

AL LIAMM 144

TAOLENN

Loeiz Kersanton (dastumet gant R. HEMON)	3
Ret eo plegañ gant R. M. KELDREG	7
Un droiad e Jerze gant Y. AN DRED	11
An doug-sigaret laeret gant DONAN KOILH	19
Kan da Afrika gant B. DADIE (tr. gant Yann Talbot)	29
Un dro-vale gant ERWAN KERVELLA	31
Huperion Thalia-Fragment gant HOLDERLIN (tr. A. E. Ar Berr)	41
Amañ e-kreiz an draonienn	62
Preder e 1970 gant G. ETIENNE	65
Notennoù.	71

LOEIZ KERSANTON

(1853.1912)

Loeiz Kersanton, ganet e Milizag (ac'hano " Loig Milizag ", e anv-barzh), a oa marichal diouzh e vicher. Desket e oa, gouest da lenn latin koulz ha brezhoneg. Da 17 vloaz, e kuitaas skolaj Lesneven, ma edo war e studi beleg, da vont da soudard en ur rejimant dragoned. Da 30 vloaz ez eas da zerc'hel ur c'hovel e Boharz. Dimeziñ a reas, hag en doe kalz bugale.

E blijadur oa sevel gwerzennoù, pezhioù hir-hir a-wechoù, atav o kontañ un istor farsus. Diembann int chomet.

PAJENNAD AR BREURIG TUDAL

A-veskell dre ar prenestr, a-dreuz ar bajenn
Ledet-brav war al letrin, e kouezh ar goulou.
Pailhurennoù tan a zañs er bann sklerijenn.
Ar breurig Tudal a wel, e skeud ar c'hleuzioù,
Saout ar gouent gourvezet. 'Maint o toskagnat.
Mañ penn ar breur o pounneraat.

An horolaj, lezirek, e lein an tour meurt
A sko e vorzhol teir gwech. Diwezhat dija !
Da echuiñ al labour n' eus nemet un eur.
Dizale 'vo an ofis, ha n' en deus graet tra.
Dre e empenn mopedus, ur soñj a zo splann :
Ar bajenn a zo c'hoazh gwenn-kann.

4

E rezoù-skrivañ aze a zo renket holl
War ar skabell tost d' e c'hlin, lufret ha kempenn,
Kanived ha pluennoù, reolenn ha skritol.
Ur gelienenn war o zro, dinec'h, a bourmen.
En ur vont-dont e seblant an amprevan fall
Ober an heg d' ar breur Tudal.

Tremen poent eo labourat. Ma ! Deomp dezhi 'ta !
Tudal a stou e ziskoaz, a ra d' al letrin
Hirvoudiñ gant pouez e zorn. Bazailhat a ra,
E zorn all war e c'henou. Latin ! C'hoazh latin !
Adskrivañ 'vit ar gouent c'hoazh un oremus
Gant ar sant bras Hieronymus !

Beg ar bluenn el liv du bremañ 'zo soubet,
Ha lakaet war ar barchenn. Krizañ 'ra e dal.
Iskis e flach ar benveg en e vizied.
Evel en desped dezhañ e tro da fiñval.
Un dakenn liv a ziver, hag a gouezh souden.
Sed ur pokard war ar bajenn !

Ar breurig a sell outañ, mantret e galon.
Tost eo, ma ne ve pec'hed, da vont e fulor.
Dre ma sell, avat, e nec'h a dro da eston.
Kouezhañ a ra e vailhog, e veg a zigor,

Sevel a ra e vruched hag e zivrabrant :
Ar pokard 'zo ur rozenn goant !

Ur rozenn war ar follenn a zo treset-sklaer.
Ha penaos eo deut aze, Tudal ne oar tamm.
E liorz ar manati n' eus ket he c'hen kaer.
Soñjal a ra koulskoude : pa oa yaouank-flamm,
E-tal prenestr ar gambrig, e ti e gavell,
E kreske rozennoù heñvel.

Rozennoù evel ar gwad, bleunioù burzhudus,
A daole c'hwez-vat tro-dro penn-da-benn d' an hañv.
Hogos hep gouzout dezhañ e soub el liv ruz
Ur barrig-livañ munut, hag a daolioù skañv
E ro d' ar rozenn ur sae, ma c'hallfed krediñ
Emañ o paouez digeriñ.

5

Ha bremañ e ra delioù, a-us ha dindan,
Gleb-holl gant glizh ar mintin, ken mistr, ken tener !
Ha rozennoù all a liv, re vras, re vihan.
Sed ur bod-roz o krapañ a-hed ar voger,
Rak ar voger 'zo treset, hag ar prenestr c'hoazh,
Ivez an apoueilhig mein-glas.

Na mibin e red e zorn ! Graet en deus e di,
Hag al liorz dirazañ, dalc'het a-ratre,
Evel ma oa gant e vamm : jenofl ha lili,
Mañ pep bleunienn en he lec'h ; e bord an ale,
Divleñchet-mat evel boaz, ar vent hag ar beuz ;
Hag ar gwezvoud e toull ar c'hleuz.

Ar bajenn a zo leugnet. Nann, ul lec'h goull
A van e-tal ar gloued. Tudal, gant sebez,
A sell ouzh beg ar bluenn, a bleg hag a dro,
Hag a ra, ha posupl 've ? ur c'hoef dantelezh
Ur c'houzougennig ridet, hag e-kreiz-etre,
Un dremmig koant hag un askre !

Katell o tont d' e welout ! Katell er gouent !
Katell ar plac'h eus e oad, oa e vestrezig
(Se a lavare an dud alies dre fent),
Paket en he c'horfenn strizh, kuilh ha kizidik.
Katell he daoulagad drant, he divoc'h livrin,
A sell outañ en ur c'hoarzhin !

Bim ! Bañ ! Na pebezh safar ! Ar c'hloc'h o c'hervel !
Kammedoù dre an trepas, menec'h a bep tu,
Pep unan o tont, sentus, er-maez eus e gell.
Ha trumm e kalon Dudal, na pebezh trefu !
Kentañ tizh a zo warnañ, dindan e c'holc'hed,
Kuzhat e labour milliget !

Siwazh, n' en deus ket amzer. O sevel e benn,
E wel, sonn evel ur peul, dirak al letrin,
Un den mentek en e sav, treut-askorn, blev gwenn,
Kroaziet e zivrec'h gantañ start war e beultrin,
E zaouлагаçi o leskiñ evel daou gef-tan :
An aotrou priol e-unan !

6

« Set o kousket adarre ! » eme an den kozh,
Tro e viz ouzh ar follenn. Ha Tudal a sell :
Ar follenn barch a zo gwerc'h ; warni n' eus na roz,

Na bleunioù all, na delioù, na ti, na Katell.
Ur samm pounner 'zo lamet a-ziwar e choug.
E feiz, n' eus nemet hanter zroug !

Mezhek, ar breurig Tudal a gerzh d' an ofis.
E dorfed euzhus, a oar, a vo paeet ker.
Rankout a ray dizale dougen e gastiz.
Dour ha bara sec'h, sur-mat ; hag ar breur foeter
A ziskrogo e skourjez. N' eo ket marteze
Re uhel briz 'vit e huñvre !

(dastumet gant ROPARZ HEMON.)

RET EO PLEGAÑ

Ar ger diwezhañ a chom atav gant ar wreg.

Marvet e oa Dominig.

Hervez ar boaz e teuas ur bern tud, merc'hed dreist-holl, da zizoaniañ Maria e wreg. Leñvadennoù hag estlammadennoù a zassonas en ti e-doug an deiz hag e-pad an nozvezh veilh. Mil gwech e voe poket da Varia ha kant gwech e voe briataet dezhi. Beuzet e oa an holl e dristidigezh hag ur rangalon e oa gwelout seurt mor a zaeloù. An holl a oa mantret.

Ar re gentañ a zeuas en ti a gavas Maria azezet war ur gador, he daouarn juntret war he barlenn, he malvennoù stouet o klozañ buhez hec'h ene, hag, - ar pezh a oa iskis, - ur mousc'hoarzh tener, tener, par d' ur flourad, o vleuniañ war he muzelloù. Ar mousc'hoarzh-se koulskoude ne oa ket lirzhin. Eus un natur all e oa, diaes e zisplegañ. Seder e seblante bezañ ar vaouez kentoc'h eget netra all ; pe marteze habask, dres evel an hini en deus gallet erfin tizhout e bal goude meur a striv ha kalz a basianted.

Meur a unan a soñjas da gentañ e oa mousc'hoarzh Maria un anaoudegezh-vat, un drugarez dezho da vezañ deuet d' he skoazellañ. Nebeut ha nebeut koulskoude, o verzout he stad reuzeudik, an amzivin a c'hounezaz spered ar vignoned, ken ez echuas unan bennak o lavarout a vouezh uhel ar pezh a soñje an holl abaoe pell hep krediñ rannañ ger. « Siwazh Doue ! pennfollet eo ar paourkaezhig gant ar glac'har ! » - « Droch a-walc'h eo neuze, a respontas ur vaouez tagnous ha treut ha ken sec'h hag un dreujenn gaol, ul lavagnon eveltañ ! » - « Re wir eo, seurt feneant ne gaver ket e bar ! bazailhat a oa evitañ ober bec'h ! » Unan all a c'hrozmolas etre he dent en ur vougañ ur c'hoant divergont da c'hoarzhin : « Kousket en kase skuizh ! » - « E c'hell bezañ, a respontas un den evit e zifenn, mat en deus graet. Da betra en devije talvezet dezhañ breviñ e gorf ? Marvet eo ha fur eo bet o kemer amzer vat dezhañ e-unan. »

8

Meulbrezegenn Dominig a ginnige treiñ da zroukprezegerezh c'hwerv !

« Doue d' e bardono ! » a lavaras unan bennak evit degas da soñj d' an holl emichañs eus ar resped dleet d' ar re varv.

« Gant ma ne sodo ket o chom da vevañ hec'h-unanik ! » a brederias ar vaouezig he devoa komzet ar c'hentañ. « Rak ne ziouganen netra a feson diouzh ar mousc'hoarzh-se. » An holl en em lakaas da ragachat ha den ne rae mui van bezañ klevet pe get gant an intañvez. Daoust hag e verze houmañ ar pezh a dremene endro dezhi ? Ne seblante ket pe neuze, ne rae forzh, rak difiñv e kendalc'he da vousec'hoarzhin, goustadik, goustadik.

*

Antronoz vintin, war-dro dek eur, e tigoras he genou evit ar wech kentañ, pa zeuas ar c'halvez en ti gant an arched. Sevel a reas he selloù davet ar micherour ha pemp komz a gouezhas eus he genou. A vouezh izel o distilhas hag a-boan ma voent klevet. N' o devoa ket graet muioc'h a drouz eget takennoùigoù dour o kouezhañ eus an doenn en ur gelorn, ha koulskoude brall ar c'hloc'h boud o tarzhañ e sioulder an noz en ur gêr vorvitellet n' en devije ket bet muioc'h a efed.

« Ne vo ket douaret Dominig ! » a lavaras.

Dreist-kred e oa he c'homzoù d' an holl. Pep hini a soñjas : « Deuet eo sot ! »

« Losket e vo ! » emezi pelloc'h, ken dibradas ha tra. Hag he mousc'hoarzh peurbadel a vleunie, sioulik, war he dremm seder.

Unan a druezas outi. « Paourkaezh Maria ! Se n' eo ket posubl. D' an iliz e rank mont. Ha d' ar vered goude. Ur c'hristen eo ! »

Sevel a reas Maria he malvennoù, un aer diarvar o parañ en he daoulagad.

« Losket e vo ! » a lavaras evit an eil gwech, ken asur evel m' he devije distaget : « Daou damm sukr a gemerin ! » Gwallskoueriet e oa an holl.

9

« Ha petra a lavaro an dud pa vo gouezet hoc'h eus graet leskiñ korf ho kwaz ? » e teuas a-benn da valbouzat ur mignon da Zominig.

« Losket e vo ! » a respontas Maria.

Unan all a nac'has dezhi, krenn, kaout ar gwir da gemer seurt diviz.

Chichant e respontas Maria ur wech c'hoazh : « Losket e vo ! »

« Ar Maer a vo enep ! » a zisklerias unan.

« Losket e vo ! » a silas etre he dent, pennek.

« Ar Person a vo fuloret ! » a gendalc'has n' ouzon ket piv. « Daou vignon evel ma oant Dominig hag eñ ! »

« Losket e vo ! » a lavaras Maria ur wech all. Hogen kement a vestroni a oa an taol-mañ en he mouezh ma tavas an holl.

Ha losket e voe korf marv Dominig.

*

« Tribidie ! » a daolas al losker pa voe echuet gantañ e labour. « Ne 'm eus jarl ebet evit lakaat e relegoù ludu ! »

Maria a dostaas neuze, he mousc'hoarzh kevrinus o skediñ war he dremm. Gant ur jestr sioul e tennas ur pezh mell eurier-traezh eus dindan he chal. E ginnig a reas d' an den en ur lavarout : « Amañ e vezint lakaet ».

Sebezet e chomas al losker ; hogen, bezañ losker korfoù marv a laka don e spered unan doujañs ha resped ouzh an intañvezed. Gant kalz a evezh eta e lakaas en eurier-traezh ar bernig ludu griz a skeudenne pezh a oa bet Dominig : brasañ feneant ar barrez.

E gwirionez, nebeut a dra eo Mab-den.

A-bouez e zivrec'h en kinnigas da Varia. Lintrañ a reas ar gwer anezhañ dindan bannoù an heol ha par e oa e jestr da hini an Drouiz Meur o tiskouez d' e bobl bodet en-dro dezhañ al louzaouenn sakr.

Astenn a reas Maria he divrec'h. Gant azaouez e kemeras ar benveg. E guzhat a reas dindan he chal. Hep ur ger, hep ur sell da nikun e troas kein hag e kemeras hent he zi...

*

10

Degouezhet er gêr ez eas d'ar gegin. Digor e oa chomet ar prenestr. Bannoù

an heol a floure hec'h arrebeuri. C'hwez valzamus ar brug, ar raden hag ar balan a oa war an aer. Tirilied ar vouilc'hi a dregerne dre al liorz. Mont a reas da azezañ war ur gador. Diskoachañ a reas he zeñzor. Pell amzer en dalc'has war he barlenn, vak a spered, he minc'hoarzh kevrinus lojet e korn he muzelloù.

Ur goukougig a zilmmas evel ur jañ-blev eus e voest hag a daolas teir gwech e gan. Graet, gantañ e labour, e winterell en sachas war-dreñv en ur ober « rapp ». An trouz-se a dennas Maria eus hec'h huñvre. Sevel a reas he selloù davet an horolaj. Teir eur. Naon he devoa. Ne ouie ket mui re vat abaoe pegeit edo war yun. War he fouezig ez eas betek ar siminal. Gant doujañs e lakaas warni hec'h eurier-traezh. Flourañ a reas ar gwer gant beg he bizied dres evel ma flourer jod tener ur bugel, evit ar blijadur hepken. Pell amzer e chomas peulet dirak an oaled o sellout ouzh Dominig, he mignon, he fried. E garet he devoa. O daou adalek bremañ e kendalc'hfent da vevañ en ti. Betek he marv dezhi hec'h-unan. Goude-se...

*

Dispartiañ a reas koulskoude ha mont betek ar ganastell. Kemer a reas ur gastelodenn hag he leuniañ a zour. War an dommerez he lakaas. Un alumetezenn a strakas ha tan a reas dindani. Atav en he sav, atav o vousc'hoarzhin, e tennas goude daou vi eus ur baner. Pa savas klogorennoù war-c'horre an dour e lakaas ar vioù e-barzh en ur deurel evezh bras evit mirout outo a derriñ. Sevel a reas he dorn davet an eurier-traezh. Cheñch penn a reas d' ar benveg. Kilañ a reas goude hag he daouarn war he c'hroazlez, he selloù ouzh al ludu a groge da ziskenn er c'hombod traoñ, he mouezh o krenañ gant ul levenez hep he far hag he mousc'hoarzh o sklerijennañ he dremm a-bezh, e c'hourc'hemennas gant ur vouezh sklintin ha lirazhin :

« Ha bremañ, labour, Dominig ! »

E mod pe vod, ret eo d' ur gwaz plegañ.

Un droiad e Jerze

Ha me bihan e tegouezhe ganin, meur a wech ar bloaz, pignat war dour Sant-Mikael Landreger. Hag an hini gozh a oa ganti alc'houez an tour a lavare bep gwech : « Alese, bugale, e vez gwelet Jerze pa vez sklaer an amzer ». Poan am eus o krediñ am befe un deiz bennak gwelet pe damzivinet an enezenn, e-touez an niver bras a enezennoù hag a reier a vez gwelet eus lein an tour-se. Hag en tu-hont da se, bepred em eus klevet komz en dro din eus Jerze hag eus an dud a yae di bep bloaz « d'ober ar sêzon ».

Amañ ivez en hon c'harter ez eus daou zen, aet war an oad bremañ, ha n'int anavezet gant an dud nemet dre al lesanvioù o deus tapet : « Paotr Jerze » ha « Gwreg Paotr Jerze ». Pevar, pemp, a-wechoù c'hwec'h miz e tremenent bep bloaz en enezenn. Ar gopr a ranke bezañ madik peogwir e c'hellent tremen ar goañv hep labourat en un doare reizh. Fentus e vezent pa zistroent, o tiskouez o « arc'hant saoz » evel ma lavarent d' an dud hag o komz teir yezh mesk-ha-mesk. Ar wech diwezhañ ma klaskas ar gwaz mont d' ober ar sêzon, ne voe ket kemeret - re gozh moarvat - hogen eñ pennek ez eas evelkent betek Sant-Brieg, met ne voe ket lezet da bignat er c'harr-nij. E wreg a c'hoarvezas ganti ur bloavezh ur gwall dra : en ur labourat e voe toullet dezhi ul lagad gant ur zint (harp) tomatez, ha koll a reas he lagad en diwezh.

Pell, pell 'zo eta e rede dre va spered ar soñj hag ar c'hoant da vont da weladenniñ Jerze ha n' emañ nemet 22 km dre nij eus Sant-Brieg. Se a zo e-tal ar gêr en amzer ar fuzeennoù bannet en oabl ! Ha koulskoude, mont da Jerze a zo mont d' an estren hag e ranker prientiñ paperoù evel evit mont da n' eus forzh petore bro all. Ret eo eta en em gemer un toullad deizioù en a-raok, dreist-holl ar re a fell dezho mont gant bugale. E-pad an hañv eo aes-tre mont di eus Sant-Brieg, Dinarz, Brest pe Gemper gant ar c'harr-nij pe eus Sant-Malo gant ar vag. Ha tu a zo evit an dud berr o amzer ganto d'ober ur mont-dont en un devezh. Eus Sant-Brieg gant 100 lur gall e c'heller kemer ar c'harr-nij, ober tro an enezenn e karr-boutin, merennañ hag adverennañ ha distreiñ er memes deiz. Setu ar pezh am eus graet e penn kentañ miz Gwengolo tremenet.

12

Aet da Sant-Brieg e karr-tan diouzh ar beure, a-dreuz ar vro sioul c'hoazh, e tegouezhomp e tachenn-nijal ar Blaenenn ur pennadig a-taok kemer ar c'harr-nij. Ret 'oa tremen dre ar maltouterezh ha leuniañ paperennoù hag ivez paeañ un tailh a zaou lur da Gambr ar C'hoñvers. E-pad an amzer-se e tegoueze karr-nij Intra-Jerze, ennañ un toulladig tud, deuet ivez marteze da dremen un devezh e Breizh. D' al lun, d' ar merc'her ha d' ar sadorn e-pad an hañv e vez ur servij evel-se. Lezet e voemp da vont hag e-pad an amzer-se an ostizez ne voe ket pell o redek da vont da gerc'hat un toullad torzhioù bara a glenkas er c'harr-nij. Evit doare unan bennak a gave mat du-hont ar bara eus amañ, hi marteze. Neuze e lavaras deomp pignat en Dakota DC3, ur c'harr-nij brezel bet adrenket evit beajoù bihan. Er c'harr-nij, pep hini en em renkas el lec'h ma kare. Mont a rejomp er penn a-raok evit gwelout gwelloc'h, setu da nebeutañ ar pezh a oa bet aliet deomp. Gourc'hemennet 'voe deomp stagañ hor gourizoù ha da nav eur dres e loc'hemp. 35 den a oa er c'harr-nij, koulz lavaret leun. Tregeriz evit al lodenn vrasañ war a welis, bet klevet gante nouspet gwech o komz eus Jerze hag a yae evit ar wech kentañ en ur c'harr-nij : un digarez ouzhpenn. Familhoù a-bezh pe vignoned a oa anezho.

Dousik e savas ar c'harr-nij kozh, - bet graet ar brezel gantañ, piv 'oar ? - e zivaskell o krenañ. Pignat a reas betek 1500 m. tamm-ha-tamm. Dedennet oamp dreist-holl gant ar gwel en em lede dindanomp : kêr Sant-Brieg, ar maezioù ha dreist-holl an aodoù, ar bigi, ar mor gant e wagennoù hag e reier amañ hag a-hont. Bez' e oamp evel an Ao. Skañvig hag e vab pa 'z ejont da nijal

evit ar wech kentañ, hag a voe boemet, bihan o c'halon avat, int ha ne oant ket bet uheloc'h eget tour an iiiz hag a wele an dud dindane, bihan, bihan evel logod !

Ugent munutenn goude bezañ bet dibradet eus an douar e welemp an douar dindanomp adarre. Erru oamp a-us d' an enezenn, a veze gwelet bremañ en he fezh, dres evel ur gartenn. Chomet e vijemp bet c'hoazh a galon vat da sellout ouzh an daolenn gaer-se, met setu hon evn dir o c'horrekaat evit tizhout hep stroñs aerborzh Jerze.

13

Amañ ne voe ket sellet ouzh hon faperoù. Blenier ar c'harr-boutin a dlee diskouez deomp an enezenn a lavaras deomp mont d' e heul, bez' e oa, emezañ, o vont da gas ac'hanomp d' ar gêrbenn, Sant-Helier. Beajourien 'zo a fellas dezho cheñch arc'hant en un doare ti-bank a oa en aerborzh, evit gellout prenañ tra pe dra e kêr. Ni ne rejomp ket, ne oamp ket deuet d'ober koñvers da gouzout a raemp e kemere ar goñversanted an arc'hant gall hag ouzhpenn hor boa un toullad moneiz saoz diouzh ret, peadra da bremañ un nebeut timbroù ha kartennoù-post. Abred e welas hon Zregeriz petore torr-penn e voe evito an arc'hant-se ha ne ouient tamm ebet dioutañ anat 'oa. Diwezhatoc'h e kavas dezho e oa ret dispign pep tra hag e prenjont traoù hep ezhomm ebet anezho. Kalz a fent o devoe en distro, an eil o tiskouez d' egile e brenadennoù, hag o lavarout ne oant ket bet gwall fin... Plijadur o doa avat, « ma », emezo, « evit ur wech... ».

Pignat a rejomp en unan eus kirri-boutin niverus an den anvet Tantivy, hini an niverenn 16. « Taolit pled eus niverenn ho karr, » eme ar blenier, « bezit soñj mat : seize, c'hwezek », emezañ deomp evel-se. Hag e kontas da dud ar c'harr dre ma 'z ae gant e hent penaos e oa ur Breizhad anezhañ, ganet en enezenn avat. E dad o vezañ eus Trebeurden hag e vamm eus Pederdeg, Ar Sant ha Kalleg o anvioù. Pell 'oa oant aet d' aber ar sêzon hag e chomjont en enezenn. Hemañ a zeuas ur wech da Vreizh evit obidoù e vamm-gozh hag e voe souezhet o welout ar beredoù, ken disheñvel eus reoù an enezenn. Bremañ oa dimezet gant ur plac'h eus Jerze ha diskouez a reas deomp e di : ur pikol ti kaer, bleuniet holl. Ne oamp ket ken divroet-se a-benn ar fin, ha ni en ur c'harr perc'hennet gant un den o tougen un anv brezhonek ha bleniet gant mab Tregeriz, hag a zeue gantañ, dre ma komze dre e vikro, ur bern bommoù brezhoneg. Er vro ne vez ket graet gwelloc'h !

Degouezhet e Sant-Helier e voe lezet pep hini da vont e-giz ma kare da vale kêr e-pad un eur hanter bennak. Sant-Helier a zo a-bell kêr vrasañ an enezenn gant ouzhpenn an hanter eus an dud o chom enni : 33 000 den. Koñvers bras a vez graet enni ha niverus eo ar stalioù en daou du d' ar straedoù, darn eus ar re-mañ strizh a-walc'h a-wechoù.

14

Amañ n' eus ket a dazoù war ar marc'hadourezh ; ar sigarettennoù, an alkool, an danvezioù, an traoù c'hwezh-vat a zo un drederenn marc'hadmatoc'h. Ar boteier a zo ur c'hard, heñveltra evit ar benvegoù luc'hskeudenniñ, ar bravigoù, an eurieroù. Ha setu perak moarvat e weler ar stalioù-se stok-ha-stok e Sant-Helier. Stalioù da werzhañ deoc'h « eñvorioù » a bep seurt a zo stank ivez. En hini gentañ a antreis enni, kentañ tra a welis e voe e-leizh a vannielloù gwenn ha du a-ispilh a-dreuz ar stal ; kalz muioc'h eget na weler dre amañ er seurt stalioù. Pompinelloù giz Breizh a oa ivez. Marteze oa Breizhiz tud ar stal. Klevout a ris unan eus merc'hed ar stal oc'h ober « Brittany » ouzhip, dre ma komzemp brezhoneg moarvat.

Jerze a zo stag ouzh ar « Gurunenn », met bez' he deus hec'h emrenerezh. Renet eo gant Ar Stadoù. Er Breujoù ez eus 52 ezel ha 12 parrez a zo : St-Brelade, St-Clement, St-Helier, St-John, St-Lawrence, St-Martin, St-Mary, St-Ouen, St-Peter, St-Saviour, Trinity ha Grouville (St-Martin). Ar Rouanez he deus ur Gouarnour en enezenn. Met Jerze he deus he moneiz dezhi hec'h-unan hag abaoe ur bloaz (lañ a viz Here 1969) he deus he zimbroù. Meur a dimbr a zo bet embannet dija hag ar c'hoñvers-mañ a ya mat ivez en dro. Deuet 'zo din n' eus ket pell 'zo ur gartenn eus Jerze gant un timbr saoz warni, ac'hanta, brav mat

eo degouezhet ganin glan ha naet (mat da servijiñ c'hoazh) gant ar meneg " STAMP INVALID " ha gant priz an tax a dleen paeañ. Ne baeis mann ebet, rak hon faotr a lizhiri ne anaveze netra er jeu !

Ar polis a zo evel e Breizh-Veur. Bleniañ a reer ivez war an tu kleiz, met ar c'hirri n' o deus ket aotre d' ober ouzhpenn 40 km an eur ; ar c'haravanennoù a zo difennet hag ar c'hirri-samm a zo bihan-tre en abeg da strizhder an hentoù. War ar maez, n' hell ket ar pep brasañ eus an amzer daou garr tremen a-gevret, dreist-holl kirri-boutin. Neuze, ken brav ha tra en em renk unan war vord an hent pe ez a betek un toull-karr hag an hini a vez lezet da dremen en deus bepred ur ger hegarat evit an hini all. N' eo ket evel dre amañ, lec'h ma vez prest hini pe hini da roñskoniad ! Bihan ha didalvez eo niver an darvoudoù-hent daoust m' eo niverus-tre ar c'hirri. Niver uhelañ ar bed dre gementad tud : 45000 karr-tan. Kalz a girri a vez feurmet, pe evit un devezh pe evit ur pennadig amzer gant ar c'harrdioù pe an ostalerioù hag aes int da zisheñvelout ouzh ar re all peogwir e weler warno ul lizherenn vras a-ratozh.

15

Abaoe un toullad bloavezhioù eo deuet an douristelezh da vezañ ar c'hoñvers pennañ evit an enezenn, tra ma oa kent al labour-douar. 600 000 tourist ar bloaz tremenet : Breizh-Veuriz evit ar pep brasañ met niveret a zo ivez 100 000 Gall, ar re-mañ o tont da vare an hañv. Met dont a ra Breizh-Veuriz da Nedeleg, dedennet gant temz-amzer glouar an enezenn hag ivez dre ma n' eo ket pell eus o bro hag eo aes-tre mont di. N' int ket re zivroet ha se a gont dreist-holl evit an dud war an oad. Kalz a zeu da ziskuizhañ hepken ha ret eo gwelout an niver bras a geder-brec'h aozilh a vez e-tal an hotelioù ha war an traezhennoù. Hag a-hend-all e teu ar re nevez dimezet da dremen eno o « honeymoon » (loar-vel !). Gwelet 'vez ivez Anglizien pinvidik o tont d' ober o annez e Jerze. Amañ o heritourien n' o devo netra da baeañ war o lerc'h. An douar avat a zo ker, hag ar sevel ti keroc'h c'hoazh. Difennet eo ivez gwerzhañ douar labour evit sevel tiez ; ouzhpenn ma n' heller ket sevel un ti n' eus forzh pelec'h na n' eus forzh penaos, ret eo mirout braventez an enezenn.

Al labour-douar a zo ur binvidigezh evit Jerze daoust ma n' emañ mui nemet evit ur c'hard er c'honidegezh, tra m' emañ an douristelezh evit an hanter. Gras d' he zemz-amzer he c'hell gwerzhañ legumachoù abred da Vreizh-Veur, patatez, tomatez, bleunioù ivez. Er bloaz-mañ o deus bet diskont gant ar bleunioù, elestr dreist-holl, en abeg da ziskrog-labour dokerien Breizh-Veur, ha manet eo ar bleunioù er parkeier hag er serioù. A-raok ar brezel ez ae meur a vil Breizhad da labourat da Jerze. Kenderc'hel a ra kalz da vont, met nebeutoc'h, dre ma koazh ivez dre amañ niver an devezhourien. Bep bloaz, en nevez-amzer, e vez roet da c'houzout d' an dud dre an tiez-kêr ha dre ar c'helaouennoù e teuy deiz-mañ-deiz dileuridi eus perzh labourerien-douar Jerze, da c'hoprañ paotred ha merc'hed, dezho d' ober un emglev ha da sinañ paperoù. Alies ez a familhoù a-bezh evel-se da denañ patatez abred, darn a chom evit an tomatez ; darn all a vez gwelet goude bezañ bet distroet d' ober an eost da Vreizh, o advont en diskar-amzer evit un eil rummad patatez. Er bloaz-mañ eo bet kont evel-se ur wech muioc'h. D' an deiz merket ez eont da Sant-Brieg hag eus eno gant kirri-nij e vezont kaset d'an enezenn. Un hevelep deiz ez eas 125 den e tri garr-nij. Gwechall ez aent dre Sant-Malo gant ar vag. Hiniennoù a ya ivez da c'h-Gwernze. Gopret mat e vezont moarvat, met kalet eo o labour, hir an devezhioù, lojet fall alies ha boued digustum.

16

Pa 'z on bet e miz Gwengolo 'oa e-leizh a douristed o vale dre ruioù Sant-Helier, Saozon dreist-holl. An hanter eus ar Vreizhiz a ya d' ober ur valeadenn war an enezenn a ya evit un devezh hepken. Baleet hon eus dre Sant-Helier, amañ hag ahont, neuz ur gêr saoz dezhi. Un anv breizhat bennak hon eus gwelet, un ti-kafe Ar Gall da skouer. Souezhus eo evidomp an tiez apotikerezh gant o livioù teñval, bihan, nebeut a neuz dezho d' hor meno hag anvet « chimist ». Stalioù boued a bep seurt, e-lec'h ma weler vioù Jerze keroc'h eget ar vioù deuet eus Breizh-Veur. Ar re-mañ gwenn-kann, tra ma oa rouz ar re all. Graet am eus evel an holl, aet on da brenañ ur voutailhad whisky, hini « marc'h gwenn », peogwir ho peus aotre da gas ganeoc'h ur voutailhad hep paeañ droejoù. En un iliz ez is

ivez, unan anglikan e oa, heñvel a-walc'h ouzh ar re gatolik : All Saints' Church, Iliz an Hollsent.

War-se e teuas eur pred kreisteiz a voe servijet deomp en unan eus ostalerioù niverus a zo e kêr. Bez' e oa un ostaleri a c'hiz kozh, teñval, gant taolioù bihan ha gouleier bihan un tamm e pep lec'h. Merenn a voe servijet buan. Boued dereat, eeun a-walc'h ha bier evel evaj. Nevezenti : debret hon eus eus bara giz saoz evit ar wech kentañ.

Neuze e teuas eur ar valeadenn vras : tro an enezenn. Jerze a zo un tammig brasoc'h eget ar Gêrveur, war-dro 20 000 devezh-arat ha dezhi 20 km hed evit 10 km led. Tremenet omp dre ar pep brasañ eus ar parrezioù, darn o tougen un anv brezhonek evel Sant-Brelade (Brendan) Sant-Ouen (Owen pe Oan). Da gentañ hon eus hedet an aod, traezhennoù, porzhioù bihan pesketa, aodoù roc'hellek hag uhel. N' int ket ken brav hag hor re pell ac'hane, met naetoc'h moarvat. Difennoù an enezenn, an tourioù Martello, eus anv ar c'horsikad a ijinias anezho, a zo stank, troet war-du ar reter hag ar su hag a zo bet savet e 1778 evit enebañ ouzh ar C'hallaoued.

17

An tiez o deus alies un neuz saoz gant o « bow-windows » (prenestroù balirek) ha gant o livioù madigoù sukret ha n'omp ket ken kustum-se outo. Kempenn int avat ha bleuniet kaer. Ar maezioù a zo sioul ; gwech an amzer e weled atantoù tonius, neuz manerioù dezho, pep tra o seblantout bezañ dalc'het mat. Ar parkeier a zo bihan gant kleuzioù hag alies gwez warno, evel dre amañ. Serioù a zamweler ivez, enno tomatez pe vleunioù. Gwelet hon eus an diribinoù serzh, e-lec'h ma teu ar patatez abred hag e-lec'h ma poagn Tregeriz alies a-hed an deiz. Mereurioù heñvel a-walc'h ouzh re Vreizh a vez gwelet. Meur a hini anezho a zo bet adkempennet ha gant darn 'z eus bet graet ostalerioù. Adkempennet ar c'hrevier, ez eer enno da evañ te, da selaou sonerezh. En unan anezho e-tal Devil's Hole (Toull an Diaoul) 'zo bet servijet deomp an te « five o'clock », te pemp eur, gant a bep seurt gwestell da heul. E ostalerioù 'zo, dreist-holl, e kêr, ar mitizhien, ar geginerien a zo alies Italianed, Spagnoliz pe Bortugaliz. Peogwir n' eus ket a dailhoù e c'hellont kas ganto d' ar gêr tost da vat o holl c'hounidegezh.

Gouzout a reer moarvat eo bet dalc'het an enezenn gant an Alamaned eus miz Mezheven 1940 betek miz Mae 1945. Diskouezet 'vez d' an douristed an ti nemetañ a zo o kouezhañ en e boull e-barzh an enezenn. Ar berc'henned a dec'has kuit dirak an Alamaned ha betek-hen n' eus distroet nikun anezho.

Er parkeier e weler o peuriñ, stag ouzh ur piked diwar-bouez ur gordenn, saout bihan sklaer an enezenn. Brudet kaer int evit reiñ laezh hag amann dispar, padal ne dalvez ket o c'hig avat kalz a dra. Graet 'vez aketus war o zro hag adal ma ra glav e vez staget war o c'hein ur pallenn, un doare mantell-c'hilav na petra 'ta hag e kendalc'hont da beuriñ dizehan. Enor 'vez graet ivez d' ar jerzeenn, ha n' eo ket hepken war ar c'hartennoù-post e weler anezhi, manteliet peurvuiañ, met war ar pezhioù moneiz, ha kavet e vez en tiez « eñvorioù », saout e prierezh livet. An diwezhañ enor graet d' ar jerzeenn a zo bet ober un timbr ganti.

En ur ober tro an enezenn e c'heller gwelout er pellder enezennoù all, an hini vrasañ o vezañ Gwernze. Un iliz a zo enni en enor da sant Samzun hag ur chapel en enor da sant Brieg. En enezenn Sark ez eus ul lec'h anvet Tintageu, ur sant Magloar ha roud 'zo bet kavet eus ur manati anvet « locus sancti Ronani ». En enezenn vihan all, Herm, e kaver ur chapel sant Tudual. E Alderne (Aurigny), an enezenn-mañ he deus bet evit patron sant Gwennael ha gouzout a reer penaos en Xvet kantved e komzed brezhoneg enni. Menegiñ a c'heller c'hoazh e mor Breizh, ar roc'helloù o deus anv ar Minquier (maen ?) hag an Ecrehou hag a zo bet divizet gant Lez Etrevroadel an Haag e 1953 e vefent hiviziken da Vro-Saoz, hag hor bezo graet an dro eus an enezennoù a zo bet hag a zo bepred Breizhiz enno.

18

Meur a dra all hon eus gwelet c'hoazh ha kalz muioc'h n'hon eus ket gwelet

anat eo. Tostaat a rae an abardaez hag eur an distro. Da zeiz eur e tibradas ar c'harr-nij ac'hanomp evit treuziñ ar mor. Kaoz bras a oa gant an dud, pep hini o lavarout e soñjoù diwar-benn ar pezh en doa gwelet, ar pezh a oa souezhus ha disheñvel evel ar pezh a oa heñvel : « memes al linad hag an drez », eme unan, « a oa memes tra ! ».

Kaer ' oa c'hoazh gwelout an tamm douar bihan-se eus an uhel, kelc'hiet gant ar mor, ar gwagennoù oc'h eonenniñ tro-dro dezhañ dindan kuzh-heol miz Gwengolo.

Kenavo Jerze, kenavo ur wech all...

Lannuon, Diskar-amzer 1970.

An doug-sigaret laeret

Kavout a ris Charlig Omnez en e gombod e Roazhon, straed ar Moneiz, o yariñ dirak an oaled. Gant divergontiz ur mignon kozh, ez azezis diouzhtu, evel boaz, en e gichen, war ur skaoñvig, hag e stagis da flourañ e votoù. Douget e oan d' ober kement-se evit daou abeg : an eil, evit sellout splann ouzh e zremm stouet ha prederiet ; egile, evit diskouez va doujañs ouzh e zonezon a zivinour-dreist. Ken dalc'het edo e spered o klask ur roud kevrinus bennak, ma hañvale evel pa n' en dije ket va gwelet o tont tre. Faziet oan diwar-se, evel ma vezen bep tro ma klasken disklipañ e skiant galloudus-meurbet.

« Glav a ra, a lavaras, hep sevel e benn.

- Aet oc'h er-maez neuze ? a lavar is buan.

- N' on ket, hogen gwelout a ran emañ gleb ho tisglavier hag ez eus takennoù dour war ho mantell. »

Chom a ris gant va beg war nav eur dirak kement a spiswelusted. Goude ur pennadig, e lavaras digas, evel pa vije dibouez :

« Klevout a ran, ouzhpenn, ar glav ouzh ar prenestr. Selaouit ! »

Selaou a ris. Ne c'hellis ket krediñ va divskouarn : edo, da lavarout gwir, pigosadur c'hwek an takennoù war ar gwer. Ne c'halle ket an den-se bout touellet gant kement-se, anat oa !

« Kalz a labour ' peus bet en deizioù-mañ ? a c'houlennis, da gemmañ kaoz. Petore kudennoù nevez a c'halle bout war ar stern - ha n' oa ket gouest ar P. J. d' o diskoulmañ, gant un empenn ken poellek ? »

Goustadik e sachas war e droad, hag e hañvalas termal, ken dont en-dro d' e emzalc'h a-ziagent. Neuze, e respontas eeun a-walc'h :

20

« Traoùigoù dister, na ve ket dav komz diwar o fenn ; deut eo ar Priñs Leunegoff da 'm c'haout evit goulenn diganin penaos adkavout ar ruzvein aet diwar wel er C'hremlin : Rajah Meraped-Moc'hamañ, goude bout dibennet e warded-korf gantañ en aner, a oa ret dezhañ kaout va sikour da adkavout ur c'hleze braviget : an Dukez Veur a Lakdachik-Barzhmadorn a oa c'hoant dezhi da c'houzout petra a rae he gwaz ar pevarzek a viz C'hwevrer da noz ; ha dec'h da noz, - ez izelaas e vouezh -, un annezad en ti-mañ, am eus kejet gantañ en diri, a felle dezhañ gouzout perak ne oa ket bet respontet dezhañ pa 'n deus skoet ouzh e zoreñ. »

Ne c'hallen ket mirout a c'hoarzhin betek ma welis e zivabrant o krizañ hag e dal dizivinus o roufennañ

« Mar plij deoc'h, bezit soñj, a lavaras yen, e oa diwar un abeg ken dister-se em eus dizoloet Perak En Doa Lazhet e Wreg Yann Seitek ha Petra a C'hoarvezas da Savebao ! » Abafet-trumm e voen. Paouezañ a reas ur mareig, ha neuze, o tont en-dro d' e zoare boas, didruez ha dielfennus, e lavaras :

« Pa lavaran traoùigoù dister, dister int e gwirionez pa vezont keñveriet ouzh un afer nevez am eus da ziluziañ bremañ. Un torfed zo bet graet hag, iskis a-walc'h, a-enep din. Souezhet oc'h, emezañ ; goulenn a rit ouzhoc'h hoc'h-unan piv en deus kredet ober un dra ken vil em c'heñver ? Me ivez. Evelkent graet eo bet. Laeret ez eus bet un dra diganin !

- C'hwi, laeret ! C'hwi Charlig Omnez, Spouron al Laeron ! » a c'hwezhis, strafuilhet, o sevel hag o tapout krog en daol, va dremm displiv troet outañ.

« Laeret ! Selaout ! Ne govezfen ket an dra-mañ ouzh den. Hogen c'hwi hag hoc'h eus heuliet va buhez, c'hwi hag a anavez va doareoù, c'hwi am eus savet un tammig evidoc'h ar ouel a guzh va menozioù diouzh ar boutin, c'hwi hag hoc'h eus degemeret gant plijadur va c'huzutoù, estlammet dirak va barnadennoù, lakaet ac'hanoc'h da vout va skoazell-bemdez, deut da vout va sklav, ruzet ouzh va zreid, dilezet hoc'h ostizien nemet ar re ha ne baeent ket, evit gwelout tamm-ha-tamm ho purev-mezeg o vont goullo, ha gant hoc'h emroustet da stouiñ war va c'hudennoù hoc'h eus roet a-wechoù striknin e-lec'h kinin hag arsenik e-lec'h aspirin, c'hwi hag hoc'h eus aberzhet kement tra ha kement den din, c'hwi an hini eo a ran va c'heneil-kuzul ac'hanoc'h ! »

21

Sevel a ris hag e vriata birvidik ; ha koulskoude, ken beuzet e oa en e soñjezonoù ma lakaas e zorn, dres d' ar mare-se, war chadenn e eurier, dic'houzvez dezhañ, evel ma vije bet evit gwelout pet eur oa.

« Azezit, emezañ, ur sigaretenn ' po ?

- Ne vutunan ket mui, emezon.

- Perak ? » a c'houlennas.

Etre daou venoz e chomis hag, emichañs, e teuas ruz d' am divjod. Da lavarout gwir, me 'm boa dilezet ar sigaret abalamour da 'm ostizien, ken distank bremañ ; re ger e kaven prenañ sigaret. Ar c'horn-butun hepken ne lavaran ket.

« Ur c'horniad, n' on ket a-enep, a lavaris en ur c'hoarzhin, hogen komzit din eus al laeroñsi-se. Petra 'c'h eus kollet ? »

Sevel a reas ha, en e sav dirak an oaled, e zaouarn dindan pastell e chupenn, sellout ouzhin ur pennadig, un tamm prederiet.

« Soñj 'c'h eus eus an doug-sigaret roet din gant Kannadour Turkia pa 'm eus adkavet favoritez diank ar Vizir-Meur e pempvet kor C'hoariva Roazhon ? Hennezh eo. An doug-sigaret a vennan lavarout, enskantet gant diamantoù.

- Hag an hini brasañ anezho a zo bet lakaet mel-skoulmoù en e lec'h, emezon.

- A ! c'hwi a ouie an dra-se ? emezañ en ur vouc'hoarzhin.

- C'hwi ' poa lavaret din. Soñj am eus em boa disklipet e oa ur brouenn eus ho lemmded-spered, hogen, en anv Doue, ha kollet eo bet ganeoc'h ? »

Dilavar e chomas ur pennad.

« Nann, laeret eo bet, se zo gwir, met e gavout a rin, sur ! Ha va-unan-penn c'hoazh ! En ho micher, mignon ker, pa vez klañv ur mezeg, ne gemenn ket louzoù dezhañ e-un, met gervel a ra ur mezeg all, keta ? Disheñvel eo an dalc'h amañ. Me gemero an afer etre va daouarn-me !

- Ha pelec'h e c'hallfec'h kaout gwelloc'h ? emezon birvilhet. Lavarout a rafen emañ kavet ho toug-sigaret endeo !

- Me zegaso an dra-se d' ho soñj c'hoazh ! emezañ goustadik. Ha bremañ, evit diskouez deoc'h em eus un tamm fiziañs en ho parn, daoust din bout graet ganin va menoz da genderc'hel va un, prest on da zegemer ho tamvenegoù. »

Tennañ a reas ur c'harnedig eus e c'hodell ha, gant ur mousc'hoarzh

strizh, e kemeras ur c'hreion. N' oan ket evit krediñ. Eñ, ar Charlig Omnez hollvrudet, oc'h asantiñ ouzh damvenegoù ur paour-kaezh den dister evel don ! Pokat a ris d' e zorn gant doujañs, ha stagañ laouen :

22

« Da gentañ, e lakfen un embann er gelaouenn, o kinnig ur gopr ; ober a rafen heñvel gant skridoù-embann lodennet er c'hafedioù hag el lec'hioù foran ; neuze, ez afen da c'hwiliañ en holl stalioù-meskailhez ; mont a rafen da 'n ti-polis ; imbourc'hañ a rafen ar vevelien hag ar mitizhien ; un enklask klok a rafen em godilli hag en ti a-bezh ; hag, ez ouzhpennis gant ur mousc'hoarzh, hoc'h hini evel just ! »

Dic'hoarzh, ez enskrivas dre ar munud ar pezh a oan o lavarout.

« Marteze hoc'h eus graet an traoù-se endeo ?

- Marteze, a respontas, kevrinus. Bremañ, mignon ker, a gendalc'has, en ur vountañ ar c'harnedig e-barzh e c'hodell hag en ur sevel, va digarezit ur pennadig, ret eo din mont er-maez ; chomit amañ m' hoc'h eus c'hoant ; grit evel er gêr betek ma teuin en-dro ; traoù zo marteze a gavot amañ da zedennañ ac'hanoc'h, a lavaras, o tiskouez din e levraoueg leun a levrioù a bep seurt ; kornioù ha butun zo er c'hogn-mañ. »

Neuze, gant ur sin-kimiadiñ, e kuitas ar gambr. Re voas oan ouzh e zoareoù evit soñjal fall war e zisparti ken divergont, ha marteze en doa kavet-souden ur roud bennak a oa aet d' e imbourc'hiñ kerkent ha deut d' e skiant efedus.

Va-unan-penn, e kasis ur sell kelc'hiek ouzh e stalioù. Bez' e oa un niver mat a voutailhoùigoù, danvezioù douar-heñvel enno, skritellet : « Skubien Hentoù ha Riblennoù-Straed eus gourstraedoù ha bannlevioù Roazhon », gant un is-skritell : « Peurheñvelaat enlouc'hadoù treid ». Boutailhoùigoù all a oa skritellet warno : « Uloc'h diwar Azezennoù Kirri-Straed ha - Boutin », « Neudennoù Kraoñ-Kokoz ha Tammoù Fisel Kavet e Lec'hioù Foran », ha « Pennoù Sigaret ha Pennoù Alumetez eus Leur ar C'hoariva Graslin e Naoned, Renk A, 1 da 50 ». E pep lec'h e oa prouennoù eus urzhiadur ha lemmded-spered an den marzhus-se.

Edon o furchal evel-se pa glevis ur strakadenn damvouget, hag e welis un estren o tont tre. Un den liv ar groug gantañ e oa, gantañ ur vantell druezek hag ur skerb-c'hloan uzet tro-dro d' e c'houzoug, a oa kuzhet traoñ e zremm ganti. Enoet-kenañ gant an emellerezh-se, e sellis outañ garv a-walc'h, pa droas war e seulioù goustadik ha serriñ an nor war e lerc'h, gant un digarez grumuzet ha damvouget da vout faziet a gambr. Heuliañ a ris anezhañ buan betek ar pondalez, hag e welout o vont diwar wel e traoñ ar skalier. Prederiet ma oan gant al laeroñsi, e voen diaezet kalz gant an darvoud-se. Anaout a raen boazioù va mignon da vont kuit pa zeue an awen d' e weladenniñ. Gwirheñvel oa ivez, p'edo e ijin-dreist hollgaer ha dibar kreizennet war un abeg, e oa digas war e beadra-eñ, ha, hep mar, bout ankounaet gantañ zoken teurel evezh da brennañ e diretennoù. Klask a ris digor unan pe ziv anezho, ha kavout edo ar gwir ganin, daoust ma ne voen ket gouest da zigeriñ unan anezho a oa pegus evel ma vije bet digoret an tiretennoù gant bizied lous. Oc'h anavezout mat naetadur perverzh Charlig, e ris va menoz kontañ dezhañ an evezhiadenn-se, hogen disoñjal a ris, siwazh, betek... mont a ran re vuan gant va danevell !

23

E ezvezañs a badas hir a-walc'h. A-benn ar fin, skuizh ouzh e c'hortoz, en em stlapis en e gador-vrec'h e-kichen an tan, ha, luskellet gant ar wrez ha pigosadur ar glavennoù war werenn ar prenestr, e vanis kousket. Marteze em boa huñvreet, rak, e-pad a c'houk, e santis en un doare displann daouarn o stekiñ flour va godilli. Pa zihunis da vat, e kavis Charlig Omnez azezet dirazon en tu all d' an oaled, e selloù kreizennet don o parañ war ar flammoù.

« Kavet em eus ac'hanoc'h kousket ken c'hwek, n' em eus ket kredet ho

tihuniñ, » a lavaras en ur vousc'hoarzhin. Frotañ a ris va daoulagad.

« Petra zo nevez e Kêr-Is ? a c'houlennis. Deut oc'h a-benn da gavout ur roud bennak ?

- Gwelloc'h eget na soñje din, emezañ, en ur zamskeiñ e gardedig, he me gav din, a drugarez deoc'h eo ! »

Fromet don, e c'hortozis da c'houzout hiroc'h. En aner. Me 'm bije ranket derc'hel soñj e oa Charlig Omnez douget da 'n damlavar p' edo imoret. Kontañ a ris dezhañ gweladenn an estren hogen c'hoarzhin a reas.

Diwezhatoc'h, pa savis da vont kuit, e sellas ouzhin goap en e zaoulagad :

« Mar bec'h dimezet, emezañ, e lavarfen deoc'h broustañ ho milgin a-raok mont d' ar gêr. Bez' ez eus blevennoù-reunig, berr ha gell, e tu-dindan ho prec'h, dres evel m' ho pec'h briatet, en ur waskañ un tammig, ur vantell feur-reunig !

- Evit ur wech, faziet oc'h, a lavaris lorc'h ennon. Ar blevennoù-mañ a zo din, evel ma c'hellit merzout ; troc'het eo bet va blev n'eus ket pell 'zo hag, hep mar, ar vrec'h-mañ a yae dreist d' an davanañjer. »

24

Krizañ a reas e dal, koulskoude, kemer ac'hanon en e zivrec'h ha pokat din, ar pezh zo rouez a-walc'h digant an den-skorn-se ! Skoazellañ a reas ac'hanon zoken evit lakaat va mantell hag e tennas rabadoù va godilli hag o flouras. Gant aked eo ivez e lakaas va brec'h er vilgin, o palveta anezhi eus an toull-milgin betek an arzorn gant e vizied ampart.

« Deuit en-dro bremaik pa ho po c'hoant, emezañ, o reiñ din ur mell stlapad ouzh va c'hein.

- Bepred, emezon, gant birvidigezh. Ne c'houlennan nemet dek munud div wech bemdez da zebriñ un tamm kreun em burev, peder eurvezh kousk a-fed an noz, ha peurrest va amzer a vez gouestlet deoc'h dalc'hmat, evel a ouzoc'h.

- Bez' e vez, e gwirionez, » emezañ gant ur mousc'hoarzh didreuzwelus.

Evelkent, n' hen kavis ket er gêr pa zeuis d' e weladenniñ ar wech all. Un endervezh, p' edon o tostaat ouzh ar gêr, e kejis gantañ en unan eus e dreuzwiskadurioù muiañ-karet : ur vantell c'hlas hag hir, lost-ar-big ganti, bragoù-kotoñs roudennek, ur c'holier ledan a-us d' e borpant, un dremm duet hag un tog gwenn war e benn, o tougen un daboulinig. Evel just, evit tud all e oa peurvrat an treuzwiskadur, daoust m' hen anavezen, hag e tremenis e-biou dezhañ, - hervez un emglev kozh etrezomp, - hep ober dezhañ na kaout digantañ an disterañ sin nag arouez bennak, o fiziout en un diskleriadenn diwezhatoc'h. Ur wech all, tra m' edon o weladenniñ gwreg ur mignon e Maorepaz, e welis anezhañ, treuzwisket ar wech-mañ evel un artizan paour oc'h arvestiñ ouzh gwerenn ur stal-veskailhez. Laouen e oan o welout edo o heuliañ va alioù ha ken plijet all e oan ma ris dezhañ ur gwilc'had a eilkasas din, dibalamour.

Daou zevezh diwezhatoc'h, e tegemeris un notenn digantañ o pediñ ac'hanon da vont d' e welout d' e di a-benn an abardaez. Siwazh, ar vodadenn-se zo bet un darvoud a bouez em buhez hag ar vodadenn ziwezhañ-holl gant Charlig Omnez ! Emaon o vont da glask displegañ, dinec'h, an traoù evel m' int tremenet.

Kavout a ris anezhañ en e sav e-tal an tan, gant un neuz war e zremm am boa gwelet gantañ div pe deir gwech c'hoazh a-raok, un neuz prederiet gant kudennoù kevrinus kenlakadur-ha-dielfennañ, ma oa ezvezant-krenn diouti pep denelezh, teneridigezh ha mignoniezh. Edo skornek, kevrinus ha ken rouestlet hag un arouez-algebra ! E gwirionez, e gorf a-bezh a oa prederiet, zoken e zilhad laosk hag e benn, deut ken bihan ar ment anezhañ gant gwaskadur e spered, m' edo e dog sanket betek e zivskouarn, o hañvalout bout a-istribilh outo.

Kerkent ha me deut e-barzh e gambr, e prennas an dorioù, ar prenistri hag e plantas ur gador dirak toull an oaled zoken. Tra m' edon oc'h arvestiñ ouzh an evezhioù talvoudus-se gant un aked trivliadus, e tennas eus e c'hodell ur revolver hag, o lakaat ar beg anezhañ ouzh va ividig, e lavaras gant un ton skornet hag izel :

« Roit din an doug-sigaret ! »

Daoust din bout souezhet, e voe gwiriek, trumm ha diyoul va respont :

« N' emañ ket ganin, » emezon.

Mousc'hoarzhin a reas c'hwerv, hag e stlapas ar benveg-lazhañ war ar gador.

« O c'hortoz ar respont-se e oan. Neuze, me ho lakay a-dal gant un dra spontusoc'h, marveloc'h, kendrec'husoc'h eget ar c'hozh tamm revolver-mañ, da lavarout eo, ar prouennoù diwar ar c'hendastum hag an dezastum ma 'z eo c'hwi an hini da damall ! »

Tennañ a reas e garnedig eus e c'hodell.

« C'hwi zo oc'h ober goap ouzhin sur a-walc'h, a hiboudis ; ne c'hellit ket, ur reuziad, krediñ...

- Peoc'h , hag azezit ! . »

Sentiñ a ris.

« En em gondaonet oc'h, a gendalc'has didruez. En em gondaonet hervez va doareoù-enklask, doareoù a anavezit mat, ez oc'h boas outo, a asantit outo, bloavezhioù ha bloavezhioù 'zo ! Deomp en-dro d' an deiz m' hoc'h eus gwelet an doug-sigaret evit ar wech kentañ. Ho komzoù, a lavaras yen, gant bommoù-mouezh dibreder, o teurel ur sell ouzh e notennoù, ho komzoù a oa : « Pegen brav ! Me garje e gaout evidon ! » Eno oa ho kammed kentañ war hent an torfed, ha va frouenn gentañ. Adalek « me a garje e gaout » betek « me am bo anezhañ », hag ar vunudenn vihan « penaos e c'hallan ober evit e gaout », anat oa an araokaat. Peoc'h ! Hogen, evel m' on kustum d' ober, ret oa kaout un dra all a gasfe ac'hanoc'h d'an torfed : n' oa ket trawalc'h hoc'h estlamm anat evit an dra end-eeun. Chwi a vutun sigaret !

Met, ha me o tarzhañ gant trivliad, lavaret em eus deoc'h em boa dilezet ar sigaret !

- Droch ! a lavaras dic'hoarzh, an eil gwech eo hoc'h eus en em werzhzet. Evel just 'c'h eus lavaret din ! Petra natureloc'h evidoc'h da lakaat splann an diskleriadur-se da 'm daoulagad, un diskleriadur ha n' eo ket bet goulennet diganeoc'h, da ziarbenn ouzh an tamalladur. Zoken evel ma 'm eus lavaret a-raok pa 'c'h eus klasket kuzhat ho roudoù n' oa ket trawalc'h ivez. Din da gavout an abeg galloudus a oa ret deoc'h. Kavet em eus an abeg-se, ar c'hreñvañ-holl eus an abegoù : ar garantez a rafec'h anezhañ me gred, emezañ c'hwerv. D' an abardaez m' oc'h deut, hoc'h eus degaset ar brouenn anataüs nemeti war ho milgin.

- Met... a yudis.

- Peoc'h ! Gouzout a ran petra 'lavarfec'h. Lavarout a rafec'h, zoken, m' ho pefe poket d' ur plac'h yaouank bennak he mantell feur-reunig : « Petra en deus an dra-se da ober gant al laeroñsi ? » Va lezit da lavarout deoc'h, neuze, ar vantell-feur-se eo he deus touellet ac'hanoc'h : An doug-sigaret eo en deus prenet ar vantell-feur ! Chomit peoc'h ! Bremañ m' eo lakaet anat an abeg, emeon

o vont da gaozeal diwar an torfed e-un. Peurliesañ e vez klasket an dra a vank da gentañ, n' eo ket se va doare-ober. »

Ken fromus oa e zoare da zisplegañ an traoù ma tremenis va zeod war va muzelloù skalfet, daoust din gouzout e oan didamall, da glevout hiroc'h ar munudoù all eus displegadur splann va zorfed.

« Al laeroñsi 'c'h eus graet d' an abardaez am eus diskouezet deoc'h an doug-sigaret, goude m' am boa bannet anezhañ gant digasted e-barzh an diretenn. Azezet oac'h war ar gador-mañ hag e oan savet evit kemer un dra bennak war ar stal-se. Amzer 'c'h eus bet da dapout krog en doug-sigaret ; prim 'c'h eus graet ! N' oa ket dav deoc'h sevel zoken. Tavit ! Ha soñj 'c'h eus pa 'm eus sikouret ac'hanoc'h da lakaat ho mantell d' an abardaez all, o klask lakaat ho prec'h e-barzh ar vilgin gant aked ? Tra m' edon oc'h ober se, e vuzuilhis ho prec'h gant ul lietenn-vuzuliañ, eus toull ho prec'h betek hoc'h arzorn. Anataet eo bet ar muzul-se gant ho kemener un nebeut deizioù war-lerc'h. Prouet e oa bet e oa an hed resis etre ho kador hag an diretenn-se ! »

27

Berr e chomis.

« Ar peurrest n' eo nemet munudoù da harpañ. O vezellañ gant an diretenn e oac'h pa 'z on deut tre ! Na gomzit ket ! An estren a zeuas tre gant ur skerb en e gerc'henn, me eo an hini 'oa ! Ouzhpenn-se, lakaet em boa un tammig soavon war dornell an diretenn kent lezel ac'hanoc'h hoc'h-unan-penn. Bez' e oa soavon war ho torn pa 'm eus e stardet a-raok kousket, da c'houzout hiroc'h, e vriatais ac'hanoc'h pa guitajoc'h, hag e oa an doug-sigaret ganeoc'h pe un dra all kuzhet warnoc'h. Ar pezh en deus kadarnaet ac'hanon ne oa ket ken an doug-sigaret ganeoc'h, er mod hag en abeg am eus diskouezet deoc'h endeo. O vezañ ma kreden e oac'h gouest c'hoazh da gaout keuz ha da goves ho torfed, em eus klasket div wech reiñ deoc'h da c'houzout e oan war ho roudoù : ur wech, treuzwisket evel ur barzh-kaner morian o vale bro, ur wech all evel un artizan o sellout ouzh gwerenn ur stal-veskailhez m' ho poa eskemmet ho preizh enni.

- Met, emezon, m' ho pije goulennet gant ar meskailher, ho pije gwelet pegen direizh...

- Droch ! e pufas, unan eus hoc'h alioù e oa, d' ober un enklask er stalioù-meskailhez. Ha c'hwi a soñj deoc'h e oan evit heuliañ hoc'h alioù, alioù al laer ? Er c'hontrol e tiskoueze din hoc'h alioù petra chom hep ober.

- Neuze, e c'houlakaan, emezon, c'hwervoni warnon, n' hoc'h eus ket zoken klasket en ho tiretenn ?

- N' em eus ket; » a lavaras sioul.

« Feuket-mik e oan evit ar wech kentañ. Mont a ris d' an diretenn gentañ hag e sachis warni kreñv. Chom a reas harzet homañ evel diagent, o lezel ul lod anezhi dizigor. Koulskoude en ur hejañ anezhi un tammig a-hed hag a-dreuz, e kavis e oa harzet gant ur skoilh bennak gennet war-c'horre an diretenn, ha ne c'halle ket homañ risklañ evel just. O lakaat va dorn enni, e tennis er-maez ar skoailhenn. An doug-sigaret laeret e oa ! Treiñ a ris davetañ gant ur c'harm laouen. »

Hogen e chomis berr ouzh e neuz. Ur sell a zismeg a oa deut d' e zaoulagad o parañ warnon, o furchal em spered.

28

« Faziet on bet, a lavaras goustadik ; ne 'm boa ket rakwelet e oac'h gwan, laosk ha digalon ! Re a vad a soñjen ac'hanoc'h, zoken en ho torfed, ha bremañ e welan perak e oac'h o vezellañ gant an diretenn an noz all. Dre ur stumm all, diaes da ziskleriañ, marteze ul laeroñsi all, hoc'h eus adc'hounezet an doug-sigaret en-dro diouzh ar stal-veskailhez, hag evel ur c'hi bazhataet hoc'h eus daskoret anezhañ din er mod ken heut-se. Soñjet ho poa touellañ

ac'hanon, me, Charlig Omnez ! Muioc'h, soñjet ho poa distruj va difaziusted. Kit kuit ! Dieub oc'h. Ne c'halvin ket an tri foliser o c'hortoz er sal e-kichen, hogen ne welin ket ac'hanoc'h biken ! »

Tra ma chomen sebezet ha sonnet, e kemeras ac'hanon dre va skouarn hag e 'm blenias d' an trepas, o serriñ an nor war va gorre. Houmañ a zigoras adarre, ledan a-walc'h da lezel da dremen va zog, va mantell ha va disglavier, a oa bannet er-maez gantañ, hag e serras en-dro an nor da viken !

N' e welis ket mui. Ret eo din lavarout e troas mat an traoù ganin goude-se, koulskoude, rak va aferioù a yeas war greskiñ tamm-ha-tamm ; adkavout a ris va ostizien a-wechall, ha lod anezho a adkavas ar yec'hed war un dro. Pinvidik e teuis da vout. Un ti brav a breis e bannlev Roazhon hag ur wech ar bloaz ez is da dremen va ehan-labour e Bro-Spagn. Hogen, meur a wech em eus goulennet ouzhin va-unan, en ur boellat war trebarzhusted dispar ha dibar an den-se, ha ne oan ket bet an torfedour e gwirionez, hep gouzout din !

E-giz gwiriekadur :
ROLLEN E. SURZHUR.
Roazhon Keryann, 1970.

(tr. gant YANN TALBOT)

Kan da Afrika

Kendonianñ ' rin va zelenn 'vit dishilhianñ en noz
 Da litanioù a-hed an eurioù peoc'hus.
 Aozañ ' rin va bizied 'vit c'hoari war Gora ar C'heveled ampart,
 A-hed an andennoù hag ar c'hammennoù
 Kanaouennoù ar varc'heien varv
 Ar wareg 'n o dorn.

'N em wiskañ a rin gant lili ha voulouz
 Evit riklañ ingal, diouzh mentadur an tam-tam foll,
 War c'heoteg ar skleurioù a sach an heol.

Em zreid ' lakain solennoù skeudoù glas,
 Sterniet gant al limestra braket war ar struj,
 Evit damdresañ 'vel un arzour
 Pazioù kozh an devezhioù sabad.

War ar bizied ' lakain manegoù tarzhoù-deiz ha huanadoù,
 Evit meuliñ war delenn David,
 Marzhioù eurvezhioù kentañ ar vuhez.

Ha war varmor da leurioù
 E korollin, pourc'het gant pluñv al laboused,
 War ballenn-feur rouaned ar strouezheg hag an dour.

Kavout ' rin ar Varzhed war dreuzoù da balez reterel,
 Evit lidañ war vinvioù diseurt,
 E kendonioù heson ha nevez,
 Da goadoù,
 Da savanenn,
 Da gorfadur,
 Ha da gemmadennoù.

30

Dreist ar Bed klemmoù ar gwent er palmez-doum,
 Dreist traezhegoù kann ar gouelec'h,
 E vodin, war ribl ar stivelloù
 Ma teuz gorrek an deiz,
 O redek war-lerc'h ar merc'hed, ar Vari-Vorgan,
 Ar wazed hag ar maouezed,
 Evit hedata gant o daouarn hag o c'hoarzhadennoù
 Ar c'hendon hesonius a rifl diouzh va zelenn war askell an amzer,
 O klask opalenn diwezhañ da dron neñvel ;
 Ha gant estlamm dirak da garr a dan,
 E lezin o tiverañ
 Diouzh al lestr porfir glan
 Takenn ha takenn
 Dour-mel an Doueed.

(Aod an Olifant.)

NOTENNOU.

Kora (gwregel e yezh wolof) : telenn vras a servij evit kanañ ar barzhonegoù

istorel. Anvet e vez « Sorong » er Foutah Djalou (menezioù Ginea).

Gevel (e galleg e vez lavaret : « griot ») : Daneveller, konter ha kaner, mirour an hengoun hag istorour, a gan an daravoudoù pennañ eus an tiegezhioù meur. N' eus nemeto o c'houzout mat an Istor. Brudet-kenañ e vezent eta. Ar ger a zeu eus ar yezh wolof : « gewel » distummet diwar an arabeg « Rawwal » a dalvez kement ha displeger eus ar Vreuriezh Soufi e-touez ar Vuzulmaned. Ret eo derc'hel soñj ez eo o lennegezh ul lennegezh dre-gomz hepken.

UN DRO-VALE

Un aergelc'h ispisial a gaver war ar c'h- « car-ferry » etre Cherbourg ha Southampton. Leun eo peurvuiañ a Vreizhiz hag a Vreizh-Veuriz. En o zouez, kollet, ur Gall bennak. Paour-kaezh anezhañ ! Beuzet eo gant kanaouennoù dispac'hel ha komzoù goapaus ur vandennad Breizhiz. Ar re-mañ eo nijet kuit o c'hompleksoù. Pell emañ ar vro c'hinidik. Ar Gall er c'hontrol en ur mor a wennha-du ne gred ket peurvuiañ dispakañ an disterañ triliv.

* * *

- Sell 'ta. C'hwi ' gomz brezhoneg ?

An den, war an oad ha laouen tout, a stag da gontañ e vuhez. Eus Pempoull eo. Eñ a oa e soñj sur-mat redek en dianav, en em gav gant brezhonegerien. Ne oa ken nemet ur breizhad penn-kil-ha-troad. Hag evit diskouez deomp e anaoudegezhvat, dav d' ar c'han ! Ur c'h- « Kousk Breizh- Izel » drant ha divezh !

* * *

Dalc'het e vez an « Eisteddfod » broadel bep bloaz e-doug sizhunvezh kentañ miz Eost. Ur genstrivadeg kan eo dreist-holl. Met e-leizh a stalioù diskouezadeg a gaver en-dro da sal ar c'henstrivadegoù. Er sal vras-se ne ya ket sur meur a Vreizhad. Ne gomprenont ket gwall dra nag er yezh nag er c'han. Fentusoc'h e kavont ruzañ o botoù a stal da stal, lezel ur sinatur war pep levr-aour. Keñveriañ Breizh ha Kembre (evit dizoloiñ n' eo ket diforc'hoù met islonkoù), ha dreist-holl klask skoulmañ darempredoù.

* * *

Ar stalioù a gaver war dachenn an « Eisteddfod » a werzh a bep seurt traoù ; dreist-holl levrioù ha kelaouennoù (moulet), pladennoù (pop), ha traoù a seurt-se. Pe ober a reont bruderezh : eus ar « Salvation Army » betek ar gostezenn gomunour en ur dremen dre z-Diwallerezh an Natur.

32

An alkoool a zo difennet groñs war an dachenn, an te avat a zo marc'hadmat. Bez' e c'hellit tremen an devezh a-bezh eno - goude bezañ kemeret ur bilhed - o lonkañ koaven skornet, o lenn ar " Western Mail ", oc'h arvestiñ ouzh delwennoù gwall arnevez pe ouzh merc'hed berr-wisket.

* * *

Ar puboù (pe gafedioù) a vez digor e kêr. Ha diwezhatoc'h eget kustum kement ha diskouez ez eus gouel. Ur gont diniver a vier - « cwrw » evel ma lavarar e kembraeg - a vez lonket, n' eo ket marteze.

* * *

En ur « pub » pe war dachenn an Eisteddfod eo ho peus ar muiañ a chañs da zaremprediñ tud... ha da gavout Breizhiz all. An doare gwellañ eo kantreal gant ur banniel breizhat a-istribilh ouzh ho kein pe ho prec'h.

Sur e kavfet ur c'hembread hag a zo bet e Breizh - e Foujera peurvuiañ - hag a grogo da baeañ deoc'h pintadoù « cwrw » forzh pegement.

* * *

Ur C'hembread a ev, a gan war ar memes tro. N' eo ket tonioù da lonkañ dre ret. Kantikoù ne lavarant ket. Kantikoù drant adkemeret gant an holl. Mezv-dall e vo an dud a-wechoù met ar c'han a vo atav ken dibar. Souezhus.

* * *

Serret ar puboù e kendalc'ho ar ganadeg war an tachennoù kampiñ. Ha pedadennoù a vo a deltenn da deltenn. Betek eurioù gwall zibaot.

* * *

Ur Breizhad a vo pedet alies da « gemer an te ». Pa n' anavezer ket Kembreiz e chomer souezhet-mik o welout ar pred postek a zo ouzh ho kortoz. Hag evit plijout deoc'h e vo graet kafe. An te en istor-se...

* * *

33

Pa ne vezit ket pedet e c'hellit mont d' ur « Fish and Chips » pe en ur c'h- « Chafe » bennak. Ur pred evit netra (koulz lavaret) ho po enno. Ho tistagadur a lakaio meur a servijourez da (vous-)c'hoarzhin, dreist-holl ma fell deoc'h implijout kembraeg ar roll-meuzioù.

* * *

Mar dit du-hont gant ur c'harr ha ma tegouezh ganeoc'h kaout diaesterioù grit eus ho kwellañ evit kaout ur mignon eus ar vro ganeoc'h. Ober a raio evel ma vefe ar c'harr (gall) dezhañ, hep gouzout na pelec'h emañ an tizhoù, na mann ebet, e garr renket e-kichen hoc'h hini, hag e giz-se e vo dreset ho karrigell deoc'h evit netra pe dost gant ur paotr an AA pe ar RAC.

* * *

Tremen un toullad devezhioù e ti ur c'hembread a zo eus ar plijusañ. An ti a zo deoc'h. Sevel a rit pa garit hag ar skinwel a ya atav en-dro. An taolioù a zo dianav pe neuze dister-dister. Bevañ a reer e kadorioù-brec'h.

* * *

N' o deus ket ar Gembreiz an hevelep temz-spered ha ni. Int a zo sur levezonet gant an « humour » saoz. Pa dremen un abadenn bennak er skinwel ne c'hoarzhher ket en hevelep mareoù ha tud ar vro. Ne gomprenet ket holl ar pezh a dremen met koulskoude.

* * *

Evit traoù 'zo, ret eo lavarout, Kembreiz n' int ket leun a ijin. Pa seller ouzh an tiez, heñvel int e pep lec'h, e Skos, Kembre pe Kent. Ar boued ivez a zo unton. N' eus ket a « spécialités locales » pe neuze int dianav deomp.

Ar c'hêrioù kennebeut n' o deus ket kalz a bersonelezh. Daoust dezho bezañ dedennus a-wechoù. Caerdydd a zo meur a dra da zizoloñ enni, daoust m' hon eus graet ni nemet ruzañ kêr, o vont eus ur « Wimpy » d' ur stal bennak, met an diforc'h brasañ a verzer eo en ur sellout ouzh an dud. Kembreiz n' int ket Saozon ! Gwelet e vez diwar o emzalc'h.

* * *

34

« Arms Park » a zo un dachenn « rugby » e Caerdydd : nevez-flamm. Eno e vez c'hoariet ar matchoù etrevroadel. Un dra bras divent eo. E Bro-C'hall ne gaver ket a seurt-se. An arvesterien o deus feurmet o flasoù en a-raok ha se evit ur bloaz a-bezh. Ur gador a c'hortoz anezho evit pep match talvoudus.

Cholori a vez e-doug ar matchoù. Kanaouennoù e kembraeg forzh pegement. Setu pell 'zo n' eo ket bet trec'het Kembreiz war o zachenn.

* * *

N' eo ket re zisplijus bezañ klañv e Breizh-Veur. N' ho peus ket gwall dra da zispign. Ar vezeien a vez paeet gant ar Stad. Ha tapout an tetanos ne zeu ket da wall ger. Al louzeier n' int ket evit-se gwelloc'h eget amañ. Met dre ma 'z oc'h estren e vo graet war ho tro hag e klañvdioù bras Caerdydd ho po div pe deir glañvdiourez d' an nebeutañ evidoc'h hoc'h-unan.

* * *

Ur blijadur a vo ivez evit Kembreiz kontañ ho kwalleurioù-c'hwi d' an holl. Fistilhat a reont war bep tra a zegouezh ganeoc'h ha buan e c'hello an hanter eus Caerdydd gouzout ho peus tapet an tetanos. Zoken ma n' eo e gwirionez nemet un arouez eus ar c'hleñved. Ispiserez ar c'harter a choulenno diganeoc'h penaos emañ ho troad, ha daoust ha gwellaet eo.

* * *

Komzet hon eus dija eus an « humour ». Plijout a ra kalz da Gembreiz blagiñ. C'hoarzhin a reont evit nebeut a dra.

Pa anavezont un toullad gerioù brezhoneg n' eo ket bepred ar re vravañ, sklaer eo. Fent o devez pa roont o chomlec'h da skouer : « e-kichen ar c'hastell ruz ! » pe pa gomzont eus ar banniel « an erouant ruz ! ». Ar ger « ruz » a vez implijet kalz e kembraeg pa vez Breizhiz nepell.

* * *

Ur breizhad evito a zo un debrer onion. Ma 'z eo ar bourenn plantenn vroadel Kembreiz, evito hini Breizh a zo un onionenn. C'hoariit biz-meud e Kembre hag e welfet.

- Where are you from ?

- Brittany.

35

- Ah ! Where the onions come from.

Breizh a zo goloet a onion. Ne vez labouret nemet war-dro an onion. Ne zebret nemet-se ha ne werzher netra all. Breizh a zo ur parkad onion. Setu tout. Desket e vez traoù a-zivout Breizh e pep lec'h.

Evit hoc'h « enoriñ » e vo degaset deoc'h un onionenn boazh - unan - war ur plad ha ret e vo deoc'h he zebriñ dirak an holl. C'hoarzhadeg a vo ha stlakadennoù daouarn ; paeet e vo deoc'h ur banne « cwrw » ouzhpenn.

* * *

Kampoù a vez evit ar yaouankizoù e Kembre. Daou c'hant bugel o komz kembraeg e-pad ur sizhun ha daou c'hant all ar sizhun war-lerc'h. Se e-pad c'hwec'h sizhun. Ret eo hen ober. Pinvidik eo ar c'hampoù ret eo lavarout : skodoù o devez forzh pegement. Setu ma tap alies ar renerien un dro-spered kargidi bihan. Kement-se n' eo ket gwall blijus. Ne rint ket ur paz e diavaez ar reolennoù. Nann 'vat. Zoken ur breizhad o tremen a baeo dek shilling evit bezañ kousket e korn ur prad ha debret daou v- « breakrast » dister. Ne fell ket deomp tammal anezho pell alese. Met tapet o deus Kembreiz perzhioù-fall Breizh-Veuriz siwazh.

* * *

Met evel e pep bro ar vugale a zo frank, digor, distro. Ha daou estren evito a zo un teñzor nevez. Ha pinvidikaat a raio ar vugale o-unan an teñzor-se. Dek shilling. Frouezh ur gest graet buan ha buan evit daou vreizhad kollet en ur

c'harr-boutin bugale. E-kreiz menezioù Kembre. Dek shilling. Ar priz paeet evit plantañ an deltenn.

* * *

E Breizh pep emsaver yaouank en deus klevet komz eus Kembre. Du-hont ar re yaouank ne ouzont ket petra eo Breizh. « Llydaw ». Ret deomp deskiñ dezho ar ger kembraek zoken. An darn vrasañ eus Kembreiz a bled gant o aferioù ha ne deont ket da sellout e aferioù ar re all. N' eo ket falloc'h. M' hon eus ni ezhom da gemer skouer war Gembreiz, int a zlefe ober kemend-all koulskoude. Breizhiz a gav mat pep tra a ra Kembreiz. N' eo ket gwall boellek an emzalc'h-se. Ar Breizhad en deus perzhioù prizius dianav e Kembre.

* * *

36

Redek a-dreuz Kembre e karr-samm a zo ur blijadur. Ar c'hirri a chom a-sav niverus, n' eus forzh pelec'h. Dreist-holl ar c'hamionoù. Ar pezh ne zegouezh morse amañ e Breizh.

Estren evel ma 'z oc'h e krogo ar blenier da gontañ kaozioù a bep seurt. Alies an hevelep re a garr da garr. Met pa gavont ur stivell vat n' eus ket tu d' o herzel. Aberfan da skouer ; an darvoud spontus-se a bermetas da unan komz e-doug hir amzer, o reiñ munudoù kalvezel diwar-benn abegoù ar gwall-zarvoud.

N' eus forzh penaos, pa na vefe nemet gant an onion ne serrer genou ebet.

* * *

Liverpool n' emañ ket ken e Kembre. Divalav-mezh eo. Ha pa zegouezher du-hont e-pad an noz n' eo ket gwall fentus, evit an estren.

Eno e kaver an darn vrasañ eus ar « Skinheads », ar « pennoù touzet » evel ma raemp anezho. N' int ket brav da welout gant o botoù bras divent hag o dilhad glas, o brageier war-bouez bretelloù. O blev a zo troc'het berr-berr, gwashoc'h eget ur G. I. Amerikan.

Ar « Skinheads » n' int ket evit gwelout an estrenien hag e-pad an hañv e tremenont o amzer o terriñ dezho o fas hag o laerezh o zraoù : arc'hant, dilhad, ha me oar ! E-pad ar peurrest eus ar bloaz e tagont kentoc'h an dud divroet, Pakistaniz dreist-holl, dre gasoni hepken, evit tremen an amzer hag en em « zefouliñ ». Yaouank-tre int peurvuiañ ha renet gant ul « leader » un tammig koshoc'h.

N' hon eus ket kredet diskenn eus ar bus e-lec'h ma oamp pignet a-raok bezañ degouezhet dirak an ti hent-houarn. Pennoù touzet a oa e pep lec'h hag un itron gozh, o welout hor seier kein a lavaras deomp teurel pled. En ti hent-houarn ne oamp ket hon-unan gant seier kein. An holl rederien-bro hag an hippied a bep seurt a zeue da glask repu hag un treñ evit kuitaat ifern ar pennoù touzet.

Hag e-kreiz ar spontadeg-se e teuas tri faotr yaouank da brezeg deomp diwar-benn Doue, ar feiz. Cliff Richard, ur c'haner pop brudet, deuet da vezañ kristen a oa o fenn-rener. Pebezh kemm, pebezh disheñvelder goude an dec'hadeg dirak ar « skinheads ».

* * *

37

An treñioù saoz a zo marc'had-mat met kozh, trouzus, gorrek ha stroñsañ a reont diehan. Kombodoù a gaver miret d' ar merc'hed hepken. Hag alies e chom an treñ a-sav e-kreiz ar maezioù ne oar den d' ober petra. Kenkoulz c'hoazh biz-meud.

E Bro-Skos e santer dija ez aer war-zu an Norzh. E miz Eost eo freskoc'h an amzer eget e Kembre. Glav a ra alies ouzhpenn-se. Evel ma lavare ur blenier

karr-samm :

Ma ne welez ket ar menez eo e ra glav,
Ma welez ar menez eo emañ o vont d' ober glav.

Unton a-walc'h eo ar vro daoust ma n' eo ket displijus. Tosennoù glas a bep tu. Komz a ran eus al « Lowlands » rak n' hon eus gwelet nemet ar c'horn-se ha c'hoazh, Edinbourg hepken. Dinedin a zo sur mat kêr bravañ Breizh-Veur, daoust ma vo kavet aes kaeroc'h e Breizh. Met ken divalav eo ar c'hêrioù dre zuhont !

Tu a vefe d' he c'heñveriañ gant Kemper, n' eo ket dre ma vefe un darempred bennak dre ar stumm pe an neuz, met dre ma ne vev koulz lavarout nemet war gont an douristed. E pep stal e kaver bitrakoù diniver evit ar gantreerien etrevroadel. E gwirionez ne weler ket kalz a Skosiz e Dinedin, Saozon, Gallaoued, Amerikaned, Kanadianed, Italianed ne lavaran ket.

* * *

Spontus eo an niver a dud a vez war ar straedoù e Dinedin. Ar stalioù a zo leun-kouch ivez. E pep lec'h tud o vont hag o tont.

Ti ar Yaouankiz a oa leun (evel peurvuiañ). Met plac'h an « Tourist Office » a gavo lojeiz deoc'h e ti mignoned dezhi. Evel-se vez graet ! Ur gambr ho po, a-gevret gant tud yaouank all, e ranndi bras tud eus bro-Holland. Klevout a refet a bep seurt yezhoù. Ne vo ket ar brezhoneg anhini diwezhañ.

* * *

Plijus eo d' ar sul d' an noz mont da selaou ar brezegerien war ar straed. Pintet int war ur c'hased bennak hag e tibunont a bep seurt. Beleien o veuliñ ar feiz e Jezuz-Krist hag o kondaoniñ ar vuhez hudur ma vevomp enni. Kleizourien o youc'hal dispac'h an hini gwasket. Hippied o tistreiñ eus an Nepal, « lamaed » nevez, o kanañ kantikoù d' un doue indouat bennak. An arvestourien en em vod endro, o troc'hañ meur a wech e gaoz d' ar prezeger hag alies a vez diviz etre daou zen.

38

* * *

Edinbourg o vezañ ur gêr evit touristed, en em santit rediet da brenañ ur « Souvenir » bennak a-raok ma vo fontet tout hoc'h arc'hant. Ker eo an traoù-se evel just met n' eo ket an dibab eo a vank. Koulskoude n' eus ket diaesoc'h eget ur c'hilt da gavout. Ret e vefe deoc'h e lakaat ober ! Ar pezh a zeu da ger ruz. Ma kavet unan prest-hag-all e vo eus ar re glasel. N' eo ket falloc'h evel just met n' it ket da zougen anezhañ e Skos, kenkas na dapfec'h un taol dorn digant ur Mac bennak, enebour a-viskoazh da livioù an tartan a zougit.

* * *

Ur veaj e Skos pe e Kembre a zo yac'hus evit ar re a vutun re. Ar butun saoz a zo gwir foenn, dous, fall-put ha ker ruz. Ha keroc'h c'hoazh eo prenañ ur pakad « Gauloises » (distagañ : Gawl-hawaz). An doare ma vez diskouezet ar Gall a zo bepred heñvel : un den tost moal, ur bered euskarat war e benn ha dirazañ ur werennad gwin ruz.

* * *

C'hoari biz-meud e Skos a zo ar c'hontrol bev eus Kembre. Gwelloc'h eo kaout ur c'harr-tan ma fell deoc'h gweladenniñ ar vro ha pignat betek al Loch Ness pe uheloc'h en « Highlands ». Rak en diavaez eus Edinbourg n' am eus gwelet koulz lavarout netra. N' eus forzh penaos an amzer a ro c'hoant deoc'h distreiñ davet ar Su.

Ar pezh n' eo ket eus an aesañ o vezañ ma kavit c'hoazh strolladoù « Skinheads » war ho hent.

* * *

Annan a zo ur gêrig e su bro-Skos, nepell eus Carlisle. Sioul met e-doug an hañv e teu pennoù touzet da dremen eno o vakañsoù. Eürus omp bet evit ur wech da gejiñ gant tri gall yaouank eus kostez Pariz (unan anezho mab ur breizhad divroet - evel just). Da bemp a-enep dek ha ganeomp kontilli ha pikejoù an deltenn, eo kroget ar pennoù touzet da gaout aon. Dek a-enep daou pe tri a ya c'hoazh met pa gaver pemp hag armet mat, nann. Klasket o deus hon dispartiañ. Ne oa ket tu, n' omp ket ken sot-se. Kavet o deus gwelloc'h mont da c'hoari las e lec'h all.

39

* * *

Ar gwellañ a oa d' ober a oa skarañ pell alese ; ar pezh a voe graet en un devezh. E karr-samm mar plij. Annan-Abertawe (Swansea). Sellit ouzh ar gartenn ha grit kemend- all. Gouzañvet hon eus ivez. Ouzhpenn 300 km toullbachel e kouf ur c'hamion, hep gellout arvestiñ ouzh ar vro zoken. Ha dres goude-se karget en un doare tank eus an arme gant hippied ha rederien-bro a bep seurt : ur gwir doull-avel. Dalc'hit soñj eus an hent : an M6.

* * *

M' en em gavit e kreiz an noz en ur gêr ho po an holl chañsoù da vezañ goulennataet gant ur poliser-bobby, cops, copper-bennak diwar-benn ho kantreadennoù.

- Pegement a arc'hant a chom ganeoc'h ?

Nebeut a dra peurvuiañ.

- Daoust ha lazhet ho peus unan bennak ?

Piv ? Setu goulennoù !

- Pelec'h ez it ?

Aze. En un ti, an niverenn 472. Aze ez it sur met n' eo ket an niverenn-se nag ar 427 ho poa roet un tammig goude. Gwelet oc'h gant ar flik evel un den iskis, sur. An dra-se ne vira ket ouzhoc'h da zihuniñ tud da beder eur eus ar mintin.

* * *

Ar C'hembread er gêr a dremen e amzer o lenn kelaouennoù hag o sellout ouzh ar skinwel. Diouzh an noz ez a d' ar pub nesañ. Er puboù-se e kaver atav an hevelep tud, boazet da zont aze bep noz. Ne ever nemet bier, mat a-wechoù, fall alies dre ma vez klouar pe re zous.

* * *

40

Kembreiz n' int ket gwall zibar. Ma c'houlennit e anv digant unan bennak e vo sur mat Jones pe un dra e-giz-se. Chañsoù oc'h eus da gouezhañ mat ma 'z it davet unan bennak en ur lavarout : « Hello Mr. Jones ! ».

An Aotrou Jones, emsaver, a zo ezel eus ar Plaid Cymru. Mont a ra bep bloaz d' an Eisteddfod ha selaou a ra Dafydd Iwan. Met ar pezh a blij dezhañ dreist pep tra eo ar bier hag ar rugby.

41

FRIEDRICH HOLDERLIN

(1770-1843)

HUPERION THALIA-FRAGMENT

Troet diwar an alamaneg gant Alan E. AR BERR

42

Evit Breizh, ya ! Hogen evit ar pezh a zo kant gwech talvoudusoc'h,
kant gwech santeloc'h eget Breizh, evit ar wirionez !

- O klask an Holl, ar pezh hoc'h eus a c'hellit koll.

- Ar pezh am eus n' eo netra din hep an Holl.

Roparz HEMON

Ur Breizhad oc'h adkavout Breizh

Bez' ez eus daou uhelvennad eus hon hanvoud : ur stuz eeun-meurbet, ma klot a-geveskemm hon ezhommoù ganto o-unan ha gant hon nerzhoù, ha gant kement tra a zo e darempred ganimp, dre urzhiadur rik an natur, hep emell eus hon perzh, hag ur stuz sevenaet-kenan ma c'hoarvezfe hevelep tra gant ezhommoù ha nerzhoù kreñvaet ha liesaet diziwezh, dre an urzhiadur emamp en degouezh da reiñ dimp hon-unan. An hent ezkreizus ergerzhet a-stroll pe a-hinienn gant un den eus ur poent (a eeunegezh glan pe glanoc'h) d' egile (a sevenadur klok pe klokoc'h) a hañval, hervez e roudoù pennañ, bezañ bepred heñvel).

Un nebeut eus ar roudoù-se, ouzhpenn o durc'hadurioù, oa da vezañ deskrivet el lizheroù a vo kavet un niver anezho amañ da heul.

An den a garfe a-walc'h bezañ e-barzh pep tra hag a-us da bep tra, hag ar frazenn e bezskrid LOYOLA :

NON COERCERI MAXIMO, CONTINERI TAMEN A MINIMO

a c'hell azonañ, ken arvezioù arvarusañ an den a c'hoanta hag a suj pep tra, ken ar stuz kaerañ hag uhelañ a c'hell tizhout. D' hon youl rez eo divizout an dalvoudegezh hag ar ster a dle ar frazenn-se kaout evit pep hini ac'hanomp.

43

Zakunthos.

Bremañ e fell din distreiñ da 'm Ionia : en aner 'm eus kuitaet va mammvro, ha klasket ar wirionez.

Penaos ivez e c'halfe komzoù bastañ da 'm ene sec'hedek ? Komzoù a gavan e pep lec'h, ha Iuno ebet.

Kement hag ouzh ar marv e'm eus kas ouzh holl distervezioù truezus an Dra hag an Netra. Gwinkal a ra va ene a-bezh ouzh an dic'henezh.

Pezh n' eo ket din an Holl, hag an Holl da vat, n' eo netra din.

Va Bellarmin ! pelec'h e kavimp an Unan, a rofe an diskuizh dimp, an diskuizh ? Pelec'h e tassono c'hoazh evidomp ton hon c'halon e deizioù benniget hon bugeliezh ?

A ! gwechall 'm eus e glasket er genvreudeuriezh gant an dud. Kavout a rae din e tlee tavantegezh hon boud dont da vezañ pinvidigezh, gant ma teufe daou

seurt tavanteg da vezañ ur galon, ur vuhez dirannadus, evel pa c'hoarvezfe holl doan hon hanvoud hepken eus ar rannidigezh diouzh kement a genglot.

Kounañ a ran gant levenez ha melkoni an doare ma klaske va boud a-bezh gounit a-striv ur mousc'hoarzh a galon, an doare ma 'n em lezis da vont evit ur skeud a garantez, ha pegen displeet e teuis da vezañ. A ! nag alies 'm eus kredet bezañ tizhet an eskemm sakr, ha ne raen nemet goulenn, goulenn, hag eno edo ar paour-kaezh, diaezet hag abaf, drouk alies ivez - dihuediñ an amzer eo a felle dezhañ, netra sirius !

Ur bugel dall e oan, Bellarmin ker ! Perlez a felle din prenañ digant klaskerion-vara, a oa paouroc'h egedon, ken paour, ken sanket en o reuzeudigezh ma ne ouient ket pegen paour e oant, ha ma 'n em gavent mat-kenan en truilhoù a zivilhe en-dro dezho.

Diwasket-mik on bet avat gant meur a douell.

Krediñ a raen e gwirionez bezañ kaset d' ar strad. Ur santad dizehan a beurzistruj zo ur glac'har hep e bar, p' en deus an hanvoud kollet kement eus e dalvoudegezh. Gwasket oan gant un digalonegezh dreistmeiz. Ne greden ket sevel va daoulagad dirak dremm an dud. Aon a 'm boa rak c'hoarzh ur bugel. Padal e oan habask ha sioul-meurbet ; hag alies e kreden mui pe vui, ha gant plijadur dreist, e galloud-salviñ meur a dra. Alies e c'hallen e kuzh gortoz pezh a glasken digant ur glad bihan nevez-prenet, digant ur verdeadenn, digant un draonienn skoachet ouzhin gant ur menez.

44

Va nerzhoù a yeas da get ken anat ha va c'halonegezh.

Poan a 'm boe da strollañ dismantrou ar mennozioù mennet gwechall ; ar spered lemm oa koshaet ; e luc'h neñvel a santen, a-vec'h savet dirazon, o vont tamm-ha-tamm war deñvalaat.

Moarvat, pa hañvale din e ve talvoudek un deiz bennak peurrest va buhez : pa zivorfile va lorc'h, neuze ne oan tra nemet oberiantiz, hag ennon edo hollc'halloud an dic'hoanag : p' he doa an natur ezhommek ha dizeriet euvret ur banne levenez, e sanken gant nerzh e-touez an dud, e komzen gant entan hag e santen ivez meur a wech daeroù ar wenvidion e 'm daoulagad ; souezhañ a raen pa skede adarre ur mennoz pe skeudenn ur gouron e noz va ene, ha laouen oan evel pa zeufe un doue er glad paouraet, neuze e seblante din edo ur bed o vont d' en em stummañ ennon ; hogen seul feulsoc'h ma sav hon nerzhoù morgousket, seul skuishoc'h e tiflakont, hag hon natur manet gant he c'hoant a zistro d' ar boan daougementet.

Eurus, Bellarmin ! eurus neb en deus tremenet tanarnod ar galon, neb en deus gouezet kompren huanad ar c'hrouadur, santad ar baradoz kollet. Seul uheloc'h ma sav an natur a-us d' al loen, seul vrasoc'h an arvar da zizeriañ e bro ar verbbadelezh !

Hogen un dra 'm eus c'hoazh da gemenn dit, breur karet !

Spontañ a raen en-dro rak eñvorioù 'zo p' edomp war dismantrou Henroma. Ken aes e riskl hon spered diwar e hent ; ret eo dimp alies pellaat diouzh sarac'h un delienn evit na ve ket direnket en e oberoù didrouz.

Bremañ avat e c'hallan c'hoari gwech an amzer gant speredoù an eurvezhioù tremenet.

Keneil kozh, kouezhet oa an nevez-amzer warnon e-kreiz va enkreiz. Gwechall e 'm bije he santet a-bell pa zihune ar skourroù sonnet ha pa skoe un aezhenn skañv ouzh va jod. Gwechall e 'm bije goanaget diganti siouladur da bep glac'har. Hogen goanag ha drouksant o doa tamm-ha-tamm steuziet eus va ene.

Hag eno edo bremañ, e holl glod ar yaouankiz.

Hañvalout a rae din bezañ laouen en-dro. Digeriñ a ris va frenester hag en em wiskañ evel evit ur gouel. Gwir eo e tlee ivez an estren neñvel dont da 'm gweladenniñ.

45

Gwelout a ris an holl o redek er-maez dindan an amzer, war mor plaen Smurna, ha war e aodoù. Trivliet oan gant gortozioù espar. Er-maez ez is da 'm zro.

Neuze en em ziskouezas anat hollc'halloud an natur. Hogos pep dremm a splanne a galon ; dre-holl e veze fentigelloù didro hag an eil, e-lec'h kevarc'hañ egile evel boaz en un doare lidel-meurbet, a astenne dezhañ e zaouarn. Pep tra oa yaouankaet hag entanet gant an nevez-amzer skedus ha kuñv.

Ar porzh laouen a vordilhe gant listri o tridal, warno garlantezioù bleuñv o nijal ha gwin Khios o lintrañ ; ar barradurioù meurta a zassone gant tonioù drant ; koroll hag ebat a safare dre an oulmoù hag ar plataned.

A ! klask a raen muioc'h eget se. Se ne c'halle ket salviñ diouzh ar marv. Hep rat din, beuzet e beunegezh, e teuis tre e liorz Gorgonda Notara, un anaoudeg din.

Strafuilhet e voen gant un tramaduilh en ur genalez.

A ! - er santad poanius-se eus va digenvez, gant ar galon wadek-se, goullo a bep levenez - en em ziskouezas-Hi din ; edo eno dirazon, habask ha nevet evel belegez ar garantez ; evel gwiadet diwar aezhenn ha goulou, ken speredel ha ken tener ; a-us d' he mousc'hoarzh leun a beoc'h hag a vadelezh neñvel, he daoulagad bras-entanet a drone gant meurdez un doue, ha rodelloù aour a wagenne gant avel an nevez-amzer war he zal evel koumoulennoùigoù war ar ruzell-veure.

Va Bellarmin ! mar gallfen reiñ dit da c'houzout, bev hag a-bezh, an dreistlavar a c'hoarvezas ennon neuze.

Pelec'h edo bremañ doanioù va buhez, he noz hag he dienez ? An holl varvelezh ezhommek ? Hep ket a var, ez eo seurt ampoent a zieubidigezh an hini uhelañ ha gwenvidikañ a c'hell an natur diheskadus derc'hel enni. Ober a ra kempouez da Aioned hon buhez-plant ! Ar marv oa va buhez war an douar, ne oa ken eus an amzer, va spered adsavet ha disparlet a verze e nesaelezh hag e orin.

Bloavezhioù zo tremenet ; mont ha dont a ra ar gwiantenioù ; meur a releg eus da Italia, meur a skeudenn skedus eus an natur, tarzhet diwar faltazi neñvel, o deus laouenaet va c'halon. Hogen ar pep brasañ zo bet diverket gant an amzer. He lun hepken zo chomet ganin, gant kement a oa nes dezhañ. Emañ-hi aze c'hoazh dirazon, evel d' ar c'houlz nevet ha mezvus m' he c'havis : an tasmant flour a stardan war va c'halon e fo ; klevout a ran he mouezh, son sklinton he zelenn. Emañ frank aze dirazon, neveted he c'halon hag he spered, evel en un Arkadia beoc'hleun, ma vrañskell bepred had ha bleuñv en aer sioul, ma tarev an eost hep toufor ar c'hreistevezh, ma struzh ar rezin melus, ma n' emañ ket an aon o kaeliañ an tir diogel, ma ne ouzer tra nemet nevez-amzer beurdad an douar, an oabl digoumoul hag e heol, hag e steredegi karadek.

46

Melite ! A Velite ! boud neñvel !

Karout a rafen a-walc'h gouzout hag e talc'h koun ac'hanon c'hoazh gwech an amzer. Keuz he deus din marteze. Hec'h adkavout a rin e ne vern pe goulz eus an hanvoud peurbad. Hep mar ! pezh a zo ken nes ne c'hell ket tec'hout da viken.

A ! an doue enomp a vez atav digenvez ha paour. Pelec'h e kav e holl nesaeion ? A oa aze un deiz, hag a vo aze ? Peur e tegouezho adkejadeg veur ar speredoù ? Rak ur wech edomp, war a gredan, holl a-gevret.

Noz vat, Bellarmin, noz vat !

Warc'hoazh e kontin siouloc'h.

Zakunthos .

Dizankouadus eo din pardaez deiz va deizioù, gant kement a verzis e 'm mezvidigezh. Evidon e oa kaerañ tra a c'hell reiñ nevez-amzer an douar, an oabl hag e luc'h. Berañ a rae ar ruzell-noz en he zro evel klod ar sent, hag ar c'houmoulennouigoù aour tener en aezhenn a bare o mousc'hoarzh d' an traoñ, evel arc'houereed neñvel laouen gant o c'hoar war ar glenn, pa gerzhas en hon touez e hollgaerded ar speredoù, ha ken mat neoazh, ken hegarat e-keñver kement a oa en he zro.

En em vountañ a rae an holl en-dro dezhi, hañval gant pep hini e tigloze evitañ ur rann eus he boud. Ur merzad nevez ha tener, un nesaegzh c'hwek oa savet kenetrezo ha ne ouient ket penaos e oa c'hoarvezet.

Hep goulenn, e ouezis e teue eus glannoù ar Paktolos, eus un draonienn digenvez en Tmolos ma oa en em dennet he zad pell a oa endeo, un iskis a zen kerseet gant saviad ar C'hresianed er mare-mañ, evit ober war-dro e enkrez hurennek, hag e oa he mamm, gwechall kurunenn Ionia, kar da Gorgonda Notara.

47

Pedet e voemp gant Notara da dremen ar pardaez gantañ dindan ar gwez, hag evel ma oa troet bremañ hon speredoù ne soñje den kimiadiñ diouzh ar re all.

A-nebeudoù ha mui-ouzh-mui e savas etrezomp buhez hag awen. Komz a rejomp kalz eus bugale hollgaer Henionia, Sappho hag Alkaios, Anakreon, dreist-holl eus Homeros, eus e vez e Nio, eus ur c'hev er reier nes war glann ar Meles, ma tlee an hini hollgaer bezañ lidet meur a eurvezh entan, hag a-zivout meur a dra all ; evel gwez flour al liorz en hon c'hichen o skuilhañ war an douar o bleunioù distaget gant anal an nevez-amzer, e tigore an eil kalon d' eben : pep hini en e zoare, hag ar re baourañ kenkoulz, a roe un dra bennak. Melite a lavaras meur a gomz neñvel, diardoù, didroidell, gant tra nemet eeunegezh nevet. Alies, p' he c'hleven, e teue war va spered tresadennoù Daidalos : ar gwel anezho, hervez Pausanias, oa un dra doueel daoust d' o eeunder rik.

Hir e chomis azezet, dilavar, hag e euvren ar gened neñvel a dreante va c'hreizon evel skinoù ar goulou-deiz hag a c'halve eginou mouget va boud d' ar vuhez.

En diwezh e voe komzet ivez eus burzhudoù ar vignoniezh c'hresian, eus an Dioskored, eus Akhilleus ha Patrokles, eus falanks ar Spartiz, eus an holl garourion ha karantezed a zo deuet war ar bed pe aet diwarnañ, dirannadus, evel luc'h peurbadel an neñv.

Neuze e tihunis. « Ne dlefemp ket komz eus se », emezon.

« Seurt splannder a gas da get ar geizh ez omp. Hep mar e oa devezhioù aour ma veze eskemmet an armoù, ma veze an eil karet gant egile betek ar marv, ma veze engehentet bugale divarvel en entan ar garantez hag ar gened, kurioù evit ar vammvro, kanoù neñvel, komzoù fur peurbad, a ! ma rebeche c'hoazh ar beleg egiptat da Solon : «C'hwi Gresianed zo krennarded e pep amzer !» Bremañ omp deuet da vezañ kozhidi, speredekoc'h eget ar re hollgaer a zo aet da anaon ; nemet un druez eo ez a kement a nerzh da zizeriañ en un elfenn ken estren ! »

« Ankoua se da nebeutañ evit hiziv, Huperion ! » eme Notara ; hag edo ar gwir gantañ.

Lagad Melite, bras ha garv, a bare warnon. Na 'm bije ket ankouaet pep tra.

War an hent da vont e kêr e teuis en he c'hichen. Gant nerzh e starden va divrec'h ouzh va c'halon gridiennus. Evit gallout komz, e voustren war reustl an turmud ennon.

48

A va Bellarmin ! Nag he meizañ a ris, ha na laouenaet e voe gant se ! nag ur bed a vennoziou a zevoudas ennon ur gerig deuet dre zegouezh diganti ! Gwir gourzrec'h ar speredou e oa-hi da gement tra bihan ha gwan, unvanidigezh sioul hon preder hag hon awen.

Kimiadiñ a rejomp dirak ti Notara. Ha kuit en ur drabidellañ, o tridal gant al levenez, o krozal hag o c'hoarzhin war ar bihan ma oa aet va c'halon en deizioù tremenet, e sellis gant ul lorc'h dreistlavar ouzh va gloazioù a wechall.

Neuze, pa zeuis d' ar gêr, pa gerzhis betek ar prenester hag ar bleunioù kresket gouez ha hanter grinet, pa savis va sell war-du kreñvlec'h Smurna kouezhet en e boull, gourvezet dirazon en amc'houlou, nag iskis ha sebezus e kavis kement-se !

A ! ken alies oan chomet a-sav du-hont un amzer a voe, da greiznoz, pa na c'hallen ket menel kousket war va fled digenvez, pa glemmyuden war dismantrou er mare gwelloc'h ha d' ar spesou anezho !

Bremañ e oa distroet, nevez-amzer va c'halon. Bremañ e 'm boa pezh a glasken. Henn adkavet e 'm boa e hebreter navel Melite. Tarzhañ a rae an deiz ennon c'hoazh. Ar boud uhel en doa galvet va spered er-maez eus e vez.

Hogen pezh e oan, henn oan drezi. Hi ken kuñv oa laouen gant al luc'h a bare ennon, hep gouzout dezhi ne oa nemet adsked he hini. Re abred avat e santis e teuen da vezañ paouroc'h eget ur skeud pa na veve ket ennon, en-dro din, evidon, pa na zeue ket da vezañ din ; e teuen da vezañ koulz ha netra pa em denne diganin. C'hoarvezout a-hend-all ne c'halle ket, ret oa din atersiñ gant souflam pep lavar, pep arvez anezhi, heuliañ he sell, evel pa ginnigfe va buhez tec'hout diganin, buhez war vordo etre neñv ha glenn ; a Doue ! ya, kiminiad ar marv e ranke bezañ evidon kement mousc'hoarzh sioul ha nevet, kement ger neñvel diganti, a lavare din ha bastet e oa d' he c'halon. An dic'hoanag-mañ a ranke kouezhañ warnon : ar c'hement hollgaer a garen oa ken hollgaer ma tremene hepzon. Ra vin pardonet gant ar santez ! alies e villigan an eur m' he c'havis, hag e konnaran dre ar spered ouzh ar grouadur neñvel dre m' he deus va dihunet d' ar vuhez nemet evit va diwaskañ en-dro gant an uhel m' edo. Daoust hag e c'hell kement a zivadelezh dont e ene unan ken madelezhus ?

49

Purgos e Morea.

Morgousk, nec'h ha meur a weledigezh iskis, steuziet a-vec'h hanter stummet ennon, o deus abaoe miret ouzhin a lavarout pezh a felle din kemenn dit. Devezhioù kaer a'm bez alies. Neuze e lezan va c'hreizon en e roll, da hunvreal ha da brederiañ hervez e c'hoant ; dindan an amzer e vevan peurliesañ ; rozioù ha traoniennoù Morea a glot flour gant tonioù glanañ va ene.

Pep tra a rank c'hoarvezout evel ma c'hoarvez. Pep tra zo mat. An tremened a dlefen lezel da vorediñ ; n' omp ket krouet evit pezh a zo enk ha munut. Nekwir, va Bellarmin ? Nann, n' eus evidon Arkadia ebet o kreskiñ evit ma teufe an ezhommege a vev hag a breder ennon d' en em zispakañ da enderc'hel an diharz.

Se a garfen, o se a garfen ! Da get e karfen kas an dremenusted a bouez warnomp hag a zichek hon c'harantez nevet ; gwinkal a ra va spered enep an deñvalijenn m' emañ chadennet evel unan lakaet bev en douar.

Mennet oan da gontañ. Graet e vo. A-ziavaez n' eus netra a 'm strafuilh e 'm eñvorioù. Tir ha mor a gousk e toufor kreiz an deiz, ha zoken an andon a rede amañ gwechall e-harz din zo aet da hesk. Aezhenn ebet ne sourr etre ar skourroù.

Ul leñvadenn skañv a glevan gwech an amzer digant an douar pa vez frailhet gant bann grizias an heol. Hogen n' eo ket se a strafuilh an disterañ. A-walc'h a zisheol a 'm eus gant ar siprezenn e kañv a-us din.

Ar pardaez ma kimiadis diouti zo aet da antronoz ; hogen ket evidon. Ne oa tu ebet ken e 'm buhez evit hun ha dihun. Ne oa nemet un hunvre anezhi, un hunvre wenvidik ha gloazus ; ur gouren etre goanag hag anken. D' he c'havout ez is a-benn ar fin.

Spontañ a ris neuze pa voe dirazon, ar gwel anezhi ken disheñvel diouzh pezh a greden, ken sioul ha ken gwenvidik, neñvadez laouen gant an holl ha gant nebeut. Divarc'het oan, ha dilavar. Tec'het oa va spered diganin.

Ha hi ken madelezhus hag an neñv, ne gredan ket e verze ervat he doare da na deurel pled resis ouzh pezh a c'hoarveze en he zro.

50

Poan he devoe da 'm degas lec'h m' hor boa echuet en derc'hent. A-benn ar fin e vervas ennon a-bezh ur preder a yeas da gevredañ laouen gant he re.

Ne ouie ket pegen diharz e komze, penaos e splannas he skeudenn betek an dreistklod gant an uhel ma oa he frederioù diskuliet war he zal, ha penaos en em unane he spered rouantel gant madelezh he c'halon gar-an-holl. Evel an heol o tostaat dre an aer guñv, pe evel un doue o tiskenn etrezek ur bobl digablus e oa pa zeuas an dizalc'h hag an nevet war wel dreist he hebreter.

Ankouaat a ris alies hetoù ha sorboù va c'halon gaezh keit ma chomis en he ser goursavet a-us da holl reuzeudigezh mab-den. Hogen ur wech aet kuit e klaskis en aner henn kuzhat ouzhin, neuze ur c'hlemm a savas fraezh ennon, ne 'z kar ket ! Konnariñ ha stourm a ris. Hogen va enkrez ne 'm dilezas ket. Va nec'h a greskas a zeiz da zeiz. Seul uheloc'h ha galloudusoc'h ma lugerne he boud a-us din, seul deñvaloc'h ha guesoc'h e teue va ene da vezañ.

Neuze e hañvalas tec'hout diouzhin. Evidon e tivizis chom hep he gwelout biken, hag e gwirionez e oan deuet a-benn dre forzh boureviañ va c'halon da bellaat diouti evit ur mare.

War-dro an amzer-se, o vezañ m' edon o paouez distreiñ eus digenvezioù ar Korax ma oan aet kent tarzh an deiz, e kejis ouzh Notara hag e wreg. Lavarout a reas din e oant pedet e ti un amezeg kar dezho, hag e soñjent bezañ distro en endervezh. Melite, emezañ ouzhpenn, oa chomet er gêr. Ret e oa d' ar verc'h kuñv skrivañ lizheroù d' he zud.

Holl va goanagoù diwasket a zihunas adarre. En em vestroniañ a ris, gwir eo, nebeut goude, hag e lavaris groñs d' ar stourm a reuzie ennon na felle ket din he gwelout d' an deiz-se ; dirak o zi e tremenis avat, goullo a bep preder hag o krenañ evel pa vefen bet mennet da vuntrañ. War se en em rediis da vont d' ar gêr, prenañ an norioù, teurel va dilhad diwarnon, digeriñ, goude bezañ termet pell a-walc'h d' ober va dibab, skridoù Aias Mastigophoros, ha sellout enno. Hogen ne zeue ket va reiz a-benn da euvriñ ur silabenn a gement. Edo he skeudenn eno bewech ma saven va sell. Gourlamm a raen gant kement kammed a gleven. En desped din, hep rat din zoken, e lavaris evidon va-unan komzoù digenheul a 'm boa klevet eus he genou. Va divrec'h a astennen alies daveti, hag e tec'hen bewech ma teue a-wel din.

51

Fuloriñ a ris en diwezh ouzh va diskiantegezh, ha divizout da vat peurzistrujañ an hiraezh lazhus-se. Hogen va spered a nac'has va eilañ. En eneb, heñvel oa ouzh erevent ganas oc'h ober kouch warnon hag o kinnig din c'hwistantin e sell da 'm breinañ penn-da-benn gant o louzeier ifernel.

Diflakañ a ris a-benn ar fin, diviet gant emgannoù ken feuls. Va daoulagad a glozas, tennañ a ris siouloc'h va anal hag evel gwareg ar glav goude ar stourm e savas c'hoazh he holl voud neñvel ennon.

Sioulder nevet he c'halon, kemennet din a-wechoù dre gomz ha dre ziskouez, ken e hañvale din bale adarre e paradoz kollet ar vugeliezh, an aon he doa rak disakrañ tra ebet dre re a fent pe re a zevri, ha pa ve kar a-bell d' ar Gened ha d' ar Mad, he c'hendamant uvel, he spered gant e uhelvennadoù stag ouzh he c'harantez sioul en un doare ken unvan ma ne glaske na ne zouje tra er bed - an holl bardaezioù karet a dremenis a galon ganti, he mouezh ha kensonioù he zelenn, hoalerezh he fiñvoù o tiskouez he madelezh hag he meurded lec'h ma veze, lec'h ma 'z ae ; a ! kement-se holl hag ouzhpenn a zeuas da vezañ ken bev ennon.

Konnariñ a raen ouzh seurt krouadur neñvel. Ha perak e konnaren ? Peogwir ne oa ket paouraet evel don, peogwir e touge c'hoazh an neñv en he c'halon ha n'he doa ket en em gollet evel don, peogwir ne rae ket ur boud all diouer dezhi, peogwir ne glaske ket pinvidigezhioù estren da beurleuniañ ul lec'h drastet, peogwir ne c'halle ket kaout aon evel don da vont da get, peogwir n' [he doa ezhomm] ebet evel don d' en em stagañ ouzh unan all gant ar souflam-se ; a ! dres, gant va gin eo e 'm boa graet gaou ouzh kement a oa douelañ enni, ouzh an dilorc'hentez neñvel-se ; he faradoz a c'hoantaen gant un drougiezh displeet. Ha gallout a rae plediñ gant ur c'hrouadur trelatet ? Ha ne oa ket ret dezhi tec'hout diouzhin ? A dra sur ! Diwallet oa bet diouzhin gant he dreistijin.

Kement-se a dreuzas klezeheñvel dre va ene.

Fellout a rae din dont da vezañ un all. O ! fellout a rae din dont da vezañ re-bar dezhi. Klevout a raen endeo eus he genou komzoù neñvel ar pardon ha boemet e vanen o santout penaos oan treuzfurmet ganto.

Neuze ez is, mall warnon, d' he c'havout. Hogen nec'hetoc'h oan gant pep kammed a raen. Melite a gollas he liv pa zeuis tre. Pezh a 'm divarc'has mik. Pegen berr bennak ma padas an dilavar a rene etrezomp, re boanius oa din avat evit na glask e derriñ gant va holl nerzh.

52

« Ret oa din dont, » emezon. « Henn dleout a raen dit, Melite ! » Kerreizhded va mouezh a hañvalas he sioulaat ; koulskoude e c'houlennas, souezhet, perak 'ta e oa ret din dont ?

« Kement a c'h eus da bardoniñ din, Melite ! » a lavaris.

« Gaou ebet ne c'h eus graet ouzhin. »

« A Velite ! na kastizet on gant ar vadelezh neñvel-se ! Sebezet out bet moarvat gant va drougiezh. »

« Dismegañset ganti avat n' on ket bet, ne oas tamm ebet mennet d' henn ober, Huperion ! Perak e tlefen tevel war se ? Kañvet 'm eus dit. Ar peoc'h a 'm bije grataet dit laouen. Fellout a reas din meur a wech goulenn diganez bezañ siouloc'h. Ken disheñvel out ez mareoù mat. Anzav a ran dit e 'm eus aon evidout pa 'z kwelan ken hurrenek ha ken taer. An dra-se a reizhi, nekwir, Huperion mat ? »

Ne voen ket evit distagañ ger ebet. Moarvat e santez ivez, breur va ene, e pe stad e tleen bezañ. A ! ken neñvel oa an hud a rene en he c'homzoù, ken dreistlavar va gloaz.

« Prederiet 'm eus alies, » a gendalc'has, « evit gouzout perak out ken dibar. Ur c'hevren ken poanius eo gwelout e c'hoarvez d' ur spered evel da hini bezañ gwasket gant seurt gloazioù. Hep mar e oa dieub diouzh an nec'h-se un amzer a voe. Ha n' emañ ken ganez ? Salv ma c'hallfen degas dit en-dro ar paouez peoc'hleun, sioulder nevet ar c'hreiz on ma klever betek ar skañvañ son a ziwan eus don ar spered hag ar skañvañ stok a-ziavaez, digant an neñv, eus ar skourroù hag eus ar bleuñv - dreist da 'm lavar eo ar stad ma vezen p' edon eno dirak an natur doueel ha pa dave ennon ar glenn a-bezh - ken tost dimp emañ neuze, an diweladus ! »

Tevel a reas, souezhet war a hañval, evel p' he defe diskuliet rinoù.

Ha hi d' adkregiñ : « Huperion ! emvestroni 'c'h eus ; m' henn goar. Lavar da 'z kalon e klasker en aner ar peoc'h er-maez eus an-unan pa n' en roer ket d'an-unan. Ar c'homzoù-se 'm eus atav uhelbrizet. Komzoù digant va zad int, frouezh e enkreziou, evel a lavar. En ro dit da-unan, ar peoc'h-se, ha bez laouen ! Henn ober a ri : va goulenn kentañ eo. N' en nac'hi ket ouzhin. »

53

« Pezh a fell dit, evel a fell dit, ael an neñv ! » a youc'his, o kregiñ, hep gouzout din, en he dorn hag ouzh e zegas gant nerzh war va c'halon e kañv.

Evel dihunvreet e voe gant ar spont ; distreiñ a reas diouzhin en ur deurel ar brasañ evezh da na ober poan din, hogen pladet e voen gant meurdez he sell.

« Ret eo dit kemmañ. » He mouezh a save feulsoc'h eget boaz. En dic'hoanag edon. Santout a ris pegen dister e oan hag en aner e strivis da sevel. A ! nag izel avat ar stad ma c'hallen kouezhañ ! Evel an eneoù boutin e klasken frealziñ va Netra dre vihanaat ar Meur, an Neñvel - Bellarmin ! ur gloaz hep e bar eo diskouez war an-unan un namm ken mezhus. Bezañ dieub diouzhit eo a fell dezhi, a soñjis, setu holl ! - « Ya 'vat, kemmañ a rin ! » Hevelep gerioù a zistagis, reuzeudig, en ur vousec'hoarzhin glas, hag e tifraeis da vont kuit. Evel bountet gant drougaeled, e redis er-maez d' ar c'hoadeier hag e kantreis a bep tu a-barzh sankañ er geot kras.

Ledet oa an tremened eno dirazon evel ur gouelec'h euzhus, ha gant ur fulor ifernel e kasis da get ar peurrest eus pezh en doa gwechall distanet hag uhelaet va c'halon.

Sevel a ris neuze e sav, hag aet gouez, e c'hoarzhis yud warnon ha war an holl, un drugar klevout an heklev skrijus ; yudadegoù an aourgon o sammañ warnon a bep tu dre an noz a reas e gwirionez kalz a vad da 'm ene en e roll.

Un tav pout ha spontus a gouezhas goude an eurvezhioù dismantrus-se, ur gwir tav a varv ! Bremañ ne glasken salvidigezh ebet ken. Ne daolen pled gant netra. Edon evel ul loen dindan dorn ar boser.

« Hi ivez ! Hi ivez ! » Setu ar c'homzoù kentañ a zeuas war va diweuz goude hir amzer ; daeroù a savas da 'm daoulagad.

« Ne c'hell ket ober a-hend-all ; ne c'hell ket reiñ dezhi hec'h-unan pezh na c'hell ket kaout, da baourentez ha da garantez ! » Setu pezh a soñjis en diwezh, ha nebeut ha nebeut e teuis da vezañ sioul ha lent evel ur bugel. Bremañ avat ne felle din klask tra ken, mennet d' en em skoazellañ va-unan da badout a zeiz da zeiz, gwellañ ma c'hallen, ne oan mui netra din, ne c'houlennen ket zoken kemmañ an disterañ, ha mareoù ' a voe ma hañvalas din e oa tu da welout an Hini Nemeti ha da hetañ netra all.

54

Pellik a voe ma veven evel-se pa zeuas Notara un deiz da 'm c'havout gant un Tenozad yaouank da glemm war va digenvez espar, ha va fediñ a reas d' en em gavout antronoz d' abardaez e-kichen kev Homeros, rak un dra bennak a venne ober evit plijadur an Tenozad, a vane an holl ene anezhañ staget ken reizh ouzh bro an Henc'hresianed, hag a oa o vont da weladenniñ an aod aiolat ha Hendroia ; mat e ve din, emezañ ouzhpenn, gallout ambroug e vignon di, ha koun en doa a-hend-all e 'm boa diskleriet va c'hoant da welout an darn-se eus Azia Vihanañ. An Tenozad ivez a'm fedas hag asantiñ a ris evel ma 'm befe asantet da bep tra, ken aes da gas gant an diyoul ma oan.

Antronoz d' abardaez, ma oa aet an deiz ganin da brientiñ mont en hent, e teuas Adamas (anv an Tenozad e oa) da 'm c'herc'hat da vont betek ar c'hev.

« Souezh ebet » (a zeraouis, evit na reiñ lec'h ennon da weledigezhioù all, goude bezañ kerzhet ur pennad krec'h ha traoñ a-hed ar Meles dindan ar gwez meurta hag ar plataned), « e ve kement a vreud etre ar c'hêrioù a-zivout orin Homeros. Ken dudius eo soñjal en deus ar paotrig kuñv c'hoariet eno en traezh ha degemeret ar merzadoù kentañ a ziorreas a-nebeudoù ur spered ken kreñv ha ken kaer. »

« Emañ ar gwir ganez, » a eilgerias, « hag arabat deoc'h Smurniz lezel ar gredenn blijus-se da vont diganeoc'h. Nevet eo din an dour hag an aod-se ! Piv oar pegen bras eo ar perzh en deus an tir-mañ, ouzhpenn ar mor hag an oabl, e divarvelezh ar Maionad. Daoulagad glan ar bugel, dre arvestiñ ouzh ar bed, a sammas broud ha raksant a ra mezha da galz eus kement a voe gounezet diwezhatoc'h gant hon spered dre hentoù poanius. »

Kenderc'hel a reas da gomz en doare-se betek ma tegouezhas Melite war un dro gant un nebeut tud all.

Reizh e chomis. Gallout a ris tostaat outi, hep kemm merzadus e'm c'hreizon. Un dra vat e oa bet derc'hel warnon kerkent.

Gouzañv a rae ivez. Henn gwelout a raed. Hogen, na pegen muioc'h, hag a galz, a Doue !

E tachadoù ar Mad hag ar Gwir e oa tec'hed he c'halon. Ur glac'har seder, evel na 'm boa biskoazh merzet warni, a sonne fiñvoù laouen he dremm, ket he spered avat. Hemañ a lugerne sioul ha digemmadus en he sell neñvel, hag outañ en em stage he melkoni evel ouzh ur frealzour doueel.

55

Adamas a gendalc'has lec'h ma oa bet troc'hed e gomz. Melite a gemeras perzh. Ur gerig bennak a lavarais ivez gwech ar mare.

Evel-se e teujomp da gev Homeros.

Degemeret e voemp gant kensonioù sioul ha tristidik a ziskenne eus ar roc'h ma oamp aet tre dindanañ ; tonioù an delenn a zivere war va askre evel en nevez-amzer ur barrad glav war an douar marv. E diabarzh ar c'hev, en amheol o parañ dre frailhoù diseurt er roc'h, dre an delioù hag ar skourroù, edo un delwenn varmor eus ar c'hanour doueel. Mousc'hoarzhin a rae d' e c'hourvibion azaouezus.

Azezañ a rejomp en-dro dezhi evel minored en-dro d' o zad, hag an eil a lennas d' egile kanoù diwar an Ilias, dibabet gant pep hini hervez e c'hoant ; rak boazet oa an holl outo.

Skoet e voe neuze kreiz va c'halon gant ur c'hlemmigan a ganjomp da skeudenn an dall ker ha d' an amzer ma veve. An holl oa fromet don. Melite a zremme ouzh ar marmor hag he daoulagad a lintre dre o daeroù a velkoni hag a entan.

Torret oa bremañ war an holl. Ger ebet ne voe lavaret etrezomp, ne stoke den e vizied ouzh den, ne selle den ouzh den ken anat e hañvale pep kalon kendonian gant ar re all er c'houlz-se, ken dreist d' ar yezh ha d' an eztaol e hañvale mont kement a veve neuze enno.

Santad an dremenusted e oa, lid-kañv da gement a oa bet eno gwechall.

En ur ruziañ e stouas neuze Melite war-du Notara da guzhuliat dezhañ un dra bennak.

Notara, e barr al levenez o klevout ar grouadur karet, a gemeras ar sizailh a ginnige dezhañ hag a droc'has ur rodell eus e vlev.

Intent a ris ar ster a c'halle se kaout, hag ober heñvel, tavedek.

« Da biv nemedout ? » a youc'has an Tenozad en ur zerc'hel e rodellad ouzh ar marmor.

Ar re all, skoet gant hon devri, a roas ivez o c'hañvaberzh, e-pad ma save adarre hon c'hlemmgan.

Kement-se ne dalveze nemet da dennañ va boud eus ar sioulder ma oa sanket. Va sell a vane c'hoazh paret warni, va c'harantez ha va gloazioù a 'm skoe garvoc'h eget biskoazh.

56

En aner e striven evit padout. Ret e oa din mont kuit. Va c'hañv e gwirionez oa diharz. Diskenn a ris betek ar Meles, en em deurel war ar c'hlan ha yudal. Alies e tistagis hec'h anv a vouezh izel, ha va gloazioù a hañvalas habaskaat diwar neuze. Hogen ne oa nemet evit distreiñ diharzadusoc'h a se. A ! evidon ne oa paouez ebet e nep lec'h war ar bed ! Bezañ tost dezhi, ha pell anezhi, hi a garen en un doare ken dilavaradus, hag a 'm boa enkrezet en un doare ken dilavaradus all, ken dreistlavar ha ken hakr, se oa heñvel ! An eil hag egile oa deuet da vezañ ifern evidon ! ne c'hallen ket paouez a vont war he zro hag en he zro ne c'hallen ket chom.

E-kreiz an turmud-se e klevis un trouz er gwez meurta. Sonnañ a ris - a neñv ! Melite e oa.

Spontañ a reas moarvat o welout ur c'hrouadur ken mantret dirazi. En em strinkañ a ris daveti e 'm dic'hoanag, gweañ va daouarn hag aspediñ Ur Ger Nemetken eus he madelezh. He liv a golle hag a-vec'h ma c'halle komz. Va fediñ a reas erfin gant daeroù neñvel da zeskiñ anaout haelañ ha kreñvañ perzh va boud, evel m' en anaveze-hi, parañ va sell war gement a zo dizalc'h, diblegadus, doueel ennon evel en holl gwitibunan - kement na darzh ket eus an andon-se a gas d' ar marv - kement a zeu anezhi, hag enni a zistro, a beurbad - kement a unan diouer hag ezhomme a baouez a vezañ Unan, evel ma paouez an ezhomme - kement a zo unanet evit hag er pezh nemetañ a zo meur, nevet, divrall, - unaniezh a zo da badout da viken, evel ar Peurbad, penaos ha perak emañ da badout hag evel... Amañ e voe ret dezhi paouez. Ar re all a zeue war he lerc'h. D' an ampoent e 'm bije lakaet mil buhez en argoll evit he selaou betek penn. Biskoazh ne 'm eus he c'hlevet betek penn. Ar peurrest a glevin marteze dreist ar stered.

E-tal ar c'hev ma oamp distroet e krogas da gomz a-zivout va beaj, ha va fediñ a reas da gevarc'hañ eus he ferzh glannoù ar Skamandros, menez Ida ha tir Hendroia a-bezh. Hec'h aspediñ a ris avat da na rannañ ger ebet ken eus ur veaj a gasaen kement, ha diouzhtu e vennis goulenn digant Adamas va dieubiñ diouzh ar ger a 'm boa roet. Hogen Melite, gant he holl hebreter, a verzas ouzhin henn ober, ken sur dezhi na ve tra par da seurt beaj evit diazezañ ar peoc'h hag al levenez etrezi ha me ; mont an eil diouzh egile e-doug un nebeut amzer oa eviti kement hag ar vuhez pe ar marv ; anzav a rae din ne ouie ket sklaer hec'h-unan an abeg he doa da 'm fediñ ken start, hogen ret e oa dezhi, ha war var he buhez e ve.

57

Sellout a ris outi, souezhet, ha tevel evel o klevout belegez Dodone. Mennet oan da vont, ha war var va buhez e ve. Serrnoziñ a rae endeo hag ar stered a save en oabl.

Goulaouet oa ar c'hev. Bommou ezañs a save eus diabarzh ar roc'h, ha tarzhañ a reas diouti da dridal meurdeus goude un nebeut mentadoù diheson, ar sonerezh.

Kanañ a rejomp kanoù nevet d' ar pezh a zalc'h da vezañ ha da vevañ dindan mil stumm disheñvel, pezh a oa, a zo hag a vo, d' an dirannadus m' eo ar speredoù a zo Unan adal an derou ha da viken, ha pa vent digevredet gant an noz hag ar c'houmoul ; ha daoulagad an holl oa barr gant hevelep santad a nesaelezh hag a zivarvelezh.

Kemmet oan a-grenn. « Lezit da dremen pezh a dremen, » a youc'his d' an entanidi, « tremen a ra evit distreiñ, koshaat a ra evit yaouankaat, en em rannañ a ra evit en em unaniñ donoc'h, mervel a ra evit bevañ bevoc'h. »

« Evel-se, » a gendalc'has an Tenezad ur predig-amzer goude, « e rank gortozioù ar bugel mont da get evit adsevel da wirionez e spered ar gour. Evel-se e weñv meurta ken kaer ha ken yaouank an hened, barzhaz Homeros hag e amzer, an diouganou hag an diskuliadurioù, hogen an egin a voe enno a zifluk evel frouezh azv en diskar-amzer. Eeunegezh ha diantegezh an amzer gent a varv a-benn distreiñ er sevenadur klok, ha peoc'h nevet ar baradoz a ya da goll, evit ma 'z advleunio pezh a oa nemet donezon an natur evel perc'hentiezh gounezet gant an denelezh. »

« Dispar ! dispar ! » a youc'has Notara.

« Padal n' eo nemet er pellvro e teuy ar c'hloker, » eme Velite, « e bro an adwelout hag ar yaouankiz peurbad. Amañ n' eus nemet amheol o ren warnomp. Hogen e lec'h all e savo sur evidomp, ar beure nevet ; gant dudi e soñjan e se ; ha neuze holl en em adkavimp, e-ser peurunvaniñ kement a oa bet disrannet. »

Melite oa fromet dreist. Nebeut-tre e komzjomp war hent an distro. E-tal ti Notara e kinnigas din he dorn ; « adeo, Huperion mat ! » sed a voe he diwezhañ komzoù a-barzh mont diwar wel.

Adeo. Melite, adeo ! Ne c'hallan ket soñjal ennout alies. Ret eo din diwall ouzh gloazioù ha levenezioù an eñvor. Emaon evel ur blantenn glañv na c'hell ket gouzañv an heol. Adeo dit ivez, va Bellarmin ! Ha deuet out e-keit-se tostoc'h ouzh neved ar wirionez ? Ra c'hallfen klask sioul, evelout !

58

A ! mar degouezhan eno ur wech bennak, e vo disheñvel va stad. Don dindanomp e tarano neuze froud an dremenusted hag an dismantrou o ruilhal ennañ ; ha hirvoud ken ne vo, evel pa ve keinvan ar re strinket gantañ d' an islonk gorreet da uheloù sioul ar Gwir hag ar Peurbad.

Kastri war venez Parnassos.

Ur wech all e komzin eus an amzer-vremañ ! Hag ur wech all ivez marteze eus va beaj gant Adamas ! Nozkent hon c'himiad dreist-holl a chomo e 'm eñvor : war aodoù Henilion, e-harz krugoù savet marteze da Akhilleus ha Patrokles, da Antilokhos, da Aias Telamon, e tivizemp eus Hellas tremenet ha da zont hag eus meur a dra all a zeue hag a yae eus donioù hag e donioù hon boud.

Kimiad karantezus Melite, spered Adamas, ar faltaziennoù hag ar prederiadennoù gouronek a save evidomp eus bezioù ha dismantrou ar bed kozh evel stered eus an noz, nerzh kuzh an natur anadet dimp a bep tu dre al luc'h, an douar, an oabl hag ar mor en hon tro, ken kreñvaet oan bet gant kement-se holl ma talme ennon bremañ un dra bennak all ouzhpenn va c'halon gaezh ; Melite a vo laouen ganez ! a lavaren alies, laouen e 'm c'hreiz, hag en em skoulmañ a rae mil goanag aour ouzh ar prederiadennoù-se. Neuze e c'hoarveze d' ur barrad aon espar kregiñ ennon adarre : ha kejañ a rafen outi c'hoazh un deiz bennak ? Hogen se a sellen evel un aspadenn eus va buhez hurennek, ha henn skarzhañ a raen eus va spered.

Ouzh penn-tir Sigeion e 'm boa kavet ul lestr a ouelie war-eeun etrezek Smurna, ha kalz e plijas din ober hent an distro war vor, e-biou da Lesbos ha Tenedos. Plarik e verdeemp trema porzh Smurna. Gouroned ar stergann a gantree a-us dimp e peoc'h flour an noz. A-vec'h ma krizenne ar gwagennoù e skleur al loar. E 'm ene n' edo ket ken sioul avat. E-tro ar beure koulskoude en em rois c'hwek da gousket. Dihunet e voen gant geizadeg ar gwennilied o tridal ha gant an doumpi a rene el lestr. Va c'halon a youc'he he goanagoù holl da aodoù

karantek va mammvro, d' ar goulou-deiz a darzhe dreist kern amsklaer ar Pagus hag e gozh kreñvlec'h, dreist tourioù ar moskeennoù ha nevedoù siprez teñval, hag a-greiz kalon e vousc'hoarzhis o welout war an aod ar penntiez a skede gant o frenester lugernus evel kestell hud a-dreñv an olived hag ar palmez.

59

An avel a c'hwezhe he galvadenn e'm rodelloù. Dirak ar vag ar gwagennoùigoù a lamme laouen war-du an aod.

Gwelout, santout kement-se a raen, ha mousc'hoarzhin.

Tra gaer eo ne sav drouksant ebet er bugel p'emañ ar marv tost endeo d' e galon.

Hastañ a ris eus ar porzh betek ti Notara. Melite oa aet kuit. Deuet oad, war urzh he zad, d' he c'herc'hat buan, da ven, den ne ouie. He zad en doa kuitaet rannvro an Tmolos, ha Notara n' en doa ket gallet gouzout, nag al lec'h ma chome bremañ, nag an abeg a oa bet dezhañ da bellaat. Melite hec'h-unan, evit doare, ne ouie ket perak. N' he doa a-hend-all lavaret hogos netra d' an deiz ma oant loc'het. Kefridiet oa bet ganti da 'm c'hevarc'hañ ur wech c'hoazh.

Hañval a voe ganin bezañ barnet d' ar marv. Ha sioul-kenan e oan war un dro. D' ar gêr ez is da lakaat urzh en un nebeut munudoù ret, hag e 'm c'homzoù da nebeutañ e oan dres evel ar re all. Tec'hout a raen diouzh kement a c'halle degas koun din eus an tremened ; pell eus liorzha Notara e chomen, hag eus glann ar Meles. Diwall a raen diouzh kement tra bennak a c'halle fromañ va c'haoued, hag an digas oa deuet da vezañ digasoc'h din c'hoazh. An distro diouzh kement tra-bev, setu pezh a glasken. Noz-deiz e pleustren war genderc'hadoù ar preder henc'hresian, ha dougen bri dezho. Distreiñ a raen enno diouzh kement tra-bev. An holl gement hon eus dirak hon daoulagad oa deuet tamm-ha-tamm da vezañ ken estren din ma arvesten outañ hogos gant sebez. Alies, pa gleven mouezhioù an dud, e hañvale din bezañ broudet ganto da guitaat ur vro na oan perzh ebet enni, hag edon evel ur spes en deus daleet en tu all da greiznoz hag a glev kan ar c'hilhog.

E-pad an holl amzer-se ne oan aet morse er-maez. Hogen va c'halon re yaouank a dalme c'hoazh : ne oa ket marvet c'hoazh ennon mamm pep buhez, ar garantez diveizadus. Lusket oan gant un hiraezh digunvez. Er-maez ez is.

Un devezh sioul a ziskar-amzer e oa. Laouen oan gant ar voem a oa evidon an doare ma tamante an aezhenn flour d' an delioù gweñvet, evit ma chomfent stag ur predig c'hoazh ouzh ar mammgelf.

60

Ur c'helc'hiad plataned, ma veze gwelet pell war ar mor, oa bet nevet din a-viskoazh.

Eno e ris un azez, ha kantren goude amañ hag ahont.

Noziñ a rae endeo ha trouz ebet ne gleved en ardremez.

Neuze eo e teuis da vezañ kement ez on bremañ. Eus kreiz an neved e hañvalas ur galv sevel betek ennon ha youc'hal din eus kondonioù an tir hag ar mor : perak ne'm c'harez ket ?

Diwar neuze ne c'hellis ket ken soñjal pezh a soñjen kent, ar bed oa deuet da vezañ nevetoc'h din, hogen kevrinusoc'h avat. Prederiadenoù nevez, o reverzhiañ va donañ kreizon, a danflammas dre va ene. Dic'hallus e voe din derc'hel warno ha kenderc'hel d' en em soñjal sioul.

Kuitaat a ris va mammvro evit kavout ar wirionez tramor. Na talmiñ a rae va c'halon gant goanagoù yaouank ha meur !

Ne 'm eus kavet tra nemedout. Dit-te e lavaran se, va Bellarmin !

Ne 'c'h eus kavet tra ivez nemedon.

Ned omp netra ; kement a glaskomp zo pep tra.

War venez Kithairon.

Raksantout a ran c'hoazh hep kavout.

Atersiñ a ran ar stered ha mut e vanont, atersiñ a ran an deiz hag an noz ; hogen ne respontont ket. Ac'hanon va-unan, p' en em atersan, e tesson lavaredoù kevrinek, hunvreoù anster.

Moarvat en em gav mat va c'halon en amc'houlou-se. N' ouzon dare petra ' c'hoarvez ganin pa sellan ouzh an dreistmeiz m' emañ an natur ; hogen daeroù nevet ha gwenvidik eo a skuilhan rak ar vuiañ-karet en he gouelioù. Va boud a-bezh a dav pa vezan stoket skañv gant anal kevrinus ar pardaez. Beuzet er glaster ec'hon, e paran alies va sell ouzh uheloù an ebr ha du-hont war ar mor nevet ; heñvel eo din neuze e tigor evidon dorioù an diweladus hag e tremenan da heul kement a zo en-dro din, ken ma vezan dihunet eus ar marv gwenvidik gant un trouz er strouezh a 'm galv da zistreiñ en desped din d' al lec'h ma oan aet da hesk.

61

Moarvat en em gav mat va c'halon en amc'houlou-se. Hag hon elfenn eo, an amc'houlou-se ? Perak ne c'hallan ket paouez ennañ ?

Ur bugel a welis agentaou gourvezet war ribl an hent. Ar vamm, o veilhañ warnañ, he doa astennet ur pallenn a-us dezhañ evit ma kouskfe c'hwek er skeud hep bezañ trellet gant an heol. Hogen ne felle ket d' ar bugel menel ; diframmañ a reas ar pallenn hag e welis penaos e klaske sellout ouzh ar sklerijenn garantezus ; ha klask a rae dalc'hmat, ken ma reas e zaoulagad poan dezhañ ha ma troas, o leñvañ, e zremm war-du an douar.

Paour-kaezh bugel ! a soñjis, n' emañ ket gwelloc'h ar bed gant ar re all, hag e kinnigis dilezel un eferusted ken her. Ne c'hallan ket avat ! ne dlean ket !

Er-maez e ranko dont, ar rin meur, a roy din ar vuhez pe ar marv.

AMAÑ E-KREIZ AN DRAONIENN

N' eo ket, sur a-walc'h, ar barzhoneg-mañ, ur bennoberenn eus lennegezh c'houezelek Iwerzhon. Koulskoude, dudius eo e meur a geñver ha setu perak am eus lakaet anezhañ e brezhoneg.

Skrivet eo, da gentañ, en ur yezh eeun ha glan hep ger diaes, koulz lavaret, nemet marteze, an anv-gwan " áigh " (= kalonek) hag ar verb " riomh " (= kontañ, danevelliñ). Soñjet em eus eta e c'hellfe an droidigezh-mañ bezañ lakaet keñver-ha-keñver gant ar skrid gouezelek ha talvezout, evel-se, da destenn-studi d' ar studieren war ar yezhoù keltiek ken e Breizh ken en Iwerzhon.

Danvez ar barzhoneg, war a vez lavaret deomp, a zo bet miret a rumm-da-rumm gant an dud hag e tegas da goun heskinerezh hir ha didruez ar gatoliked en Iwerzhon gant ar Saozon p' edont mistri war ar vro. Soñjal a raio ar Vretoned ivez en amzer an Dispac'h-Bras pa ranke ar Vretoned en em dennañ e kornioù digenvesañ eus ar vro evit klevout an oferenn. En " Emgann Kergidu ", levr kaer Lan Inisan, e vez komzet eus darvoudoù heñvel hag, e mirdi Roazhon, em eus soñj da vezañ gwelet ur vras a daolenn livet o tiskouez « un oferenn war ar mor e-pad an Dispac'h ».

Al lennerien a daolo evezh ivez ouzh an aked en deus lakaet ar barzh da zerc'hel naet ha digailhar brud ar beleg. Evel-se eo spisaet gantañ e voe cheñchet e zilhad gantañ e « a-enep e youl ». Ur merk, hennezh, a gredan, eus ar resped a zouge, hag a zoug c'hoazh, Iwerzhoniz d' ar velegiezh.

Komprenet e vo, a-hend-all, e talvez « ar chupennoù ruz » kement hag ar soudarded saoz dres evel ma oa kevatal e Breizh « ar re c'hlas » hag ar soudarded republikan.

N' em eus ket kredet, erfin, treiñ bepred ger evit ger an destenn c'houezelek. Er c'hwec'hvet poz, da skouer, n' eo ket « daeroù puilh » e skuilh Brian O Laoi (evel-se e vez skrivet e anv) hogen « daeroù bras » (deóra móra). Troet em eus er 4-vet poz « A Athair Seán » (= O Tad Yann), gant « Aotrou Person », hervez ar c'hiz vrezhonek.

Lavaromp ivez e vez graet er skrid iwerzhonek gant daou c'her disheñvel evit lavarout « trouz ». Kavout a raer « gleo », er poz kentañ hag e linenn gentañ an eil poz. El linenn war-lerc'h, avat, e kaver ar ger « torann », kreñvoc'h eget « gleo », a c'heller keñveriañ, moarvat, gant hor ger « taran » = kurun.

Da glozañ, e lavarin c'hoazh em eus savet va zroidigezh a-ziwar an destenn " Anso i tar an ghleanna " a gaver el levrig koant ha dudius " Rogha na bhfili " (Dibab ar Varzhed) (1), embannet evit ar skolioù ha bet roet din gant ar gouezeleger mat Seán Stafford, eus Galliv. Ur c'haer a brof a reas din evel-se rak e c'hellan lavaret n' on morse en em zispartiet dioutañ abaoe an hañv 1963 ma tremenis un dek devezh bennak e Galliv hag er C'honamara. Ra gavo amañ Seán testeni va anaoudegezh ha va c'hengarantez geltiek.

(1) " Rogha na bhfili " a zo bet embannet gant C. S. O Fallúin Tta, 43 sráid Gheata na Páirce (Parkside), hep anv kêr, moarvat e Dulenn. 63 fajennad a zo el levrig. 40 barzhoneg a gaver ennañ hag ouzhpenn pedennoù, krennlavarioù ha notennoù. Displeget e vez ennañ ar gerioù hag an troioù-lavar diaes. Embannet en iwerzhoneg penn-da-benn nemet div bajenn diabarzh ar golo a zo saozneg warno. Kavet em eus bepred ne glotent ket gant ar peurrest met alies a-walc'h a ra

Iwerzhoniz faziou evel-se.

Seul plijusoc'h eo-din al levrig a gomzan anezhañ m' eo moulet brav e lizherennoù gouezelat a zo, d' am meno, kalz sklaeroc'h ha kalz kaeroc'h eget al lizherennoù latin, ar re-mañ ken divalav e-skoaz ar re gentañ hag o reiñ ur stumm luziet-kenañ d' an iwerzhoneg gant ar c'hwezhadennoù puilh-souezhus a vez kavet ennañ hag a vez merket gant al lizherenn h.

64

AMAÑ E-KREIZ AN DRAONIENN

Lavaret 'oa bet an oferenn hag echuet 'oa pep tra.
Edo pobl an Aotrou Doue oc'h en em zispartiañ
Pa voe klevet trouz o tont war-du enno
Amañ e-kreiz an draonienn.

Pe drouz eo hennezh a zo o tont war-du ennomp ?
Sed amañ tousmac'h pavioù ar c'hezeg !
Sed amañ o tont 'trezek ennomp soudarded ar Roue
Amañ e-kreiz an draonienn.

Distreiñ a reas an den kozh Brian O Li
Hag e kerzhas etrezek ar beleg
Hag ec'h hiboudas e toull e skouarn
Amañ e-kreiz an draonienn.

« Aotrou Person, Aotrou Person !
Setu o tont ar chupennoù ruz.
Ne c'hellit ket tec'hout bremañ
Amañ e-kreiz an draonienn.

« C'hwi 'zo yaouank, Aotrou Person,
Me a zo e diwezh va buhez,
Cheñchit ho tilhad ganin bremañ,
Amañ e-kreiz an draonienn. »

Graet e voe ar c'hemm hep dale re
A-enep youl ar beleg
Hag e skuilhas daeroù puilh a c'hllac'har
Amañ e-kreiz an draonienn.

Tapout a reas ar Saozon Brian O Li
Ha dieub ez eas kuit ar beleg.
Krouget e voe Brian war un uhel a wezenn
Amañ e-kreiz an draonienn.

Bevañ a raio brud an den kozh kalonek
Keit ha ma kresko geot 'barzh ar glen
Danevellet e vo e istor gant paotred Iwerzhon
amañ e-kreiz an draonienn.

SEAN MAC FHEORAIS (troet gant ABERZEL).

" PREDER " E 1970

Mont buan, setu redi an emsav brezhon evel redi pep emsav. Ret eo mont war dachenn an emgann kevredigezhel a-raok bezañ diluziet ar c'hudennoù broadel, ober politikerezh an den nevez hep bezañ distrujet diazezoù an den kozh, sevel oberennoù nevez ret hep gwallegañ an oberennoù kozh ken ret all. Aza emañ enkadenn Preder. Krouet e 1958 evit digeriñ hent ar bed arnevez, e teuas buan da gevezañ outi an oberennoù a ziwane e penn an hent digoret : an aozadurioù a zeskadurezh, a stourm politikel, armerzhel, kevredigezhel a skrapas ingal diganti he c'henlabourerion. Seurt skrapadeg oa e gwir ur grapadeg, hag ar brouenn e rae berzh an embregerezh. Ganti evelkent edo Preder lakaet en arvar. Deuet miziek e 1961, e krogas ar gelaouenn da goll lañs e 1963, ken ma oa ganti 20 miz dale e 1969, - 5 niverenn hepken diwar 12 o vezañ bet embannet er bloavezh-se. Un adsav trumm a voe avat e 1970, gant 16 niverenn o tont e goulou, hag an dale war an embann o tiskenn da 16 miz. An adsav hirc'hortozet-se a zeu, evit un darn, eus barregezh ar remziad yaouank, ar re da nebeutañ a oar bremañ petra eo al labour, evit un darn all, eus dalc'hegezh pevar den a glaske gant pasianted an tu da adluskañ Preder hep dihourvezañ talbennoù all an Emsav.

C'hwezek niverenn, dek kaier, zo deuet er-maez warlene. Un damsell a fell din ober warno. N' eo ket reizh-tre marteze e teufe rener ur gelaouenn da ginnig e embannadurioù e-barzh ur gelaouenn all. P' hor bo ur skridvarnerezh gwirion, ne vo ket lec'h ken d' henn ober.

TONKAD 07, Kaier 107, Mae 1968, 60 p.

Penaos on deuet d'an Emsav, gant Gab CHEREL, Line BOURDIER, Yann Fañch FURIG, Joelle KERMOAL, Mikael AR GWILHOU, Tangi LOUARN, Pierrette KERMOAL, Nonna JEGOU.

Mennoz embannerez Preder o c'houlenn digant tud eus ar remziad yaouank « penaos int deuet d' an Emsav » oa gwelout sklaeroc'h er pezh a zo dindan ar skritell « Emsav ». Adkavout a reomp aze unan eus hentennoù-enklask ar gevredadouriezh. Ha sklaerius eo bet an disoc'h ? Ya, hep mar ebet, gant kompren an Emsav evel un tremen eus ur gevredigezh kozh a zistaoler d' ur gevredigezh nevez n' eus ket anezhi c'hoazh, - a zo roll an dremenerion he c'hrouiñ dre berzh an tremen a reont end-eeun. Gant kompren, da heul, e chom e-pad pell bed an emsaver ur bed hiniennel hag an Emsav ur « groupe marginal », eleze furmoù tost d' ar gleñvedelezh. An emsaver ne dec'h diouzh ar c'hleñved nemet e kement ma argas war e lerc'h ar meni bed en em stumm en-dro dezhañ, - ar meni bed-se o vezañ an Emsav-kevredigezh evel just, met ivez ur stroll bac'h a denn da chom speg el lec'h m' emañ. An doare da chom yac'h, da vont war-raok ha da grouiñ diazezoù ar bed nevez eo distrujañ ar meni bed-se. Pa baouez an emsaver a vezañ heuet gant an Emsav, e paouez a vezañ emsaver. Gennet emañ neuze evel ur preñv-koad aet og e penn e riboul, hag ar c'hleñved, tapet-mat gantañ ar wech-se ne gav distan nemet gant an distro d' ar bed kozh.

" Penaos on deuet d' an Emsav " zo enta danevelloù eus loc'hadur eizh den yaouank diouzh ar bed kozh hag eus derou o imram... Pet anezho a ouezo kasaat a-walc'h an Emsav evit en em gavout en tu all dezhañ un deiz ?

GERIADUR ISTOREL AR BREZHONEG, Kaier 108-109, Mezheven-Gouere 1968, 100 p., Rann 16, Kaouenn - Kempenn. Kaier 121-122, Gouere-Eost 1969, 100 p., Rann 17, Kempenn - Klamastrenn, gant Roparz HEMON.

A-zivout an oberenn vras-mañ ned an ket ken pell hag ar c'heneil a lavare : " Margaritas ante porcos ". Didruez avat e tleer bezañ ouzh ar skrivagnerion, ouzh ar gomzerion ivez, na gemeront ket ar boan da gorvoiñ mengleuzioù istorel ar yezh. Dav eo anzav neoazh ez eus muioc'h a brenerion d' ar Geriadur Istorel en estrenvro eget e Breizh.

Kelc'hlizher PACEM IN TERRIS, Peoc'h war ar Bed, Kaier 110, Eost 1968, 58 p.
YANN XXIII, Troidigezh gant an Tad TURIIV.

Pep troidigezh vrezhonek diwar ur skrid a-zivout traoù ar bed arnevez zo c'hoazh ul labour-enklask. Diaesterioù an destenn-mañ koulskoude a denne muioc'h d' an termenou a relijion, - a oa da gompren en o istoregezh, - eget d' an termenou a bolitikouriezh, chomet an darn vuiañ anezho e par lizheradur al ledañ-deskamant. E-se n' on ket evit barn labour an troer. Me oar e vo rebechet dezhañ e c'hlanyezherezh hag e anaoudegezh dreistpouezek eus ar gwenedeg. Evidon-me e rebechfen d' ar rebecherion o zech euver d'an trefoderezh hag o azenerezh war ar gwenedeg... Evelkent e rankan anzav ez eo tuet an Tad TURIIV, evel kalz lennegourion pa'z eont war dachenn ar skiantoù, da rearverañ ar gerioù kalvezel. Ober ganto pa n' eus ket tu d' ober e mod all, setu ar reolenn, re nebeut heuliet. Diwallomp avat ! Kalz troiennoù eus skrid an Tad TURIIV a hañvalo dimp bezañ divoas pe iskis e gwall hon diouiziegezh dimp-ni pe, gwashoc'h, dre berzh ma reomp-ni, evit lavarout an hevelep tra, gant troiennoù plaket war ar galleg. Na varnomp ket diwar skañv enta.

67

AREIZH 04, Kaier 111, Gwengolo 1968, 46 p.
gant Joelle KERMOAL, Gab CHEREL, Pierrette KERMOAL, Arzel EVEN.

Dindan an adtitl Areizh ez embann Preder gwech an amzer prezegennoù, kentelioù, komzidigezhioù war a bep seurt danvezioù, - reolenn an dibab eo ma vent bet displeget dre gomz. En niverenn-mañ ez eus bodet peder studiadenn a lennegezh hag unan a yezhadurezh. Barregezh Joelle ha Pierrette KERMOAL a ro din spi ma vo ur skridvarnerezh brezhon en-dro hep gortoz re bell bremañ, - goude un toull a ugent bloavezh ! Etre daouarn an holl studierion war al lennegezh e tlefe bezañ ar studiadennou-mañ diwar-benn kontadennoù Ronan Huon ha lennekezh Walarn, rak ur skouer int eus an dezrannañ lennegel. Mennoz Kerverziou eo titl ar gentel a reas Arzel EVEN e Devezhioù Studi Gourin e 1968. Gab CHEREL a ro alioù talvoudus d' ar studierion war arver ar furmoù-verb e **-je**, pe eilator.

AN ARDIVINK DENEL, Kaier 112-113, Here-Du 1968, 76 p.,
Ezel-krec'h, Lodenn gentañ, Kenvelladur ar skoaz. Kaier 115-116, Genver-C'hwevrer 1969, 118 p., Rann 1, An Ezel-krec'h, Eil, Trede, Pevare Lodenn, Kenvelladur an ilin, Kenvelladur an arzorn, Kenvelladur an dorn, gant Gab CHEREL.

Amañ ez adkavomp un hengoun all eus an Emsav, an hini gwriziennet en oberoù Meven MORDIERN, e amboaz reiñ ul lizheradur a ouezoniezh, pe da nebeutañ a ouiziegezh, d' ar brezhoneg. Ur c'halonekadur eo bet din gwelout ur paotr eus ar remziad nevez oc'h adstagañ gant an erv a'm boa boulc'het dek vloaz 'zo gant va Geriadur a Gorfadurezh. Leuñvour (pe kineziterapeutour mar kavit gwell) eo Gab CHEREL ha lakaet en deus e brezhoneg unan eus levrioù-diazez e vicher. Borodus eo moarvat al levr d' al lenner deboner a ra « brec'h » ha « gar » eus ar pezh a zo « ezel-krec'h » hag « ezel-traoñ » evit ar mezeg hag al leuñvour. Aze on gouest da varn, ha bamet e choman o welout pegen splann eo ar brezhoneg gouiziel, - hag ivez pegen fraezh e teu gant aozer an **Ardivink denel**.

68

MANIFESTO AR STROLLAD KOMUNOUR (1847), Kaier 114, Kerzu 1968, 62 p.
Karl MARX ha Friedrich ENGELS, gant rakskrid ha notennoù F. Engels evit embannadur saoznek 1888.

N' emamp ket mui en amzer ma krede beleion 'zo a Vreizh-Izel en doa an

Aotrou Doue kement a garantez ouzh ar brezhoneg m' en doa miret na ve troet oberoù Karl MARX er yezh-se. N' eo ket ganin koulskoude eo bet graet an droidigezh-mañ evel ma embanne war Al Liamm 143/496 ur skridaozer dievezhiek. Ul labour-stroll eo bet, boulc'het gant F. FAVEREAU diwar an testennoù saoznek hag alamanek. Sklaer ha resis eo an destenn vrezhonek evel ma tere d' ur skrid-diazez evit ar studierion war ar bolitikouriezh hag ar gevredadouriezh.

DAFAR GERIADUR AR YEZH ARNEVEZ, Kaier 117-118, Meurzh-Ebrel 1969, 49 + viij p. Geriaoueg gallek-brezhonek, brezhonek-gallek dre fichennoù, Strobad Kentañ, Rann A-1, A-Dict, gant Kreizenn Imbourc'h Sturyezhouriezh.

Ar c'haier-mañ zo e gwirionez an trede embannet er rummad Dafar. Roet ez eus bet dezhañ ur furm nevez, furm ur fichennaoueg, pep follenn o vezañ moulet war un tu hepken ha rannet en 24 c'hombod d' ober kemend-all a fichennoù (1). Adskrivañ a ran arroudoù eus Kentnotennoù ar Rann gentañ-se :

« Setu kaier kentañ Dafar Geriadur ar Yezh arnevez. Disheñvel eo dre e furm diouzh an daou gaier embannet e 1963 ha 1964 dindan an talbenn **Dafar evit ar Geriadur broadel**, a oa anezho geriaouegoù hollvrezhonek savet hervez an doareoù klasel. Ganto avat e oa daou zisplet bras. Da gentañ, ar sammad labour ret da brientiñ pep kaier, skoilh grevus pa ouzer pegen rouez e chom labourerion an Emsav ; an arbenn e voe ma vanas sachet an Dafar goude ma paote an danvez er fichennaouegoù. D' an eil, an diaesterioù a gav an deraouidi gant ur geriadur hollvrezhonek war dachenn ar vuhez arnevez. Dañjerus eo a dra sur ispilhañ un droidigezh c'hallek ouzh pep ger brezhonek ; hogen merzet hon eus ivez ez eo ken dañjerus-all leuskel da redek gerioù komprenet a-dreuz. () »

(1) D' al lennerion o deus klemmet, gant gwir abeg, war voanded ar follennoù, e roan da c'houzout ez eus bet dibabet ur paper tevoc'h evit ar c'haieroù da zont.

69

E-touez ar spietoù a zo gant ar c'heriaoueg dre fichennoù e pouez an aozerion war hemañ :

« Ur geriadur klasel a rank plegañ da reolennoù resis. Endalc'het eo e aozerion da raktermenañ an dachenn spis o devo da c'hwiliañ ha na vint ket aotreet da guitaat. Ul Larousse zo ennañ geriaoueg ar yezh voutin hag un alberz eus ar yezhoù resis, - gant ur c'henfeur merket evit pep kevrenn arbennik (skiantoù, arzoù, micherioù, h.a.), kenfeur o kemman a-hend-all hervez an embannadurioù tevoc'h pe moanoc'h eus ar geriadur. Dav eo enta d' ar geriadurour savelañ evit pep ger ar chañsoù en deus da vont en embannadur-mañ-embannadur, pezh a anvimp « barr-degemeradusted » pep ger. A-genstur, hervez ar vent a fell dezhañ reiñ d' e c'heriadur, hervez ivez an doare hollek pe arbennik (skiantel, lennegel, kenwerzhel pe all) en deus ar geriadur da gaout, e rank ar geriadurour savelañ a live-degemerusted » e oberenn : hervez ma kouezho barr-degemeradusted ur ger dreist pe dindan live-degemerusted ar geriadur e kavo pe get bod ennañ. Aze emañ ar stek ha micher wirion ar geriadurour.

« Hevelep yev n' o devo ket aozerion an Dafar-mañ da zougen. Yannig ar mil micher eo an emsaver, evit ar mare n' eus ket tu da dremen e-biou da se. Gwell a se avat pa c'hell dioueriñ unan eus ar mil micher. An Dafar-mañ ne c'houlennont ket digantañ kaout stummadur kalvezel ar geriadurour, da nebeutañ evit a sell ouzh savelañ barr-degemeradusted ar gerioù, - arz seul diaesoc'h da embreger war ar brezhoneg m' emañ ar yezh-se e-kreiz ur prantad kreskiñ ha kemman. Roll aozerion an Dafar a vo hepken dastum kement ger ha kement troienn a vo bet ezhomm anezho e buhez an Emsav, el labour politikel koulz hag en ober lennegel, en trepetoù pemdeziek koulz hag en deskadurezh. Grignoliet e vo kichen-ha-kichen troioù-lavar ar geginouriezh hag anvadoù difetisañ ar brederouriezh, termenoù an diplomaterezh gant re ar relijion, pep tra evel ma teuy e teuy. Termen ebet ne vo dezhañ ur barr-degemeradusted ken izel ma ne ve izeloc'h c'hoazh live-degemerusted an Dafar.

« Kement-se hon degas da verkañ un arvez all eus al labourioù war ar yezh

arnevez. Er broioù a zo e piaou d' ul lennegezh kantvedel ez eo ur c'hoari sevel geriadurioù lennegel, - pep ger o vout dezhañ ur vuhez hir leun a zarvoudoù o deus lezet warnañ arlivioù e-leizh. Disheñvel eo saviad ar yezhoù a voe daleet kantvedoù-pad evel ar brezhoneg hag a zo oc'h ober o lammgresk terzhiennek en 20t kantved : evito ne c'haller c'hoazh sevel nemet, diouzh un tu, geriadurioù istorel ha, diouzh an tu all, geriaouegoù arnevez. Etre an daou e chom an toull ma vo ur geriadur lennegel p'o devo dibradet da vat hag en ur ser, an eil o vagon eben, ar gevredigezh hag al lennegezh nevez. E-barzh rumm an imbourc'hioù a c'heriadurouriezh istorel emañ, ouzhpenn Geriadur Istorel Roparz HEMON, kement dastumerezh renet diwar an aspadennoù komzet ha skrivet eus ar yezh, labourioù ERNOD, VALLEE, FLEURIOT, Pêr DENEZ, Jules GROS, KLERG, KERVELLA, HEUSSAFF, Gwenole LE MENN ha kenlabourerion all Hor Yezh, evit an 20t kantved hepken. Ken oberiant-all eo enezennad ar yezh arnevez ; gant VALLEE e voe boulc'het an erv, hogen evel ma tiskouez aoz ar Grand Dictionnaire, ne anavezaz disparti ebet etre geriadurouriezh istorel ha geriaouegouriezh arnevez, - a-ratozh ha dre abegoù anat.

« Arabat e ve neoazh ober un dezerzh eus an dachenn-greiz ha lavarout n' eus ket, ne c'hell ket bezañ a c'heriadurioù lennegel brezhonek evit c'hoazh. Ul lennegezh vihan hon eus, o krakvefañ war c'hortoz eus ar vuhez kevredigezhel a bourchaso dezhi danvez treujennañ ; diouzh he skeudenn emañ hon geriadurouriezh lennegel. Merkomp en deus aze Roparz HEMON sammel roll ar gwastadour ur wech ouzhpenn : diazevadur ur glaselezh eo bet Gwalarn. Diazezoù an ti avat n' int ket an ti, hag e rez an diazezoù e chomo dre ret kement geriadur lennegel brezhon keit ma ne vo ket eus ur gevredigezh vroadel brezhoneg.

70

« Aozerion an Dafar-man a oar enta ervat pelec'h emaint ha petra a reont. Intret int en o donañ gant spered ar yezh lennegel, gant aked e studiont kement degasadenn nevez war dachenn ar yezhouriezh istorel ; e nep doare avat n' int geriadurourion istorel pe lennegel ; geriadurourion n' int ket zoken. Daou amboaz o deus : labourat evit an dornad Brezhoned a ren ur vuhez arnevez klokañ gwellañ hiziv an deiz ; prientiñ an amzer ma vo ar brezhoneg, nag istorel nag arnevez, yezh voutin ar vro-mañ. »

Mil daou c'hant fichenn pe-dost zo er c'haier kentañ-mañ.

Kelc'helenn POPULORUM PROGRESSIO, Diorreadur ar pobloù, Kaier 119-120, Mae-Mezheven 1969, 96 p.
PAOL VI, Troidigezh gant Jil EWAN.

Ul labour-enklask hon eus amañ c'hoazh : ur c'hard eus ar c'haier zo leun gant notennoù a yezhouriezh, - en abeg da se hon eus, goude termal, asantet e embann. Ar rebech bras a ran d' an aozer zo unan a hentenouriezh : padout da drevelliñ en e gorn, pa 'z eo dic'hallus d'un den sturyezhañ en digenvez hiziv : re a anaoudegezhioù war re a dachennoù disheñvel zo ezhomm, re a gizidigezhioù a rank kenc'hoari, ha dreist-holl n' eur ket evit dioueriñ ur stroll kevredigezhel, pegen bihan bennak ma ve, hag an nevid o lakaat en e ser ezhommoù ar vuhez ha kenderc'hadoù ar sturyezhañ da gejañ ha da zaleañ hed an amzer. An disoc'h eus seurt hiniennegezh eo e chom arroudoù a-bezh eus skrid Jil EWAN digomprenadus d' an holl. Kement-se lavaret, e talvez bepred ar boan d' ar sturyezhourion studiañ testennoù Jil EWAN, rak amañ hag ahont e kavont nevezc'heriennoù ijinus. Seul c'harvoc'h ma 'z on ouzh ul labour graet e-maez eus an hentennoù, seul zieupoc'h a se on evit meuliñ ijin Jil EWAN war dachenn ar geriaoua : meur a dermen kinniget gantañ zo deuet da vezañ gerioù boutin eus ar brezhoneg pemdeziek.

NOTENNOÙ

Hor Mignoned

Annik RENAUD ha J. J. KERDILES a zo laouen o kemenn deoc'h ez int bet euredet e Palaiseau, d' ar 24 a viz Kerzu.

Erwan, Gwenn ha Mowena KERDRAON o deus al levnez da gemenn deoc'h ganedigezh o c'hoar vihan Anne-Solen, en Oriant, d' ar 21 a viz Genver.

Hor gwellañ gourc'hemennoù d' hor mignoned.

Kañv

Klevet hon eus keloù marv Yann-Vari KERMARREC, koumanantet abaoe bloavezhioù, e Toulon. An Ao Kermarrec a oa bet kabiten fourgadenn ha komandant al lestr morouriezhel " Président Théodore Tissier ".

D' e familh ha d' e vignoned, e kinnigomp hor gourc'hemennoù a gengañv.

Profoù

Degouezhet eo ganeomp ar projoù-mañ e-korf an tri miz diwezhañ :

MIZ HERE : E.-W. Vallerie, 5 lur ; Ronan Tremel, 10 ; Vefa de Bellaing, 7 ; Per Loisel, 10.

- War un dro : 32 lur.

MIZ DU :

Anjela Duval, 5 lur.

MIZ KERZU :

Y. Beaugrand, 10 lur ; J. Queinnec, 24 ; M. Audic, 25 ; R. Pellen, 2 ; R. Le Gleau, 10 ; Dr. Coulet, 4 ; J. Le Coz, 5 ; M. Le Floc'h, 5 ; R. Jestin, 10 ; P. Le Meur, 25 ; P. Rolland, 5 ; F. Tourmen, 20.

- War un dro : 145 lur.

E 1970 ez eus bet profet d' Al Liamm 2.164,34 lur.

Hol Lennerien a skriv

Digant Y. B. Q. hon eus bet al lizher-mañ :

« Spi am eus e vo kendalc'het gant lañs an niverenn 142. Kavet am eus e-barzh pennadoù plijus da lenn ha pennadoù a laka da brederiañ.

72

Mat-tre e kavan en em varekaat da lenn skridoù talvoudus. Dre ar troidigezhioù, ar studiadennoù, ar pennadoù hag ar barzhonegoù yac'h ez eus ur vuhez wirion en niverenn-se. Ne c'houlennan nemet un dra : ma vo kendalc'het. Evel-se e teuin a-

benn da lenn ha da gompren gwelloc'h-gwellañ al labour savet gant va c'henvroiz hag e c'hellin kemer perzh ennañ. »

Digant J. H. :

« N' am eus ket lennet " Al Liamm " diwezhañ c'hoazh, met plijadur bras am eus bet o welout nag a draoù mat a vez savet gant ar skrivagnerien yaouank. Kaout a ra din ez eus un dro spered nevez el lennegezh vrezhonek a-vremañ : e-lec'h skrivañ brezhoneg evit difenn pe harpañ ar yezh, e vez skrivet gant kalzig tud, netra nemet abalamour m' o deus un dra bennak da lavarout. »

Digant R. H. :

« Mat-tre em eus kavet niverenn 143 " Al Liamm ". (Ha pa soñjan, mat e vefe embann e stumm ul levr ar romant Danvez-Priedoù, gant Manzoni. N' eo nemet un diverrañ eus al levr italianek, a zo hir-hir, ha krediñ a rae din ne oa ket bet peurembannet troidigezh Maen-Tan gant ar gelaouenn " Breiz "). »

Levrioù peurwerzhet

Emaomp o paouez prenañ digant ur mignon un nebeut levrioù ha n' int ket mui meneget en hor rolloù, setu int :

30 skouerenn eus Notennoù diwar-benn ar Gelted kozh 12,00 lur
15 skouerenn eus Levr an Amprevaned 1,50 lur
15 skouerenn eus Dremm an Ankou, gant Abeozen 6,00 lur
40 skouerenn eus Taolenn ar c'hemmadurioù 1,00 lur
5 skouerenn eus C'hoariva brezhonek 6,00 lur
4 skouerenn eus Hovelina Geraouell 6,00 lur

Goulenn al levrioù digant J. Queillé, 47, rue Notre-Dame, Guingamp, ccp 1136 82 Rennes.

Gwerzh al levrioù

Evel bep bloaz e kas deomp an Itron Kemere eus Kemper, roll ha niver al levrioù a zo bet gwerzhet en he stal. E 1970 ez eus bet gwerzhet 962 levr brezhonek.

Levrioù evit deskiñ : 549
Geriadur brezhonek-gallek 8
(ne oa ket mui da werzhañ)
Geriadur Gallek-brezhonek 55
Yezhadur Roparz Hemon 247
Cours Elémentaire 239

73

Levrioù da lenn : 413 ha 12 Emsav, 6 Imbourc'h, 12 Al Liamm.

E-touez al levrioù bet gwerzhet, setu ar re a zo bet gwerzhet ar muiañ anezho :

An Teirgwern Pembroke, gant Jarl Priel 3
Geotenn ar Werc'hez, gant Jakez Riou 14
Kleier Eured, gant Roparz Hemon 6
An Ti Satanazet, gant Jakez Riou 12
Ar an Deulin, gant Y. B. Kalloc'h 6
Alanig an Tri Roue 3
Barzaz Breiz, Kervarker 25
Merc'hed, gant Reun Menez Keldreg 12
Ar Fest-noz, gant Youenn Olier 3
Labous ar Wirionez, gant Milin ha Troude 5

Va Buhez e Rusia, gant Jarl Priel	4
Diamantoù Keroulaz, gant Roparz Hemon	5
Pirc'hirin Kala-goañv, gant Abeozen	6
En ur rambreal, gant Kerwerc'hez	4
An Irin glas, gant Ronan Huon	5
Pipi Gonto, gant Dir na Dor	4
Toul al lakez, gant Lan Inizan	6
Barzhonegoù, gant Roparz Hemon	4
Istor Breiz Toutouig	9
Ar Pevar Aviel	4
Bevoniezh	5
Yezhadur Bras, gant Kervella	5
Levrioù ar Vugale	45
Amañ hag ahont, gant Jarl Priel	3
Mari Vorgan, gant Roparz Hemon	4
Notennoù diwar-benn ar Gelted	3
Al Lennegezh vrezhonek dre an testennoù	5
Ritual ar briedelezh	4
Ritual ar vadeziant	3
Ritual an nouenn	2
Peseurt anv a rofec'h d' ho ti	12
Kontadennoù an amzer-vremañ	4

Kanaouennoù :

Gwerzenneu ha sonnenneu Bro Wened	6
Gwerzioù ha sonioù Breiz Izel	6
Sonioù Arnoux	42
Bourgault Ducoudray	8
Kanaouennoù Bourgeois	3
Gwir Vretoned	18
Kantikoù brezhonek Marrec	4

Al levrioù all a zo bet gwerzhet dre hiniennoù pe dre 2.

74

Niverennoù kozh " Al Liamm " da werzhañ

Chom a ra c'hoazh ar skouerennoù-mañ : 1, 2, 4, 5, 6, 7, 19, 25, 26, 28, 29, 30, 31, 32-33, 34, 36, 37, 43, 45, 53, 60, 62, 63 betek 142 (nemet an niverenn 98 diviet).

Priz an niverennoù a zo :

- 1, 2, 4, 5 : 4 lur ar pezh ;

- an niverennoù all : 5 lur ar pezh (nemet an niverennoù 32-33, 60, 61, 62, 65, 126 : 8 lur ar pezh).

Posupl eo kaout ar bloavezhioù klok-mañ : 1958 (niv. 66 betek 71), 59 (72-77), 60 (78-83), 61 (84-89), 62 (90-95), 64 (102-107), 65 (108-113), 66 (114-119), 67 (120-125), 68 (126-131), 69 (132- 137) : 30 lur ar bloavezh.

An niverennoù a vo kaset kuit a vizoù-post

Goulenn anezho digant Per ar Bihan, Résidence La Concorde,
Esc. E 2, 35 - Saint-Servan - ccp 5349-06 Paris

Klokait ho levraoueg eta, hag en doare-se e skoazellot ar gelaouenn

Levrioù nevez Al Liamm

Goude « Geriadur nevez brezhonek-gallek » Roparz Hemon, « Ho kervel a rin en noz », « An Dour en-dro d' an Inizi », « Sizhun ar Breur Arturo », « Gwerzioù kozh

Breizh » ha « 40 pennad-lenn evit ar skolioù », emaoomp o paouez kas d' ar mouler ur romant gant Roparz Hemon « Tangi Kerviler » ha « Beajour ar goañv ha kontadennoù all ».

Ul levr kelenn eil bloavezh gant Per Denez a zeuio er-maez war-dro Pask gant eil levrenn ar Bibl hag eil embannadur « An Irin glas ».

Spi hon eus e vo graet degemer mat d' an 11 levr-se embannet ganeomp e korf 6 miz hag e zikourot ac'hanomp d' o faeañ en doare-se ha da embann oberennoù all.

Kenstrivadeg Al Liamm 1971

Burev Al Liamm en deus divizet reiñ prizioù evit ar gwellañ skridoù embannet adalek bremañ betek dibenn 1971 er gelc'hgelaouenn.

Ar prizioù a vo ar re-mañ :

- danevell verr (war-dro 10 pajenn) : 200 lur
- danevell verr (war-dro 5 pajenn) : 100 lur
- studiadenenn war arboellerezh ar Vro (war-dro 10 pajenn) : 200 lur
- studiadenenn (5 pajenn d'an nebeutañ) : 150 lur
- barzhoneg (war-dro 2 bajenn) : 100 lur
- barzhoneg (war-dro 1 bajenn) : 50 lur

75

Digor eo ar genstrivadeg d' an holl. Ur c'huzul, ennañ skrivagnerien anavezet, a raio dibab ar skridoù a c'hell bezañ embannet ha renkadur ar skridoù embannet. Evel just, ar varnerien a ranko chom hep kenstrivañ. Evit pep danvez e vo savet ur roll eus ar 5 skrid gwellañ.

Ar pennadoù pe varzhonegoù a c'hell eta bezañ kaset adalek bremañ. Ret eo o c'has skriverezet pe d' an nebeutañ dornskrivet en un doare splann evit ar mouler. Ret eo o skrivañ war un tu eus ar follennoù hepken. Embannet e vint en doare-skrivañ peurunvan.

Pa gaser ur skrid ez eo ret menegiñ anv ha chomlec'h an oberour hag ivez ez eo kaset ar skrid evit " Kenstrivadeg 1971 ".

An dornskridoù ne vezint ket kaset en-dro.

80 % eus ar re a zesk brezhoneg n' int ket ouzhpenn 20 vloaz

Ober a ra KEVREDIGEZH AN DESKADUREZH NEVEZ un enklask war stad kelennadurezh ar brezhoneg. Meur a dra zo bet lakaet war wel endeo. Ouzhpenn 90 % eus ar re a gelenn brezhoneg n' int ket paeet. Tost da 60 % eus ar c'helenn brezhoneg a vez aozet gant strolladoù pe oaledoù sevenadurel ; ar peurrest a vez graet gant ar skolioù ; muioc'h e vez kelennet brezhoneg er skolioù lik ouzh a seblant. Ar c'hentelioù zo an tri c'hard anezho kentelioù kentañ bloavezh. Tost da 40 % eus ar re a heuil kentelioù a oar dija un tamm brezhoneg bennak a-raok dont. 40 % ivez a zo o soñj tremen arnodenn vrezhonek ar vachelouriezh.

Setu darn eus ar c'hudennoù a zo bet studiet d' ar sul 20 a viz Kerzu e Menez-Kamm ma aoze Kevredigezh An Deskadurezh Nevez un devezh studi evit ar gelennerien vrezhoneg.

Danvezioù all zo bet pleustret warno :

- Al lennegezh iwerzhonek kozh, gant Chr. Guionvarc'h.
- Ur gentel skouer eil pe trede bloavezh (studiañ brezhoneg diwar testennoù), gant P. Denez.

- Penaos lakaat buhez er c'hentelioù, gant Gw, Ar Menn.

An holl gelennerien pe danvez kelennerien a c'hell skrivañ d' ar sekretourva evit kaout diskleriadurioù all.

K. A. D. N., 44, rue Jean-Rameau, 29/5 - Quimper.

Kamp etrekeltiek evit deskiñ iwerzhoneg

Ur c'hamp etrekeltiek a vo dalc'het da Bask en Iwerzhon evit deskiñ komz iwerzhoneg eeun da dud eus ar broioù keltiek all, gant ma ouestlo un niver bras a-walc'h anezho dont. Digor e vo ar skol-se e-pad 10 pe 14 devezh ha goulennet e vo digant ar berzhidi studiañ a-zevri ha deskiñ ar muiañ a c'hallint.

Merour div skol holliwerzhonek e kreisteiz ar vro o deus lavaret e vije laouen o reiñ bod ha boued dezho e skol Trâbolgan war an aod, nepell diouzh Kork, pe c'hoazh - ha kentoc'h - en un ti-skol-hañ war Enez Cléire, e mervent kontelezh Kork. Kavout a rafe ivez kelennerion akuit, ma teu a-walc'h a ziskibion. Gant ma teuy, da vihanañ, 15 pe 20 den en holl e c'hell o lojañ hag o magañ evit £ 10.10.0, pezh a ra 135 lur gall ar sizhun. O tont eus Breizh e c'hellfed berraat an hent en ur zont eus Abertawe (" Swansea ") da g-Kork gant al lestr.

76

Hor mennad eo reiñ tu dreist-holl d' ar re a oar endeo ur yezh keltiek all da zeskiñ an elfenoù pouezusañ eus an iwerzhoneg gant un distagadur mat. Evel-se e vo digoret frankoc'h an darempredoù etrekeltiek hep ma ve ezhom d' ober gant ar yezhoù a wash hor re-ni. Moarvat e teuy Iwerzhoniz all evit skoazellañ ar gelennerion. Degemeret e vo merc'hed ha paotred a ne vern pe oad.

Ar re a zo dedennet a-zevri gant ar mennad a zo pedet da skrivañ diouzhtu da : A. Heussaff, 9 bothar Cnoc Sion, Ath Cliath 9, Iwerzhon, en ur lakaat un timbr respont etrevroadel evit ma vo roet keloù dezho kerkent ha ma vo divizet ar mare, al lec'h, ha., hag o lavarout da be zeiz e c'hellfent dont d' an abretañ hag e rankfent mont kuit en-dro. Rak divizet e vo ar mare e doare da zereout ouzh ar brasañ niver.

Jorj Kadoudal 1771-1971

Daou c'hant vloaz 'zo e c'hane Jorj Kadoudal, 1-añ a viz Genver. Mar deo anavezet mat e anv ne anavezet ket koulz e vuhez hag ar stourm a renas ken hir amzer.

Al levr " Georges Cadoudal et la Chouannerie bretonne " (Plon 1887) ne oa ket tu d' e gavout abaoe pell 'zo.

Advoulet e vo al levr-mañ a drugarez d' an Aotrou Georges de Cadoudal, 14, rue des Fossés, 53 - Laval.

Tu a zo da rakprenañ al levr : 18 lur, pe 25 lur ar skouerenn niverennet, o kas ul lizher goulenn. Arabat eo kas arc'hant.

Kendalc'h Keltiek 1971

E Skol-Veur Stirling e vezo graet ar C'hendalc'h Keltiek Etrevroadel er bloaz-mañ. Padout a raio eus ar 16 betek an 20 a viz Eost. Erruout a raio an dud d' al Lun d'abardaez evit mont kuit d' ar Sadorn a-raok kreisteiz. Gouestlet e vo ar

bodadoù da studi an arz hag an hudouriezh e Keltia. Setu amañ ur roll-da-c'hortoz evit dalc'hoù ar C'hendalc'h :

Lun 16 a viz Eost : Degemer ar c'hendalc'hidi ; lakaat an anvioù ; koan ; degemer er Skol-veur ha ceilidh.

Meurzh 17 : Dijuni ; degemer a-berzh Kendalc'h ; kafe ; prezegenn-digeriñ gant Kenneth MacDonald, lenner war ar c'heltieg e Skol-veur Glaschu ; lein ; beaj betek Dunblane ; servij protestant en iliz-veur, servij katolik ; te ; kenderc'hel gant ar veaj betek Glaschu o tremen dre an Trossachs ; degemer ha ceilidh en Highlanders Institute ; distro da Stirling ha bodadeg er Skol-veur.

77

Merc'her 18 : Dijuni ; diviz diwar-benn an Arz keltiek ; lein ; beaj dre garr-boutin betek Loch Earnhead ; diouzh an abardaez, degemer gant Kêr Stirling ; bodadeg diouzh an noz er Skol-veur.

Yaou 19 : Dijuni, diviz diwar-benn an hudouriezh e Keltia ; lein beaj dre garr-boutin betek Dunfermline ; degemer gant Kuzul-kêr Dunfermline ; bodadeg er Skol-veur ; prezegenn gant Annie Mackenzie, eus enezenn Lewis.

Gwener 20 : Dijuni ; danevelloù bloaziek ar sekretourien ; kafe ; bodadeg etrevroadel ; lein ; endervezh dieub ; koan ; sonadeg en Albert Hall ; bodadeg diouzh an noz er Skol-veur.

Sadorn 21 : Dijuni ; divodadeg ar C'hendalc'h.

Ar re a garfe mont d' ar C'hendalc'h a rank skrivañ da rener Skourr Breizh, da lavarout eo Per Denez, Ri, Ploare, 29 S - Douarnenez. Bez e ranker bezañ ezel eus Skourr Breizh evit mont d'ar C'hendalc'h.

Lavar 3

Setu amañ taolenn Kaier 123-124 Preder :

Goulven Pennaod : Gwrizienn ha bonad ar verb euskarek.

Goulven Pennaod : Diwar-benn ar raganvioù :

- gour 3 e un. gourel ha nepreizh ha raganvioù ;

- diskouezañ zo.

abEnnez : Hanez ar moulañ.

Kreizenn imbourc'h sturyezhouriezh. - Notennoù-labour.

Priz : 9 lur - Preder, 30, place des Lices, Rennes c.c.p. : G. Etienne 16 093 13 Paris

Pub

PUB zo o paouez embann ul levrig evit ar vugale a vent gant levrioù-bugale " Al Liamm ". *Un amour de chat*, ur gontadenn e galleg siwazh, zo skrivet gant Simone Morand. Al levrig zo diskouezet brav-tre hag ar skeudennoù e liv eus ar re goantañ a zo diwar zorn ur plac'h ivez : Marjatta Taburet.

Presses Universitaires de Bretagne, 10, rue Vicairie, Sant-Brieg. 15 pajenn - 2,25 lur ar skouerenn.

Devezhioù-studi Emsav Ar Bobl Vrezhon e Koad-an-Doc'h

D' ar 27 - 28 - 29 - 30 a viz Kerzu 1970.

Devezhioù-studi Koad-an-Doc'h o devoa da bal bodañ en un doare arbennik izili pe zanvez izili E.B.V. a gemer perzh war-eeun e labour an Emsav, evit en em stummañ, unvaniñ o mennozioù hag an doareoù-ober dre eskemm o soñjoù ha studiañ a-gevret ar c'hudennoù politikel a sav war hent addiazezidigezh Pobl Vreizh en he frankiz.

78

Ouzhpenn pemp den ha tregont o deus kemeret perzh enno daoust d' ar riell ha d' an erc'h a c'holoe Breizh a-bezh, darn o tont a bell gant an doareoù kehentiñ an iskisañ ha goude bezañ tremenet un nozvezh bennak en ur c'hraou a-wechoù.

N'eo ket bet pouezet war studi ar yezh (devezhioù-studi all a vo gouestlet da houmañ) evit gellout studiañ donoc'h obererezhioù SKOL AN EMSAV hag E.B.V.

Ar c'hudennoù a zo bet studiet dre gendaelioù hollek ha bodadoù studi bihan.

Gant Skol an Emsav ez eo bet ensellet stad ar yezh hag an deskadurezh e Breizh, an ezhommoù e-keñver kelennerion, stummadur ar gelennerion, dornlevrioù kelenn. Ur rentañ-kont a zo bet graet gant kreizennoù Skol an Emsav ha termenet eo bet amkanioù ha pal Skol an Emsav. Pal hemañ eta ez eo sevel un deskadurezh vrezhon klok ma c'hell an holl Vrezhoned ober o studioù en o yezh ha stummañ, dre se, ar Vrezhoned evel Brezhoned.

An amkanioù a zo lies, hervez ar c'hreizennoù hag an dud a vez tizhet gant Skol an Emsav. Ar re bremañ a zo :

- diorren ur skol evit deskiñ brezhoneg d' ar c'hallegerion ;
- krouiñ ur skol hollvrezhonek ;
- kaout rummoù kentelioù eil ha trede derez a roio ur stummadur izek d' an emsaverion bet stummet e galleg evit kas war-raok o stourm e brezhoneg ;
- sevel kreizennoù nevez.

Evit E.B.V. ez eo bet studiet dreist-holl kudennoù ar sevel trevioù ha kendrevioù, an ereadur etrezo, an darempredoù gant aozadurioù diavaez, an dael ha kudenn diorreadur ar gelennadurezh gant skoazell « Imbourc'h » ha dreist-holl « An Ere » kelaouenn gefridiel E.V.B. a zeuio er-maez bep miz adal miz Genver 1971.

Studiet eo bet lec'h E.B.V. en istor an Emsav hag en Emsav hiziv hag an darempredoù da gaout gant ar strolladoù all : strolladoù politikel, ampolitikel, c'hweluniadel, breizhek pe c'hall.

Boulc'het ez eus gant studi damkaniezh stourm ar broadoù bihan en Europa, evit klask peseurt ster a zo da adsavidigezh ar broadoù-se hiziv e kornog hor c'hevandir.

Imbourc'h, taolenn an niverennoù 11 ha 12

Niverenn 11, 30 Du 1970 :

Kemennadenn - Darvoudoù an deiz : douaridigezh ur vroad - Kebeg ha Breizh -

Bodadeg vras ar C'hevren keltiek - Danvez ur Statud evit Breizh - Evezhiadennoù - Emañ hon dazont e goueled ar mor - Emsav ar Bobl Vrezhon : danevell obererezh. Skoazell pobl Vreizh da bobl Euskadi.

79

Niverenn 12, 31 Kerzu 1970 :

Labour an Emsaverion - Dielloù : Breudoù-Meur Adc'hanedigezh Vreizh - Lizhiri - Heuliadoù ur prosez - Emsav ar Bobl Vrezhon : Devezhioù-studi ar goañv.

Koumanant-bloaz : 20 lur

Da gas da Y. Ollivier, c.c.p. 1 534 25 Rennes. Ar c'houmanant a grog e miz Genver.

Skol an Emsav - Kevrenn an eil derez

Tennet eo bet an div gentel gentañ war al lennegezh gouestlet da d Taldir ha da Erwan Berthou. Ar re a garfe enrollañ evit ar rummad kentelioù-mañ a c'hell skrivañ da : SKOL AN EMSAV, 30, place des Lices, 35 - Rennes.

Skol dre lizher

V. Seite, rener Skol dre lizher ar Bleun-Brug, a bed ac'hanomp da gemenn kement-mañ : E-pad ar bloavezh-skol 1969-70, ez eus bet enskrivet en e skol 615 skoliad (merc'hed : 298 - paotred : 317), o oad o vezañ well-wazh 23 bloaz. An div drederenn a zo dindan 25 bloaz.

Orin ar skolidi :

Penn ar Bed : 276 ; Aodoù an Hanternoz : 31 ; Mor Bihan : 28 ; Il ha Gwilum : 23 ; Lijer Izelañ : 31 ; Pariz : 129 ; Departamantoù all : 94 ; Estrenien : 7. - War un dro : 615.

Micher ar skolidi :

Studierion : 296 (merc'hed : 146, paotred : 150) ; Kelennerien, skolaerien : 61 ; Implijidi-burev : 56 ; Sekretourien : 26 ; Micherourien : 34 ; Klavdiourezed : 12 ; Soudarded : 12 ; Retredidi : 8 ; Micherioù all : 52 ; Micher dianav : 58.

E 1967-1968 e oa enskrivet 218 skoliad, e 1968-69 : 504. O oadoù o vezañ well-wazh 29 bloaz ha bremañ 23. Niver ar merc'hed a oa an drederenn eus hini ar baotred ha bremañ ez eo tost heñvel evit an daou rumm.

E ti Moulerezh AR BAOL - Bali ar Marichal-de-Lattre-de-Tassigny

Diskleriet hervez lezenn : kentañ trimiziad 1971

Niverenn er voulerez : 31486

Ar merour : P. AR BIHAN

AL LIAMM 145

TAOLENN

BarzhazBreizh	83
Mona gant REUN MENEZ KELDREG	88
Deuet gweur ar beure gant Breur TURIIV	93
An Dremm gant ROLLEN E. SURZHUR	94
Jord Helori (dastumet gant ROPARZ HEMON)	100
Nikolaeva : " An ijinour Baxirev " gant PIERRETTE KERMOAL	104
Skandinavia : Un taol-arnod sokialour deut da vat ? gant ALAN THIBAULT	117
Evezhiadennoù a-hed hag a-dreuz gant YOUENN OLIER	122
Enezenn va ene gant L. ANDOUARD	128
Dilezet gant MAIRE AINE NIC GHEARAILT	131
Notennoù.	133

BARZHAZ BREIZH

SANT EFLAM HAG AR ROUE ARZHUR

- I -

Ur roue eus a Hiberni
En doa ur verc'h da zimeziñ,
Eus ar priñsezed ar vravañ.
Hi oa hec'h ano Enora.

Gant e-leizh oa bet goulennet
Hag holl e oant bet distaolet,
Nemet mab ur roue, Eflam,
Ur c'haer a zen, ha yaouank-flamm.

Met lakaet en doa en e benn
Monet da ober pinienn
En ur minic'hi, en ur c'hoad,
Ha mont kuit digant e wreg vat.

Deiz an eured, e-kreiz an noz,
An holl er gwele, kousket-kloz,
Diouzh he c'hichen e oa lamm,et,
Er-maez eus ar gambr, didrouz-naet.

Er-maez eus ar palez ez eas,
Na den ebet ne zihunas,
Ha pell diouzh ar gêr, skañv ha feul,
Nemet e gi-red ouzh e heul.

War an traezh pa oa degouezhet
Klask ul lestr bennak en doa graet.
Kaer en doa sellout a bep tu,
Ne wele netra en noz du.

84

Ken na savas al loar souden,
Hag e welas en e gichen,
E-kreiz an eon, un arc'hig toull,
Taolet-distaolet war an houl.

Hag Eflam kerkent da gregiñ
En arc'h ha da bignat enni.
Ne oa ket c'hoazh savet an deiz
Ma oa bet kaset betek Breizh.

Breizh neuze a veze gwastet
Gant loened gouez ha dragoned,
A rae o reuz e pep kanton
Ha dreist-holl e bro Lanuon.

Kalz anezho oa bet lazhet
Gant penntiern ar Vretoned,
Arzhur, ha na oa ket e bar,
Keit ha ma oa war an douar.

Hag Eflam, dres, o touarañ,
'Welas Arzhur o 'n em gannañ,
E varc'h eilpennet war ar prad,
Dre e zifron o teurel gwad.

Hag ul loen gouez en e gichen,
Ul lagad ruz e-kreiz e benn,
Ha skant glas en-dro d' e ziskoaz,
Ken bras hag ur c'hole daou vloaz,

E lost evel ur viñs houarn,
E veg betek e ziskouarn
Digor, gant skilfoù gwenn, lemmet,
Evel un hoc'h-gouez, hed-ha-hed.

Tri devezh oant bet evel-se,
An eil o tagañ egile.
Ar roue oa tost da fatañ,
Pa zegouezhas Eflam gantañ.

Ar roue Arzhur a laras
Da Eflam, adal m' hen gwelas :
« Me ho ped, aotrou pirc'hirin,
Degasit ul lommig dour din ».

85
« Mar plij d' hon Aotrou binniget,
Dour a-walc'h a vezo kavet. »
Hag eñ da skeiñ gant penn e vazh,
Dre deir gwech, war veg ar roc'h c'hlas.

Ken na zilammas ur vammenn
Diouzh ar garreg, en un taol krenn,
A dorras d' Arzhur e sec'hed,
O reiñ dezhañ nerzh ha yec'hed.

Hag eñ d' an dragon adarre,
Ha plantañ 'n e veg e gleze,
Ken na laoskas ur griadenn,
Ha kouezhañ er mor war e benn.

Ha pa voe lazhet, ar roue
A lavaras d' an den Doue :
« Deut, m' ho ped, e palez Arzhur.
M' ho lakay en ho plijadur ».

« Salokras, aotrou, ne din ket.
Da lean em eus-me soñj monet.
Mar plij ganeoc'h, me a chomo
El lec'h-mañ, keit ha ma vin bev. »

- II -

Enora voe souezhet-bras,
Diouzh ar beure, pu zihunas,
O c'houlenn petra oa degoueet,
Na pelec'h oa aet he fried.

Eus he daoulagad an daeroù
A rede 'vel dour ar gwazhioù,
Dre ma oa, siwazh, dilezet
Gant he mignon hag he fried.

86
Gouelañ a reas a-hed an de,
Hep kavout frealz d' hec'h ene.
Gouelañ a reas c'hoazh goude koan,
Hep gallout tamm kavout diboan.

Ken na gouezhas kousket, skuizh-tre.
Ha setu me reas un huñvre :
Gwelout he gwaz en he c'hichen,
Hag eñ kaer 'vel an heol melen.

« Deut-hu ganin, » a lavare,
« Mar fell deoc'h mirout hoc'h ene.
Deut hep dale, en digenvez,
Da ober ho silvidigezh. »

Hag hi, dre he hun, da laret :
« Mont a rin ganeoc'h, va fried,
E-lec'h ma karit, da leanez,
Da ober va silvidigezh. »

Ar re gozh o deus lavaret
Penaos e oa-hi bet douget,
Hag hi kousket, dreist ar mor bras,
Gant an aelez, da zor he gwaz.

Diouzh ar beure, pa zihunas,
Tri zaol war an nor a skoas :
« Me zo ho tous hag ho pried,
amañ gant Doue degaset ».

Hec'h anaout a reas diouzh he mouezh,
Ha sevel kerkent, hag er-maez.
E zorn en he dorn a lakae
Gant komzoù mat a-berzh Doue.

Ul lochennig a reas dezhi,
Gant balan, a-gleiz d' e hini.
'Kichen ar feunteun he savas,
Er gwasked, a-dreñv ar roc'h c'hlas.

Pellik-meur e chomjont eno,
Ken na deas ar brud dre ar vro
Eus ar burzhudoù o doa graet.
Ha bemdez oant darempredet.

87

Un noz, an dud a oa war vor
A welas an neñvoù digor,
Hag a glevas meuleudioù,
Ken na oant bamet o selaou.

Hag antronoz, ur baourez kaezh,
Hag a oa aet da hesk he laezh,
He bugel o vont da semplañ,
A zeuas da gaout Enora.

Kaer he doa gervel ' toull an nor,
Ne zeue gour da reiñ digor,
Ken na welas dre un toullig
An itron astennet, marv-mik.

Ken kaer oa hag an heol melen,
Hag al loch leun a sklerijenn,
Hag ur paotrig gwisket e gwenn
War e zaoulin en he c'hichen.

Hag hi da vonet en ur red
Da gavout Eflam binniget.

Digor oa dor ar minic'hi,
Hag eñ a oa marv evelti.

An traoù-mañ n' int e levr ebet.
Da virout na vent disoñjet,
Int bet lakaet e gwerzennoù,
Da vout kanet en ilizoù.

MONA

Gwechall ned ae ket alies gant ar bignerez. Gwelloc'h e kave mont dre an diri. Karout a rae pignat, derez war-lerc'h derez, en ur santout e dreid o sankañ e tevder ar pallenn a c'holoe ar skalier penn-da-benn. Vad a rae dezhañ lakaat kigennoù e zivesker da labourat goude e eurvezhioù er burev. Alies e c'hoarveze gantañ kemer plijadur o sevel war-bouez begoù e dreid, goustadik, goustadik, betek santout korf e vorzhedoù o tommañ. Daou solieradur a bigne, a-wechoù tri. Hogen, ral a wech e oa bet gouest da gemer e amzer da grapañ ar pevarvet pe ar pempvet gant ar memes tizh.

Degouezhet war an trede pondalez ne c'helle mui gortoz. Gouzout a rae edo hi ouzh e c'hedal. Ul lamm a rae neuze, hag en ur gregiñ er garidoù e kemere e lañs, hag e lamme, daou-ha-daou, gant an derezioù hep ehanañ, tre betek al laez...

Ya !... Gwechall.

Tost-tre e chome ar wechall-se. Ne oa nemet teir sizhun abaoe m' he devoa e guitaet. Hogen, teir sizhun pe dri bloaz, heñvel e oa evitañ. Abaoe en em sanke en ardivink kerkent ha degouezhet en trepas. Torret e oa ar winterell en douge davet e lojeiz.

E fin an enderv-se ne gemmas ket e voaz nevez. Pouezañ a reas, dievezh, war nozelenn an niverenn pemp. E selloù a baras, goullo, war ar skritell peget a-rez e zaoulagad. Rouzmouzañ a reas ar mekanik. E fraoñvadeg unton a dizhe e zivskouarn, heskinus. Ul lamm a reas pa harzas ar benveg « dija », a soñjas. Douget e voe da sellout ouzh niverenn ar solieradur gant an asur ma oa faziet p' en doa pouezet war an nozelenn. Nann. Degouezhet e oa. Dont a reas er-maez ha mont betek e zor. Sevel a reas e zorn, dre voaz, davet ar sonetenn. « Diot », a c'hrozmolas etre e zent en ur hejañ e skoaz. Sankañ a reas an alc'houez er botailh hag ez eas tre.

Souezhet e voe o santout aer tomm al lojeiz war e dremm. Bep tro ma tigore e zor, abaoe he disparti, en em gave e voud a-bezh o c'hedal, o c'hortoz roudoù he bezañs. En devezhioù kentañ e rae tro e di, e galon o talmañ gant ar c'hoanag d' he c'havout tamolodet e korn gourvezvank ar saloñs a blije dezhi kement. Deuet e oa, nebeut ha nebeut, da zegemer ar menoz ne zistrofe ket mui. Pe, da vihanañ, ket a-raok pell. Re ziwezhat...

C'hwesa a reas an aer oc'h evezhiañ sioulder digunvez an ti. Ar mogerioù o devoa klevet o c'huzutoù ne restaolent dezhañ nemet o feoc'h morvitellet ken sklaset hag hini ur c'hav-bez.

Digor en devoa lezet an holl zorioù war e bondalez. Peulañ a reas e kreiz al leurenn hep dont a-benn da zivizout da belec'h mont. E sac'h ler a zalc'he dre ul lerenn war-bouez e vrec'h. Enoet ez eas, a-benn ar fin, d' e saloñs. Stlepel a reas ar sac'h war ur garidon. Asvan a reas goude da lemel e zilhar. Hogen n' en doa netra da dennañ. Re domm e oa an amzer evit dougen estreget ur rochedig. En em deurel a reas war ur gador-vrec'h, e gein harpet hag e zivrec'h astennet war divrec'h an azezenn. Talmeta a reas an danvez anezhi, war un dro fetis ha gwak. Yen en kavas ha plijus-tre d'e groc'hen vouest ha da balv e zaouarn tomm berv. Gant e vizied e flouras an danvez, ken evit ar blijadur.

En amheol edo. Diskennet en devoa ar stalafioù, diouzh ar beure a-raok mont d' e labour en ur lezel ar prenestroù digor evit mirout un tammig freskter d' e lojeiz. Astenn a reas e zivrec'h ha klask kousket. Serret en doa e

zaoulagad. Skuizh e oa e gorf, hogen e spered a chome war evezh. Serret gantañ e valvennoù e pare dirazañ goulloer e vuhez. Kerse en devoe d' e vurev. Eno, da vihanañ, e kave ur seurt peoc'h en e labour e kompagnunez kenlabourerien. N' en devoa rannet grik betek-hen da nikun eus e stad. Gouzout a rae re vat ne chomfe ket pell e sekred e dra dezhañ. Meur a sell souezhet a verze dija en-dro dezhañ, dreist-holl pa seblante d' e geneiled ne bare ket e zaoulagad warno. Hep dale ez afe ar brud betek enno. Ne rae mui forzh. An devezhioù kentañ, ya ! chifet e vije bet, mezhekaet zoken. Hogen, e teir sizhun en deus unan amzer da brederiañ hag er c'heñver-se ur seurt peoc'h a oa diskennet en e ene. Diseblant e chomfe bremañ ouzh ar pezh a soñjfe ar re all. Un dra a zouje koulskoude ! lenn an druez en o selloù.

90

Soñjal a rae en devije kavet gwelloc'h klevout c'hoarzhadennoù ha zoken godiserezh. Divizet en devoa, tri pe bevar devezh a oa lavarout dezho. Met tevel a reas. En e zon donañ e chome c'hoazh ar spi d' he gwelout o tistreiñ, d' he c'havout mut hag elevezet, o c'hortoz anezhañ er saloñs. Marteze, a brederias, he devo prenet bleunioù ? Plijout a rae ar bleunioù dezhi. Evitañ ne rae ket forzh ganto. Ne oa bet nemet ur vleunienn en e vuhez, mousc'hoarzh he muzelloù ha sklerijenn he daoulagad. En ur feson, hetiañ a rae bremañ gwelout pep tra anavezet gant an holl. Gwelloc'h en devije kavet koulskoude gwelout an dezrevelladur o tont gant ar re all. Re nec'het en em gave gant e brederiadennoù evit bezañ rediet ouzhpenn da deurel evezh war emzalc'h an nesañ en e geñver...

Sec'het a oa deut dezhañ. Evajoù a chome en armel-yen. C'hoantaat a reas trumm merzout blaz c'hwerv bier sklaset o tiskenn en e c'hourlañchenn. Diegi en doa da sevel ken rannalonet en em gave. Holl nerzhoù e voud a hete chom evel-se, sanket e don an azezenn betek ar c'houk diwezhañ.

Hir vunutennoù a lezas da dremen.

« Gwechall, a soñje, a-raok he disparti, am bije kanet a-bouez-penn dirak ar miz ehanoù o 'n em astenn dirazon. »

Bremañ e oa deuet pep tra da vezañ ur bec'h evitañ : fardañ boued, mastariñ boued kentoc'h, skaotañ al listri, ha dreist-holl, derc'hel a-ratre e zilhad. Klasket en devoa tennañ prof eus ar walc'herez, met ne ouie ket e petore lec'h e oa bet lakaet an doare implij. Re a nozelennoù a oa warni. Ret e vije dezhañ, un devezh bennak, mont da welout ar marc'hadour. Kilañ a rae bemdez dirak seurt kefridi. Soñjal a rae dezhañ en devije pep implijat lennet e donkadur war e dal. Kaset en devoa pep tra en un ti-kannañ pell a-walc'h diouzh e garter.

Ha bremañ, peder sizhun a oa digor dirazañ. Goullo.

Kuitaat kêr. Aes e vije. Mont da n' eus forzh pelec'h. Tost d' an aod. Ret e vije mont da vord an aod. Ezhomm en devoa eus ar mor. Gallout kouronkañ. Santout a-nevez red an dour war groc'hen. Evel gwechall. Kounaat a reas an draezhenn o devoa darempredet warlene. Hag adwelout anezhi. Kalz pelloc'h egetañ e oa chomet an dro-se da c'hoari en tonnoù. Deuet e oa, erfin, brevet gant ar skuizhder, da c'hourvez en e gichen war ar palenn kouronkañ o devoa ledet war an traezh. An dour o tiverañ diouzh he blev a rae dezhi stumm ur c'hi yaouank droch. Berv e oa an amzer. Evel hiziv. Ha klouar an dour. Re glouar evitañ. Gwelloc'h e kave an dour yen. Santout ur skrijadenn o redek a-hed e groc'hen a-bezh pa spluje en tonnoù a oa evitañ ur blijadur dispar. A bouez brec'h en em lakae neuze da neuial. Sankañ a rae tizh betek gounit war ar yenijenn ken e teue, er fin, da gavout an dour klouar. En em ledañ he devoa graet en e gichen en ur bouezañ he fenn war e vrennid. Nebeut amzer goude e vane kousket plaen. Na pa soñje er c'houk-se dindan flouradenn an avel o c'hoari en he blev !

91

Pellaat ! ya ! met mar tistrofe avat ? Ezhomm en devoa outi. Ezhomm eus he divrec'h. Ezhomm eus he c'horf, eus skleur he daoulagad, eus hec'h anal, eus fuilh he blev war ar pennwele. Gallout a-nevez flourañ he c'hroazlez, santout

c'hwezenn **an** daou gorf o strivañ er garantez...

Trelatet e oa gant he soñj.

Chom a rafe. Un devezh bennak da nebeutañ. Betek ma teufe sot o treiñ hag o tistreiñ en e lojeiz, dres evel ur gelienenn-dall oc'h en em stokañ, eurvezhioù-pad, ouzh gwerennoù ur prenestr serret.

Da c'hortoz, ret e oa dezhañ bevañ. Dav e oa dezhañ kemer ur c'habas pe ur roued bennak ha mont da brenañ tra pe dra.

Sevel a reas.

Pellaat e rankfe diouzh e garter rak e giger en devoa serret e stal abaoe eizh deiz. Euruzamant en ur feson. Fuloret e oa distroet diouzh e di ar gwener all. « Hag oc'h itron ? » en devoa goulennet gant e vouezh lipous, « n' em eus ket he gwelet abaoe meur a zevezh. Ur frealz eo d'an holl gwelout he minc'hoarzh er stal ! » Aet e oa e gouez. Ur pezh mell kontell a oa war varbr an daol labour. Ur c'hoant spontus he zapout hag he sankañ tre betek an troad e kof egile a oa krog ennañ, ken e krene e zaouarn e foñs e c'hodelloù. Sellet en devoa ouzh an den gant daoulagad sklaset, re ur muntrer. Hemañ spontet, a vesteodas un dra bennak hag a davas. Ne geuzie ket dezhañ. Kigerien a-walc'h a oa e kêr. Ar baraer ivez a serre e stal hiziv. Lennet en devoa ar skritell en devoa peget ouzh e zor. Dont a rafe, hen gouzout a rae, da vezañ nebeut ha nebeut digas da bep tra en-dro dezhañ. Da c'hortoz, ne gare ket kalz kemañ e voazioù. Gwelloc'h e kave kenderc'hel da zaremprediñ an dud a anaveze. Ur seurt nerzh a denne eus o c'hompagnunezh.

92

En e sav en em zalc'he e-kreiz ar saloñs. O klask kemer un diviz bennak a-raok mont er-maez. Edo e selloù o parañ en-dro dezhañ. Poultrenn a verzas war an arrebeuri. Tostaat a reas ouzh e levraoueg. Astenn a reas e zorn ha flourañ kein e levrioù. E vignoned. Hi eo he doa koaret an astelloù. Tremen a reas e viz war ur planken. Dic'houzvez kaer e skrivas war ar boultrenn un anv : MONA. E emskiant douget gant ar garantez a gendalc'he da vogañ eviti en devoa graet d' e viz tresañ al lizherennoù. N' en devoa bet e spered perzh ebet en e jestr. Souezhet, e chomas ur pennad da sellout ouzh an anv-se. Er memes amzer e spias e zaoulagad pep tra en-dro dezhañ. En un taol e verzas ar stad wirion ma oa e lojeiz. Heugañ a reas rak al loustoni a c'houneze an arrebeuri devezh war-lerc'h devezh. Lizherennoù ar ger MONA a gendalc'he da biklammat dirak e zaoulagad. Astenn a reas e vrec'h a-nevez. D' o heul e skrivas, evezhiek kaer an taol-mañ : KIEZ.

Ul lamm a reas o kerzhout d' ar gegin. Ur bok bier a gemeras en armel-yen. Hag e zistouvañ, kounnaret. Lonkañ a reas an died sklaset hep tennañ e anal. Er sailh e stlepas ar voutailhig goullo. Torchañ a reas e vuzelloù gant e gildorn ha grozmolañ : « Poent eo ! ». D' e gambr ez eas. En armel e gemeras ur valizenn. Sankañ a reas enni ar pezh a gavas. Nebeut a dra. Serriñ a reas ar golo. E chupenn a gemeras er pres en ur c'hrougnal : « Ne zistroin biken ! » .

Deuet gweur ar beure

Splannat goubannwel war va lann-me
Kazarc'h ha latar atav
Glav ne zeu ket pan en hetan
Da gannañ va liñselioù diwennet a-werz zo

Ha du-teñval e vo d' an noz bezañ
Lusenn war bep tusenn
Poukoc'h an erc'h du eget mein
O tiraez va maezeier

Ur safron eston diheson toniet
Kangomzadoù huanadus a bep pennad
Na vez manac'h evit o meizañ
Bouzarus o safar latarek

Meur e vezo gweur ar beure
Pa vezo glav dilavus
O welc'hiñ kannoc'h eget erc'h
Kannoc'h eget gloan da-neuze

Da zigailharañ mastar an arvar
Ma savo didav e vavded
Ar c'han difazi briel ha disi
D' ur meulvezh dalbezh.

Koareiz 1970.

An Dremm

An abardaez all, n' eus ket pell 'zo, e oamp holl azezet ouzh taol goude kafe, e ti Goulven Gergoad, unan eus va mignoned vrasañ, o kaozeal diwar goñchennoù a veze danevellet gwechall, pa oamp paotred yaouank, e korn an oaled, diwar an arc'helaroù, ar gorriganed, ar spesoù hag ar c'hannerezed-noz. An doareennoù dreistnatur, pep hini her goar, zo un danvez na vez kavet dibenn outañ, hag e-pad eurvezhioù hag eurvezhioù e c'heller aozañ tamm-ha-tamm un aergelc'h kevrinus ha skrijus, dreist-holl pa vez izelaet ar gouleier ha pa vez avel pe c'hilav er-maez pe pa darzh ar gurun en noz teñval.

Evel just, en doa pep hini ac'hanomp un darvoud bennak da zibunañ, skouer un darvoudenn dreistnatur c'hoarvezet dezhañ pe da unan bennak eus e gerentiad. E-touez ar re n' anavezen ket eno, e oa un den bihan ha treut, gwisket cheuc'h, ha n' en doa laret grik betek-hen ; azezet oa war veg e reor war vevenn e gador, o terc'hel en e zorn, hag ouzh e saouriñ, ur werennadig lagout-prun. Taolet en doa, e-doug an holl ziviz, an evezh donañ ouzh pep koñchenn, o parañ e zaoulagad bihan du ouzh muzelloù ar c'honter, pa zeuas Goulven Gergoad da c'houlenn digantañ ha n' en doa ket, eñ ivez, un eñvorenn bennak da zanevellañ.

Ur grak a reas d' e c'hourlañchenn :

- Mat-tre, emezañ, n' eo ket ur gontadenn evel ar re am eus klevet amañ. Un afer iskis eo emeon o vont da gentañ deoc'h. Ar wirionez, war a gred din, n' eo ket hepken iskisoc'h eget ar faltazi, hogen un tamm mat dedennusoc'h. Kontañ a c'hellan deoc'h un darvoud am eus bevet va-unan, ha, iskisat tra, n' am boa ket komprenet mat betek an endervezh-mañ.

Goulenn a rejomp holl outañ kenderc'hel gant e zanevell.

Diskarget e voe bep a werennad chouchenn pe lagout hag pep hini ac'hanomp a leunias ur c'horniad pe a gemeras ur sigaretenn.

- Bloaz pe zaou 'zo, emezañ, em boa graet ma annez anezhi ur gambr vihan ha dister am boa feurmet e-ti Kozhmao, straed ar Gereon, en un ti bras nepell eus Leurgêr Douar-an-Dug. Paper-moger ar gambr en doa gouzañvet kalz digant glebor al lec'h, o vezañ m' emañ live ar Ster uheloc'h eget diazezadur an ti ; setu perak e oa introù bras graet gant an holen-moger a-dreuz ar paper. Unan anezho a denne d' un dremm ; hag heñveloc'h eget ma vez boaz. Sebezus a-walc'h oa. Astennet war ma gwele, diouzh ar mintin, o c'hortoz ar mare da sevel, e chomen a-wechoù o sellout outi pell a-walc'h, ha, tamm-ha-tamm, e teue din da soñjal e oa ken gwir ha ma vefe bet ur c'hengambred bennak. Daou e oamp o lojañ en hevelep kambr ! An dremm ha me ! An iskisañ-holl a oa tra m' edo an introù all o kemmañ liv pe stumm ganto, ne gemme an intr-se tamm ebet. Bep noz, pa oa poent din mont da gaout ma lec'h etre divrec'h Murphy - savet oa bet an dro-lavar-se gant ur mignon din a Vro-Iwerzhon - an hevelep dremm a gaven ouzh ar voger.

E-doug ma oan o chom eno, e pakis ur frapad riv fall gant gwashadurioù, ha n' am boa netra all d' ober nemet menel e-barzh ma gwele o lenn pe o lonkañ soñjoù ; hag e-pad ar marevezh-se, e teuas an dremm da dapout krog em spered tamm-ha-tamm. He sklav e teuen da vezañ hep gout din. Dont a reas da vezañ gwiroc'h-gwirañ, heverkoc'h-heverkañ. Larout a c'hellan ez aotronie ma soñjezonoù deiz ha noz. Ar fri anezhi a oa ur grommell fentus outañ, ha pouez-traoñ an tal anezhi a oa dibar. An dremm-se a oa personelezh sur-awalc'h outi ! N' oan ket koulskoude da vezañ troet ma spered ganin.

Feiz, gwellaat a reas din, hogen dindan voem an dremm e oan c'hoazh. En em gavout a ris er straedoù o klask hevelep hini. Un tu bennak, ha sur-krenn oan, e tlefe bezañ un den gant seurt dremm dezhañ ; ha setu me ouzh e glask e pep lec'h. Perak ? N' ouien ket. An dra nemetañ a ouien eo e oamp staget, an dremm ha me, ouzh an hevelep planedenn, e mod pe vod, an hini oa. Stagañ a ris da zaremprediñ lec'hioù m' en em vod kalz tud enno : bodadegoù politikel, kevezadegoù mell-troad, ar c'hoc'hu, an oferenoù e St-Kaourintin ha St-Vazhe, an ambrougadegoù-kañv, ha me oar. En aner. Biskoazh diagent n' em bij kredet e oa kement a zremmoù disheñvel war ar glenn-mañ, ha dremmoù heñvel ivez. Rak, daoust d' an disheñvelderioù, e c'hellit kontañ ar rummoù anezho war ho taou zorn.

96

Mont a raen sot gant an enklask-se. Un albac'henn e teuas da vezañ evidon. Lezel a raen a-gostez pep tra all. Chom a raen war ma sav e kornioù ar straedoù darempredet-kenañ, betek ma soñjas an dud e oa troet ma spered, diremed, ha, bremaik, e teuas ar bolis da anaout ac'hanon hag e voent disfizius. Ne sellen ket ouzh ar merc'hed, feiz nann avat, ouzh ar baotred ne laran ket. Paotred, paotred dalc'hmat !

Tremen a reas an den bihan e zorn war e dal.

- Ha neuze, a-benn ar fin, e welout a ris. En un taksi edo azezet, o tremen e-biou d' an Ti-Post war gorn bali Gergelen. Treiñ a ris ha lammat en un taksi all war e lerc'h, en ur lavarout d' ar blenier : « Heuilhit an taksi-mañ ! ». Dont a reas a-benn ar blenier da dremen hep koll roudoù egile, ha betek ar gar ez ejomp. Difraeañ a ris betek dor ar c'hae hag e welis ma den gant div itron hag ur plac'hig vihan. Da Bariz e oant o vont gant tren 21 eur. Treiñ a ris tro-dro dezho da glask toullañ kaoz gantañ. En aner. Tud all a zeuas d' o c'havout hag an holl anezho a dremenas war ar c'hae.

Buan ez is da brenañ un tiked a-raok ma tiloc'hje an tren. P' en em gavis war ar c'hae n' edo ket mui ar strollad-tud eno, ha dav oa din e glask e-barzh an tren. Leun-kouch oa an trepasioù hag e rankis ergerzhout dre an holl girri, unan-hag-unan, a-hed an tren a-bezh. A-benn ar fin - an tren a oa erru e Rosporden endeo - e kavis ma den en e sav en trepas, o vutuniñ ur sigaretenn gant unan eus an itronezed ; divantell e chome eno, gant e selloù troet ouzh ar werenn-brenestr o tigeriñ war an noz o tisken.

An tiegezh a-bezh, a ouezis diwezhatoc'h, a oa bet feurmet ur c'hombod evitañ e-unan. Ne greden ken tostaat outo, d' an nebeutañ keit ha m' edo an itron en e gichen. Dibab a ris ul lec'h e penn ar c'harr ma oa aes din e gaout dindan ma selloù ; hag e c'hortozis. A-benn ur hanter eurvezh - etre Kemperle hag An Oriant e oamp - e sachas an itron war an nor c'haranet hag ez eas diwar wel er c'hombod. Tridal a reas ma c'halon, ken na soñje din e rae kement a drouz hag an tren e-unan. Fazi ebet da gaout, e soñje din, e zremm a oa heñvel ouzh hini paper-moger ma c'hambr. Teurel a reas ur sell war ma zu hag ez is d' e gaout. " Bremañ pe morse, " e laren din ma-unan.

97

« Ma digarezit aotrou, emezon en ur vesteodiñ, n' anavan ket ac'hanoc'h, hogen un abeg mat am eus da c'houlenn hoc'h anv diganeoc'h, mar plij deoc'h. »

« Eus ar bolis oc'h ? » e c'houlennas.

« N' on ket, » hag e rois dezhañ ma anv da zispontañ anezhañ.

Mousc'hoarzhin a reas hag, anat e oa, ne oa ket souezhet da vezañ komzet outañ ; n' oa ket ral seurt traoù e-barzh un tren.

« Perak, e laras din, e fell deoc'h gout ma anv ? »

« Re hir e vije heñ displegañ deoc'h penn-da-benn ha re iskis ivez ;

marteze goude ho po roet din hoc'h anv, e rin ! »

Mousc'hoarzhin a reas adarre hag e roas din unan eus e gartennoù a dennas eus e c'hodell-nec'h. Anat eo e oa spontet un tammig memestra, ha sur-awalc'h ez en em c'houlenne piv oa an istrogell difeson-se. Antren a reas e-barzh ar c'hombod hag e serras an nor war e lerc'h, o soñjal moarvat e oa furoc'h dezhañ kemer an darvoud-se gant fent e-lec'h broc'hañ.

O stardañ ar gartenn em dorn, e kerzhis betek penn all ar c'harr hag e taolis ur sell outi. Luziet e voe ma daoulagad, badaouet e vanis a-stok ouzh ar speurenn ; war ar gartenn, en he c'hreiz, e lizherennoù du war wenn, e lennis :

Monsieur Lucien Moger
Président Directeur Général
Smith, Klein & French
92 - Courbevoie

An anv Moger ! N' oa ket Doue posubl e kenglote e anv gant al lec'h m' edo e zremm warnañ ! En argoll e oan, hag hanter gollet ma skiant ganin. N' am eus ket soñj a netra goude-se panevet ez en em gavis en un ospital e Pariz ma rankis chom peder sizhun da bareañ ma nervennoù ; ha n' eus nemet ur miz on deuet en-dro da Gemper.

Digomz e chomas ur pennadig.

98

Sellout a rejomp outañ, bamet ha dilavar. An holl goñchennoù a-raok a oa netra ken e-keñver koñchenn an den bihan disliv-mañ.

Kenderc'hel a reas neuze, ha mall a oa warnomp gout hiroc'h.

- Mont a ris en-dro da Straed ar Gereon hag e stagis da soñjal diwar-benn an aotrou Moger-se eus Courbevoie, ma oan bet stlapet en e vuhez en un doare ken divergont. Piv oa an den-se ? Skrivañ a ris d' ur mignon din a oa o chom e Courbevoie hag e reas un enklask diwar e benn. Ur respont digantañ a roas din da c'hout e oa ur mondian, un " Aotrou " ma karit. Kerent en doa un tu bennak diouzh kostez Kemper. Hogen e pelec'h ? D' ar goulenn-se ne zeuas din respont ebet.

Hag an amzer a dremenas. Betek dec'h vintin. Aet e oan da gousket abretoc'h eget boaz rak skuizh-marv e oan, hag e tihunis diwezhat. An heol a bare er gambr. Evel ma ran pep mintin, e taolis ur sell ouzh an dremm war ar voger. Frotañ a ris ma daoulagad hag e c'hourlammis gant ar spont. Aet e oa hogos diwar wel. An derc'hent d' an noz e oa ken fraezh ha ken bev m' em bije hogos klevet anezhi o komz ! Ha bremañ ne oa ken nemet ar spes anezhi.

Sellout a ris, badaouet, dianket, ha mont e-maez. Kelaouennoù kentañ an deiz a oa war werzh endeo, hag e welis e kolonenn-zisplegañ an diabarzh :

GWALLZARVOUD KARR-TAN UR MONDIAN

C'hwi ho peus hel lennet ivez, sur ! Prenañ a ris ar gelaouenn hag e lennis ar pennad evel just : « An aotrou Lusian Moger, ur mondian, ginidik eus Kemper hag o chom e Courbevoie (92), o veajiñ gant e garr-tan etre Lyon ha Marseille gant e diegezh, a zo bet gwallc'hloazet pa 'z eo aet e garr da stekiñ ouzh ur c'harr-ramok ».

Mont a ris en-dro d' am c'hambur, badaouet c'hoazh, hag ez azezis war vord ma gwele, trellet ma selloù ganin oc'h arvestiñ ouzh dremm ar voger. Ha tra m' edon o sellout pizh outi, e welis anezhi o vont diwar wel da vat ! N' oa ket mui a zremm ouzh ar voger ur mareig goude ! Naet oa ar paper !

99

Diwezhatoc'h e tizolois e oa marvet an aotrou Moger diwar e c'hloazioù.

Dilavar e vanas adarre.

- Dreist-ordinal eo ! e larjomp, n' eus ket da dortal ! Biskoazh kemend-all !

- Ya, a laras an denig. Bez' ez eus tri zra dreist, tri zra dispar em danevell. An hini kentañ he c'helle an holen-moger ouzh ar paper stummañ penn un den bev e gwirionez. Marteze, ar Skiant, deiz pe zeiz, a ziluzio an dra-se. An eil, e vefe un darempred etre anv an den : MOGER, hag al lec'h m' edo skeudennet warnañ : MOGER ; Doue oar penaos keta ?

A-du e voemp gantañ ; hag e stagas en-dro an diviz a-ziagent war an darvoudoù dreistnatur, gant un trivliad daougementet hag e kreske goustadik ton ar vreutaenn pa savas an denig a-daol-trumm en ur larout kenavo d' an holl. Dres pa dizhas an nor, e tegasas d' hor soñj ma mignon Goulven Gergoad abeg ar vreutaenn-se en ur c'houlenn gantañ, a-raok mont kuit, petra oa an trede tra dreist eus e goñchenn ken dedennus.

- Laret ho peus e oa tri zra dreist en ho tanevell c'hwi 'oar ?

- A, ya ! an trede tra, e laras en ur zigeriñ an nor, e oan oc'h ankouat anezhañ. An trede tra dreist eo em eus ijinet an istor penn-da-benn un hanter eurvezh 'zo ! Noz vat deoc'h holl !

Gant hor genouioù war nav eur e chomjomp, ha souden e klaskis ma-unan da belec'h e oa aet Goulven Gergoad, evit gout hiroc'h diwar-benn an den fentus-se m' en doa pedet d' ar vodadeg da hilligañ hor c'hivioulder ha d' ober goap diouzhomp en un doare ken difeson.

N' oa ket da vezañ kavet neblec'h !

Muzilheg, Ebrel 71.

JORD HELORI

(? 1700-1782)

Diwar-benn Jord Helori a Lezivin, ne ouzer netra resis, nemet e oa un denjentil, hag e varvas en Irvilhag, en e genkiz, « oadet a bevar-ugent vloaz pe ouzhpenn, d' an triwec'hvet deiz a viz Mae 1782 ». Skrivet en deus telenn-ganoù ha Klemmganoù, klasek a spered hag a stumm.

FLEMMGAN A-ENEP BRIZHDEVODEZED REKOURANS

War Gae ar Foz, e skeud an Tour,
 Amañ e parrez Rekouraños,
 E weler tud a bep doare,
 A bep rumm hag a bep nouveañs,
 Ha na gaver o hevelep,
 M' hen assur deoc'h, neblec'h e Breizh,
 Danvez d' ar varzhed da sevel
 Karmoù divarvel, hag e-leizh.
 Penaos choaz 'mesk kement a dud
 Dellezek da vezañ brudet ?
 Me a blezho ur c'harlantez
 En enor d' an devodezed.

101

Gwelit, azezet en iliz,
 'Tal ur piler, Aziliz kozh.
 War he dremm, en he daoulagad,
 E lugern peoc'h ar baradoz.
 Mes a-boan echu an ofis,
 D' an trotig d' ar gêr pa zistro,
 Nag a storlok ! nag a fourgas !
 Kredit ac'hanon, kemm a zo
 He fried, he merc'h, he matezh
 A vez skandalet hep espern.
 Ken gwazh eo bevañ en he zi
 Ha rostañ e puñs an Ifern.

Sellit houmañ o tont, didrouz,
 Atav jentil, dousik-dousik.
 Ne vank dezhi nemet eskell
 Da nijal evel un aelig.
 Rozina a gar he hentez.
 Mes gant komzoù madelezhuz,
 N' ouzon penaos e ra he c'hont
 Da skignañ kelachoù spontus.
 Pelec'h he deus desket an arz
 Da zispenn en ur vousc'hoarzhin,
 Da flemmañ don en ur veuliñ,
 Da reiñ d' ar pour blaz an triñchin ?

Ur vigodez pounner he yalc'h,
 Selina, dezhi a zalc'h tost,
 A ro soubenn an tri zraig
 D' he zud, kentoc'h eget kig rost.
 Soñjit, mar fell deoc'h, he deus c'hoant
 Da ober, dre wir garantez,
 D' he mevelien ha d' he c'herent

Heuliañ hent strizh ar baourentez.
En iliz, an itron devot
A vez avat brokus-noter,
Atav ganti ul liard, prest
Da lakaat e plad ar c'hester.

102

Tekla, bepred stouet he fenn
O tibunañ he fedennoù,
Evel ur seurez a vale.
Ne sell a-gleiz nag a-zehou.
Padal e ouezo difazi,
Mar tremenit en he c'hichen,
Piv oc'h, pe dog zo ganeoc'h-hu,
Pet bouton zo war ho chupenn,
Hag ivez da belec'h ez it.
Ha mar deo kuzh ho kefridi,
Gwazh a se deoc'h, rak ho kevrin
'Vo diskuliet da bep hini.

Ar gantol betek hanternoz
A zev e ti Mari-Roza.
Sur-mat e tremen hec'h amzer
O lavarout he rozera.
Dre un norig, o tont er-maez,
D' an eur-se, ur wechig pe ziv,
Ez eus bet spiet ur c'hanfard,
Un ofiser eus ar Gwardoù.
Mari-Roza, me tarife,
He deus graet dezhañ katekiz.
Koulskoude, sevel a ranko
Abred-mat da vont d' an ofis.

N' on ket evit kontañ troioù
Holl zevodezed Rekourañs.
Kalz c'hoazh da lavarout a chom,
Rak n' em eus graet nemet komañs.
Lezomp 'ta Jertrud, Madalen,
Glaonida, Liza, Eujeni,
Ha re all a anavezan.
Ret eo klozañ va letani.
Dija m' o gwel o tont, allas !
'Vel chas kounnaret war va zro.
Gwelloc'h din tec'hout, ha buan.
Anez, va ler a zamanto.

103

Lezenn ar pardon a zo strizh.
Neb na bardon 'vo kastizet.
Me ' c'houlenn eta trugarez
Diganeoc'h-hu, devodezed.
Ur wech all e rin meuleudi
D' ho vertuzioù, bras ha bihan.
Ouzhpenn, dav din anzav diouzhtu
N' on ket direbech va-unan.
Daoust da se, n' on ket un den fall.
Digarezit va zamalloù,
Hag ho pezet soñj ac'hanon
Ivez en hoc'h orezonoù.

(dastumet gant ROPARZ HEMON.)

NIKOLAEVA : " An ijinour Baxirev "

Ur romant soviedel eo **An ijinour Baxirev**, embannet en URSS er bloavezhioù pemont, ha skrivet gant un den a zo, hep mar ebet, e-touez difennourion ar gouarnamant hag ar renad. Deraouiñ a ra ar romant da zeiz marv Stalin. Div eus an tudennoù pennañ - Valgan, rener ar greanti, ha Baxirev, anvet da bennijinour - a heuliomp a-dreuz Moskva betek Ti ar C'hweluniadoù m' emañ kelan Stalin. Goude ar pirc'hirinerezh-se ez a an div didenn d' ur rannvro eus URSS, m' emañ ar greanti. Ar greanti-se, ma vez savet stlejerezed, a zalc'h ul lec'h bras er romant. Muioc'h eget buhez ur benndudenn pe ziv, e vez studiet el levr buhez ar greanti, hag ivez buhez ar c'holc'hozioù tro-dro, diskouezet doareoù pennañ ar gevredigezh soviedel e 1953 hag er bloavezhioù goude. Danevellet e vez a-wechoù buhez an dudenn-mañ-tudenn, met evel ur skouer o kemer kerkent he lec'h en un daolenn hollekoc'h, buhez ar gevredigezh en he fezh. Krediñ a rafed, gant seurt deskriavadur, ez eo **An ijinour Baxirev** ur bennoberenn. Nann, pell ac'hann. Plat a-walc'h eo zoken e meur a geñver. Dizampart eo Nikolaeva, a ra gant tunioù gwelus, da zifenn ur brederouriezh eeunik : ar re fall zo kastizet en diwezh, ar re vat gopret. E-touez ar re fall e kaver rener ar greanti. Valgan, a asant da forzh pe dreuzvarc'had, gant ma vo brudet e anv ; un nebeut re all a ouenn gant Valgan ; Tina Karamysh ar vaouez yaouank a zeu da vezañ mestrez Baxirev. Ar re vat zo Baxirev, ar pennijinour gwallgaset gant Valgan (met, dre chañs, ar Strollad a oar...), ar partorg (1) Tchubasov, a zesk tamm-ha-tamm gwelout sklaer, micherourion araokadour, ha gwreg Baxirev daoust d' he sioù. N' eo ket en abeg d' e berzhioù lennegel ez eo talvoudus ar romant, met evel taolenn eus ar gevredigezh soviedel er bloavezhioù pemont, pa oa an dud, ma n' eo ket al levrierion, levezonet c'hoazh gant personelezh ha mojenn Stalin. Emañ URSS c'hoazh o stourm evit dreist-bevañ goude ar gwalldaolioù gouzañvet e-pad ar brezel, emañ - hervez an tudennoù - o klask diazezañ ar sokialouriezh en diabarzh, ha kevezañ gant ar broioù kevalaour a-hend-all.

(1) Sekretour ar Strollad Komunour er greanti.

105

N' eo ket aes an traoù evit ar greanti : hanter zistrujet eo bet ar savadurioù e-pad ar brezel, lod a zo adsavet buan ha fall, hag ez eus labourvaoù rakgantel ha truezus ; an darn vrasañ eus ar binvioù zo da ratreañ pe da gemmañ ; diaes-tre eo kavout ur c'hemendad dereat a vetal evit labourat ; micherourion gozh uzet gant ar vuhez a chom diseblant dirak al labour moc'het hag an disoc'hoù dipitus ar c'hemendad a zistaolad zo spontus. Setu pezh a verz Baxirev ar wech kentañ ma ren emvod ar pennoù-gwazva :

« - Dec'h, a grogas Baxirev, gant e vouezh unton, ez eus bet kenderc'het teir stlejerez nebeutoc'h eget boas gant ar stlejad-strollañ, hag ugent stlejerez diechu. Perak n' en deus ket gallet labourva ar strollañ tizhout ar sifr reizh ?

« Rosslavlev a savas, dilaouen. Evel an holl re all er greanti e ouie ne gemere " an hini nevez " disentez ebet, an emvod gantañ er pezh-mañ hanter c'houllo ne oa evitañ nemet ur furmelad. Ouzhpenn-se e oa bet displijet-krenn gant an derou. Peurliesañ, evel pennlabourva ar strollañ, e rae-eñ e evezhiadennoù d' al labourvaoù all ; " an hini nevez " en doa kroget dre ober evezhiadennoù dezhañ. Ne oa nemet un draig, met ne oa ket boas ouzh an draig-se. Setu perak e lakaas en e vouezh voud godiserezh ha dismegañs.

« - N' hon eus ket tizhet ar sifr reizh peogwir n' eo ket bet tizhet ar sifr reizh gant ar re all. ()

« - Goulenn a rin diganeoc'h respont resis. eme " an hini nevez ". hep ersaviñ ouzh ar goaperezh. Perak teir stlejevez nebeutoc'h eget ar reolenn ? emezañ o komz adarre da Rosslavlev.

« - Ar stlejad-strollañ zo chomet a-sav teir gwech e-pad an noz, en abeg d' an Dieseloù, eme Rosslavlev imoret ha skuizh.

106

« - Perak eo aet da netra kenderc'had an Dieseloù ? a gendalc'has " an hini nevez " gant ur vouezh bepred ken unton.

« Randonus ez out, war ar marc'had, a soñjas Rosslavlev, peurhegaset. O kas pelloc'h e c'hoaperezh e trevezas en un doare speredek ha dik taolioù mouezh Baxirev :

« - Aet eo da netra kenderc'had an Dieseloù peogwir he deus an deuzerez graet e doare da gas d' an distaolad an hanter eus ar bailhoù... ()

« - Penn an deuzerez, eme Baxirev, a zisplego dimp petra zo e kont.

« Shchterbakov a savas, ponner, diwar e gador. En e zaouarn blot e talc'he gant evezh, evel ur vleunienn, ur follenn baper joget, hini an divigadoù.

« - Ar potin c'hoazh ! emezañ en ur huanadiñ. Ne oa ket ken a botin gant krom ha nikel. Aet on va-unan, dec'h da noz, da wazva ar pourvezadur kalvezel. Gwelet 'm eus pezh a dremen eno... Ne zeuont ket a-benn. ()

« Baxirev a gendalc'has :

« - Perak an distaolad-se, e-pad an noz, m' ho poa c'hoazh potin en abardaez ?

« - En noz, ne oan ket er greanti. Ar fornioù-sec'hiñ... Ar pennwezhour...

« Shchterbakov a c'hlabouse gerioù digomprenadus.

« Vassili Vassilievitch a lakaas brall en e vourroù :

« - Ar fornioù, setu tost daou viz e komzan anezho ! Ne reer ket ar ratreadurioù ret ! Me eo en em lak e-barzh evit o ratreañ ! ()

« - Ne ouiec'h ket e oa ar fornioù e stad fall ? A c'houlennas (Baxirev) ouzh ar pennwezhour, tost gant kasoni. Penaos hoc'h eus gallet mont kuit ha lezel an traoù evel-se ?

« - Penaos ? Aet on kuit, eeun eo ! a zisklerias ar pennwezhour. Ret e vefe stankañ an holl douloù gant an daouarn, gant an diskoaz, pa na ra ket ar re all ur siseurt ! Gerioù, gerioù bepred ! " Kae, gra ur striv ! " Graet 'm eus ur striv ur wech, hag ur wech c'hoazh, ha setu, dec'h, on aet kuit. Mont a ran kuit, a'm eus soñjet, n' o deus nemet deviñ, ar c'hreizennoù, gwelet e vo en diwezh er greanti e pe stad emañ va rann. »

107

Heñveldra eo gant ar c'holc'hoz paour a zo en hevelep rannbarzh hag ar greanti. An douaroù hag ar binvioù zo e stad fall ; ar gouerion, leun a spi da gentañ hag entanet gant an doareoù nevez degaset gant ar sokialouriezh, zo deuet bremañ da vezañ digas ouzh aferioù ar c'holc'hoz ; laerezh a reont boued evit o chatal dezho diwar goust ar gumuniezh, laerezh a reont laezh ha koavon. Madoù ar c'holc'hoz n' int ket o re, berzh ar c'holc'hoz n' eo ket o hini ; n' eus ket d' en em chalañ muioc'h evitañ eget evit an Aotrou gwechall. Renerion divarrek ha gwidreüs a weler ken er c'holc'hoz, ken er greanti, chalet da glask klod evito o-unan, hag a zilez o c'hefridi wirion. Ar si karezet an aliesañ er romant zo an tech da erlec'hiañ an nevesadur retañ gant entan al labourerion. Hag an entan-se a vez lakaet da dalvezout n' eo ket evit gwellaat ar c'henderc'hadoù, met evit

dont a-benn eus kenderc'hadoù dreiststandur, ur stlejerez nevez da skouer, a zegaso ur Priz Stalin d' ar greanti. Da heul e vez graet fall al labour standur, e ra diouer an arc'hant hag ar metal ; hag ez a an emzalc'h-se a-enep da gerzh war-raok gwirion ar greanti.

E-kichen an holl elfennoù nac'hel-se ez eus elfennoù yael. Micherourion araokadour a striv da wellaat doareoù-kenderc'hañ ar greanti, pe ar c'holc'hoz - hag a-wechoù ez eo an hevelep tud, dic'hoanaget a-raok, a labour gant entan ha birvidigezh, p'o deus kavet renerion a oar o micher. Rak renerion prederiet gant ar c'hudennoù gwirion ez eus ivez, na zamantont na d' o amzer, na d' o foan, na d' ar gopr o devo. Tina Karamysh, a zo ijinourez er greanti, he deus touet dont a-benn da c'houzout perak eo silibrennet ar bailhoù :

« - N' he devoe ket Tina amzer da vont betek ar preti ma youc'has ur vouezh a-dreñv dezhi, pell :

« - Tina Borissovna ! Tina Borissovna !

« Soñjal a reas : " Gant ma ne vo ket ar bailhoù ! ".

« Gwiriet e voe e raksantadur. Meur a vailh, ruz-teñval, tomm-berv c'hoazh, a oa stlapet war leur al labourva. Silibrennoù a faote ar jontroù er c'hrommennoù ledan, hag er c'hrommennoù reut.

« Seniñ a reas ar pellgomz. Unan bennak a zeuas da gerc'hat Tina. He gwaz e oa a c'halve anezhi. Ur vouezh a lavaras dezhi, pell :

« - Dleout a rez memes tra kemer amzer da gousket !

108

« - Va lez e peoc'h !

« - Petra c'hoarvez ganit ?

« - Tro ar bailhoù eo...

« - Dizale e vo da dro, ma ne gemerez ket ar boan da ziskuizhañ.

« Adkregiñ a reas. Bailhoù, divent, ruz, ispilhet ouzh krochedoù, heñvel ouzh tammoù kig, a zeue en ur ruilhañ a-hed ur varrenn houarn. Redek a reas tremazo.

« - Silibrennoù ez eus c'hoazh, pe n' eus ket ? A youc'has da Sagurov a zeue en tu all.

« - Bez' ez eus...

« Ret e oa adkregiñ gant an enklask. »

An holl dud-se a ziskouez un entan hag ul levenez a zo spi ha dazont ar vro ; perzh emouiziek a gemeront en hec'h adsavidigezh.

Aze koulskoude e c'haller souezhiñ un tammig : adsevel ur vro, evit holl dudenoù ar romant, a hañval bezañ arnevesaat an doareoù-kenderc'hañ, kreskiñ an askoradoù, gwellaat ar c'henderc'hadoù, sevel binvioù a vo trec'h d' ar binvioù savet er broioù kevalaour, hag a vo prenet aesoc'h. Da gement kudenn a zo e kaver un diskoulm kalvezel. Ne reer morse dave d' ar politikerezh. Den ne oar piv zo e penn ar vro abaoe m' eo marv Stalin ; Moskva zo kollet en ul lec'h diresis ha koumoulek ; den ne ra forzh eus kement-se, nemet ar re a c'hoanta ur plas uhel er vaodiernezh.

Mar kreder ar romant, disoc'h yael an Dispac'h zo bet broudañ an dud da

gemer perzh oberiant ha war-eeun e diorreadur armerzhel ar vro, pezh a zo pouezus hep mar. Kemmet eo ivez ar c'heñverioù etre renerion ha micherourion, n' eus ket kalz troc'h ken etrezo : ur micherour a zalc'h penn d' ur rener ma ne vez ket a-du gantañ pe a respont dezhañ dichek, hep bezañ an disterañ en arvar da goll e blas :

« C'hwi 'oar, emezañ gant ur vouezh vrevet, abaoe m' emañ er greanti, c'hwi zo an unnekvet pennijinour... Chom a reas mut ur pennad, hag e troas penn-da-benn war-du Baxirev evit kas dezhañ e-kreiz e fas : gwelout a rin an daouzekvet... »

109

Ur micherour a c'hell ivez dont da vezañ rener, hep na vefe un degouezh dibar ; setu pezh a zo c'hoarvezet gant Baxirev. Met ne hañval ket bezañ kemmet kalz an den e gwirionez, ha daoust d' ar pezh a zigel bepred an tudennoù, n' eo ket gwall zispac'hel ar " gevredigezh nevez " diazezet da heul an Dispac'h. Kreñvaet eo ar santadur-se gant meizadur an tiegezh : Baxirev, dimezet ha tri bugel dezhañ, zo e karantez gant ur vaouez yaouank, Tina Karamysh. Dic'houzañvadus eo dezhañ bevañ gant e wreg, ha kement da dTina bevañ gant he gwaz ; krouüs e vefe ar vuhez a renfent a-gevret. Met ne vern, ne zibriedo ket Baxirev, ne " c'hell " ket. Tina avat a vo dilezet gant he gwaz : n' eo ket dellezek ken eus e garantez. E-kichen an dimezioù hag an tiegezhioù mougus, ez eus an dimeziñ hag an tiegezh skouer, hini ar partorg ; aet eo Baxirev da frealziñ ar partorg derc'hent an emgann meur etre ar " re vat " hag ar " re fall ". Kejañ a ra evit ar wech kentañ gant gwreg ar partorg.

« Baxirev a soñjas n' o dije moarvat, na Katerina nag eñ, roet pouez d' an tabut-se etre bugale a-zivout karr o zad. Ar vaouezig-se avat, n' he doa ket hepken merzet an dra, hogen roet da se ur ster ken don ma kemere bremañ bemdez ar c'harr-boutin gant he mab. An evezh a ziskoueze ar vamm-se ouzh bed diabarzh he bugel. He spered a emaberzh, a skoas anezhañ.

« Gant doujañs e sellas outi. Echu ganti braswriat, e renkas he labour gant un nebeut jestroù resis ha mistr, hag e krogas da zresañ an daol. Biskoazh n' en doa bet Baxirev c'hoant skoazellañ Katerina e labourioù an ti. Pe lusk trumm en broudas d' en em ginnig ? N' en dije ket gallet lavarout. Met nac'het e voe e skoazell, hag e chomas da bavata, amparfal, e-kichen ar gourvezvank.

« Stlaket e voe an nor-dal, ha Tchubasov, mousc'hoarzhus-holl, a daolas ur sell er sal.

« - A ! Dimitri ! aze emañ endeo ? Ha neuze, Liouba vras, perak ne 'c'h eus kinniget netra dezhañ ?

« - Gortoz a raemp da zistro !

« - A-benn ur vunutenn e'm bo echu. Chourik, ar servietenn ! Tania, va fijama !

« Distreiñ a reas, roz ha fresk, e vlev gleb o kouezhañ war e abrantoù, en-dro dezhañ ur pijama liv ar granat. E jestroù oa ledan, hag e vouezh vlim, distennet.

« - Setu me. Ro dimp da zebriñ, Liouba vras, emezañ d' e wreg.

110

« - Ha neuze, penaos emañ an traoù ? a c'houlennas Baxirev, dibasiant.

« Hep kemmañ netra nag en e vouezh nag en e zremm e respontas Tchubasov :

« - Roet eo bet din da c'houzout e vefe sellet va c'homzadenn evel komzadenn enepstrollad.

« Tostaat a reas d' ar bidoc'hig, e gemer a reas en e zivvrec'h hag e

sevel a-us d' e benn ; " Na brav omp hiziv ! " Flourañ a reas Chourik en ur dremen, hag e kluchas e-kichen ar fornigell evit kregiñ da fichellañ an tan.

« Baxirev, en em briente d' e skoazellañ ha d' e frealziñ, ne gomprens netra en e emzalc'h. Ar partorg ne wele ket an dañjer en gortoze e Plenum an antronoz ? " Komzadenn enepstrollad... " an afer a c'halle echuiñ gant un diskarzh brav ha kempenn !

« Divizout a reas gortoz e komzfe Tchubasov outañ e kuzulig. Met hennezh ne hañvale ket bezañ mall warnañ. Baleata a rae er sal, gant neuz laouen an ozhac'h eürus da adkavout e oaled goude un hir a veaj.

« Dreset e voe an daol gant ar vugale, aozet an asiedoù, lakaet e-kreiz an daol ul lestr glas ennañ bleunioù gwenn. An aergelch laouen ha digomprenadus-se a hañvale iskis ivez da vBaxirev. Hag un deiz-ha-bloaz e vije ? Ha degouezhet fall e vije ?

« Evit lavarout un dra bennak e reas d' ar vamm gourc'hemennoù diwar-benn Tania :

« - Kinnig a ra bezañ koant e gwirionez !

«Ruziañ a reas ar plac'hig betek penn he divskouarn, hag ar vamm a respontas gant un tammig dismegañs :

« - Eus petra 'ta e fell deoc'h komz ? Eus hec'hilwen ?

« Skeud an nec'h a voe gwelet en he daoulagad speredek, hag e kendalc'has, teodekoc'h a-greiz-holl :

« - Ur gilwen, dres evel hini gwreg Virin. Mar c'hoarvez d'ur plac'h yaouank divalav bezañ gwalleürus en he buhez, diaes eo henn rebech dezhi. Met pa na zeu a-benn ur bompinell evel Virina da blijout nemet d' ur Virin, se a dalvez n' eo nemet ur veulkeez, ar washañ beulkeez !... Larissa Reissner, sed aze ur vaouez. Dedit e veze barzhonegoù dezhi. Leurioù ha pezhioù-c'hoari zo bet skrivet diwar he fenn. Pe Andreeva. Ur gomunourez. Ken speredek ha ma oa brav. Doujañs bras en doa Lenin outi. Maxim Gorki en deus graet anezhi mignonez e vuhez. Setu maouezed dellezek eus an anv ! Met ur gilwen ! Sed aze un dra, e gwirionez !...

111

« - Ya, a ouzhpennas Tchubasov o komz da vBaxirev, met evit e verc'h e gwirionez, ma ne glot ket an traoù kenetrezo, e tegouezher gant ar pezh a c'hoarvez e labourva ar c'hefluskerioù. An emgefreakaat, war a hañval, hag a-dreñv, an taolioù horzh !

« An daou ersav-se ouzh e c'hourc'hemennoù a lakaas Baxirev da gompren e oa chalet ar gerent gant kened o merc'h.

« An ostizez a leunias adarre ar fornigell, a lakaas lienoù naet d'ar babig, hag a lavaras a vouezh uhel d' ar vugale :

« - It da walc'hiñ ho taouarn, d' en em gribañ, hag ouzh taol !

« Pasticheioù bihan a tivogediñ a oa berniet war ur plad bras.

« - Poan a 'c'h eus kemeret c'hoazh ! a lavaras Tchubasov evel o tamall.

« E zizarbenn a reas jentil :

« - Tav 'ta, ha debr ! Te 'blij dit kement an traoù-se... Azezit !

« Pa c'hortoze kavout e ti Tchubasov enkrez ha stenn, en em gave bremañ Baxirev, paket daoust dezhañ gant talm an ti-mañ, azezet sioul e kelc'hiad un

tiegezh. Ur wech an amzer e strake an etivi er fornigell, hag an trouz-se, disoñjet abaoe pell, a lakae da zifourkañ eus an tremened nozvezhioù goañv e yaouankiz, ma hañvale pep tra gallus, tost d' e zorn.

« Ar babig a richane. Pell a zirenkañ an dud, ar vagadell sioul-se ha farsus a greske nesaegezh an ti. Ur flammenn greñvoc'h eget ar re all er fornigell, un estlamm heverk e fraoñv ingal an divizadenn, stok ul loa ouzh ur werenn, an holl zarvoudoù-se he lakae da vezañ evezhiekoc'h. Ma ne c'hoarveze netra heverk, e c'hoarie ar vagadell gant he daouarn, o stardañ anezho, o digeriñ he bizied, o treiñ he falvoù a bep tu, o plegañ ha displegañ gant nerzh he divvrec'h vihan, hep paouez a vousec'hoarzhin hag a c'heizañ.

« Chourik ha Tania a gonte d'o zad penaos o doa graet evit sevel o milin avel, hag e tanevellent sioul o istor. Er c'helc'hiad gouloù o tont eus tog ar gleuzeur e hañvale ar bleunioù gwenn lidañ ur gouel.

112

« Ne c'hellas ket Baxirev mirout outañ a ober ur goulenn a oa war veg e deod abaoe ur pennad :

« - Met petra 'zo en ho ti hiziv ? Lidañ a rit un deiz-ha bloaz ?

« Gwreg Tchubasov a savas daoulagad souezhet :

« - Tamm ebet. Mare nemetañ an devezh eo m' emamp holl a-gevret.

« Se oa neuze un doare-bevañ. Doare-bevañ an tiegezh-se.

« Sonet e voe. Rosslavlev a zeuas tre hag a huchas gant e vouezh kurun :

« - Aze emaac'h holl ? Bazirev zo aze ivez ?

« Hag o treiñ war-du an ostizez e strivas da ouzhpennañ gant un tammig teneridigezh :

« - Noz vat, Gioconda ! Adkemer a reas e vouezh vout evit saludiñ Tchubasov hag ar vugale, flourañ a reas penn Chourik, tostaat a reas d'ar gourvezvank hag astenn da Liouba vihan unan eus e vizied tev, kalet ha melenet. Ar plac'hig a grogas ennañ en ur glask sevel.

« Rosslavlev en em rene evel en e gêr, boas oa ouzh an ti, gwelet e veze. Baxirev en em sante mat eñ ivez er sal-mañ. Deuet gant ar soñj da zegas skoazell ha frealz en em gave eñ a-greiz-holl skoazellet ha frealzet. Santout a rae an hevoud spered-se na santer nemet en ur c'helc'hiad tud anavezet mat ha tost-tre ; staliet mat en e gador-vrec'h, e chupenn dilaset, e krignatae e gorn-butun.

« Lakaet e voe un asiad evit Rosslavlev, met hennezh a gendalc'he da c'hoari gant Liouba vihan.

« - Hopala ! Hopala ! Hep paouez, e c'houlennas : " Eus petra e oac'h o komz ? "

« - Ne 'm eus ket soñj resis, a respontas gwreg Tchubasov. Eus ar vugale, a gav din.

« - Ar vugale; ar vugale ! Rosslavlev a vouseklennas. Ret e vo ober un dra bennak : Victor Tchernousov a laer klogorennoù tredan en diri. Hag e-keit-se emañ e dad o paeañ chupennoù feur dañvad alaouret d'e hini nevez... Tost e voe da sakreal, met paouez a reas trumm goude bezañ taolet e selloù war an ostizez.

« Ne oa anv er greanti, gant an holl dud feuket hag heuet, nemet eus afer Tchernousov en doa dilezet e diegezh.

« - Hi zo deuet da gomz ganin en devezhioù-mañ, eme wreg Tchubasov. Ne gomprenan ket... Laouen eo. " Bevañ a reomp mat ", emezi. Penaos e c'hellont " bevañ mat " ?

113

« Rosslavlev e zeuas da vezañ ruz ; e abrantoù a hañvalas sklaeroc'h.

« - Bevañ a reont mat ! Evel just, pep tra a c'hell c'hoarvezout. En ur gêriadennig o deus tud klañv o spered lazhet o hini kozh ha douaret anezhañ en o c'hav. " Bevañ mat " a raent, int ivez. Pep tra a c'hell c'hoarvezout !... Met n' omp ket eus ar ouenn dud-se a c'hell bevañ gant ur c'helan en o c hav. An dud-se, o lazhañ a rin, a glozas feuls en ur dostaat d' an daol.

« E-pad ur vunutenn en em santas Baxirev distaolet eus ar c'helc'hiad tud-se, eürus, onest, pell a bep gaou.

« Ur barrad imor a savas ennañ goude. Mar goufent... Muioc'h a chañs egetañ o doa bet. N' en doa ket bet, eñ, un tiegezh evel hemañ ha koulskoude en doa renet e-pad pemzek vloaz ur vuhez direbech.

« Sioulaet gant ar varnadenn grennus edo o paouez ezteurel, ec'h azezas Rosslavlev ouzh taol, o sachañ gantañ an asiedad pasteziou bihan hag e paras e selloù glas war Tchubasov.

« - Ha neuze, marc'hadour kadarn Kalashkinov, petra a c'hortozez evit komz ?

« Mut e chomas Tchubasov.

« Mantret e voe Baxirev gant beiadur Rosslavlev, met, evit e vrasañ souezh, mousc'hoarzhiañ a reas gwreg ar partorg hag e tribunas gwerzenn gentañ ar varzhoneg :

" Warc'hoazh eo e vo an emgann meur... "

« Baxirev na gomprene mui netra, a c'houlennas outi :

« - N' oc'h ket chalet evit ho kwaz ?

« - Chalet omp bet pa ne gomprenemp ket. Karout a raemp Valgan. Soñjal a raemp e oa Blikin ur gwir rener, hag e oa Valgan diziouerus d' ar greanti. Bremañ eo sklaer pep tra. Forzh penaos, re ziwezhat eo evit en em chalañ. Nikolas a gomz warc'hoazh.

« Hag e kendalc'has en ur farsal :

" Hag e talin ouzh ar c'hlezeiad
En em gannañ a rin d' ar marv, betek va huanadenn diwezhañ "

« Aloubet e oa kalon Baxirev gant ar gadarnded hag hag an disaouzan a blije dezhañ kement hag a oa ken tost d'e natur. En e vleud edo.

114

« - Ha mard eo roustet ar marc'hadour kadarn Kalashkinov ? emezañ evit isañ Tchubasov. Pelec'h ez aio ?

« - Deuet out da vezañ ijinour pare er greanti, eme ar partorg en ur vousec'hoarzhin. Me ivez a gavo un dra bennak...

« - Me, va faotr, a 'm eus kavet un den start evit va difenn ha va skoazellañ. Ar partorg Tchubasov, mab un teuzer dir. Klevet 'c'h eus anv, marteze ?

« Tchubasov a reas un hej d' e zivskoaz, hag a gasas e vlev en a-dreñv.

« - Te ' gred e gwirionez ne vin ket skoazellet ? Difennet e vin n' eo ket hepken gant hiniennoù, met gant lignezoù ! Lignez ar Rosslavleved, lignez an Ivankoved, hanter-lignez ar Sogrubined, an tad-kozh hag ar mab-bihan o talvezout evit dek...

« Rosslavlev, laouen gant ar respont, a zirollas da c'hoarzhin ken kreñv ma troas Liouba vihan ha ma klaskas sevel.

« - Ret e vo lakaat dir un taveler, eme Tchubasov evel o tamall. Pe da sparlañ en ur sal dizassonaet !

« Baxirev, a gemere muioc'h-mui a blijadur o welout levenez yac'h hag eeun e vignoned ne voe ket evit derc'hel d' ar c'hoant broudañ c'hoazh Tchubasov.

« - Ha sur out ez emellint en afer-se, da lignezoù ? Forzh penaos, er Plenom, ne vo nag ar Rosslavleved, nag an ivankoved, nag ar Sogrubined...

« - Re all a vo, a dalvezo ar re-se ! Ha zoken, warc'hoazh, er Plenom, mar... Prest on da forzh petra, a lavaras gant ur vouezh stennet o taskrenañ.

« Kerkent e voe merzet ar c'hemm gant e wreg a ginnigas buan d' he gwaz ar pladad kig rostet.

« - Kemer nerzh 'ta, a-raok an emgann ! Ne ouzer morse, gallout a rafes kaout aon er Plenom, ha koll ar c'hoant debriñ !

« Ar farsadenn a dizhas he fal, an tennder a steuzias.

« Tchubasov a yeas er c'hoari :

« - Warc'hoazh e 'm bo kement a naon hag ur roñfl. N' eo ket ur c'hrogadig a 'm lakay da goll ar c'hoant debriñ ! Evit pezh a sell ouzh disoc'h an emgann, n' eo ket arvarus an disterañ evidon. N' emeon ket va-unan er stourmse !

115

« Eus un eilgeriadenn d' eben e tizoloe gwelloc'h Baxirev buhez diabarzh an tiegezh-se, ha kevrin e sioulder drant. Pep hini amañ a gomprens e oa dañjerus ar stourm, met a oa sur ivez war un dro e oa reizh, ha sur da heul eus an trec'h en diwezh. Tchubasov a anzave e c'halle bezañ trec'het bremañ, hag un tammig nervernek e oa, met aergelc'h kennerzhus an oaled-mañ en sioulae.

« Setu perak e oa chomet mut en ur zistreiñ eus ar C'huzul Rannvroel. En ur vale er sal-mañ e veze intret hep gouzout dezhañ gant an aergelc'h bividik a dalvezfe dezhañ kement antronoz. E wreg a gomprens anezhañ. Ma n' he dije soñjet nemet enni he dije graet diouzhtu outañ ur bern goulennoù... Hogen, en abardaez-mañ, an noz-mañ, e ranke Tchubasov chom dreist-holl difrom ha kempouez.

« Liouba, spiswel evel ur wir maouez, a roe brokus d' he gwaz ar sioulder-se ken prizius evitañ. Mar bije bet lavaret da vBaxirev en noz-mañ ne oa ket koant gwreg Tchubasov, en dije enebet, feuket. He divskoaz strizh hag he dremm evel sklerijennet eus an diabarzh en hoale, ken benek ha teneraüs e oant. Ne oa ket ur stourmerez atebek er Strollad, nag ur renerez er greanti ; skolaerez e oa, o teskiñ an elfennoù kentañ da vugale ar c'hlas izelañ. Met evel he fried e oa glan ha digor he spered, diheskus he berzh-kalon.

« Ar vaouez vresk-se, o ren war an daoliad, a skuilhe peoc'h ha levenez en-dro dezhi. He dremm disliv, fiñvus, a eztaole tro-ha-tro degadoù trivliadoù, evel en ur frankizenn skeud skourroù ar gwez a vevenn anezhi. Abaoe ma oa Baxirev aze he doa graet ur bern traoù, ha bremañ c'hoazh, ouzh taol, e lakae hec'h evezh, didrouz met hep mank, da leuniañ asied an eil, da reiñ an holen d'egile. Skiant ar c'henurzhiañ, al levenez a zegase e kement tra a rae, a dreuzfurme he mall e kempouez, he skuizhnez kuzh e benegezh don.

« D'ar mare-se hepken e komprenas Baxirev ar partorg Tchubasov. Henezh a-hend-all, kemeret hep e wreg, ne oa ket aes da gompren. En he c'hichen avat e teue pep tra da vezañ sklaer : e neuz vezhek a zanvez-pried, e vadelezh. Ur paotr ken eürus e oa en e vuhez trivliadel ma oa diaezet, lent, m' en em sante un tammig evel kablus eus an eürusted klok-se, ha ma klaske en em zigareziñ. E zremm hag e vousec'hoarzh a lavare bremañ da vBaxirev : « Sur a-walc'h e 'c'h eus kudennoù ez puhez prevez. Ket me ! En em santout a ran mat ! Va digarez, met en em santout a ran mat-tre e gwirionez ! »

116

O kemer harp war ar skouer-se e tiogel Nikolaeva ez eo an tiegezh al lec'h bleuniañ ha krouiñ nemetañ, an ensavadur diazez a ranker derc'hel en e sav, zoken mar distruj an dud. Lec'h ar plac'h er gevredigezh zo stag ouzh ar meizadur-se ha splann eo er pajennoù troet uheloc'h. Ar vaouez skouer n' eo ket Tina, he deus sammet atebegezh er greanti, na re all a labour er Strollad Komunour. Ar vaouez skouer eo Liouba, gwreg ar partorg, n' eo netra drezi hec'h-unan, na c'haller kompren nemet evel elfenn glokaüs d' he gwaz ha d' he bugale n' he deus roll ebet er-maez eus ar roll-se a elfenn glokaüs : nac'het eo evel den en diwezh. Pell emamp amañ eus ar bloavezhioù kentañ goude an Dispac'h, ma voe klasket doareoù-bevañ nevez, ha kaset da get an doareoù kozh, an tiegezh pergen. Seurt gweladur a empleg un divezouriezh n' eo ket dispac'hel : hec'h anavezout a reomp mat, e Kornog-europa. Da heul, ar gevredigezh diazezet war an divezouriezh-se ne c'hell ket bezañ dispac'hel kennebeut. En diwezh e hañval ar sokialouriezh bezañ bevnet d' al labour, ha ket penn-da-benn c'hoazh : ne vez dalc'het en un doare strizh d' ar bennaenn « da bephini hervez e labour » ; kolc'hoziz 'zo n' int ket bet paeet abaoe ouzhpenn ur bloaz ; gwragez ar renerion ne labouront ket bepred, hogen ur vatezh o deus, hag o freder brasañ zo dispign arc'hant o gwaz. Ha kement-se a hañval " naturel " a-walc'h.

Nikolaeva a ziskouez en diwezh tud o stourm en ur mare ma oa diaes ar vuhez en URSS. Ar bed soviedel n' eo ket ur baradoz a 'n douar, henn anzav a ra. Met eus kreiz an holl ziaesterioù, armerzhel pe drivliadel, e tiogel e ranker kaout fiziañs en uhelvennad a labour, a emroüsted, a c'hlanded, a zoug an den komunour. Taolenniñ a ra ur vro warlerc'hiet c'hoazh, o klask he lec'h en armerzh ar bed, ur vro a gemer « diorreadur armerzhel » ha « dispac'h » evit gerioù heñvel-ster, ha n' eo ket gwall chalet da heul da gavout ur furm gevredigezhel nevez.

SKANDINAVIA

Un taol-arnod sokialour deut da vat ?

Evit reoù 'zo en hor bro, Sveden a vez sellet outi evel ouzh un arouez eus diskar ar reolioù-buhez dereat, ar vuhezegezh vat hag ouzhpenn ur skouer a zigiriegezh. Evit reoù all niverusoc'h ez eo er c'hontrol un doare paradoz war an douar, an dud enni pinvidik, brav hag evurus, ar soñj diwezhañ-mañ o vezañ hini lennerien re hegreidik o c'helaouennoù. Bezet a vezo, reoù all eveldon, goude bezañ lennet kalzig ivez o deus bet c'hoant da sellout pishoc'h ouzh an traoù, war an dachenn. Ha sammet ganin va sac'h war va c'hein em eus en em lakaet en api war vord an hent bras ha degouezhioù ar " stop " o deus bleniet ac'hanon a-benn ar fin betek Stockholm.

Stummet ar vro treuzet ne lez douetañs ebet war he finvidigezh. Hentoù ledan en em astenn etre maezioù war-naou-zinaou enno mereurioù koant e koad livet, ar c'hirri-dre-dan a zo bras o ment ha nevez peurliesañ, lod bras anezho a verk VOLVO. Stockholm a sko diouzhtu dre he meurded, ha straedoù graet evit ar vuhez a-vremañ, he gourliorzhoù, he ziez pinvidik, an diouer a vannlev louet ha paour evel hini Bariz pe Londrez da skouer.

(*) Kret eo hepken evel just saver ar pennad-mañ eus ar menozioù displeget ennañ. Alan Thibault, 21 bloaz, a zo skoliad-ijinour e klas diwezhañ Skol Kimiezh Rouen ; " adkavet " en deus Breizh nevez 'zo ha graet anaoudegezh gant broioù Skandinavia, e-lec'h m' en deus beajet e 1969 ha 1970.

118

Evit pezh a sell ouzh an ensavadurioù, goude divizoù (1) gant ar vlenierien galonek a zo bet mat a-walc'h da sammañ ac'hanon evit un toullad kilometroù, e kreñva ennon an engwask kentañ.

Ensavadurioù skouerius

Gounit a ra Svediz kalz a arc'hant. Pae ur micherour a zo war-dro 2.500 lur. Dindan 2.000 lur ar miz eo izel ar gopr. (Kaoz a zo bet zoken a lemell an tailhoù evit ar goproù izel-se.)

Ar goproù uhel er c'hontrol a zo tost eus reoù broioù all Europa. Pezh a ra n' en deus ster ebet « stourm ar renkadoù » er vro-mañ. Ne c'heller ket avat sellout ouzh talvoudegezh rik ar goproù uhel-se. Koust ar vuhez a zo hini uhelañ hag an tailhoù eeun re bounnerañ Europa, ar re-mañ o tizhout 30 betek 40 dre eus ar gounid. N' eo ket Svediz dre vras a-enep an tailhoù-se (2), rak talvezout a reont da asur gounidoù kevredadel a-bouez (skolioù digoust-krenn, prestoù d' ar priedoù nevez, prestoù evit an annezioù, roadoù dereat d'ar re gozh) ha da grouiñ paramantadurioù a-vremañ (hentoù, karterioù arnevez er c'hêrioù (3), lennoù-neuiñ digoust, sportvaoù, h.a.).

Ouzhpenn, Svediz n' int ket re chalet gant prizioù uhel ar bevañs (4), rak o dispign evit an ezhommoù-se a zo kalz disteroc'h eget hini ar C'hallaoued da skouer. Fellout a ra dezho a-hend-all kaout marc'hadourezhioù a-zoare hag o stalioù a zo eus ar re zedennusañ (5).

Efedoù daelus

Paradoz an Ensavadurioù, Sveden ne seblant ket evelato bezañ ur skouer disi. Ar stumm-renadur a beurfrankiz a veuler a ra ivez leizh-implij eus e bolis. Trement 'm eus div eurvezh en ur gourliorz e Göteborg ha gwelet 'm eus poliserien o lakaat o c'hraban war un den mat tommet un tamm d' e fri hepken,

hag o c'houlenn paperioù un dekad a dud yaouank bodet eno ha ne oa ket blev hir ganto koulskoude. Ar polis a zo dre-holl e karterioù kêr, en holl lec'hioù boutin, war droad, war varc'h, pe gant kirri. Harzet eo bet ouzhomp komz a vouezh uhel goude 22 eur dindan hon teltenn e-kreiz ur c'hamp hañverien. A-hend-all ez eo difennet an alkool, hag an efedoù a zo heñvel ouzh ar re a oa merzet er Stadoù-Unanet e-pad ar berz (strilherezhioù kuzh, marc'had du an alkool ha lonkadurioù diroll pa dremen Broiz an harzoù, dreist-holl reoù an Danmark tost).

119

Hogen pezh a seblant grevusoc'h eget ar fedoù munut-se eo e seblant Svediz e-tal o boutinelerezh evel ur bugel dirak ur c'hoariell re vray ha na gav doare ebet da gaout dudi enni. E amezeg danat a sell outañ evel ouzh un den tavedek, yen ha na seblant eürus tamm ebet. Heñvel eo ouzh tudoù leun a enkrez filmoù ar fiñvskeudenner Ingmar Bergman, hini gwellañ Sveden hag unan eus ar re bouezusañ er bed, anezhañ an hollwashaerañ fiñvskeudenner a-c'houde ar brezel diwezhañ (6). Da greñvaat ar skeudenn-se, menegomp ez eo lodenn dre gant an emlazhoù e Sveden an hini uhelañ er bed gant hini ar Stadoù-Unanet.

Ar skouer danat

Ra ne vinsc'hoarzh ket re vuan an duañ hollwashaerien, rak ma ne seblant bezañ stumm-renadur Sveden nemet un hanter-drec'h, ar voutinelerezh "sklerijennet " he deus perzhioù mat ha ma n' eo ket Svediz peureürus, ez eo marteze en abeg d' o diaes a natur-den. Ha memestra, hervez ur sondadur graet nevez 'zo, en em ziskouez Svediz ar re o deus en Europa an nebeutañ a c'hoant da zilezel o bro, pezh a verk n' eo ket o c'hudenn hini o ensavadurioù.

An arguzenn wellañ a-du gant ur seurt stumm-renadur a zo an hini roet gant Bro-Danmark. Pa guitaer Sveden un tamm kerseet ha pa vever un nebeut devezhioù-pad e Keubenhaven e tizoloer gant estlamm ar blijadur-vevañ danat.

Bro-Danmark, bro vihan tamm-tamm didamm ur souezh, a zo ar stad skandinav nemeti o kaout harzoù gant Europa ar C'hornog hag ur werinelezh a stumm svedat. Al live-buhez, unan eus ar re gentañ en Europa, n' eo ket kalz izeloc'h eget hini Sveden. Amañ ivez paourentez ha " stourm ar renkadoù " a zo kudennoù peuzdianav. Hogen pezh a zo heverk ez eo gwelout pegen laouen eo an dud.

Degemerus ha disheñvel-krenn eus o amezeien svedat, e vurutellont taer a-walc'h ar re-mañ. Al laouenidigezh-se avat ne zisamm ket anezho eus ar c'hudennoù ganet dre al lec'h a-raok o deus kemeret en ur zieubiñ ar vuhezgezh hag en ur lakaat en abeg frammadurioù hengounel (hini kell ar familh da gentañ).

120

Hogen ne fell ket din herzel ouzh ar blijadur am eus bet o tizoleiñ ur vro e-lec'h ma teuer tost evelato ouzh ur seurt klokter. Pouezusoc'h eo avat d' am soñj gwelout war be ziazez he deus Bro-Danmark savet he finvidigezh ha setu perak em eus savet, goude bezañ lennet levr Morvan Lebesque " Comment peut-on être breton ? " un daolenn evit anataat chañsoù heñvel d' an derou etre Breizh ha Bro-Danmark.

DANMARK	BREIZH
43.000 km ² 4,6 milion a annezidi	35.000 km ² 3 milion a annezidi
Pinvidigezhioù	
I. - Gounidigezh-douar Sevel-chatal modern ha poellek, evit kaout laezh dreist-holl. Gounidigezhioù all, o c'houzañv eus un temz-amzer rust.	I. - Gounidigezh-douar Sevel-chatal. Edoù. Legumajoù prim.
II. - Pinvidigezhioù morel	II. - Pinvidigezhioù morel

1) Pesketaerezh, 2) Merdeadurezh kenwerzh 3) Saverezh listri.	1) Pesketaerezh, 2) Saverezh listri, 3) Merdeadurezh " broadel"
III. - Ijinerezh Strilhouriezhel ha bouedel.	III. - Ergerzh.
IV. - Diouer a binvidigezhioù-mengleuz.	IV. - Diouer a binvidigezhioù-mengleuz.
Degouezhadennoù	
Unan eus uhelañ liveoù-buhez en Europa. Ur voutinelerezh " sklerijennet "	Ur rannvro is-diorrenet. Un divroerezh kreñv. Ur frammadur trevadennel o terc'hel war ur vro damvouget.

121

Evurusat ha furat Daniz o deus gouezet gant pinvidigezhioù a eil renk, a-hervez, krouiñ ur stabilded arboellouriezhel, politikel ha kevredadel, tra ma vez laret abaoe pell d' ar Vretoned ez eo o rannvro is-diorrenet ur samm evit Bro-C'hall hag e vije gwelloc'h ober anezhi ur gourliorz broadel.

Da c'houzout ma vije mat kaout e Bro-C'hall ur seurt boutinelerezh, ez eo dereatoc'h avat distreiñ davet ar skouer svedat. Er vro-mañ ez eo diorrenet an ijinerezh, dreist-holl e-keñver metallouriezh ha saverezh kirri-dre-dan. Ouzhpenn, evel e Bro-C'hall, troet eo Sveden ivez war ar gounidigezh-douar. Siwazh, mar deo deut a-benn Sveden da gas da benn he reverzhi e 1931, c'hwitet he deus Bro-C'hall war he hini e 1936 hag e seblant tanavoc'h c'hoazh bremañ he chansoù a verzh-mat er feur-se.

NOTENNOU

(1) Darn vrasañ Svediz a gomz saozneg, peurliesañ en un doare aes : o anaoudegezh eus ar yezhoù skandivanek all hag eus an alamaneg a zo gouest da lakaat gwarizi e kalon meur a hini.

(2) Pounnerded an tailhoù a harz evelato en un doare ouzh diorroadur ar vro, ar renerien ne glaskont ket kaout kargoù uheloc'h, rak gant kreskadenn ar pae e teu hini an tailhoù.

(3) Unan eus al labourioù sebezusañ kaset da benn gant Svediz e-pad an 20 bloavezh diwezhañ a zo adaozadur kreiz o holl gêrioù evit respont d' an ezhommoù modern hag en em zifenn ouzh krouidigezh marc'hadoù ramzel savet tro-dro. Ar c'harterioù-kreiz nevez a ro plas d' ar c'henwerzh, d' ar mererezh, d' ar sevenadur, d' an dudi koulz ha d' an annez. Hogen Svediz, evit 90 dre gant, a vev er c'hêrioù, tra ma oant 14 dre gant e derou ar c'hantved ; Sveden a zo bet lakaet, a-raok broioù all, dirak kudenn dreist-diorradur ar c'hêrioù.

(4) Da skouer e koust ar bara 6 lur ar c'hilo hag al laezh 1,50 lur al litrad.

(5) Kudenn kemmadur ar c'henwerzh a zo bet pledet a-zevri gantañ er vro-mañ. Tu a zo bet roet d' ar genwerzhourien da zeskiñ traoù nevez o sellout ouzh o micher dre gentelioù, diskouezadegoù, beajoù... Kenskoazellañ ha kevredañ a ra ar genwerzhourien vuhezekañ da sevel ivez o " gorreadoù bras ". An hini n' eo ket gouest da gemmañ stumm e stal bep 5 bloaz d' an nebutañ a zo tonket da vont da get.

(6) Pa gomzer eus brezel, ez eo ret menegiñ e vev er peoc'h Svediz abaoe ur c'hantved hanter.

Evezhiadennoù a-hed hag a-dreuz

Roazhon, 28 a viz Kerzu 1970.

I

Tremenet eo gouel Nedeleg a laka ar vugale da huñvreal e-pad mizvezhioù ; erruet eo ar c'hoarielloù a c'hortozent abaoe ur beurbadelezh, sevenet ha lamet war un dro ar c'hoantaennoù a rae dezho kavout ken hir an amzer. Ne vern a-hend-all : a-boan echu un huñvre ez adkrog unan all a bado betek ar bloaz a zeu ha moarvat ez eo mat an traoù evel-se.

An dud en oad a vag ivez o huñvreoù hag a c'hed hiziv emichañs e tiskennfe an neñv war an douar nemet int gwazed, na petra, ha gouest d' ober o unan ar burzhudoù a vez profet d'ar vugale. Ken na zeuy ar baradoz a faltaziont e rankont avat kiañ ha gouzañv ha meur a stourmer a c'hell krediñ ne zegouezho biken dibenn e reuz ha disamm e vec'h ; meur a stourmer en Euskadi en deus tremenet gouel Nedeleg en anken, enkrezet marv gant ur varnedigezh ha ne grede ket o gwaskerion embann. Moarvat int bet kalonekaet o c'houzout o doa kavet difennerion e-leizh en holl vroioù Europa ar C'hornog hogen daoust hag ar re-mañ a oa a-du ganto penn-da-benn a-hed ar wech ? Sur a-walc'h, paotred E.B.V. o deus ar re gentañ adal ar seizh a viz Du, dalc'het ur vodadeg foran e Roazhon evit tamall an heskinerezh er vro-se, e-lec'h e teuas un tri c'hant bennak a dud hag int, da vihanañ, a lode feiz ar stourmerion euskarat hogen an holl harperion a gavas Euskariz a-c'houdevezh a oa kalz mui chalet gant diskar Franco eget gant tonkadur pobl Euskadi, a gav din ; sikour Euskariz, evito, a oa dreist-holl un tu da vrudañ o folitikerezh-int ha na bled ket nemeur, ret eo anzav, gant frankiz ar broadoù vihan.

123

Prosez ar Yuzevion e Moskov o devoa klasket a-hervez, skrapañ ur c'harr-nij n' en eus ket dedennet kement an evezh. Daoust hag en abeg maz eo Rusia ur vroad sokialour, sañset, an hini eo ? Pe daoust ha speredoù an dud a oa dalc'het endeo gant prosez Burgos ken na c'hellent ket war un dro merzout ar pezh a c'hoarveze a-hont e Moskov ? N' ouzon dare. Bremañ hepken, goude m' eo bet barnet daou eus an damallidi d' ar marv du-hont ez eo krog ar c'hedveno europat da zihuniñ. Ar P.C.F. e-unan en deus ranket diveuliñ ar varnedigezh dindan levezon ar c'hedveno-se, daoust ma n' en deus graet evel boaz nemet diwar veg an teod ; hag e-lec'h all ez eus bet aozet un nebeut displegadegoù ha n' int ket da geñveriañ evelato ouzh ar re a oa bet aozet evit Euskariz a-ziagent.

Diaes eo gouzout ha kont a zalc'ho Soviediz eus ar menoz foran etrevroadel. Hogen, ne vern petra a c'hoarvezo, un dra a zo sur : daoust d' ar pezh a embannont ne c'hell mui ar Stadoù hiziv ober kement a garont diouzh o zid, ha kement-se moarvat a zo mat. Ne gredan ket ez omp erruet e prantad dizeriadur ar Stad, nag a bell, hogen kavout a ra din ez arvestomp er mare-mañ ouzh un argerzh kensturiek a laka ar Stad da greskiñ he galloud en un doare divent ha da goll war un dro an aotrouniezh speredel he deus en em vataet diouti en Europa hag er bed dreist-holl abaoe derou an amzervezh vodern. Eus kollidigezh an aotrouniezh speredel gant ar Stad en hon deizioù e c'hellfed reiñ skouerioù niverus : e-pad devezhioù miz Mae 1968 n' eo ket bet par e nep doare ersav ar Stad c'hall ouzh an drubuilherion d' ar pezh e vije bet e derou ar c'hantved, lakaomp ; dieubet eo bet paotred ar FLB hep barnedigezh ebet ; e Spagn ez eo bet lakaet gouarnamant Franco da blegañ. N' eus nemet en U.R.S.S. - e-lec'h e tleje ar Stad bezañ dizeriet ar buanañ - hag e Spagn e chom ar startañ, ar c'hrisañ hag ar muiañ divrall war un dro, daoust ma c'heller gwiriañ evelato e teu an nagennerion, skrivagnerion ha kefredourion, d' en em ziskouez

niverusoc'h-niverusañ er Stadoù-se ivez.

Moarvat n' eo ket dizañjer hevelep emdroadur ha ne vefed ket gwell, da skouer, oc'h erlec'hiañ tid un nebeut hiniennou ouzh reol lezenn ar Stad (1). Ha, moarvat ivez, e c'hell an emdroadur-mañ, devoudañ ur c'hilwered taer a-berzh dalc'hidi hollveliegezh ar Stad, faskourion pe stalinourion (kv. o emzalc'h dirak nagennerezh kefredourion Tchekia pe ar « jacquerie » a zo o paouez c'hoarvezout e Polonia). Hogen niver an dud desket hag emkiantek, atebek anezho o unan, a gresk a zeiz da zeiz. Ha dre se e vo diaesoc'h-diaesañ d' ar Stad ober ouzh ar geodedourion evel ouzh sujidi, sklaved pe vugale. D' ar c'houlz-se e vo ret empennañ evit ar Stad ur stumm, ur vent hag ur roll nevez ha kefridi an Emsav eo moarvat lakaat ar c'houlz-se da zont an abretañ ar gwellañ.

(1) Arabat eo azeuliñ na dismegañsiñ ar Stad hep disoñjal n' he deus ket houmañ en em zigontammet c'hoazh eus he si orin, mac'homerezh ar renerion vandennadoù kentidik. Ho pezet koun eus komzoù Sant Aogustin : Petra eo ar Stad nemet ur vandennad forbidden he deus graet berzh ; ha petra eo ur vandennad forbidden nemet ur Stad vihan a zo a-walc'h dezhi hec'h-unan !

124

II

Darn a c'hellfe krediñ, goude lenn va fennadoù e-barzh **Imbourc'h** emañ a-enep d' an « araogelouriezh ». E gwirionez n' eo ket ouzh an « araogelouriezh » em eus disfiz, - ouzh an « araogelourion » o-unan ne lavaran ket. Da gentañ e kav din n' o deus ket ar renerion anezho alies gwriziennoù don e-touez ar bobl. Daoust ma kejer gant un toullad mat a werinourion e-mesk o renerion e chom o emsav evelato awenet ha renet gant bourc'hizion - betek gortoz da vihanañ - hag int Gallaoued holl, na petra. Hag er c'heñver-se e sav ur goulenn. Daoust ha nep emsav gall a ve a c'hell bezañ un dra bennak estreget bourc'hiz ? Evidon-me ne gredan ket. O vezañ maz eo bet savet Bro-C'hall gant bourc'hizion ne c'hell ar vro-se dilezel biken ha c'hevala istorek bourc'hiz hep en em renaviañ hec'h-unan. Peseurt fiziañs a c'heller kaout e « gwerinelezh » an emsav « kleizelour » hag « araogelour » e Bro-C'hall pa weler bourc'hizion evel J. P. Sartre ha Simone de Beauvoir o plediñ gant ur skourr anezhañ hag o ren " La cause du peuple ", da skouer. Kalz a istim am eus evit an daou brederour brudet-mañ hogen daoust hag ar re-mañ n' int ket evelato bourc'hizion c'hall « par excellence » ! Ken gwir eo kement-se ma tiwall mat o c'henouennidi a zo e penn ar Stad c'hall da ober an disterañ poan spered dezho : eus o rumm int ha dre se en o doujont end-eeun, daoust maz int bugale fall d' an tad renkad en deus o maget. Evel-se e weler Jean-Paul ha Simone o kestal ar verzhherinti war ar straed e Paris en ur werzhañ " La cause du peuple " hag ar bolised digalon-se o nac'hañ outo a-grenn ar gurunenn gaer a hiraezhont dezhi tra ma tastumont dizamant a-daolioù matarazh o c'henseurted yaouank a oa bet berrboell a-walc'h evit krediñ e vije gouest galloud o aelez mirourion d' o diwall diouzh pep trubuilh.

125

Anzav a ran em eus estlamm ouzh ar C'hallaoued a zo tud fin evelato hag a zeu a-benn da lakaat en o servij - hep gouzout hag hep mennout dezho - ar re a embann e fell dezho - sañset - diskar o galloud. Evel-se J. P. Sartre, S. de Beauvoir ha Régis Debray, dispac'herion ruz-tan ha bourc'hizion a ouenn rik war un dro, a vez pardonet o froudennoù dezho gant mistri ar pempvet Republik, bourc'hizion evelto, dre maz int kannaded Vro-C'hall - e-giz m' emañ - e broioù Amerika ar C'hreisteiz, da skouer.

Ha setu c'hoazh ur gudenn da ziluziañ : daoust ha tu a zo da gas un dispac'h da benn o chom er reizhiad ez eur mennet, a-hervez, da ziskar ? Ar goulenn-se a oa deuet d' am spered ivez en devezh all p' edon o sellout ouzh un abadenn eus ar skinwel gall diwar-benn an Iliz en amzer a-vremañ. Ar skignadenn a oa mennet da vezañ a-du ha pedet e oa bet zoken an aotrou kardinal Daniélou da reiñ e ali (hag e vennoz ivez war un dro moarvat). Hogen anat e oa e troe hevelep abadenn a felle dezhi chom diuntuek a-hervez a-enep d' an Iliz netra dre ma oa bet aozet e framm ur reizhiad a zo diseblant - er gwellañ degouezh - ouzh an talvoudoù relijiel.

Ar skouer-mañ a gemeran hogen pet emsaver bet goulennataet gant ar skingomzerezh pe ar c'helaouennerezh gall a oa tuet mat d' an Emsav sañset n' int ket bet gwall gerseet goude-se o klevout endro a-c'houdevezh ar c'homzoù o devoa distaget gant addisplegoù hag en un endro a denne o ster hag o zalvoudegezh diganto ? Ha neuze eta, piv a c'hellfe krediñ e vefe a-walc'h kelenn ar brezhoneg e skolioù ar Stad c'hall evit adsevel ar spered broadel en hor bro ? Gwall zidro e ranker bezañ evit goanagiñ kement-se.

126
III

Moarvat n' eus tu ebet da grouiñ ur sevenadur nevez e-barzh frammoù kozh evel Bro-C'hall pe Spagn pe Saoz pe Alamagn dezho un tremened hag ur c'hevala istorek puilh endev rak ur gwir zispac'h oc'h ober fae war an tremened a gasfe ar vroad da get : koulz eo neuze sevel ur vroad nevez. Padal, un dañjer a zo o c'hourdrouz an holl vroadoù-se am eus meneget : war var emaint da vezañ flastret ha mouget dindan puilhded o c'hevala istorek a vez bruzhunet ha rannet etre ar renkadoù hag ar rummoù a ya d' ober ar vroad. Ken stank eo al levrioù a vez embannet a vloaz da vloaz e galleg, en alamaneg pe e saozneg ma ne oufe unan eveljust lenn anezho holl ; hag ar gwashañ zo eo e kouezh e puñs an ankounac'h, eus ur rummad d' egile, oberennegoù a-bezh hep ma vije dezho an disterañ spi a zreistpadelezh. Ha penaos e c'hell dreistvevañ ur gevredigezh paz a da get e gevala istorek eus ur rummad d' egile ? (2) E Breizh hag er broioù bihan all n' eo ket ken bras an arvar pe da vihanañ ne wisk an hevelep stumm. O vezañ ma vez diviet buan kement skrid a vez embannet en hor yezh ha na vezont ket adembannet ne oar an danvez emsaverion nevez netra eus kevala istorek an Emsav. Evel-se eo hon eus ivez er mare-mañ un emsav neurozek : ar re a zo ennañ pe a gav dezho emaint ennañ a zegemer un dastumad mennozioù ha na vezont ket mat an dalvoudegezh anezho dre ma n' anavezont ket ar c'hendalc'h hag an istor anezho. Ul louzoù a zo hepken d' an neuroz- se : distreiñ da vammennoù an Emsav hag anavezout mat ar gwriziennoù anezhañ. Rak-se em eus-me graet va soñj stagañ da studiañ istor an Emsav (3).

(2) An hevelep tra a c'hoarvez e diabarzh an Iliz end-eeun. Emaon o paouez lenn ul levr kembraek gant J. R. Jones a zo o paouez mont da anaon hevlene ha merzet em eus gant souezh n' en devoa ar « c'hristen » -mañ a-benn ar fin tamm feiz ebet (evel nouspet « kristen » all en hon amzer a chom en Iliz peogwir e c'hoari evito roll ur vamm evelato). Seurt led-kristenion n' anavezont netra diwar-benn istor an Iliz ha kemer a reont da vistri led-kristenion all -- Schweitzer, Simone Weil, Tillich h.a. - hag en em gav ivez e-kichen ha n' eo ket e-barzh an Iliz. Padal, peseurt kristeniezh a c'hell bezañ er-maez eus an Iliz ?

(3) Kroget e vo gant embannadur an istor-se a-benn un nebeut mizioù.

127

Seurt dañjer ne vo ket mui anezhañ eveljust ur wech ma vo bet diazezet ur Stad vrezhon. Hogen un arvar all a chomo evel er broioù bihan all : bezañ bac'het en ur bed strizh hep gellcut rannañ kevala boutin ebet gant ar pobloù all en Europa, da skouer. Moarvat ez eo prest ar C'hallaoued hag ar Saozon da ginnig deomp o c'hevala-int evel ur c'hevala hollvedel hogen daoust d' ar pezh a soñjont - ha dre ma chomont enouestlet en istor - ez eo o c'hevala ken « rannvroel » ha ken strizh hag hon hini. Neuze eta, daoust ha ne c'hellfe ket Europiz, da vihanañ, kavout an diazez boutin a vank dezho o tistreiñ d' ar sevenadurioù a zo bet eztaolet e-pad keid-all en hen yezhoù latin ha gresianeg ? Er yezhoù-se e kaver mammennoù hor sevenadurioù europat arnevez ha war var e vo Europiz da chom hep en em gompren o-unan ma tilezont anezho penn-da-benn. Hemañ n' eo nemet ur c'hinnig a ran hogen ne vefe ket fall, d' hor soñj, prederiañ diwar-benn klenkadur hor sevenadur en ur gevaniezh ledanoc'h, o vezañ ma ne oufe zoken an hini geltiek bezañ a-walc'h deomp (4).

GERIOU ROUEZ :

TID : faltazi, froudenn.
ARGERZH : hentadenn war-raok, " processus ".
KEDVENO : menoz an holl dud en ur vro.
KEVALA : kapital.
EZTAOLIÑ : diavaezañ, displegañ.
KEVANIEZH : dastumad klok hag urzhiet.
KEFREDOUR : den a labour gant e spered, meizour, intellektual.

(4) Skol eil derez an Emsav a zo o prientiñ rummoù kentelioù hen hezhoù latin ha gresianeg, e-tal ar rummoù kentelioù war an istor, ar yezhoù arnevez hag ar skiantoù. Evit kaout diskleriadurioù n' eus nemet skrivañ da SKOL AN EMSAV, 30, place des Lices, 35 - Rennes.

Enezenn va ene

" Inis fá réim i gcéin san Iarthar tá. "
QODHAGAN O RATHAILLE.

1

Va enezenn a zo divrud,
Dizarempred ha didud ;
N' emañ ket pell er-maez
'Vel ma vez ar gwir enez.
N' anavezan ket hec'h anv
Ha n' ouzon tra diwar he fenn
Nemet e teu al lanv
Div wech bemdez en he zro.

Va enezenn !
Ur roc'h n' eo ken
En gwirionez.
P' he damwelan, avat, a-dreuz ar gwez
Du-hont, e penn an draonienn
Ha warni an heol o skediñ
E lamm va c'halon em c'hreiz
Gant levenez.

2

War lein va enezenn
Ez eus un ti,
Unan hepken,
Hag heñ dismantret-holl,
Repu an avel foll
Hag ar gouelini
A zeu di
Pa 'z int aet divi
Da nijal ha da gantren
En-dro d' am enezenn.

129

3
Di e teuan ivez da huñvreal
E-touez ar gouelini o c'hournijal.
Da eo din chom eno
E-harp ar mein kozh dizanv.
Ne santan mui red an amzer,
N' eus mui den war va zro.
Va spered a red lijer
Da heul ar goelettinier
O tremen en diabell
O gouelioù gwenn displeget en avel.

4

Di e teuan ivez da bediñ
Rak n' eus gwelloc'h peniti
Eget va zi dido ha dizifenn
O 'n em guzhat 'mesk ar vorenn.
A va enezenn !
O sevel da-unan eus don
Ar mor didermen
Te ' zo evidon

Ul lec'h a repoz hag a joa diamen.

130

5

A va ene !

Pa vi skuizh da gantren

Eus un den d' egile

Hag eus ur gêrbenn d' eben

Ha divi da vont-dont

Er straedoù du gant an dud

E kemeri ar c'harrhont

A gas d' am enezenn.

Di e teui

Ha, 'vel ar gouelini.

Ec'h arvesti

Ar bed 'n e c'hlanañ,

C'hoari peurbadus

Ar mor meurdezus hag an oabl skedus,

Ar c'houmoul hag ar stered.

Alo 'ta, va ene,

Perak termal ?

Deomp d' an enezenn,

Da virviken !

131

Maire Aine Nic Ghearailt

Dilezet

A Vleuñvennig !

N' oar ket an noz

Perag da ziskar,

Gweñv da c'har,

Dinaou da vuhez

d' an douar :

Aner leñv ar glav-pil

a deuz da ene en atil

hag an avel rok

o regiñ 'n ezel noazh...

Aet an hañv d' e dro

Ar c'helion a goroll

bremañ e pellvro,

frouezh e velen el liorzhoù,

kozhgedon e guzmuz

'n o ched er soulegi.

Koumoul ar bannwel-noz

a ziougan ar goañv...

132

Amañ ez kichenig

am diraez prederennoù -

Dre ma spered e red goulennoù,

Garm an evned o kildreiñ

da heklez dezho :

Setu respont ar bed -

Un Diskoulm roet gant ar c'hantvedoù

diwar o skiant-prenañ...

Estlamm eo d' an den

mont e-unan
war an hent dilezet
gant an Amzer !
A Vleuñvennig !
Estregedout zo o vervel
henozh...

(Unan eus ar barzhonegoù a c'hounezas ur priz en Oireachtas 1970.)

NOTENNOÙ

Hor Mignoned

Arzela KALVEZ a zo laouen da gemenn deoc'h ganedigezh he breur bihan Iwan, d' an 2 a viz C'hwevrer e Gwened.

Hor gwellañ gourc'hemennoù.

Hor c'hef evit 1970

DISPIGNOU

	lurioù	
Moulañ :		
niv. 138	2.698,60	
niv. 139	2.874,25	
niv. 140	2.814,62	
niv. 141	2.947,91	
niv. 142	3.884,73	
niv. 143	2.849,30	
		18.069,41
Mizoù-post - Bruderezh		429,25
Diseurt		68,56
	War un dro	18.567,22

ENKEFIADURIOU

	lurioù	
Koumanantoù	14.655,06	
Niverennoù gwerzhed	1.083,73	
Chomlec'hioù kemmet	27,70	
Profoù	2.164,34	
	War un dro	17.930,83

134

Gounid ar bloavezhioù all	+ 1.194,00	
Koll 1970	- 636,39	
Er c'hef, d'an 31 a riz Kerzu 1970		+ 557,61

Profoù

Degouezhet eo ganeomp ar projoù-mañ e-korf an daou viz diwezhañ :

MIZ GENVER :

E. Bleuzen, 3 lur ; M. Maze, 15 ; A. Rousseau, 5 ; C. Le Brazidec, 5 ; G. Breton, 10 ; F. Vossen, 21,02 ; J. de Lesquen, 25 ; B. Assicot, 15 ; J. du Plessis, 4 ; M. Drean, 63,50 ; Y. Thomas, 12,65 ; J. Tilly, 5 ; F. Le Calonnec, 5 ; E. Le Carrer, 5 ; J. Ducamp, 15 ; C. Millour, 5 ; J. Le Moigne, 25 ; R. Tassel, 20 ; M. Blanchard, 5 ; O. Chevilotte, 9 ; Y. Gelezeau, 5 ; M. Gourlaouen, 5 ; A. Hervieu, 5 ; B. Prudor, 20 ; J. Fennec, 25 ; F. Favreau, 5 ; R. Brisson, 24 ; H. Le Lan, 10 ; A. Le Bihan, 15 ; P. Aoustin, 5 ; B. Audic, 20 ; H. Calvez, 25 ; A. Cloitre, 25 ; F. Kervella, 90 ; Y. Minou, 10 ; A. Omnes, 10.

- War un dro : 572,17 lur.

MIZ C'HWEVRER :

J. Konan, 60 lur ; Y. Hourmant, 4 ; J. Le Bec, 200 ; L. Bothorel, 10 ; M. Le Goff, 5 ; J. Rohou, 5 ; B. Le Rallie, 4 ; C. Barbotin, 75 ; M. Toudic, 5 ; G. Kernevez, 5 ; M. Miniou, 20 ; A. Herry, 60 ; dizanv, 400.

- War un dro : 853 lur.

1.425,17 lur profoù hon eus bet e-pad an daou viz-mañ. Bennozh Doue d' hor mignoned.

Ul levr kelenn nevez : Levr kentañ Herve ha Nora

Ar gelaouenn Skol zo o paouez embann ul levr kelenn nevez evit an deskarded a zesk ar yezh gant ur c'helenner. Al levr a zo aozet hervez an doareoù nevesañ gant an Ao. Kalvez hag a zo bet rener skol e-pad 14 vloaz hag en deus kelennet brezhoneg d' ar vugale e-pad an amzer-se.

An embannadur zo brav ha sklaer ha n' eo ket karget evel meur a levr gant direizhderioù pe stummoù trefoet didalvoud.

- Ar c'hentelioù a ya atav war gresk.

- Ar skeudennoù zo sklaer hag a harp al lennadennoù hag an divizoù.

- Ar yezhadur berr diazezet war ar c'hentelioù a gaver ennañ ar pep retañ eus ar yezhadur brezhonek.

- Ur geriadur bihan ennañ 522 ger implijet er c'hentelioù, trawalc'h d'en em zibab er vuhez, a gaver e penn al levr.

1 skouerenn : 6 lur franko,

5 skouerenn : 25 lur franko,

Adalek 10 skouerenn : 4 lur pep hini, franko.

SKOL, Crec'h-Avel, 22 - Lannion - c. c. p. Rennes 1911-06

Cours Élémentaire Roparz Hemon war vandennoù

Ul lodenn vras eus levr kelenn Roparz Hemon zo bet enskrivet war daou vinikasedig Philips : kentelioù 1-12 war an hini kentañ ha 13-25 war an eil. Pep boestig a goust 20,00 lur. Embannet eo bet gant Al Liamm.

Mlle J. QUEILLÉ, 47, rue Notre-Dame, 22 - Guingamp - c. c. p. 1136 82 Rennes.

Breiz

Krog eo ar gelaouenn Breiz da embann peder fajenn brezhoneg penn-da-benn. Anv al lodenn-se zo " An Dihun ". Pennadoù a bep seurt ha skrivet en ur yezh eeun a gaver e-barzh.

Ar rener, J. C. Bozec, a c'houlenn ma vefe kaset dezhañ pennadoù, istorioù ha tresadennoù.

Hor gwellañ gourc'hemenoù da " Vreizh " ha d' hor mignon J. C. Bozec.

BREIZH, La Baule, c. c. p. 144 67 Rennes. - Koumanant : 15.00 lur.

Sav Breizh

Degouezhet eo ganeomp niverenn gentañ Sav Breizh. Ur gelaouenn voulet, a vent gant " Al Liamm ", ez eo. Pleustriñ a ra war ar politikerezh. Ar pennadoù a zo skrivet e galleg dreist-holl, nemet ar pennad-digeriñ a zo divyezhek. Div varzhoneg gant Youenn Gwernig a gaver ivez e-barzh an niverenn gentañ.

Hetiñ reomp buhez hir d' ar gelc'hgelaouenn nevez a gemero marteze lec'h " Ar Vro " .

Koumanant 6 niverenn : 30,00 lur. SAV BREIZH, B. P. 96, Quimper, c. c. p. 525-59 Nantes.

Kemennadur

An U. R. B. (Unvaniezh Rannvroel Vreizh) bet krouet gant Markiz an Estourbeillon a gemenn e vo lakaet da advevañ ar gevredigezh. An emsav-se, war un dro keltiek ha speredel (kristen), a vodfe ar rannvroelourien a garfe gwelout sevel Europa troet war-du ar pinvidigezhioù speredel ha dreist-holl re ar broadelezhioù bihan a gaver enni.

Skrivañ da : Mme MESNIER, c/o Maison de la Bretagne, 3, rue du Départ, Paris 14' .

136

Ti Europa en Nederland

Ti Europa en Nederland a gemenn e vo graet devezhioù-studi war danvez " Ar minorelezhioù Broadel en Europa " eus an 28 a viz Mezheven d' an 3 a viz Gouere e Bemelen.

Skrivañ da : Europahuis in Nederland. St. Antoniusbank 30, Bemelen/Limburg. Nederland.

Levrioù gwerzhet

Setu amañ roll al levrioù bet gwerzhet e Kêr Vreizh, etre an 1-añ a viz Meurzh 1970 et dibenn C'hwevrer 1971. Gwerzh graet d' ar sadorn (4 eur - 8 eur) :

Kentelioù R. Hemon	90
Yezhadur	70
Méthode Rapide	24
Levrioù ar Vugale	59
Geriadur Brezhonek-Gallek	12
Geriadur Gallek-Brezhonek	12
Yezhadur Kervella	7
Merc'hed	20
Ho kervel a rin en noz	9
Sizhun ar Breur Arturo	9
An Dour en-dro d' an Inizi	13
Kleier Eured	8
Diamantoù Keroulaz	5
Gwerzioù kozh Breizh Izel	7
40 Pennad lenn	6
Barzhonegoù R. Hemon	5

Geotenn ar Werc'hez	8
Va Buhez e Rusia	6
An nos o skediñ	4
Pirc'hirin Kala Goañv	4
Evidon va unan	4
Gwinizh hepken	4
Hervelina Geraouel	4
Istor ar Yezhoù Keltiek	3
Geriadur Arnevez (Preder)	3
Hor Bara Pemdeziek	3
An Ti Satanazet	3
Aquis Submersus	3
En ur rambreal	3
Alanig an Tri Roue	3
Trema an heol o sevel	3
An 3 Boulomig kalon aour	3
An Teir Gwern Pembroke	3
Bibl	3
Manifesto ar St. Komunour	3
Lennegezh vrezhonek dre an testennoù	3
Geriadur Istorel	2
Barzhaz	2
Ar Gevnidenn	3
Amañ hag Ahont	3
Dremm an Ankou	2
An Irin Glas	2
Ar Fest Noz	2
Abrobin	2
Labous ar Wirionez	2
Ar Pesk Aour	2
Evit ket ha netra	2
Gwir Vretoned (kan)	29

Diskleriadur Kuzul Ar Brezhoneg

Kuzul Ar Brezhoneg hag a stroll 18 kevredigezh sevenadurel breizhat, bodet e Sant-Brieg d' ar Sul 18 a viz Ebrel, a ziskler ar pezh a c'houlenn, d' an nebeutañ evit ober ar c'hammed kentañ, en doare ma vo dalc'het sonn ha kaset war-raok yezh-ha sevenadurezh pobl Vreizh, ha diorreet personelezh ar Vro. Goulenn a ra eta :

- 1) ma vo lakaet teir eurvezh skol vrezhonek bep sizhun en holl skolioù a bep derez, ma vo gopret ar gelennerien evit an eurvezhioù-kelenn-se, ha ma vo kontet an eurvezhioù-se en o eurioù-labour reoliek ; .
- 2) ma vo degemeret ar Brezhoneg en holl arnodennoù, dreist-holl er vachelouriezh, war an hevelep renk hag ar yezhoù bev all ;
- 3) ma vo astennet kelennerezh ar Brezhoneg hag ar Yezhoù keltiek all e Skolioù-meur Lizhiri Brest ha Roazhon, ha ma vo savet ur gevrenn geltiek e Skol-veur Lizhiri Naoned ;
- 4) ma vo skignet war ar skingomz ha war ar skinwel 2 eurvezh radio ha 3 eurvezh skinwel bep sizhun ;
- 5) ma vo degemeret ar Brezhoneg er mererezh evel ar Galleg, da gentañ-penn er Brezhonegva ;
- 6) ma vo taolet ar brasañ evezh da skrivañ en un doare reizh an anvioù-lec'h e Brezhoneg war an holl skritelloù. Kuzul Ar Brezhoneg a zo prest da reiñ sikour evit se ;

7) ma vo savet un Ensavadur evit diorren ar pinvidigezhioù sevenadurel, istorel, douaroniezhel, arzel a zo d' ar Vrezhoneg. Kuzul ar Vrezhoneg a zo prest da genlabourat evit ar c'harg-se gant ar c'hevredigezhioù sevenadurel all.

Evit Kuzul Ar Brezhoneg,
Ar C'hadoriad : YANN TALBOT.

Roll ar c'hevredigezhioù a zo bodet e Kuzul Ar Brezhoneg :
AL LIAMM.
EMBANNADURIOU AL LIAMM.
KEVREDIGEZH AR SKRIVAGNERIEN.
LEVRIOU AR VUGALE.
SKOURR BREIZH AR C'HENDALC'H KELTIEK.
HOR YEZH.
EMBANNADURIOU AR BIBL - STUDI HAG OBER.
AR BED KELTIEK.
SKOL.
WANIG HA WENIG.
BARR HEOL.
UNVANIEZH SPEREDEL BREIZH.
KAMP ETREKELTIEK AR VREZHONEGERIEN.
EMGLEV AN TIEGEZHIOU.
BREURIEZH SANT ERWAN.
KEVREDIGEZH AR SELAOUERIEN HAG AR SKINWELERIEN.
KEVREDIGEZH AN DESKADUREZH NEVEZ.
SKOL OBER.

Devezhioù-studi Pask " Emsav ar Bobl Vrezhon "

Dalc'het eo bet Devezhioù-studi " Emsav ar Bobl Vrezhon " e Lanuon etre al lun da noz 12 a viz Ebrel hag ar yaou d' abardaez 15 a viz Ebrel.

138

Ar pep pennañ eus an devezhioù-mañ a oa gouestlet da studi ar yezh ; rannet e oa ar studierion e pevar rummad hervez o anaoudegezh eus ar brezhoneg. Tri-ugent a berzhidi o deus heuliet ar c'hentelioù prientet gant c'hwec'h kelenner.

Meur a gendael diwar-benn labour Skol an Emsav hag E. V. B. a zo bet dalc'het ivez e-kerz an Devezhioù-studi-mañ.

Pep devezh a veze klozet gant un nozvezh laouen a ziskouezas ampartiz meur a ganer hag a ganerez, hag ivez hini ar sonerion c'hitar hag an dañserion.

Frouezhus eo bet an devezhioù-studi-mañ evel boaz. Ar re a garfe kemer perzh e devezhioù-studi an hañv (derou Eost ha marteze re all, berroc'h e derou Gwengolo) a rank skrivañ da : EMSAV AR BOBL VREZHON, 30, place des Lices, 35 - Roazhon.

Imbourc'h

Taolenn niverennoù Genver, C'hwevrer ha Meurzh 1971 :

Niverenn 13, 31 Genver 1971

Kefridi ha tonkad Skol an Emsav (an niverenn penn-da-benn a zo gouestlet du gudennoù Skol an Emsav).

Niverenn 14, 28 C'hwevrer 1971
Kefridi ha tonkad Skol an Emsav (breutadeg) ;
Ar gleizelourion ha ni, gant F. F. ;
Lizhiri ;
Pinvidigezhioù kondon Breizh, gant Alan Kerrann ;
Da belec'h ez a ar " Mezzogiorno " ? gant Jakez ar Bihan ;
Kendalc'h ar breutadur diwar-benn ster ar yezh.

Niverenn 15, 31 Meurzh 1971
Peseurt politikerezh a c'hell kaout E. B. V. hiziv ? gant H. K. ;
Armerzh Yougoslavia pe : emdroadur un armerzh sokiatur reolet gant an nevid,
gant Jakez ar Bihan.

Emsav

Kelaouenn bolitikel miziek - B. P. 125 - 35 Rennes.

Kroget eo ar gelaouenn Emsav gant he 5t bloavezh. Setu roll ar pennadoù embannet en niverennoù 49, 50 ha 51.

Genver 1971

Brastrer ar c'heñverioù etre an Emsav hag emdroadur armerzhel ha kevredigezhel.
2. - An Eil Emsav (1918-1944). Notennoù politikel (18) Ar renad soviedel.
En *Emsav hag ar Vro* e kaver lizheroù o tennañ da obererezh an Emsav, da obererezh al luskadoù breizhek, danevell un emvod aozet gant G. CARO e Plouwinaz.

139

C'hwevrer 1971

Keal an unventegezh dedalvezet d' al luskadoù breizhek.

Er rannbennad *Lizheroù*, e kaver lizheroù a-zivout buhez an Emsav, e gudennoù diabarzh, ar stummadur speredel, ar sokialouriezh, ar c'heñverioù etre an Emsav ha buhez prevez an emsaverion, emsav Gwalarn hag Al Liamm, buhezañ an eztrouradur. Ul lizher digant un ezstourmer eus ar strollad gall **Gauche prolétarienne** a ro tro da bouezañ war diazezoù an Emsav a-vremañ. Ul lizher all a respont d' ar goulen " Hag ez eus Brezhoned eus Naonediz ". Da heul ez eus danvez an ezkemmoù etre un ezel eus E. S. B. hag unan eus atebeion ar gelaouenn Brud : Embannet eo lizher ar c'henskriver « hogos en e bezh rak gantañ e kaver ur skouer vat eus an arc'hwel ledemsav ». An daou lizher diwezhañ a studi pleustr an dezrannañ.

Ar rannbennad *Lennadennoù* zo gouestlet da lennegezh Gwalarn, Al Liamm, ha da lennegezh nevez an Emsav.

Er rannbennad *Danevelloù obererezh* e kaver danevell obererezh Skourr an Deskadurezh Vroadel.

Meurzh 1971

Breudoù 1971 " Emsav Stadel Breizh " e Roazhon d' ar 07 03 71. (Dezvadoù. Danevelloù obererezh 1970 ha steuñvoù 1971 an ensavioù hag an aozadurioù. Dezrann obererezh politikel 1970. Raklun obererezh bloaziek 1971).

En *Ennsav hag ar Vro*, roll ar c'hentelioù embannet gant S.A.D.E.D. abaoe derou ar bloaz 1971.

Notennoù politikel (19) Renadoù ar Gweriniezhoù-pobl : Tchekoslovakia, Polonia, Roumania, Bulgaria, Yougoslavia, Sina.

War an niverennoù da zont e vo kavet kendalc'h an *Notennoù Politikel* : Renadoù faskour, renadoù ar riezoù isdiorreet.

War ar stern emañ ivez an *Notennoù Kevredadel* a gemero lec'h er gelaouenn pa vo echu an *Notennoù Politikel*. En hevelep doare resis ma voe studiet ar politikouriezh hag an armerzhouriezh, e vo pleustret war zanvez hollek ar gevredigezh.

Kendalc'het e vo evel just gant ar pennadoù a-zivout Istor Breizh hag an Emsav, istor an Emsavioù all.

Kenderc'hel a raimp ivez da verat pervezh kudennoù fetis, hollek ha dibarek, pemdeziek ha padek an Emsav.

Roet e vo astenn d' ar studiennoù gouestlet d' ar gevredigezh e Breizh. War ar roll emañ : emdroadur armerzh ha kevredigezh Bro-Naoned en 19^t kantved, istor al luskadoù sokialour e Breizh, emdroadur armerzh ha kevredigezh An Oriant, emdroadur ar boblañs e Breizh.

Marteze ez oc'h koumanantet endeo da Emsav. Hon digarezit neuze : n' hoc'h eus desket netra nevez amañ... Marteze avat n' eus bet c'hoazh niverenn ebet eus Emsav etre ho taouarn ; mar fell deoc'h koumanantiñ, e kavot e traoñ ar bajenn-mañ an diskleriadurioù hoc'h eus ezhomm.

140

Marteze ivez e oac'h koumanantet e 1969 pe e 1970 hag ankouaet hoc'h eus neveziañ ho koumanant...

Gant hon gourc'hemennnoù kalonek,
M. F. BOUCHER, Penn ar C'helaouiñ

Evit koumanantiñ pe adkoumanantiñ :
Kas 20,00 F da EMSAV, c.c.p. Rennes 2 460 10
Deraouiñ a ra ar c'houmanant e miz Genver.

Alioù d' ar goumananterion nevez :

Ur benveg-studi ha stummañ eo da gentañ-penn ar gelaouenn Emsav.

Diaes eo deraouiñ lenn Emsav o kregiñ war-eeun gant an niverenn 49 : un darn vat eus ar pennadoù anezhi zo kendalc'h ar pennadoù embannet er bloavezhioù tremenet, pe da nebeutañ ez int diazezet evit mennozioù hag ar yezh war skridoù ar bloavezhioù tremenet.

Setu perak ez aliomp ar goumananterion nevez da bourchas ar pevar bloavezhiad kentañ (1) hag o studiañ kent stagañ gant ar bloavezhiad-mañ.

(1) Kas 24,00 F dre vloavezh, eleze 96,00 F evit ar pevar vloavezhiad da :
EMSAV, c.c.p. Rennes 2 460 10
en ur venegiñ : Bloavezhiad 1967, h.a...

Kamp Etrekeltiek ar Vrezhonegerien

Kamp Etrekeltiek ar Vrezhonegerien a vo dalc'het er bloaz-mañ, eus an 18 d' an 31 a viz Gouere, e KREHEN-PLANKOED.

Digor eo ar skol-hañv-se d' an holl re o deus c'hoant brezhonegañ ha peurzeskiñ ar yezh, an hini nemeti implijet e-pad ar pemzek devezh.

Kentelioù, studiadennnoù, baleadennoù, dudielloù, pep tra a vez aozet e sell da lakaat an holl berzhidi da vestroniañ ar yezh en un endro yaouank ha plijus.
Priz : 15,00 lur an devezh.

Evit kaout displegadurioù hiroc'h, skrivañ d' an Itron de Bellaing, 28, rue des 3 Frères Le Goff, Saint-Brieuc (Pellg. 33-26-66). Lakaat un timbr evit ar respont.

Devezh-studi Kevredigezh an Deskadurezh Nevez

Un devezh-studi zo bet gant kelennerien vrezhoneg K. D. N. d' an 21-3-71, e St-Brieg. Diouzh ar beure ez eus bet taolet ur sell war ar c'helenn brezhoneg dre vras hag ar c'hudennoù a sav. Gwelet hon eus penaos e ya war-raok ar c'helenn brezhoneg koulz er skolioù lik, er skolioù prevez hag en oaledoù sevenadurel, penaos e vez gopret ar gelennerien, peseurt lec'h zo d' ar brezhoneg en arnodennoù.

141

Evit echuiñ ar penn-devezh mintin hon eus gwelet disoc'hoù an enklask kaset da benn gant ar gevredigezh. Setu int berr-ha-berr (kavet e vo hiroc'hig war " Hor Yezh ").

Pet kelenner a gelenn hor yezh ? Ouzhpenn 100. 23 % hepken anezho a zo gopret (n' eus koulz lavaret nemet ar skolioù lik a bae ar gelennerien). Kement a glasoù brezhoneg zo c'hoazh en oaledoù sevenadurel hag er skolioù lik ; div wec'h nebeutoc'h zo er skolioù prevez. 72 % eus ar c'hlasoù zo klasoù kentañ bloavezh, 20 % klasoù en bloavezh ha 8 % klasoù uheloc'h.

Pet den a zesk brezhoneg e 1971 ? war-dro 4.500. Ha 80 anezho zo dindan 20 vloaz.

Div brezegenn zo bet goude merenn gant daou gelenner eus Skol-veur Roazhon.

An hini gentañ zo bet diwar-benn al lennegezh vrezhonek gant Per Denez. Klasket en deus P. Denez displegañ andonioù hol lennegezh a-vremañ hag hec'h emdroadur abaoe hor skol lennegel gentañ abaoe ar c'hrennvrezhoneg : hini ar Gonideg, Kervarker hag An Uhel. « Ur stourmer eo ar skrivagner, emezañ, da lavarout eo un test d' e amzer hag un den kiriek eus herezh ar bobl ».

Perak eo disheñvel ar brezhoneg a vez komzet du-mañ diouzh ar brezhoneg skrivet ? N' eus ket ur c'helenn n' eo bet goulennet digantañ an dra-se gant e skolidi. Da respont d' ar goulenn-se oa prezegenn Leon Fleuriot. Displeget en deus penaos ha perak eo deuet ar brezhoneg d' en em rannañ e rannyezhoù pa oa anezhañ un uhelyezh unvan da vare an henvrezhoneg. Evit echuiñ en deus kemeret L. Fleuriot ar rannyezhoù a-vremañ unan hag unan hag en deus klasket petra oa a gozh hag a nevez e pep hini.

Evit kaout resisadurioù diwar-benn K. D. N., skrivañ d' ar sekretourva : K. D. N., A. Le Bec, 12, rue Astor, 29/S - Quimper.

Andersen ha Daniz e Pariz

Pa oan aet da welout al levrioù tchekek diskouezet e Pariz, bloaz 'zo, em boa merket pegen kasaüs e oa ne veze ket stankoc'h, e seurt diskouezadegoù, an diskleriadurioù e yezh ar weladennerien. Ma ! en dro-mañ, ne c'helle ket seurt klemmadenn bezañ graet ar re a zo aet da Di an Danmark da welout an diskouezadeg savet diwar-benn Andersen ha Bro-C'hall (1) rak kerkent erruet en ti e veze kinniget deoc'h, evit ur bennozh Doue ! ul levrig koant, ennañ diskleriadurioù war gement tra lakaet war-wel. P' em bo lavaret ouzhpenn e oa 80 a bajennadoù ennañ, darn anezho skeudennaouet, hag e oa moulet splann, e komprenot, moarvat, n' am eus nemet meuleudioù d' ober en dro-mañ, da aozourien an diskouezadeg.

Arabat, avat, bezañ touellet gant an talbenn lakaet war an diskouezadeg rak m' eo bet pouezet gant Daniz war an darempredoù a zo bet etre Andersen ha Bro-

C'hall ez eo, evit gwir, buhez a-bezh ar skrivagner brudet a oa danevellet eno. Deuet eo Andersen meur a wech da Bariz ha dreist-holl e 1843 ha 1867 nemet hervez Daniz o-unan, n' eo ket bet an darempredoù en deus bet gant Gallaoued eus an talvoudusañ evit ar skrivagner. Ne anaveze ket mat a-walc'h ar galleg evit skrivañ rag-eeun er yezh-se. Al lizheroù gallek a-ziwar e zorn, a zo bet miret, a zo troidigezhioù eus an daneg bet eil-skrivet gantañ. N' eo ket bet awenet kalz, kennebeut, gant ar pezh en deus gwelet e Bro-C'hall er-maez eus ar gontadenn DRYADENN " (Boudig an derv) a gav hec'h orin en Diskouezadeg Hollvedel graet e Pariz e 1867.

142

Andersen a zo anezhañ ur skrivagner meur anavezet er bed-holl evit e gontadennoù dreist-holl. Etre 1835 ha 1872 en deus savet ouzhpenn 150 anezho ijinet gantañ e-unan nemet un 10 bennak awenet gant kontadennoù-pobl. Troet int bet en ouzhpenn 100 yezh disheñvel hag er broioù bras int bet embannet nousped gwech. Bez' e c'helled gwelout e Ti an Danmark, da skouer, an embannadur gallek kentañ savet kerkent ha 1848 met « a-ziwar an hini fallañ eus an troidigezhioù alamanek ». Gant poltredoù niverus ar skrivagner, diskouezet eno da bep oad eus e vuhez, hag e dresadennoù e oa an embannadurioù-se ar pep duduusañ eus an diskouezadeg.

Lavaromp diouzhtu eo bet graet meneg eus Breizh div wech, da nebeutañ en diskouezadeg. Laouen e vo, sur-mat, ar vrezhonegerien o c'houzout edo " Priñsezig an Dour " eno e-mesk troidigezhioù en eskimoeg, en arabeg, en iraneg ha me 'oar. Digor e oa er bajenn 24 ma 'z eus warni un dresadenn o tiskouez ar vorwregig azezet « dindan eur pondalez diavaez bras, da skleur al loar. » hag hi bamet dirak kened ar priñs yaouank oc'h huñvreal. A-hend-all, diskouezet eo bet eno ivez un embannadur graet e 1873 e Pariz eus ar " C'hontadennoù danat " ha, ma venegan anezhañ, eo abalamour ma voe skeudennet gant Yann Dargent, anezhañ ul livour breizhat brudet a-walc'h eus an XIX-vet kantved hag e kave da Andersen e-unan e oa skeudennoù hor c'henvroad ar re gaerañ a oa bet graet er bed a-bezh evit e gontadennoù.

Moarvat ne lavarfe ket kemend-all hiziv rak awenet eo bet, hag e vez bepred, arzourien niverus gant oberoù Andersen hag ur blijadur e oa sellout ouzh embannadurioù skeudennaouek 'zo gant kaer ma 'z int evel an hini norvegek savet e 1927 en Oslo pe unan gallek nevez (Gründ-Pariz 1962) a voe moulet avat, e Praha ha skeudennet gant Jiri Trnka, un arzour n' eo ket, sur-mat, a ouenn c'hall. Ret anzav e seblante skeudennoù " Priñsezig an Dour " dister e-keñver ar re-hont ha setu perak, moarvat, n' eus bet lakaet hini ebet anezho el levr bourrus-tre " Udenlandske H. C. Andersen-illustrationer " (Skeudennoù estren a-ziwar Andersen) (Kobenhavn, 1969) daoust d' hol levr brezhonek bezañ meneget ennañ.

N' ouzon ket ha gwelet eo bet an diskouezadeg-se gant kalz Bretoned. Ma n' eo ket bet ez eo un druez rak Daniz a c'hell bezañ, e meur a geñver ur skouer evidomp. Anavezout a ran mat Ti an Danmark, m' on bet meur a wech da welout diskouezadegoù ennañ hag ar " Stal Danat ", a vez ken plijus bale enni, hag a zo en e gichen. Bez' e rankan anzav ez on bamet pep gwech ma sellan ouzh pezh a ra Daniz. Ur bobl vihan eo, a dra sur, nemet bras eo bet hag ez eo c'hoazh he levezon war hor sevenadurezh. Krediñ a ran hon eus-ni, Bretoned, kalz da zeskiñ diouto, ken kempenn, ken urzhiet-mat ha ma vezont, kement a vlaz hag a gizidigezh a vez ganto !

L. ANDOUARD.

143

Skourr an Deskadurezh Vroadel

DEVEZHIOU STUDI KERZU 1970.

Aozet ez eus bet tri devezh studi war ar yezh evit an deraouidi hag an araokaidi

e Bourc'h-Vriag, eus an 26 d' an 28 Kerzu.

E pevar rummad edo dasparzhet en deraouidi hervez o live : tri rummad kentañ bloavezh, ur rummad eil bloavezh. C'hwec'h kelenner a oa evit ar pevar rummad ha tro o devoe da geñveriañ, burutellañ ha gwellaat o doareoù kelenn. Setu roll ar pleustradennoù :

Sadorn 26 12 :

14-16 h : skrivadenn ha poelladennoù dre gomz ;

17 - 19 h : poelladennoù dre gomz.

Sul 27 12 :

09-12 h : skrivadenn ha poelladennoù dre gomz ;

14 - 16 h : bodadoù-komz : frankizadur ar merc'hed ;

17-19 h : poelladennoù dre gomz.

Lun 28 12 :

09 - 12 h : skrivadenn ha poelladennoù dre gomz ;

14-16 h : bodadoù komz : ar vuhez e kêr ;

09 - 12 h : arnodennoù kentañ derez kentañ bloavezh hag eil bloavezh ;

14 - 15 h : arnodennoù eil bloavezh.

Pelloc'h e kaver testennoù an arnodennoù-se.

Ur rummad hepken a oa eus an araokaidi. Kinniget e voe d' ar re-mañ daou rumm pleustradennoù :

1. Studiañ dre gomz a-stroll testennoù a lennegezh. Div destenn oa war ar roll labour : **Taldir e ti Frañsez Vallée**, arroud eus levr TALDIR, Ur c'hrennard, un deskard, ur soudard, Karaez 1944, pp. 54-56 ; **Melegan**, arroud eus levr Youenn DREZEN, *Itron Varia Garmez*, skrivet e 1936, embannet e 1941, pp. 213-218. Pouezet e voe dreist-holl war savadurezh ar frazennoù ha war ar brezhonekadurioù.

2. Deskiñ penaos lenn, meizañ, plaenaat ha krennañ ur pennad (pleustradenn graet war ar pennad *Greantioù Citroën e Breizh*, Emsav 47/345-355 1970). Deskiñ penaos ren taolennadur hanezel ha dezrannadur istorel un darvoud (pleustradenn war degouezh ar Bodedoù Ruz).

145

ARNODENNOU AR C'HENTAN DEREZ (Kerzu 1970).

Aozet e voe gant Kelc'h Debouvais e Bourc'h-Vriag d' an 28 Kerzu un dalc'h arnodennoù eus ar c'hentañ derez, kentañ hag en bloavezh. Setu testenn an amprouennoù a voe roet d' an emstriverion.

Arnodenn Kentañ Bloavezh

1. Amprouennoù dre skrid.

a. skrivadenn (40 poent) : arroud eus " An ti a drizek siminal " gant Roparz HEMON.

« En ur zañsal e selle ouzh Hubert, azezet en ur c'horn, ur bern merc'hed en-dro dezhañ, o c'hoarzhin outo en ur c'hoari e akordeoñs. « N' eo ket souezh, » a soñje Youenn, « e kav hennezh gwelloc'h redek an tiez-dañs eget redek ar mor. Merc'heta, a dra sur, a zo gwelloc'h gantañ eget pesketa. Hag evel merc'hetaer, ne 'm eus ket gwelet alies e bar. Ar plac'h a oa gantañ dec'h da noz, ne ouzon ket petra a lavarfe mar befe amañ. » D' ar c'houlz-se dres, ez echue un dro-dañs, hag ur plac'h a gemeras kerkent plas an akordeoñs war e c'hlin. »

b goulennoù (20 poent) :

1) En-dro da biv eus ur bern merc'hed ?

2) Ouzh piv e c'hoarzh Hubert en ur c'hoari e akordeoñs ?

3) Piv a gav gwelloc'h redek an tiez-dañs eget redek ar mor ?

4) Petra a dalvez ar verboù-mañ : merc'heta, pesketa ? Roit verboù all stummet en hevelep doare.

5) Sevel en un doare all ar frazenn-mañ : « Hag evel merc'hetaer ne 'm eus ket gwelet alies e bar ».

verboù all stummet en hevelep doare.

2. Amprouennoù dre gomz.

a. yezhadur (20 poent) : pep emstriver en devoe da respont da dri goulenn a-douez ar re-mañ :

1) an orioù ; skouerioù.

2) bonator ha bonragor ; skouerioù.

3) rener, renadenn, verb ; skouerioù.

4) renadenn an anv ; skouerioù.

5) arver ar rannigoù-verb « a » hag « e » ; skouerioù.

6) kemmadurioù an anv war-lerc'h ar ger-mell ; skouerioù.

7) kemmadurioù an anv-gwan war-lerc'h an anv ; skouerioù.

b. divizadenn (20 poent) : un divizadenn a voe gant pep emstriver a-zivout e vuhez pemdeziek : e vicher, ar gêr ma emañ o vevañ, ar broioù a anavez, h.a.

145

Arnodenn Eil Bloavezh

1. Amprouennoù dre skrid.

a. skrivadenn (40 poent) : STER HON ISTAR (arroud eus ar pennad embannet war ar gelaouenn **Emsav** : niverenn 5 ; pajenn 101 ; Mae 1967) :

« Moarvat ne ra ket diouer dimp al levrioù diwar-benn Istar hon bro. Hogen ne gav ket dimp e c'hellomp bezañ laouen ganto. Da gentañ int bet savet gant gallegerion stummet gant ar sevenadur gall ha n' eo ket souezh eta mard eo diaes tennañ diouto ur gentel bennak e sell da stummañ amzer-da-zont ar vro. Ha pezh a zo kiriek d' an dra-se eo dres an diouer a skiant-varn a ra anezho meulganoù berrboel a-walc'h. Kredet e ve o lenn an oberennoù-se o deus graet ar Vrezhoned bepred o seizh gwellañ evit difenn ar vro hag ez eo aet houmañ da fall en abeg da zrougiezh hon enebourion pe an Dichañs nemetken. War veno ar skrivagnerion-se ez eo bet diskaret Breizh bepred eus an diavaez ; prest int dalc'hmat d' ober tud-veur eus kement hini en deus kemeret perzh en Istar o bro o tifenn - pe ober van da zifenn - « frankizoù » pe « wirioù » ar vro, goude ma n' o defe graet nemet siellañ faezhidigezh washañ hon Istar, evel Anna Vreizh. »

b. goulennoù (20 poent) :

1) Displegit ster ar gerioù : kiriek, meulgan, berrboell, ober van, faezhidigezh.

2) Ar verb « stummañ » a gaver div wech e derou an destenn-mañ : « gallegerion stummet gant », « stummañ amzer-dazont ar vro ». Klaskit spisaat e ster en daou arroud.

3) Pe ster zo d' ar stagell « goude ma » er frazenn diwezhañ. Savit ur frazenn all gant « goude ma » en hevelep ster ; hag ur frazenn o reiñ da « goude ma » ur ster all. Penaos e verker an diforc'h etre an daou ster ?

4) Penaos eo bet savet ar gerioù : galleger, meulgan, berrboel, oberenn, drougiezh, faezhidigezh ; kavit gerioù savet gant hevelep rakgerioù pe lostgerioù.

k. pennad da sevel (40 poent) : etre ugent ha pergont linennad. Roit da gompren penaos eo diaes da dud stummet gant ur sevenadur estren daneveliañ Istar ur vro.

d. yezhadur (20 poent) :

1) Klokaat frazennoù gant « ez eus », « eo », « emañ », « bez ».

2) Liammañ frazennoù gant ar stagelloù MAR (MARD), PEOGWIR, PA (PA'Z, P').

- 3) Liammañ frazennoù gant ar raganvioù MA (MA'Z, M'), NA (NAD, N'), A.
- 4) Liammañ frazennoù dre ar goulennata ameeun.

2. Amprouennoù dre gomz.

a. yezhadur (40 poent) : goulennataet e voe pep emstriver war bep hini eus an danvezioù-mañ :

- 1) an orioù hag an arver anezho.
- 2) an holl gemmadurioù diazez.
- 3) anvioù, verboù, adverboù, stagelloù, araogennoù.
- 3) elfennañ frazennoù, liammañ frazennoù,

146

b. divizadenn (40 poent) : pep emstriver en devoe da gomz war unan eus an danvezioù-mañ :

- 1) dezrannañ ar festoù-nnoz.
- 2) ar pesketaerezh en Orient.
- 3) an ehanoù.

Embannadurioù klok ar Bibl

Hepdale e teuio er-maez eil levrenn embannadurioù klok ar Bibl. An eil levrenn a gaver enni An Oberoù, Al Lizheroù hag An Diskuliadur (360 pajenn, ment " Al Liamm ").

Gant al levr-mañ e vo echu embann an Testamant Nevez hag er bloaz a zeu e vo embannet levrenn gentañ an Testamant Kozh. Gallout a reer rakprenañ betek ar c'hentañ a viz Gouere.

Priz war baper bibl niverennet : 30,00 lur franko e-lec'h 35,00 lur.

Priz war Bouffant : 22,00 lur e-lec'h 27,00 lur.

Mlle J. QUEILLÉ, 47, rue Notre-Dame, 22 - Guingamp - c.c.p. 1136-82 Rennes

Ul levr kentelioù

Dont a raio ivez er-maez en deizioù-mañ ul levr kentelioù eil bloavezh gant Per Denez. Ennañ e kavor pennadoù, poelladennoù ha yezhadur.

Ul levr 180 pajenn - Priz : 15,00 lur.

Erratum

Ur fazi-mouladur a zo bet lezet e troidigezh ar barzhoneg " Kan da Afrika " gant Yann Talbot (" Al Liamm ", niverenn 144, paj. 30). E-lec'h « Dreist ar Bed klemmoù ar gwent er palmez-doum », e ranker lenn : « Dreist ar Bed ha klemmoù ar gwent... ».

AL LIAMM 146

TAOLENN

Tour an Arvor	151
Digenvez gant JORD KLER	158
Brezel ar Sivi gant ROJER BRISSON	170
David Swansa gant N. HAWTHORNE (tr. R. Hemon) .	183
Istor Breizh La Borderie gant ROPARZ HEMON	190
Skoilh d' ar c'hresk armerzhel ? gant ALAN HEUSAFF	198
Stad an Iwerzhoneg .	206
Notennoù	208

TOUR AN ARVOR

I

- Piv ac'hanoc'h, e ribl an dour,
 Tudou,
 En deus gwelet, e beg an tour,
 E beg tour krenn kastell Arvor,
 Daoulinet, 'n itron Azenor ? -

- An itron hon eus-ni gwelet,
 Aotrou,
 E prenestr an tour, daoulinet,
 Drouklivet he jod, du he sae,
 Ha sioul he c'halon koulskoude.

- II -

Erru kannadourien un deiz
 En hañv,
 Eus an uhelañ gwad a Vreizh,
 Sternioù arc'hant, dilhad melen,
 Kezeg glas, frank, ruz o difroenn.

Ar gedour, adal m' o gwelas
 O tont,
 Da gavout ar roue a yeas :
 - Setu daouzek den o tonet.
 Ar perzhier a vo digoret ? -

- Ra vo ar perzhier digoret,
 Gedour.
 Ra vint seder degemeret.
 Ra vo savet an daol timat,
 D' ober un degemer a stad. -

152

- A-berzh mab hor roue omp deuet,
 Aotrou,
 Da c'houlenn ho merc'h da bried,
 Da c'houlenn ho merc'h gant enor,
 Da bried ho merc'h Azenor. -

- A-youl vat e roin dezhañ
 Va merc'h.
 Paotr bras ha koant eo, a glevan.
 Bras ha koant eo va merc'h ivez,
 Kuñv evel evn, gwenn evel laezh. -

Eskob Iz 'n eured a lidas,
 Laouen.
 Pemzek devezh krenn e padas :
 Banvez, koroll ha kaniri,
 Ha korollerien o c'hoari.

- Mar plij ganeoc'h, va gwreg jolis,
 Bremañ
 Ez aimp-ni d' ar gêr war hor c'hiz. -

- Ne ran forzh, va fried nevez,
E-lec'h ma 'z eot ez in ivez. -

He mamm-gaer, evel m' he gwelas
Erru,
Gant ar warizi a vougas :
- An holl bremañ a raio stad
Eus ar beg-melen-mañ, moarvat !

An alc'houez nevez a garer,
Setu !
An alc'houez kozh a zisprizer,
Ha koulskoude, peurliesañ,
An alc'houez kozh eo an aesañ. -

Ne oa ket eizh miz echuet,
Me ' gred,
D' he lezvab he deus lavaret :
- Da ve ganeoc'h-hu, paotr a Vreizh,
Diwall al loar dimeus ar bleiz ?

153
Lakait evezh, mar em c'harit !
Sellit !
Rak ober a reot ma ne rit.
Lakait evezh, hag hep amoug,
Mirit ho neizh diouzh ar goukoug ! -

- Mar deo mat ha leal hoc'h ali,
Itron,
Bremaik e vo kroget enni,
E-barzh an tour krenn vo lakaet,
Hag a-benn tri deiz vo devet.

- III -

Ar roue kozh, 'dal ma klevas
Ar brud,
Rannet e galon, a ouelas.
E vlev diouzh e benn a sachas
- Gwa me ! Re gozh ez on, siwazh ! -

Ar roue kozh a c'houlenne,
Paour-kaezh !
Gant ar verdeidi neuze :
- Merdeidi, na nac'hit ket
Respont : va merc'h a zo devet ? -

- Ho merc'h ne deo ket devet c'hoazh,
Aotrou.
Devet e vo a-benn warc'hoazh.
E beg an tour emañ bepred,
Ha neizheur hon eus he c'hlevelt.

War he daoulin, e beg an tour,
Aotrou,
O kanañ sioul, o kanañ flour
« Ho pet truez, o va Doue,
Ho pet truez, truez oute ! » -

154
- IV -

Azenor o kerzhout d' an tan,
Avat,
Oa ken dibreder hag un oan,
Gwenn he dilhad ha diarc' hen,
Laosk war he skoaz he blev melen.

Azenor o kerzhout d' an tan,
Paourez,
Holl e larent, bras ha bihan :
- Pec'hed eo sur, pec'hed marvel,
Deviñ ur wreg tost da c'henel ! -

Bras ha bihan oa glac'haret
En hent.
He mamm-gaer hepken ne oa ket
- Ne deo ket pec'hed, nemet mad,
Mougañ an naer gant he c'hofad.

C'hwezhit, c'hwezhit, paotred seder,
C'hwezhit !
Ma pego an tan ruz ha taer ! -
- C'hwezhomp, paotred, c'hwezhomp hardizh,
Ma pego an tan-mañ a-dizh ! -

C'hwezhañ a raent, ha koulskoude,
A-boan
Ma save ar flamm, e varve.
C'hwezhañ a raent, c'hwezhañ, c'hwezhañ,
Mes an tan a nac'he pegañ.

Ma lavarar ar pennvarner,
Mantret :
- Labourat a rit en aner.
Boemet, 'michañs, an tan ganti.
Pa na zev ket, ret he beuziñ !

155
- V -

- Merdead, petra 'c'h eus gwelet
Ahont ? -
- Ur vag hep roeñv na gouel ebet,
Ha war an aros, da sturier,
Un ael e eskell digor-kaer.

Ur vag am eus gwelet a-bell,
Aotrou,
Enni ur wreg hag ur bugel.
He bugelig ouzh he bronn wenn,
'Vel ur goulm war vord ur grogen.

Ha d' e geinig noazh e poke,
Ken flour !
Ha dezhañ ken kaer e kane
« Toutouik-lalla, va mabig,
Toutouik-lalla 'ta, paourig.

Ma ve da dad hag az kwelfe,
Va mab,
En defe foug ganit-te.
Mes, siwazh, n' ez kwelo nepred,
Da dad, paourig, a zo kollet. » -

- VI -

Tud ar c'hastell zo saouzanet,
Muioc'h
Eget tud e kastell ebet.
Strafuih bras a zo er c'hastell :
Ar vamm-gaer zo ' vont da vervel.

- An ifern a zo dindanon
Digor.
Va lezvab ker, grit evidon
Un dra bennak. Me zo daonet !
Ho kwreg am eus dizenoret ! -

156

Ne oa ket he genou serret
A-vec'h,
Ma weljod un naer o tonet.
En ur fuc'hañ en em stlejas
Betek enni hag he mougas.

Hag he lezvab er-maez raktal,
Ha kuit,
Ha kuit 'trezek ar broioù all.
Hag eñ war zouar ha war vor,
Da glask keloù eus Azenor.

D' ar c'hornog ez eas, en aner
Da glask.
Klask a reas ivez er reter.
Er c'hreisteiz c'hoazh e reas tro wenn.
Hag eñ mont war-du ar sterenn.

O touarañ en un enez,
Un deiz,
'Welas ur paotrig war an traezh
O c'hoari e-tal ur wazhred,
O tastum kregin 'n e roched.

Melen e vlev, glas e lagad,
Glas-mor,
Heñvel ouzh Azenor, avat,
Ken na deuas kalon mab Breizh
Da huanadañ en e greiz.

- Piv eo da dad, va bugel-me,
Piv eo? -
- N' em eus a dad nemet Doue.
Va zad, tri bloaz 'zo, voe kollet.
Va mamm a ouel dezhañ bepred. -

- Piv eo da vamm ? Pelec'h emañ,
Mabig ? -
- Kannerez eo. D' ar poull-kannañ,
Du-hont, eo aet gant an toaliou. -
- Deomp-ni neuze d' he c'haout hon-daou. -

157

Pegañ ' reas e dorn ar bugel,
Ha prim
Ez ejont trema ar stivell.
En ur vont e verve ar gwad
E dorn ar mab ouzh dorn an tad.

- Mammig, savit buan, m' ho ped.

Sellit !
Setu va zad, 'zo adkavet,
Setu va zad, a oa kollet,
Distro, Doue ra vo meulet ! -

Meulet voe an Aotrou Doue
Ganto,
A ro an tad d' e vugale.
Distreiñ ' rejont laouen da Vreizh.
Bennozh an Drinded gant an treizh !

Digenvez

- I -

« Dre forzh kanañ Nouel e teu Nedeleg, » anavezet eo ar c'hrennlavar-se gant an holl. Ret eo anzav e chom Nedeleg amzer dudiusañ ar bloaz... n' eo ket hepken dre ma 'z eo amzer ar vakañsoù, mare ar profoù hag ar vugale o c'hoari laouen ha dibreder ouzh troad ar gwez-sapr karget a c'houlouigoù a bep seurt liv. Nann ! Marteze e vefe ret mont a-benn d' ar bloavezhioù tremenet ha tizhout harzoù pellañ ha donañ hor yaouankiz evit gouzout ha kompren petra eo Nedeleg. N' eus forzh, amzer al levenez eo, ur minc'hoarzh o strinkañ diouzh ar goañv ! ha gwell a se !

Er bloaz-mañ da vare Nedeleg 'ta, em boa pedet da zont du-mañ, war ar maez, en aer vat hor bro, va breur henañ Tangi. Seitek vloaz en deus warnon ha chomet eo dizemez. Ret eo lavarout e oa va zad ur martolod a-vrezel. Kalz en doa beajet war vorioù ar bed ha ne zistroe d' ar gêr nemet bep tri pe bevar bloaz pe zibaotoc'h. Bep tro e farde ur bugel d' e wreg. Tangi a voe an hini kentañ. Ne don nemet an niverenn pevar. Tri all a zo ganet war va lerc'h. Petra a faot deoc'h ! Pep hini a glask e dammig plijadur hag ar vartoloded marteze muioc'h eget ar re all, neketa ?

159

E gwirionez ne gredan ket en defe asantet va breur dont du-mañ. Daoust ma 'z eo bet ganet ha savet e Breizh emañ o vevañ e Pariz abaoe ken hir amzer ken ne fell ket mui dezhañ distreiñ da Vreizh nemet a vare da vare. Diaes eo din anzav ne garen ket kalz va breur. Feuket e vez an dud pa lavaran dezho an dra-se. Ret eo kompren : seitek vloaz warnon en doa eta, ha p' edon-me gant va ardoù kentañ edo Tangi war e studi e Pariz. Ouzhpenn-se, n' eo ket eñ en devije uzet treuzoù va dor : ne welen anezhañ nemet dibaot-tre. Kazi un estrañjour e oa deut da vezañ evidon. Ur gudenn all a oa : ne oa ket gwall gaozeer ; ne blije ket dezhañ marvailhat. Penaos 'ta skoulmañ darempredoù start ha karantezus gant un den - ha va breur e vefe - ken tavedek ? Peseurt enkrez a heskine, a grigne e spered en un doare ken dalc'hus m' en doa kollet ar c'hoant da gomz, ar blijadur da fistilhañ ? Dilavar e chome dirak an holl, hep kontañ nag e zoareoù dezhañ e-unan, ar pezh ne lakae ket an dud en o aez gantañ, na doareoù ar re all kennebeut. Anat e oa ne glaske ket Tangi ober an disterañ strivadenn evit kompren e hentez. Met abegoù all a oa, ha mezhañ am eus ouzh hel lavareut : un aotrou e oa Tangi, hag un tammig erez a vagen outañ evel just. Rak ret eo din bremañ komz deoc'h eus an den speredek-se, ganet dindan ur steredenn vrokus a skuilhas warnañ he donezonoù priziusañ. Goude e vachelouriezh bet e Kemper, hep poan ebet, a c'hellit krediñ, ez eas Tangi da Bariz da di un eontr, ur breur d' am mamm, e-sell da vont pelloc'h war e studi. Heuliañ a reas kentelioù mistri vrudet ar Skol-Veur, ha buan e tapas e aotreegezh war ar Reizh ha, goude, an doktorelezh. Er mare-se edon-me o trailhañ foñs va bragoù war bankoù ar skol lik ha digoust gouez dezho, skol hag a blije kement d' am zad !

Nann, ne c'hellan ket lavarout e hiraezhen d' am breur. N' anavezen ket mat anezhañ, setu holl. Pa groge amzer ar vakañsoù, pa zirede davet hor bro, war vord ar mor, bagadoù niverus a douristed, e krede d' am zud e teuje o mab henañ da ziskuizhañ ganto. Mar ne fazian ket, ne zeuas nemet ur wech en ur ober tri bloaz. An dra-se ne blije ket kalz dezho. Re yaouank e oan, met dija e santen e don va zammig skiant en doa faziet va breur en un doare bennak. A-wechoù e kouezhen war va mamm o huanadiñ spontus. Va zad a vallozhe ken e vallozhe, met ne daolen ket re a evezh ouzh e imorioù : dihentet e oa evel kalz a vartoloded war o leve hag a ya aliesoc'h da lipat gwerenoù d' an ostaleri eget d' ober war-dro o liorzhi.

Un endervezh - n' em oa ket unnek vloaz echu - edon o vastrouilhañ ur boelladenn bennak, em c'hoazez ouzh taol ar gegin, pa ziboukas Tangi e toull an nor. Paket berr e chomis evit doare rak lavarout a reas diouzhtu :

- « Perak an diaoul emhout o sellout ouzhin evel-se ? »

Skuizh e oan ha ne gavis netra da respont. Ne dis ket war e arbenn, met diouzhtu e lammis da gerc'hat va mamm a oa o kontañ kaozioù gant an amezegezed.

160

Ne chomas va breur er gêr nemet tri devezh. Petra a dremenas etrezañ ha va zud, morse ne ouezis an traoù. Gwelout a c'hellen hepken e oa bet kreñv o c'haoz. Va mamm a gunuc'he, va zad ne lavare netra, ha feson enkrez warnañ koulskoude. Tangi ne dae ket er-maez : gantañ e oa deuet un nebeut levrioù hag e veze o lenn diehan en ur gador-vrec'h, e traoñ al liorz, e disheol ar wezenn-fiez. Hag ez eas kuit. Diwar neuze ne oan ket prest d' e welout en-dro !

Direizh e vefe lavarout ne skrive ket d' ar gêr. Ingal **hag** ingal e tegase lizhiri a veze lennet hag adlennet aketus meur a wech. Gant unan bennak hag a ouie, em eus klevet e oa bet anvet va breur - hag eñ yaouank - da rener an implijidi, en un ti-bank bras. Beajiñ kalz a rae hag alies e resevemp kartennoù-post o tont eus Jeneva (ar re niverusañ) pe eus Londrez. Soñj mat em eus ivez eus ul lizher gant un timbr hag ur siell ispisial evit « Kentañ Beaj ar Yankee Clipper ». Eus New-York e teue. Hiziv an deiz, evel ma ouzoc'h, ez eo Tangi Rener-Meur an Ti-bank hag ouzhpenn-se, ezel eus Kuzul Etrevroadel ar Bankoù ! Evel ma welit, uhel e oa pignet mab-e-dad.

Ar bloavezhioù a dremene goustad, pep hini anezho o tegas e lod a drubuilhoù pemdeziek. Gwall-glañv e kouezhas va zad e-pad ar brezel. Mervel a reas pa oa Tangi e Marsilha. Ne erruas nemet div eur a-raok ma voe kaset ar c'horf d' an douar, ar pezh ne blijas ket d' am mamm na gomprens ket pegen diaes e oa beajiñ er mare-se.

Pa voe echu ar brezel e tistroas Tangi da Bariz. D' ar c'houlz-se e oan bet anvet da vestr-skol en ur gêriadenn vihan eus Bro-Leon : Lokmelar. Va c'harg kentañ e oa, ha lorc'h ennon evel just o vezañ « en tu all d' ar gloued », evel ma vez lavaret du-mañ. Bep bloaz e kejen gant Tangi pa zeue da Vreizh. A-boan ma chome ur sizhunvezh. Bewech e roe din-me ha d' am holl vreudeur ha c'hoarezed, ur prof bennak. Gantañ eo em eus bet oberennoù klok ha keinet-brav ar skrivagner gall Maupassant.

- « Enno e kavi un tolpad skrivadennoù evit da skolidi, » emezañ.

161

Ne c'hellas ket dont d' am eured. Goulennet e oa bet digantañ ober ur brezegenn en ur C'hendalc'h e Roma. Tud va danvez-pried ne felle ket dezho gortoz ha lidet e voe an eured heptañ ! Kas a reas dimp ur chekenn vrokus gant ur gerig hegarat.

Hag evel-se e troas ar vuhez, pep hini o heuliañ an erv boulc'het gantañ. Daoust hag e kreske diseblanted va breur en hor c'heñver ? Dont a rae nebeutoc'h-nebeutañ da Vreizh. Souezhet bras e voen eta pa resevis ul lizher digantañ e derou miz Kerzu diwezhañ : « ... sammet e vezan muioc'h-mui gant va labour. C'hoant hag ezhomm am eus da gaout devezhioù-diskuizh. Ha posupl eo mont da dremen Nedeleg ganeoc'h ? Na rit netra ispisial : sioulder eo a glaskan ».

Setu perak e oamp bodet, en deiz war-lerc'h Nedeleg, em sal-debriñ. Ganeomp, va mignon Gweltaz, kelenner e Roazhon, deuet ivez da dremen un devezh du-mañ.

- II -

Goustadik e kouezhe an noz en ur c'hronnañ pep tra gant ur skeud difiñv, disneuz. Stummet fall e oa an amzer hag avel but ar goañv he doa skubet an

delioù krinet ouzh troad ar c'hleuz e-traoñ al liorz. Er-maez, dirak dorioù gwerennet ar saloñs e c'hoarie ur c'hazhig du deuet davedomp n' ouzon dare eus pelec'h. Edo o klask e dammig begad, moarvat. Tenn e vez buhez an anevaled memes tra, pa ne vez ket yac'h an amzer... A-dreuz ar gwer, e sellemp outañ o skrapet an douar noazh.

Goude merenn - unan fonnus evel ma teree ouzh va c'houvidi, tud a zoare anezho - e oa bet bourrus an endervezh. Prizet hor boa tomnder an ti, strak ar c'heuneud er siminal, ha ni hanter-c'hourvezet en hor c'hadorioù-brec'h blot ha don.

Hag ar gaoz da vont en-dro ! Gweltaz, bepred skañv e bluenn, en doa lennet deomp e gontadenn ziwezhañ : " Daou o vervel " an titl anezhi. Displegañ a rae ar menoz-mañ enni : n' eus ket a garantez c'hlan. Lavarout a rae : « Ar vrasañ karantez ne c'hell ket derc'hel penn ouzh stroñs ar vuhez, ouzh an disterachoù pemdeziek... Ar garantez ?... ur c'hastiz eo nemetken ! » pe c'hoazh : « Digreskiñ buan a ra ar garantez pa ne da mui war gresk ».

162

Ya, un den fastet e oa deuet Gweltaz da vezañ. Tangi ne lavare netra, nemet e talc'he mui-ouzh-mui da grizañ e dal, evel ma c'hoarvez alies gant un den prest da enebiñ reut ! Huanadiñ a reas en ur dremen e zorn war e vlev. Ha goustadik e lavaras :

- « Laeret eo bet ar garantez diganeoc'h, Gweltaz ! Ne chom mui en ho kalon nemet dismantrou ! Peg eo ar follentez ennoc'h ! Diaes eo a-wechoù dont war-gil met an hini en deus anavezet ur garantez wirion ne c'hell ket ankounac'haat ! Marteze n' eo ket dre ho kwall ! »

Den ebet ne respontas.

Sevel trumm a reas Tangi diwar e gador-vrec'h. Stlepel a reas e damm sigaretenn er podig-ludu a oa war an daol. Ar moged a gendalc'has da sevel en ur droidellañ ! Trabidellañ a rae va breur evel un den mezh en ur dostaat ouzh Gweltaz. Dirazañ e chomas a-sav :

- « Ne vezan ket mestr warnon va-unan pa glevan diotachoù evel-se !... An dud a gomz bepred eus traoù n' anavezont ket mat, traoù distreset gant ur spered lennegel... luzius eo an hent-se ! N' eo ket deoc'h, Gweltaz, skrivañ diwar-benn ar garantez... din-me ne lavaran ket ! »

Mont a reas da azezañ en-dro en e gador. Tennañ a reas ur sigaretenn all eus ar pakad a oa war an daolig dirazañ. Ar c'hwezenn a bizenne war e dal. Er gegin e klevet ar merc'hed oc'h ober war-dro al listri. Va mab Ronan en doa lakaet ur bladenn da dreiñ, ur bladenn gant Alan Barrière e oa, a gredan. Dre an dorioù chomet digor e tiskenne ar c'han betek ennomp.

Sabatuet e oamp ! Klask a reas Gweltaz ober e baotr difrom, met Tangi a yeas diouzhtu pelloc'h gant e gaoz : « ... Ya, din-me ne lavaran ket !... Evidon-me ez eo ar garantez un dra c'hlan, a-wechoù c'hwerv he douster, ha pounner he doare. Hogen ne c'heller ket dinac'h ur garantez don : honnezh a lak ur siell diziverkus en hon ene ! Anavezet em eus un istor a garantez wirion : va istor-me ez eo ! »

Pep hini ac'hanomp a selle mantret ouzh begoù e votoù. Dilavar ! Ha ni da selaou an istor sebezus-mañ.

.....

163

D'ar c'houlz-se edon e Pariz oc'h echuiñ va studioù. Labouret start am boa e-pad bloavezhioù ha kemeret em boa poan ha soursi evit gonit ar garg dibabet ganin. Tizhet e oa ar pal a-benn ar fin. Edon o paouez bezañ anvet da rener an implijidi en ti-bank ma 'z on deuet da vezañ ar rener anezhañ diwezhatoc'h. Ur

garg eus ar c'hentañ, gounezet war-bouez ul labour, pennek ha diehan.

... 1937 ... Mezheven ! Gouzout a rit pegen dibreder e veve an darn vuiañ eus an dud kent ar brezel. A-raok kregiñ gant va micher e fellas din mont da Vro-Italia gant va mignon Andreu Berthou, eus ar memes oad ganin, hag en doa kaset e studi-a-vedisinerezh da benn ! Ha ni da vont en tu all d' ar menezioù, d' an Alpoù, dibreder a galon ha skañv a spered. Arc'hant a-walc'h hor boa en hor chakodoù, a-walc'h da vihanañ evit c'hoari hor furlukined e-pad teir sizhun. Petra goulenn muioc'h ?

Daoust dimp da vezañ paket ur barr-amzer fall en ur vont er-maez eus Piombino, ez eo ret anzav ne voe ar veaj nemet ur bourmenadenn plijus ha disourisi. Un ehanig a rejomp e Roma. Andreu ne blije ket dezhañ arvestiñ ouzh « dismantrou ar re gozh » evel ma lavare. Un devezh hepken a dremenjomp e kêr. Ne fellas ket din chifañ va mignon met kerse a oa ganin. Ne vern ! Diwezhatoc'h e tleen distreiñ meur a wech da Roma ha klask gouzout hiroc'h diwar-benn « ar re gozh » evit va brasañ plijadur. Edomp o tostaat ouzh kêrig Sapri, e kreisteiz ar c'hourenez. Bep bloaz ez ae familh Andreu da dremen ur miz bennak, e-kerz an hañv, en un ostaleri pell diouzh an hent bras. Anavezet mat e oa evel just Andreu Berthou gant tud an ostaleri-se. Kerkent ha ma chomas ar c'harr a-sav dirak an nor, e voe gwelet perc'henn an ti o tont davedomp en ur zibunañ kement a gazioù hag en ur ober kement a jestroù ma chomis ur pennad mat hep gellout diskenn ar pakadoù. Komz a rae Andreu un tammig italianeg. A-wechoù e rae fazioù bras met brav a-walc'h e teue gantañ memes tra. Perc'henn an ostaleri - Nuzzo a veze graet anezhañ - a oa un den bigofek, bepred o jestraouiñ hag fistilhañ, hag atav oc'h ober goap pe o kontañ flabaj evit farsal. N' eus forzh ! Akuit e oa ar paotr-se war an aozañ-boued. Eno eo em eus tañvaet pizzaoù ha soubenn-besk eus ar re saourusañ !

Devezhioù kaer-dreist a renjomp er waskijenn dudius-se. N' ho skuizhin ket o tibunañ deoc'h hor rambreoù war an traezh, gant ar mor glas o tarlipat goustadik ar reier, an oabl boull, ar geot kras, hag oc'h en em silañ etre ar gwez krabosek, kan ar skrilhed-douar : ha me ' oar me ! Nann, an dra-se 'zo evit ar varzhed, ha ne don tamm ebet broudet gant an Awen !

164

Bemdez ez aemp da gouronkañ pe da besketa gant paotred ar vro, lorc'h enno o kaout en o bagig ur medisin yaouank eus Pariz, mab ar medisin a oa anavezet ganto dija ! Ha gouzout a rit ar c'hrennlavar : « Pa vez prizet an tad e vez roet madigoù d' e vab ! ». Tanfoeltr forzh ne raent eus va diplomoù-me : daoust da se ne vagen droug ebet ouzh va mignon ha va lod a blijadur - hag a besked - em beze koulz hag eñ ! Diouzh an abardaez e c'hoariemp ar c'hartoù pe vouldoù en ostaleri, met skuizh gant bourouell diehan hon ostiz e skoemp drantik war-du Sapri. Lip-e-bav a veze graet ganimp e tavarn " Ar Valafenn Aour ", e korn plasenn Tonessi. Eno e kejemp gant plac'hed yaouank - studierezed an darn vuiañ anezho - ha na oant ket eus ar re fallañ da farsal, a c'hellit krediñ !

Siwazh, un mestr bras eo an Amzer, ha re vuan e teuas dibenn Mezheven. Gant ur c'hofad-keuz e loc'hjomp diouzh ar baradozig-se, en ur drugarekaat hon tavarnour rec'het ken ma oa rec'het, hag a ouele dourek evel ma c'hell ober hepken tud bro Italia ! Ne oamp ket evit hiraat hor vakañsoù : Andreu en doa prometet kemer lec'h ur medisin eus Pariz hag a yae da Garnag da dremen e goñjeoù. Ne oan ket evit chom va-unan : kenavo 'ta d' ar fulennoù italiat !

D' an tri a viz Gouere e krogas Andreu gant e labour.

Ne vez ket kalz a dud d' ober war o zro evit ur mezeg er mare-se eus ar bloaz : an amzer n'eo ket klañvus. Pedit a reas ac'hanon da chom gantañ un nebeut devezhioù. Asantiñ a ris a-greiz-kalon. E gwirionez n' em boa tra d' ober, ha hir e kaven an amzer. Andreu, diouzh e du, a rae war-dro e bratikoù, an darn vuiañ anezho plac'hed yaouank kempenn war o gwenneien ha bepred o klemmichat war o remm, o foan-benn pe red o gwad ! Diouzh an noz ez aemp laouen da zeverrañ hon amzer d' al lec'h-mañ-lec'h.

Un abardaevezh - ur yaouezh a gredan - va mignon o tistreiñ diouzh ti ur glañvourez bennak, a gemennas din en doa pedet e vignon Jerman hag e c'hoar Elena : aet e oa o zud kuit ivez.

Ar wech kentañ e oa din kejañ gant Elena.

165

- III -

Elena ! Iskisat tra ! Amgredik evel ma oan, n' em bije morse kredet e c'hellje c'hoarvezout ganin ar pezh a gouezhas war va chouk, a-daol-trumm, evel ul luc'hedenn. Diouzhtu e santis e don va ene e oa hi ar plac'h nemeti, plac'h va buhez. Penaos envel al liammoù a skoulmas rak-eeun hor c'halonoù ? Ar gerioù ne dalvezont netra, an dra-se a zo diaes a-walc'h da gompren.

Ha kaer e oa Elena ? Ne oa ket ur goantenn met diskouez a rae bezañ ur plac'h yac'h, bagol, doareoù seven ha fur dezhi. He dremm a vousec'hoarzhe goapaus, he mouezh a zassone flour evel ur vousekomz kanus. Liv ur plac'h a-feson a gavis warni diouzhtu. Speredek e oa. Gwelout a ris ne guzhe netra, ne gaerae mann. Eeun ha reizh e oa he diviz. Kavout a raen dezhi ur skiant-poell don hag e veizis he zalvoudegezh gwirion. Edo d' an ampoent o kas he studi war-raok e sell da gaout ur skolveuriekadur war al lizhiri. Diwezhatoc'h e lavaras din he doa savet ur pikol tezenn diwar-benn Rivarol.

Un abardaevezh plijus a dremenjomp. Evit doare o doa Jerman hag Andreu lipet meur a vanne : c'hoarzh skiltrus Andreu a yae war gresk hag e kroge da vale war-zastum, ar pezh a ziskoueze anat e oa tomm d' e fri ! Eskemmañ a rejomp, Elena ha me, komzoù a bep seurt diwar-benn hor studioù, hon diduelloù, al levrioù a blije dimp. Ur songarourez touet e oa Elena, ha pa groge da varvailhat a-zivout ur sonour bennak ne veze ket prest da ziskregiñ diouzh ar gaoz. Ne lamen lagad ebet diwarni pa 'z ae he c'haoz en-dro. Kreñvoc'h-kreñvañ e skoe va gwad ouzh va daouividig ha dija e santen, em c'hreiz, e vefe diaes din chom hep he gwelout. Lennet em boa war ur gelaouenn bennak - hep teurel re a evezh - e oa un abadenn sonerezh-kambr da vezañ d' al lun war-lerc'h, e saloñs an ostaleri vrudet " An Tri Roue ". He fediñ a ris start da zont ganin d' an abadenn-se hag asantiñ a reas d' am fedenn gant plijadur.

Nag eskuit e vez an Tonkadur ! Ne vez ket gwelet o tont ha dija en deus digoret e zorioù ha c'hwezhet warnomp avel e follentez ! An abadenn sonerezh-kambr-se a voe kammed kentañ hon darempredoù. Aes e oa dimp en em welout rak netra n'em boa d' ober c'hoazh hag Elena a vefe hep he zud evit ouzhpenn ur miz. Disoursi e vevemp, oc'h ober pourmenadennoù liesseurt e Pariz ha tro-war-dro. Didud e oa ar gêrbenn hag aozet hor boa meur a valeadenn d' al lec'h-mañ-lec'h dizarempred. Bremañ, pa choman digousk en noz, e hiraezhan d' an amzer-se !

166

Pa zeuas deiz al labour evidon - va labour kentañ goude studioù hir ha poanius - e oamp deuet da vezañ Elena ha me, mignoned vras, muioc'h eget daou vignon zoken ! Ar vuhez eo, neketa ? ha ma ne ra ket ar yaouankizoù o mad eus o follentez, ne dalvez ket ar boan na bevañ na bezañ yaouank.

Divizet e voe ez afen da saludiñ he zud kerkent ha ma teufent en-dro. N' em boa ket aon rak ur goulenn reizh, graet hervez reolennoù an dereadegezh yourc'hizel. Protestanted dibleg, dic'hoarzh, didrugar, strizh o menozioù hag un tammig c'hwerous e oa tud Elena. Ne zarempredent den ebet ha ganto ne oa o vevañ, evit o servijañ, nemet un intañvez kozh. Andreu ne gompren ket penaos o doa lakaet an dud-se war an tamm douar-mañ bugale ken disheñvel diouto !

N' anavezen ket anezho evel just. Dija em boa prenet ur roched nevez pa 'z erruas, ur beurevezh bennak, ur pellskrud o lavarout da Elena e oa kouezhet klañv he mamm : pedet e oa da zont buan daveti da Nermouster, e-lec'h ma tremene he zud o vakañsoù en o c'henkiz. Chom a reas Elena ouzhpenn ur miz e Nermouster. E derou Here hepken e tistroas da Bariz pa voe he mamm e-maez a riskl. Kerseet

hag ankeniet e voemp hon daou : daoust d' he mamm da vezañ rust en he c'heñver Elena he c'hare kalz. Ouzhpenn-se e oa daleet hor mennad. War wellaat ez ae ar vaouez met ar mezeg a c'hourc'hemennas dezhi chom e Nermouster ur pennad mat evit diskuizhañ ha kreñvaat. Divizet e voe e teuje Jermen da gerc'hat e dud e-kreiz miz Kerzu evit tremen gouel Nedeleg e Pariz gant o bugale. Marteze n' em eus ket lavaret deoc'h e oa kozh an tad, war e leve edo, na ne rae bremañ nemet merañ ar madoù en doa bet a-ziwar-lerc'h e dad, un den pinvidik, marv peuzyaouank pell 'zo, karget a beadra.

167

Daou viz hor boa dirazomp 'ta met hir e vez daou viz evit amourouzien. Pa 'z erruas amzer Nedeleg e oa keloù gant Elena abaoe tost da dri miz ! N' eo ket bragal a oa d' ober ken. Ha koulskoude un dra boutin a-walc'h a oa c'hoarvezet ganimp. Ne oa ket da dermal hag anat e oa an dibab : an trec'h pe al lamm. Evit lakaat an trec'h diouzh hon tu, n' em boa nemet mont da gavout an dud-se, ober ur goulenn-dimeziñ dereat, ha dreist-holl lakaat an traoù da vont buan en-dro. Gout a ouien mat e vefe gwall-luziet ar gudenn da ziskoulmañ. Penaos e tegemerfe an dud-se ur mank ken dichek d' ar reolennoù o doa renet o buhez penn-da-benn en un doare ken strizh. Na kasasat tra ! Ha taolet e vefen er-maez eus an ti evel un torfedour ? Hag un torfed e oa ? Nerzhus ez eo bepred ar garantez wirion ha gouest eo da zallañ ar spered ha da herzel ouzh an den d' en em vestroniañ e-unan.

Din-me 'ta e oa kas da benn ar pezh hor boa divizet.

Un nebeut deizioù goude distro mamm Elena e trec'his war va nec'hamant hag ez is d' ober anaoudegezh gant danvez va zud-kaer. Ne oan ket prest da c'hoari va furlukin, da c'hagouilhat ne lavaran ket. Dre wall-chañs e oa bet galvet Elena d' ar Skol-Veur en deiz-se. Va unan-penn en em gavis eta evit kanañ diskan « ar paotr-a-diegezh-mat » kouezhet e karantez gant o merc'h. Gant danvez va fried e oa bet divizet e vefe diskleriet an traoù en un doare doujus, « hep spisaat dre ar munud » evit ar mare. Re wan e oa ar baour-kaezh itron evit dibunañ dezhi krenn-ha-krak ur frazenn a seurt gant : « Emaomp o vont da zimeziñ buan rak ho merc'h a zo en em gavet keloù ganti... hag all... ».

Yen hag un tammig dihegar e voe ar weladenn. Dirazon edo daou gozhiad tavedek, malañjer, ha ne glaskent ket zoken bezañ seven. Luziet e chomis em c'homzoù. Pegen kozh e oa o doareoù ! Ar vamm dreist-holl, souchet er gador-vrec'h, a selle pizh ouzhin, disfizius, ha bepred o vont war va c'homzoù ! Buan e troc'has :

- « Elena n' eo ket gwall-hir he zeod peogwir n' he deus lavaret tra diwar-benn ho tarempredoù ! Souezhet ha displijet omp bet hon-daou o welout e oa kroget an darempredoù-se e-pad ma oan-me e riskl da vervel. Pa ne vez ket ar c'hazh en ti e c'hoari al logod ! N' ouzon ket peseurt irienn, petore divergontiz dizonest hoc'h eus ijinet ! »

... Kenderc'hel a reas ar gaoz e-pad un hanter- eurvezh bennak war ar memes ton. Anat e oa e oant bet feuket o vezañ chomet ken pell hep gouzout e oa kroget en o merc'h ar c'hoant da fortunañ.

168

... Ne felle ket din lavarout da Elena pegen gloazet e oan bet gant degemer dic'hras he zud. Vad a reas din bale a-hed ar straedoù. Tamm ha tamm e talc'his war lammou va c'halon... Gouest e voen d' ober min vat dezhi pa gejis ganti en ur c'hafedi war vali Sant-Mikael. Krenañ a rae. Anavezout mat a rae strizhder-spered he zud. Livañ a ris gevier. Ken gwasket e oa he c'halon koulskoude ma prometis dezhi distreiñ d' he zi ar buanañ ar gwellañ e dibenn ar sizhun war-lerc'h, rak d' ober em boa mont da Londrez antronoz vintin evit ur vodadeg vras...

... Kuit ez eas Elena... he gwelout a ran c'hoazh, mistr, o steuziañ e brumenn yen miz Kerzu.

... Ar wech diwezhañ e oa !...

..

Paouez a reas Tangi un tachad... Da belec'h e nije e soñjoù ?

Melkonius e voude ar sonerezh e kambr va mab, a-us deomp !

..

« Kalon mab-den a zo leun a c'hoant, Doue a ra diouzh e venoz avat ! »
Morse ne welis Elena en-dro !

Diwezhatoc'h, kalz diwezhatoc'h e ouezis ar pezh a oa c'hoarvezet.

An deiz war-lerc'h hon emweladenn - edon o paouez erruout e Londrez - e kouezhas trumm Elena a-hed he c'horf er gegin : ur fallaenn da heul ar stad m'edo, moarvat ! Galvet buan e voe ar mezeg evel just. Hemañ, ne glaskas ket a dro evit lavarout ar wirionez.

- « Netra c'hrevus, a lavaras d' ar vamm kent mont kuit, drougerez eo, setu tout ! »

N' eo ket diaes divinout peseurt karnach a savas en ti : tamalloù, mallozhioù ha me ' oar ! Nebeut a dra a ouzon ...

A-raok va disparti em boa lavaret dezhi : ma c'hoarvez un dra bennak, pellgomz d' am sekretourez : houmañ a roio dit va chomlec'h e Londrez. Dre wall-chañs ne ouien ket, a-raok mont kuit, e pe ostaleri e vije degemeret an dileuridi. Rener ar bank, hag a oa o veajiñ ganimp, a dlee kemenn hor chomlec'h d' hor burev kerkent hag erruet du-hont.

Amañ e skoas kalet an Tonkadur...

168

Kerkent ha ma teuas hec'h anaoudegezh dezhi en-dro e pellgomzas Elena d' am sekretourez. Evit un digarez dister, ur gwall-zigarez siwazh evidon, e oa aet houmañ kuit kent an eur dleet, hep spisaat d' he c'hamaladez pelec'h he doa skrivet chomlec'h ha niverenn-bellgomz hon ostaleri e Bro-Saoz. Teir gwech ec'h esaeas va faour-kaezh muiañ-karet kaout an niverenn daonet ! Goulenn a reas digant Andrev... en aner !

D' an noz ez eas an tabut war washaat en ti. Fuloret, feuket e don o c'hredennoù dibleg he mamm hag he zad a daolas o binim warni hag he skandalas didruez.

- « Warc'hoazh e skarzhip da Nermouster da guzhat hor mezh, » a lavarent dezhi.

Spontet - ha petra a rafe-hi e Nermouster pell diouzhin - peseurt menozioù diboell a droas en he fenn ? Den ne oar ! Aon dall a grogas enni. Didrouz e savas eus he gwele e-kreiz an noz, en em silas er-maez, diskiant, dindan glav pegus miz Kerzu !

Tregont vloaz 'zo abaoe an nozvezh vantrus-se !

Da belec'h ez eas ? Den ebet n' he gwelas ne gejas ganti. Kompren a rit : den ebet ! Enklaskoù pizh a zo bet graet, ravellet eo bet ar ster, netra ! Paeet em eus poliserien brevez evit pleal gant an afer, heuliet em eus roudoù ar c'helachoù fallakrañ, skrivet em eus e pep lec'h evit gouzout hag-eñ e oa keloù eus ur plac'h yaouank kollet ganti pep eñvor... War wanaat ez eas va gweled dre forzh lenn, studiañ, eilskrivañ pennadoù ar c'helaouennoù, lizheroù dizanv, dezrevelloù displetus !

En aner !

Bevet em eus er spi donañ : « Dont a raio en-dro ! » koulz hag en dispi
krisañ : « Marv eo ! n' eus ket da faziañ ! »

Anavezet em eus ar c'hoant diroll da vervel, da lazhañ, da huchal va imor,
da ouelañ war va eürusted distrujet.

Spontusaat tra ! Plijet on bet oc'h anavezout an diskonfort, an
droukpedenn, an aon, ar c'heuz da welout un huñvre ken kaer kouezhet en he
foull, a-daol-trumm...

Tremen a reas mizioù.

Ur sioulder peoc'hus a c'hronnas va ene.

.. ..

Met un deiz e welis e oan deuet da vezañ un den kozh !

Brezel ar Sivi

1. - Ur ger bennak e-giz raklavar

N' on ket paotr da gontañ traoù a-dreuz evit lakaat tud 'zo, gwall-droet o spered, da c'hoarzhin. Gwir-bater eo kement darvoud a zanevellan amañ.

Nebeut a dud a oar ez eo bet gwastet nevez 'zo tachenn Blougastell gant ur brezel diabarzh, ur brezel kuzh, unan eus ar re grisañ bet renet biskoazh war an douar, ar mab o sevel a-enep d' an tad, ar verc'h a-enep d' ar vamm, ar breur a-enep d' ar breur, pep kostezenn o lavarout edo an Aotrou Doue a-du ganti hag an Aotrou Doue o c'holeiñ E fas gant heug ha glac'har.

Penn-abeg ar brezelioù euzhusañ a vez kavet alies e traoù dister : un nebeut lizherennoù skrivet a-stlabez war ur c'hozh tamm paper, fri Kleopatra, divfeskenn Helena, ha me oar-me ! Ur ger, ur ger hepken, a vo kaoz eus ar brezel-mañ, ur ger difloupet ganin hep soñjal, ur gerig a netra, ankounac'haet kerkent ha distaget.

Ankounac'haet ganin-me, tamm ebet avat gant an hini a oa aet ar ger-se en he skouarn dehou, ar wrac'h daonet anezhi ha n' he doa ket komprenet e oan-me o farsal evidon d' en em zizober diouti. Klaskit 'ta avat pakañ hent gant ur ger o nijal. Hemañ a ya dre ar maezioù o sevel dre ma tremen avelioù yud an anken hag ar marv da zirollañ, ha n' eus tra ebet da herzel outañ d' ober e reuz, hag an dinoazañ ger e vefe.

Amañ, tud diskredik, kenkas ma vefe anezho, a c'houlennfe : perak n' hon eus ket klevet keloù diwar-benn Brezel ar Sivi digant ar skingomz ? perak n' hon eus ket gwelet war skramm ar skinwel paotred Plougastell oc'h en em gannañ kenetrezo ? perak eo chomet mut ar c'helaouennoù ? Ret eo din evit seurt tud reiñ un disklaeriadur bennak.

171

Dres d' an deiz ma tarzhas Brezel ar Sivi, edo ar Jeneral Degol, Doue d' e bardono, o paouez leuskel ur bramm. Seurt brammoù o doa bet a-viskoazh un heklev hollvedel. E-pad meur a zevezh ne vo anv er c'hazetennoù nemet eus ken burzhudus ur bramm, hemañ o meuliñ e hesonerezh, henhont c'hwekted e frond. A-benn ur miz avat e kilas Diskuliadeg ar Bramm Sakr d' an eil bajenn er c'helaouennoù. Plas a oa eta er bajenn gentañ. O vezañ ma oa trouz an armoù en e varr uhelañ dindan oabl Plougastell, kelaouerien 'zo a gemeras penn o hent davet Breizh. Kent dezho tizhout Roazhon avat, ur c'heloù all o lakaas da zistreiñ a-benn-herr da Bariz, evito da bignat er c'hentañ karr-nij a c'hellfe o c'has betek Londrez : Rouanez Bro-Saoz a oa kouezhet e karantez gant ur c'hozh manac'h Tibetan lous ha gadal ha leun a laou ruz e varvenn hir. A-hed mizioù ha mizioù ne voe mui kaoz dre ar bed-holl nemet eus ken brav un istor a garantez ma oa hini Tristan hag Isold ur c'heloù boutin en e geñver.

Evel an holl vrezelioù, Brezel ar Sivi a echuas. Echuiñ a reas avat en un doare iskis : deiz an arsav a voe un deiz a c'hloar evit an div gostezenn. Kelaouer ebet avat oc'h arvestiñ ouzh sinadur feur ar peoc'h : dre zegouezh e c'hoarvezas e oa an deiz-se un deiz a c'hloar evit Bro-C'hall ivez : dre hir boaniañ, a-bouez toullañ ha didoullañ, taerañ ha didaerañ, simantañ ha disimantañ, e oa deut a-benn paotred an hentoù da echuiñ trizek metrad gourhent, ha penn-rener Bro-C'hall en doa pedet renerien stad er bed-holl evit o digeriñ gant ardoù bras ha lidoù kaer-meurbet.

Setu penaos ha perak Brezel ar Sivi a grogas, a reas e reuz hag a echuas

hep gouzout da zen.

* * *

172

2. - Ar Gwall o tarzhañ

An afer a zeraouas e dibenn Mezheven, dres da zeiz diwezhañ ar vakañsoù a oan-me o tremen em ziig-hañv, savet war aod Keralioù, ur gêriadennig eus kumun Plougastell. D' an deiz-se, eta, goude kreisteiz, edon oc'h ober pezh a blij din ar muiañ er vuhez, da lavarout eo oc'h ober netra. Labaskennañ a raen en ur gador-vrec'h, ha lavarout ouzhin va-unan en ur barañ va selloù war korn pe gorn eus al liorzbig : ma vijen-me un den kalet war al labour, ez afen da zilouzaouiñ an alezioù, ez afen da ziskoultrañ ar c'harzh, ez afen... na petra 'ta ! Kaer eo huñvreal.

A-daol-trumm, e voen tennet er-maez eus va soñjoù gant kloc'hadenn an nor-dal : unan bennak a oa o c'houlenn digor. Sevel a ris, dibres ha mont war va gorregezh davet an trepas. Ur Blougastellenn gozh a oa aze, a-sav e toull an nor, ur vaouez krommet he c'hein, krazet ha roufennet he zal, n' em boa ket soñj bezañ kejet ganti kent. P' am gwelas, ez astennas ur baner davedon en ur c'houlenn kuit a zemata :

« Sivi ho pezo, aotrou ? Marc'had-mat evidoc'h-c'hwi, a-boan keroc'hig eget e koc'hu Brest. »

Gant ar mall a oa ganin da zistreiñ d' am labour, e respontis ken disoñj ha tra :

« N' em bo ket, itron, ho trugarekaat a ran. Sivi am eus bemdez digant un amezeg, evit netra.

- Evit netra ?

- Evit netra. »

Dispourbellañ a reas he daoulagad :

« 'Fell deoc'h lavarout e vez roet sivi deoc'h ?

- Ya, roet.

- Bemdez ?

- Bemdez, hag evit netra, pa lavaran deoc'h. Ho saludiñ a ran bremañ, itron hag... »

N' oa ket peurlavaret va c'homzoù ma lezas ar wrac'h he faner da gouezhañ, ar sivi o ruilhañ-diruilhañ war an douar. Spont ha mezh a strafuilhe he dremm. Treiñ kein a reas hag ankounac'haet ganti oad ha remm, redek d' an daoulamm er-maez eus al liorzbig, evel m' he dije gwelet mil diaoul du ha daou c'hant o klask he zennañ e don donañ an ifern.

173

Ur c'hruz a ris d' am skoaz : « Honnezh 'zo sot un tammig m' eus aon ». Bezet a vezo, poent e oa din mont war-dro ar malizennoù, da lavarout eo, reiñ alioù d' am gwreg a oa o leuniañ. Un hanter- eur goude, klozet ar stalafioù, serret an nor, karget ar c'harr, setu ni war hon hent. Ne voemp ket erru e penn ar pont bras, ma klevjomp an toksin o vrallañ e tour iliz Plougastell, ha nebeudig goude c'hwitelladenn boud an tangwall. Re a bres a oa warnomp, avat, evit ma 'z afemp da welout petra a c'hoarveze, ha kenderc'hel a rejomp gant hor beaj. Pezh a oa o tremen am eus gouezet diwezhatoc'h, digant testoù din da vezañ kredet.

Evidoc'h da gompren an darvoudoù da heul, displegañ a rankan amañ eo al lazhañ tad ha mamm pec'hed dister e Plougastell e-keñver ar Reiñ Sivi.

Ur wech aet er-maez eus va liorzhañ eta, ar gozhiadez he sivi a gemeras penn he hent davet ar vourc'h. Mont end-eeun avat, ha sioul ne reas ket. Er c'hontrol, hopal a reas ouzh kement den a c'hoarvezas dezhi gwelout er parkeier ha skeiñ ouzh pep dor a zigore war an hent. Dirak pep hini e tibune he fater. Da gentañ, diegus e kavas an dud krediñ ar pezh a lavare. Liv ar wirionez a skede war he dremm avat, ken na voe hepdale kendrec'het an holl, droug ganto o klevout un dra ken euzhus. Awen an Diougan a zibrade anezhi, ha krapat a reas gant roz ar C'hroaz-hent bleniet gant ur feiz kounnaret par d' an hini a leunie Per ar Manac'h pa oa eñ o prezeg kroaziadeg war grugell Vezelay. Jestraouiñ ha droukpediñ a rae-hi en ur genderc'hel diehan gant he hent. Tud kounnaret a zerede niverusoc'h-niverus ouzh he heul, hemañ o tilezel war an taol biñvioù ha chatal, hounnezh oc'h ankounac'haat laezh war an tan ha kig er forn. Klevet em eus zoken e oa bet gwelet tri den o tiboufañ er-maez eus un davarn en ur lezel war o lerc'h gwerennoù hanter-leun ; diaes eo krediñ ken bras ur burzhud avat. Forzh penaos, padout a rae toudoù ha toudoù d' en em veskañ ouzh an heuliadeg, ken na voent daou c'hant e Penn ar Roz, tri c'hant pa dreuzjont hent ar C'harv, ha tost da vil pa errujont war blasenn ar vourc'h. Ha petra a oa d' ober er vourc'h, nemet mont da gaout ar maer e vefe ? Poulzet e penn an engroez, an hini gozh a dreuzas war he lañs toull-dor an ti-kêr. Re strizh e oa an ti-se avat, evit d' an holl mont e-barzh. An dud a chomas eta o kantreal dre ar ruioù en ur addisplegañ kenetrezo pep munud eus ar gwalleur bet kouezhet warno. Unan, ur paotr dilu anezhañ, a yeas, dre e benn e-unan, da vrallañ kleier an iliz. Unan all, helebini gentañ, a lakaas c'hwitell an tangwall da vont en-dro - pezh hor boa-ni klevet war hent hon distro. Evel-se e voe kemennet ar reuz d' ar vro en he fezh. Tud a zerede bremañ eus pep korn, ha n' eo ket dre hent Keralioù hepken. Ar re nevez deuet o doa kaset armoù ganto, fuzuilhoù, penn-bizhier ha filc'hier. Unan en doa zoken a-dreuz e skoaz boest dir ur maskl-enep-aezhenn. Unanet an holl, dres evel e 14 !

174

A-benn ur c'hard-eur, dor an ti-kêr a zigoras a-nevez, hag ar maer e-unan en em ziskouezas, kollet gentañ e holl liv. Krenañ a rae e vouezh pa zistagas : « Dizenoret eo ar Vro. Gwashoc'h ha dizenoret, rivinet ! Me zo o vont da c'hervel ar c'huzul-kêr, evit ma vo gwelet petra zo d' ober. Mantret on e don va ene ».

* * *

3. - Kuzuliadeg ar c'huzul-kêr

En amzer ma komzan, kuzul-kêr a veze dalc'het en ur heuliañ reolennoù strizh ur roll-lidoù aketus. Da gentañ e veze dalc'het ur rak-kuzul, ha sal ar rak-kuzul hini ar bistro tostañ ouzh an ti-kêr e oa.

Setu eta an aotrou maer a-sav e-kichen ar c'hontouer, en-dro dezhañ, an holl guzulieren, en-dro d' ar guzulieren, ur vostad trouzus a frioù ranell, ken ma oa leun chouk ar bistro gant ar c'hement a dud a oa ennañ ha m' he doa bec'h ar baour gaezh vatezh o silañ he reor evit diskenn da bep hini e vanneig hini ruz. Safar ha cholori a save, ken a save, ha stlakañ div pe deir gwech a rankas sekretour an ti-kêr evit dont a benn da c'hounit un tammig sioulder :

« Grit evezh, an dud amañ ! Emañ an aotrou maer o vont da lavarout ur ger pe zaou. »

175

Pep hini a serras e c'henou, hag ar selloù a droas davet Kerdrañvad ar maer. Hennezh a reas ur skarz d' e c'hourlañchenn ha rannañ :

« Evel ma ouzoc'h, an eur zo grav. Saotret eo bet hor c'humun karet gant un torfed euzhus, hag ur vezh eo d' ar Vro en he fezh...

- Marv d' an treitour ! » a huchas unan e traoñ ar sal.

« Peoc'h ! Va lezit da gomz. » Ar maer a lipas foñs e werennad ha kenderc'hel :

« Galvet em eus 'ta ar c'huzul evit ma vo pleustret war an afer hep koll amzer. Ni paotred ar c'huzul zo ar re furañ eus ar vro, peogwir omp bet dilennet, ha me an hini furañ eus ar c'huzul, o vezañ ma 'z on bet dibabet da vaer. Soñj am eus bet koulskoude e vije dereat kaout ali digant un den a-bouez, ha setu perak em eus kemeret warnon da bediñ an aotrou person da gemer perzh er guzuliadeg...

- Gast nann ! »

An hini en doa troc'het ger d' ar maer, ar c'huzulier Jak a oa. Sailhañ a reas diouzh e blas, ruz e benn, dispourbellet e zaoulagad gant an imor a oa savet trumm ennañ.

« Ni, komunourion, ni zo kontrol ! »

Ar maer a vous'hoarzhaz :

« Perak 'ta e lavarfes atav : ni komunourion, o vezañ ma 'z out ar c'homunour nemetañ er c'huzul ?

- Chom da gaozeal ! Ni, komunourion a oar petra eo al lezenn, ha pediñ un estren da gemer perzh er c'huzul a zo a-enep d' al lezenn, hag a-enep da gelennadurezh Karl Marx ha Mao.

- Ne ran foutre gant da Garl Marx ha da Vao. Hag ouzhpenn-se, daoust ha ne gred ket dit eo ar Reiñ Sivi a-enep d' al lezenn ivez ?

- Mat, mar fell d' ar galotined kaout un estren er c'huzul, ar gomunourion o deus ar gwir da bediñ unan eus o choaz ivez.

- Ha piv e fellfe dit pediñ ? »

Jak a c'hagouilhas :

« Met... n' ouzon ket me... ac'ha gast ! » hag e skoas an dorn war ar c'hontouer : « Ni komunourion a fell deomp e vije pedet memestra gward-maeziou er c'huzul ! » Kuit a dabutal, ar maer a asantas : « Ra yelo unan bennak da gerc'hat an aotrou person ha gward-maeziou neuze... »

176

Hep dale e voent kavet o daou : er bistro e oant ivez.

Pa voe dikennet ha paeet gant an holl an eil troiad hini ruz degaset gant ar vatezh, ar maer a droc'has a-bouez-penn ar safar a oa savet en-dro : « Echu eo ar rak-kuzul, deomp d'ar c'huzul bremañ, » hag e kemeras penn e hent davet an ti-kêr, ar guzulierien, ar person ha gward-maeziou ouzh e heul.

Erru e sal ar c'huzul, ar maer a lakaas e ambrougerien da azezañ, o chom e-unan a-sav a-dreñv e daol, dres dindan delwenn blastr Marianna. Gourizañ a reas e skarf triliv ha kregiñ war un ton otus :

« Kuzulierien Kuzul Kêr Blougastell ! Abeg bras ar vodadeg emamp o terc'hel hiziv, zo kavout un diskoulm...

- Marv d' an treitour !

- Ali on ganeoc'h, feiz ! Arabat avat bezañ re brim war ar poent-se. Tud sivilizet omp, ha ne vo ket kaset an treitour d' ar marv ken buan ent-se. Dav eo

e vije harzet, reizh, gant an archerien, ha stlejet dirak al lez-varn. Ur prosez en devo, ur prosez gwirion, gant gwir barnerien hag un advokad d'e zifenn, ha ne vo kaset d' ar marv nemet goude bout harzet, difennet, barnet ha kondaonet hervez lezenn Justis ar Republik. Met, da gentañ holl, eo ret gouzout piv eo an treitour.

- Ya sur. Ha piv eo ?

- Siwazh, den ne oar. Tud Keralioù zo aet holl d' en em guzhat en o c'hêriadig.

- Marv da holl dud Keralioù neuze !

- Tav ! an dra-se n' eo ket da lavarout a vouezh uhel. Evel just, en un afer evel houmañ, gwelloc'h e vije kondaoniñ mil den direbech eget lezel unan kablus o chom digastiz, petra bennak e c'hellfe gwic'hal ha klemmichat Kevredigezh Gwirioù Mab-Den.

- Bez dinec'h, » a eilgerias unan, « Kevredigezh Gwirioù Mab-Den a chomo mut, nemet ur yuzev e vefe an treitour, ha n' eus ket a yuzevien e Keralioù. A-hend-all, diaes eo krediñ e c'hellfe ur yuzev reiñ un dra bennak, hag un dornad sivi e vefe.

- Ni komunourion... a laras Jak o sevel en ur harpañ e zivrec'h war daol ar c'huzul.

- Ha, hemañ en deus c'hoazh e vegad da zibunañ.

177

- Ni komunourion, zo tud desket e pep feson. Evidon-me, lennet em eus an holl levrioù bet skrivet gant pennoù bras ar gostezenn ruz, Karl Marx, Engels...

- 'P eus komprenet anezho ?

- Mao...

- Ar c'hac'her-kraoñ-mañ n' eo ket unan ruz, war a gredan, unan velen ne lavaran ket.

- Lenin, Bakourin, Kourtelin...

- A-walc'h, a-walc'h ! ha petra a vez lavaret diwar-benn ar Reiñ Sivi gant an toullad istrogelled-mañ ? »

Jak a bouezas war e lavar

« Ret eo ober ur brozesion !

- Ur brozesion ! » a vamas ar maer. « Prozesionoù zo tra an aotrou person. Goulennomp 'ta e ali digantañ. » Ur mousc'hoarzh kuñv a zeuas war vuzelloù ar person :

« Ali on, tostik bepred, gant ar gomunourion. Ar wech-mañ, n' on ket avat. Prozesioniñ a oa mat evit hon tud kozh, en amzer an obskurantism. Tud vodern omp bremañ, en ur iliz vodern. Daoust ha prozesionoù a rae Che Guevarra ?

- Feiz, n' ouzon ket, ha piv eo ar Che Guevarra-mañ ?

- Che Guevarra zo anezhañ ar pempet avielour, bet diguzhet nepell zo gant ar veleien vodern. Hon Tad Santel ar Pab n' en deus ket c'hoazh kredet e anavezout. Ret e vo dezhañ kodianañ avat, pa vo kavet an tu gant sovied ar gardinaled vodern d' ober e greñv er Vatikan...

- Tommoc'h eget bremañ e vo moarvat an deiz... » Ar maer a lakaas e glochedig da ziñsal evit troc'hañ berr d'an arguz a oa o vont da sevel :

« Peoc'h ! kuit a sorc'hennoù. Pell omp diouzh hon afer. Me oa ar maer, ha din me eo diskoulmañ ar gudenn. Ijinet em eus un dra ken brav ma ne gredan ket e vefe amañ den a gement a soñjfe sevel a enep din. »

Un ehan a reas, amzer da lezel ar re all da zigeriñ frank o divskouarn. Neuze e kendalc'has, leun e vouezh gant herrder ha lorc'h

« Ret eo deomp bardellañ an hentoù ! »

An holl a sellas outañ gant estlamm hag anaoudegezh. Pebezh den e oa o maer !

Pa voe tavet gant ar youc'hadennoù, ar maer a roas e urzhioù, dres evel ur jeneral o reiñ kefridi d'e gabitened a-raok dezho mont d' an emgann diwezhañ :
178

« Ra yelo pep hini d' e gêriadig. Ra vo dastumet an holl girri, ken dre dan ha dre gezeg, an traktourien, an tourterien, an erer hag an ogedoù, an dornerezed, ar viloioù, lañdosioù, gweturioù ar re vuturniet. Ra yelo gward-maezioù e pep lec'h gant e daboulin, evitañ da gemenn d' an holl emañ ar Vro en argoll. Ra vezo mobiliset an holl dud war o yec'hed, ken yaouank ha kozh, ken paotred ha merc'hed, evit ma vo kastizet an treitour ha restaolet enor ar Vro ! War-raok ! »

Echu ar c'huzul, e veze dalc'het ur goude-kuzul, ha sal ar goude-kuzul, hini ar bistro tostañ ouzh an ti-kêr e oa.

* * *

4. - Kentañ skoilh war hent an Trec'h

C'hoant kousket ne oa ket gant Plougastelliz er noz-mañ, hag abredig en em gavjont holl dirak an ti-kêr, bet lakaet da benngarter. Kent ruzell ar beure an dafar bardellañ hentoù a oa bet dastumet war ar blasenn hag hanter-guzhet en em gave ar c'halvar gant bep seurt mekanikoù war rodoù, darn nevez-flamm, darn merglet betek an askorn, traoù kevrinus a-ispilh outo. Labouret en doa ar maer a-hed an noz, a-gevret gant an eilvaer ha gward-maezioù. Studiet e oa bet ganto, war daolenn-douaroù ar c'humun, an tu hag al lec'h gwellañ da vardellañ an holl hentoù a gas da Gerialioù, hag ivez ar re vunutañ eus ar gwenodennoù, ribinoù ha gwenodennoù. Divizet e voe memestra e pleustrfe an eilvaer gant seziz ar gêriadennig villiget e-keit ha ma 'z afe ar maer e-unan war an hent-bras evit e stankañ gant al lod brasañ eus an danvez brezel.

Krenn ha krak e voe graet an taol, ha yaouank c'hoazh e oa an deiz pa voe peursavet ar bardelloù e pep lec'h merket gant furnezh ar maer, an hini bravañ hag uhelañ anezho o vezañ an hini bet berniet war hent bras Brest-Kemper.

179

Ar maer a oa chomet amañ e-kichen, hag a c'hortoze. Petra a c'hortoze-eñ ? Gortoz a rae pezh a vez peurvuañ gortozet gant an dud o vardellat hentoù. Gortoz a rae an Dazont da zont, daoust dezhañ bezañ chomet hep bezañ lennet linenn ebet digant Teilhard de Chardin. Ur paotr eus ar c'hentañ eo an Teilhard-mañ. N' eo ket n' eus forzh piv en dije kavet pezh en deus kavet, da lavarout eo, ez a an amzer o red diehan, warc'hoazh o tont atav war-lerc'h hiziv ha da vezañ hiziv d' e dro, an Tremened o c'henel dibaouez diwar an Dazont, ken na c'houlennfen alies ouzhin va-unan penaos e c'hallfe paotred ar PTT ha Ronan Huon sevel o deziadurioù, godell pe voger, kent amzer Teilhard de Chardin. Tud fallakr e ra goap. N' on ket eus ar re-se avat, hag ar brasañ resped e vagan ouzh ur prederour a oar koulz hag eñ displegañ kelennadurezh La Pallice en ur implijout yezh ha troioù-lavar Jean-Paul Sartre.

E-keit-se, ur steudad kirri harzet a astenne a bep tu d' ar vardell. Blenierien ha blenidi o doa kuitaet o boestoù mir dre-tan hag a valee dibres war

ribl an hent. Konnar ebet enno, na souezh kennebeut, na c'hoant-gouzout zoken. Ur vardell war an hent zo ur vardell war an hent ha netra ken. N' eus nemet gortoz an amzer da dremen, hep soursial gant ar rak hag ar perak. Darn o doa enaouet tommerezed-dre-alkool, evito da dommañ ur banneig bennak, darn o doa staget gant stigmañ tinelloù er Pradoù tostañ, kenkas ma vije an afer da badout meur a zevezh. Kañfarded Plougastell a oa deut ivez, pep hini gant div pe deir fanerig sivi, a glaskent gwerzhañ, gant doareoù tagnous, da brizonidi an hent.

A-benn ar fin en em ziskouezas an Dazont. En em ziskouez a reas dindan stumm daou archer a ziskenne gant hent Daoulaz war o mirc'hi-houarn. Diskenn a rejont diwar o c'hezeg-houarn e traoñ ar vardell, ha komz ouzh ar maer en ur saludiñ anezhañ :

« Ur vardell vray hoc'h eus amañ.

- N' on ket fallgontant. Bravig eo. »

Ar brigader a brizas ment ar berniad, estlamm ha bam en e sellloù :

« Ul labour tenn hoc'h eus bet.

- Sur, kiet, ken hon eus kiet. »

An daou archer a reas tro ar vardell en ur sellout pizh ouzh pep tra. Echu ganto o enselladenn, e c'houlennjont, seven tre, hag un tammig lentegezh ganto :

« Aotrou Maer, laouen e vijemp da welout hoc'h Aotre-Bardellañ-Hentoù.

180

- Va Aotre-Bardellañ...

- ...Hentoù. Ya.

- Ha d' ober petra ?

- Evidoc'h da gaout ar gwir da vardellañ an hent.

- N' em eus ket, gast ! Hag ouzhpenn-se, bardellet hon eus dija an holl hentoù a gas da Gerialoù. Grav eo ?

- N' eo ket. O vezañ ma 'z oc'h ar maer, ar gwir hoc'h eus da vardellañ hentoù ar c'humun. Gouzout a zlefec'h koulskoude, ez eo dleet kaout un Aotre evit bardellañ an hent bras, pe anez e vin rediet da ober un dell-gastiz deoc'h. Al lezenn eo. Arabat abegiñ, n' on nemet un archer.

- Gast ! Ha petra a rin-me bremañ m' eo bet savet ar vardell ?

- Evit ur wech, ec'h asantfen da c'hortoz un tammig, amzer deoc'h mont da gerc'hat an Aotre.

- Ha, digant piv e vez bet an aotreoù-mañ ?

- Digant ar Prefed evel just, e Kemper.

- Biskoazh ne gredin direnkañ an Aotrou Prefed evit keloù-se.

- Ne vo ket ezhomm. Kit d' ar Brefeti. Aze, war ar c'hentañ solier ha war an tu dehou, e kavot Burev ar Bardellañ-Hentoù. An aotre ho po aze, amzer da lavarout grik.

- Mont a rin diouzhtu. Gant va c'harr nevez e vin distro kent div eur ac'han. Ha petra a zeuio va bardell da vezañ keit-se ?

- Bezit dinec'h, ni a chomo amañ d' he diwall. »

Ar maer a guitaas an archerien, hag hopal ouzh gward-maezioù a oa en tu-hont d' ar vardell :

« Jobig, gouzout a oufes e pelec'h emañ va c'harr ? »

Jobig a oa tost dezhañ mougañ, evel m' en dije klouket un tamm a-dreuz.

« Ho karr, aotrou maer... » a c'hagouilhas-eñ, ha daoublegañ a reas gant ar c'hoant c'hoarzhin a oa kouezhet warnañ : « Ho karr zo an hini kentañ bet lakaet e traoñ ar vardell. Amañ emañ gant un tourter war e doenn !

- O gast ! va faour-kaezh karr ! Friket e vo 'm eus aon. Tañpi, ar brezel eo, me a bigno er c'harr-boutin.

- N' eus karr-boutin ken.

- Karr-boutin ken ? Abalamour da betra ?

- Abalamour d' ar vardell evel just. 'M eus aon e rankfec'h mont gant an tren. »

181

Setu eta ar maer o kemer penn e hent davet Dirinon. War droad. Jarneal a rae ken e oa ur vevzh e glevout ha ma ruzie ar moc'h e mereurioù ar c'horniad. Noziñ a rae pa erruas e Kemper, ha serret e oa dor ar Brefeti. Kenderc'hel a rae da jarneal, a vouezh izel avat, dre ma oa kalz a dud er ruioù. Leun-chouk e kavas an holl ostalerioù, gant ar c'heiment a dud harzet outo da vont gant o beaj abalamour d' ar vardell. Tremen an noz a rankas war ur menk el liorz-hêr.

Burevioù ar Prefeti a oa dleet o digeriñ da nav eur rik, ha da nav eur rik edo ar maer o c'hortoz e-kichen dor Burev ar Bardellañ-Hentoù. War-dro dek eur hanter e teuas an implijad Bardellañ-Hentoù da gregiñ gant e servij. Dibrennañ a reas an nor ha lakaat ar maer dont tre :

« En ho kourc'hemenn, aotrou. Da be vad e vin deoc'h ?

- Mat deoc'h, mat deoc'h. Deut on evit ma rofec'h din un Aotre-Bardellañ-Hentoù.

- N' eus netra aesoc'h, » a eilgerias an implijad en ur astenn davet ar maer ur stobad paperennoù, « n'eus nemet deoc'h ober ur goulenn dre skrid, e pemp skouerenn mar plij. War ar bajenn gentañ e vo skrivet hoc'h anv, oad, chomlec'h, niverenn gedskor, hag ivez anvioù, oadoù, chomlec'hioù ha niverennoù kedskor ho kwreg, tad, mamm, tadoù ha mammoù kozh. War an enebenn e vo displeget pe hent a fell deoc'h bardellañ, ha perak, ar perak o vezañ diret. Azezit ouzh an daol-mañ, ha pa vo echu ganeoc'h, roit din ar paperennoù en-dro. Setu ur voullbluenn, kenkas m' ho pije ezhomme. »

Ar maer a roas bec'h d' e boelladenn, hag a-benn un eur e voe echu gantañ. Sevel a reas, hag astenn ar stobad follennoù dre dorikell an implijad :

« Setu ! Echu pep tra. Roit din an Aotre bremañ, mar plij deoc'h.

- Goustadik ! N' hellan ket hen ober e-giz-se. Da gentañ holl, kaset e vo ho koulenn da sinadur ar Prefed, goude se, da sinadur an Igam e Roazhon, hag a-benn ar fin da sinadur Ministr an Diabarzh e Pariz. Dont a raio en-dro da Roazhon ha da Gemper, evitañ da vezañ adsinet gant an Igam hag ar Prefed, ha n' em bo an aotre da sevel hoc'h Aotre nemet pa resevin pempet skouerenn ho koulenn, an holl sinadurioù ha sielloù warni. Neuze e kasin an Aotre deoc'h, pa vo deut ho tro.

- Deut va zro ?
- Deut ho tro, rak goulennoù all zo o c'hortoz.
- Ha kalz a c'houlennoù zo a-raok va hini
- Kalzik a-walc'h, sellit. »

An implijad a dennas ur follenn bennak diouzh e diretenn :

« Amañ, an apotikerien, a fell dezho ma vije kresk war an aspirin, amañ, ar re o deus poan-benn, a fell dezho ma vije digresk war an aspirin, amañ, an doganed...

- An holl doganed ? a vamas ar maer.

- Ket holl ! Ne vije ket a-walc'h a hentoù er departamant evito holl. Ar re hepken a vez A pe B kentañ lizherenn o anv. Ar re all a zeuio da c'houde... »

Beunek a-walc'h e oa ar maer war hent an distro. Reiñ urzh a reas da zispenn ar Vardell Veur, ha mont d' an ti-kêr e-unan-penn. Morailhet an nor warnañ, tennañ a reas ur pikol marilh diouzh an armel-houarn, ur marilh ma oa skrivet war e c'holoenn : Kontoù Brezel ar Sivi, pep pajenn anezhañ o vezañ merket : Gounid war an tu reizh ha Koll war an tu gin. Ar Maer a skrivas war bajenn gentañ ar c'holloù, gant daeroù put hag un tammig liv du : kollet hon eus en deiz-mañ karr-tan nevez-flamm an aotrou maer ha tapet un dell-gastiz digant archerien Daoulaz, dre an abeg m'hon eus savet ur vardell hep aotre.

(DA GENDERC'HEL)

troet gant ROPARZ HEMON

David Swansa

Eus an darvoudoù a zoug levezon war hor buhez hag en diwezh war hon tonkadur, ne c'hellomp kaout nemet damanaoudegezh. Darvoudoù all, avat, dreistniver (mar deo reizh ober darvoudoù anezho) a dosta ouzhimp hag a dremen e-biou diefed, hep zoken diskuliañ ez int deuet ken tost, hep teurel skeud na goulou war hor spered. Ma oufemp kement tra a zo gouest da gemmañ hor planedenn, e vefe re leun hor buhez a c'hoanag hag a spont, a levezon hag a gerse, evit hol lezel e peoc'h e-pad un eur.

Ha setu amañ ur skouer : ur bajenn tennet diouzh kevrin David Swan.

A nebeut a bouez eo dimp gouzout piv oa David Swan a-raok ar poent ma kejom gantañ, d' an oad a ugent vloaz, o kerzhout gant an hent bras eus e vro c'henidik etrezek kêr vBoston, da vezañ komis e stal e eontr, un ispiser bihan. A-walc'h lavarout e oa ar vro c'henidik-se New Hampshire, e oa e dad hag e vamm tud enorus, en doa bet er skol an deskadurezh ordinal hag en doa tremenet ur bloaz evit echuiñ oc'h ober studioù klasel e " Gilmanton Academy ".

Beajet en doa war e droad adalek goulou-deiz betek tost kreisteiz en devezh-hañv-se. Aet oa ken skuizh hag ar wrez a oa ken pounner m' en doa divizet azezañ er gwasked el lec'h kentañ a vije diouzh e zoare, da c'hortoz ar rederig. Kavet en doa buan ur guchennadig skav-gwrac'h, evel plantet a-ratozh evitañ, hag un dachennig plijus, gant ur stivell e-kreiz, a vije lavaret n' he doa biskoazh skedet evit tremeniad ebet nemet David Swan. Bezet gwir an dra-se, pe faos, ne vern. Pokat a reas dezhi gant e vuzelloù disec'het. Neuze en em daolas a-hed e gorf war ar vriell, harpet e benn war un nebeut rochedoù ha daou vragoù strobet gant ur mouchouer kotoñs. Eno ne c'halle ket bannoù an heol e dizhout.

184

Ne save ket c'hoazh ar boultrenn diwar an hent, rak glav bras a oa bet en derc'hent. Ha boukoc'h e oa ar geot d' an den yaouank eget ur gwele dumed. Hiboud an eienenn en e gichen a zouge d' ar c'housked ; ar skourroù luskellet a-dreuz an oabl glas a-zioc'h e benn a zouge d' ar reze. Hag un hun pounner, huñvreoù kuzhet en e zonder marteze, a gouezhas war David Swan.

Ne huñvreas tamm avat en darvoudoù a vezo danevellet deoc'h bremañ.

Hag eñ morvitellet en disheol, tud all, dihun-mat, a dremenas, war droad, war varc'h hag e kirri a bep seurt, a-hed an hent heoliek e-tal e gambr-gousket. Darn ne selljont nag a-gleiz nag a-zehou, ha morse ne ouejont e oa bet eno. Darn a daolas ur sell hepken etrezek ennañ, re brederiet da reiñ dezhañ an disterañ lec'h en o soñjoù. Darn a c'hoarzhaz ouzh e welout kousket ken kloz. Ha re all, leun-barr o c'halon a zismegañs, a ziskargas lod eus o binim war ar paotr. Un intañvez etre daou oad, pa ne oa den all ebet e-kichen, a vountas he fenn un tammig er c'hornig ma edo David Swan, hag a lavaras enni hec'h-unan e oa koant-tre en e gousk. Ur prezegour a-enep an alkool a welas anezhañ, hag a zivizas lakaat David kaezh er sarmon a dlee ober en abardaez se, evel ur skouer spontus eus gwalenn ar vezventi war an hentoù bras. Tamall, meuleudi, dismegañs ha diseblanted a oa holl avat tra heñvel, pe gentoc'h, netra da Zavid Swan.

Kousket oa bet ur pennadig hepken pa zegouezhas ur c'harr liv gell, stlejet gant daou varc'h kaer. Mont a rae brav gant an hent. Hogen trumm e chomas a-sav tost e-kichen al lec'h ma edo David o tiskuizhañ. Un ibil a oa kouezhet hag unan eus ar rodoù a oa o riklañ diouzh un tu. Ne oa ket kalz a

zroug, hag an daou zen a oa er c'harr, tud o vont war an oad, ur marc'hadour hag e wreg war o distro da vBoston, n' o devoe ket aon pell. Endra edo ar paotr-karr hag ur mevel o renkañ ar rod, an itron hag an aotrou a yeas da glask gwasked dindan ar skav-gwrac'h.

Gwelout a rejont ar stivell, ha David Swan o hunañ e-kichen. Fromet evel ma vezer atav gant un den, zoken un den dister, o kousket, ar marc'hadour a gerzhas ken skañv ha ma c'halle gant an urloù a oa en e zivesker, hag e bried a viras evezhiek ouzh he brozh da daravat, betek-gouzout na zeuje ar paotr da zihuniñ trumm.

185

« Hemañ a gousk c'hwek avat, » a hiboudas an aotrou kozh. « Na brav e teu e anal eus don e vruched ! Me a rofe an hanter eus va fortun da c'hallout kousket evel-se, kuit da gemer louzoù. Met ret e vefe, siwazh, bezañ yac'h ha dibreder ! »

« Ha bezañ yaouank ivez, » eme an itron. « Tud kozh, hag i yac'h ha dibreder, ne gouskont ket evel-se. Nann, kousket pe war zihun, n'omp ket evel an den yaouank-mañ. »

Seul vui ma sellent, seul vui e oant plijet gant ar paotr dianav, en e gambr guzh bevennet gant an hent bras hag ar skav-gwrac'h, an deil a-zioc'h e benn evel stignoù seiz damask teñval. Ur bann-heol a zeuas da gantren war e zremm, hag an itron vat a dortisas ur brank evit mirout outañ da dremen. O vezañ graet an tammig oberenn-se a vadelezh, e santas en he c'halon karantez ur vamm o tiwanañ.

« Daoust, » a hiboudas-hi d' he fried, « ha n' eo ket bet kaset amañ gant Providañs Doue ? Ha ni, daoust ha n' omp ket bet ivez kaset amañ da gavout anezhañ, goude an dro fall hon eus bet gant mab hor c'henderv ? Un tammig heñvel eo, me ' gred, ouzh hor mab-ni, Herri, Doue d' e bardono. Ha ma tihunfemp anezhañ ? »

« E zihuniñ ? D' ober petra ? » eme ar marc'hadour o termal. « Ne ouzomp mann diwar e benn. »

« Un aer a zen onest a zo warnañ ! a lavaras c'hoazh ar wreg, atav en un hiboud, hogen a-zevri. « Hag o kousket ken flour ! »

E-doug ar gaozeadenn-se, graet a vouezh izel, ar c'housker ne zaskrenas tamm e galon ; ne zeuas ket e anal buanoc'h eus e skevent ; ha ne fromas tamm e zremm. Padal, edo ar Chañs-vat o stouiñ warnañ, prest da lezel ur bern aour da gouezhañ war e vruched. Ar marc'hadour kozh a oa marv e vab-pennhêr, ha ne oa nikun da gaout e binvidigezh war e lerc'h, nemet ur c'har-pell, a zisplije dezhañ e zoare-bevañ. E seurt degouezh e ra tud 'zo traoù iskisoc'h eget c'hoari an achantour, ha dihuniñ an den yaouank, manet kousket paour-razh, d' en em gavout pinvidik-mor.

186

« Ha dihunet e vo ? » eme an itron adarre, war un ton aspedus.

« Prest eo ar c'harr, aotrou, » eme ar mevel, a oa chomet a-dreñv.

An daou bried kozh a skrijas, a ruzias hag a bellaas buan, pep hini oc'h en em c'houlenn penaos e oa deuet ur froudenn ken iskis en o fenn. Ar marc'hadour a azezas er c'harr en e aez, o treiñ en e spered ur mennad en doa da sevel un ti kaer-dreist evit degemer kenwerzherien rivinet.

Edo Davir Swan atav o kousket.

Amzer d' ar c'harr da ober ur c'hard lev, ha setu ma teuas ur plac'h yaouank koant en ur dripal, he c'halon ivez o tripal en he c'hreiz. Abalamour da

se moarvat, - n' eus droug ebet o lavarout, - ere unan eus he loeroù a yeas laosk. O santout ar seizenn, mar doa ur seizenn da vihanañ, o riklañ, ez eas da glask repu dindan ar skav-gwrac'h, hag e welas ur paotr yaouank o kousket e-tal an eienenn.

Ar plac'h a ruzias evel ur rozenn oc'h en em gavout e kambr-gousket ur gwaz, hag a zo muioc'h, evit seveniñ seurt kefridi, pa verzas e oa buhez ar paotr en arvar. Ur pikol gwenanenn, a oa bet o troieta dre an aer en ur voudal, gwech e-mesk an deil, gwech o skediñ dre vannou an heol, gwech o sankañ en deñvalijenn, a seblantas neuze diskenn war groc'hen unan eus daoulagad ar paotr. Flemm ur wenanenn a c'hell bezañ marvus. Ar plac'h kalonek ha dinoaz a dagas an euzhadenn hegas gant he frilien, a vountas anezhi taer a-gostez, a chouas anezhi pell diouzh ar skav-gwrac'h.

Koantat arvest ! Neuze, dianalet ha ruz he fenn, ar vadoberourez a sellas ouzh an estren yaouank, ma oa en em gannet evitañ gant an aerouant eus an aer.

« Kaer ar paotr ! » a soñjas, o ruziañ donoc'h c'hoazh.

Perak eta ne savas ket en e greiz un huñvre a eürusted ken kreñv, ken galloudus ma vije tarzhet e tammou, ouzh e lezel da spurmantañ ar plac'h e-touez an tasmantoù ? Perak, da vihanañ, ne lugernas ket ur mousc'hoarzh a zonedigezhvat war e zremm ? Setu ma oa deuet ar plac'h a oa bet hec'h ene, hervez ur gredenn gaer a wechall, rannet diouzh e ene, ar plac'h a felle dezhañ kejañ ganti gant ur c'hoant dispis, hogen divent. Hi hepken en dije karet gant gwir garantez, eñ hepken he dije degemeret e don he c'halon. Bremañ, edo ar plac'h-se, ar ruz war he divjod, melezoaret gwan e dour ar stivell en e gichen. Ur wech aet e-biou, mui biken ne barje war e vuhez ar sklerijenn laouen skuilhet ganti.

187

« Kousket-kloz eo, » a hiboudas ar plac'h yaouank.

Hag ez eas kuit. En ur vont gant an hent, avat, ne oa mui ken skañv he zreid.

Tad ar plac'h a oa ur marc'hadour eus ar c'harter. E genwerzh a rae berzh, ha d' ar mare-se e oa o klask un den yaouank dres evel David Swan.

Lakaomp en dije David graet anaoudegezh ganti e-tal an hent. Klaoustre e vije deuet da vezañ komis e ti an tad, ha traoù all a vije c'hoarvezet da heul, evel reizh. Ur wech c'hoazh eta e oa en em silet ar Chañs-vat, - gwellañ chañs a zo er vuhez, - betek kichen ar paotr, ken tost ma oa aet dilhad ar plac'h da rifiñ ouzh e zilhad. Ha n' en doa gouezet netra.

Ne oa ket aet mat ar plac'h yaouank diouzh gwel ma teuas daou waz e gwasked ar skav-gwrac'h. Neuz fall a oa war o dremmoù, ha gant o c'hasketennoù lien sachet a-dreuz, izel war o zal, ne oan ket bravoc'h da welout. Teuc'h e oa o dilhad, mistrik a-walc'h koulskoude. Hailhoned e oant, a veve diwar gement tra a veze kaset dezho gant an diaoul. Bremañ, pa n' o doa netra gwelloc'h da ober, o doa divizet mont dindan ar gwez evit c'hoari kartoù, da c'houzout gant pehini anezho ez aje gounid ar mestaol kentañ a rajent.

O welout avat David kousket e-tal an eienenn, unan eus an daou hailhevod a lavaras a vouezh izel d' e genseurt :

« Hss ! Te 'wel ar pakad-se dindan e benn ? »

Egile a wignas hag a reas ul luchadenn.

« Me 'bari ur chopinad gwin-ardant, » eme ar c'hentañ, « ez eus un doug-bilhedoù pe ur bernig brav a bezhioù-moneiz kuzhet gant hemañ e-mesk e rochedoù, pe c'hoazh e godell ur bragoù. »

« Ha mar dihun ? »

188

E geneil a zigoras e jiletenn, o tizoleiñ fust ur gontell.

« Mat eo ! » eme egile.

Tostaat a rejont ouzh David, dic'houzvez-kaer eus ar pezh a c'hoarveze. Unan a zalc'has ar gontell troet he beg ouzh e galon, endra furche egile er pakad dindan e benn. O dremmoù, teñval, roufennet, warno merkoù euzhus an droug hag ar spont, a oa stouet war an hini a felle dezho laerezh, ha sur a-walc'h e vijent bet kemeret da ziaouloù an ifern gantañ, ma vije deuet a-daol-trumm da zihuniñ. Hag al livastred o-unan, m' o dije sellet a-gostez e dour ar stivell, o dije bet bec'h oc'h en em anavezout o-unan. Hogen David ne oa bet biskoazh ken sioul, zoken pa oa gwechall o kousket war varlenn e vamm.

« Ret e vo din lemel ar pakad, » eme unan.

« Mar flach e skoin, » eme egile.

D' an ampoent, avat, ur c'hi, en ur c'hweseta, e fri war an douar, a zeuas dindan ar skav-gwrac'h, hag a sellas, gwech ouzh an daou dorfedour, gwech ouzh ar c'houker difiñv. Neuze ez eas da lipat dour.

« Foei ! » eme unan eus an daou urupailh, « n' eus netra d' ober bremañ. Emichañs emañ mestr ar c'hi-mañ o tont. »

« Evomp ur banne 'ta, ha skampomp ! » eme egile.

Paotr e gontell a renkas e arm dindan e roched adarre, hag a dennas ur bistolenn eus e c'hodell. N' eo ket avat unan a lazh war an taol. Bez' e oa ur voutailh evit lakaat gwin-ardant, gant ur c'hobeled houarn-gwenn biñset war ar genou. Pep hini a reas ur glukadenn ha neuze ez ejont kuit en ur farsal hag en ur c'hoarzhin ken kalonek ma vije lavaret e oant plijet da vezañ graet tro wenn. A-benn un eur pe ziv o doa ankounac'haet pep tra, hep soñjal zoken e oa bet enskrivet o zorfed a vuntrezezh gant an Ael a verk an holl oberoù e lizherennoù ken padus hag ar beurbadelezh.

David Swan e-keit-se a gouske sonnec'h atav, hep gouzout e oa tremenet warnañ skeud ar marv hag e pare warnañ sked ar vuhez adarre.

Kousket a rae eta. Hogen ne oa mui ken sioul. Un eur a oa bet a-walc'h evit lemel ar skuizhder diouzh e izili gwevn, brevet gant eurvezhioù hir a gerzhed. Gwech e fiñve e gorf, gwech e komze evel ennañ e-unan ouzh spesoù-kreiz-an-deiz e huñvre.

189

Trumm avat e teuas tourni rodoù, kreñv-ouzh-kreñv a-hed an hent, o vruzunañ krenn latar e hun, a oa o tanavaat endeo. Ar rederig e oa.

David a savas en ul lamm, dihun-mat bremañ.

« He ! paotr ! plas 'zo ? » a grias.

« Plas war an doenn ! » a respontas ar blenier.

David a bignas. Ha setu eñ laouen war e hent etrezek Boston, hep teurel zoken ur sell ouzh ar stivell-se, stivell froudennoù huñvreüs an tonkadur. Ne ouie ket e oa bet Tasmant ar Binvidigezh o strewiñ liv alaouret war an dour, - na Tasmant ar Garantez o huanadiñ flour dre he sourrad, - na Tasmant an Ankou o kinnig he ruziañ gant gwad, - ha kement-se e-pad un eurvezh verr ma oa bet o kousket.

Kousket pe war zihun, ne glevomp ket kammedoù an traoù iskis a c'hoarvez

hogos, o vont skañv dre an aer. Ur Ragevezh marteze a ren hor buhez a dud tonket d' ar marv, a ro dimp ar galloud, daoust d' an darvoudoù dic'hortoz, dispis o donedigezh, a dreuz hon hent dalc'hmat, da ziawelout darn anezho da vihanañ.

NOTENN. - Ar skrivagner amerikan Nathaniel Hawthorne (1804-1864) a zo unan eus brudetañ komzourien-blaen ar vro-se, aozer romantoù evel " Al Lizherenn Ruz " hag " An Ti a Seizh Talbenn ". Div eus e gontadennoù niverus a zo bet lakaet e brezhoneg, " Ar Skarbouklenn Vras ", troet gant Youenn Drezen, e GWALARN, ha " Taol-Arnod an Doktor Heidegger ", troet ganin, en AR BED KELTIEK. - Roparz Hemon.

Istor Breizh La Borderie

troet gant ROPARZ HEMON

NOTENN. - E miz Gouere 1964, e kroge AR BED KELTIEK da embann pennadoù troet diwar " Istor Breizh " La Borderie.

E-pad seizh vloaz eta (1964-1971) e voe kavet en hgozik pep niverenn eus ar gelaouenn peder fajennad well-wazh tennet eus labour hon istorour meur, en holl war-dro 350 pajennad, - peadra d'ober ul levr ment ordinal a ouzhpenn 500 pajenn.

Darn eus al levrennoù I, II ha III a zo bet troet evel-se. N' eo ket bet troet pep tra. Lezet ez eus bet a-gostez :

1) pennadoù deuet da vezañ re ziamzeret en hon deizioù ;

2) pennadoù, a bouez bras a-wechoù, a oa diaes diwar abeg pe abeg embann en ur gelaouenn.

E miz Mezheven 1971, staget AR BED KELTIEK ouzh AL LIAMM, e oamp erru en 12-vet kantved. Kenderc'hel a reomp gant Istor hor Bro dindan an duged eus lignez Penteür.

191

AN DUGIEZH GANT LIGNEZ PENTEUR

Ar Saozon o stourm ouzh Breizh
(1148-1213)

Ur marevezh houarn a oa o tont e Breizh. Pep reuz a oa tost da gouezhañ warni.

An dug Konan III, hoc'h eus soñj, war e wele a varv, e 1148, a zianzavas Hoel, a oa tremenet pell amzer evit bezañ e vab. Ne chome nemet ur bennhêrez war e lerc'h, ar briñsez Berta.

War-dro 1137, pe un nebeud a-raok, e oa bet dimezet Berta gant ur priñs eus lignez Penteür, Alan Du kont Richmond, eil mab Stefan I kont Penteür, hag hemañ a oa mab perc'henn kentañ dalc'h-yaouaer Penteür, Eozen, marvet e 1079.

Kalonek-tre e oa Alan Du. O rein dezhañ e verc'h, e felle d' an dug Konan III kaout un den a zifennje he fersonelezh hag he gwirioù. Fellout a rae dezhañ ivez marteze aozañ an distro d' an domani dugel eus darn da vihanañ eus an dalc'h-yaouaer bras krouet ken difur gant an dug Alan III evit e vreur Eozen.

Siwazh, Alan Du a varvas a-raok Konan III, e 1146, o lezel war e lerc'h ur mab anvet Konan evel e dad-kozh. N' en doa ar mab-se neuze nemet pevar pe bemp bloaz. An tad-kozh, o santout e oa tost e vuhez da echuiñ, hag o kaout aon dreist-holl na chomje e verc'h hep nikun d' he diwall diouzh ar riskloù a rakwele, a reas dezhi dimeziñ buan gant beskont Pourc'hoad, Eozen II, brezelour taer, brogarour start.

E gevezerezh ouzh mab Alan Du, avat, evit kaout an tron dugel, a voe derou an enkadenn a reas kement a reuz e Breizh.

192

EOZEN POURC'HOAD HA KONAN IV, DUGED VREIZH

(1148-1166)

E 1148 ne dlee Konan yaouank kaout nemet c'hwec'h pe eizh vloaz. Evel ma c'halle ar merc'hed ren e Breizh, e ranke Konan, a-raok pignat war an tron, gortoz marv e vamm, pe c'hortoz ma vije prest da zilezel ar galloud. Ne vern penaos, ne c'halle kaout netra a-raok tizhout e oad-gour, a oa c'hoazh e Breizh, evit ar briñsed da vihanañ, pemzek pe c'hwezek vloaz.

Betek neuze e vije renet ar vro gant an dugez hag he fried a-gevret. Hemañ, en abeg d' e veli, a voe graet anezhañ " Eozen, kont pe zug Breizh ", pe evit berraat " ar c'hont Eozen ".

Enebourien Eozen.

Eozen, goude marv Konan III, a voe e gwirionez anavezet da zug e Breizh a-bezh, nemet e kontelezh Naoned. Eno e oad boas abaoe pell da gaout renerien ganet direol, hag eno e voe embannet da zug an hini dianzavet, Hoel.

Mar boe brezel etre an daou briñs, ne voe ket taer e-pad c'hwec'h vloaz (1148-1154). Neuze avat e voe savet un unaniezh : taget e voe Eozen war un dro gant Hoel ha gant mab Alan Du, Konan yaouank.

En-dro da Gonan, ur paotr berrboell a bevarzek pe bemzek vloaz, na c'halle ket gortoz betek marv e vamm evit ren, en em vodas, - hervez ur c'hronikour, - « ur bern krennarded uhelwad eus ar vro ».

An dud fur, avat, ar varoned a c'halle komz gant poell abalamour d' o oad ha d' o skiant, aotrounez Dinan, Leon, Gwizhuriege, Felger, h.a., kont Treger e-unan (Herri Penteür), eontr Konan yaouank, en ur ger, an holl dud a benn a venne mirout ar gwir hag ar peoc'h, en em lakaas a-du gant Eozen.

Brezel Eozen ouzh Hoel.

Hemañ, dre aon na vije taget a-dreñv e gein gant Hoel e-pad ma vije o herzel ouzh Konan hag e vignoned yaouank, en em daolas da gentañ gant e arme war gontelezh Naoned, a dreuzas taer penn-da-benn en un tennad hepken. Edo Hoel e Naoned o c'hortoz an enebour da zont diouzh tu an hanternoz. Eozen a dreizhas al Liger, a gemeras porzh Raziez da gaout un harp evit tagañ Naoned eus tu ar c'hreisteiz.

193

Hogen Hoel a yeas buanoc'h egetañ. Klask a reas zoken e soupren dre argadiñ en noz. « Er-maez eus Naoned ez eas, » eme ar Baot, « e-pad nozvezh gouel sant Lazar, gantañ marc'heien niverek, ha gant listri e tagas Eozen, hag e voe bras ar stourmad etrezo. »

Marc'heien Hoel a voe lazhet hogozik holl, hag Hoel e-unan, faezhet, a rankas tec'hout ha distreiñ da Naoned. Eno e vije bet taget hep mar gant Eozen. Nemet ret e voe da hemañ mont war-du an hanternoz evit derc'hel penn ouzh Konan. A-walc'h e voe dezhañ eta bezañ torret nerzh kont Naoned. Ur wech dieubet dioutañ, e redas a-benn d' e enebourien all.

Brezel Eozen ouzh Konan.

Ne ouzer ket dre ar munud penaos e troas an emgann. Gouzout a reer hepken e stourmas ar varoned meneget uheloc'h ha kalz re all a-du gant Eozen. « En emgann-se etre kenvroiz, » eme Ar Baot, « a voe kriz ha skrijus, e chomas an trec'h gant an dug Eozen, ha Konan, trec'het, a gemeras an tec'h. »

Er bloaz 1154 e c'hoarvezas an emgann-se, evel an hini a-enep Hoel.

Konan a glaskas repu e Bro-Saoz, e kontelezh Richmond, en doa bet war-lerc'h marv e dad Alan Du.

Konan skoazellet gant ar Saozon.

D' an ampoent (1154) e varvas Stefan roue Bro-Saoz. hag en e lec'h e teuas Herri II Plantagenet, kenderv-kompez mamm Gonan.

Konan a c'houlennas skoazell digant e gar, hag er bloaz war-lerc'h (1155) e treizhas ar mor adarre da zistreiñ da Vreizh, gantañ ur bagad soudarded saoz. Darn eus dalc'hidi Eozen, eus ar re bouezusañ, hen dilezas. En o zouez e oa unan eus ar varoned pennañ, dre e c'halloud gladdalc'hel ha dre e galonegezh, Raoul Felger.

Arabab bezañ re souezhet. Ne oa mui an traoù evel ma oant bet er bloaz kent. Konan a oa deuet sur-mat d' e oad-gour. Ouzhpenn se, e vamm Berta a felle dezhi, a c'haller krediñ, ma pignje he mab war an tron. Ar gwir eta a oa diouzh e du.

194

Hogen, en tu-hont d' ur gudenn a lezenn e oa ivez ur gudenn a vrogarantez : kudenn silvidigezh Vreizh.

Ar Vrezhoned fur prederiet gant ar gudenn-se ne fizient tamm ebet e Konan yaouank, skañbenn, hedro, laosk a galon. Hag ouzh e welout oc'h en em lakaat dindan warez ar roue Herri II, anavezet-mat e zezoioù, e komprenjont e tennje buan ar roue-se e vad eus gwanded ha diboellegezh ar priñs brezhon evit astenn e graban war Vreizh hag he gwaskañ. Dre se e chomas c'hoazh un nebeut tud a-du gant Eozen.

Eozen trec'het.

Konan a zilestras en aod hanternoz Breizh, hag a gerzhas etrezek Roazhon. Skoret-gredus e voe gant daou zenjentil eus lignez Gouezel-Monforzh, Roperzh hag Huon e vab. A drugarez dezho, kastell Kerhazou en em zaskoras hep skeiñ un taol. Skoazellañ a rejont Konan da gemer kastell Menez-Muron, pennlec'h aotrouniezh Tintenieg.

Neuze e lakaas Konan seziz war Roazhon, en em zifennas start. Eozen, chomet er-maez eus kêr, a dagas kamp Konan, hep dont a-benn d' e bakañ. En diwezh e voe diarbennet Eozen, ha rediet da dec'hout.

Digoret e voe dorojoù Roazhon d' an trec'her. Hogen Eozen, hep koll kalon, hag eñ faezhet ken grevus, a redas dre ar vro da zastum e zalc'hidi hag adsevel un arme. E-doug unan eus ar redadennoù-se, avat, e kouezhas etre daouarn Raoul Felger hag e voe prizoniet.

O klevout ar c'heloù, holl dudjentil Vreizh a soublas dirak Konan, embannet da zug dindan an anv a Gonan IV. Unan hepken o chomas feal d' an hini trec'het, pe gentoc'h d' e vammvro. Ra vezo meneget e anv gant enor : Yann Dol, aotrou kozh Komborn.

Raoul Felger, den leal, gwir vrogarour, o rakwelout marteze an darvoudoù a zeuje da heul trec'h Konan, hag o soñjal e oa bet e-pad pell amzer mignon da Eozen, a roas e frankiz d' e brizoniad. Hemañ a guitaas Breizh (1156), hag o c'hortoz gwell, ez eas da c'hounit trec'hioù da roue Bro-C'hall.

195

Ar Saozon mistri war Naoned.

E-keit-se (1156) e oa aet Naonediz skuizh gant Hoel, « ne reas netra vat, » eme ur c'hronikour. E ziarbenn a rejont hag en em reiñ da gont Anjev, Jafrez mab Jafrez Kaer ha breur Herri II roue Bro-Saoz. Ar Jafrez-se a varvas daou vloaz goude (27 Gouere 1158), hep hêr nemet e vreur Herri.

War se, Konan IV, o sellout gant reizh ouzh kontelezh Naoned evel o

terc'hel **da** zugelezh Vreizh, a berc'hennas anezhi laouen. N' en doa ket taolet pled ouzh Herri II, a oa mestr endeo war Boatev hag Akitania, war Anjev, Touren, Men ha Normandia, da lavarout eo war gornog Frañs a-bezh, nemet war Vreizh ne oa ket.

Diwar neuze e oa mennet da stagañ Breizh ivez ouzh e zouarou, ne vern dre be hent, dre nerzh ha touell diouzh ret. Re vrav oa an digarez d' e lezel da vont e-biou.

Oc'h en em reiñ da hêr d' e vreur Jafrez, e c'houlennas groñs kontelezh Naoned. Tra souezhus, Konan a soñjas da gentañ enebañ. Hogen pa welas un armead saoz-ha-norman strollet war e harzoù, e plegas, hag ez eas da Avrañchez, da zeiz Gouel Mikael 1158, evit ober dilez e-unan eus Bro-Naoned d' ar Plantagenet.

Goude se, e kreskas levezon ar Saozon war renerezh an dug, en em zigollas evelkent dre laerezh, unan-hag-unan, ar varoned a oa bet a-du gant Eozen. Evel-se, Herri Penteür, hag eñ eontr Konan IV, a voe lamet digantañ, war-dro 1160, kontelezh Wengamp, kastellaniezhoù Lanuon ha Minibriag, ha ne chomas perc'henn nemet eus Bro-Ouelou.

Emsavadenn Raoul Felger.

Seurt oberoù direizh, seurt servijusted laosk e-keñver an estren a lakaas Breizh da daeriñ. Yann Dol a reas e wellañ a-grenn diouzh e du. Nebeut amzer goude e varvas (1162), o vezañ fiziet e Raoul gwardoniezh e bennhêrez, verc'h Iseult, ha diwallerezh e gastell hag e aotrouniezh.

Ha setu ma teuas Raoul da vezañ pennatizer ur bagad brogarourien. Raktal, un niver bras a dudjentil en em stagas outañ. Ar renerien, ouzhpenn baron Felger, a voe Eozen Pourc'hoad distro eus Bro-C'hall, hag Herve kont Leon. E 1164 e tarzhas an emsavadenn. E pep lec'h e voe faezhet dalc'hidi Gonan. Hemañ a c'houlennas harp adarre digant e warezour. Un arme norman a yeas e Breizh, hag a gemeras, goude krogadoù taer, kêr Dol ha kastell Komborn. Ne voe ket a-walc'h da zigalonekaat ar vrogarourien, a astennas o linennad-stourm, a glaskas betek e Poatev kevredidi a-enep Herri II, hag a gendalc'has d' en em gannañ start e-pad daou vloaz. A-benn neuze (1166), edo Konan hag e skoazellerien en o sach diwezhañ.

196

Herri II avat a aloubas kontelezh Roazhon gant un armead vras. Kêr Felger eo a voe kreizenn ar brezel. Raoul, disaouzan, a reas penn ouzh ar roue saoz, ha da gentañ, daoust na oa ket ken niverus e soudarded ha re an enebour, e talc'has mat.

Pourvezioù e-leizh a oa e kêr. Graet en doa un dezerzh en trowardroioù, hep bitailh, hep netra da reiñ danvez evit bevañ. Mervel a rae ar soudarded saoz gant an naon. Broudoù-trap a oa bet lakaet da droc'hañ an hentoù, ha tost dic'hallus oa d' ar varc'hegerien mont da gerc'hat boued a-bell hep bezañ taget gant ar sezizidi, a skoe warno taolioù kriz. Ken stank e oa ar Saozon, avat, na c'halle ket Raoul padout pell evel-se hep skoazell eus an diavaez. Kontañ a rae war ar sikour prometet-start gant ar C'hallaoued, hag e c'houlenn groñs a reas. Ne viras ket ar re-mañ o fromesa evelato, ha ne zeuas sikour ebet.

Baron Felger, serret en e gastell, gronnet a bep tu, a harzas kalonek e-pad ur pennad. En diwezh e rankas daskoriñ e greñvlec'h, a voe diskaret gant an trec'her. Felger ur wech kouezhet, e kouezhas ivez kevredad ar Vrezhoned : Konan a c'houneze.

Roue Bro-Saoz mestr war Vreizh.

Un gounid avat hag a droas da fall. Herri II, da gentañ, a redias Konan da zimeziñ pennhêrez Vreizh, Konstanza vihan, a oa a-boan pemp bloaz, gant e drede

mab, ur priñs yaouank eizh vloaz anvet Jafrez. Konan a asantas, laouen o soñjal ne oa ket uhel ar priz. Hogen ne oa ket echu : en em strinket e oa, evel un diod, e geol ar bleiz, da vezañ lonket gantañ. Goude kaout an asant, e kredas Herri II, evel tad an dug da zont, goulenn evitañ e-unan, ken na vije deuet Jafrez d' e oad-gour, gwardoniezh Vreizh, pezh a oa koulz ha goulenn digant Konan IV reiñ e zilez, - ha reiñ e zilez a reas, hep ur ger, o terc'hel evitañ kontelezh Wengamp hepken (1166).

197

E-giz-se, hep skeiñ un taol, e voe lakaet Breizh dindan yev ar Saozon gant ar priñs laosk ha diskiant-hont. N' eus ket kalz a zarvoudoù ken vil en Istor. Daoust ha kastizet eo bet a-walc'h an torfed-se dre reiñ d' an hini kablus al lesanv dismegañsus a Gonan Bihan ? Nann avat. Konan an Trubard, Konan ar Yudaz a vije bet ret lavarout, rak gantañ e voe roet, korf hag ene, e bobl, a oa e gefridi diwall, zoken diwar-goust e vuhez, d' ar gwashañ enebour, d' ur mac'homer euzhus.

Setu eta tizhet gant Herri II ar pal a glaske adalek dek vloaz. Hag eñ da bompadiñ dirak an holl. E Thouars e oa bet skoulmet an emglev, pe gentoc'h ar marc'had, hag e c'halvas baroned Vreizh da vont eno evit touiñ gwazoniezh dezhañ. Kalz anezho, sebezet gant seurt drougober, a yeas di, kounnar ruz en o c'halon.

A zo muioc'h, Herri a yeas neuze da Roazhon evit kemer perc'hentiezh eus an dugelezh dre bakañ krog er gêrbenn. Eno e pompadas adarre. Gourc'hemenn a reas sevel tailhoù, hag ez ingalas ar c'hargoù hervez e blijadur. Erfin, lorc'h ha rogoni leizh e gorf, e tistroas d' e zomaniou.

Skoilh d'ar c'hresk armerzhel ?

Hervez ur c'henskriver eus ar gelc'hgelaouenn " The Ecologist " o deus bevezet ha distrujet an dud muioc'h a zanvez e-pad an 40 vloaz tremenet eget e-pad peurrest eus istor mab-den. E-doug an tregont vloaz a zeu e taougemento poblañs ar bed ma kendalc'h da greskiñ evel ma ra abaoe ur prantad. Gant se e vo lakaet an holl vuhezged en arvar da vout diouennet evel ma n' int bet biskoazh.

Mar degemeromp ar c'houlakadenn-se e tleomp lec'hiañ hor stourm war un dachenn ledanoc'h eget hini an darempredoù breizhat-gall, hep disellout evit kelo-se ez eo ouzh ar stad c'hall hon eus d' ober da gentañ. En tu-hont d' an elfennoù hengounel eus hor stourm e rankfemp gwelout hag ez eus tu da gemmañ ar meizad o deus ar Vrezhoned eus ar vuhezegezh vat, da lavarout eo an doare buhez hag a zo da c'hoantaat. Evit ar mare e kav din e c'hoantaont ar muiañ ar gwellañ eus an traoù a vez kinniget gant ar galvezouriezh arnevez, boued ha dilhad, tiez-annez gant rikoù a bep seurt, diduamantoù hag an araezioù-beajiñ evit mont betek enno, traoù hag a zo dieubus darn anezho tra ma 'z eus re all hag e vefent a-well o tremen hepzo.

Ma kendalc'her da atizañ ar c'hoantoù-se en ur boblañs vedel o kreskiñ da 7.000 milion, e vo krouet plegennoù drastus evit an holl vuhezged. A-benn bremañ e ranker prederiañ o welout meur a seurt plant hag anevaled o vont da get, diouennet gant ar « sivilization » (hag a zo e gwirionez treuzsevenadur ar meurgêrioù). 800 seurt anevaled bennak zo aet ken rouez pe a zo bet argaset da ranndirioù ken digevannezus ma steuziint nemet e vent gwaredet hep dale. Pa vint bet diouennet ne vo ket gallet o adkrouiñ. Ha n' ouzer ket peseurt digempuez a vo bet lakaet etre ar vuhezged a chomo war o lerc'h. Diouzh ar sellboent ken-vevoniell-se ivez ez eo talvoudus diwall ar pobloù « gouez » pe « warlerc'hiet » (sañset) : en o hengoun ez eus teñzorioù a anaoudegezh eus ar plant hag al loened ha n' o deus ket dizoloet ar ouezoniourien c'hoazh. Ne gomzan ket eus hengounioù pobloù « araokaetoc'h », tostoc'h da sevenadur ar c'hêrioù bras, damgollet ma 'z int diwar zievezh ha dismegañs kentoc'h eget diwar ratozh ha burutelladur.

199

Krediñ a ran start n' eo ket mat kenderc'hel gant ar seurt araokadur ha kresk armerzhel a anavezomp abaoe ur pennad e broioù ar C'hornog. N' ouzon ket hag ez eus tu da dreiñ kein dezhañ pe da adroudennañ emdroadur ar vuhez kevredigezhel evit mont gant un hent yac'husoc'h. Gant ar strivoù da genezelañ peder stad all er « Gumuniezh Armerzhel Europat » n' emeur ket o vont gant an hent-se, avat.

Abaoe un nebeut sizhunvezhioù ez eus bet graet kammedoù bras war-du ar c'henezelañ-se. An darn vrasañ eus poblañs Iwerzhon ha " Breizh-Veur " zo en entremar a-zivout ar gounid a c'hellint tennañ diouzh an avantur, met moarvat e ouezo ar stadrenerien o luskañ war o zu pa zeuy ar mare. Kevredigezh ar C'hreantourien Iwerzhonat (Federation of Irish Industries) zo unan eus ar rummadoù dougetañ d' ar C'henvarc'had, daoust ma n' eo ket anat tamm ebet petra 'vat a zeuy dezho dioutañ. Pal pennañ ar Gumuniezh Armerzhel Europat ez eo atizañ ar « c'hresk », klevit ar C'hresk Armerzhel : muioc'h a gig bevin, a hentoù bras, a girri-nij. Evit ma ray berzh ar C'henvarc'had e ranker « kempoellaat » al labour-douar, e c'hreantelaat diwar-bouez forzh pegement a demzoù-holen hag a louzeier-diamprevaniñ ha dilouediñ. Distrujet e vo tachennadoù glasvezh evit astenn ar meurgêrioù, digoret hentoù ledanoc'h-ledanañ, diskarget eoul-douar er mor, dislonket moged ha trenkennoù en aer hag er stêrioù, skignet danvez plastik a-hed ar straedoù hag ar gwrimennoù...

Hag araokaat eo an dra-se pe adreñvaat ? Evit lavarout ar wirionez, ar re

a eneb ouzh emezelidigezh Iwerzhon ha " Breizh-Veur " d' ar C'henvarc'had ne gavont ket abeg e « kresk an armerzh ». O komz e bodadegoù diwar-benn ar mad hag an droug a c'hellfe an emzeladur ober da adsav an iwerzhoneg, em eus bet aliet Kevre ar Gouezeleg da ginnig d' an dud ur meizad nevez eus ar vuhezgezh, o tisteurel hini ar genvarc'hadourien, met an heklevioù a zo bet gwan ha darnaoek. Republikaned ha Gouezelegerien n' int ket chalet gant drouzviadur ar fonnderioù-natur. Ne zistaolont ket pennaennoù ar Galvezourien. D' ar muiañ e rakwelont e tidudo maezioù Iwerzhon da heul ar « c'hempoellaat ». Abegañ a reont er c'holl a zrest-beli broadel, peogwir e kollint ganti ar galloud, nevezc'hounezet ha berr-embreget, da ziskoulmañ o c'hudennoù bras, hini ar yezh ha hini an dilabour pe zivroadur.

200

Emzalc'h Kembreiz ha Skosiz, ar re a varn diouzh ur sellboent « broadel » a seblant bezañ eeun-tre : nac'h a reont an emzeladur peogwir n' o devo ket dileuridi kembreat pe skosat tu da gemer perzh en divizoù-emezelañ. Ne garer ket meskañ prederouriezh gant politikerezh en emsavioù broadel-mañ. Chom a reer gant e dreid stok-mat ouzh an douar !

Evit ar Saozon, ken chalet int hag ar C'hallaoued gant o dreistbeli, met en un doare disheñvel, nac'hadurel : kizidik-tre eo ar bobl saoz ouzh kement tra estren, disfiziañs o deus ouzh politikerezh katolik tud an douar-bras, ouzh a strishadurioù a vez lakaet du-hont war arc'hadurioù ar vicherourien hag ouzh tech ar re-mañ da harpañ ar strolladoù kumunourien. Gwelloc'h e kavfe ar Saozon bezañ perzhiek en ur Gevredigezh Kenwerzhel Norzatlantel hag a vefe Skandinaviz ha Japaniz enni ivez.

Diouzh sellboent ar re a zo prederiet gant mastaridigezh an trowardroad, ar re a fell dezho difenn yac'husted an *amved*, ne vefe ket gwelloc'h ur Gevredigezh Norzatlantel eget ar C'henvarc'had peogwir e vefe levezonet-kreñv gant doareoù an Amerikaned, o ereoù-kenwerzh hag o arc'hanterezh o vroudañ d' an hevelep kresk gwastus ha mastarus.

Amañ hag ahont e weler ar preder gant ar c'hempouez-natur o kadarnaat emzalc'h ar strolladoù-micher. Unan eus an abegoù ma harz pesketaerien Iwerzhon, Breizh-Veur ha Norvej ouzh ar mennad kenezelañ d' ar C'henvarc'had eo o deus diviet o c'henseurtes eus ar C'henvarc'had o zachennadoù-pesketa en ur o c'horvoñ en un doare dibalamour, tra ma chom stank a-walc'h ar pesked en doureier tro-war-dro d'o aodoù-int. Ma vefe aotreet ar re-hont da zont ken tost ha mar karfent d' an aodoù gant o listri-greantioù da rozellañ pep tra en hent o rouedoù bras, e vefe distrujet hep dale fonnder ar mor.

201

Ha gouest e vo ar Saozon ha Norvegiz - hag a zifenn groñsoc'h o gwirioù eget Iwerzhoniz - da lakaat ar Genvarc'hadourien da blegañ da reolennoù nevez diazezet war ur c'henober finoc'h etre an den hag an natur ? Laouenaus e vefe. N' eo ket hepken kevalaouriezh ar C'henvarc'had a zo da gareziñ evit bezañ o preizhata ar fonnderioù-natur hep damantiñ hag e kresko re all en o lec'h pe nann. Hervez ar Varksourien ivez ez eo an natur un dra da vezañ trec'het, gwallet ha korvoet, evel m' hen diskouez ar c'heloù diwezhañ a-zivout an implij a vo graet gant ar Rusianed eus o adplanedennoù : diskouez a raint e pelec'h ez eus strolladoù pesked hag evel-se e c'hello ar besketaerien dont diouzhtu war an dachenn d' o fakañ !

An ezhom da ziwall na ve korvoet en un doare drastus o zachennadoù-pesketa zo pennabeg da ziviz Islandiz astenn da 80 km bevennoù o doureier broadel. Ha gouest e vint da herzel ouzh gwalladennoù ar besketaerien estren ? Ar Saozon zo da gentañ o klemm a-enep an diviz-se...

Politikerezh Bro-Saoz a rank klotañ diouzh he ment douaroniel hag he fonnderioù-natur goude bezañ kollet he galloud impalaeriezhel. A-drugarez d' he morlu ha d' he roll a greizenn-arc'hanterezh evit un darn vat eus ar bed he doa gallet gwallegañ he greanterezh hep arvar evit he levezon. Bremañ avat e rank kroazañ war he brientoù unwerzherezh, ar renk a zibab er c'henwerzh gant ar

broioù hag a oa gwechall dindan he beli, peogwir n' eo ket barrek he greanterezh da gevezata gant re ar stadoù greantel all - tamallet e vez dezhañ kaout mekanikoù re gozh, ha re a harzoù-labour. Unan eus ar broioù diorroet ez eo ma voe gorrekañ (2,5 %) o c'hresk greantel abaoe 100 vloaz. Spi o deus he greantourien e vo kentraouet armerzh Bro-Saoz o vont er C'henvarc'had.

Er Stadoù-Unanet ez eo deut da wir an « affluence society », ar gevredigezh a builhder. Tizhet o deus ar pezh a anver ur rez-bevañ uhel - ma c'heller gounit ha dispign kalz. Ur c'hresk kriz ez eo bet, o tegas muioc'h a binvidigezh d'ar re binvidik hag o paouraat ar re baour. Prederiet eur bremañ gant an dispignoù kevredigezhel o tont diwar ar gwast hag ar firboucherezh. Ar bec'h a vez lakaet war ar vuhez kevredigezhel ganto a zo da vezañ kemeret er gont, pa glasker dezvarn pegen spletus eo kenurzhiadur an armerzh. Dont a ra ar mare ma vo peuz-didalvoud kaout ur c'harr-tan pe ur pellgomzer en abeg d' an hegas ha d' an tennder a zeu ganto.

202

E Bro-Saoz n' emeur ket degouezhet c'hoazh e rez puilhder ar Stadoù-Unanet. An armerzh a rank bezañ gwellaet a-raok en em chalañ gant ar saotradur hag an drouziviadur. Gouzout a reer ez eo re stank ar boblañs endeo, met ezhomm zo eus micherourien marc'had-mat hag e lezer eta an divroidi da zont. Ret eo ez afe falloc'h an traoù a-raok ma savfe difrae d' o gwellaat.

Bezañ gouest da zispign ur c'henfeuriad bras eus e c'hounidegezh n' eo ket kement ha kaout ur vuhezegezh kempouezet-mat, plijus, laouenaus. Er gevredigezh a builhder ez eo disteraet ar galloud da zispign gant disleberidigezh an trowardroad hag ar boued. E ranndirioù evel Kalifornia e kresk an emskiant eus an droug betek dont da vezañ un elfenn badel eus ar vuhez pemdeziek : kontammet eo an aer gant souffr, plom, monoksid karbon, en dour e vez mesket kement a glor ma n' heller ket kaer e evañ mui, hag evit herzel ouzh o nec'hamantoù e lonk an dud louzeier sioulaus ha mezvus hag o laka divarrekoc'h c'hoazh goude-se. Paotoc'h-paotañ ec'h embanner galvoù o c'houzav efedoù an danvezennoù kimiek a vez mesket er bara, en diedoù, er c'hig, hag all. A belec'h gouzout penaos e vez aozet pe c'hounezet ar boued ? N' eus nemet kenurzhiadurioù a-seurt gant ar Stadoù hag a ve gouest da bourchas an archant hag an araezioù rekis evit dezrannañ hag evezhiañ ar madoù da veveziñ, met ar gouarnamantoù zo e servij ar c'hreantourien hag ar genwerzhourien !

N' eo ket souezhus pa 'z eus bremañ un niver bras a ouizieien amerikad o klask dont da labourat e Breizh-Veur, er skolioù-meur, en ensavadurioù-enklask ha zoken er c'henwerzh. Gwelout a reont an diforc'h a zo etre kaout ur rez-bevañ uhel ha kaout ur vuhezegezh vat. Ezhomm zo bet da zaougementiñ niver ar gargidi e Kannadti Saoz Washington evit ober war-dro an holl c'houlennoù-divroañ da Vreizh-Veur. War roll ar goulennoù da labourat en ur skol-veur saoz da skouer ez eus dek Amerikan evit pep Saoz, hag e-touez ar re-se ez eus tud barrek, ha darev koulskoude da zegemer digreskoù-gopr a 50 - 60 %.

203

Seul izelloc'h e vez renk ar vuhezegezh ma vez uhel ar rez-bevañ. Se a weler re ziwezhat marteze. Aet eo ar c'hevredigezhioù bras ha d' o heul ar Stadoù war roudennoù ha n' heller ket mui treiñ kuit diwarno, war a hañval.

Hiniennoù a c'hell marteze nac'h ar gevredigezh a builhaer, neket hepken en o spered (o welout ez eo dizenelaus) met er pleustr. Meur a hini a anavez an droug met a gendalc'h da vezañ perzhiiek ennañ dre voaz pe dre redi. Klevout a reer komz eus « gnomed » (korrnandoned) Amsterdam hag a zo bet barrek da c'hounit sezioù e Kuzul ar gêr-se hag a glask direnkañ argerzhioù ar Gevredigezh a Builhder en-dro dezho. Dre vras avat ez eus aze ur gudenn gevredigezhel, rannvedel ma n' eo ket hollvedel, hag e ranker klask he diskoulmañ gant harp ha perzhiadur tolpadou tud.

E-doug an ugent vloaz tremenet e c'heller merzout e Breizh-Veur e oa prizet doare ar vuhezegezh kement hag ar c'hresk armerzh. Savet e voe ar " Welfare State ", ar Stad a Genskoazell. Evit ingalaat ar binvidigezh e voe

lakaet telloù e kenfeur gant al leve. Ha nebeutoc'h a se a arc'hant a chomas da engouestlañ en embregadegoù greantel ha da vrasaat ar c'henderc'hadur.

Ne seblant ket ar Saozon bezañ gallet ober un dibab krenn, pe moarvat o deus klasket kempouezañ doare ar vuhezegezh ha puilhder. Dedennet he deus o Stad-Kenskoazell estrenien a vil vern ha droukimplij zo bet graet eus ar servijoù kevredigezhel. Gwanaet eo bet galloud Breizh-Veur da gevezañ er marc'hallec'hioù estren, koulz hag er C'henglad (Commonwealth) hag a chom e gwirionez nebeut a zerc'hvoud ennañ. Derc'hel a rae d' he youl c'hoari ur roll pouezus etrevroadel, hogen he gwerin ne oa ket mennet da boaniañ e-sell da se : evit o labour e c'houlenne ar vicherourien bezañ gopraet ar muiañ ma c'helleda ha bezañ e-tailh evel-se da ren ur vuhez aez.

Klasket o deus an armerzhourien reiñ da grediñ ne vefe ket tu da ingalañ ar binvidigezh anez ma ne greskfe buan ar c'henderc'hadur hag an eskemmoù. Gwir eo o deus kresket difonn-difonn re Breizh-Veur. Daoust da se ez eur aet ur pennad mat war-du an ingaladur-se. Ha pa ne vefe ar youl da zerc'hel ur renk e-touez ar galloudoù bras ez ajed tost a-walc'h d' ar pal.

204

Er c'heñverioù kevredigezhel koulz ha politikel ez eo kenurzhiat ar strivad da ziwall an trowardroad gwelloc'h eget war an douar bras. E 1965 e voe divizet ne aotrefed ket a sammgirri pounneroc'h eget 32 donenn war hentoù Breizh-Veur, tra ma oa aotreet kement ha 44 t. e broioù ar C'henvarc'had. Fellout a ra d' ar Saozon mirout ardamezioù o c'hêrioù hag o maezioù diouzh an droug a vez graet gant froumadur kefluskerioù kreñv. Mar deont er Gumuniezh Europat e rankint moarvat heuliañ skouer o c'henberzhidi. Liesseurt ha dizunvan eo ar strolladoù o plediñ d' an trowardroad ha n' eo ket sur e vint gouest, ha pa vent unanet, da herzel ouzh gwask ar c'hompagnunezhioù liesvroat europat.

Lusk ar C'henvarc'had a zeu dindan kompagnunezhioù hag a fell dezho tennañ ar brasañ splot ma c'hallint eus ur marc'had a 300 milion a dud. Europa a vo neuze ur galloud bedel, ha seul c'halloudus seul droet da zizenelaat. Degouezhet eur en ur par ma n' eo ket mui ar Stadoù hag a ren buhez an dud met ar Galvezouriezh Etrevroadel. Gant ar galvezourien, an deknokrated, emañ ar galloud da lakaat ar bolitikerien da ober divizoù na rakweler ket mui o heuliadoù. Piv en deus ezhomm eus ar Concorde ? Seul vui a zispigner gant ar c'harr-nij-se, ha kement-se war goll, seul startoc'h e wasker evit ma vo kemeret gant ar Stadoù, gall ha saoz, war o c'hont.

An ensavadurioù politikel ne spiront ket d' ar gefridi reoliañ hag adroudennañ emdroadur an den. Ur gudenn-greiz hag a vo da ziskoulmañ er prantad dirazomp eo penaos kabestrañ an deknopolitikerien hag o lakaat en o renk, e-lec'h o lezel da zastum galloud dreist-goñvor. Anat eo e tremenont alies dreist d' ar veli ha d' an aotre a vez roet dezho a-berzh lezenn. Gwelit da skouer pegen divergont e ra Shell ouzh tud Enez Mona : ar re-mañ o deus diskouezet ne fell ket dezho e ve lakaet enstaladurioù en Amlwch da enporzhiañ eoul-douar met Shell a oar penaos trec'hiñ d' an eneberezh ha kaset e vez al labour-prientiñ war-raok hep gortoz ma vo reizhet pep tra. E Meirionnydd emañ Rio Tinto Zink Ltd da vat oc'h enc'hwiliañ evit kavout kouevr daoust ma 'z eo difennet hervez al lezenn eztennañ kailh en ur ranndir disklêriet da " Area of Outstanding Natural Beauty ".

205

Digarezioù a vo kavet e-leizh evit lezel ar Galvezouriezh da aloubiñ tachennoù ledanoc'h-ledanañ eus an trowardroad. Re brizius eo ar c'houevr evit ma chomfe en e stad displetus en douar-kondon. Re brizius ? Ma rofe c'hoazh ar c'hompagnunezhioù darn eus o spletoù evit lakaat an tachennoù foeltret ganto e ratre en-dro goude ma vez echu o embregadegoù ! E Bro-Saoz ha Kembre ez eus bremañ tennadoù ha tennadoù eus ar stêrioù, a-hed ar mengleuzioù glaou diviet hag izeloc'h, ma n' eus mui netra vev enno : diouzh ar poullou leuniet a zour hag ar bernioù kailh hag atredoù lezet evel restajoù diwar-lerc'h an eztennañ e sil kontammoù er stêrioù. Burev ar Glaou (hag a zo stadelaet koulskoude) a nac'h sammañ ar garg da ober an adaozadurioù rekis. Da c'hlannidi ar stêrioù d' en em

zibab mar karont !

Fall eo ha reuzius zoken e ve disrannet ar ouezoniezh evel m' emañ-hi. E pep kogn anezhi e talc'her da ober enklaskoù darnaouek, hag an arbennigerien a nac'h prederiañ gant nep tra er-maez eus o zachenn. Evel-se emañ kont gant an atomouezoniourien ha gant gouezoniourien an ec'honder. Pa vez ur gudenn, e seller outi evel un daeadenn da ijin an den, hag e striver d' he dirouestlañ hep kuzuliañ gant gouizieien war dachennoù all evit gouzout hag e vo drastus an heuliadoù.

Adal bremañ e rankomp nac'h Europa ar Galvezourien. Ar seurt Europa a vez embannet gant Heath ha Pompidou ne zegas netra vat da Vreizh na d' ar broioù bihan all, petra bennak ma raio evit ar broioù bras. Deomp eo empentiñ ur c'henurzhiadur disheñvel, deneloc'h, embann ar wellentez anezhañ ha klask tud all d' e zegemer ha d' e seveniñ.

STAD AN IWERZHONEG

" HOGEN, AET OMP WAR-RAOK "

eme b- PROINSIAS MAC AN BHEATHA

Ur miz bennak a zo e voe embannet gant " AL LIAMM " un notenn diwar-benn stad ar gelennadurezh dre ar gouezeleg en Iwerzhon. Diskouezet e oa enni e oa niver ar skolioù, ken izel ken etre, o reiñ ar seurt kelennadurezh o koazhañ buan. Talbenn ar pennad, ma oa tennet dioutañ ar sifroù diwar-benn ar skolioù o kelenn dre yezh ar vro, a oa : " An Chulú mór " pe, e brezhoneg, "Ar Giladenn Veur ". Hag, e gwirionez, e oa ur giladenn vantrus an hini a gomzed anezhi, neket hepken evit ar skolioù, met evit ar yezh heo'h-unan n' emañ ket he stad re vrav dija.

Evit bezañ reizh e roomp hiziv ur c'hloc'had all.

Brallet eo ar c'hleier, ar wech-mañ, gant P. Mac an Bheatha, ur skrivagner ha kelaouenner gouezelek, a reas ur brezegenn, e penn kentañ ar bloaz-mañ, diwar-benn an araokadennoù bet graet gant an iwerzhoneg abaoe un 30 vloaz bennak. Ha klevit penaos e tint laouen ar c'hleier ar wech-mañ ! Nemet, arabat en em douellañ, daoust d'an araokadennoù a zo meneget er pennad da heul, hervez un diverrañ eus ar brezegenn embannet gant ar gelaouenn c'houezelek sizhuniek " INNIU " (26.2.1971), e chom ankenius-meurbet stad ar yezh vroadel en Iwerzhon.

L. A.

« Ur maen-hent eo bet, hep mar ebet, an oferenn santel lavaret, bep sul, e gouezeleg en ilizoù ar gêr-benn. Lakaet a-gostez o levezon war an eneoù ez eo an oferinier-se un arouez kaer eus ar mont war-raok...

C'hoarvezout a ra din, ha me o labourat war va micher, kaout divizoù gant tud yaouank bet ganto o zesteni-uhel (ard-teastas). Kavet em eus bepred e vezent barrek da zivizout hep poan ha da verat kudennoù an deiz (e gouezeleg). Ne veze ket evel-se 30 vloaz a zo.

Soñj am eus eus ar stourm a voe ganimp, da skouer, evit ma vije lakaet ar roudennoù e gouezeleg war ar c'hirri-beajourien. Un dra diboell, sed a veze lavaret dimp en amzer-se. Graet eo bet abaoe ha n' eus bet diaester ebet da heul. Memes tra eo gant an embannoù en Aerborzh Dulenn hag e porzhioù-houarn pennañ Dulenn ha, marteze, e lec'hioù all. Kavet e voe adarre ne oa ket se un dra dic'hallus.

207

Soñj am eus ivez eus an amzer na oa nemet ur gelaouenn vizek c'houezelek ganeomp " An t-Ultach " ha pa ne oa roud ebet eus unan sizhuniek. Div gelaouenn sizhuniek hon eus bremañ hag e vez gwerzhet 20.000 niverenn eus unan anezho nemetken : " Inniu " (1). Gwechall, e-pad ur mare, e oa ur souezh gwelet ul levr gouezelek o tont er-maez. En deiz a hiziv kalz kompagnunezhioù a embann gouezeleg ingal. Unan anezho, " Foilseacháin Náisiúnta Tta " hec'h anv, a zo war-nes embann ul levr (gouezelek) bep miz. Kreskiñ a ra lod ar gouezeleg er c'helaouennoù pemdeziek. Tim Pat Coogan a embann hogos ur bajennad a-bezh pep sadorn en " Irish Press ", hag en " Irish Times " e vez embannet un hanter-bajennad muioc'h bep sizhun. Emañ an " Irish Independant " o vont d' ober kemend-all. N' eo ket kement-se ur vihan a araokadenn war dachenn an embannerezh.

Menegomp ivez kresk " an Tiegezhioù Gouezelek " hag hini ar goulenn evit

kaout skolioù izel hag etre nevez. Ur radio (ispisial) a zo bet prometet evit ar Gouezelva, labouradegoù nevez a zo (bet) savet e Tir C'honell (2) hag ur spered nerzhus a zo bet bepred en hor yaouankizoù. En holl draoù-se e kavomp peadra da gaout kalon ha fiziañs.

M' en dije pleget ar rummad-tud a oa war an dachenn 30 vloaz a zo e vije bet kollet pep tra hiziv... »

(1) Eben a zo " Amárach " (- Warc'hoazh). Poblekoc'h hag embannet, sañset, evit tud ar Gouezelva. " Inniu " a dalv kement hag " Hiziv ", " Hiniù " e gwenedeg.

(2) " Tir C'honell " - Donegal e saozneg.

NOTENNOU

Hor Mignoned

Laouen eo Anne-Gaelle ha Tangi LARNICOL-DOUSSIN o kemenn deoc'h ganedigezh o c'hoarig Maiwenn-Tifenn-Soazig, d' an 31 a viz Mae.

Laouen eo an Aotrou hag an Itron SOULABAIL o kemenn deoc'h ganedigezh o merc'h Nolwenn, en Arcachon, d' an 29 a viz Mezheven.

An Itron GUILLOUX a zo laouen da gemenn deoc'h eured he mab Pier gant Katrin ZEYEN, d' ar 5 a viz Gouere, e chapel Lenn Porzh Kaer Kebeg.

Hor gwellañ gourc'hemennoù.

Kañv

Klevet hon eus keioù marv an dimezell Mari SALOU e Kerlouan. Unan eus lennerezed feal " Al Liamm " e oa.

Aet eo ivez da anaon tri c'houmananter feal all :
An Ao.Ao. Yann-Loeiz BADOUAL, beleg, e Kintin, Emil CHAUVEL, boutaouer-koad e Logivi-Plougras, hag Erwan RENAN, beleg.

Yann-Ber NEDELEG, beleg, hag a rae war-dro al liderezh e brezhoneg en Eskopti Kemper, a zo aet ivez da anaon, a-daol-trumm, e miz Mezheven. Savet e oa bet gantañ ha Maodez Glanndour ar gelaouenn " Tudi hag Ober " a-raok ar brezel.

D' o familhoù ha d' o mignoned e kinnigomp hor gourc'hemennoù a gengañv.

Profoù

Degouezhet eo ganeomp ar profoù-mañ e-korf an daou viz diwezhañ :

MIZ MEURZH :

E. Connan, 15 lur ; L. Andouard, 20 ; L. Dorval, 25 ; G. Mahé, 20 ; Y. Sicard, 5 ; J.-C. Tanguy, 12 ; J. Creff, 20 ; J.-Y. Haspot, 50 ; A. Autret, 10 ; Y. Goarin, 4 ; H. Corbel, 5 ; C. Delalande, 25 ; F. Nedelec, 5 ; J. J. Kerdiles, 5.
- War un dro, 221 lur.

209

MIZ EBREL : Y. Souffes-Despre, 10 lur ; B. Lacroix, 5 ; G. Mahé, 20 ; E. Hemery, 25 ; E. Ropers, 14 ; H. Pungier, 5 ; F. Quemeneur, 9.
- War un dro, 88 lur.

1.734,17 lur profoù hon eus degemeret abaoe derou ar bloaz.
Bennozh Doue !

Ar Bed Keltiek

Roparz Hemon, re sammet gant labourioù a bep seurt, en deus goulennet diganeomp ma vefe staget Ar Bed Keltiek ouzh Al Liamm. Daouzek vloaz zo bet e miz Genver e teue er-maez niverenn unan Ar Bed Keltiek dindan renerezh Roparz Hemon. Goude bezañ bet kannad diabarzh ar C'hendalc'h Keltiek e teuas neuze da vezañ ul gelaouenn viziek.

Deut eo er-maez bep miz, hep un ehan e-pad daouzek vloaz, a-drugarez d' e rener ha d' an Dll Martin eus Brest. Embannet ez eus bet 150 niverenn o reiñ keleier a bep seurt hag o c'hoveliañ a-wechoù ar gerioù ret evit ar vuhez a-vremañ. Tro hon eus bet da lenn e-barzh kontadennoù, barzhonegoù, istor, yezhoniezh, troidigezhioù ha kanaouennoù.

Kalz a lennerien a vo kerseet moarvat pe ne zegouezho ket mui o c'helaouennig ganto. Al Liamm, avat, a zigor frank he dorioù d' Ar Bed Keltiek hag adalek an niverenn-mañ e vo kavet amañ an darn vuiañ eus pennadoù ABK. Hor mignon Roparz Hemon a vo ivez disammet hag a gavo muioc'h a amzer da skrivañ, da gas pennadoù d' Al Liamm ha da binvidikaat c'hoazh hol lennegezh.

Kenstrivadeg Al Liamm 1971

Burev Al Liamm en deus divizet reiñ prizioù evit ar gwellañ skridoù embannet adalek bremañ betek dibenn 1971 er gelc'hgelaouenn.

Ar prizioù a vo ar re-mañ :

- danevell verr (war-dro 10 pajenn) : 200 lur
- danevell verr (war-dro 5 pajenn) : 100 lur
- studiadenenn war arboellerezh broadel Breizh (war-dro 10 pajenn) : 200 lur
- studiadenenn (5 pajenn d' an nebeutañ) : 150 lur
- barzhoneg (war-dro 2 bajenn) : 100 lur
- barzhoneg (war-dro 1 bajenn) : 50 lur

Digor eo ar genstrivadeg d' an holl. Ur c'huzul, ennañ skrivagnerien anavezet, a raio dibab ar skridoù a c'hell bezañ embannet ha renkador ar skridoù embannet. Evel just, ar varnerien a ranko chom hep kenstrivañ. Evit pep danvez e vo savet ur roll eus ar 5 skrid gwellañ.

Ar pennadoù pe varzhonegoù a c'hell eta bezañ kaset adalek bremañ. Ret eo o c'has skriverezet pe d' an nebeutañ dornskrivet en un doare splann evit ar mouler. Ret eo o skrivañ war un tu eus ar follennoù hepken. Embannet e vint en doare-skrivañ peurunvan.

Pa gaser ur skrid ez eo ret menegiñ anv ha chomlec'h an oberour hag ivez ez eo kaset ar skrid evit " Kenstrivadeg 1971 ". An dornskridoù ne vezint ket kaset en-dro.

210

Embannadurioù Al Liamm

Deut eo a-zindan ar wask eil levrenn embannadurioù klok ar Bibl. Echu eo eta embannadur an Testamant Nevez. El levrenn gentañ e kaver ar Pevar Aviel hag en eil Oberoù an Ebestel, Lizheroù, Diskuliadur, 622 pajenn ment " Al Liamm " en holl.

Al labour-divent-se zo bet kaset da benn gant ur strollad beleien, dindan renerezh Maodez Glanndour.

Er bloaz a zeu e teuio er-maez levr kentañ an Testamant Kozh.

Spi hon eus e vo graet degemer mat d' an eil levr emaoamp o paouez embann, en doare ma c'hellimp, hep trabas, kas da benn an erv boulc'het.

Romant nevez Roparz Hemon " Tangi Kerviler " zo nevez deut er-maez ivez, kerkoulz hag eil mouladur danevelloù Ronan Huon " An Irin Glas " peurwerzhet abaoe tri bloaz. Hemañ a c'heller prenañ gant un distaol betek ar c'hentañ a viz Gwengolo.

A-benn tri miz e teuio er-maez ivez danevelloù Roparz Hemon " War ribl an hent " a dlee da gentañ bezañ embannet dindan an anv " Beajour ar Goañv ". El levr-mañ e vo kavet holl gontadennoù (15) Roparz Hemon bet embannet war Walarn ha war Al Liamm nemet ar re a gaver en dastumad " Kleier Eured ". Ul levr tev a-walc'h e vo, 304 pajenn ennañ. Da rakprenañ betek ar 1-añ a viz Gwengolo.

Barr-Heol

Niverenn 68 Barr-Heol zo degouezhet ganimp gant ur golo brav-tre e daou liv. An trede niverenn tennet dre offset ez eo hag aes eo da lenn. Dipitus eo e vefe displeberet gant un toullad mat a vioù-koukoug. Plijus eo bepred da lenn, avat, dre ar pennadoù hag ar c'heleier a bep seurt a gaver e-barzh. Hor gourc'hemenoù ivez evit al luc'hskeudennoù kaer.

Studi hag Ober

Niverenn 11-12 " Studi hag Ober " zo deut er-maez. En niverenn-mañ e kaver Ritual Sakramant ar Briedelezh a c'hello servij d' ar re yaouank niverusoc'h-niverusañ a fell dezho bezañ euredet e yezh o bro. E dibenn an dastumadenn e kaver follennoù 86, 87, 88, 89, 90, 91 ha 92 eus ar Bedenn evit ar Vro.

211

NOTENN : Ur Ritual ar Briedelezh a oa bet ivez embannet gant Barr-Heol un nebeut bloavezhioù zo kerkoulz ha Ritual Badeziant ar Vugale.

Kentelioù brezhonek eil derez, gant Per Denez

Ul levr skol nevez, ennañ 25 kentel ha 176 pajenn. Mat eo evit ar vrezhonegerien a-vihanik, pe evit an dud o deus graet ur bloavezh brezhoneg dija. Testenn pep kentel a zo ur pennad tennet eus oberennoù ar skrivagnerien a-vremañ. Goude ez eus : danvez un diviz evit skoazellañ ar c'helenner en e zisplegadurioù, un nebeut gerioù displeget, goulennnoù, ur gentelig yezhadur, ur boelladenn, un droidigezh da sevel diwar ar galleg hag ur pennad da sevel war eeun e brezhoneg. Danvez a-walc'h evit ur bloavezh skol a zo el levr nevez-mañ.

Hor Yezh

Evit skoazellañ ar gelennerien oc'h ober gant Cours Élémentaire Roparz Hemon, un c'haier poelladennoù 50 pajenn poelladennoù diwar-benn an 20 kentel gentañ. Kaier niv. 64 Hor Yezh - Priz 5,50 lur

Goulenn digant P. Denis, Le Ris, Ploaré, Douarnenez CCP
1499-51 Rennes.

Minikasedoù

Cours Elémentaire Roparz Hemon a zo bet enskrivet war bandennoù magnetek embannet e stumm minikasedigoù, gant Al Liamm, e ti-labour Philips. Evel-hen eo lakaet e servij ar brezhoneg ar binvioù modernañ a ve kavet evit kelenn. Daou vinikasedig a zo, war unan ar c'hentelioù 1 da 12, war egile ar c'hentelioù 13 da 25. Goude pep frazenn, goude pep ger, ez eus un tav, d'ar studier da c'hellout adlavarout diouzhtu ar pezh en deus klevet.

Geriadur Istorel

Degouezhet eo ganimp kaier 132-133 PREDER anezhañ Geriadur Istorel ar Brezhoneg. An 18-vet levrenn eo, mont a ra eus ar ger Klañv betek ar ger Korfigellus. Ar c'haier-mañ a goust 10 lur. Ar c'houmanant da 6 rann eus ar Geriadur a zo 48 lur. PREDER, c.c.p. 16 093 13, Paris.

212

Kreizennoù Sevenadurel Brezhon

Krog e vezer da sevel Kreizennoù Sevenadurel Brezhon bremañ e Breizh. E Gwengamp hag e Lannuon e labouront mat-kenañ abaoe wariene. Pleustret gant 50 pe 60 a dud eus kêr, ez int gouestlet dreist pep tra da studi ar yezh, d' ar stummañ dre ar yezh ha d' al lennegezh vrezhonek.

Div rann ez eus e pep Kreizenn : Rann ar Stummañ dre ar brezhoneg ha Rann ar Bruderezh dre ar galleg.

E Rann ar Bruderezh e vez fiziet aozañ prezegenoù diwar-benn Breizh hag ivez diwar-benn ar broioù all pe diwar-benn kement a zo sevenadurel. Digor eo enta Rann ar Bruderezh da gement tachenn veizel a zo, gant ma ne denno ket danvez ar prezegenoù da noazout ouzh speredegezh ha sevenadur Breizh.

Akediñ a ra ivez izili ar Greizenn da chom hep ober tamm politikerezh ebet e galleg, rak e brezhoneg arnevez ez eo kalz sklaeroc'h pep mennoz politikel, ken e-keñver Breizh, ken e-keñver ar bed.

Krediñ a reomp e vefe tu da sevel Kreizennoù Sevenadurel Brezhon e lies a gêr pe gêrig eus Breizh. Dont a ra kudenn kelennerzh ar yezh vrezhonek da vezañ difraeüs, ha ret e vo kaout kelennerion a ray war-dro diskibled a bep seurt, kozh ha yaouank, en diavaez d' ar skol, na ve ken evit stummañ kelennerion nevez.

E Gwengamp hag e Lannuon e vez graet ar c'hentelioù war ar yezh o renkañ an dud dre rummadoù, hervez ma vezont galleggerion unyezhek pe rannyezheion vrezhonek, ar rannyezheion o vont gant an eil re pe gant ar re all diouzha ma vezont barrek pe varrekoc'h war ar yezh komzet.

Ar c'hentelioù war al lennegezh a vez roet e brezhoneg hepken. Graet int evit tud, yaouank dreist-holl, o deus desket lenn, skrivañ ha komz ar yezh lennegel. D' ar c'hentelioù-mañ e teu darn eus krennarded ar skolioù eil dereb, desket ganto ar yezh, hag ivez danvez-mistri ha kelennerion. E seurt giz e talv ar C'hreizennoù Sevenadurel Brezhon da glokaat ar gelennadurezh en deus bet endeo diwar-benn an Emsav kement hini a zo bet mui pe vui war studi ar brezhoneg.

Kefridi pep Kreizenn zo neuze klask ober ar pezh na ra ket, siwazh, ar Skol

Devezh studi Kevredigezh an Deskadurezh Nevez

Un devezh studi aozet gant K. D. N. zo bet evit gelennerien e Skol-veur Roazhon d' an 23-06-71.

Ar c'helenner GAGNEPAIN, dic'hallus dezhañ dont, zo bet komzet en e lec'h gant Per DENEZ. Ar strukturelegezh, emezañ, zo un doare nevez da sellout ouzh ur yezh eviti hec'h-unan hag enni hec'h-unan ha n' eo ket diwar harp ar yezhoù all : studiet e vez framm ur yezh en ur mare pe ul lec'h resis ha pa ranker da geñveriañ e keñverier ar frammoù. Pep yezh zo dezhi he framm dibar.

Goude merenn eo bet studiet gant ar burev ar c'hudennoù pleustrek o tennañ d' ar c'helenn. N' eus ket a gemm : n' eus plas ebet, koulz lavarout, evit ar brezhoneg en arnodennoù ; dic'hopr eo dalc'hmat ar gelennerien ; ha daoust da se e ya war-raok ar c'helenn brezhoneg.

Ar burev a oa da adnevesaat : anvet eo bet en-dro ar burev a-raok.

An Aotrou BOURDELLEZ a gomzas diwar-benn pinvidigezh Breizh er 15vet kantved (betek 1532). Aozet e oa e brezegenn diwar testennioù skrivagnerien ar mare-se, ar pezh a lavar istorourien an amzer-se hag an testennioù chomet en amzer vremañ. Ma 'z eus ur gentel da dennañ eus an istor, emezañ, eo karantez an dud ouzh o bro ha frankiz ar Vretoned.

E-pad 10 kantved eo bet kelennet hon hendadoù gant ar varzhed, a zisplegas Paol KALVEZ da c'houde, e-pad 10 kantved all int aet d' ar skol c'hallek hag abaoe un nebeut bloavezhioù e krog an deskadurezh hollvrezhonek da sevel he fenn adarre. Ur vro dieub ? emezañ, pa vo dieub pep den e vo dieub an dud. Ha n' hellomp adkavout hor frankiz hiniennel nemet dre berc'hennañ hor yezh.

Gant peseurt geriadurioù eo mat deomp ober ? Displeget e voe evit echuiñ gant Gw. An MENN. Evit an henvrezhoneg n' hellomp ket tremen hep labour L. Fleuriot, evit ar c'hrennvrezhoneg hep labourioù Ernault. Evit ar brezhoneg a-vremañ e vez mat deomp mont da bennaouiñ e geriadurioù Gregor Rostren, Ar Pelletier ha tostoc'h ouzhimp Ernault, Vallée ha R. Hemon.

Evit kaout dishleriadurioù all, skrivañ da :
K. N. D., 12, rue Astor, 29/3 - Quimper

Skourr An Deskadurezh Vroadel

DEVEZHIOU STUDI WAR AN TROEREZH

Devezh studi an 22 02 71 e Kastellin.

Studiet eo bet an testennoù-mañ :

NGUYEN DINH THI : Al lennegezh e Vietnam.

MATUCENKO : Istor ar gadlonk Potemkin.

Christiane ROCHEFORT : Ha tu ez eus c'hoazh da gomz eus Doue.

Devezhioù studi an 10-11-12 04 71 e Sant-Teve.

Studiet eo bet an testennoù-mañ :

X. : Noblañs ha bourc'hizion.

BAUDELAIRE : Dic'hoanag an hini gozh.
Ch. DE GAULLE : Yezh ur bobl.
Frantz FANON : Nevezadurioù ha stuzegezh Aljeria.
J.-J. SERVAN-SCHREIBER : Ar Frañsizion hag ar C'hreizennañ.
C.-V. GHEORGHU : Milan Paternik.
EXBRAYAT : D' ar c'hentañ gwel...
R. SABATIER : An alumetez svedat.
A. GUEPIN : Ar sokialouriezh displeget da vugale ar bobl.
Levr Gwenn ar C.E.L.I.B. : Barregezhioù al labour-douar breizhat.
Agatha CHRISTIE : An Aotrou Quinn.
Almanak ar moraer breizhat : Daelañ.
GORKI : Va buhez bugel.
E. VITTORINI : Kendiviz e Sikilia.
C. ETCHERELLI : Eilse pe ar vuhez wirion.
PRÉVERT : Marc'h en un enezenn.
Danevell dalc'hioù Stockholm, 2-4 Mezheven 1965 : Ar c'henlabour etre riezoù,
Norz Europa.

Devezh studi an 09 05 71 e Paris.

André CHEVRILLON : Boem Breizh.
J. MONOD : An dargouezh hag ar retvez.
DIDEROT : Niz Rameau.
J.-F. REVEL : Na Marx na Jezuz.

Devezh studi an 20 06 71 e Kastellin.
Kalevala : Penaos e voe gant an hudour kozh a anaveze holl ganoù an douar hag an
neñv.
ANDERSEN : Ar varc'hadourez vihan alumetez.
EXBRAYAT : " Chianti et Coca-cola ".

DEVEZHIOU STUDI PASK 1971 e SANT-TEVE

Aozet ez eus bet tri devezh studi war ar yezh hag ar gelennadurezh e Sant-Teve,
eus an 10 d' an 12 Ebrel.

Al labour war ar yezh a voe renet e stumm dalc'hioù troerezh. Pleustret e voe
war ar gelennadurezh dre zeskiñ d' ar berzhidi ober diverradurioù eus pennadoù a
bolitikouriezh, armerzhouriezh ; displegañ ur c'hraf burutellet da c'houde e-ser
ur gendael.

Eus 09 eur da 11 eur : diverradurioù. Pennadoù studiet : Pelec'h gwriziennañ ?
Emsav 6/129. Divrazadur kudenn an darempredoù gant ar sokialouriezh, Emsav
41/143. Penaos meizañ al lennegezh vrezhon hiziv ? Emsav 50/61. Dezrann
obererezh politikel 1970 E.S.B., Emsav 51/76. Brastres ar c'heñverioù etre an
Emsav hag emdroadur armerzhel ha kevredigezhel Breizh. 2. - An eil Emsav (1918-
1944), Emsav 40/113. Lec'h al ledemsav en daelerezh-dieubiñ, Emsav 31/195.
Brastres ar c'heñverioù... 1. - An Emsav kentañ (1800-1914), Emsav 43/211. Dremm
dispac'hel ar brezhoneg, Emsav 27/69.

Eus 11 eur da 12 eur : studiadenn war ur c'hraf dibarek ha kendael. Studiadennoù
: Ar gevredigezh a reomp hag ar gevredigezh hon eus da grouiñ. Labour er framm
gall ha labour en Emsav. A zivout pevar stael an dispac'h.

Eus 14 da 16 eur, hag eus 17 da 19 eur : dalc'hioù troerezh. Roll an testennoù
studiet a gaver uheloc'h.

216

KENTAÑ DALC'H-ARNODENNAÑ 1971 E ROAZHON
d' an 20 Mae 1971

Bevoniezh. Degemeret : an It. Nannig CHEREL gant ar meneg damvat.

Amprouenn dre gomz : Deskrivit ent fetis un nebeut arselladennoù aes da ziskouez rannoù disheñvel ar gellig vev. Deskrivit gant skoazell skeudennoù nukleüz ar gellig plantel. Termenit ar sukrennoù ha displegit penaos e tremener anezho d' ar glukid kemplezh. Deskrivit ar gwered a fiñvusted er c'helligoù dieub. Keñveriiit doareoù-empoueta ar Plant-mañ : Louzaouenn-ar-Glizeh ; Bara-gad ; Loued ar bara. Deskrivit ar c'hoidigezh alkoolek ha keñveriiit hi gant an analidigezh er ster ordinal. Lavarit petra a c'hell organeg an Anevaled ober gant ar gremm a-reñver. Deskrivit disveveladoù organeg Mab-den. Displegit pe dre hentenoù e c'haller dizoleiñ perzhioù ar vitaminoù. Deskrivit kleñvedoù ar wagrenn-skoed.

Fizik-II. Degemeret : an Ao. Loeiz MOULLEG gant ar meneg mat.

Amprouenn dre gomz : Termenañ savoniezh, heverenn. Da betra e talvez un aerbouezer, ur gwaskventer. Savelenn Boyle-Mariotte. Div boelladenn : korfoù war neuñv ; aervag.

Istor. Degemeret : an Ao. Herri FICHET gant ar meneg damvat. Amprouenn dre gomz : An eil Emsav. Armerzh ha kevredigezh e Breizh en 19^t kantved.

Douaroniezh-I. Degemeret : an Dim. Anna PALARIC gant ar meneg damvat.

Amprouenn dre gomz : Tresit ur gartenn ha displegit doareoù pennañ armerzh Kanada. Emdroadur ar gounezerezh sinaat ; penaos eo bet diskoulmet ar c'hudennoù ?

Douaroniezh-II. Degemeret : an Ao. Yann MIKAEL gant ar meneg mat.

Amprouenn dre gomz : Keñveriañ armerzh Japan, Sina hag Alamagn.

Kimiezh. Degemeret z an Ao. Loeiz MOULLEG.

Amprouenn dre gomz : Keal an amsav.

Poelladenn : jediñ henfeur div drenkenn en ur meskad.

217

An Trec'h Kentañ e 1971

Aozet e vo an Trec'h Kentañ hevlene evel bep bloaz. Kemmet eo bet un tammig ar reoliadur. Setu pezh a dalvezo da reoliadur diazez evit ar bloaz-mañ.

I. - DANVEZ AN ARNODENN.

a) Yezh : Diskouez ez eur gouest da gompren ar brezhoneg ha da ober gantañ war dachennoù eeun meurbet.

- gerioù ar brezhoneg eeun ;
- yezhadur Roparz Hemon ;
- 15 pennad da studiañ (dibabet gant ar skolidi o-unan pe gant o c'helenner. Pep frankiz zo ganto evit an dibab). War-dro 100 linenn e vo ar pennadoù-mañ. Tu vo da ginnig nebeutoc'h a bennadoù gant ma vint hiroc'hik pe ul levr en e bezh. Ma n' en devo ar skoliad pennad ebet da ginnig deiz an arnodenn e vo roet dezhañ ur pennad e brezhoneg eeun.

b) Istor Breizh : Studi dre vras emdroadur ar gevredigezh vrezhon hag an darvoudoù politikel pennañ.

ch) Douaroniezh : Studi dre vras : douar, hin, poblañs, ekonomiezh.

c'h) Gouzout kontañ difazi.

II. - GOULENNOU AN ARNODENN.

An arnodenn a vo anezhi ul lodenn dre skrid hag ul lodenn dre gomz. Peurvuiañ e

vo lakaet tremen an div lodenn en hevelep deiz.

a) al lodenn dre skrid (notennet war 60) [a bado un eur hanter] :

- ur skrivadenn (ur pennad e brezhoneg eeun) (war 20) ;
- goulennoù war ar skrivadenn (war 20) ;
- ur pennad da sevel (war 20).

b) al lodenn dre gomz (notennet war 60) :

- lenn ur pennad eus ar re a vo bet studiet (gwelout uheloc'h) (war 10) ;
- displegañ gerioù ha reolennoù danvez ar pennad-se (war 10) ;
- respont da c'houlennoù o tennañ d' ar pennad-se (war 10) ;
- respont d' ar goulennoù diwar-benn traoù ar vuhez pemdeziek (war 10) ;
- istor ha douaroniezh (war 10) ;
- jederezh (war 10).

Degemeret e vo ar re o devo bet 60 war 120 etre an div lodenn.

Roet e vo ar meneg mat a-walc'h d' ar re o devo bet 72 war 120, ar meneg mat evit 84 war 120, ar meneg mat-tre evit 96 war 120. Meuleudi ar varnerien o devo ar re a-vo o notenn 105 war 120 pe ouzhpenn.

218

Divizoù all.

Dalc'het e vo ur vodadeg arnodenniñ e-doug Kamp ar Vrezhonegerien a vo hevlene e Plancoet, eus an 13 d' an 30 a viz Gouere.

Ar gelennerien o deus skolidi a zo c'hoant ganto tremen an arnodenn en ur mare all a zo pedet da skrivañ da Gevredigezh An Deskadurezh Devez a ra war-dro an arnodenn en doare da zivizout deiziadoù ha lec'hioù all :

KEVREDIGEZH AN DESKADUREZH NEVEZ, A. ar Beg, 12, rue Astor, 29/S - Quimper.

Brest : Oaled Sant Erwan 1970

Ar boaz a zo kemeret : div, teir gwech ar sizhun, tud a zeu ingal d' an Oaled. Evit komz brezhoneg ? Ya. Hag evit kejañ gant mignoned, klevout o soñj, deskiñ, skoazellañ ivez, alies...

Ar re-se a zo ar pileroù, met lod all a zeu evit goulenn an dra-mañ-tra. A bep seurt : levrioù, pladennoù, deizadurioù (evit envel babigoù, ar c'hiz 'zo, ket 'ta). Evit kentelioù... Pe... evit netra. Dre giriusted, souezhet dirak ar stal gant levrioù brezhonek. Na plijus a-wechoù toullañ kaoz ganto ; na trist gwechoù all : tud kozh digalonekaet, tud dilabour, korkerien gaezh a zispleg o flanedenn o klask sikour...

Klinkadur ar gwitrin a gemm bep sizhun, aozet alies gant ur arzour, den a vicher : P. Gwirieg, ha neuze ken kaer e vez pe gaeroc'h eget n' eus forzh pe stal levraouer eus ar ru Siam !

Diskouezet e vez levrioù, pladennoù. Gwechoù, staliet evit un degouezh : bruderezh evit " Galv O.LO.LE ", evit " Kelc'h Henstudi Bro-Leon ", evit gouel Nedeleg ; ivez, da geñver prezegennoù : War Vro-Berou, war Vro-Iwerzhon, war savadurioù relijiel hor bro, h.a.

Meur a gaozeadenn a zo bet e-doug ar bloaz :

- « Emdroadur an obererezh kulturel er vro », gant Y. Olier.
- « An Emsav e Bro-Gembre », gant an Ao. Kalvez.
- « Un dro e Bro-Iwerzhon », gant an It. Manac'h, gant diapozitivoù ha sonerezh keltiek.
- « Labour ar Stivell », gant G. Kreac'h.

- « Savadurioù Bro-Leon en argoll », gant F. Le Bot. Skeudennoù luc'hvannet oc'h harpañ komzoù ar prezegour.
- « Ur seil war an Andoù », gant an Ao. Troal, a ziskouezas taolennoù kaer deuet gantañ eus ar Perou.

Ar skol vrezhonek kentañ hag eil bloavezh a gendalc'h ingal.

Gwerzhet 'zo bet levrioù, pladennoù, kelaouennoù, h.a., evit 1.541 lur.

Ul lodenn vat anezho a zo bet gwerzhet gant izili eus an Oaled, pergen H. Girardon, e-doug gouelioù a bep seurt, pe war ar blasenn. Salv e vije kalz tud a seurt-se.

219

Un nebeut brav a levrioù ha kelaouennoù a zo bet amprestet e levraoueg an Oaled.

Ret eo implij hor yezh e pep degouezh, ar muiañ posupl er vuhez foran. Se a zo soñj tud Oaled Sant Erwan. Dre se, lod anezho a gemeras perzh e brezhoneg er bodadegoù graet da geñver ar votadegoù evit envel kuzulierien ganton, o c'houlenn traoù resis evit implij ar yezh. Selaouet ha respontet hegarat e voent bepred.

Lizhiri a zo bet kaset a-berzh an Oaled :

- Da holl veleien Vrest ha d' an Eskibien, evit lakaat sklaer dirazo stad reuzeudik brezhonegerien Vrest (anezhi brasañ ker vrezhonegerez a Vreizh a-bezh). Gant keuz bras, ret eo anzav e seblant bezañ evito ur gudenn didalvez : n' eus bet nemet ur respont.
- D' an Ao. Quemener, kuzulier jeneral, evit ar c'hinnigoù graet gantañ d' ar C'huzul, evit ma vo implijet, doujet hag enoret hor yezh e pep lec'h evel maz eo dleet.
- Da gadoriad ha da izili ar C'huzul departamant hag o deus votet a-du, o tiskouez emaint tost d' ar bobl hag e komprenont talvoudegezh hor yezh hag hor sevenadurezh.

Katz skoazell hon eus resevet e-doug ar bloaz digant " Brudañ ha Skignañ ", en deus hor sikouret evit ar bruderezh. Bennozh dezho.

Emsav ar Bobl Vrezhon. Devezhioù-studi an hañv

Evit ar studierion a labour e-pad ehanoù an hañv e vo dalc'het devezhioù-studi e derou miz Gwengolo. Al lec'h hag an deiziadoù resis n' int ket bet divizet c'hoazh. Kemennet e vint a-c'houdevezh d' ar re a roio o anv adal bremañ.

Evit kaout muioc'h a ziskleriadurioù, skrivañ da :
EMSAV AR BOBL VREZHON, 30, place des Lices, 35 - Rennes.

Imbourc'h

Taolenn an niverenn 16 - 30 Ebrel 1971.

Tonkad Imbourc'h. - Breutadeg diwar-benn Skol An Emsav (kendalc'h) : lizher kaset gant ur c'helenner eus Skol An Emsav hag addisplegoù d' al lizher-se. - Kevredoniezh un dispac'h pe : pempvet bloaz an dispac'h aljeriat, 1959, hervez levr Frantz Fanon : Stourm ar framm gall a-enep d' ar stuzegezh hengounel en Aljeria, gant Yeun Gourvez. Addisplegoù e ser ar pennad-mañ, gant Y. O.

Taolenn an niverenn 17 - 31 Mae 1971.

Distro ar sarpant-mor pe gudenn ar skritur stignet adarre : peseurt ster politikel reiñ d' an darvoud-se ? gant Y. O. - Ar Reverzhi c'hlas, gant Jakez ar Bihan. - Lizher digor d' an embanner, gant Kervorc'h. - War-du ar bloaz daou-vil : rakwelioù armerzhel. - An dispac'h israhelat, gant Y. G. (hervez levr Ben Gourion).

220

Un dastumad barzhonegoù nevez gant Youenn Olier

Emañ Youenn Olier o paouez embann un dastumad barzhonegoù berr dindan an talbenn Kelc'h an amzer. Nevez eo an holl bezhioù barzhoniezh-se. 151 levrenn a gant pajenn a ya d' ober an dastumad-mañ. Ar re a garfe pourchas an oberenn-mañ a c'hell skrivañ da : Y. OLLIVIER, 7, Bd A.-Burloud, 35 - Rennes. Ar priz anezhi a zo : 12,00 lur. C.C.P. Y. Ollivier 1534-25 Rennes.

Celticum XIX

Christian-J. GUYONVARC'H, Le Catholicon de Jean Lagadeuc, Dictionnaire breton, latin et français d'après l'édition de Jehan Corre, postérieure à 1499, antérieure à 1531, in-folio gothique de la Bibliothèque Nationale (Réserve X 946).

Betek-hen ne oa anavezet ar c'hCatholicon nemet dre an arroudoù berr-tre, amglok ha fazius a-wechoù, lakaet gant Emil Ernault en e Glossaire Moyen-Breton, moulet e diwezh ar c'hantved diwezhañ. Graet e oa bet ivez un embannadur berraet-fall ha leun a fazioù lennadur eus an destenn 1499 gant Ar Menn e 1867. E Celticum XIX ez eus eta an destenn aozet ha moulet gwechall gant Jehan Corre. Klok eo ha savet hervez pajennoù ar mouladur kentañ. Kant folio (200 pajenn) a zo en holl, hag en a-raok e teu ur rakskrid o tiskleriañ pehini eo talvoudegezh ar c'hCatholicon e-keñver yezhoniezh ar brezhoneg a-hed ar c'hantvedoù ha penaos ober gantañ.

Bez' ez eo ar c'hcatholicon ar skrid koshañ o reiñ deomp un alberz resis eus ar yezh komzet ha skrivet e Breizh e diwezh ar Grennamzer. Bez' ez eo ouzhpenn unan eus ar geriadurioù kentañ moulet en Europa a-bezh ha talvoudus n' eo ket evit ar geltiegourien hepken. Pouezus eo ivez evit arbennigourien ar galleg hag al latin krenn.

208 pajenn : 100,00 lur (+ 4,00 lur evit ar mizoù-kas) : KRP Rennes 293 60 war anv an Ao. Pierre Le Roux, B. P. 574, 2, rue Léonard-de-Vinci, 35 - Rennes.

N. B. - Embannet eo labour Jehan Corre da gentañ holl en abeg d'an niver brasoc'h a frazennoù hag a c'herioù brezhonek hag a zo ennañ. Al levrioù all a vezo embannet hervez an urzh-mañ da heul :

- embannadur J. Quillevéré (1521),
- embannadur J. Calvez (1499),
- an dornskrid (1464).

War o lerc'h e vezo embannet ul levr pouezusoc'h c'hoazh, ennañ notennoù hag addisplegoù e-leizh.

221

Skingomz ha Skinwel

" Skingomz ha Skinwel ", Kevredigezh Vreizhat Selaouerion ha Pellwelerion an O. R. T. F., a glask brezhonegerion ampart, gant un tammig amzer vak, evit kenskrivañ gant studierion war ar brezhoneg, ha barrek da reizhañ o lizheroù. Reiñ da c'houzout an oad, diwar-benn petra e karer komz ar muiañ, lennegezh, jedoniezh, istor, douaroniezh, sonerezh, mezegiezh, sportoù, ha., hag hag-eñ e c'hoantaer kenskrivañ gant ur verc'h pe ur paotr.
- Skrivañ da " Skingomz ha Skinwel ", 18 bis, rue Duguay-Trouin, 22 - Saint-Brieuc.

Bro-Kembre

SONEREZH KEMBRAEK

Araokadennoù nevez ha bamus en deus anavezet c'hoazh ar sonerezh pop ha folk-song kembraek er mizvezhioù dlwezhañ. Displeget e vez sonadegoù betek ar c'hêriadennoù pellañ ha dedennet e vez bewech ouzhpenn mil selaouer, moulet e vez pladennoù gant pemp kevredigezh en em gav en o bleuñv, dalc'het e vez Eisteddfodau sonerezh pop diniver, savet kluboù estlammerion er skolioù, aozet abadennoù niverus er skingomz hag er skinwel ; e-touez lennetañ bannoù ar gelaouenn gembraek Y Cymro eo " top 10 " a ro titloù an dek kanaouenn brudetañ er mare, anavezet eo dreist-holl anvioù Dafydd Iwan, Tony hag Aloma, Y Tebot Piws, h.a.

N'eo ket ar sonerezh pop kembraek-se e neb doare un drevezadenn eus ar sonerezh saoz pe norzamerikat, pell a se. Kenderc'hel a ra an hengoun kembraek ha keltiek hag evel er varzhoniezh kembraek henvoazel e fell d' ar yaouankizoù-se kanañ o bro, o fobl hag an darvoudoù. Sonerezh zo evit bep blaz dre ma kaver lazioù-seniñ fentus, re all politikel ha taer, re all trist hag hiraezhus, met karantez Kembre zo ganto holl ha berzh ar sonerezh-se a ro ul lañs nevez d' ar c'hembraeg er yaouankiz kembreat.

Ouzhpenn 200.000 pladenn a vez moulet bep bloaz gant Cambrian Recordings, brasañ ti-embann pladennoù ar vro, 135.000 anezho e kembraeg. N' eus ket pell e tisklerie d' ur c'helaouenner rener an ti-se, an Ao. Josiah Jones : « Lod eo ar sonerezh pop eus azginivelezh ar sevenadur kembraek abaoe dek vloaz. Ne seblant ket ar goulenn war-nes digreskiñ ha diaes eo deomp respont dezhañ. Ret eo lavarout ivez ez eo bet graet araokadennoù bras evit pezh a sell ouzh perzh-mat ar sonerezh ».

E meur a stal-pladennoù e Kembre e vez graet an drederenn eus ar gwerzhioù gant pladennoù kembraek. Un azon eo kement-se eus emdroadur don ar speredoù e yaouankiz Kembre. Laouen eo ar yaouankizoù o kanañ e kembraeg ha chom a reont er vro e-lec'h mont da glask berzh ha brud da Vro-Saoz evel ma veze graet n' eus ket pell c'hoazh : chom a ra mui-ouzh-mui e Kembre ar yaouankizoù donezonetañ. Setu da skouer pezh a zisklerie Dafydd Iwan, n' eus ket pell : « Ne vefe ket diaes din kaout kalz muioc'h a selaouerion, n' eus nemet kanañ e saozneg. Echu eo avat gant an amzer-se hag a-bouez eo bremañ kanañ e kembraeg hepken ».

222

AR STOURM EVIT AR YEZH E KEMBRE.

Deraouet en deus ur prosez nevez en Abertawe (Swansea) d' an 3 a viz Mae : edo o tremen ur wech ouzhpenn dirak ar varnerion izili eus Cymdeithas yr Iaith (Kevredigezh ar Yezh) gant an tamall bezañ steuet iriennoù ha diskaret arouezioù-hent. Ul labour spontus en deus kaset da benn evit gwir an dornad a dud kalonek a stourm er gevredigezh-se, dindan un nebeut mizvezhioù : diframmet pe livet e gwer o deus miliadoù a arouezioù-hent saoznek dre Gembre, ha peget warno skritelloùigoù " Cymraeg ! ". Hervez ur c'hannad frankizour o deus graet endeo ouzhpenn 6.000 lur saoz a freuzioù, eleze ouzhpenn 70.000 francs.

N' o deus ket stourmet en aner hag embannet eo bet dija abaoe 1967 tost da 300

diell kefridiel e kembraek. Kirri-post niverus zo skrivet bremañ warno " Post Brenhinol / Royal Mail ". Ret eo lavarout ivez emañ a-du ganto darn vras ar Gembraegerion (ket an holl ha degemer a reont alies lizheroù-kunujenniñ) : embannet e vez bremañ er c'helaouennoù rolloù hir gant anvioù an dud o deus nac'haet paeañ an telloù-skinwel evit enebañ ouzh skorted an abadennoù kembraek er skinwel. Un nebeut mizvezhioù 'zo pa voe lakaet Dafydd Iwan en toull dre ma nac'he paeañ un dell-gastiz, e voe paeet houmañ gant tud a lezenn kembreat.

Merket e voe ar prosez-se gant meur a zarpoud. D' an deiz kentañ e teuas Meinir Evans (21 vloaz), merc'h Gwynfor Evans, ha Nan Jones (22 vloaz) da deurel dirak savadur al lez-varn arouezioù-hent saoznek diframmet evit diskouez e kendalc'he ar stourm daoust ma oa tud en toull. Nac'h a reas an damallidi komz saozneg evel just ha ret e voe gervel ur jubennour. Da zeiz kentañ ar prosez ivez e rogas Frederick Francis (22 vloaz), sekretour ar gevredigezh, ha Gwilym Tudur (30 vloaz) ar follennoù-tamall hag e taoljont anezho el lez-varn. Kaset e voent raktal d'an toull en-dro. Pa voent galvet ur wech all e stagjont da gomz e kembraeg dibaouez ha ret e voe o c'has d' an toull en-dro evit o lakaat da devel... Nac'h a rejont kenlabourat e neb doare gant ar varnerion betek diwezh ar prosez.

Anavezet e voe ar varnedigezh d' ar 14 a viz Mae. Kondaonet e voe 5 eus an damallidi d' ur bloavezh toull-bac'h, unan da c'hwec'h miz hag unan all da dri mizvezh met goursezet e voe an holl gastizoù-se « evit reiñ dezho ur chañs diwezhañ ». Moarvat ne felle ket d' ar varnerion ober merzherion ha sevel ar mennoz-foran a-du gant ar yaouankizoù-se evel warlene pa voe bac'het Dafydd Iwan. Diskleriet o deus an harozed yaouank-se edo ar stourm o kenderc'hel evel just evit adreiñ d' ar c'hembraeg e lec'h e Kembre.

223

KEMBRE HAG AR C'HENVARC'HAD.

Anat eo d' an holl bremañ n' en em savo ket ken taer Pompidou a-enep da zonedigezh Breizh-Veur er C'henvarc'had europat evel ar jeneral De Gaulle en amzer dremenet. Un afer vat e vo moarvat evit kouerion hag embregerion Vreizh met gwall-chalet eo hor breudeur kembreat gant heuliadennoù Y Farchnad Gyffredin (ar C'henvarc'had) evit o armerzh hag o sevenadur. Gant gwir abeg e klemmont n' eus bet graet studiadenenn sirius ebet war an heuliadennoù-se hag evel ar Skosiz e truezont da chom hep gallout marc'hata o-unan divizoù o donedigezh. Skignet o deus al lugan-se "Dim mynediad hep lais " (donedigezh ebet hep ur vouezh).

Setu pezh en deus diskleriet nevez zo Dafydd William, sekretour meur ar Plaid Cymru, strollad broadel Kembre :

« Ne gav ket deomp e tenno he mad Kembre eus an donedigezh er C'henvarc'had. Ma teu da vezañ ar Gumuniezh europat pezh a zo bet rakgwelet gant Feur-emglev Roma met pezh n' eo ket c'hoazh, e kav deomp ne vo nemet ar ranndirioù-kreiz evit bleuñviñ ha war washaat ez ay buan stad an traoù er ranndirioù-tro.

« Dre heuliañ reolennoù ar C'henvarc'had n' hello ket ken ar gouarnamant skoazellañ diorren ar greanterezh e Kembre rak ne vo aotreet ar skoazelloù-se nemet er ranndirioù reuzeudikañ evel re Su-italia. Hep ar skoazelloù-se, hep frammoù armerzhel yac'h ha gant ur rouedad hentoù krennamzerel, ne vimp ket evit tennañ korvo e nep doare eus dreistelezh un nevid kalz ec'honoc'h.

« Politikerezh gounezal ar C'henvarc'had a noazo ouzh gounezerezh Kembre, dreist-holl ouzh ar c'henderc'hadoù laezhek hag ouzh gounezadurioù an torgennoù. Dont a ray hor chatal da vezañ kalz re ger. Skoet fall e vo eta ar gounezerezh kembreat gant ar C'henvarc'had ha freuzet da heul buhez ar maezioù : sevel a ray an dilabour ha rediet e vo an dud da zivroañ dreist-holl er ranndirioù kembraeger.

« War an dachenn bolitikel e vimp rediet da c'houzañv politikerezhioù eus an tu dehou n' hon eus ket amzer evito e Kembre... N' omp ket tud bonnet o

speredoù d' o aferioùigoù-diabarzh. Krediñ a reomp er c'hontrol e rankomp labourat evit ur gumuniezh europat ec'honoc'h na vo ket bevennet d'ar C'henvarc'had hag a vo digor d' ar bed-diavaez. »

Kendalc'h Keltiek Stirling

E Bro-Skos, e kêr Stirling, e vo graet ar C'hendalc'h Keltiek hevlene. Kregiñ a raio d' al Lun 16 a viz Eost hag echuiñ d' ar Sadorn 21 diouzh ar mintin. An Ao. William Hume, sekretour-meur ar C'hendalc'h Keltiek, hag unan eus tud pouezusañ Skourr Bro-Skos, a zo e karg eus aozadur Kendalc'h Stirling. Graet e vo ar C'hendalc'h gant skoazell Skol-Veur Stirling, Kêr Stirling, Ker Dunfermline hag Highlanders Institute Glasgow. Beajoù a vo da Lochearnhead, d' an Trossachs ha da Glasgow. Lojet e vo an dud en ostalerioù ar Skol-Veur, anezho tiez nevez-flamm e-kreiz liorzhoù meur. An dud a garfe mont a zo pedet da gas o anv da b-Per Denez : Sekretour Skourr Bro-Skos a bourchaso paperioù da leuniañ, goulenn a ra ma vo paeet en a-raok priz ar boued, al lojeiz, ar beajoù, hag all. Ar follenoù enrollañ a vo kaset gant sekretourva Breizh kerkent ha degemeret digant Skosiz. Degas a reer da soñj e ranker bezañ ezel eus Skourr Breizh, da lavarout eo bezañ paeet 10,00 lur d' an deñzorierez (Anna Le Bec, 2, rue Astor, 29/8 - Quimper - C.C.P. 1420-35 Rennes).

224

Digant Skourr Bro-Skos hon eus degemeret ar prizioù-mañ : c'heloù-mañ : priz ar boued hag al lojeiz en ostaleri ar Skol-Veur a vo :

- bed and breakfast (kambr ha dijuniñ bihan) : 27 shilling 6 penny ;
- board and lodging (kambr ha boued, 3 bred-boued) : 43 shilling 6 penny ;
- kambr ha daou bred : 40 shilling.

A-hend-all, ur c'hampva eus ar re wellañ a zo nepell diouzh ar Skol-Veur, 10 shilling dre noz ha dre deltenn eo ar priz. An dud a garfe kampañ eno a ranko renkañ pep tra o-unan gant ar perc'henn : Mr McKerracher, Witches Craig, Blairlogie, Stirling. Ur miltir diouzh ar Skol-Veur emañ al lec'h.

D' ar mare ma skrivan kement-mañ (kreiz miz Mae) e talvez al lur sterling kement ha 13,37 lur. Gant se, 27 shilling 6 penny a zo war-dro 18,50 lur gall, 43 shilling 6 penny a zo war-dro 29,00 lur ha 40 shilling a zo war-dro 26,80 lur.

Setu amañ roll an abadennoù :

Lun 16 a viz Eost : Degemer ar gendalc'hidi. Koan. Degemer er Skol-Veur. Ceilidh " etre mignoned ".

Meurzh 17 a viz Eost : Dijuniñ. Degemer ofisiel a-berzh ar C'hendalc'h ha gourc'hemenoù digant pep Skourr. Kafe. Prezegenn gentañ gant Kenneth D. MacDonald, lenner war ar c'heltieg e Skol-Veur Glasgow. Lein. Beaj dre garr-boutin betek Dunblane. Servij Protestant en iliz-veur Dunblane, lidet gant ar Rev. Angus MacAskill, Forteviot. Servij Katolik. Te. Beaj da Glasgow dre an Trossachs. Koan en Highlanders Institute ha goude-se, ceilidh. Distro dre garr-boutin da Skol-Veur Stirling. Ceilidh " etre mignoned ".

Merc'her 18 a viz Eost : Dijuniñ. Kendael diwar-benn an arz keltiek : teir frezegenn o padout 15 munutenn pep hini. Kafe Teir frezegenn all war an hevelep danvez o padout 15 munutenn pep hini. Lein. Beaj dre garr-boutin da Loch Earnhead. Merennañ war ar maez. Distro da Skol-Veur Stirling. Degemer gant Kêr Stirling. Ceilidh " etre mignoned ".

Yaou 19 a viz Eost : Dijuniñ. Kendael diwar-benn an hudouriezh er broioù keltiek : 3 frezegenn o padout 15 munutenn pep hini. Kafe. Teir frezegenn all, war an hevelep testenn, o padout 15 munutenn c'hoazh pep hini. Lein. Beaj dre garr-boutin da Dunfermline. Degemer ha koan, kinniget gant Kêr Dunfermline. Distro da Skol-Veur Stirling. Prezegenn gant Miss Annie Mac Kenzie, Lewis. Ceilidh " etre

mignoned ".

Gwener 20 a viz Eost : Dijuniñ. Danevelloù gant sekretourien ar Skourroù. Kafe. Bodadeg Veur Etrevroadel. Lein. Endervezh dieub. Sonadeg etrevroadel en Albert Hall. Distro da Skol-Veur Stirling. Ceilidh " etre mignoned ".

225

Sadorn 21 a viz : Eost : Dijuniñ. Kimiad.

Evit lakaat hoc'h anv : skrivit da b-PER DENEZ, Ri, Ploare, Douarnenez. Ar paperioù enskrivañ o tont eus Bro-Skos a vo kaset deoc'h.

AN EMLUSK DRE AR BED

Dre ar Bed holl emeur o klask muioc'h-mui lakaat an ardivinkoù a bep seurt ijinet gant mab-den, da labourat ha d' en em ren o-unan, d' ober o afer o-unan, evel ma lavarer, hep skoazell an den. Ar pezh a glasker dreist-holl eo evel just digreskiñ ar muiañ ma c'heller ar prizioù gwerzh. Kevezerezh vras a zo evel ma ouzer, hag an hini ne labour ket hervez an doareoù arnevesañ a vo faezhet didruez. Ar merc'hed o deus, ur pennadig zo dija, fornigelloù emlusk, kannerezed emlusk, yenerazed emlusk, h.a. Sevel a reer bagoù gant pep tra o vont en-dro kazi hep martolod war vourzh, nijerezed a c'hell en em vleniañ o-unan war bouez nebeut, kirri-tan hep boest herrgemmerez h.a., h.a... An Ti hollandat " DAF " en deus ijinet pell zo evit e girri-tan un herrgemmerez emlusk eeun tre ha gwevn kenañ. Prouet he deus houmañ er bed holl, koulz er broioù tomm evel er broioù yen, ur c'houzañvusted souezhus. En tu-hont da se e c'hellomp testeniañ n' o deus ar c'hirri-tan " DAF ", nemet perzhioù mat hag ez omp prest da gas da neb a garo, an titouroù a garfe kaout diwar o fenn.

Prenit ur c'harr-tan " DAF " hag ez omp sur e viot estlammet gant an aes ez eo da vleniañ. Ouzhpenn da se, reiñ dort a reot, war un dro, da Hollandiz ijinus evel o c'henvroad ken brudet e Breizh, an Aotrou Skañvig, ha d' hon emgann evit ar Brezhoneg.

Skrivit diouzhtu da : " Skingomz ha Skinwel ", 18 bis, straed Duguay-Trouin, 22 - Saint-Brieuc.

E ti Moulerezh AR BAOL, - Bali ar Marichal-de-Lattre-de-Tassigny
Diskleriet hervez lezenn : trede trimiziad 1971
Niverenn er voulerez : 32024
Ar merour : P. AR BIHAN

AL LIAMM 147

TAOLENN

Barzhaz Breizh :	Kimiad an ene	231
	Kanaouenn an anaon	235
Barzhonegoù gant C. DRUMMOND DE ANDRADE		237
Brezel ar Sivi (kendalc'h) gant ROJER BRISSON		242
Gwagenn gant F. FAVEREAU .		257
Ar Skrapadenn gant R. E. SURZHUR		266
Istor Breizh gant LA BORDERIE (tr. Roparz Hemon)		274
E Breizh hiziv gant L. ANDOUARD		283
Notennoù		290

KIMIAD AN ENE

Dedostait da glevout kanañ an disparti
A ra an ene mat pa 'z a kuit eus e di.

Ober 'ra ur sellig, ur sellig ouzh an traoñ,
Da gomz ouzh e gorf paour, 'zo war e wele klaoñv.

AN ENE

Siwazh, deut eo, va c'horf, an termen diwezhañ.
Ret eo din da guitaat, ha kuitaat ar bed-mañ.

Klevout a ran taolioù morzhelig an Ankou.
Mezevellet da benn, yen-sklas da vuzelloù.

Ken euzhus eo da zremm, ken glas da zaoulagad !
Siwazh dit-te, va c'horf, ret eo din da guitaat !

AR C'HORF

Mar deo euzhus va dremm, ha glas va daoulagad,
Gwir a lavarit-hu, ret eo deoc'h va c'huitaat.

Dianaout a rit-hu, disprizout ho mignon,
Karget a sioù fall, siwazh, evel ma 'z on.

An heñveledigezh zo mamm ar garantez.
Pa n' he c'havit ganin em lezit a-gostez.

AN ENE

Tamm ebet, mignon ker, me n' ez tisprizan ket.
Eus ar gourc'hemenoù n' ec'h eus hini torret.

Hogen Doue a venn, meulomp e drugarez,
Lakaat fin d' am galloud ha d' az sujidigezh.

232

Dispartiet omp-ni gant ar maro digar,
Ha me va-unanik 'tre 'n neñv hag an douar.

'Tre 'n neñv hag an douar, evel ar goulmig c'hlas,
A yeas 'maez eus an Arc'h da c'hout ha glav oa c'hoazh.

AR C'HORF

Hogen ar goulmig c'hlas war he c'hiz zo nijet
D' an Arc'h, 'lec'h ma oa kent. C'hwi avat ne reot ket.

AN ENE

Ober a rin, hep mank. Touiñ a ran-me dit :
'Benn ar Varn Diwezhañ en em gavin ganit.

Me 'n em gavo ganit, ya, ken gwir ha ma 'z an
Dirak ar Varn Gentañ, bremañ, ken na grenan !

Az pez fiziañs eta ! goude gwalarn, hinon.
Distreiñ a rin, ez torn da gregiñ, va mignon.

Pa vefes-te pounner 'vel houarn, e teuin,
Hag evel ur maen-tenn, me az sacho ganin.

AR C'HORF

Pa vin-me, ene kaezh, en ur bez astennet,
Gant ar vreïnadurezh en douar dispennet,

Pa n' em bezo na biz, na dorn, na troad, na brec'h,
Diwezhat e vo deoc'h fellout va c'has ouzh krec'h.

AN ENE

Neb a grouas ar bed, hep skouer na danvez,
En deveus ar galloud d' az ober a-nevez.

Neb az anaveze en amzer na oas ket,
A c'hallou da gavout e-lec'h na vezi ket.

Ni 'n em gavo, ken gwir ha ma 'z an-me bremañ
Dirak ar Varn c'haro, siwazh, ken na grenan !

233

Ken na grenan, siwazh, ken sempl ha ken dister
Hag an delienn lamet gant ar barrad-amzer.

* * *

Doue 'ghev anezhañ, hag a respont buan :
- Ai 'ta, ene paour, ne vi ket pell e poan.

Va servijet ec'h eus pa oas-te war ar bed,
Ha bremañ ez pezo lod eus va joausted.

An ene, o pignat, a sell c'hoazh ouzh an traoñ,
Hag a wel e gorf paour stegnet war ar varskaoñ.

AN ENE

Demat dit-te, va c'horf, demat a laran dit.
Distreiñ a ran va sell gant kalz truez ouzhit.

AR C'HORF

Iezit, o ene kaezh, ho komzoù alaouret.
Ouzh poultr ha breïnadur ne deus truez ebet.

AN ENE

Faziañ 'rez, va c'horf. Te a zellez va grad,
Kenkoulz hag ar pod-pri oa ennañ louzoù mat.

AR C'HORF

Kenavo 'ta, buhez, kenavo, pa 'z eo ret !
Doue d' ho kas d' al lec'h m' hoc'h eus c'hoant da vonet !

C'hwi vo dihun bepred. Me, siwazh, a gousko.
N' am ankounac'hait ket, hag hastit an distro.

Na penaos e rit-hu ? Lavant din, m' ho ped,
Ken drant ouzh va c'huitaat, ha me ken glac'haret !

234

AN ENE

Eskenmañ drein garo ouzh roz c'hwek am eus graet,
Hag ouzh mel meurbet dous ur vesti c'hwero-meurbet.

* * *

Neuze, laouen ha skañv evel un alc'houeder,
An ene, 'n ur bomm-nij, a sav e barr an aer.

Hag evel ma tegouezh ha ma sko war an nor,
Sed an aotrou sant Per o tont da reiñ digor.

AN ENE

O, c'hwi, aotrou sont Per, a zo karantezus,
C'hwi am degemero e baradoz Jezuz !

SANT PER

E baradoz Jezuz e vi degemeret,
Rak, tra ma oas er bed, e zegemer 'c'h eus graet.

* * *

Met, en ur vonet tre, ur wech c'hoazh e tistro,
Hag e wel e gorf paour 'vel ur bern douar-go.

AN ENE

Kenavo dit, va c'horf, ha da drugarekaat
Kenavo, kenavo, da draonienn Jozafat !

Me 'ghev ur velodi 'vel na glevis he far.
Tizh zo war ar c'houmoul, ar goulou-deiz a bar.

Setu me o vleuniañ evel ur bodig-roz,
A-hed gwazh ar Vuhez, e liorzh ar baradoz.

235

KANAOUENN AN ANAON

En anv Tad, Mab ha Spered Glan,
Yec'hed mat deoc'h, tud an ti-mañ.
Yec'hed mat deoc'h, a-bouez hor penn.
Deut omp d' ho lakaat e pedenn.

War an nor pa sko an Ankou
E sko ar spont er c'halonou.
Da doull an nor pa zeu 'r Maro,
Piv gant ar Maro a yelo ?

Met na vezit ket souezhet,
Do doull ho tor mar domp deuet.
Jezuz en deus hon degaset
D' ho tihunañ mar doc'h kousket.

D' ho tihunañ, tud an ti-mañ,
D' ho tihunañ, bras ha bihan.
Mar deus, siwazh, truez er bed,
En anv Doue, hor sikouret.

Breudeur, kerent ha mignoned,
En anv Doue, hor selaouet
En anv Doue, pedet, pedet !
Rak ar vugale ne reont ket.

Gant ar re hon eus-ni maget
Ez omp pell 'zo ankounac'haet.

Gant ar re hon eus-ni karet,
Hep truez, ez omp dilezet.

Va mab, va merc'h, c'hwi zo kousket
War ar pluñv dous ha blot-meurbet,
Ha me ho tad, ho me ho mamm,
Er purgator, e-kreiz ar flamm.

236

C'hwi zo kousket en ho kwele,
Hag an anaon paour war vale.
C'hwi zo 'n ho kwele kousket flour,
Hag an anaon kaezh hep sikour.

Ul liñsel wenn ha pemp planken,
Un dorchenn blouz dindan ho penn,
Pemp troatad douar war c'horre.
Setu madoù ar bed er be !

Ni zo en tan hag en anken,
Tan dindanomp, tan war hor penn,
Ha tan war-laez, ha tan d' an traoñ.
Pedit holl evit an anaon !

Gwechall, pa oamp e-barzh ar bed,
Hor boa kerent ha mignoned.
Hogen bremañ, pa 'z omp marvet,
Kerent, mignoned n' hon eus ket.

En anv Doue, hor sikouret !
Pedit ar Werc'hez vinniget
Da skuilhañ ul lomm eus he laezh,
Ul lommig war an anaon kaezh.

Eus ho kwele, prim dilammit,
War ho taoulin en em strinkit,
Ma n' oc'h ket kouezhet er c'hleñved,
Pe gant ar Maro bet galvet.

BARZHONEGOU

troet diwar ar portugaleg gant Zavier ar C'hoseg

E-KREIZ AN HENT

E-kreiz an hent e oa ur maen
ur maen a oa e-kreiz an hent
ur maen a oa
e-kreiz an hent e oa ur maen.

Biken ne zisoñjin an darvoud-se
e buhez va skrammoù-lagad ken skuizh.
Biken ne zisoñjin e-kreiz an hent
e oa ur maen
e oa ur maen e-kreiz an hent
e-kreiz an hent e oa ur maen.

(1923-1930)

* * *

KOROLL-PEVARIGOU

Yann a gare Tereza hag a gare Remont
hag a gare Maria hag a gare Joakim hag a gare Loeizaig na gare den ebet.
Yann a yeas d' ar Stadoù-Unanet, Tereza d' ar gouent, Remont a varvas en ur
gwallzarvoud, Maria a chomas da vezañ moereb, Joakim en em lazhas ha Loeizaig a
zimezas gant J. Pinto Fernandes na oa ket brudet c'hoazh.

(1923-1930)

* * *

KENDALC'H ETREVROADEL AN AON

Da c'hortoz, ne ganimp mui ar garantez
A zo repuet izeloc'h eget ar c'hevioù.
Ni 'gano an aon hag a lak difrouezh ar garediged,
Ne ganimp ket ar gasoni rak n' eus ket anezhi,
N' eus nemet an aon, hon tad hag hor c'heneil,
Aon spontus ar sertao, ar morioù, ar gouelec'hioù,
Aon ar soudarded, aon ar mammoù, aon an ilizoù,
Ni 'gano aon an diktatourien, aon an demokrated,
Ni 'gano an aon rak ar marv hag an aon goude ar marv,
Da c'houde e varvimp gant an aon
Hag e kresko war hor bezioù bleunioù melen hag aonik.

(1935-1940)

* * *

DORN OUZH DORN

Ne vin ket barzh ur bed kabac'h.
Ne veulin ket kennebeut ar bed da zont.
Stag on ouzh ar vuhez, o sellout ouzh va c'heneiled.

Tavedek int, leun a spi avat.
En o zouez e welan ar gwirvoud ken divent,
An amzer-vremañ a zo ken ec'hon, arabat mont pell an eil diouzh egile, arabat
mont gwall bell, kerzhomp dorn ouzh dorn.

Ne ganin ket meuleudi ur vaouez, un istor,
Ne lavarin ket hirvoudoù ar serr-noz nag ar gweledva dirak va frenestr.
Ne roin ket d' an dud louzoù da gousket, na lizhiri ouzh o atizañ d' an
emzistruj,
Na dec'hin ket d' an inizi ha ne vin ket skrapet gant serafined.
An amzer-vremañ a zo va danvez, an amzer-vremañ, an dud a vremañ, ar vuhez a
vremañ.

(1935-1940)

* * *

240

JOSE

Ha bremañ, José ?
Echu ar gouel,
mouget ar gouleier, aet kuit an dud,
deut yenijenn an noz,
ha bremañ, José ?
ha bremañ, c'hwi ?
c'hwi hag a zo hep anv,
c'hwi hag a ra goap ouzh ar re all,
c'hwi hag a sav gwerzennoù,
hag a gar, hag a sav ho mouezh ?
ha bremañ, José ?

Hep maouez emac'h,
hep prezegenn emac'h,
hep karantez emac'h,
ne c'hellit mui evañ,
ne c'hellit mui butuniñ,
skopañ ne c'hellit mui,
deut yenijenn an noz,
n' eo ket deut ar goulou-deiz,
n' eo ket deut an tramgarr,
n' eo ket deut ar c'hoarzh,
an uhelvennad n' eo ket deut
hag echu pep tra
ha tec'het pep tra
ha goapaet pep tra,
ha bremañ, José ?

Ha bremañ, José ?
ho homzoù flour,
ho parrad-terzhienn,
ho lontegezh hag ho yun,
ho levriou,
ho mengleuz aour,
ho kwiskamant e gwer,
ho tiboellegezh,
ho kasoni - ha bremañ ?

241

Gant hoc'h alc'houez en ho torn
fell a ra deoc'h digeriñ an nor,
n' eus dor ebet
fell a ra deoc'h mervel er mor,
met ar mor a zo disec'het

fell a ra deoc'h mont da v-Minas,
Minas a zo aet da get.
José, ha bremañ ?

Ha ma hopfec'h,
ha ma klemmfec'h,
ha ma sonfec'h
ar valsenn wienat,
ha ma kouskfec'h,
ha ma yafec'h skuizh,
ha ma varvfec'h...
Met c'hwi ne varvit ket,
c'hwi a zo start, José !

Hoc'h-unan en deñvalijenn
evel ul loen gouez,
hep douec'heneliezh,
hep moger noazh evit en em harpañ,
hep ur jav du
hag a dec'h d' an daoulamm,
c'hwi a gerzh, José !
José, da belec'h ?

(1941 -1942)

Brezel ar Sivi

(kendalc'h)

5. - An arm-kuzh oc'h ober tro-wenn

Deizioù ha deizioù a dremenas, ha digemm pe dost e chome linenn an talbenn, gant un dek metrad gounezet amañ, kollet ahont. Bemdez e veze gwelet re ar vourc'h o vont a-razailh ouzh re Gerialioù, ha re Gerialioù oc'h enep-arsailhiñ en ur glask distrobañ o enebour. E-pad an noz, paotred an troioù-ged en em bege a daol-tag war an dachenn en em astenne etre ar fozioù-difenn, an no man's land evel ma lavarer e galleg.

Bemdez ivez e veze gwelet ar maer o tont er-maez eus an ti-kêr, ur follenn baper en e zorn gantañ. Mont a rae war e bouez, ken sioul an tamm anezhañ ha ma veze Joffre e Chantilly, betek ar banell-skritelloù, ha pegañ ar baperenn outi. Bez' e oa ar c'homunike, ma lenned warnañ : " Netra 'nevez war an talbenn ".

« Netra 'nevez ! Netra 'nevez ! » a c'hrozmole paotred an adreñv. « Mar kendalc'hit e-giz-se, e vo kollet ar brezel, n'eus douetañs ebet ! »

Ar maer a wic'he :

« Me 'oar an doare, me 'zo bet e Verdun. O c'hriñnat a ran. »

Kozhidi 'zo a savas un tammig disfiziañs enno : en ur glevout ar c'homzoù-se, e teuas soñj dezho e veze krignet an Alamaned, en amzer Verdun, dreist-holl diwar goust kroc'hen ar Vretoned, ha goulenn a rejont outo o-unan diwar goust kroc'hen piv e oa re Gerialioù da vezañ krignet.

243

A-benn ar fin, tud an adreñv, aet skuizh an tamm anezho gant an « netra 'nevez » pemdeziek a c'houlennas ouzh ar maer :

« O c'hriñnat a rez, o c'hriñnat a rez, se 'zo brav ! arabat ober goap ac'hanomp avat, ken birvidik int bremañ evel ma oant en deiz kentañ. Poent e vije distagañ ar yod diouzh da dreid ! »

Ar maer a wic'he a-nevez :

« Bez' e c'hellit kaout fiziañs ennon. O c'hriñnat a ran evit ar mare. Ur arm-kuzh am eus avat, a ziskouezin pa vo deut an amzer. »

Sioulaet e voe tud an adreñv, hag e-pad ur sizhun n' o devoe ken huñvre nemet en arm-kuzh-se. Garv e voe an dihun. Re Gerialioù, dre un taol-gwidre, a zeuas a-benn da c'hounit ur c'hant metrad a bep tu d' an talbenn, ken na voe reustl ha strafuilh e-kreiz an adreñv, ha tud o tec'hout keit ha Daoulaz, Dirinonn ha zoken Brest. Panevet ar c'hreñv ma voe an adarme bet lakaet er stourm gant ar maer, e vije bet torret an talbenn. Pa welas tud an adreñv e talc'he start a-nevez arme ar vourc'h, ez ejont en-dro, seul daeroc'h o c'honnar ma oant bet ar muiañ spontet, hag ar maer a voe goulennet groñs digantañ dizoleiñ e arm-kuzh.

Aheurtet e voe kavet da gentañ. O welout avat e talc'he an traoù da vont gant ar memes roudenn, e teurvezas gantañ asantiñ. Hanter-asantiñ kentoc'h, o vezañ ma tisklerias ne vije ket dizoloet an arm-kuzh nemet dirak ur c'huzul-kêr e vefe. Diouzh reolenn ar vourc'h, ur c'huzul-kêr kuzh a oa da vezañ dalc'het

hep rak-kuzul en e raok na goude-kuzul en e c'houde. Er c'hiz-se e chome an dud voutin hep gouzout diwar-benn petra e veze kuzuliet.

Setu eta hor c'huzulierien azezet a-nevez en-dro da daol ar c'huzul, hag ar maer o toullañ kaoz :

« Prometet em eus dizoleiñ an arm-kuzh dirak ar c'huzul-kuzh, hag o vezañ ma 'z on den d' e c'her, hen ober a rin hiziv dirazoc'h-c'hwil. »

Gant ardoù kevrinus, e tennas ul levrig ruz eus e c'hodell.

« Setu amañ Katekiz Bihan ar Maer Kontestour, am eus bet digant sekretour ar Prefeti, dres d' an deiz ma oan-me aet da Gemper evit ar vardell. E lennet am eus penn-da-benn, en ur glask ennañ ar pep gwellañ a vije d' ober bremañ.

- Ha kavet 'p eus ?

- Kavet 'm eus.

244

- Petra 'ta 'zo d' ober bremañ ? »

Ar maer a bouezas war e lavar :

« Kuzul-kêr en e bezh a rank reiñ e zilez ! »

Pa voe diabafet un tammig ar guzulierien, unan a c'houlennas :

« Ha penaos 'ta e vo lakaet ur seurt dilez da dalvezout ?

- Feiz ! n' ouzon ket ervat. An dra-se n'eo ket skrivet er c'hatekiz... »

E-pad un vunutenn pe ziv e chomas didrouz an holl, o taskiriat outo o-unan ar c'hel nevez bet kontet dezho. A-benn ar fin an hini koshañ a lavaras :

« Reiñ hon dilez ! Klevout a ran a-walc'h ! Daou benn 'zo d' ar vazh avat. C'hoazh emañ da c'houzout hag-eñ e vimp dilennet en-dro. Evidon-me, kollet ar brezel pe nann, n' am eus c'hoant ebet da zilezel va c'hador a guzulier.

- Bec'h 'zo amañ, sur, ha gaou a zeufe ganin ma nac'hfen, » a eilgerias ar maer. « Setu perak e fellfe din e vije pleustret war an afer etrezomp-ni da gentañ, en ur c'huzul-kuzh. 'M eus aon avat n' eus netra ken d' ober. Kazi sur on koulskoude e vimp addilennet gant ma vo prometet e vo gounezet an trec'h dre an ijin-mañ. »

Breutaat a rejont un tammig, hemañ o prezeg diwar-benn aberzhioù war Aoter ar Vro, hennezh o c'hrozmolat traoù dispis dindan e fri, hag ar c'homunour o venegiñ a bep tro Marx ha Mao. A-benn ar fin an holl en em gavas a-du.

An deiz war-lerc'h, da zek eur diouzh ar mintin, e voe embannet dilez ar c'huzul.

Da zek eur dek, pemp karr-boutin, pinvidik-tre ha nevez-flamm a harzas war blasenn ar vourc'h. Bez' e oa an aotrou Jañ-Jak Servan-Schreiber hag e goskor.

Edo c'hoazh ar c'harr kentañ o ruilhal goustadik diwar e lañs pa voe gwelet ar Jañ-Jak o tiboufañ dioutañ, ha dav dezhi d' an daoulamm betek an iliz, 'lec'h ma plegas glin a-gleiz hag a-zehou en ur ober pezhioù sin-ar-groaz. Ar person a oa dres amañ e traoñ an nev. Jañ-Jak a redas davetañ :

« Ho saludiñ a ran, aotrou person. Lennet em eus ho panell e penn an hent, eurioù an oferennoù-sul warni. Evel just e vin gwelet en holl oferennoù, ha bep gwech e resevin ar gomunion... » A-daol-trumm e voe troc'het e gomz dezhañ gant

c'hoarzhadennoù divergont. An itron Servan-Schreiber a oa deut e-barzh an iliz war-lerc'h he fried, ha chomet e oa a-sav dirak ur chapelig a-gostez. Hopal a reas, en ur ziskouez delwenn an Itron Varia gant he biz : « Sell 'ta, Jañ-Jak ! Se 'zo drol ken ez eo drol ! Ne oa tamm ebet gwisket na dremmet e-giz-se ho keniterv Maria ! » Ar Jañ-Jak a savas imor ennañ, hag evit reiñ da anaout e oa anezhañ un den a relijion, e taolas an itron gaezh er-maez eus an iliz a-daolioù treid en he reor.

245

Kerkent hag echu e gaozeadenn gant ar person, Jañ-Jak a yeas da di ar c'homunour : « Aotrou Jak, lavaret eo bet din ez oc'h c'hwi ur c'homunour. Me 'zo ur paotr eus an tu kleiz ivez, ha sur on e voto an holl gomunourion evidon. Laouen e vijen ivez da vezañ pedet da vodadeg ho kellig. Ho kwelout a rin adarre diwezhatoc'h. Dres bremañ, berr eo an amzer ganin : mont da welout ar Frañmasoned a rankan c'hoazh... »

E-pad ma oa o mestr o vale bro, en em lakaas paotred Jañ-Jak da aozañ plasenn ar vourc'h, darn o sevel ul leurenn dirak ar c'halvar, darn o skourrañ uhelgomzerioù ouzh brankoù ar gwez, darn, erfin, o pegañ skritelloù war ar mogerioù, ma lenned warno : SERVAN-SCHREIBER, hepmuiken, e pikol lizherennoù triliv. O welout kement-se, ar maer hag e guzulierien a rankas mont d' o gwele, tapet ganto ur barr terzhienn-janus.

A-daol-trumm e voe klevet an uhelgomzerioù o trouzal. Ur bomm-sonerezh a zeuas diouto ha, tostik goude, e stagjont da zibunañ litanioù Jañ-Jak : « Piv eo an hini bravañ ? Piv eo an hini kreñvañ ? Piv eo an hini speredekañ ? An aotrou Servan-Schreiber eo... hag all, hag all... deuit holl da selaou ar brezegenn a vo graet da nav eur diouzh an noz, dres amañ, gant ho maer da zont ! » Sonerezh en-dro, ha litanioù en-dro, ha galv d' ar vodadeg en-dro. Ken kreñv e oa mouezh an uhelgomzerioù ma vezent klevet a-bell dre ar vro ! Hed an deiz e padas an abadenn, bouzaret hag hanter sot e teuas an dud da vezañ, pezh na viras ket outo d' en em vodañ a-vil-vern en-dro d' al leurenn, kalz a-raok an eur merket.

Da nav eur e krogas laz-seniñ Jañ-Jak gant ar Marseillaise. Da nav eur pemp, luc'hvannerioù a sklerijennas al leurenn. Da nav eur dek e pignas an aotrou Jañ-Jak gant an diri koad, hag eñ da vont ouzh ar mikrofonoù. Ur jestr meurdeus a reas, evit lakaat al laz-seniñ da devel, ha pa voe echu gant ar stlakadennoù hag ar youc'hadennoù, e krogas gant e brezegenn :

246

« Plougastelliz ha Plougastelladzed !
Setu me amañ, dirazoc'h, me, ho maer da zont... »

Displegañ a reas war an hed penaos e oa eñ bet tonket a-viskoazh da vezañ maer Plougastell, ha penaos e oa bet desavet a-vihanik e-sell d' ur seurt uhelgefridi.

« Ha bremañ, » a gendalc'has, « bremañ, ar promesaoù. Pep danvez-maer a vez gantañ en e sac'h promesaoù e-leizh, ha bezit sur n' eo ket goull va hini.

Da gentañ, evel just, ar gourhentoù.

Pa vin me ho maer, tri gourhent a vo toullet dre ar vro, ha kaer-meurbet e vo digoll ar re diberc'hennet diouzh o farkeier.

Unan a gaso eus ar vourc'h betek ar C'haro, unan a gaso eus ar vourc'h betek Tin-Du, hag an trede a gaso eus ar vourc'h betek ar Roudour. »

Ha laouen-tre e voe tud ar C'haro, tud Tin-Du ha tud ar Roudour.

« N' eo ket echu. Pa vin-me ho maer, e vo tri emziskouez ar Werc'hez bemdez e pep chapelig, ha pemp en iliz- parrez. Soñjit 'ta, n' ho po ezhomme ebet ken da c'hounit sivi. Ker-ruz e c'hellot gwerzhañ dour diouzh ho puñsoù e-giz

dour benniget d' ar miliadoù ha miliadoù a birc'hirinded a zo da zeredek amañ. »

Ha laouen-tre e voe an dud a oa o chom en-dro d' ar chapelioùigou.

« N' eo ket echu. Al lipousañ evit ar fin. Diskaret rez an douar e vo tachenn Gerialioù, hag en he flas e vo savet un uzin vras, ul labouradeg boteier-rodaouek hag a broduo dek milion a reoù boteier-rodaouek bemdez. Adlabouradeg an uzinoù tchecoslovak brudet " SotdaStaga " e vo. Kretadoù am eus bet, dre gomz ha dre skrid digant o renerien. »

Ur barr-levenez diroll a darzhas war ar vourc'h, ha diwezhat-tre ez eas an dud da gousket, diskennet ganto war ar marc'had meur a voutailhad hini ruz diwar goust Jañ-Jak. Huñvreoù alaouret a luskas o hun en noz-se.

Gwashaat a reas d' ar maer ha d' e guzulierien.

247

Bez' e oa un dra souezhus da c'hoarvezout en deiz warlerc'h. Abredik a-walc'h e oa bet savet ar Jañ-Jak, hag eñ da vont betek an ti-kêr, doareoù warnañ da vezañ dija ar mestr. Un arsav a reas dirak ar banell skritelloù. Div skritell hepmuiken a oa peget outi, an hini gentañ o vezañ ar c'homunike. Jañ-Jak he lennas, gant ur vourc'henn a zispriz, ha neuze treiñ e selloù war-du an eil skritell. A-daol-trumm e kollas e liv ha redek forzh e vuhez war-du ar c'hirri-boutin en ur vlejal evel ma vije bet spontet gant un aerouant. O klevout anezhañ, e holl baotred a zilammas d' o zro a-benn-herr, war-du ar c'hirri, darn anezho c'hoazh hanter-wisket, ha setu kuit da viken an dudoù brav-se, ankounac'haet ganto o bitrakoù war ar blasenn hag ivez o dleoù en ostalirioù ha tavarnioù.

Un nebeut a dud Plougastell a oa eno. Gant ar souezh a oa krog enno e tostajont ouzh ar banell, ha sellout ouzh an eil skritell. War vrasaat ez eas o estlamm pa lennjont ar gerioù dinoaz-mañ :

Département du Finistère
Ouverture de la chasse au faisan
hag all...

Ne oa den evit kompren, kaer o devoe kuzuliata kenetrezo. O buhez-pad, Plougastelliz zo a chomas d' en em c'houlenn ar penaos hag ar perag eus emzalc'h iskis ar Jañ-Jak.

War an taol e tiglañvas ar maer hag ar guzulierien. Addilennet e voent holl en dilennadeg a zeuas da heul. Netra avat ne voe cheñchet gant red ar brezel. Tro-wenn en doa graet an arm-kuzh.

* * *

6. - Poanioù korf ha spered re Gerialioù

Pa vez sezizet ur gêr, e teu ar bitailh da vezañ rouez enni.

Tud Keralioù ne oant ket chalet re gant an debriñ. Diouzh an druilh e veze kavet al louzoù-gegin el liorzhoù, ha pa zichale ar mor e veze kaset ar gañfarded da horbalanañ war an aod. Ne oa tamm ebet memes tra avat gant an evañ, ha siwazh, tud Keralioù, evel an holl Vretoned, 'zo a-ouenn dezho bezañ sec'hedik.

248

E berr amzer, pourvezañs hini ruz an tiegezhioù a yeas da hesk, ha kresk bras a voe war ar werennad en tavarnioù. Ret e vije bet da unan bezañ pinvidik-mor, a-benn tapout kaout e walc'h.

Ur paotr yaouank, bet studier war ar sokiologiezh e Nanterre, a gredas dezhañ kavout un diskoulm. Ur podad liv-ruz hag ur gwispon gantañ ez eas da

skrivañ war an holl vogerioù : " Takenn ebet a win ruz evit ar binvidien ". Souezhet bras e voe o welout ne reas ket e dro-ijin muioc'h a verzh eget m' en dije staotet en ur violoñs. Evit ar wech kentañ en e vuhez, en em lakaas da brederiañ, ken na dapas un danijenn-empenn. Hanter-bareañ a reas kalz diwezhatoc'h. Toc'hor e chomas e benn avat hag hanter-sot en em gavas pa guitaas e wele. O vezañ ne oa mat da vicher ebet ken, e rankas distreiñ da Nanterre. Kelenner eo bremañ eno. Kelenner war ar sokiolegiezh.

Evit mirout ouzh un taol-dispac'h da darzhañ, e reas gouarnamant Keralioù moulañ tikedoù-gwin. Kent dezho bezañ ingalet etre an dud avat, e voe gwelet falstikedoù o redek e pep lec'h dre ar vro. Forzh penaos, gwirion an tikedoù pe nann, ne veze mui diskennet hini ruz er gwerennoù bras-se, ma oa boas an dud outo, e gwerennoù likor bihan-tre ne lavaran ket, ha gwashoc'h c'hoazh, evit ma padje o fourvezioù un tammig muioc'h, e rankas an ostizien badeziñ o gwin.

Lakaat dour er gwin ! Evel pa vefe an danvez prizius-se laezh evit bugale ar c'hêrioù ! Biskoazh kemend-all !

Seul grisoc'h e oa planedenn re Gerialioù ma welent 'hed an deiz lestradoù-gwin oc'h antreal e porzh Brest. Chom a raent war ar c'hal bihan, o c'hlaourenniñ en aner, ha gwelout a raent dre o faltazi ar bigi burzhudus sko ouzh ar c'hae, kirri-chalboterezh ar genwerzhourien vras o sammañ anezho, monedone an ispisourien o vont diehan eus o stalioùigoù betek an etrepaouezioù, hag al lonkerien wenvidik oc'h en em gennerzhañ gant ar boutailhadoù benniget.

An deiz a zeuas, deiz a anken hag a c'hlae'har, ma voe peurevet an diwezhañ takenn hini ruz. Ur c'harmadeg a zizesper a bignas betek an neñv. Ha petra 'raje an neñv, nemet, marteze, fennañ dour ? Ha diwar zour e oant holl bremañ.

249

Bez e oa ivez e lec'hioù zo eus ar gêriadennig skritelloù-embann evit gwin pe win. Pallennoù-kañv a voe stignet ouzh ar skritelloù-mañ a oa da vezañ diwar neuze evel arsavioù un hent-ar-groaz pemdeziek, ha bep sul e veze gwelet tud en o c'hichen o tibunañ ur chapeled pe zaou.

War an taol, e voe ijinet an eil arm-kuzh gant ar maer.

Evel ma ouzoc'h, bet e oa bet ar maer e Verdun, pa oa ur paotr yaouank anezhañ. Eno en doa difennet gant kalonegezh ar Reizh hag ar Sevenadur. Soñj a zeuas dezhañ penaos e oa bet kavet gant ar C'hallaoued un taol-ijin da bakañ prizonidi e-leizh. Treut e oa ar geusteurenn gant an Alamaned. A-walc'h e oa diskouez dezho un tamm bara amanennet a-us d' ar fozioù-difenn, evit m' en em zaskorjent a rejimantadoù, ar jeneraled en o fenn. N' eo ket bara amanennet avat a vennas ar maer diskouez da re Gerialioù, boutailhadoù hini ruz ne lavaran ket.

Tonket e oa d' an eil arm-kuzh c'hwitañ ivez, ha kement-se a-drugarez da c'harventez re ar vourc'h.

Dibabet e voe ul lec'hienn eus an talbenn evit an taol-esa. D' an deiz lakaet eta, dres goude lein, d' an eur ma vez ar sec'hed en e washañ, ur berchenn hir a voe gwintet a-us da fozioù-difenn ar vourc'h, ur voutailhad hini ruz liammet outi. Re Gerialioù a zibikouzas o daoulagad, hag a baouezas gant o zennadeg. Paotred ar gevrenn dostañ a lakaas o armoù war an douar, hag int da bignat dreist ar fozell da redek war-du re ar vourc'h, paret o selloù war ar voutailh. Ha setu paket an holl anezho ha bountet e-barzh ur c'hamp-prizonidi, kent dezho kaout amzer da lavarout grik.

Amañ, a-dreñv d' an orjalennoù-dreinek, e voe graet fall-ruz dezho.

Ar maer en doa klevet anv eus Emglev Jeneva. A-walc'h dezhañ bezañ tapet ur prosez-verbal gant an archerien, n' en dije ket karet bezañ stlejet dirak lezvarn La Haye ouzhpenn-se. Bevet mat e voe ar brizonidi. O gwalc'h a grampouezh hag a gig druz a voe roet dezho. Skrijus aval e voe dial ar maer. O

vezañ ma oa mut Emglev Jeneva war bezh a sell ouzh an evaj, o lezel a reas diwar zour. Ya Tudu ! Diwar zour, gwin feunteun, odivi raned ! Biskoazh ne voe gwelet un taol-ifern ken kriz. Ha dourek e ouelas ar re dapet, o welout n' en doa talvezet o laoskentez da netra.

E-pad an noz, e kavas prizonidi zo an tu da dec'hout eus ar c'hamp ha da zistreiñ d' o c'hêriadennig. Tud Keralioù a savas konnar ruz enno pa glevjont keloù eus doareoù fall graet d' o soudarded reuzeudik.

250

En deiz war-lerc'h, n' eo ket ur berchenn hepken a voe gwelet a-us da fozioù-difenn ar vourc'h, ur goadeg stank avat, ur goadeg iskis a berchennoù, savet a-blom, pep hini gant ur voutailhad gwin ruz staget outi.

Na c'hwek ha dudius un arvest !

Tud Keralioù avat a ouezas mat-tre ne oa aze nemet un temptadur gant an diaoul pe ar maer, hag ar wech-mañ ne voe tapet den ebet. Chom a rejont en o fozioù-difenn en ur ober van da c'hoarzhin a-bouez-penn ha huchal :

« Dour Keralioù zo ken mat hag hini ar vourc'h ! »

C'hoarzhin glas a raent avat. En taol-se e voe anat dezho e oant bet dilezet gant Doue hag an dud. N' o doa tra ebet ken d' ober, nemet derc'hel start ha pa vefe betek ar marv.

* * *

7. - Penaos e teuas tud Keralioù da vezañ Plougastelliz feal en-dro

Kentañ mezvier o vont da anaon, Marzhin gozh a Geralioù an hini a voe, hag an deiz ma c'hoarvezas an darvoud mantrus-mañ a oa dleet dezhañ bezañ ivez deiz diwezhañ ar brezel.

En deiz-mañ eta, diouzh an abardaez, e oa ur bodad mezvierien a Geralioù en o sav war savenn ar porzhig. Chom a raent amañ, difiñv ha dilavar, o daoulagad ruziet o parañ war-du digor porzh Brest. Hañval a rae dezho spurmantañ en diabell ur steudad didermen a listri-gwin oc'h hiraat war an dremmwel, ha bep an amzer e teue un huanad ponner ganto, gant ar frailhet ma oa o c'halon.

Marzhin gozh a Geralioù a oa eno ivez. Ul lonker pe ne vezo den e oa eus ar Marzhin-mañ, ul lonk-e-vloaz en un devezh, ha krenañ a rae e zaouarn e seurt doare m' en doa an holl resped outañ.

Lavaret e vez atav, pa vez skeud ar marv war un den, e tremen dirak e zaoulagad darvoudennoù pouezusañ e vuhez tremenet, ha dezho da vezañ aet a bell 'zo diouzh an eñvor. A-dreñv malvennoù kloz Marzhin e fiñskeudenne evadegoù diboell ha mousc'hoarzhin a rae en desped d' e c'hourlañchenn sec'h-ler. A-daol-trumm, setu ma voe tapet gant ur barr-awen, hag eñ da dostaat ouzh ar ribl ha sevel e zivrec'h war-du an neñv. Un doare pedenn e stumm ur c'hlemmgan, pe ur c'hlemmgan e stumm ur bedenn a zeuas gantañ. Ken brav e oa ar bedenn-mañ m' eo bet miret don abaoe e eñvor an dud.

251

Setu eta ar gerioù boemus a voe klevet digant Marzhin gozh, war gal Keralioù, d' an abardaez hag a oa da vezañ abardaez diwezhañ ar brezel :

« Aotrou Doue !

Aotrou Doue Hollc'halloudek !

Gwechall-gozh, pa ve Ho Pretoned en anken,

E teurvez Ganeoc'h kas un den santel daveto,

Un den santel karget gant Ho Krasoù,

Un den santel hag a ouie merdeñ en ur vag-vaen hep gouel na roeñv,

E pep lec'h ma touare ar baotred vurzhus-mañ e veze savet ur chapelig.

Chapeloùigoù Breizh, a zo anezho perlez Ho Kurunenn douarel.
Chapeloùigoù Breizh evit d' an douristed d' o luc'hskeudenniñ.
Pell 'zo avat n' eus ket deut un den santel betek ennomp,
Pell 'zo n' eus ket bet savet ur chapelig war douar Breizh.
Me 'oar,

Sent all 'zo deut abaoe :
Sant Rafael, Sant Zano...

Ar re se 'zo sent evit ar vondianed avat, neket evit ar gouerien.
Ken ne gredfemp e oamp bet ankounac'haet Ganeoc'h !
Gras Deoc'h, ur sant all hon eus resevet, ur sant brasoc'h c'hoazh eget an
holl re all, ha n' eus par d' ar sant nevez-mañ evit koñfortiñ ar Vretoned.
Ur sant nevez a zeu, neket eus aodoù Erin,
Eus aodoù Barbari, ne lavaran ket.
Ur sant a oar merdeñ, neket en ur vag-vaen hep gouel na roeñv,
En ur vag-houarn avat, hep gouel na roeñv kennebeud-all.
Sant Schiaffino Daouzek Grad !
Sant karet ar Vretoned ! Santig ruz
Ra vezi meulet da viken !

252

Un deiz a zeuio, ma vo bodet tout ar pobloù e don traonienn Yozafat, dirak
ar Barner,

An deiz-mañ, e savo an Aotrou Doue diouzh E dron hag e c'houlennno : « Ur
bobl a vank dirazon. Pelec'h emañ-hi ? »

Hag ael-mat ar Vretoned a ziskouezo gant e viz hor bro, Breizh, beuzet en
he fezh en ur mor a win ruz,

Gounezet ganti he lod eus ar baradoz, kent d' an holl re all bezañ
gounezet o hini.

Perak 'ta Hoc'h eus hon ankounac'haet a-nevez, ni, tud, Keralioù ?
C'hwi, Aotrou Doue an Tad, a blant ar gwini e penn-kentañ ar bed ?
C'hwi, Aotrou Doue ar Mab, a rae ken brav e Kana ?
Perak 'ta emañ ar santig ruz aet diouzhimp ?

O Sant Schiaffino Daouzek Grad !
Santig ruz !
Ho pet truez ouzhimp ! »

Echu gantañ e bedenn, e tigoras e zaoulagad. Ruz e oa an oabl digoumoul,
ruz ar mor dirazañ o tisteurel bannoù an heol ruz o kuzhat en tu hont d' ar
mulgul, ha Marzhin da c'harmiñ a-bouez-penn :

« Ar santig ruz zo deut en-dro ! Ar santig ruz zo deut en-dro ! »

Ha kent da unan kaout amzer da herzel outañ, en em stlepas er mor.

Marv-mik e oa pa voe tennet er-maez eus an dour. Itribilhet e voe ar
c'horf marv e-pad ur vunutenn bennak, evitañ da ziverañ un tammig, ha neuze
kaset d' e di hag astennet war e wele, ur c'hantolor a bep tu dezhañ.

Evit intañvez pe emzivadeg, n' oa ket. Gouestlet e oa bet buhez Marzhin d'
ar santig ruz, ha gouzout a ouie mat-tre n' eus uhelvennad da vezañ kaset da
benn pa vez ur vaouez oc'h ober he reuz tro-war-dro. Traoù kaer meurbet 'zo bet
skrivet gant Sant Paol war ar poent-se. Tud Plougastell avat 'zo holl kar ha par
an eil d' egile, leun-chouk e oa kambr an hini marv ha paneve ar pep retañ eus
ar soudarded bet lezet o c'hedal war an talbenn e vije bet gwelet enni holl
boblañs Keralioù.

253

Ha bez' e voe beilhadeg Marzhin, ur veilhadeg sec'h ma voe unan. Dour
benniget evit an hini marv, ha dour-puñs evit ar re vev. Glac'har ar galon a
veske gant anken ar c'hourlañchenn. Maouezed 'zo a ouele ken a ouelent, ar boaz
eo neketa ? Ar wazed a bilbase en-dro d' ar gwele en ur gontañ-digontañ an eil
d' egile taolioù kaer Marzhin.

Ur paotr a oa chomet e-unan-penn azezet war ar bank-tosel e korn ar siminal. Dalc'het e oa gant e soñjoù ken na grize e dal. A-benn ur predad e voe gwelet e zivskoaz oc'h hejañ-dihejañ evel pa vije bet anezhañ o tifronkañ. Difronkañ ne rae ket avat, moustrañ war ur c'hoant c'hoarzhin ne lavaran ket, ha pa ne voe, mui evit herzel ouzh e wask diabarzh, e tic'hargadennas leizh e gorf, ken ma voe feuket an holl.

« 'P eus ket mezh d' ober ken divergent e ti unan marv ?

- Me oar... me oar... » a c'hagouilhañ en ur glask adkavout e anal.

« Ha petra 'ta a ouzout-te ?

- Me oar bremañ piv eo an treitour a zo kaoz d' hon reuz.

- Ha piv eo?

- Ha piv eo an treitour ?

- Marzhin gozh evel just.

- Marzhin gozh ! Te 'zo meyv, va faotr !

- Meyv me ? Ha diwar betra ? Inosant ac'hanout ! Gouzout a ouzon koulz ha te n' oa ket Marzhin un treitour. Soñj 'ta avat : petra fell da re ar vourc'h ? Dizoleiñ an treitour ha riboulat e groc'hen, setu holl. Mar lavarfe dezho e oa Marzhin an treitour e vefe echu war an taol gant ar brezel ha torret e zroug d' ar maer.

- Marzhin gozh a zo marv...

- Gwell-a-se evitañ ! N' en devo ket da c'houzañv, ha war ar marc'had, e vo posubl lakaat re ar vourc'h da grediñ en doa bet ar paour-kaezh un taolig dorn diganeomp evit mont da veuziñ, gant ar gonnar ruz a oa savet ennomp-ni, Plougastelliz feal ac'hanomp. Ur gwidre-brezel e vo, ha netra ken. Treitour evit re ar vourc'h, den a enor e chomo Marzhin evidomp-ni, tud Keralioù.

254

- Sur... Divalav a-walc'h avat ober un treitour eus un amezeg.

- Forzh penaos, ne vo ket falloc'h evit se bremañ. Mar bez keuz ganit, e vi libr da lakaat oferenoù gantañ. Evidon-me, ken divorc'hed ha tra on, ha kentañ tro ma c'hellin ez aio ur banne ganin d' e yec'hed. »

Jeneraled hag uhelofiserien Keralioù en em dennas a-gostez, evit derc'hel ur c'huzul brezel, ha divizet e voe ganto aberzhiñ brud Marzhin evit mad an holl. N' oa tra d' ober ken, nemet reiñ kemenn da re ar vourc'h a vefe. Re risklus e vije bet hen ober e-kreiz an noz avat, ha ret e voe gortoz goulaouig an deiz.

Pa voe savet an heol eta, ur bilhenn wenn a voe savet a-us d' ar foziou-difenn. Dileuridi Keralioù, mouchet o daoulagad, daoust dezho da anavezout an tro-war-dro kerkoulz ha re ar vourc'h a voe kaset, dindan wardoniezh vat, betek an ti-kêr.

Da gentañ, ar maer a gredas dezhañ e teue re Geralioù d'en em zaskoriñ. Pa glevas doareoù nevez an traoù, ne voe mui evit derc'hel war e levenez. Mont da redek dre ar ruiou a reas, hag hejañ e dog en ur c'harmin a-bouez-penn :

« Echu eo ar brezel ! Diskoachet eo bet an treitour gant re Geralioù. Diskoachet ha kastizet evel m' eo dleet. Gloar da Blougastell ! Gloar da Geralioù ! »

E berr amzer, bannieloù triliv 'voe ispilhet ouzh pep prenestr. Gwelet e voe zoken ur gwenn-ha-du war doenn ti an otonomist nemetañ, ha ken bras e oa levezet an dud ma ne voe den o vont d' ober al lu outañ. Ar " Marseillaise " a dregerne ken na grene an aer. Re ar vourc'h a yeas en arbenn da re Gerialioù, karrigelloù karget a gasedadoù hini ruz ganto, ha re Gerialioù a dreuzigelle led an hent pa errujont er vourc'h.

Ar c'homunour a c'houlennas ma vije kanet un Te Deum en iliz-parrez, pezh a voe nac'het gant ar person, war zigarez n' en doa ket Fidel Kastro lakaet un Te Deum da vezañ kanet en iliz-veur Havana, d' an deiz ma voe trec'h d' ar gapitalisted villiget se, a zegase, dre fallagriezh, un tammig pinvidigezh d' e vro.

Pa voe divezvet an holl, pep-unan a yeas en-dro d' ober war-dro e sivi. N' oa ket peurechu avat Brezel ar Sivi, evel ma vo gouezet bremaik.

* * *

8. - Ar vardell diwezhañ

Bloavezhioù a yeas e-bioù, ha gouzout diouzh an tremen e-biou e oar mat-tre ar bloavezhioù siwazh ! Meur a wech e oa bet kemmet maer ha kuzulierien. Brezel ar Sivi 'oa aet a bell 'zo diouzh eñvor an dud. Reoù gozh Keralioù hepken a zeue ganto ur pistig en o gourlañchenn pa droent o soñjoù war-du deizioù teñval an amzer dremenet. Treuz ur biz 'oa gant ar gwelead poultr a c'holoe dielloù ar brezel e sanailh an ti-kêr.

Tavarnourien gozh Keralioù a veve bremañ diwar o leve, prenet ganto kestell, kirri amerikan ha bigi-dre-lien. Re nevez a oa deut en o flas, hag ar re-se a bede bemdez evit ma vefe brezel en-dro.

Ur monumant brav oa bet savet war an aod, ma lenned warnañ anv Marzhin gozh kizellet e lizherennoù alaouret. Monumant an hini marv e oa. Bez' e oa ur chadenn dirazañ e-skourr ouzh kern daou bezh maen stumm ur voutailh dezho. Paneve an dra se e vije bet monumant an hini marv heñvel-mik ouzh ar monumantoù bet savet e pep lec'h en enor d' ar re marv evit ar vro all.

Un deiz, ar maer a-vremañ en em ziskouezas dirak ar c'huzul, liv an trechal warnañ. Ul lizher a oa gantañ en e zorn.

« Setu amañ un dra iskis : al lizher-mañ nevez-resevet ganin. Un Aotre Bardellañ-Hentoù eo.

- Un Aotre Bardellañ-Hentoù ! Ha d' ober petra ?

- N' ouzon ket. Biskoazh n' em eus goulennet e vije kaset ur seurt aotre deomp.

- Lost al leue dre da c'henou, ha setu.

- Tamm ebet, ul lizher a-berzh-stad eo, digant ar Prefeddi.

- Ha da be vad e talvezje deomp bardellañ an hentoù ? Tamm amzer ebet n' hon eus da goll, na gwenneien da foetañ kennebeud-all.

- Sur ! An aotre-mañ, avat, zo bet sinet gant pennoù bras, isprefeded, prefeded, igamed, ministred...

- Ha neuze ?

- Neuze ? Bez' ez eus eus an Aotre-mañ un tamm muioc'h eget un aotre, un urzh eo... »

Hag evel-se e voe savet an eil bardell war hent Brest-Kemper. N' it ket da grediñ e oa ar vardell-se un dra e-giz an Tennoù Diwezhañ gant Alfoñs de Neuville, pe g-Kameron, pe zoken Montcornet. Nann, ur vardellig a netra e voe, savet gant tud klouar, diskredik ha bihan o c'halon, gant ur c'hozh bilo merglet, un dousennad boestoù-mir goullo hag ur pod-kambr toull, ha ken treut e oa ar paour-kaezh-bardell-mañ, ma oa aes d' ar c'hirri tremen a bep tu e-biou dezhi.

Archerien Daoulaz a zeuas ivez, ha kontant-tre en em gavjont pa voe diskouezet an Aotre dezho.

A-benn un eur, ur pilhaouer a c'hoarveze dezhañ tremen dre amañ a stlapas an hernaj-se en e garr hep goulenn aotre ouzh den. Evel-se e voe echu da vat gant Brezel ar Sivi.

* * *

9. - Ur ger evit echuiñ

Dereat e vije amañ ober reflexionoù profitabl evit an dud devot, evel ma lare gwechall person va farrez, pa deurveze dezhañ komz brezhoneg. N' on ket ur mailh war an filozofiezh ha ne rin ket. N' on gouest nemet da zezrevell darvoudoù gwirion dres evel m' int c'hoarvezet. Koulskoude, trist on, trist kenañ, seul dristoc'h ma ne garan ket-me ar sivi, ha dreist-holl re Blougastell, leun a zour ha blaz an netra ganto.

* * *

Levrlennadur.

- De Bello Plugastellano. (Brissonomaros.)
- Dielloù ti-kêr Plougastell.
- Buez ha maro Marzin, den santel ha gwenvidic, carguet a veritou. (Dizanv.)
- Le Siège de Keraliou et la Logistique Moderne. (Annales de l'Ecole de Guerre. Paris.)
- Über die strategische und taktische Lehungen des Erdbeerenkrieges. (Institut für Zeitgeschichte. München.)

GWAGENN

Er goañv oa bepred ! Spontus oa gleb an amzer. An hent-karr a gas di a oa ur fankigell vras en e greiz. Gortozet hor boa ar glav da ardevel un tammig. Ma moereb 'n hini he doa c'hoant mont. Deut omp da dremen an abardaevezh-sul ganti, evel kustum. Dont a raemp ingal abaoe ma oamp aet ac'hane.

Yen-ki oa. Glizhenniñ a rae c'hoazh. An avel-c'hlav 'n em sile dre a-dreñv, etre kleuzioù an hent, ha c'hwistañ ' rae ar c'hroc'hen, evel laonnenoù lemm. C'hwistañ a raemp-ni ivez. Hon-tri. Hiziv oa ket dav toullañ kaoz gant kement hini a oa war lez an hent, na mann... En o zier oant. Frank oa an hent.

« Te 'vat zo kresket ! »

« Souezhus penaos e tenn d' e eontr, Doue d' e bardono ! »

« Pelec'h 'peus lezet da verc'h ? »

Goût 'ouien. Se a larent dalc'hmat. A bell zo ec'h anavezen anezhe. Holl. Merc'hedoù kozh a vije o straniñ war vord an hent, merc'hedoù kozh o c'henaouegal e toull o dor. Yann a vije o voueta ar moc'h (tremen kant en doa bremañ gant ar GAEC).

« Dont a rit 'ta ! »

« Paouez ur vunutenn ! »

Ne vije fin ebet. Dreist-holl an teir maouez du-hont. Hiziv ne vijent ket gwelet : klozet oant en o zier talfasek o tivogediñ aze. Heg... ah ! euzhus oant heg, ar re-se ! An hini dev, ruz he fri, tost d' he banne... aze 'vije o trailhañ he genou, prest atav da zroukkomz a-drek hon c'hein.

« Hemañ 'n deus blev hir bremañ ! » a hope en ur soublañ he c'horf da c'hwennat he bleunioù.

Eben, reut ha ginet, ur geuneudenn... honnezh, a lared, oa trist 'vel Doue Tremereg ! Hag eben all, an intañvez rok ha rust. He gwaz a droc'he blev ar baotred da sul vintin, a-raok...

258

Piv a gomzo da gentañ ? Aze 'vije o troiata en he liorz, war-c'hed eus an dud, en gortoz ma tigorfemp hon beg. Hag en un taol:

« Sell 'ta ! C'hwi amañ ! Ha te, paotrig kaezh, mont mat a ra an traoù ?... Hag ar skol ?... »

Dont a raje war-raok, oc'h astenn un dorn treut ha garv. Me 'm bije karet mont a-silig, dre guzh, a-wechoù. Met hiziv oa ket dav ober van !

Klevet 'm boa a-viskoazh e lakjent meinañ ar porzh. E klaskjent... Ma moereb bepred. Honnezh tev. Bep bloaz koulskoude, en em zastume an dour er c'hanoù garanet gant ar glav. Ken ne oa ken a borzh, met ur mell gwagenn. Hirvoudiñ a rae : gant ar vezh... m' he dije gwenneien, evel an dud all... Ur glemmasenn oa, a lare ma mamm.

Erru oa teñval. Tren pemp eur oa o paouez tremen, teir munutenn a-raok, horjell-dihorjell, war al linenn strizh en tu all d' ar parkeier uhel.

Gast ! N' aen ket a galon laouen ! Ma moereb ha ma eontr oant. Evel just. Met abaoe ar c'heit ma 'c'h aen, ingal, bep miz... 'oan ket kustum c'hoazh, sur a-walc'h.

« 'Vezes ket gwelet re alies holl, » a larent din.

Ha pa 'c'h aen em beze c'hoant kimiadiñ diouzhtu. An dro-mañ 'oan ket ma-un... N' eo ket abalamour e oant tud vunut, nann ! Krakvevet o doa o buhez-pad : boued da zebriñ, dilhadoù bet roet gant hen-ha-hen, ur c'hozh ti prenet war dle pell oa. Ne oa bet gwalleur ebet en o buhez, a laremp du-mañ. Ha pa c'hoarveze ur gwalldaol gant den pe zen, e larent e oa e blanedenn, hag int-i o doa bet o lod ivez, evel ar re all. Met pa zichañse dezhe forzh petra, neuze 'oa mallozhioù ha klemmoù.

Soñj 'm eus... skoet hor boa ouzh an nor. Ma moereb Mari.

- Deut tre !

Evel-se, rak gwelet o doa ac'hanomp o tremen 'tal ar prenestr bras.

- Setu tud ! eme ma moereb, a-greiz mont en ti, sart, ur mousc'hoarzh e korn he muzelloù.

- Mat ! eme ma moereb tev, evel war he zremenvan. Pokoù, teir gwech, d' ar pevar anezhe.

- It 'n ho koazez.

Ingall eo, 'oan ket em bleud, me ! Komz a rae ma moereb ouzhimp, met evel kerse ganti degemer ac'hanomp, 'giz pa lakje war hon gwall tristidigezh he c'hêr.

259

Aet oan da azezañ war ar bank a-drek an daol. Ma mamm ha ma moereb oa tostaet d' ar gwele, war-gleiz, etre ar prenestr hag ar siminal. Ur gwele koad kistin, evel pa chomen da gousket e ti ma moereb Mari, ouzh krec'h.

- Mont mat a ra ? eme ma mamm dezhi.

- Goustadik.

Dister oa he mouezh. Ne fiñve ket. Hanter azezet oa war ar gwele, ur sae-gambr glas en-dro dezhi. Sellout a rae a-bann outo o-div, stegn he muzelloù, goulo ha skoelf he daoulagad. Rusoc'h oa he divjod 'velkent. Laret 'vije e oa gwellaet dezhi un tamm bihan, freskaet ivez. Arabat eo larout mann ebet avat. Abaoe pemp bloaz, n' houle nemet treutaat.

- Mont a ra gwelloc'h, memes tra ? eme ma mamm o stouiñ war he zu.

Respont ebet, nemet kammañ he genou.

- Ar sifern zo ganti. N' a ket kalz gwelloc'h. Me 'ouie mat ivez ! Ma vije chomet eizhtez ouzhpenn...

- Serr da c'henou 'te ! emezi d' he mamm.

Ma moereb tev a gendalc'he :

- Debriñ a rae, ha sevel a rae bemdez, met tapet he deus anoued war ar c'hozh velo daonet-se !

Gwaz an hini yaouank oa en e sav, reut war e zivhar, e penn all ar gwele, e gein troet ouzh ar prenestr. Difiñv ivez, ha digomz. Un troc'had a zen e oa, ruz e benn, gant blev fuilh war c'hlazañ. Kozh n' oa ket koulskoude : n' ouzon

ket... daou ha tregont. Liv ar yec'hed warnañ. Henezh oa deut eus ar " Menez ". Kleiz ha lent oa gant an dud. Ha c'hoazh, gwellaet oa dezhañ... Pa oan aet d' e eured, c'hwec'h vloaz oa, ne ranne grik, grik ebet, da hini 'bet. Larout a raed 'oa tost evel pep tra, hag e oa en em roet da evañ abaoe...

- E Sant-Kast e labourit atav ? a c'houlenne ma mamm outañ.

- Ya... betek Pask.

Komz a rae war e blaen. Kigenn ne fiche war e zremm. Diegi 'n doa o tigeriñ e c'henou, a vije bet laret.

260

Toer oa henezh. Ma zintin all a ouie 'oa paeet mat, zoken 'pad ar goañv, rak digolloù 'n dezo 'vit ar gwallamzer. Laket o doa sevel un ti e kêr, tost d' an aod. C'hoant ganti tec'hel diouzh ar vourc'hadenn vrein-se, sañset. Met klañvet oa, hogos diouzhtu. Div wech oa bet fellet dezhi kaout ur bugel, met aet oa re abred d' an ospital, sur a-walc'h. Goude-se oa deut treut 'vel ur gioc'h, a lare an dud. Sant-Malo, Dinan, Sant-Malo adarre, Sant-Brieg, er glinikenn nouspet gwech, ha Bear. Ret oa... An holl a lare ne oa ket un dizenor mont da Vear. Ezhomm oa e vije intentet outi a-zevri, hag a-dost. Setu tout. Ha ne oa ket tre er folldi... er c'hlañvdi, tal-kichen. Aet oa da zibenn ar vakañsoù bras. Bremañ oa o paouez dont war he c'hiz. Met ne oa ket evit bevañ en he zi nevez, hec'h-un war ar sizhun. Klasket he doa. Met bep tro oa bet fellet dezhi 'n em lazhañ. Geizoù eo a rae, a laremp-ni. Anez da se e vije deut a-benn. Ha pa 'c'h aemp, ar sul war-lerc'h, da Sant-Malo da welout anezhi, e oa eveek (1) un tamm bihan, evel pa vez tapet ur paotr oc'h ober skol al louarn. He gwaz a veze eno. Ne ranne ger ebet, morse. Ober a rae war he zro avat. Ha hi a lare e kare anezhañ, kenañ, dirazomp, ha ne rafe ket mui. Mall oa garni distreiñ d' ar gêr, emezi, dreist-holl pa soñje ennañ, an den kaezh, o loeniñ war an toennoù 'hed an deiz, hag e-un da noz, o fichañ koan... Ne ouele kammed. Met se a lare bepred. Ma zonton all a lare e oa fin, ken e oa, rak berniañ a rae louzeier ha butun dre laer, ha bep taol e veze tapet he mamm ganti. Ha larout a rae ne ouie mui ar medisin penaos ober outi.

Ar gaoz a yae en-dro. En o c'hoazez oant holl, nemet he gwaz, sonn en e sav 'tal ar gwele. Teñval a-walc'h oa ar sal. A-hed ar voger-draoñ, a-dreñv din, an arrebeuri kozh a oa evel e kañvoù. En oaled, skleur ruz ar c'hoad devet.

- Neuze, c'hoar-me, 'teus ket gwelet Soazig c'hoazh ? eme ma eontr, evel gant c'hoant lakaat fent.

- Koantik eo, ha n' eus ket da dortal, heñvel-bev ouzh he... Komz a rae seder, met aze 'n doa strebotet. Me 'm boa c'hoant c'hoarzhin !

- Gwelet 'm eus Janed 'vit beure, ha laret he deus e timezjent da vloaz, pa vije echu e goñje, eme ma moereb Mari, ur reuziadig goude.

- Te 'gomz ! N' ouzon ket petra 'ray gant ar verc'hig-se ! eme ma eontr teñval e benn bremañ.

- En em gustumiñ a ray ! eme eben war he gwele.

Ar verc'hig oa bet ganet d' he nizez, merc'h he c'hoar Janed, an hini 'oa o chom e gorre ar barrez. An hini yaouank oa kamm ivez, ha treut-ki ! 'Oa ket vil, met ne vije ket barrek d' ober war-dro ar plac'hig, ken didalvez oa. N' he doa desket netra er skol. Ha pegoulz e tistrofe al labous, evel a lare ma zonton all... Ma tistrofe... Janed a lare d' an dud en doa teir micher, met ma moereb Mari he doa respontet oa div a re.

(1) eveek = iskis, fentus.

261

Ma c'heniterv a zifenne anezhi koulskoude. A-hervez oa sot gant ar

plac'hig, gwashoc'h eget pa vije bet dezhi...

- Fazi he zad eo ivez, eme ma moereb Mari. Te 'oar, Anna, pa gaser ar maout 'mesk an dañvadezed... N' oa ket fur sachañ ur paotr da vevañ en o zi evel-se...

- Na pet gwech 'm eus-me laret se dezhe. Ne fell ket dezhe selaou ac'hanon ! Ma reont sotonioù, e paefont, a lare Janed din. Ya da... paeet o deus !

Ma eontr a heje e benn en ur gomz.

- D' am soñj, eme ma moereb Mari, he zad n' houle ken met en em zizober diouti : unan nebeutoc'h da vagañ ! Graet ar stal... Ya, met...

Ar vamm-gozh (ma moereb Anna) a oa krizet he zal. Eben a gendalc'he :

- Ya, ur c'horfad mezh 'm eus tapet, me, abalamour dezhi an deiz all. Me oa aet da Blouaer da labourat e liorz ar patron, ha setu un itron o tont da larout din e vije un eured war an ton bras er barrez, 'benn an 28, hag e c'houlenn ganin piv oa ar plac'h. « Ha me oar-me ! » a laran dezhi. « Geo sur, gant mab-bihan an Hamon kozh, eus Lannoe : hi zo ur gaezhez yaouank, sur a-walc'h, rak ar vaouez he deus laret din, er gigerezh, he mamm 'ta, oa ur vantell lous-brein ha joget tout ganti... » Evel just, 'm eus ket laret oa merc'h ma nizez. Memes tra !

Kontet he doa an istor dimp a-raok. C'hoarzhed hor boa, leizh hon genou, dreist-holl pa lare : « Gast ! Me oa aet ruz betek begoù ma diskouarn ! » Du-hont ne voe ket c'hoarzhed kemend-all. Ma moereb tev a veze dalc'hmat o krozal d' he merc'h, met ne blije ket dezhi klevout ar bleupajoù-se. N' he doa graet van ebet, ha troet he doa ar gaouz :

- Klevet 'teus oa deut Jozef da glask afer ouzhimp ? emezi d' am mamm.

- Petra eo an istor-se ?

Ma eontr a voe primoc'h da respont

- C'hoant en doa da doullañ un nor er voger a-dreñv, un nor a skoje war hon c'harrdi kozh. Me ' fell ket din, me ! Me 'ra fout' deus ar c'harrdi daonet-se, met din eo memes tra ! Laret 'm eus nann. Respontet 'n deus e raje koulskoude, dre gaer pe dre heg, emezañ. Met diriaou oan aet gant Mari da Zinan da gaout un den a lezenn...

262

- Petra 'n deus laret hennezh ?

- 'Oa ar gwir ganin, forzh penaos. An dachenn zo dimp.

- Met n' eo ket echu, a droc'he ma moereb Mari a-daol. Me 'soñje din oa renket an traoù. Met diriaou d' abardaez 'n doa laket toullañ an nor, ha Meleg oa aze, el liorz, o c'hoarzhin, evel ober fent gant an daou baour kaezh-se... N' o deus mann da larout, emezañ, abalamour n' eus ket a san ouzh an doenn.

- Se n' hall ket...

Krog oant da arguziñ. Tik oant war traoù mod-se.

- Toullet eo an nor, forzh penaos, eme ma eontr. Ret 'vo mont da gaout an den-se adarre.

A-vec'h dezhañ echuiñ e frazenn - moredet oan, hag un tav dister a oa bet - ma huche ma moereb ken na findaone :

- Me zo og ganeoc'h, og... faezh !

Ur vaouez ramz e oa, postek, ledan, lart - ur vlonegenn - daou bikol boutegad " bronniaou " outi, evel 'm boa laret ur wech pa oan bihan. Savet oa he mouezh, a-daol-trumm, met n' he doa ket fiñvet diwar ar bank. Ne welen takenn bremañ gant an deñvalijenn daonet-se, nemet oa stegn ar c'hroc'hen druz ha barvennek war he dremm, a soñjen.

- Perak e larit atav droug diwar he fenn ? Fursod eo, paour kaezh plac'h ! Komz a ra a-dreuz hag a-hed ! Koulskoude eo ma merc'h ! Ma kav deoc'h eo fentus he buhez, gant al leue all ! Ha seizh a vugale ! Ma n' eo ket reiñ bec'h...

- Ne oamp ket o komz diwar he fenn, se, eme ma moereb Mari, sec'h.

- Brav eo dit kaozeal, te ! 'Teus ket bet poan o sevel bugale, te ! N' hallez ket kompren ! Hag arc'hant a gouezhe ingal 'leizh da c'hodelloù... Perak 'vezes dalc'hmat oc'h ober fent ganti hag o trailhañ din... ? Goût 'ouzon ec'h a da redek dre ar vourc'h, o kontañ kozh kaozioù droch hag o troadañ gevier... Ha d' ober dleoù, moarvat... Ha petra ?

Fuc'hañ a rae. Hag e komze fonnus. Met setu ma hope ma eontr :

- Serr da veg, pe m' hen stanko dit ! Petra zo peget ennout 'ta ? Te 'n hini 'vez atav o klemm war he lerc'h... P' he deus da c'hoar-gaer laret n' ôn ket petra aze... Mallozh Doue ! Arabat pennfolliñ 'vit se ! Ha n' ez ket d' ober geizoù evel-se ! Erru out gwall dener an deizioù-mañ !...

Ha tabut etreze.

263

- Na rit ket gwad fall, Anna gaezh ! eme ma mamm. Ho merc'h eo, moarvat, met Mari n' he deus ket laret a zroug. Perak tabutal ?...

Grik. Mouzhat a rae, sur a-walc'h.

- Ha da bañsion ? eme ma mamm ouzh he breur.

- Touch a ran ingal bremañ. Ar sizhun all 'm eus bet paperoù c'hoazh... an adpañsion. Sur 'm bo. Degouezhet eo ar paperoù, met ne laront ket pegement. Morel a douch ivez, pemp mil ha tregont, hervez a lare...

- Sep miz ?

- Nann, bep tri miz. Se zo ouzhpenn.

- Ya ! eme ma moereb tev. Ma n' eo ket ur vezh ! Labourat 'vel ur c'hi war ar chanterioù 'giz m' en deus graet... A-boan ma c'hallomp 'n em vevañ ! Pa soñjan 'n deus charreet glaou ha troc'het koad 'pad hanter-kant vloaz... Ha c'hoazh, brav e c'hallomp kaout un tamm da chaokat bremañ... Paneve ar vandenn all o sunañ ac'hanomp gwashoc'h 'vit... chas ! N' hallan ket prenañ ur vroz nevez... Hag aze 'maint o lakaat an dour-red en tier tro-dro... Me 'm boa laret dezhañ pell zo... M' en dije selaouet ac'hanon...

- Petra c'hoazh ? eme ma eontr.

Ne selle ket outañ :

- Mont e kêr ! Arabat oa chom en toull-mañ ! E kêr 'vez paeet an dud, e-lec'h amañ . . . ober goap ac'hanomp ! Me 'vije aet d' ober maneroù e ti an dud, 'vel ma 'peus graet te ivez. 'Lec'h ni amañ... Sell Marc'harid : mont a ra da Zinan bremañ, bep mintin. Gwell eo ganti labourat 'barzh ar machin gwestell-se 'vit chom da wriat er gêr ! Me ivez bremañ, n'hallan ket mui mont d' ar stank ! Poan-gein a dapan bep taol !... E kêr 'vez ket ragach ha chaok 'vel amañ. Ha gant e aotre-bleniañ 'n dije kavet labour, sur, lopagn zo ac'hanout...

Sioulaet oa, distanet un tamm bihan. Komz a rae difonnoc'h.

En un taol-kont, prim 'vel un daredenn, e tifrete ar verc'h war ar gwele. Sachañ he divhar er-maez, hejañ anezho ul lajadig, ha lammat d' an traoñ, 'vel ur gwiñver. Redek betek an nor, war he zreid noazh. N' he doa laret ger ebet, nemet gwic'hal. Den n' en doa bet amzer da gompren. Er-maez oa, o vreskenn.

Dilammet oa ar gwaz war he lerc'h, ponner. Choupet 'n doa anezhi, 'vel ur poupig, rak pa oant distroet, e oa en e zivrec'h, o tifronkañ goustadik. Gleb ha lous oa he zreid.

264

Tavet an holl.

Laket 'n doa anezhi war ar gwele, ha chomet oa en he c'hichen, sko outi, o sec'hañ he zreid gant un tamm torch.

Se zo abalamour da Jozef c'hoazh... eme he mamm. Dec'h oa sart evel pep tra. Aet oa er porzh, ha setu ar genaoueg-se a lar dezhi 'oa gwellaet, hag e teuje en-dro 'vel ur wiz... pe ur varrikenn, 'm eus ket soñj...

- Ur varrikenn, a zifronke eben war he gwele.

- N' he deus ket komprenet e rae goap outi. Ur glañvourez eo. N' en deus ket ezhomm larout se !

- Tav da c'henou 'ta ! eme ma eontr.

An den oa plaen ha gorrek evel pep tra. Ral oa klevout anezhañ o komz rust evel-se.

- 'Peus ket echu dihopal ac'hanon ? a lare dezhañ. Hag o treiñ a-grenn war-du ar re all :

- Met petra 'n deus oc'h ober buhez din evel-se abaoe ur pennad ? Emberr e vanto e zorn warnon, ar c'hozh tra... Lar 'ta d' az c'hoar, lochore kozh... Ne dennje ket ur blouzenn diwar e hent ! Ar velc'houedenn gozh ! Ah ! Kouezhet mat oc'h ! N' hallan ket mui larout ger ebet... Me zo og... Evit piv e kemer... Holl 'enep din... O huchal warnon...

A-greiz-holl oa en he sav, o jestraouiñ.

- Me 'vat ne valein ket mod-se... Nann, nann ! Goût mat a rez petra c'hortoz ac'hanout... Un deiz e kavi ac'hanon er solier, pe er c'hav aze... Pe me 'n em grougo ouzh ur wezenn avaloù du-hont, er prad... Ma sac'h gant ar garzajou-se... Nann, nann ! Ha petra 'rafent hepdon, hañ ?...

Dispac'hañ a rae en ur gomz. Chomet oamp skodeget, o sellout outi. A-greiz huchal he doa bountet an nor goad kozh a skoe war al liorz a-dreñv. Diflipet 'maez, en ur vlejal.

- Petra he deus 'ta ? eme ma moereb all.

- N' ouzon ket, a responte ma eontr, o sevel da vont d' he c'herc'hat. Abaoe ur sizhun ne ra nemet blejal. Me ivez zo aet skuizh...

- Chom amañ 'ta ! eme ma mamm. Me zo 'vont da welout.

Ha hi er-maez. Eben all he doa paouezet a zifronkal. En he c'hoazez oa war ar gwele.

- Genaoegez kozh ! a fuc'he ma eontr. Petra ' c'hoari ganti c'hoazh ? Mont e gouez evel-se... Biskoazh... Just pa 'maoc'h-c'hwi amañ !

Tavet oa. Didrouz. Teñval-sac'h oa ar sal bremañ. Evel pa vije bet mouget enni pep elfenn a vuhez. Hini 'bet ne grede mont da enaouiñ ar goulou er penn all. Monget oa an tan en oaled, nemet un tamm skleur arruz dindan al ludu.

- Me 'vat, 'm eus ket aon : ar re a lar se ne reont ket, morse, eme ma eontr c'hoazh.

Kammedoù er-maez. Mouezhioù. Ma mamm o tistreiñ hec'h-un.

- Er c'harrdi 'mañ, 'tal ar bern keuneud. N'houl ket dont. Emañ o ouelañ. Vad a ra dezhi. Larout a ra emac'h atav o pismigat...

Hag hi er-maez adarre.

- Se a dremeno dezhi, eme he mab-kaer, war e bouezig.

Trouz. I o-div o tont. Strevial a rae ma moereb, ha sec'hañ he daoulagad gant he mouchouer.

- Barrekoc'h out bremañ ?... eme ma eontr a-daol.

- Ma zad mar plij... eme e verc'h, sklaset he mouezh.

- Ale ! echu eo... It 'n ho koazez aze, Anna, eme ma mamm.

Fronañ a rae c'hoazh un tamm bihan.

- Ur bannac'h kafe 'po, emezi gant ur vouezh raouliet.

- Nann, nann...

Morzet oa ma divhar war ar bank yen.

- Mat ! eme ma moereb all, seder... Poent 'vo dimp mont !

- Ya ! emezon.

Pokoù. Gleb ha garv oa divjod ma moereb tev. Dorn ma eontr a grene un disterañ. Yen ha blouc'h oa c'hroc'hen ma c'heniterv.

- D' ar c'hentañ gwel ! eme he gwaz, mannous atav.

- Ha deut pa girit,.. a lare ma eontr.

Skeltr oa an noz er-maez. Fresk ha gleb oa an aer warlerc'h ar barr-glav. Ur c'hi a yude en atant, pelloc'h.

Ne oamp ket brochet, met me oa diaesaet memes tra.

Mont a raemp war begoù hon treid. Laket o doa ar goulou e-barzh. Sklêrijenn ar prenestr bras a ziskoueze dimp ar poulloù dour.

- Diwall 'ta da gerzhout er fank, eme ma mamm din. Ken buan e rampfes war da gein...

- Ya, taol pled ! a lare ma moereb. Arc'hoazh vintin 'vo ret luc'hañ da votoù 'vit mont d' ar skol !

Ar Skrapadenn

Er mintin-se e savas abred Yann Verrec'houg. Diskenn a reas d' ar gegin e-lec'h m' edo e wreg o fardañ lein dezhañ. En e bijama edo c'hoazh. Treuziñ a reas ar gegin, pokat d' e hini-gozh, ha mont er-maez da deurel ur sell er voest-lizhiri, kenkas en dije paotr-ar-c'helaouennoù degaset an " Telegramme ". Kemer a reas ar gazetenn ha distreiñ d' ar gegin. Plijout a rae dezhañ lenn ar c'heleier diwezhañ en ur gemer e gafe :

- Ma stagez da lenn, eme Varijanig, e vi diwezhat d' az labour.
- Na rit ket a viloù, 'vin ket, eus na vin ! Boas on d' ober er mod-se. Tapit din ar bara hag ur gontell 'ta e-lec'h chom aze da yariñ ! Gast 'r gurun !
- Konnaret out dija, ha koulskoude n' em eus lavaret netra dit c'hoazh.
- Tavit din, ha lezit ac'hanon da lenn va c'helaouenn, ha diskennit ar c'hafe, mar plij.

Ne oa nemet seizh eur hanter ha ne zigore ket e stal-genwerzh a-raok nav eur, hogen ret e oa dezhañ bezañ e-tal e regennadoù-boteier 'tro eizh eur hanter, rak atav e veze un dra bennak da ober a-raok na zeufe ar pratikoù kentañ. Hag en deiz-se e vefe muioc'h a dud eget boaz, rak ar sadorn e oa ha deiz ar marc'had ouzhpenn. Neuze e oa ret dezhañ hastañ buan. N' eo ket eñ a oa ar patron, un implijad hepken, ne lavarant ket.

Echu gantañ e lein e pignas en-dro d' ar sal-dour da lemel e varv gant e aotenn-dredan. Gallout a rae Marijanig klevout fraoñverezh homañ eus an traoñ. Huanadiñ a reas tra m' edo o torchañ listri an derc'hent, rak n' he devoa ket bet amzer d' hen ober en abeg d' ar film er skinwel hag en devoa echuet war-dro unnek eur.

267

War-dro eizh eur e oa prest Yann Verrec'houg. Ne oa ket dav dezhañ kemer e vantell-c'hlav peogwir e pare an heol en oabl glas. Deuet e oa an nevez-amzer en-dro evit mat, ar wech-mañ. Tridal a reas kalon Yann o klevout richanadeg al laboused e gwez al liorz a-dreñv an ti.

N' o devoa bet bugel ebet, daoust ma oant dimezet abaoe ouzhpenn dek vloaz. Marijanig he devoa kavet stamm da ober da virout outi da gavout hir an amzer hec'h-unan-penn er gêr e-pad an deiz. Lakaat a rae ar skingomz da vont en-dro a-hed an holl vintinvezh, ha goude merenn e tebre hec'h-unan-penn ivez, ez ae da weladenniñ ur vignonez 'tre e-kichen, Tunvez ar Stumm, ur plac'h yaouank kozh, ha kafeta a rae ganti ; hag an teodoù da flapañ, merc'hed, na petra 'ta !

*

Setu Yann o vont gant riblenn ar straed betek ti ar baraer, lesanvet Ti-Laou, e-traoñ hent Penharz. Edo e stal e straed ar Brovidañs. Un hanter-eur bennak en devefe ezhomme da vont war e droad p' en devoa manket ar c'harrboutin o tonet eus Ludu-Du. Ma chomfe e-tal Ti-Laou da c'hortoz an hini war-lerc'h, e tegouezhfe en e stal pemzek munud re ziwezhat, hag e klevfe e begement gant e vestr. Neuze e kendalc'has war e droad betek traoñ straed Bourg-les-Bourgs ha leurgêr La Tour-d'Auvergne.

Ur menoz iskis a zeuas dezhañ a-daol-trumm. Ha ma ne dafe ket da labourat hiziv peogwir edo re ziwezhat endeo forzh penaos ? Aes e vefe pellgomz d' e stal ha lavarout d' ar patron e ranke mont da gaout ar mezeg. Un devezh-ehan a

gemerfe. Ha perak ne rafe ket ? Morse n' en devoa kemeret un devezh evitañ e-unan. Ar wech kentañ e vefe.

Ober a reas e venoz neuze da vont d' ur c'hafedi da gas un taol-pellgomz d' e vestr. Hag e skeud-se e kavas digarez da evañ ur banne Muskadig. Ar patron n' en devoa respontet nemet : O. K. Setu-eñ dieub evit an devezh penn-da-benn. Sur e oa n' edo ket e wreg evit gouzout doare ebet eus an afer, peogwir ne oa pellgomzer ebet er gêr. Hag ar patron a soñjfe gantañ e vefe chomet e implijad er gêr. Ne oa dañjer e nep tu. Deomp dezhi neuze, a soñjas Yann.

Hag eñ ha mont da brenañ un dorzh-vara, un tamm fourmaj, un tamm anduilhenn, ul luriad rigadelloù, un hanter-lur amann, hag evit kas an holl draoù-se war draoñ, ur voutailhad gwin-ruz. Prenañ a reas ivez Paris-Match. Mont a reas betek harz ar c'harr-boutin war gae an Oded. Gortoz a reas ur reuziad, hag e pignas e-barzh. Ha dao betek penn al linenn, betek Ludu-Du. Tremen a reas ar c'harr-boutin e-biou d' e di. Gwelout a reas Yann ar stalafioù mouk anezhañ ; serr ma oant c'hoazh, e ranke Marijanig bezañ er gegin bepred, en traoñ.

268

E-unan-penn e oa betek penn al linenn, hag ar blenier en em c'houlenne piv e oa ar praktik dic'hiz-se gant e bakadoù ken dic'hiz all.

Diskenn a reas Yann hag e kemeras ur wenodenn war an tu dehou d' an hent bras, hent Pont-'n-Abad. Ur wezenn-derv a gavas ledan a-walc'h da gaout un tamm skeud. Ehanañ a reas dindani, en disheol, daoust d' an heol bezañ izel a-walc'h c'hoazh. Petra 'n diaoul e oa deuet da ober aze ? Chom hep mont da labourat. Graet e oa bet an dibab hep termal an disterañ. Ur c'hruz a reas d' e zivskoaz. Teurel a reas ur sell ouzh e eurier : nav eur hanter. Un devezh a-bezh da chom e-unan er c'hlasvez. Er park ekichen e oa saout o peuriñ. A-us d' e benn un tad-moualc'h a c'hwitellas ken-ha-ken tra ma taole e-unan e benn-adreñv war ar geot. Tro-dro dezhañ e oa bodoù-spern ha raden e-leizh. Kant metrad alese e c'helle gwelout an hent bras gant ar c'hirri-tan, ar c'hamionoù bras o vont hag o tont drezañ.

Disoursi ha seder e oa. Ne oa distoufer ebet gantañ da zistoufañ ar voutailh. Tapout a reas e gontell eus e chakod, hag e stagas da dennañ ar stouf, ret e voe dezhañ avat, e dennañ a-dammoù evit donet a-benn anezhañ. Ul lonkadenn hir a gemeras hag e santas diouzhtu ur wrez plijus oc'h aloubiñ e vruched.

Klask a reas lenn ul linenn bennak diwar e Baris-Match. N' edo ket evit ober. Serra e reas e zaoulagad troet war-du an oabl digoumoul, hag e kouezhas en ur morzadur c'hwek a droas tamm-ha-tamm en ur voredenn leun a huñvreoù kaer.

*

Pa zigoras e zaoulagad en-dro e oa tost da deir eur goude kreisteiz. Penaos en devoa gallet kousket ken pell amzer ? Skuizh e oa sur a-walc'h diwar re labour, pe marteze, n' en devoa ket kousket trawalc'h en noz tremenet. Naon en devoa bremañ hag e sankas e gontell er bara. Un darnenn anduilhenn a yeas gantañ ivez hag ul lonkadenn win da gas houmañ war-draoñ. Na brav e oa ar vuhez ! Boulc'hañ a reas ar fourmaj hag e chomas ar rigadelloù war ar geot. Perak an diaoul en devoa prenet kement-se a draoù ? N' edo ket evit debriñ an holl voued a oa deuet gantañ.

269

Souden dirak e zaoulagad e c'hoarvezas un taol iskis war hent Pont-'n-Abad. Ur plac'h yaouank diskennet eus ar c'harr-boutin a wele o kerzhout war an tu dehou eus an hent bras, gant levrioù dindan he brec'h. Ur studierez, a soñjas, o tont eus ar skol. War he lerc'h avat, setu o tont ur c'harr-tan, ennañ un den blev du dezhañ. Gorrekaat a reas ar c'harr pa zegouezhas gant ar plac'h, hag herzel. An den hag a oa ennañ a lammas er-maez. Ur paotr krenn e oa anezhañ. Yann a c'helle e welout spis-mat bremañ. Tapout a reas krog er plac'h hag e vountas anezhi er c'harr. Anat e oa ne faote ket dezhi mont e-barzh rak en em zifretañ a rae. Met n' edo ket evit ar paotr.

Alvaonet e chomas Yann. Petra en devoa gwelet ? Daoust ha ne oa ket ur skrapadenn ? Peurlonkañ a reas e voutailhad-win. Lezel a reas an dorzh-vara hag ar rigadelloù. Sevel a reas en e sav en ur vroustañ kuit gant e zorn ar geotenoù chomet stag ouzh e chupenn. Pakañ e reas Paris-Match, bountañ ar peurrest eus an anduilhenn en e chakod ha mont kuit ac'hano a-zoug e gamm war-zu an hent bras, prederiet gant ar pezh en devoa gwelet. Marteze, emezañ outañ e-unan, daou zanvez-pried tabut etrezo.

Gant ar c'harr-boutin e tistroas betek Ti-Laou, ha neuze mont etrezek ar gêr, dres d' ar mare ma oa boas da zistreiñ bemdeiz diouzh e labour.

Ne oa ket souezhet Marijanig o welout he gwaz, peogwir e oa Yann un den sirius. Ne chome morse da straniñ, da ruzañ pe da lipat ur banne goude e labour. Evel just ne c'helle ket Yann komz diwar-benn ar pezh en devoa gwelet en endervezh-se.

*

Kentañ a reas, pa savas antronoz vintin, e voe mont da welout hag-eñ emedo e gazetenn er voest-lizhiri. He zapout a reas ha buan e redas betek ar gegin da glask e gafe ; ha displegañ ar gazetenn d' ar bajenn e-lec'h ma vez merket an darvoudoù c'hoarvezet e kornad-Kemper. Kentañ e welas e oa :

270

SKRAPADENN E KEMPER.

« Ur plac'h yaouank 17 vloaz a zo bet skrapet etre teir eur eur ha peder eur, war-dro Ludu-Du, dec'h d' enderv. Diskred a zo war ur paotr 22 vloaz, mab rener Skol ar Merc'hed, Itron-Varia-Wir-Sikour. Gwelet eo bet hemañ meur a wech o treiñ en-dro d' ar plac'h yaouank a zaremprede ar skol-se. Marivon Laotredoù - hennezh eo hec'h anv - n' eo ket bet distroet d' ar gêr dec'h da noz. Goulennataet eo bet ar paotr, Yann-Vari Salaun, gant ar polis. Nac'hañ a ra evel just... »

Hag e oa ur pennad hir o tiskleriañ an holl vartezeadoù graet gant an archerien. Ne ouie den da belec'h e oa bet kaset ar plac'h gant he skraper... Yann a daolas ar gazetenn war an daol, ur stumm prederiet warnañ.

- Gast ! eme Varijanig, petra 'n diaoul a zo peg e-barzh da revr, Yann. Un aer drol ac'h eus. Lennet ec'h eus un dra bennak war ar gelaouenn ha na blij ket dit ?

- 'M eus ket, sur, netra, a eilgerias Yann.

Kerkent ha ma voe aet kuit, e lammias Marijanig war ar gelaouenn hag e tigorias anezhi er bajenn bet lennet gant he gwaz. Klask a reas en aner e pep lec'h, ha ne gavas mann a gement a vefe bet dedennus evitañ. Strafulhet e chomas.

*

Patron Yann a c'houlennas digantañ hag-eñ e oa gwelloc'h an traoù gantañ eget en derc'hent ha petra en devoa lavaret ar mezeg. Kontañ a reas Yann dezhañ e vizit e ti ar mezeg, dre ar munud. Gant un tamm terzhienn e oa bet ret dezhañ chom er gêr, en tommder. Damveneget e oa bet ar c'heleier diwezhañ hag ivez skrapadenn an derc'hent : - Ya, eme Yann, gwelet em eus an dra drist-se war ar gelaouenn. Ha ne voe mui komzet eus an afer.

... Pa zeuas d' ar gêr, d' abardaez, en deiz-se, ez erruas dres d' an ampoent ma roe ar Skingomz ar c'heleier :

« Skrapadenn Gemper. Kavet eo bet korf Marivonig Laotredoù en ur vengleuz,

e Pluguen, ul lev bennak diouzh al lec'h ma oa bet skrapet. An torfedour - emañ ar polis war e roudoù - a zo atav o redek. Goulennataet e vo adarre Yann-Vari Salaun, mab rener skol Itron-Varia-Wir-Sikour. War a seblant ez eus bet implijet unan eus loeroù ar plac'h yaouank d' he zagañ. Graet e vo ar c'horfskejerezh warc'hoazh da welout hag-eñ ne oa ket bet graet vil dezhi a-hend-all. »

271

... Pa zigoras Yann e gelaouenn en deiz war-lerc'h, e lennas ar pennad-mañ :

« Marivonig Laotredoù, ar studierez 17 vloaz hag a oa bet skrapet e Ludu-Du, daou zeiz 'zo, a oa bet kavet he c'horf en ur vengleuz, e Pluguen, nepell ac'hano ; pizh-skejet eo bet he c'horf da welout hag-eñ ne oa ket bet graet vil dezhi a-raok he lazhañ.

An torfedour a zo ur paotr yaouank 22 vloaz, Yann-Vari Salaun e anv. Anzavet en deus e dorfed. Kontet en deus dre ar munud ar skrapadenn. D'an eur-se n' edo ket er skol m' eo e dad ar rener anezhi. Lavaret en deus e oa aet war e droad betek harz ar c'harr-boutin, da Ludu-Du ; anaout mat a rae ar plac'h yaouank hag e ouie pelec'h e tiskenne eus ar c'harr-boutin. Hec'h ambroug a reas betek ar vengleuz hag eno e tagas anezhi gant unan eus he loeroù. »

E-keñver ar pennad-skrid e oa poltred ur paotr yaouank, ur pezh lankon anezhañ, gant ur chupenn-lêr warnañ ; ur melegan e seblante bezañ, daoulagad c'hlas dezhañ. Yann a skoas e gelaouenn e-kichen e volennad-kafe ha darbet e voe dezhañ mougañ gant tamm bara a oa en e c'henou.

- Gast, eme Varijanig hag a oa o skubañ ar gegin, petra 'r gurun a c'hoari ganit, Yann. Te 'zo 'vont da vougañ ?

- N' eo netra, Marijanig, un tamm bara aet en toull kontrol.

*

Adal neuze ne c'helle mui Yann kousket ken strafuilhet ha ma oa... Ur melegan, ur melegan, emezañ ; n' eo ket posupl. Hen gwelet em eus ; un duard e oa, ur paotr krenn ha n' eo ket ul lankon. N' am eus ket huñvreet, mil mallozh !

272

E berr gomzoù : test e oa bet Yann eus ur skrapadenn kaset da benn gant un duard diskennet eus ur c'harr-tan. Diouzh un tu all, ar skingomz hag ar c'hazetennoù a venege en devoa anzavet e vuntr. Lavarout a raed e oa bet ambrouget ar plac'h yaouank war droad eus harz ar c'harr-boutin betek ar vengleuz ; hag e oa ar paotr un den melegan ha bras. Gevier, gevier tout, a lavare Yann outañ e-unan : « Me a oar petra a zo c'hoarvezet, ha n' eus nemedon o c'houzout penaos eo tremenet an darvoud. Ne c'hellan ket avat, mont da dest, gant aon na zeufe va gwreg da c'houzout n' edon ket er stal-genwerzh en deiz-se, ha va fatron da glevout n' edon ket er gêr oc'h ober un tamm diskuizh. Petra da ober ? »

Ar gwir vuntrer a oa tec'het kuit, a-hervez. Hag hemañ, an inosant melegan-se, Yann-Vari Salaun, eo a baefe evit d' egile ? Se ne c'helle ket bezañ.

*

E-pad mizioù ha mizioù e voe kontet traoù a bep seurt diwar-benn abegoù ar muntr. Ar brud a redas e kêrbenn Bro-Gernev e oa Yann-Vari un inosant, troet e spered, hag a oa bet gwelet meur a wech o c'hoari koukoug e lec'hioù-kuzh ar skol, da glask pokat da Varivonig ha siklezonoù evel-se a voe lennet war ar c'hazetennoù.

Gwir e oa memes tra ne oa ket ur paotr speredet-dreist, n' en devoa micher

ebet ha diskarget e oa bet eus ar servij-soudard en abeg d' e yec'hed. Gant e spered gwan un tamm e oa bet levezonet gant goulennoù ar boliserien ha re ar barner. Hep kontañ sur a-walc'h un tamm lorc'h en e greiz o welout e boltred war ar journalioù. Karantez kuzh en devoa moarvat evit ar plac'h yaouank. Setu ma voe toullbac'het eta, da c'hortoz ar varnedigezh.

*

Yann avat, ne c'helle ket e spered chom e peoc'h. Lammou bras a rae en e wele e-pad e gousk. E wreg a redie anezhañ da gemer boued, rak n' edo mui evit debriñ na lonkañ netra. Tamm-ha-tamm ez eas war zinerzhañ ha darbet e voe dezhañ kouezhañ klañv da vat.

Un devezh e lennas war ar gelaouenn e oa bet barnet Yann-Vari Salaun d' ar marv. Neuze e reas e venoz da vont da brouiñ n' eo ket Yann-Vari an hini a oa an torfedour gwirion. Un den onest e oa Yann. Ne c'hellas ket kuzhat e sekred pelloc'h. Gwiskañ a reas e zilhad da sul. Lakaat a reas e dog nevez-flamm war e benn, ha mont da gaout ar barner-meur.

273

Ne gontas ket dezhañ en devoa gwelet paotr e vlev du o tapout krog er plac'h yaouank hag ouzh he bountañ en e garr-tan. Diskleriañ a reas ez eo eñ, Yann Verrec'houg eo en devoa lazhet anezhi.

Kaer en devoa ar barner lavarout en devoa Yann-Vari Salaun anzavet pep tra. Poan gollet e oa. Tamm-ha-tamm e savas arvar espered ar barner, hag e roas urzh da eilatersañ Yann-Vari Salaun ha da adober ar prosez. Difennet-mat e voe hemañ gant e alvokad hag a-benn ar fin e voe diskleriet Yann-Vari digablus ha roet e frankiz dezhañ. Toullbachtet e voe d' e dro ar paour-kaezh Yann Verrec'houg, dezhañ un anv tonket d' an dibennerez. Evel prouennoù e voe kavet an tamm bara lezet gant Yann war ar geot, ar voutailh c'houllo hag an tamm fourmaj. Aet e oa ar rigadelloù moarvat gant ar brini. Goulennet e oa bet ivez digant e vestr e pelec'h edo e implijad en deiz-se : aes eo gouzout ar respont ; ha neuze mezeg ebet n' en devoa gwelet Yann en deiz-se kennebeut.

Yann Verrec'houg n' en em zislavaras ket. Kalz a zaeroù a skuilhas ar baour-kaezh Marijanig pa voe kaset he gwaz d' an dibennerez. Met ar gwir vuntrer a zalc'h da redek.

Muzilheg. Meurzh 1971.

ISTOR BREIZH LA BORDERIE

troet gant ROPARZ HEMON

An Dugiezh gant Lignez Penteür

(KENDALC'H)

Mac'homerezh Herri II hag eneberezh ar Vrezhoned

E-pad pemzek vloaz e chomas Breizh etre skilfoù Herri II, mac'homer spontus, an ijin-dreist mesket en e spered gant an torfederezh, galloudusañ, krisañ, fallakrañ euzhusañ rener an amzer-se.

E-pad pemzek vloaz (1166-1181) e troas, e voustras, e vresas evel e gevelioù dir bro Vreizh d' ober ganti ur rannvro saoz. Hag en desped d' e c'halloud ha d' e grizder e c'hwitas war e daol.

Dirak an dagadenn skrijus-se a-berzh holl nerzhioù Bro-Saoz evit terriñ emrenezh ha broadelezh Vreizh, e talc'has ar Vrezhoned da enebiñ dibaouez. Faezhet e voent peurliesañ. Meur a wech e kredas ar gwasker fougèus e oa mouget an eneberezh. Antronoz ez adveve. Morse ne davas el ledenez, zoken evit ur pred, ar garmoù a gasoni hag a argarzhidigezh ouzh yev an estren. E-pad ar pemzek vloaz-se e voe brezel diarsav, ha dreist-holl eizh emsavadenn vras, e 1167, 1168, 1170-71, 1172, 1173, 1174-75, 1177, 1179.

Hervez ar gronikourien, hini anezho ne zeuas da vat, ha gwir e tle bezañ, d' hor soñj. Koulskoude, ret lavarout n' eus ket tu, siwazh, da dresañ, un istor resis a-walc'h eus an eizh emsavadenn-se. Ar Vrezhoned, n' o doa ken preder nemet difenn o frankiz, n' o deus skrivet netra, n' o deus lezet roud ebet eus ar stourmad meur.

275

N' hon eus eta nemet testeni o enebourien. An holl gronikoù a chom a zo diwar bluenn skrivagnerien saoz, pe da vihanañ a-du gant roue Bro-Saoz. Untuek ez int eta, rak en ur brezel ken taer e oa gwall entanet ar speredoù.

An testenioù untuek-se, na c'haller ket gwiriekat, n' eus ket, sur-mat, da fiziout kalz enno. Hag ouzhpenn, teñval, damlavarus ha diglok int. Meneget e vez an disoc'h e berr gomzoù, atav heñvel : trec'h ar Saozon, drougeurioù liesseurt ar Vrezhoned. Hogen penaos ha perak e teuas an disoc'h-se, war gement-se e taver, ha ne roer diskleriadur ebet.

Ar Saozon hag o mignoned o doa kalz traoù da guzhat. Da skouer, e tiskouezont dimp bep bloaz ar Vrezhoned evel echu, kaset da netra. Pezh na vir ket ouzh ar re-mañ da zistreiñ bev-buhezek ar bloaz war-lerc'h evit adkregiñ gant ar stourm. Sklaer eo ne oant ket bet faezhet a-grenn, evel ma lavarar, hag ar Saozon ne oant ket bet trec'h a-grenn.

Dic'hallus eo eta, a lavaran adarre, sevel un danevell eus an emsavadennoù kalonek-se, a ve taolennet enni an darvoudoù hervez ar wirionez rik. Bez' e c'haller evelkent, gant an tammoù kelaouadur a chom, skeudenniñ dre vras stumm hag emdroerezh ar stourmad hir-se, o lakaat liv warnañ gant an taolioù hag an darvoudennoù dudius deuet betek ennomp an anaoudegezh anezho. An dra-se a glaskimp ober.

Blenierien ar Vrezhoned.

A-raok pep tra, setu amañ pennañ kadourien Vreizh :

Da gentañ, Eozen Pourc'hoad, a oa atav, hervez barn ar vrogarourien, dug Breizh, hep mar ebet, abaoe ma oa bet gwerzhet ar vro gant e gevezer mezhus d' he gwashañ enebourien. Dre se e oa rener, sturier an harzerezh broadel. Ha dellezek oa eus ar garg-se dre e galonegezh dibleg ha youlek, na c'halle morse bezañ diskaret p' en deveze lamm, hag eñ dibourc'het, handeet, harluet, dalc'hmat en em gave sonn en e sav ar bloaz war-lerc'h gant un armead Vrezhoned evit difenn frankiz, enor, ha buhez end-eeun ar vammvro.

En e gichen an hini kentañ dre e skiant-prenet, e gadarnded taer ha dizoñvus, oa Raoul II baron Felger, a oa bet ken illur e nerzh-kalon hag e c'hoaf galloudek en ergerzh-brezel 1162-64, hag a dlee dizale, e 1173, gounit c'hoazh muioc'h a vrud dre guriou brasoc'h.

276

E Breizh-Uhel, aotrounez Dinan, Olier ha Rolant, pennoù an daou skourr ma oa rannet etrezo o lignez, a oa ivez er renk kentañ e-touez kampioned an harzerezh broadel, hag e talc'hjont penn hep skoazell, e 1168, en unan eus rustañ krogadoù ar brezel.

E Bro-Naoned, er Me, - ar c'hornad-bro ec'hon etre genou ar Wilun hag harzoù Anjev, - e weljod, e-doug emsavadenn vras 1173, aotrou ar Roc'h-Vernez o stourm kreñv ouzh mac'homerezh ar Saizon, hag ivez e kontelezh Roazhon, aotrounez Gouion, Tintenieg, Elvinieg, ha ganto re Vonforzh, Kastell-Jiron, Gwizhurieg, h.a.

Breizh-Uhel, a weler, a roe d' ar vro difennourien c'hredus ha niverek. Brezhon e oa, brezhon a galon hag a ene bremañ, dreist-holl a drugarez d' an dalc'hioù-douar trevadennet gant Breizhizeliz am eus meneget diaraok. Ar marz galian-ha-frank a oa hep mar ken brezhon ha Goueled-Breizh, brezhonoc'h zoken, a-galz, a c'hallfed lavarout, da varn hepken diouzh kronikoù saoz ha saoz-ha-norman an amzer, a ra anv, e-touez diwallourien Vreizh, eus kalz nebeutoc'h a Vreizhizeliz eget a Vreizhuheliz. An abeg avat eo ne grede ket ar gronikourien mont e diabarzh Arvorig. Dre ma choment en diogel war an harzoù, ne ouient hogos mann eus kement a c'hoarveze e kornog al ledenez.

An eneberezh e Leon.

I. - Er c'hornog pellañ e veve ul lignez a roas er stourm-se meur a desteni a vrogarantez virvidik : lignez beskonted Leon, dre Wionvarc'h IV hag e zaou vab Gwionvarc'h V hag Herve. Goude gwerzhidigezh vezhus Breizh d' ar Saizon gant Konan an Trubard, Leoniz o doe an enor da zeraouiñ an emgann ouzh ar marc'homer, e 1167.

Herri II, o soñjal e oa a bouez flastrañ ar gentañ emsavadenn-se dre ar spouron, a skignas e Leon a-bezh e soudarded hag e ijinoù-brezel, hag a gemeras kestall, en o zouez an hini kreñvañ eus re ar beskont ; e beurzismantrañ a reas en un doare spontus, e lakaat da leskiñ evel ur bern keuneud.

Gwionvarc'h, enket gant nerzhioù dreist d' e re, a rankas plegañ. Hag Eozen Pourc'hoad a reas eveltañ ; rak hemañ a oa deuet da vezañ e vab-kaer : abaoe un nebeut bloavezhioù, war-lerc'h marv an dugez Berta (war-dro 1163), e oa dimezet da Alienor Leon, merc'h Wionvarc'h IV. Herri II, en doa aon bras rak Eozen Pourc'hoad, en abeg d' e ampartiz, d' e nerzh-kalon ha d' e esper da gaout an dugelezh, hen redias da zaskoriñ dezhañ, evit tizhout ar peoc'h, ur gouestl eus ar priziusañ, ar briñsez Alis e verc'h, en doa bet digant an dugez Berta.

277

Stourm er Rener.

II. - E derou 1168, e klaskas da gentañ Herri II, dre bilbouzerezh, sachañ davetañ Eozen Pourc'hoad ha darn eus ar varoned kevredet gantañ evit difenn frankiz Vreizh, en o zouez Olier Dinan ha Rolant e genderv. Poan gollet

kenderc'hel a rejont da ziarbenn e veli.

Ar roue, kounnaret, a sailhas war ar " rebellanted "-se, ha war Eozen da gentañ penn. Gwastañ ha leskiñ e holl zouar, da lavarout eo Pourc'hoad, a reas, distrujañ Josilin, kemer Gwened, Alre (o kreñvaat eno ar c'hastell), kontelezh Bro-Wereg a-bezh, koulz ha kontelezh Kernev, a oa da Eozen.

Neuze e troas ouzh aotrounez Dinan hag o c'hevredidi, o wastañ pep tra. Kemer ha kreñvaat a reas kastell Kerhazou, diskar kastell Tintenieg (hini Menez-Muron), sezizañ gant ijinouù-brezel Bekerel, a c'hounezas gant mil boan.

N' en doa ket amzer da dagañ Lehon, rak poent oa dezhañ mont d' an emwel aozet etrezañ ha roue Frañs, eizh devezh goude Gouel Yann-Vadezour, e La Ferté-Bernard. Amzer en doe evelato da rivinañ holl vro Dinan war div c'hlann ar Renz hag un darn vras eus bro Aled. E-giz-se en doa lakaet tan ha gwad e tost an hanter eus Breizh.

N' on ket, siwazh, evit tevel war e daol kalonekañ. Er bloaz diagent, Eozen en doa lakaet e gouestl etre e zaouarn e verc'h Alis, a oa c'hoazh yaouank-flamm. En ur reiñ dezhañ ar grouadurez-se, e geniterv, en doa kontet Eozen war e onestiz a varc'heg. He dizenoriñ a reas hep mezh.

En emwel La Ferté-Bernard e teuas Eozen, o tiskuliañ dirak roue Frañs hag ar bed kristen an torfed euzhus-se, a oa « treitouriezh, avoultriezh ha karc'hadaliezh » war un dro. Pe forzh a rae avat an tourc'h kurunennet-se, a dorimelle en e hudurnez ?

E derou 1169, da heul un emwel all etre an daou roue, d' ar 6 Genver, e Montmirail, e voe adsavet ar peoc'h e Breizh evit ur mare. Rolant Dinan a nac'has koulskoude da gentañ anavezout Herri II da roue. Hogen ret e voe dezhañ plegañ pa voe kemeret ha diskaret kastell Lehon gant Herri.

278

Marv Konan IV.

III. - Ar peoc'h ne badas ket pell. E 1170, mevel ar Saozon, an dug, pe gentoc'h an ezdug Konan IV, a dagas a-greiz-holl Gwionvarc'h beskont Leon, a nac'he anavezout e veli, a drec'has hag a brizonias anezhañ. Er bloaz war-lerc'h Eozen Pourc'hoad a savas, a-nevez ouzh yev an estren. Herri II a gouezhas gant e arme war gastell ha kêr Josilin, a voe losket adarre, ha diskaret-rez. Argaset e voe kêriz holl gwitibunan, hag Eozen harluet diouzh Breizh. Er bloaz-se, kalz re ziwezhat evit e enor ha mad ar vro, e varvas an ezdug Konan IV (20 C'hwevrer 1171). N' en doa mui nemet kontelezhioù Gwengamp ha Richmond.

Distro Eozen Pourc'hoad.

IV. - E 1172, Eozen, distro da Vreizh, a adsavas ar c'hevredad broadel ouzh an enebour. Adarre e voe taget gant Herri II ha rediet da glask repu e Frañs. Hogen an had taolet gantañ en douar brezhon ne deas ket da goll, hag e tarzhas ar bloaz war-lerc'h un emsavadenn spontusoc'h eget ar re ziaarak.

Tabut etre ar Saozon.

V. - An emsavadenn-se, e 1173, ouzh ar mac'homer, - ar pempvet adalek 1167, - a voe aesaet gant an tabut a c'hoarvezas etre ar roue Herri II hag e vibien, en o zouez Jafrez, a veze graet anezhañ endeo dug Breizh. Feuket e oa bet hemañ, rak e dad en doa klasket lemel digantañ un denjentil a brize kalz, Hasculfe de Saint-Hilaire. Un nebeut Saozon, mignoned da Jafrez, kont Chester da skouer, en em lakaas a-du gant ar Vrezhoned.

Eozen Pourc'hoad a zistroas ivez eus Frañs evit kemer perzh er stourm. Koulskoude, pennatizer ha pennrener ar stourm-se e voe Raoul Felger, ha na

skuizhe morse. Eozen a adsavas e gastell a Josilin. A zo gwelloc'h, e kemeras kêr dugel Plouarzel-Breizh-Uhel, hag ez adperc'hennas e zouar, Bro-Wereg hag an hanter eus Kernev.

Kastell Felger, adsavet ivez gant Raoul, a dlee, dre e lec'hiadur, bezañ emvodlec'h ar vrogarourien vrezhon, rak eno, war an harzoù, eo e ranked herzel ouzh an estren a venne mont e Breizh. Saizon a-du gant Jafrez en em unanas gant ar vrogarourien-se. Raoul a zastumas an holl dud eus e zouar a oa gouest da zougen armoù. Kement-se a rae ur galloud bras.

279

Herri a gasas en o enep ur bagad soudarded-kantreerien ouez, lesanvet "brabantiz", a rae e nerzh. Trec'het e voent etre Felger ha Saint-James-de-Beuvron. Kemeret e voe zoken gant Raoul kestell norman Saint-James hag an Teilleul, ha losket.

Herri neuze, e soñj kouezhañ war Raoul war e zistro eus an argadenn-se, a zeuas e kuzh gant un nebeut soudarded betek Felger. Pa voe klevet edo Raoul o tostaat, e kemeras an tec'h. En ur dec'hout en devoe bevez : Raoul en doa gourc'hemennet da dud ar c'hornad en em repuiñ gant o holl bourvezioù, o zropelloù, o c'hezeg e koad Felger. Herri a gavas ar bagadoù-se, dizifenn, o tont dirazañ. Skampañ a rejont a bep tu, o lezel pep tra war o lerc'h, pa weljont ar soudarded.

Seziz Dol.

Daoust da se e kemeras Raoul kastell Komborn ha kêr Dol, a oa e dalc'h ar Saizon. Herri II, o kompren ez ae ar stal war fallaat, a gasas un armead vras a "vrabantiz" da stourm ouzh an emsavid. En armead Raoul Felger hag Huon Chester e oa kalz soudarded ivez, troadeien avat an darn vuiañ anezho, da lavarout eo bilened, gourdonet-fall d' ober brezel. Ne zalc'hjont ket dirak rouderien gozh Herri II : 1.500 a voe lazhet, 16 marc'heg prizoniet. Ur c'hant bennak a dud armet, 40 marc'heg en o zouez, en em serras e Tour Dol, hag eno e voent gronnet gant ar Saizon (20 Eost 1173).

Edo Herri II e Rouen. En noz etre an 21 hag an 22 a viz Eost e klevas ar c'heloù, hag ez eas en hent raktal. Antronoz, an 23, da nav eur eus ar beure, ez erruas dirak Dol, ha kerkent e lakaas aozañ e ijinoù-brezel evit dispenn ar c'hreñvlec'h. D' ar 26 a viz Eost en em zaskore ar sezizidi. Holl e oant tud a renk uhel, brezelourien galonek.

Bac'het e voe gant Herri II an darn vuiañ eus e brizonidi en e greñvlec'hioù. Raoul Felger a nac'has krenn plegañ d' ar roue. Lakaet e voe war werzh-daspren, hag e chomas dishual, o lezel e zaou vab, Juhel ha Gwilherm, war e lerc'h da gred. Kerkent e tec'has e don e goad.

280

Daoust d' an taol spontus-se, e kendalc'has ar brezel e meur a gornad. En hanternoz kontelezh Naoned, e bro ar Me, Jafrez Pouancé baron Gwerc'h, Bonabe Ruvieg ha re all, Brezhoned hag Anjeviz, bet losket o c'hestell gant Herri II, o doa klasket repu ivez en o c'hoadoù, hag ac'hano e sailhent evit gwastañ domanioù ar roue. Ar "vrabantiz" a gemeras hag a zistrujas Gwerc'h, hogen ne gredjont ket mont er c'hoadoù. E-lec'h-se e skojont etrezek beskontelezh Pourc'hoad evit tagañ Eozen. Hemañ, na oa ket kreñv a-walc'h d' en em zifenn, en em repuas e Frañs.

E 1174 e kavas Breizh un tamm peoc'h, rak edo Herri II o vrezelekaat ouzh e vibien. Roue Bro-Saoz a ramparzhas Anseniz, dreist-holl a-enep dezho. Eozen Pourc'hoad, oc'h ober e vad eus an darvoudoù, a zistroas da Vreizh hag a adc'hounezas, n' eo ket hepken Pourc'hoad, hogen ouzhpenn Plouarzel-Breizh-Uhel, Bro-Wereg hag an hanter eus Kernev.

Labour Eozen Pourc'hoad.

VI. - Er bloaz war-lerc'h, 1175, ar bleiz hag ar bleiziigoù a oa adunanet, hag e krogas a-nevez ar brezel e Breizh.

Herri II a roas urzh d' e vab Jafrez da vont di, o c'hourc'hemenn groñs dezhañ handeiñ ha gwallgas ar re na soubljant ket d' e vac'homerezh. En em zifenn kalonek a rejont, evel ma oa da c'hortoz, hogen flastret e voent. Eozen Pourc'hoad, an hini a glasked diskar dreist-holl, a voe lamet digantañ e zomani adarre, ha rediet, sur a-walc'h, da vont en harlu evit ar pevare gwech.

Diwar ar poent-se, ne vez mui meneget e anv en istor ar brezelioù-se. E-pad ugent vloaz, difenner dispont gwirioù ar vroad vrezhon en doa stourmet diastal evit herzel ouzh an estren. Bep tro e oa bet trec'het, bep tro e oa chomet disuj. Dalc'hmat e oa en em gannet, dalc'hmat e oa bet rener, ene an eneberezh broadel. Outañ e oa bet skoet holl daolioù, warnañ e oa bet kreizennet gourvenn ar mac'homer holl-c'halloudus, dihegar ha didruez, a felle dezhañ kas Breizh da get. Gwall c'houliet, aet skuizh-divi, e rankas Eozen ehanañ en diwezh. Hogen sevenet en doa e labour. Enaouet en doa e kalonoù ar Vrezhoned ar gasoni ouzh ar Saozon, na c'hallje bezañ mouget nemet goude kas anezho er-maez eus Breizh.

281

Bro-Leon o stourm adarre.

VII. - Dre se, evit da Eozen bezañ aet kuit, ez adkrogas ar stourm dizale. E 1177, Gwionvarc'h IV, beskont Leon, en em savas adarre a-enep yev ar Saozon, hag e-keit-se e e tarzhe un hevelep ensavadenn e penn all ar vro, en he fenn Jarnogon eus ar Roc'h-Vernez. D' ar yaou 18 a viz Eost er bloaz-se, e touare Herri II e Normandia gant un arme vras, ha kerkent e kase e vab Jafrez evit stourm ouzh an emsavidi. Trec'het e voe ar Vrezhoned evel boaz, ret dezho degemer ar peoc'h hervez an divizoù a voe lakaet warno.

Bro-Leon rannet.

VIII. - Hag evel boaz ivez, ez adkrogas ar brezel, daou vloaz goude, e 1179, ha Leoniz ur wech c'hoazh en em gannas disaouzan. Gwionvarc'h IV hag e vibien a zigoras an abadenn. Pezh a laka Robert du Mont da vrouezañ :

« Ar Gwionvarc'h-se ne zouje na Doue nag an dud ! » emezañ.

Ha Dom Moris diouzh e du a ziskler parfet :

« Netra ne c'halle e zerc'hel war hent an dlead ! »

Evel pa ne vefe ket kentañ dlead un den difenn e vro ouzh an estren !

Jafrez ar Saoz, mab Herri II, a oa ali gant Dom Moris war ar poent-se, hag e tivizas reiñ d' an emsavidi ur gentel. Tagañ a reas beskont Leon goude Gouel Pask (1-añ Ebrel 1179), ha ken bras oa niver e soudarded e-keñver niver re al Leonad ma kemeras e holl greñvlec'hioù, ma lakaas e graban war e holl zomaniou.

Gwionvarc'h avat en doa gouestlet mont da Jeruzalem gant e wreg. Aotreet e voe dezho mirout al leve diwar o douaroù e div barrez evit gallout bevañ betek o disparti. Daou vab o doa, Gwionvarc'h hag Herve. Gant Gwionvarc'h, an henañ, e voe lezet al leve diwar unnek parrez. An eil, Herve, a rankas mont da heul Jafrez.

Gwionvarc'h IV koulskoude a varvas d' as 27 a viz Gwengolo 1179, ha ne deas ket da Balestina. War-lerc'h e varv, e voe restaolet ar gontelezh d' an daou vreur, nemet kastellaniez Vontrolez. Evit terriñ nerzh eneberezh Bro-Leon, evelato, e troc'has Jafrez ar gontelezh e daou, o reiñ da Herve un dalc'h-yaouaer bras-ec'hon (*). Padal, daskoriñ da renerien Leon ar gwir da virout ar

gontelezh a ziskoueze ne oa ket Jafrez ken kriz, ne oa ket e bolitikerezh ken dibleg hag hini e dad, - hag ar Vrezhoned a zeuas da c'hoanagiñ e vije skañvaet un nebeud ar bec'h a zougent war o choug.

282

(*) Setu amañ penaos e voe rannet Bro-Leon :

1) Gant an dug Jafrez ez eas kastellaniezh Vontroulez, evel lavaret.

2) Da Wionvarc'h V e voe roet kastellaniezhoù Lokournan ha Lesneven.

3) Da Herve e voe roet Daou-Zour (etre Montroulez hag an Elorn), Landerne ha beskontelezh Kozmeal (distaget diouzh Lokournan). Ouzhpenn se e voe roet da Herve holl zalc'hioù-douar lignez Leon e Kernev : aotrouniezhoù Daoulaz, Kraozon, Porzhoez, ar Gemenez (er c'huzh-heol da Gemper), ha Plouie.

Herve a gemeras evel e vreur henañ Gwionvarc'h an titl a veskont Leon. Lignez Wionvarc'h a voe rivinet tamm-ha-tamm. Lignez Herve, er c'hontrol, a reas berzh, betek 1363. Neuze e timezas ar bennhêrez diwezhañ gant un den eus lignez Roc'han, a rastellas pep tra.

E Breizh hiziv...

War Hent Bulad

Anavezet Bulad-Pestivien ganin evel ul lec'h pirc'hirinaj kozh, n' em bije morse kredet e vijen-me aet war roud ar birc'hirined a wechall. Setu, koulskoude, pezh a c'hoarvezas ganin en hañv-mañ (1) ha setu penaos en em gavis, evelto, war hent Bulad.

Kemer a ris penn va hent abred d' at gwener 4 a viz Gwengolo evit en em gavout e Bulad da bemp eur noz, c'hoant deuet ganin, en un taol, da welet gant va daoulagad din va-unan, paotred ha merc'hed yaouank " Breuriez Sant Erwan ". Evit gwir, o anavezout a raen abaoe an derou rak lennet em boa gant estlamm hag ar brasañ dudi o c'helaouenn

" Mouezh Sant Erwan " adalek an niverenn gentañ anezhi. Gant estlamm, a lavaran, rak o c'houzout ervat pelec'h emañ ar GWAN e Breizh e kav din n' eus labour talvoudusoc'h ebet da ober, d' ar mare-mañ, en hor bro, eget stummañ TUD ha BRETONED war un dro. Al labour-se, d' am meno, arank bezañ sevenet dreist-holl e-touez ar yaouankiz hag, e Breizh-Izel, e brezhoneg, na petra 'ta. Tud ha Bretoned, da lavarout eo paotred ha merc'hed a-youl hag a-zoare ha Bretoned penn-kil-troad a spered. Ul labour diaes, ma 'z eus, nemet a daolo frouezh, sur a-walc'h, ma vez sevenet gant kalon ha dalc'husted. Setu perak e lennan pep gwech " Mouezh Sant Erwan " gant ar brasañ dudi peogwir eo krog, meur a vloaz zo, gant al labour-se.

*

(1) E 1970 e oa.

E Gwengamp em boe un disouezhenn. Me ' gave din em bije kavet eno ur c'harr-beajourien o vont da Gallag hag en dije va c'haset betek Bulad. Ne oa ket. Ret e voe din kemer an treñ a dremen war-bouez div lev diouti. Goulenn a ris, eta, ur bilhed evit ar « gar » tostañ da Vulad. Sellout a reas paotr ar bilhedoù ouzhin, souezhet. Bulad ? E pelec'h oa se ? Hag eñ ha goulenn ouzh unan eus e gamaladed ha, goude, ouzh unan all. Emberr e voe klevet ar porzh-houarn o tregerniñ gant mouezhioù rust o c'houlenn : « Eh, dis donc, tu sais où il faut descendre pour aller à Bulat, toi ? » Ker souezhus ha ma oa, den ne ouie. Unan am alias da vont da Gallag. Ne gave ket din e oa ret mont keit-all. Taolet em boa ur sellig prim - re brim, siouazh, rak ne oa ket skeudennet mat doareoù ar vro em spered - war ur gartenn a-raok mont en hent. « Roit din, » emezon, « ur bilhed evit ar gar kentañ a-raok Kallag. » Ha setu penaos e ris anaoudegezh gant " Les Mais ". Evel-se eo skrivet an anv war baperennoù an Hent-houarn. Goude, e teskis e vez graet " Lez-Mez " anezhañ gant tud ar vro. Leun e oa ar vichelinenn a dud o vutunat. Hini anezho ne gomze nemet daou zen, kozh a-walc'h. E galleg Breizh-Izel e komzent. Er galleg iskis-se a vez, dreist-holl, gant an dud war an oad ha na ro ket dezho alies un neuz re speredek en holl. Evidon-me ne lavaris ger da zen ebet. Adlenn ha peurgempenn a ris lizheroù edon o paouez skrivañ. Sellout a raen, gwech ha gwech all, ankeniet, ouzh an amzer o teñvalaat. Daoust hag ez afe da dreiñ e glav ?

A-benn un eurvezhig vihan e chomas an treñ a-sav e-kreiz ar maezioù. Erru edomp e Lez-Mez. N' ouzon ket perak e tiskennis rak ne oa netra d' am dedennañ eno. « Gar » ebet, evel just. Un tammig loch simant divalav hepken war ribl an hent-houarn. Ti ebet e-kichen. Hent ebet, kennebeud-all. Netra nemet parkoù, geot ha glasvez. Ur wenodennig, koulskoude, a verke a-boan he roudenn e-mesk ar geot hir ha gleb. Chom a ris ur pennadig eno o sellet ouzh an treñ o steuziañ. « Ranket em bije mont da Gallag, » a soñjis, « kavet em bije eno ur wetur d' am

c'has da Vulad. » Keuz a-raok, pa na vez ket, keuz war-lerc'h ne dalv ket. Ret oa din bale. Dre belec'h, avat ? A-zehou ? A-gleiz ? N' oa skritell ebet d' am heñchañ ha ne oa kartenn ebet ganin kennebeud-all.

285

N' oufen ket lavaret mat perak ez is a-zehou. N' em boa ket graet kant kammed ma klevis trouz en ur park. Sellout a ris dreist ar c'hleuz. Edo ur gwaz e-kreiz e vrud, e foet gantañ a-istribilh ouzh e c'houzoug, a-zevri oc'h arat gant daou loen bagol. Gwelout a raed an douar, nevez troet gant ar soc'h, o lintrañ.

- « Ac'hanta ! » emezon. « Me 'zo o klask hent Bulad. »

An den a savas e benn, souezhet. Lakaat a reas e zaou loen da chom a-sav. Unan anezho, a oa gouenn ennañ, a reudas hag a skoas an douar gant e baviou a-raok. Bec'h en devoe an den ouzh e zerc'hel hag eñ o fringal bepred. « Hent Bulad ! » Diouzh e gomzou e komprenis e oan aet war an tu fall, e oa gwelloc'h din distreiñ war va c'hiz ha mont betek ur pont rak eno e oa, diouzh a lavare, « un hent muioc'h direkt ».

Mont a ris eta war va c'hiz betek ur c'harrhent a dremene dindan ur pont. En tu all dezhañ e oa un hent terdouaret aet lufrus gant ar glebor. N' ouien ket re vat dre belec'h mont. Skritell ebet. Ur vereuri a oa nepell hag e kleven, en ul lab, un den o palarat pri-raz. Skeiñ a ris war e du. Teñval e oa an diabarzh. Bountañ a ris va fenn e toull an nor. Ur gwaz, uhel ha treut, a zilezas e labour hag a zeuas betek ennon. Diskleriañ a reas din raktal ne anavezete ket brezhoneg : « Le chemin de Bulat ; c'est facile. Tournez à gauche ». P' edon o vont kuit, ur vaouez yaouank a lakaas he fenn e toull uhelañ an nor a oa serret an traoñ anezhi. Kavout a ris dereat displegañ dezhi perak e oan deuet en he mereuri hag e kendalc'his gant ur ger bennak diwar-benn an amzer. « Ya, 'vat, druz eo an amzer ! » ha druz ivez, m' hel lavar deoc'h, porzh ar vereuri, ennañ fank ha dour-hañvouez mesk-ha-mesk.

286

Kemer a ris adarre penn va hent, da vat ar wech-mañ, war-du Bulad, evel ar birc'hirined gwechall. Ne oa ganin nemet ur sac'hadig bihan a daolis dreist d' am skoaz. Bray, kompez ha naet e oa an hent. Bale a raen tost d' ar c'hleuz. Seder e oan evel pemp gwenneg rak ne oa gwetur ebet o tremen ha ne gavis hini ebet etre Lez-Mez ha Bulad. Div vaouez a oa o tivizout e toull ur park. « Brumenn 'zo, » a lavaris en ur dremen e-biou. « Ya, 'vat, brumenn 'zo ! » a respontjont a-unvouezh. Derc'hel a ris da vale. A-benn un hanter- eurvezh e chomis a-sav, souezhet : « Pegen sioul eo ! » a soñjis. Ne glevet trouz ebet ha me va-unan ne raen ket an disterañ trouz gant va botoù demm. Pa oan aet da Gintin, ur sizhun bennak a-raok, ha pa oan aet da vale tro-dro d' ar gêrig koant-se, em boa dija merzet pegen didrouz e vez hor maezioù, en Argoad, zoken e-kreiz an hañv. Dleet eo se, moarvat, d' an diboblañ ha d' an doareoù nevez da labourat an douar. An dornerezed, a fraoñve kel laouen, gwechall, e-pad an hañv, n' eus mui anezho bremañ. Ouzhpenn-se, en Argoad, n' eus mui, koulz lavaret, nemet peurvanoù. Ne welen nemet brousgwez a bep tu d' an hent ha gwech ha gwech all, dre an toulloù-karr peurvanoù, tro-dro dezho kleuzioù gwezennek. Al lusenn, aet war-stankaat, a lakae an dour da ziverañ eus an deil. Pep tra a oa glas, fresk ha glan, un dudi ! Tremen a ris e-biou d' ur pradig tric'hognek ken bihan m' ho pije a-boan gallet sevel un ti dister ennañ. Anat e oa ne oa ket bet adlodennet ar vro. Pegen disheñvel ar c'hornad-mañ, a soñjis ; diouzh va hini m' eo bet, pellik zo dija, adstummep tra : parkoù, mereurioù, porzhioù, hentoù, staolioù, ha diskaret, evel just, kement kleuz a oa ennañ ha Doue 'oar ma oa anezho ! Amañ pep tra a zo chomet heñvel, pe dost, ouzh ar maezioù, evel m' edont a-raok ar brezel. Ha mat pe fall eo ? Evidon, ne gaven ket kement-se diblijus, evurus ma oan oc'h adkavout maezioù Breizh evel m' em boa o anavezete p' edon krennard o vont d' ar skol ha pa gasen peurvuiañ va yaouezhioù ha va sulvezhioù, goude merenn, o redek dre ar parkoù tro-dro da Voñforz, e Breizh-Uhel.

War-sav goustad ez ae an hent bremañ hag eñ bet toullet e torr ur

grec'hienn. Tevoc'hik e teue da vezañ al lusenn. Klevout a ris en draonienn ur falc'h o troc'hañ a-daolioù ingal geot ha raden. Sellout a ris dreist d' ar c'hleuz hag e welis ar falc'her dambleget war e venveg hag eñ o vont war-du an traoñ a-gammedoù bras gorrek en ur lezel war e lerc'h un hent treset-mat a-dreuz d' ar radenneg. Soñjal a ris en Euzkadi ken glas-all, m' em boa gwelet eno ken lies gwech arvestoù heñvel. Lennet em boa, a-hend-all, nevez 'zo, ur pennad-skrid ma komzed ennañ eus un doare nevez da sevel koleoù hag eus « ar geot, pinvidigezh ar Vretoned ». Ma ! er vro-mañ ne veze ket ken anat-se din ar binvidigezh-se.

287

Pelloc'h, e oa pikolioù reier e-mesk ar geot hag ar wech-mañ eo skeudenn Gonamara a darzhas em spered. Ur C'honamara strujusoc'h ha pinvidikoc'h un tamm, avat, eget an hini gwirion a zo, e lec'hioù 'zo, paour-razh ha trist-kenañ, dreist-holl dindan ar glav. E pleg an hent e tifoupas en un taol eus al lusenn un tammig kêriadenn : div pe deir doenn c'hlas a oa eno oc'h en em ziskouez a-zioc'h ar brousgwez, en o raok e oa ur c'hleuz uhel marellet-holl a vleunioù. Anat e oa e oant bet plantet eno gant an dud. Ken souezhet e voen gant an arvest-se ma chomis a-sav, amzer da sellout outañ, da deurel va mantell-c'hlav war va diskoaz ha da dennañ va benveg-luc'hskeudenniñ eus va sac'h. War ur peul e oa skrivet Sainte Anne. Ma voen kerseet un tammig gant an anv gallek-se, ret din lavaret e oan bet dudiet a-raok o lenn, war vord an hent, kement a skritelloù brezhonek o verkañ e pelec'h edo ar mereurioù. Evel-se, e oan en em gavet tro-ha-tro, a-feur ma aen gant an hent, gant : « Gwarem-Bocher », « Kerdujal », « Cosquer », « Guerientec », « Rest-ar-Varec'h », « Parc-an-Ty » hag e ranken kavout pelloc'h : « Kernas », « Kernazunet », « Kenec'h-laouen », « Pors-an-Lunet », « Pen-an-Nec'h »... Evit ar mare, avat, edon e « Santez-Anna-Radeneg » ha neuze ne voen ket re souezhet o welet war an tu all d' an hent, ur chapel gozh hag ur groaz-vein en ur c'hloz geotek. Tro ar chapel a ris er geot gleb hag e kemeris div skeudenn anezhi daoust d' al lusenn. Un toulladig bugale a zeuas er-maez eus un ti hag a dostaas ouzh ar vogerig da welout an estrañjour. Mont a ris dezho e brezhoneg. Respont ebet ne dennis diganto.

Ha yao en hent adarre ! Edo an dour o tiverañ diouzh va zal. Dour-lusenn ha c'hwez kemmesket, moarvat. Trouz ur marc'h-tan a dostaas hag a davas trumm em c'hichen. Ur paotr yaouank, tokarnet, gleb e zremm hag e lunedoù, a saludas ac'hanon e brezhoneg. Yann-Erwan, eus Kintin, an hini e oa, ar paotr end-eeun en doa lakaet va luc'hvannerezh war he rez e " Kamp ar Vrezhonegerien ", goude ma oa bet losket al lamp enni div wech heul-ouzh-heul. Lavarout a reas din n' edon mui pell eus Bulad. Derc'hel a reas gant e hent ha trouz e varc'h-tan a vihanaas tamm-ha-tamm. Un ti-mein dilezet a oa war ribl an hent. Hanter-zigor e oa an nor ha skritelloù, bet peget warni, a venne mont gant an avel. Lenn a ris GALV war unan anezho. War-ziskenn ez ae an hent bremañ hag er penn anezhañ e oa tiez ha gwez uhel. Bulad an hini e oa. Ur vagadig merc'hedigoù a zeue en arbenn din. Edon o vont da dremen en o c'hichen hep ehanañ pa verzis, don er c'hleuz ha damguzhet gant ar glasvez, un tamm moger vein benet, logigoù enni heul-ouzh-heul. « Petra eo se ? a c'houlennis ouzh ar plac'hedigoù. Ger ebet. O daoulagadoù a selle ouzhin hag e kredis lenn enno un dra bennak evel : « Petra eo an istrogell-mañ ? » Ret e voe din mont e galleg dezho. « Feunteun ar Seizh Sant » an hini e oa (1). Kontañ a ris al logigoù : unan, daou... seizh a oa. Roud ebet eus ar Sent. Daoust hag e vije ret dezho ermaeziañ evel an dud ?

288

Pelloc'hik e kavis un feunteun sakr all (2). Houmañ, miret gwelloc'h, en em ziskoueze en he fezh e foñs un toull bras geotek. Demdost dezhi, war an tu all d' an hent, e oa ur chapelig vihan koant a-walc'h hag, en adreñv dezhi, un ti mein benet, dezhañ un estaj ha kambroù dindan an doenn, doare ur maner kozh warnañ. A-hed ur c'harrhont, e oa ur regennad gwez-pupli o sarac'hiñ goustad, hag o tamguzhat iliz Vulad. Ken uhel e save he zour ma oa kollet ar beg anezhañ el lusenn. Nag ur gwel kaer ! Erru en ur c'hroaz-hent, e trois a-gleiz da vont e-barzh ar vourc'h. War un treuzfurmer tredan e oa skrivet " FLB, la Bretagne aux Bretons ". Degouezhout a ris war ur blasenn ec'hon. Ken tev e oa ar vrummenn ma oa diaes din damwelout an tu all anezhi. Dre toull dor un davarn e welis un daol hir, warni un doubier, asiedoù ha gwerennoù, servietennoù gwenn liespleget

enno hag int heñvel ouzh kemend-all a avelerioù. Bez' e oa un toullad tud e-kichen an nor hag int oc'h en em vountañ evit mont e-barzh. Ne ouien ket, adarre, dre be du mont. A-drugarez Doue, e oa ur vaouez o tont war-du ennon. « Ar Skol Gristen, mar plij. Pelec'h emañ ? » - « Ar Skol Gristen, » emezi, « kit war ho kiz !... » hag e tiskouezas din an hent em boa baleet warnañ a-raok. Kompren a ris edo er maner kozh edon o paouez tremen e-biou dezhañ. Ne zaleis ket da zont e-barzh ur porzh divalav evel an holl borzhioù-skol ha d' en em gavout eno gant un toulladig bihan a baotred hag a verc'hed yaouank. Erru e oan.

(1) Savet e voe e 1893.

(2) Feunteun ar c'hilhog o tegas da goun dinac'hidigezh Sant-Per. Un feunteun all a zo er vered, " Feunteun ar Werc'hez ", lesanvet Feunteun ar Magerezed. Savet e voe e 1718.

289

Ur pennadig goude ez is en-dro d' ar vourc'h. Lizhiri ganin da lakaat er voest. Pelec'h edo, avat ? Goulenn a ris e brezhoneg ouzh ur paotrig hag ur plac'hig a oa o tremen. Aes e oa gwelout pezh a glasken. « Là-bas ! Là-bas ! » eme ar paotrig, dezhañ un doare divergont a-walc'h. Ne c'hellis tennañ netra ebet ken dioutañ. Heuliañ a ris ar roud merket gantañ ken en em gavis dirak ar vered. Edo an iliz en he c'hreiz. He brud a oa deuet betek ennon pell 'zo. Bez' e ris div wech an dro anezhi. Kaeroc'h e oa eget na greden gant he forched, he sakristiri peg outi, he c'hloc'hdi uhel, hag he c'hizelladurioù. Krog e oa da noziñ. Kement tra a oa evel beuzet el lusenn. Ar man a rae tachoù damwenn niverus war ar vein louet. An dour a zivere eus an holl zelwenoù. Edo dremmoù pennoù-marv ar sakristiri oc'h ober neuizioù iskis. Bamet e oan dirak kement a gaerderioù a gaven fromus-meurbet en abardaevezh brumennek-se pa welis an Aotrou Person o tont er-maez, tamm-ha-tamm eus an douar. Lavaret ho pije Lazar o tont er-maez eus e vez. Emañ iliz Vulad war un dosenn gant ar presbital, stok outi e-harz he zreid koulz lavarout. Mont a raer eus ul lec'h d' egile gant un diri mein enk a-walc'h o tifoupañ er vered hag eñ enklozet etre div voger vein...

E Bulad edon eta. Ur Vulad lusennek, avat, ma oa pep tra enni dispis ha boemus. Wat ar blasenn, skeudoù-tud a zeue war-wel en un taol hag a steuzie ker buan-all. Lavaret ho pije ur vro-hud. Ne oa ket, avat. Ne oa anezhi nemet ur vourc'hig, bet brudet gwechall evit he ferc'hirinaj ha deuet ken dister ma ne anaveze ket paotred an hent-houarn e pelec'h edo, daoust d' hec'h iliz kaer ha d' he feunteunioù-sakr niverus ; ur vourc'hig a oa anat warni c'hoazh liv an amzer-dremenet hag e lavarfen zoken eus ar grenn-amzer ; ur vourc'hig, erfin, m' edo o paouez erruout enni un dousennad paotred ha merc'hed yaouank evit studiañ a-gevret gant pevar beleg hag ur c'hloareg, unan eus kudennoù brasañ ha diaesañ hon amzer ha kement-se dre ar brezhoneg nemetken.

Nag ur menoz iskis mont da Vulad evit displegañ e brezhoneg petra eo ar Varkselezh !

Ur miz a-raok, edon en ur gêr ken krenn-amzerel ha Bulad, e-touez tud all oc'h en em c'houlenn hag-eñ e c'heller bezañ Breizhad e 1970. Ma vijent deuet da Vulad d'ar 4, 5 ha 6 a viz Gwengolo, marteze o dije kavet eno ar respont d' o goulenn.

NOTENNOÙ

Kañv

Klevet hon eus e oa aet da anaon daou zifenner ar brezhoneg : Ar chaloni Jakez THOMAS, bet person Plonevez-Porze, mirour pirc'hirinajoù Santez Anna ar Palud, d' an oad a 88 vloaz.

Jozef KADOUDAL, kenwerzhour e Boulvriag ha den oberiant en Emsav, d' an oad a 82 vloaz.

D' o c'herent ha d' o mignoned e kinnigomp hor gourc'hemenoù a gengañv.

Profoù

Degouezhet eo ganeomp ar profoù-mañ e-korf an pevar miz diwezhañ:

MIZ MAE : G. Quere, 20 lur ; L. Bothorel, 25 ; P. Penneç, 115 ; Y. Libouban, 5 ; E. Salaün, 30 ; R. Moride, 29,60 ; M. E. Coïc, 9.
- War un dro : 233,60 lur.

MIZ MEZHEVEN : J.-M. Bouessel du Bourg, 20 lur ; A. Gachet, 5 ; J. Gueguen, 25 ; R. Radenne, 45 ; Y. Bonvallet, 5 ; Y. L'Heveder, 5 ; D. Guichard, 25 ; J. Le Guern, 5 ; T. Pabu, 10 ; H. Le Bitoux, 10 ; A. Cornic, 15 ; Y. Goas, 25 ; A. Guilcher, 50.
- War un dro 245 lur.

MIZ GOUERE : Y. Daniel, 25 lur ; A. Le Berre, 5 ; A. Guillon, 70 ; A. Daniel, 50 ; V. de Bellaing, 50 ; L. Bihannic, 70.
- War un dro : 270 lur.

MIZ EOST : Y. V. Bouessel du Bourg, 30 lur ; G. Clocher, 10 ; Y. Guiomard, 10 ; A. Le Fur, 5 ; Y. Bizien, 5 ; J. Tricoire, 5.
- War un dro : 65 lur.

2.547,77 lur profoù hon degemeret abaoe derou ar bloaz. Bennozh Doue d' an holl.

640 Koumananter

E miz Gouere he doa ar gelaouenn 640 koumananter, lodennet evel-hen : Aodoù an Hanternoz, 91 ; Penn ar Bed, 138 ; Il ha Gwinum, 74 ; Lijer Atlantek, 33 ; Mor Bihan, 39 ; Rannvro Bariz, 132 ; Departamantoù all, 68 ; Afrika an Hanternoz, 1 ; Afrika Du, 1 ; Iwerzhon, 11 ; Kembre, 13 ; Bro-Skos, 1 ; Bro-Saoz, 5 ; Bro-Sveden, 1 ; Alamagn, 10 ; Helvetia, 2 ; Izelvroioù, 6 ; Belgia, 2 ; Stadoù-Unanet, 3 ; Kanada, 6 ; Haiti, 1 ; Kaledonia-Nevez 1 ; Australia, 1.

E miz Here 1970 hor boa 617 koumananter. Kresket eo dreist-holl niver hol lennerien e Rannvro Bariz. Spi hon eus da gaout 700 koumananter dizale.

Kamp Etrekeltiek ar Vrezhonegerien

Dalc'het eo bet ar c'hamp-se, ar 24-vet, e Krehen etre an 18 hag an 31 a viz Gouere.

War-dro 100 den o deus darempredet ar c'hamp, al lodenn vrasañ anezho etre 20 ha 30 vloaz.

Evel boaz ez eus bet kentelioù ha prezegennoù niverus. Krehen o vezañ un nebeut levioù hepken diouzh ar mor ez ae an holl war aod Penn Gwenn, en endervezh, da neuial ha da c'hoari. Gweladennet eo bet ivez Beg Frehel, Sant-Malo, Kastel ar Guyomarais ha bez Ar Rouerie.

D' an 29 a viz Gouere ez eus bet dalc'het un arnodenn eus an Trec'h Kentañ. Setu amañ an disoc'hoù anezhañ.

War 10 arnodennad, ar 6 mañ a zo bet degemeret :

- Bernez KADORET, meneg mat-tre ha meuleudi ar varnerien.
- Yolen BEAUGRAND, meneg mat-tre.
- Deneza MAGUER, meneg mat.
- Mari-Tereza D'HAESE.
- Annaig Ar Gov.
- Katell KALVEZ.

Barnet e oa bet an amprouennoù diouzh ar reoliadur-diazez nevez. Hor gourc'hemenoù gwellañ d' an drec'hourien.

" Herve ha Nora "

Emañ eil levr ° HERVE HA NORA " o paouez dont er-maez, embannet gant ar gelaouenn Skol. An Ao. Kalvez hag a zo bet e-pad meur a vloavezh rener Skol Sant-Erwan e Ploueg-ar-Mor, en deus implijet an doareoù nevesañ da gelenn. An daou levrig-mañ, skeudennet, a zo ar re wellañ a c'hello bezañ implijet evit kelenn ar yezh d' ar vugale a grogo da zeskiñ er 6vet hag er 5vet klas.

Pep levrig a goust 6,00 lur. Un trede hag ur pevare a zeuio er-maez e 1972. Revue Skol. Crec'h Avel, Lannion - c.c.p. 1911 06 Rennes.

" Hent Nevez d' ar Brezhoneg "

Ul levr kelenn all zo bet embannet gant Hor Yezh (niv. 69-70). Hemañ n' eo ket graet evit bugale-skol, met, evel ma lavar an oberour F. Kervella, « evit tud graet o c'hresk ganto ha barrek da vont buan a-walc'h war-raok ». E pep kentel e kaver frazennoù ha da heul meur a bajenn yezhadur hag ur roll gerioù gant o distagadur hag o ster e galleg. Marteze e vefe bet mat lavarout er rakskrid penaos e rank ar c'helenner implij ar c'hentelioù-se.

El levrenn gentañ ez eus 10 kentel an eil levrenn a yelo eus ar gentel 11 d' ar gentel 20.

Priz : 11,00 lur. P. DENIS, Le Ris, Ploaré, 29/8 - Douarnenez - c.c.p. 1499 51 Rennes.

292

Barr-Heol

Unan eus ar plijusañ kelaouennoù embannet e Breizh, enni pennadoù liesseurt war

vuhez hor Bro hag ar bed-holl. Skrivet en ur yezh yac'h, tost da yezh ar bobl, ha bev-kenañ. Moulet dre offset gant luc'hskeudennoù enni. Trimiziek ne deo ken evit bremañ, met ma kreskfe ar goumananterien e vefe aes-tre hec'h embann aliesoc'h.

Koumanantit da Varr-Heol !

20,00 lur ar bloaz da gas : REVUE BARR-HEOL : 22 - Lannion - c.c.p. 245 453
Rennes.

Gwerzh levrioù Al Liamm

JANED QUEILLE, hag a ra ken aketus war-dro gwerzh levrioù AL LIAMM, a gemenn d' hor mignoned ne vez gwerzhet al levrioù ganti nemet dre lizher. En abeg d' he micher ne c'hell ket ober war-dro ar re a zeu da c'houlenn levrioù en he zi.

Errata

Poent-bras eo din difaziañ va fennad **Faltazi Roparz Hemon** (Al Liamm 142). Klemm zo bet, gant gwir abeg, e oa diveizadus frazennoù zo er pennad-se, abalamour da vankoù chomet er skrid. Chomet, hen anzav a ran, dre va fazi nemetken - kaset ganin ur skrid skoet d' an daoulamm hep e reizhañ. Digarez a c'houlennan digant rener ha lennerien Al Liamm ha digant Roparz Hemon.

(An arouez " negezel " dirak niverenn al linenn a dalv : a a-raok an diwezh ».)
ARZEL EVEN.

p. 335 l.-4 *lenn* brizhfolklorel.

id. -2 *diverkañ* m'eo:

p. 337 n. (7) *stagañ* : Ha Meurlarjez, e-unan divaskl, a denn ar maskloù diwar dremmoù an dud.

p. 339 n. (9) l.-3 *virgulenn goude* korolliñ.

p. 340 l. 6 (diwezh) *lenn* gant ar bed.

p. 342 l. 1 (diwezh) *lenn* dre ur benveg pe ur strollad binvioù.

p. 343 n. (11) l. 2 *lenn* e dastumad.

293

Mirdi nevez Tel-Aviv

Saludet eo bet digoridigezh ar mirdi nevez, en Israel, evel un darvoud broadel. Ar gouelioù bras, bet lidet d' ar c'heñver-se, da ziskouez ar bouez roet gant ar Stad yaouank da oberoù ar spered, a zo seul heverkoc'h m'emañ he fobl dindan armoù ha taget a bep tu gant hec'h amezeien.

Displeget eo bet gant e rener, an Doktor HAIM GAMZU, penaos e veiz ur mirdi. « D' am meno, » emezañ, « e rank ur mirdi bezañ ul lec'h m' en em gav ennañ ha m' en em stok menozioù an amzer dremenet ha re an amzer da zont ha, kement-se, war an holl dachenoù ; ul lec'h eo m' en em gav an arzoù ha ma c'hell livourien, skulterien, sonourien, tud ar c'hoariva hag ar sinema ha, zoken, ar ouizieien displegañ o menozioù. »

Ur savadur bras eo ar mirdi nevez ; savet eo war un dachennad-douar, 12.000 m² ar gorread anezhi. Diginkl eo e ziavaez. N' eo troc'het an tolzennoù anezhañ, hag int oc'h en em astenn a-rez an dremmwel, nemet gant pevar zour sonn a gaver enno ar saverezed hag an ardivinkoù da freskaat an aer.

Eus ar sal-degemer (720 m² ar gorread anezhi) e c'heller mont, dre hentoù o tiskenn goustadik, da beder sal vras (780 m² gorread pep hini) ma tiskouezer

enno taolennoù ha traezoù priziüs. Div sal bihanoc'h a zo gouestlet d' an tresadennoù ha d' an engravadurioù. Kavout a reer ennañ c'hoazh ur sal sonerezh ha c'hoariva, 150 sez enni, unan all, 170 kador-vrec'h enni, gouestlet dreist-holl da luc'hvannañ bandennoù ha da glevout prezegennoù, ul levraoueg, a vo enni 40.000 levr, hag, erfin, un davarn ma c'hell 100 den kavout un azez enni da varvailhat dibreder kenetrezo en ur evañ ur banne.

An heverkañ er mirdi nevez, hervez lod, eo ar goulou o tont eus an diavaez a-dreuz meur a renkennad toulloù bet graet er solier. Evel-se ez a goulou-deiz skedus Israel da c'houlou plijus, flour d'an daoulagad.

Da c'hortoz ma vefe lakaet war-wel ennañ dastumadegoù ar mirdioù kozh e kaver er mirdi nevez seizh diskouezadeg gouestlet d' al livouriezh a-vremañ, da arz ar pallennoù-moger, da oberoù ramzel Jakez Lipchitz, un den eus Lituania, d' ar weledoniezh, ha... Evel just, taolennoù ha delwennoù arzourien Israel n' int ket bet ankounac'haet. 140 oberenn, savet ganto, a zo diskouezet. A-drugarez dezho e c'heller heuliañ displegadur an arz en Israel, n' eo ket disheñvel, a-hend-all, diouzh an arz etrevroadel, adalek Reuben Rubin betek E. Ronkin, ul liver donezonet anezhañ, a voe lazhet d' e 26 vloaz e-pad brezel ar c'hwec'h devezh.

Ur paotr yaouank kalonek

Feardocha Mac Aogain an hini eo a dreuzas Iwerzhon war droad eus an hanternoz betek ar c'hreisteiz. Souezhus ha ma 'z eo e tibabas mare Nedeleg hag ar C'halanna evit ober e veaj ha ne ziskouez ket bezañ bet diaezet kement-se gant an amzer fall.

294

Er c'hontrol, dont a ra gantañ ez ingal bommoù evel : " an aimsir go breá " (brav an amzer), " la breá geal a bhí ann " (un deiz brav brav e oa) h.a...

Kregiñ a reas Feardocha gant e veaj e Cioan Mhálanna, e penn hanternosañ Iwerzhon, d'an 20 a viz Kerzu 1970 hag ec'h ehanas da gerzhout d' an 2 a viz Genver 1971, ur wech tizhet gantañ aod ar mor, er c'hreisteiz, e Gara Ui Néid, e kontelezh Korkig. Tremen a reas dre Zoire (Derry e saozneg Iwerzhon), Liminac'h (Limerick) hag er gompezenn greiz, e heulias tost da vat hag a-bell ar stêr Shannon. Bale a rae war an hentoù, ha, diouzh an noz, e kave boued ha lojeriz en un davarn pe un ostaleri bennak.

An hent baleet gantañ a zo 370 miltir dezhañ pe 595 km. O vezañ tremenet 13 devezh ha 5 eurvezh evit mont eus ur penn d' egile e reas well-wazh 44 c'hilometr bemdez.

A zo muioc'h, Feardocha, ur gouezeleger anezhañ, en deus danevellet e veaj e tri fennad a zo bet embannet gant ar gelaouenn sizhuniek " Inniu " (niverennoù ar 26 C'hwevrer, 5 ha 12 Meurzh 1971) dindan an talbenn Mar shiuil mé ó barr go bun na hEireann (- Penaos em eus kerzhet eus barr Iwerzhon betek an traoñ). Un drugar eo lenn danevell eeun ar paotr kalonek-se !

Neuze, pegoulz e ray ur Breizhad yaouank kemend-all, ma n' eo ket gwelloc'h, da lavarout eo pegoulz e vo treizhet Breizh, war droad, n' eo ket eus ar barr betek an traoñ anezhi, met en hec'h hirañ, eus Ingrand betek Gwitalmeze, da skouer, ha goude, danevellet ar veaj kaer-se e brezhoneg flour, evel just ?

Hor Yezh

War niverenn 68 Yor Yezh e c'heller lenn pennadoù savet gant studierien Kevrenn ar C'heltieg e Skol-Veur Roazhon. Da gentañ ur strollad pennadoù diwar-benn

oberennoù Youenn Drezen " An Dour en-dro d' an Inizi " ha " Sizhun ar Breur Arturo ". Ar pennadoù all zo eñvorennoù bugaleaj.

HOR YEZH, Koumanant da beder niverenn : 20,00 lur. P. Denis. Ri. Ploaré.
Douarnenez. CCP 1499 51 Roazhon.

Ogam

War Ogam niverenn 121-126 e kaver, en tu-hont d' ar pennadoù boas e galleg war an Istor, an henistor, h.a., kendalc'h " Catholicon Ladadeuc " hervez embannadur Jehan Corre. Al lodenn-mañ a ya eus ar ger *Cornemus* betek *Honissaff* (eus ar bajenn 49 betek ar bajenn 112). Kavout a reer ivez war an niverenn-se notennoù etimologiezh galianek ha keltiek.

Skodenn 1970 : 50 lur. Skodenn 1971 : 60 lur.
C.C.P. 293 68 Rennes. Pierre Le Roux, 2, rue Léonard-de-Vinci, B. P. 574,
Rennes.

295

Embannadurioù ar P. U. B.

Un nebeut mizioù zo ar P. U. B. (Presses Universitaires de Bretagne, 10, rue Vicairie, St-Brieuc) a embanne ul levrig mat-tre, e galleg, diwar-benn an anvioù brezhonek da reiñ d' an tiez (3 lur) savet gant Garmennig Ihuellou-Le Menn. Un eil levrig gant ar memes oberourez zo o paouez dont er-maez o plediñ ar wech-mañ gant anvioù al loened (5 lur). Un trede levr gant Gwenole ar Menn a zo ur studiadenenn war an anvioù-badez. Ur soñj mat en deus bet Gwenole ar Menn o sevel ar studiadenenn-se leun a guzolioù fur (7 lur).

150vet kantved Embannadur Geriadur brezhonek-gallek Ar Gonideg

Ar C'hevredigezhioù Oaled Sant Erwan eus Brest ha Melezour Breizh (kreizenn studiadennoù ha skignerezh Istor ha Yezh Breizh) gant kenlabour ar gelaouenn " Appel d'Olole ", a lido memor Y. F. Ar Gonideg e Konk-Leon, d' an 9 ha d' an 10 a viz Here.

Ar c'hadoriad a vo Aotrou Maer Konk-Leon. Kannaded ar C'hevredigezhioù sevenadurel hag an Emsav a zo pedet d' en em unaniñ ganto evit enoriñ Reizher ar Brezhoneg.

D' an 9 a viz Here e vo un abadenn fiñvskeudennerezh breizhek, ha, d' ar sul 10, un oferenn-bred lidet e brezhoneg penn-da-benn ha war-lerc'h ur vodadeg e bered Lokrist en-dro da vez Tad ar Brezhoneg. Da 15 eur : kan, sonerezh, gourenadeg, kenstrivadegoù bugale.

Kemennadur diwar-benn an Okitaneg

An Okitaneg a zo degemeret, war-lerc'h reizhadurioù graet da lezenn Deixonne, en arnodenn ar vachelouriezh adalek 1971. En doare-se e teu da wir, tost da vat, c'hoant Mistral hag e ziskibien.

E-touez ar re-mañ, Prosper Estieu ha Joseph Salvat o deus krouet, e 1927, Skolaj Okitania evit kelennerezh yezh Oc dre lizher implijet bremañ e meur a skol

prevez ha lik.

700 skoliad zo bet enskrivet evit ar bloavezh 1969-70.

Sekretourva : 31, rue de la Fonderie, Toulouse.

296

Brezel Norzh-Iwerzhon

Skourr Breizh ar C'hevre Keltiek a zo o paouez kas ul lizher d' an Ao. Maudling Ministr Aferioù Diabarzh Breizh-Veur, war un dro gant ul lizher d' ar c'helaouennoù " Time ", " Daily Telegraph ", " Irish Time ", " Irish Independant " hag " Irish Press ".

Setu amañ an droidigezh eus al lizher kaset d' ar c'helaouennoù :

Aotrou ker,

Laouen e vefemp d' ho kwelout oc'h embann an adskrid-mañ eus al lizher hon eus kaset dec'h d' an Ao. R. Maudling Ministr Aferioù Diabarzh Breizh-Veur :

Nantes 27/8/11.

Aotrou,

Skrivañ a ran en anv Izili Breizh ar C'hevre Keltiek, o c'houzout ez eo sav-poent an darn vrasañ eus ar Vretoned a anavez o c'herentiezh gant an Iwerzhoniz hag ar pobloù kelt all. Fellout a ra din kemenn deoc'h pegen mantret ez int o welout en deus ar gouarnamant Saoz divizet toullbac'hañ 300 den en Norzh-Iwerzhon.

Untuegezh an disentez-se zo anat o vezañ n' eo bet harzet hini ebet eus izili ar C'hevredigezhioù Oranjist taerañ, ha kalz eus ar re a zo bet harzet n' o doa ket kemeret perzh ebet e stourmoù feuls a-enep da renerezh ar Stormont. Ar Vretoned zo ivez trubuilhet-bras gant krizder an arme saoz ha dreist-holl polis an arme e-keñver ar brizonidi.

En anv ar Vretoned e karfen pouezañ warnoc'h evit ma vefe dieubet diouzhtu an dud bac'het hag evit ma vefe graet un enklask neptu gant ar Broadoù Unanet war ar c'hrizderioù meneget.

Ar goulenn-se zo diazezet war ar gredenn hon eus e c'houlenn stad an traoù e Norzh-Iwerzhon un disoc'h politikel ha n' eo ket un diskoulm dre an nerzh.

Ma ne zieubit ket ar brizonidi ha ma talc'hit gant gwaskerezh an arme e vo kement-se ur brouenn emac'h c'hoazh ha da vat a-enep da Iwerzhon dieub hag e nac'hit pep diskoulm politikel.

Ma n' eo ket aesaet an diskoulm gant kudenn ar relijion ez eo sklaer evidomp koulskoude n' o deus ar re a zo a-du gant ar Rouantelezh Saoz doujañs ebet evit gwirioù ar Vroad Iwerzhonat nag evit an Norzh-Iwerzhoniz Republikan a zalc'hont en ur stad a baourentez reuzeudik. Un nebeut gwirioù hervez lezenn ne vint ket a-walc'h evit adreiñ dezho ur stad dereat da vat.

Marteze an adunvanidigezh ne ziskoulmo ket en un taol an holl gudennoù, hogen an hent reizh nemetañ ez eo.

Bezit assur ne roomp skoazell da Iwerzhoniz nemet dre ma 'z omp kerent kelt ha n' omp ket levezonet gant menozioù relijiel.

A galon,

Jakez Derouet
Sekretour Skourr Breizh ar C'hevre Keltiek.
1, rue Géo-André, 44 - Nantes.

297

Ret eo deomp anzav, daoust ma komprenomp glac'har ar Vreizhveuriz o deus kollet pe ur mab pe ur pried e Norzh-Iwerzhon, ec'h ouzomp ez eus soudarded Breizhveuriat ha n' int ket « tud santel ». Lod anezho o deus boureviet prizonidi, ha zoken tud n' o deus kemeret perzh ebet er stourm feuls, evel izili Emsav peoc'hus Gwirioù an Den. Ar re-mañ ez eus anezho lodenn vrasañ ar brizonidi.

Evidomp arme Breizh-Veur a zo er memes stad hag an arme gall e Aljeria e mareoù diwezhañ ar brezel e Norzh-Afrika o klask derc'hel bev an urzh trevadennel ; karout a rafen gwelout soudarded Iwerzhonat o kuitaat an arme breizhveuriat (Saoz a vefe gwelloc'h) hag hor breudeur kelt all (Skosiz, Kembreiz, Manaviz, Kerneiz) o nac'h servij e Norzh-Iwerzhon.

Ma vez ret kaout ur galloud evit lakaat ar peoc'h, n' eus nemet hini ar Broadoù Unanet a zerefe bremañ.

A galon ganeoc'h,

JAKEZ DEROUET.

Kasit arc'hant evit Stourm Iwerzhoniz da : J. Derouet, CCP 3264-47 Nantes.

Levr-bloaz ar C'hevre Keltiek " zo deuet er-maez hag e gwerzh emañ er memes chomlec'h. Skodenn + koumanant da Celtic News ha Levr-Bloaz : 15 lur d' an nebeutañ. Ar priz a zo heñvel evit al Levr-bloaz hepken pe al Levr-bloaz + Celtic News hep bezañ ezel.

AL LIAMM 148

TAOLENN

Barzhaz Breizh :	
An Ifern	303
Ar Baradoz	305
Un dornad douar gant VALÈRE DEPAUW (tr. E. AR BARZHIG)	309
Nevez-amzer war Menez Arre gant TUGDUAL KALVEZ	341
E ser oberenn Lan Inizan : Emgann Kergidu gant ERWAN OLIER	342
An Dugiezh gant lignez Penteür (tr. R. HEMON)	351
E Breizh hiziv gant L. ANDOUARD	357
Al levrioù gant L. ANDOUARD	367
Notennoù	370

AN IFERN

Diskennomp holl, kristenien, en ifern da welet
 Gloazoù-kastiz estlammus an eneoù daonet,
 A zo dre lezenn Doue dalc'het e-barzh an tan,
 O vezañ graet gwallzispign eus e c'hras er bed-mañ.

An ifern zo un toull don leun a deñvalijenn,
 E-lec'h na weler morse ur bann a sklerijenn.
 An dorioù zo bet serret ha prenet gant Doue,
 Ha n' o digoro biken. Kollet eo an alc'houe !

Ur forn c'horet er bed-mañ ne deo nemet moged
 E-keñver tan an ifern, tan eneoù daonet.
 Gwell e ve devañ enni ac'han da fin ar bed
 Eget bezañ en ifern e-pad un eur gwanet.

Yudal a reont a-bouez-penn evel chas kounnaret.
 Ne ouzont pelec'h tec'hout, pep lec'h ez int losket.
 An tan zo war o gorre, an tan zo dindano,
 An tan zo a bep kostez, hag atav o devo.

Ar mab a lamm gant e dad, hag ar verc'h gant he mamm,
 D' o stlejañ, gant mil mallozh, dre o blev, 'kreiz ar flamm,
 - Mallozh deoc'h, mamm dirollet, hag hoc'h eus hor ganet !
 Mallozh deoc'h, tad didalvez, kiriek oc'h omp daonet ! -

O magadurezh a vo da viken gant Satan,
 Stronk ha strouilh an dragoned, e-mesk ar gwazhioù tan.
 Hag o evaj o daeroù, hag a vezo mesket
 Gant mil ha mil seurt viltañs ha gwad an touseged.

Ha kignet vo o c'hroc'hen, hag o c'hig difreuzhet
 Gant flemm an naered-wiber ha gant dent an diaouled,
 Hag en tan e vo ruilhet o c'hig hag o eskern,
 Evit ma tevo kreñvoc'h forn divent an ifern.

304

Goude ma vezint losket ur boutadig en tan,
 E vint taolet en ul lenn leun a skorn gant Satan,
 Hag eus al lenn 'barzh an tan adarre vint taolet,
 Hag eus an tan 'barzh an dour, 'vel houarn goveliet.

Neuze ' teuint da ouelañ, da ouelañ gant enkrez :
 - Ho pet ouzhimp, va Doue, ho pet ouzhimp truez ! -
 Met en aner e ouelint, rak, tra bado Doue,
 E pado o ankenioù, hag o enkrez ive.

Ken taer e vezo an tan o losko en ifern
 Ma teuy ar mel da virviñ penn-da-benn d' o eskern.
 Seul vui ' c'houlennint truez, seul vui e vint gwanet.
 Kaer o devezo yudal, losket e vint bepred.

An tan-se a zo c'hwezhet dre vuanegzh Doue,
 Ha n'hellfe ket e lazhañ, zoken pa hen karfe.
 Biken ne daolo moged, ha biken ne zevo.
 Hep ehanañ d' o leskiñ, biken n' o distrujo.

AR BARADOZ

Jezuz ! pegen bras vo
 Plijadur an eneo,
 Pa 'z aint dirak Doue
 Hag en e garante !

Berr ' kavan an amzer
 Hag ar poanioù dister,
 O soñjal deiz ha noz
 E gloar ar baradoz.

Pa sellan en neñvo
 Hag etreze va bro,
 Nijal di a garfen
 Evel ur goulmig wenn.

Pa vo pred ar maro,
 Neuze, me 'gimiado
 Diouzh ar c'hig ankenius,
 Enebour da Jezuz.

Gant joa e c'hortozan
 An termen diwezhañ. H
 ast am eus da welet
 Jezuz, va gwir bried.

Kerkent ha ma vezo
 Torret va chadenno,
 Me a savo en aer
 Evel un alc'houeder.

Tremen a rin al loar
 Evit monet d' ar c'hloar,
 Dreist an heol, ar stered,
 Me a vezo douget.

Pa vin pell diouzh an douar,
 Traonienn leun a c'hlac'har,
 Neuze e rin ur sell
 Ouzh va bro Breizh-lzel.

306

Neuze, me 'lavaro :
 - Kenavo dit, va bro,
 Kenavo, bed doanius,
 Gant da vec'hioù poanius.

Kenavo, paourentez,
 Kenavo, gwanerezh,
 Kenavo, trubuilhoù,
 Kenavo, pec'hedoù !

Pelloc'h ne soñjin ket
 'N ardoù an droukspered,
 Rak biken n' em c'hollo
 Goude pred ar maro.

Evel ur vag kollet,
 Va c'horf 'n deus va c'haset

Amañ, dre an avel,
Ar glav hag ar riell.

Maro, te an treizher
A zigor din ar gêr,
Pa vruzun gant an herr
Va lestr ouzh ar reier.

A bep tu pa sellin,
Kement tra a welin
A ray d' am daoulagad
Ha d' am c'halon mil vad.

Perzhier ar baradoz,
Digor ouzh va gortoz,
Ar sent, ar santezed,
Tost d' am degemeret.

Me vo degemeret
E palez an Dreinded,
E-kreiz an enorioù
Hag ar meuleudioù.

307
Hag eno, evit mat,
'Welin Doue an Tad
Gant e Vab binniget
Hag ar Spered meulet.

Me a welo Jezuz,
En ur c'hiz dudius,
O lakaat war va fenn
Ar gaerañ kurunenn.

- Ho korfoù evurus,
- A lavaro Jezuz,
- Oa teñzorioù kuzhet
En douar binniget.

Evel gwrizioù roz gwenn,
Pe lili pe spern-gwenn,
E kornig ul liorz, h,
Emaoc'h e-kreiz va forzh.

C'hwi zo em baradoz
Evel bokedoù roz,
A zivleugn d' ar mare,
Hag a vleugn adarre. -

Evit poanioù dister,
Evit ankenioù berr,
Ni vezo paeet-mat
Gant Doue, hor gwir dad.

Kaer e vezo gwelet
Ar Werc'hez vinniget
Gant daouzek steredenn
A ra he c'hurunenn.

Gwelout a raimp ouzhpenn,
Ganto pep a delenn,
Aelez hag arc'haele,
Holl o veuliñ Doue.

308

Gwelout a raimp-ni c'hoazh,
Leun a c'hloar, leun a c'hras,
Hon tadoù, hor mammo,
Hor breudeur, tud hor bro.

Gwerc'hezed a bep oad,
Santezed a bep stad,
Gwragez, intañvezed,
Gant Doue kurunet.

An holl aeledigoù,
War o eskelligoù,
Ken mignon, ken rubenn,
A nijo dreist hor penn,

A nijo dizehan,
Evel un hed-gwenan
En ur parkad bleunio,
Son ha c'hwez-vat ganto.

Eürusted hep he far
An Neñvoù, me ho kar !
C'hwi a ro din dizoan
E poanioù ar bed-mañ !

(troidigezh gant Ernest AR BARZHIG)

Un dornad douar

Genel a reas hor bugel e-pad an nozvezh etre ar 6 hag ar 7 a viz Genver, hon noz Nedeleg-ni, ha pa gemeras Andreï anezhañ etre e zaouarn, e welis, evit ar wech kentañ, e zremm o sklaeraat gant ur minc'hoarzh ha ne reas, tra souezhus, nemet koshaat anezhañ war an taol. Soublet a-us din, e tistagas va anv a vouezh izel. Neuze Anna Skiumanis a bellaas an andorenn hag ec'h adwelis ar seizh lamp a daole o skleurenn yen a-hed ar varakenn. Abaoe an neizheur, e oa an holl vugale o kousket er penn all hag hini anezho ne oa dihunet e-pad ar gwilioud. Ar wazed o doa ivez kousket a-hed an noz. Met ar maouezed a zeuas davedon hag unan anezhi a lavaras din :

« Bet out kalonek, Tania. »

Andreï a c'houlennas :

« Pe anv a roi d' hor mab, Tania ? »

« Andreï, » emezon. Hag e paras adarre e vousec'hoarzh ken skuizh ha ken kozh.

Neuze e vanis kousket.

Pa zihunis, e oa deut an deiz. Lazhet e oa bet ar seizh lamp ha flouaraat a reas sklerijenn c'hriz ar varakenn va daoulagad kizidik. Komz a rae Andreï, a vouezh izel, gant unan bennak troet gantañ e gein. Spurmantiñ a reas Andreï e oa digor va daoulagad ha sin a reas din gant e benn. Treiñ a reas ar gwaz a oa o kaozeal gantañ Ya " Mister " Emery e oa, unan eus renerien ar c'hamp. En alamaneg e komze ganin, ar yezh nemeti e oamp holl gouest da gompren, met lavarout a rae atav " Madame " ha " Monsieur ".

« Itron, ra zegaso deoc'h levenez ar bugelig-mañ, ganet e nozvezh Nedeleg. »

310

Yaouank, kreñv hag evurus e oa, met evel mezhek gant e yaouankiz, e yec'hed hag e eurvad, e-mesk an holl dud walleürus-se. Lakaat a reas ouzh troad ar gwele ur pakad a voe digoret raktal gant Andreï. Bez e oa ennañ lienaj, gloan melen, un toullad boestadoù laezh tevaet ha boestadoù "corned beef ".

« Klevit 'ta, Aotrou, deuit betek va burev warc'hoazh pe an deiz war-lerc'h, » a lavaras da Andreï, hag eñ kuit buan.

« Perak n' emaint ket holl evel Mister Emery ? » eme ar vaouez kozh Manierescu.

* * *

Azetet on e sal-ar-gouelioù hor c'hastell, dirak ur prenestr ledan, o sellout, dre un troc'h e linennad vodennek ar brousgwez o bleunioù ruz, amheuliadeg diarsav ar gweturioù-dre-dan a dremen dillo war an hent-meur.

Ar sul eo, ur sul vintin, met evidomp-ni, an deiz-se a zo heñvel ouzh ar re all. Er beure-mañ, oferenn ebet, an Aotrou Chaloni-meur Jord a oa amañ disul diwezhañ. Ar gontez Glovacka a zo krog da c'hoari gant he c'hartoù. Emañ Heiko Tiru o pediñ. Ar Jeneral Arkinov hag an " hetman " Tarkin ne gomprenont ket

c'hoazh penaos e voe tapet gant ar Re Ruz, e nozvezh an 28 pe an 29 a viz Here 1920, diazezoù ar Re Wenn e Perekop hag e-kichen ar Sivach ha burutellañ a reont ar faziou graet gant Wrangel. Bohumil Kotska, sorennet, a zeu gantañ a vouezh izel, gerioù diveizus. Rodzianko a dorr e benn war ar brezhoneg, evel m' en deus graet a-raok war an iwerzhoneg hag an euskareg. Pep hini e sal-ar-gouelioù a ra un dra bennak.

Klevet e vez momedadur ponner hag hep distro an orolaj e-pign ouzh ar voger. Dre soñj, en em adwelan e kamp Kufstein.

« Perak ne dint ket holl evel Mister Emery ? » eme ar vaouez kozh Maniedescu.

* * *

Dont a reas gant Andreï ha me pa gasjomp hor bugelig d' ar vered a oa bet digoret tost a-walc'h ouzh ar c'hamp hag a gouske enni endeo meur a hini ac'hanomp. An 22 a viz Genver e oa se.

311

Ma oa lous ar wenodenn, dirazomp e lugerne kannded trellus menezioù uhel an Alpoù bavariat. Andreï en doa sammet an archedig dindan e gazel ha me a zouge ar groaz koad. En ur zistreiñ d' ar c'hamp, ne ouie ket Mister Emery petra lavarout dimp. Gout ' ouiemp ez aje kuit dizale evit mat, edo o vont da zimeziñ gant an eilerez velgiat anavezet gantañ e Kufstein. Hag e seblante bezañ mezhek gant kement a eurvad.

Mont a reas diganimp d' an 31 a viz Genver, un toullad sizhunvezhioù a-raok ma soñje dezhañ. Diouzh ar beure, en doa kimiadet digant tud ar barakennoù, met Andreï ha me a yeas gantañ betek an hent-meur. Addiskenn a reas diouzh e " jeep " evit lavarout ur ger bennak dimp c'hoazh. Chomet e oa e zanzev-pried er wetur hag e vousec'hoarzh ouzhimp, ur mousc'hoarzh ken evurus !... Mister Emery a ouie a-walc'h ar pezh a dalveze evidomp ha pegen dilezet en em santfemp pa vefe aet kuit, met ur wech ouzhpenn, ne gavas ket ar pezh a oa da lavarout.

Pokañ a rejomp dezhañ. Gant tizh e krapas er " jeep ". « N' ankouain ket ac'hanoc'h ! » a huchas dimp. Ha n' en deus ket ankounac'haet ac'hanomp.

* * *

Dimezet e oamp bet, Andreï ha me, d' an 12 a viz C'hwevrer 1948 e Kufstein.

A-hed an abardaezioù goañv hir ha tristidik, hor boa diskuliet an eil d' egile hon amzer dremenet. Komzet em boa dezhañ eus va bugaleaj ken evurus hag eñ a gontas din e vuhez start ha poanius. Hogen, daoust ma 'z anavezemp kazi pep tra an eil diwar-benn egile, e chomemp kevrinus a-walc'h an eil evit egile hag a-wechoù e teue din aon hep gouzout perak. Tostaet e oamp bet an eil ouzh egile gant ar reuzidigezh, an dienez pemdeziek hol lakae war ar memes troad, met en desped dimp, e santemp un " no man's land " etrezomp na grede nag an eil nag egile e dreuziñ.

Andreï a oa ganet e Kosakowzy, war ribl al lenn b-Peipous.

Derc'hel a raen soñj eus mareoù ar bloaz en hon domani, e kreisteiz Iekaterinoslav, tostik ouzh froudoù herrus an Dnieper. Ec'honder divent ar c'hompezennoù rusian en em astenne etre pepini eus hor rannvroioù. Met gwashoc'h a oa. Va Rusia-me oa oa disheñvel diouzh hini Andreï. Va Rusia a oa echuet e Sebastopol, e miz Here 1920, pa guitaas ul lestr-ospital ar porzh, e-keit ha m' edo va zad ha va breudeur o kouezhañ war dachenn Sivach - an drec'hidigezh ha ne oa ket ar jeneral Arkinov nag an " hetman " Tarkin evit kompren. Va Rusia-me, Andreï en doa gwelet anezhi war he zalaroù hep keuz, hag a galon vat en doa degemeret ar Rusia nevez, ar Rusia n' he doa ket kavet hent va c'halon.

Ha koulskoude e karen anezhañ. An den-se, triwec'h vloaz dezhañ warnon, louet e vlev ha krommet e gein, e oan en em dommet outañ hag addeut e oan d' ar mare-se evel ur plac'h yaouank, daoust din da vezañ tost ouzh va daou-ugent vloaz ! Ma karen anezhañ, ne oa ket dre ma kemeren truez outañ, sot e oan gantañ endeo a-raok bezañ klevet peseurt gwall-reuz a oa kouezhet warnañ.

Un darvoud e oa hag en doa poan Mister Emery o krediñ ennañ ; ret eo lavarout avat ne oa ket troet da grediñ war an taol ar pezh a veze kontet dezhañ. E-pad ur " progom " e Vitebsk, e miz Here 1941, Andreï, e wreg, o div verc'h hag o mab a oa bet kemeret evel Juzevien ha dalc'het, evel kalz a wir Juzevien, gant ar gomunourien. Bep ma teue an Alamaned war-raok, e veze kaset pelloc'h-pell ar brizonidi war-du ar reter, hag a-benn ar fin, ar re anezhe a oa chomet bev en em gavas en ur c'hamp tost da Galinin. Aze e voe dispartiet ar wazed diouzh ar gwiragez hag ar vugale. E-pad ma oant c'hoazh er memes kamp, Andreï en doa klasket adwelout e familh, kouezhet e oa ur gward warnañ, taget e oa bet gantañ ha kaset goude d' ur c'hamp-kastiz e-lec'h ma oa chomet c'hwec'h miz. Pa zistroas, e voe degemennet dezhañ o doa e wreg hag e vugale kavet o marv, evel kalz a brizonidi all, pa oad o kas anezhe d' ur c'hamp nevez en tu all d' ar Volga. Diwezhatoc'h e kavas Andreï, Doue oar penaos, nerzh-kalon a-walc'h evit sachañ gantañ e skasoù. Ne gompren ket eñ e-unan penaos e oa deut a-benn. Hag eñ kuit eta etrezek ar c'huzh-heol, betek al lodenn eus ar vro bet aloubet. Ne voe ket tregaset ha kavout a reas labour. Met an Alamaned a voe trec'het ha ret mat dezhe mont tamm-ha-tamm war o c'hiz. Andreï a adkemerias d' o heul hent ar C'hornog. Erruout a reas war-dro al lenn b-Peipous, met siwazh, ne oa ket evit chom en e vro c'henidik. Treuziñ a reas Estonia, Letonia, Lituania, Prus-ar-Reter hag e talc'has da vont gant an Alamaned faezhet, a oa koulskoude e enebourien. Ha setu aze penaos e tegouezhas a-benn ar fin e kamp Kufstein...

« N' em eus mann ebet da ginnig dit Tania, emezañ, ha, moarvat, n' em bo biken netra... »

Dre ar prenestr bihan gris, e welemp douaroù goloet a erc'h, hag er pellder trolinenn skañv ar menezioù, met ar vro-se gant he gwiskad gwenn a chome evidomp ur vro estren, evel ma oa pep tra e Kufstein. Met gellout a raemp bremañ en em harpañ an eil ouzh egile, hag evit ar wech kentañ abaoe meur a vloavezh, e santen ur seurt peoc'h ha dienkrez pa souchen ouzh Andreï. Ha ni da zimeziñ hag hor bugel a zeuas war an douar. Hor bugel a varvas. Hag atav ivez ha bemdez-Doue, kamp Kufstein, hag atav ivez ha bemdez-Doue, ar soñj ne oamp nemet tud harluet a-douez ar re all, tud ha n' o doa ken o lec'h er bed, kristenien hep dazont hag hep spi. Hol lezel a raed da vevañ, hol lezel a raed da vervel

Er penn all d' ar damp du-hont, e kreske bepred ar vered, met bepred ivez ez errue paour-kaezh harluidi all o tont eus pevar c'horn ar bed evit kemer plas ar re aet da anaon. Kamp ar marv.

Miret em eus al lizher-se. Ne van ket kalz tra ganin a-hend-all ha gwall brizius eo evidon. Nozvezhioù zo a vez pounneraet gant kleñved ar vro, ur c'heuz didalvoud bennak, gant c'hwervoni hag imor displann, nozvezhioù a zegas soñj eus re Gufstein. Ne c'hellan ket neuze chom e sal-ar-gouelioù e-kichen Kostska, Rodzianko, ar gontez Glovacka hag ar re all ; klask a ran repu em c'hambrig, e bali ar pileroù pe ul lec'h didrouz all el liorz, hag e kemeran al lizher er sac'h bihan lien du a zougan evel ur relegenn war va bruched. Aze e vez atav, gant troidigezh ar c'helenner Kirov, en e wir c'holoenn hanter zispennet ez eo peget bepred an timbr warni. Un timbr o tont eus ur vroig eus ar C'hornog, ur vroig anvet Belgia.

* * *

D' an eil a viz Meurzh 1949, e resevas kamp Kufstein seizh lizher ha daou-ugent, o tont eus Belgia, evit kemend-all a zegemererien, hag en o zouez unan evit Andreï ha me. Ha ni da sellout gant souezh ouzh ar chomlec'h skrivet e giz

ar C'hornog ha diaes evidon da lenn : « D' an Aotrou ha d' an Itron Andreï Malinov-Prohorski, Barakenn 12, Kamp an Dud Divroet, Kufstein, Aostria ». Ul lizher skrivet e galleg e oa ha sinet : Jenny Delille. Re nebeut eus ar galleg desket ganin er skol am boa soñj anezhañ evit lenn mat al lizher-se hag ez ejomp da c'houlenn skoazell ar c'helenner Kirov a droas anezhañ dimp e rusianeg.

314

Setu ar pezh a skrive Jenny Delille :

« N' on nemet ur plac'hig yaouank c'hwezek vloaz, ur bennhêrez bet atav kolladenn he zud, ha pa sellan en-dro din em c'hambr, e welan druilhadoù traoù bet kinniget din hag e c'hellfen diouerout anezho. Ur pennadig zo hepken n' edon c'hoazh nemet ur bugel a zegemere a galon zigor pep douster degaset dezhañ gant ar vuhez hag a gave naturel bezañ moumounet. Met un toulladig eurvezhioù zo bet trawalc'h evit reiñ din da gompren pegen troet edon ganin va-unan.

Kouezhet eo an noz, edon em gwele endeo. Divizet em boa skrivañ deoc'h, warc'hoazh ar beure, ul lizher hir. Met ur wech lazhet ar goulou ganin, e verzis ac'hanoc'h, c'hwi ha n' anavezan ket, ya, ho kwelout a ris e gwirionez dirazon e dic'hoanag don ar c'hamp a zo bet taolennet dimp bremaik gant Mister Emery. N' edon ket evit kousket. Ret e oa din kaozeal ganeoc'h. Hag ez on trefuet ; soñjal a ra din e komzan ganeoc'h hag e selaouit ac'hanon. Fellout a ra din kinnig deoc'h, Tania garet hag Andreï ker, va holl vignoniezh a zo brasoc'h eget ne c'hellan lavarout. Goude ar brezegenn, p' o doe prometet an holl dud a oa eno skrivañ da unan eus harluidi Kufstein, Mister Emery a zo deut da gaozeal ganin va-unan, ha din-me hepken hag a oa e sell da skrivañ deoc'h, en deus kontet ho puhez. A ! nann, an Tad a oa ivez o selaou, an Tad a oar ivez krizder ho planedenn.

Petra a c'hell ober evidoc'h ur plac'hig yaouank c'hwezek vloaz ? O, n' on ket o komz eus ar c'hasadennoù dilhad, bitailh ha liperezhoù. Se avat zo aes d' ober, ken aes ! Adalek warc'hoazh e klaskin gouzout ar pezh a zo d' ober evit kas deoc'h ur bakadenn. Met se n' eo ket a-walc'h, se n' eo mann ! Petra a c'hellan ober evidoc'h ? En an' Doue, lavarit din ar pezh a c'hellan ober evidoc'h. Sikourit ac'hanon d' ober vad deoc'h. »

Paotred ha merc'hed yaouank, seizh ha daou-ugent anezhe, o doa skrivet da bep harluad pe da zaou bried, pephini en e stumm, met holl o c'hoantaat hor sikour, paour-kaezh tud diwriziennet a oa ac'hanomp. Lennet em eus troidigezh al lizhiri rak an holl re o doa bet unan a zisklerias amplik etreze an darvoud. Ur burzhud e oa en hor buhez hep levenez, hep bann sklerijenn ebet e krizder hon devezhioù teñval ha mantrus. Ken dizonet e oamp eus pep tra, ken ma tegasas dimp an testeni-se a garantez ur frealz dreist-lavar...

315

Ha n' eo ket dre ma oa prometet dimp dilhad, pourvezioù, sigaretinier ha liperezhoù. Trawalc'h a veze roet dimp da zebriñ hag ar seurt naon-se ne oa ket hol lod. Met pell 'oa, hep gout dimp, hor boa naon eus un dra all, un dra dizoloet dimp a-greiz-holl, bremañ pa oa kavet ganimp : ar garantez, ha marteze muioc'h c'hoazh an anzav e oa un den gwirion eus pep hini ac'hanomp. An dud yaouank-se a skrive da dud heñvel ouzh re an douar a-bezh ; ne ginnigent ket dimp o c'harantez evel un aluzen, gant al lorc'h a ziskouez peurliesañ ar pinvidig e-keñver ar paour, ar vrasoni-se a anavezemp abaoe keid-all ! Par e oamp dezhe ha zoken o mistri. Gouzañvet hor boa, hag int a oa bet kontrol-rik o zonkadur, ur blanedenn c'harv e oa bet hon hini hag int a oa bet lakaet da vezañ eürus, gant kement a eurvad ken m' en em gavent evel mezhek dirazomp. O, Mister Emery, adkavout a raemp ac'hanoc'h er c'homzoù-se !...

Met un den all a soñjan ennañ a-greiz-holl, pe gentoc'h ur skeud tasmantus a felle dimp reiñ dezhañ un dremm : " An Tad "... En holl lizhiri e veze komzet diwar e benn ha sur e oamp en doa awenet ar genskriverez. Goulennet en doa digant Mister Emery dispakañ ur brezegenn war « an dud diwriziennet » d' ar re

yaouank a oa dindan e renerezh speredel. Ha bras-bras e tlee bezañ e levezon, rak holl izili ar C'helc'h a sentas raktal ouzh e c'halv hag a skrivas da baour-kaezh harluidi Kufstein en doa soñj Mister Emery eus o anvioù.

" An Tad " !... N' hellemp ket gouzout e vefe un deiz hor sikour, hor salver, hon Tad.

Er sizhun all, em eus adwelet anezhañ : etre div veaj, en deus graet dimp ur weladennig. Dimp-ni.

Anavezet eo bremañ e pevar c'horn ar bed, un den brudet eo e-touez an holl hag ar pennoù-bras eo un enor evite stardañ dezhañ e zorn. Hag un enor eo, e gwirionez. Met nag ar brud nag an enorioù n' o deus degaset fouge dezhañ, chomet eo ken izelek, par dezhañ e-unan, n' eus forzh petra a c'hoarvez, ha chom a ra en hon touez.

Ouzh e c'hortoz edomp holl, en-dro d' ar gloued evit e saludiñ p' edo o vont kuit. Kuzuliata a rae c'hoazh diwar-benn traoù zo gant rener an " home " hag e soutanenn wenn a daole sklerijenn en amc'houlou an trepas. Dont a reas neuze davedomp, kuitaet gantañ an deñvalijenn evit sked an deiz.

316

Evel-se e welis anezhañ evit ar wech kentañ e Kufstein. Damskleur an trepas hir. Ur skeud gwenn o tont davedomp. Hag a-greiz-holl setu eñ sklerijennet hag e verzis madelezh e zaoulagad.

* * *

E-pad ar bloavezhioù spontus-se e oamp deut holl da vezañ amgredik ha war-emziwall. Al lizhiri hag ar pakadennoù belgiat o devoa teneraet ac'hanomp un tammig, met hep hon digeriñ c'hoazh da vat. Ac'hanta adalek ar gejadenn-se ez eas eeun d' hor c'halonoù evel ma ne oa aet den c'hoazh. Tremen a reas en holl varakennoù en ur gomz gant kalz a dud, hep aezamant, rak e alamaneg a oa c'hoazh falloc'h eget hon hini. Nag evit se ! Nag e komprenemp anezhañ !

En ur dreuziñ an holl varakennoù e kavas brasoc'h reuzidigezh eget n' en doa soñjet.

Ne c'hell den tromplañ ac'hanomp, den ne c'hell kuzhat ouzhimp e from. Pa zegouezhe ur gweladenn er estren bennak er c'hamp evit ar wech kentañ, e sellemp pizh ouzh e zremm ha ne gollomp nag ur grenadenn eus e vuzelloù na lufr ul lagad gleb ; ha, bep tro e weljomp e souezh hag e from o kreskiñ, bewech an hevelep testen eus hor stad truezus. Eñ avat, ne glaskas ket sevel enep d' e from. Merzout a rae hon digalonegezh ha gouzañv a rae ganimp.

Pa 'z eas kuit, e tistagas ar memes gerioù hor boa klevet, Andreï ha me, o tont eus genou Mister Emery : « N' hoc'h ankouain ket ».

Ha n' en deus ket ankounac'haet ac'hanomp.

* * *

Ar seizh ha daou-ugent harluad a oa e miz Meurzh a zeuas da vezañ tremen pemp kant er goañvezh 49-50. Tremen pemp kant harluad eus Kufstein a resevas lizhiri ha pakadoù eus Belgia ha " maeronezed " ha " paeroned " a erruas niverusoc'h-niverusañ evit degas d' un harluad eus Kufstein o c'halon hag o c'harantez. Setu penaos e oa an afer-se, didro hag uhel, ha ken disheñvel diouzh ar pezh a veze graet ez-ofisiel evidomp. Ha kalz gwelloc'h e oa ivez. Tud o vevañ e daou aergelc'h disheñvel-rik a geje an eil gant egile, en em gompren hag en em gare. Burzhud ar vignoniezh hag ar garantez a veze adwelet alies.

317

Ne voe ket ar burzhud nemetañ.

Boris Karamaïev, mignon Andreï, en doa resevet digant e vreur, o chom er C'hanada, ul lizher da zegemenn dezhañ e oa labour evitañ du-hont. Met kaer e oa bet ober an dro da vurevioù ofisiel ar C'hanada, an Alamagn hag an UNRRA, ne oa deut netra evitañ goude tremen ur bloavezh. An Tad a eilskrivas un toullad anvioù hag un nebeut sizhunioù goude ez ae Boris kuit. Pa varvas ar vaouez kozh Manierescu ha ma vanas he merc'h-vihan hec'h-unan, hep na kar na par e Kufstein, e kasas an Tad anezhi gantañ da Velgia hag Iona a skrivas d' he mignoned eus ar c'hamp lizhiri hir da gemenn dezhe pegen evurus e oa o vezañ bet degemeret gant priedoù douget dezhi evel pa vefe bet o merc'h. Pephini e Kufstein a ouie taol kaer ar medisin yaouank poloniat Kowalski. P' edo o vont da skarzhañ d' ar Stadoù-Unanet, e voe nac'het outañ an aotre, dre ma oa klañv gant an droug-skevent. Ret dezhañ lezel e wreg da vont kuit hec'h-unan, met an Tad a verkas un toullad anvioù hag an doktor Kowalski a nijas kuit.

Neuze, diwar ludu Kufstein, e savas un tamm flamm, ar vantridigezh a baouezas da voustrañ ar c'hamp dindan e bouez ken ponner hag ar marv. A-douez ar vandennad skeudoù digalonekaet, e savas tud en em ziskoueze bezañ pepini anezhe un den, darn a-hed un devezh, darn all e-pad un nebeut eurvezhioù hepken, evit adkouezhañ goude e-touez ar re zianv ha digalonekaet, rak ken gwan e oamp c'hoazh. Hogen, bezañ barrek da sevel hor c'hein, na pa vefe nemet ur pennadig, a ziskoueze hor boa c'hoazh nerzh a-walc'h da zegemer an dieubidigezh. Ar gerent a selle ouzh o bugale gant un tammig mousc'hoarzh. Ar baotred hag ar merc'hed en em glaske gant un emzalc'h hag un abafter divoaz. Hag ar re gozh a verze etre ar barakenoù hag ar vered, etre o gwele hag an toull, un hent hiroc'h. Holl e save ennomp ar c'hoant direizh, ar c'hoant poanias d'un dra bennak a oa c'hoazh pell diouzhimp ha ne dizhfemp marteze biken, met... un dra bennak nevez e oa.

318

Va Zad, o va Zad ra viot benniget na pa vefe nemet evit ar boan deut diwar ar c'hoant-se.

* * *

Andreï a lavaras din :

« Un toullad mizioù zo, e oan aet ken heug ken e oan en em gustumet ouzh ar sorc'henn e oan kozh, ha gwan, ha na badfen ket pell.

- Ha bremañ ? » a c'houlennis.

Adsevel a reas ur gizennad-vlev diwar va zal.

« Marteze ez eo ur spi diot, Tania, emezañ, met ma kavfen c'hoazh tro, un deiz... »

Hag eñ en e sav. Poan a rae din gwelout pegen koshaet e oa abaoe marv hor bugel, pegen treut e oa e fri ha pegen don an arroudenn en-dro d' e c'henou. Met lavaret e vefe bet e oa va daoulagad melezhourioù a c'helle en em welout enne.

« Ar bloavezhioù-mañ ken start, emezañ, izel.

- Tremenet int, Andreï, emezon.

- Tremenet int, a adlavaras. Kement a draoù a zo tremenet. Met te a zo yaouank bepred, Tania.

- Sell, emezon, en ur addiskenn war va zal ar guchennad-vlev savet gantañ Sell pegen louet eo va c'hreouichenn. »

Hejañ a reas e benn.

« Ma tegouezhfe d' ar blev griz-se touellañ unan bennak, gant un taol-lagad en dielloù e vo gouvezet n' he deus Tania Prohorski, gwreg Malinov, nemet daou vloaz ha daou-ugent.

- N' ez ket da grediñ an holl vrizh-keleier, » emezon, rak gout ' ouien ar pezh e strafuilhe.

Kalz a gaozioù a veze klevet, d' ar mare, e Kufstein, keleier diaes da lonkañ a rede, met daoust dezhe bezañ diaes da grediñ e kredemp anezhe. Mennadoù amzer-da-zont an Tad a veze diskuliet dre ar munud gant hemañ pe henhont. Edo an Tad, hervez, oc'h intentiñ ar priedoù yaouank da rannvroioù al labouradegoù, Alamagn, Bro-C'hall ha Belgia da gregiñ gant ur vuhez nevez. Ar re gozh, edo o klask kas anezhe da diez-degemer.

« Ne domp nag an eil nag egile, eme Andreï. Dimezet out, Tania, gant unan a zo re gozh evit ma vefe adtaolet er vuhez, met nann kozh a-walc'h evit bezañ distaolet a-grenn... Ar re a zo eveldon ne vint mat nemet evit Kufstein... »

319

Minc'hoarzhin a rae evel pa vefe bet o farsal, met dija, e tremene e selloù a-us din, evel o klask un dra bennak er pellder. Ur pec'hed bras am eus graet neuze e-keñver Andreï, pegen diboell ha drouk e voen evitañ, kompren a ran bremañ pegement. Ar spi e vefe roet dezhañ c'hoazh al lusk da gregiñ gant ur vuhez all ha d' e lakaat da dalvezout, ne gaven ket me re fur, ha gant ur mousc'hoarzh a druez e sellan ouzh ar barrad nerzh-kalon-se. An Aotrou Doue en do pardonet din an displealded-se e-keñver va gwaz, met glac'haret on c'hoazh o soñjal e c'hellje Andreï bezañ merzet an druez-se. Ma lavarín deoc'h e oa kalz brasoc'h ha kalz kreñvoc'h egedon.

Me 'vat, ar pezh a oan engortoz dioutañ ne oa ket kalz tra, ne oan ket direzon. Kozh evel ma oamp, ne vefe ket roet tro dimp da stagañ gant ur vuhez nevez, kuitaat a rafemp Kufstein ha, ma feiz, ne oan ket chalet gant ar soñj e vefe ret din bevañ pelloc'h-pell diouzh Rusia. N' em boa ken nemet ar spi da gaout un tammig lojeiz, na pa vefe nemet ur gambr kloz-mat evidomp hon-daouik. Sioulder ha diskuizh. Ur wech ouzhpenn, edon gant va huñvre douellus, edon o faltaziañ penaos e vefe hor buhez, ha...

* * *

D' an eil a Vezheven 1950, e resevjomp c'hoazh ul lizher digant Jenny Delille, an hini diwezhañ.

Biskoazh n' he doa anzavet ouzhimp e oa ur plac'h yaouank gwan ha mac'hagnet, atav en he c'hador-vrec'h-ruilh pe war he gwele, abaoe m' he doa paket ar polio. Nann, kontañ a rae dimp he doa resevet kalz digant ar vuhez... He mamm he c'hase, en he c'hador-vrec'h-ruilh, betek al lec'h a felle dezhi mont, dreist-holl d' ar c'helc'hioù-studi savet gant an Tad.

Ar vad graet da briedoù Kufstein a oa bet he joa ziwezhañ. N' eo ket Jenny a zibune se dimp, met he mamm o kemenn gant glac'har edo he merc'h war he zalaroù, un toullad devezhioù hepken dezhi da vevañ. Met Jenny, hi hec'h-unan, en he barrad levenez diwezhañ, a skrivas edo Andreï ha me e-touez an dud chañsus, c'hwezek anezhe, da lavarout eo eizh koublad priedoù war an oad, a oa o vont da vezañ degaset da Velgia. Torret he doa e benn d' an Tad evit ma vefemp en o zouez daoust ma ne oa ket reizh-tre, rak me, da vihanañ, a oa re yaouank, hag en doa asantet.

320

Gouelañ a rejomp. Gant ur glac'har divent, abalamour m' edo o vont da vervel ar plac'h yaouank-se he doa ad-diskouezet dimp edomp tud wirion, he doa astennet dimp he dorn a-dreuz al latar a gavemp ken tev. Gouelañ a rejomp. Gant ul levenez didrec'hus, dre m' edomp o vont da guitaat Kufstein ha da gaout hon diwezhañ frealz.

Setu ma voemp ar re gentañ er c'hamp o c'houzout e kase an Tad e vennadoù war-raok, mennadoù a soñje pepini enne hep re a spi. Met derc'hel a rejomp kloz war hor beg rak ne oa nemet c'hwezek a gement a c'hallje mont kuit hag e oa

kement o c'hortoz. Ar c'helenner Kirov a droas al lizher, a davas ivez. Ne oa ket unan eus ar c'hwezek, daoust dezhañ da vezañ koshoc'h eget Andreï, met e-unan-penn e oa er vuhez.

Hogen un nebeut deizioù goude, e voe gouvezet ar c'heloù dre-holl, rak ul lizher ofisiel a oa erruet eus Belgia, hag anavezet e voe ivez anvioù ar re zibabet.

Andreï ha me a chome er varakenn ha stignet hor boa an andorenn evit gellout bezañ hon-unan en hor c'horn. Bet hor boa eus Belgia un daolenn-gañv, warni ul luc'hskeudenn. Un dremm strizh gant daoulagad kalz re vras ha n' ankouaimp biken.

Eus ar c'hwezek kentañ, pere a zo bepred ganimp ? En ti-degemer all : Dimitri ha Getta Tudoran, Maria Dievotchikov. Amañ, er c'hastell : ar jeneral Arkinov, Heiko hag Inriid Tiru, Ivan ha Ludmilla Charpakov, ha me. Re all a zo deut diwezhatoc'h eus Kufstein, met eus ar re gentañ ne van ken nemet nav. C'hwec'h a zo marv.

Ar c'hwec'hvet eo Andreï.

* * *

Dont a ra da soñj din eus an deiz m' hon eus kuitaet Kufstein ! Hon heuliañ a raent gant o daoulagad, a-hed ar wenodenn etre ar barakennoù, sioul ha difiñv, ha n' hellemp nag o saludiñ na krial dezhe kenavo. Hastañ a rejomp pignat er c'harr-boutin, mall a oa warnomp evel m' hor bije bet aon eus un dra bennak er momed diwezhañ o herzel ouzhimp da loc'han, mall ganimp ivez peliaat diouzh selloù ar re a ranke chom. Andreï ha me a oa azezet e penn diadrefñv ar c'harr, ha ni da sellout c'hoazh ur wech etrezek ar c'hamp, met ne veze spurmantet ken nemet e doenoù du. Pa voent aet diwar wel, e voe etrezomp ur sell trefuet. Diouzh ar mintin, e oamp aet evit ar wech diwezhañ d' ar vered, hag, en hor malizenn, e kasemp ganimp un dornad douar diwar an tammig bez.

321

An tren a oa ouzh hor gortoz e gar Kufstein hag hor c'has a reas a-dreuz an Alamagn, met prestik e voemp re skuizh ha re vorzet evit sellout ouzh ar maezioù hag ar c'hêrioù. Arsaviñ a raed meur a wech ; d' abardaez e voe degaset dimp ur pred tomm ; an noz a voe hir, evidon da vihanañ, rak ne voen ket evit menel kousket. Diouzh ar beure, pa chomas an tren a-sav, e voe roet dimp kafe ha bara gwenn skañv. Sorenniñ a rejomp betek ma voe degemennet dimp hor boa treuzet an harzoù etre an Alamagn ha Belgia hag edomp degouezhet en hor broad nevez. Ha setu ni erru ha, war leurenn an ti-hent-houarn, edo ouzh hor gortoz ha digor-bras e oa gantañ e zivrec'h evel pa vefe bet fellet gantañ hor briata holl a-gevret. Hag evel just, soñj mat am eus ivez eus ar momed ma tegouezhjomp er c'hentañ ti-degemer belgiat !

Ur straed war-zinaou, tud o c'hortoz ac'hanomp hag o vouc'hoarzhin, a-greiz kalon ; met derc'hel a raemp tost an eil d' egile, rak goude bezañ gouzañvet kement, eo diaes dilezel pep disfiz.

Ha setu ni a-sav dirak un ti heñvel ouzh ar re all, hag an Tad, astennet mat e vrec'h gantañ da bediñ ac'hanomp da vont e-barzh. Tremenet an treuzoù ha degouezhet er solieradur kentañ, e tigoras an Tad, dirak pep koublad priedoù, dor o c'hambr.

Hor c'hambr !

Ne oa ket bras. Ur prenestr hepken. Ar gwele, an daol, ar c'hadorioù-brec'h hag an armel a oa a orin disheñvel. Met un tric'horn heol a skede war ar paper-moger glas-gwer teñval, frond fresk liñselioù naet a leunie ar pezh, ha gant kalz a blijadur e santis strakadennoù ar rideozioù p' o stardis etre va bizied. « Setu c'hwi er gêr, » eme an Tad en ur vont kuit, sioul ha goustadik, kazi hep gouzout dimp. Andreï a adlavaras :

« Er gêr... »

* * *

322

Ar jeneral Arkinov a zo koshaet kalz abaoe ur pennad amzer. Kozh e oa endeo, met betek un nebeut mizioù zo, e kerzhe serzh ha sonn evel ur pipi. Bremañ eo krommet e gein hag ar valeadenn hir a rae bep beure war-lerc'h e lein, he deus berraet tamm-ha-tamm evit dont da vezañ hepken un dro d' al liorz. Krenañ a ra e zorn gant e dasad-kafe ha pa vez o tanañ e sigaretenn, met pa vez krog en ur c'hreion pe en ur bluenn, e teu c'hoazh da vezañ start, ha lavaret e vefe n' en deus kollet netra eus e ampartiz.

Dirak prenestr ar sal vihan troet war-du ar c'hornog e plij ar muiañ d' ar jeneral bezañ aezet evit labourat, ha bez ez eo hep mar unan eus al lec'hioù dedennusañ er c'hastell. Er-maez : dour difiñv ar stank dindan ar pikol halegenn hir ha stouet he barroù. En diabarzh : paper-mager rous sklerijennet gant heol an abardaez hag e vez gwelet neuze warnañ o skediñ hag oc'h advevañ ur pennadig tresadennoù alaouret damziverket. Abaoe Pask warlene, ez eus ouzh ar voger-se ur stern ennañ nav luc'hskeudenn, re an eizh harluad marvet amañ en ti-degemer, hag an navet hini eo Andreï :

« Hini Andreï ivez, » en doa divizet ar rener.

Evit an holl, ar prenestr-se eo ar gwellañ lec'h evit diskuizhañ ha soñjal, met pephini a ro e blas d' ar jeneral Arkinov, daoust ma n' en deus biskoazh gouelennet.

Pa ziskenn an diri gant e blanken-tresañ dindan e vrec'h, e chom ur pennadig da straniñ, o klakenniñ gant hemañ pe henhont, hag e-keit-se ne van den dirak ar prenestr hag e c'hell en em lakaat d' ober tresadennoù. Gwechall, e veze gwelet unan bennak o tont en en gichen pe oc'h azezañ a-drekañ evit sellout outañ o labourat, met ar jeneral Arkinov a yae kuit neuze. Bremañ e laosker anezhañ da linennañ e peoc'h ha komprenet en deus pephini n' eo ket graet ar reolenn-se evidon hag e c'hellan chom eurvezhioù-pad en e gichen keit ha m' emañ o labourat.

* * *

Anavezet en deus va zad. Ha setu ar pezh en deus kontet din. Un deiz, pa oan bihan, e oa bet pedet en hon domani, met an daolenn a ra din eus pezhioù an ti hag al liorz-veur ne glot ket gant ar pezh am eus-me soñj. N' houlfen ket lavarout eo faziet, gellout a ran me ivez en em dromplañ. Abalamour m' eo kalz koshoc'h egedon ha dre m' en deus anavezet ac'hanon ken yaouank, e lavar " bihan " din ordinal, pezh a gavan fentus a-walc'h, rak an hini vihan he deus tremenet pell 'zo he daou-ugent vloaz, met petra 'vern ?

323

« Deus, bihan, ez an da dresañ... Soñj 'ta, emezañ, - evit an n' on ket petvet gwech evel pa ne oufen ket c'hoazh, - n' hellan gouzañv den o sellout ouzhin o labourat, met ganit e kavan plijadur. »

Gout 'oar e plij din sellout outañ o tresañ ha n' eo ket hepken dre ranellerezh pe evit diverrañ an amzer. Kreskerezh gorrek an dresadenn, sevenidigezh ar pezh a ziskoueze al linennadur kentañ, se a vez, bep gwech, evidon, un didu gwirion ha, war ar memes tro, un darvoud a gemeran perzh ennañ, daoust ma n' eo ket gwall lies-stumm e awen. Bevonn ar c'hoadeier gant un isba ha, pelloc'h, un toullad chaseerien. Ec'honder ar steppennoù goloet a erc'h, un troika gant kezeg herrus a skrij dindan skourjez ar blenier. Ur c'hornad-bro teñval a-walc'h eus Krimea gant ur c'hastell-kreñv dismantret, dispaket mat war dremmwel ar menezioù er pellder.

Kalfichat a ra Heiko Tiru, e-barzh tammoù koad, kirvi-erc'h bihan-bihan ha skeudoù tasmantus. Lydia Kotskâ a ra labourioù bihan broderezh gant tresadurioù

iskis ha livioù flamm.

Pa ne studi ket, Rodziando a vez o sternañ taolennoù relijiel gant goulazh tanav kizellet. Belbia a ra ivez evel ar re all. An holl draoù-se o deus nebeut a dalvoudegezh ha pa vent prenet gant ar weladennerien, ez eo dre druez. Ar jeneral Arkinov ne glasko morse gwerzhañ e oberennoù, rak en em garget eo rener an " home " eus se, lorc'h a-walc'h ennañ dre ma c'hell kinnig labourioù un arzour gwirion. Pa vez bet gwerzhet unan eus e dresadennoù, ar jeneral Arkinov, gant brokusted, a laosk an arc'hant gant ar gevredigezh a zo anaoudek en e geñver evit ar bevez-se. Chomet eo un aotrou uhel, daoust dezhañ da vezañ ken paour ha ni.

Bet eo dalc'hmat hegarat evit Andreï, met hepken abalamour ma oa va gwaz. Biskoazh n' en deus lavaret din, met gout 'ouzon evelato e sell ouzh va dimeziñ evel unan amzere : ur plac'h eus va renk - eus an tiegezh Prohorski ! - ne gemer ket un den didra... Goude ar pezh a zo c'hoarvezet diwezhatoc'h, n' en deus biskoazh ken komzet diwar-benn Andreï, nag ar re all kennebeut, met a-berzh ar jeneral Arkinov e oa gwashoc'h ha gant ur ster all. Ha koulskoude n'ankounac'hain ket penaos eo deut e-kerz an devezhioù spontus-se d' am c'haout e-lec'h ma 'z aen da glask sioulder. Met gwech ebet n' en deus gwelet ac'hanon o ouelañ nag ar re all kennebeut.

324

* * *

Tomm-gor eo an amzer, en abardaevezh-mañ, met er sal vihan n' eo ket ken ponner hag el liorz, nag en o c'hambroù nag e sal-an-ebatoù, ha setu perak on souezhet eo goull. N' eus den dirak ar prenestr ha n' en deus ket ezhomm ar jeneral Arkinov da bonneraat e gammedoù er viñs.

« Deus, merc'hig, » emezañ, pa wel ac'hanon e toull an nor, hag e vouezh a zo gwan ha trist.

Hag ur wech ouzhpenn, ar steppenn gant hec'h erc'h hag an troïka, an droiad hep termen, un dro-wenn etrezek ul lec'h diziraezus. Atav an hevelep steppenn hag an hevelep troïka, atav un hevelep hirnezh hag atav ar soñj ez eo echu pep tra ha n' hon eus ken netra d' ober nemet mervel ; siwazh, ne gouskimp ket en douar chomet ken tost d' hor c'halonou. Er momedoù-se, e sav an amzer dremenet dirak va daoulagad. Daouarn ar jeneral Arkinov a gemm o neuz, dont a reont da vezañ treuzwelus, damsteuziañ a ra linennoù ha teñvalderioù an dresadenn hag en em ziskouez a reont war gannder morennnek ar paper. Taolennoù va bugaleaj, pa skarzhis evit ar wech kentañ gant un troïka, war ar maez goloet gant an erc'h, evit tizhout ribloù an Dnieper hag estlammiñ dirak ar froudoù skornet. Taolennoù va ergezhadenn varzhus a-dreuz Europa, gant he flijadurioù paour, ar mareoù berr m' edon c'hoazh Tania Prohorski, ha gant dienez ar c'hambroù teñval hag anken an amzer-da-zont. Taolennoù eus ar c'hampoù : Kufstein gant minc'hoarzh skuizh Andreï, va spi pa oan brazez, ha, pa varvas hor bugelig, an dispi didrec'hus. Taolennoù a esper peoc'hus en ti-degemer kentañ, a eurvad gwirion en eil, un eurvad berr a zlee e reiñ e lec'h d' an dizesper teñval hag un anken bepred war gresk. Hag erfin, taolenn ziwezhañ Andreï pa... «O!».

Leuskel a ran ur griadenn c'harv ha glac'harus rak troet em eus va sellou war-du ar stern hag ar voger rous hag e welan... e welan...

« Ya, bihan, » eme ar jeneral Arkinov, difiñv hag hep sevel e benn. Hag e talc'hañ da sellout ouzh ar stern hag al luc'hskeudennoù : nav a oa ha bremañ n' eus ken nemet eizh.

325

« Ya, bihan, a adlavar ar jeneral Arkinov, lamet o deus poltred Andreï. N' hellont ket kompren, bihan... Ha te, a zle kompren n' hellont ket kompren... »

A-greiz-holl, trec'het, en em daolan da zifronkal, n' on ket evit va

daeroù hep soñjal emañ ar jeneral Arkinov o vriata ac'hanon, hag e gomzoù a zeu din eus ken pell ne intentan ket anezhe.

Tennet o deus kuit poltred Andreï... N' hellont ket kompren...

* * *

Andreï ha me a oa e-touez ar re gentañ a zeuas eus Kufstein da Velgia hag a voe lakaet en ti-degemer kentañ hag ivez e-touez ar re a guitaas ar c'hentañ " home " evit ar c'hastell adalek ma voe goulllo. Gwelloc'h e vefe bet ganimp mirout hor c'hambrig edomp en em voazet outi hag a blije kement dimp ; m' hor bije goulennet groñs, e vefemp chomet enni. Met, peogwir e oa bet divizet cheñch lojeiz dimp, hor boa sentet.

E-pad ar brezel ha diouzhtu goude, e oa bet soudarded er c'hastell. Difoeltret e oa bet meur a dra, evel just, ha ne oa bet posubl nemet addressañ ar pep reañ. Ar c'hambrou bras, hag a oa bet lakaet enne un nebeut arrebeuri a c'hiz nevez reoù vihan, a seblante c'hoazh brasoc'h a se, muioc'h goulllo eget na oant e gwirionez, met prestik ne voe ken taolet pled ouzh se. Dre m' edomp ar priedoù yaouankañ e oamp bet lakaet en eil solieradur en ur gambr bet lojeiz ur vatezh, ha buan-tre en em gavjomp er gêr evel e kambr hor c'hentañ ti-degemer. Amañ e chomfemp bremañ moarvat, hag ar pezh n' hor boa ket graet en " home " all, ar pezh n' hor boa ket kredet ober, ni d' hen seveniñ neuze. El liorzheur, er penn-pellañ en ur andred diaes tostaat outañ, hag el lec'h ne dae morse den, e lakajomp dornad douar Kufstein hag en em santout a rejomp neuze muioc'h er gêr, amañ er c'hastell.

Buan e teuas c'hoant da Andreï ober un dra bennak ; ne oa ket ur paotr da ren ur vuhez didalvoud. Un deiz, ez eas da welout rener an ti-degemer hag hemañ a roas aotre dezhañ da labourat liorzheal-legumajoù dilezet pell 'oa.

326

Evel diazezet e oa neuze hor buhez. Ne oa ket bet lavaret da Andreï pet eurvezh poñial en e zevezh, ober a rae ar pezh a blije dezhañ, met drezañ e-unan e tibabas ur reolenn strizh. Bep beure, e savemp abred, hag a-raok lein a zebre an holl a-gevret, Andreï en deveze graet dija un eurvezh hanter labour. En em gustumiñ a ris da vont d' e gerc'hat ur pennadig a-raok eizh eur hanter da liorzheal-legumajoù hag e tistroemp hon-daouik d' ar c'hastell. Andreï a walc'he e zaouarn, a lakae e chupenn en-dro dezhañ ha pa zeue tre er sal-debriñ, e veze, e gwirionez, kaer da welout. Erruout a rae e toull an nor, hir ha moan, c'hwezhet mat e skevent, e zaoulagad damserret, evel pa vefe bet c'hoazh dindan an heol. Neuze ec'h azeze ouzh taol e-mesk ar re all morgousket c'hoazh ha, war e bouez, met kuit a abafter, e tape ar bara.

Gout ' ouien, gwelout a raen, pegen eürus e oa abaoe m' helle adarre rentañ servij. Goude e lein, ez ae d' ar gegin da c'houlenn peseurt legumaj e oa ezhomm en deiz-se. Ur momed gloriüs eus an deiz e oa hennezh.

Distreiñ a raen d' e gerc'hat da greisteiz, ha goude d'abardaez, ha bep gwech e veze gantañ un draig bennak evidon. Goude koan, ez aemp war hor pouez, en ur c'hedal hag-eñ edomp hon-unan, betek kornig pellet al liorzheur.

An Tad a erruas hag a yeas betek tachenn al legumaj, evel pa vefe bet al liorzheg-se dedennus-tre. Reiñ a reas meuleudi da Andreï ha trugarekaat a reas anezhañ. Ar sulvezh war-lerc'h, lavaret an oferenn gantañ er chapel, an Aotrou Chaloni-meur Jord a fellas dezhañ ivez gwelout an dachenn-zouar hag a reas ivez e c'hourc'hemennoù da Andreï.

« Dont a ri da vezañ rener an " home ", emezon da Andreï p' en em gavis va-unan gantañ.

- Ne vin ket, emezañ, met mestr-pourvezer marteze a-walc'h. »

Hag a-nevez e c'helljomp c'hoarzhin a greiz-kalon ha disoursi, evel ma

c'hoarzher pa n'ouzer ket ar rann-galon da zont.

Daou viz, tri miz a dremenas. Pa zeuas Andreï da vezañ teñval e benn, pa lezas da gouezhañ e dachenn-zouar hag ez ae kuit eurvezhioù-pad hep lavaret na rak na perak, den ne gomprenas e emzalc'h. Ha pephini en em c'houlenne penaos e c'hell un den cheñch penn d' ar vazh ken prim all.

Ac'hanta, se ne oa ket c'hoarvezet en un taol. Met den nemedon ne ouie abeg ar cheñchamant-se.

Me a gomprens...

* * *

327

Lizher Boris Karamajev a zegouezhas ganimp goude un droiad dre Gufstein, rak Boris ne c'helle ket gouzout hor boa kuitaet ar c'hamp.

Bez' e oa ul lizher laouen, betek re marteze, rak ne oa ket natur Boris bezañ o tridal evel-se. Andreï a voe evurus an tamm anezhañ o welout e vignon oc'h en em blijout kement er C'hanada. Ha ni da respont diouzhtu, kontant ivez da gas dezhañ keloù mat.

Alies ha diehan e skrivjomp an eil d'egile. Boris dreist-holl, a oa ur c'henskriver feal hag echuiñ a rae pep lizher en ur bediñ ac'hanomp da respont war an tomm. Pezh a raemp. Hag evel ma tiskrive eñ kerkent, e tegouezhe bep sizhun ul lizher evidomp eus Toronto.

Ha koulskoude, pell 'oa em boa drouk-santet e kuzhe Boris un dra bennak ouzhimp er joausted-se, pezh ne lavaris ket da Andreï, rak n' en defe ket evelkent kredet ac'hanon. Met er meuleudioù war e labour, ar c'helc'hiadur ma veve ennañ, ar frankiz ha kalz traoù all, e santen ur glac'har iskis ha fuilh. Petra ' oa ? Petra va Doue e c'helle bezañ ? « Marteze, a soñjen etre ma sant ha me gant tenerausted, en deus graet Boris anaoudegezh gant ur plac'h eus Toronto, karout a ra anezhi, met eñ ne blij ket dezhi »... Foei ! se ne oa nemet romantelezh ! Pa brederien gant aked, e soñjen e oa diot un tammig va c'havadenn.

Ha koulskoude e oa un ibilh bennak a-dreuz.

Biskoazh n' em befe kredet e oa se. Ar frankiz hag aezamantoù ar vuhez ne oant ket eta a-walc'h evit eurvad un harluad, ne oant ket a-walc'h evit stagañ anezhañ ouzh ar vro hag ar bobl a roe dezhañ ar frankiz hag an aezamantoù-se !... Holl e oant ken mat ha ken brokus evitañ, eme Voris, ken en doa mezh o chom hep trugarekaat anezhe gant ar prof nemetañ a c'helle kinnig dezhe : ar garantez hag ar fiziañs. Rak, gouez dezhañ, chom a raent estrenien evitañ, hag e soñjoù hag e vennadoù a oa bepred evit ar re par dezhañ, e vreudeur hag e c'hoarezed eus Kufstein, dreist-holl ar re o doa eveltañ kollet o Rusia hag hec'h adkave gwech ha gwech all e-pad ur pennadig, pa gomzont en o yezh.

E Toronto, ne oa den evit kaozeal gantañ.

N' em eus ket ankounac'haet reustl Andreï goude bezañ lennet kement-se. Eñ n' en doa drouksantet netra, kredet en doa e eürusted e vignon, marteze zoken e oa bet gwasket e galon o soñjal ne vefe biken kinniget dezhañ an eurvad tañvaet gant Boris. Hag a-greiz-holl e voe ret dezhañ prederiañ war an dra diveizus-se : un den, e vignon, a nac'he degemer an taol-chañs roet dezhañ da adkrouiñ e blanedenn.

328

« Marteze e kemmo temz-spered Boris, » emezañ.

Met cheñchamant ebet e temz-spered Boris, ar c'hontrol rik. Al lizhiri all resevet digantañ a oa leun a huñvreoù melkonius pe a varrioù-karantez, met bep gwech e welemp e zic'halloud d' en em voazañ du-hont, hag en em c'houlenn a

raemp gant anken petra a zeufe da vezañ en amzer-da-zont.

Rak e gomzoù a ziskoueze ivez ur boan all, ur boan a c'houzañvemp ni hon-unan : kleñved ar vro. Boris a zegase ar gaoz war e gêriadennig c'henidik, nepell diouzh Kosakowzy, e-tal al lenn b-Peïpous, en ur vravaat ar vuhez a oa bet e hini eno. Menegiñ a rae mareoù ar bloaz gant o c'hened divoutin hag o flijadurioù dibar, mareoù ar bloaz a roe eno, da vihanañ, liv d' ar vuhez, ur ster hag un dremmwel ledanoc'h. Komz a rae eus annezidi ar vroig, pesketaerien ha labourerien-douar o doa, abaoe, hep mar, adsavet ar gêriadenn evel ma oa kent.

En em deurel a rae da huñvreoù ha d' un esperañs ha n'hellent ket chom huñvreoù hag esperañs, un nac'hidigezh eus ar gwirvoud. Evit Boris, evel evidomp holl, bro hor c'hendadoù a oa kollet da viken.

Gant lizhiri hir, hon eus klasket Andreï ha me prouiñ da Voris e oa e eürusted etre e zaouarn, da bemp bloaz ha daou-ugent e c'helle c'hoazh, eus a c'helle, reiñ ul lusk nevez d' e vuhez. Komz a rejomp dezhañ eus an eurvad deut dimp a-benn ar fin, amañ, en ti-degemer, daoust d' ar pezh a oa bet ret dimp nac'h, e-keit ha m' edo eñ...

Met netra d' ober evit e genteliañ.

An taol-se adarre, em eus drouksantet, meur a sizhun 'raok Andreï, pelec'h e vefe kaset Boris gant e demz-spered. E-pad ma klasken c'hoazh sankañ em spered ne vefe ket tra re c'hrevus, hag e vefe poellek Boris, e oan sur eus ar c'hontrol. Ha koulskoude e tapis ivez un taol horzh war ma fenn pa skrivas Boris...

O tistreiñ edo da Rusia ! N' helle ket chom pelloc'h e Toronto ha n' en defe kennebeut gellet menel pelloc'h e kornog Europa, nag e Kufstein, nag en ur c'hamp pe un ti-degemer all. Ret e oa dezhañ distreiñ d' e gêriadenn, d' e vroig, e-tal lenn b-Peïpous, al lec'h nemetañ e oa gouest da vevañ ennañ.

329

O, gouzout a rae ar pezh a soñjfe darn ! Hogen, ne oa ket un treitour sevenet gantañ e gefridi hag o tistreiñ bremañ davet e vistri evit rentañ kont dezhe. Ha ne oa ket kennebeut ur sod o kerzhout d' ar marv goude bezañ mouchet e zaoulagad. Ar pezh a c'helled rebech dezhañ, goude holl, a oa gwall skañv. Lavaret groñs e oa bet dezhañ er c'hannati e c'helle distreiñ e peoc'h d' e gêriadenn c'henidik evit labourat evel n' eus forzh piv : ar vro he doa ezhomm eus hec'h holl nerzhioù. Skarzhañ a rae kuit eta. Dav e oa dezhañ, se 'zo sklaer, gortoz un nebeut mizioù, rak ur bern paperioù en doa da zuañ, met den n' en defe ar galloud da lakaat anezhañ da gilañ. Ret mat e oa dezhañ mont du-hont.

Hon holl gomzoù, hon arguzennoù, hor pedennoù, hor galv d' ar skiant-poell, pep tra a voe didalvoud : netra, e gwirionez, n' helle cheñch penn d' ar vazh...

Graet gantañ e gefridioù, pa voe Boris war-nes nijal kuit, e skrivjomp dezhañ ul lizher diwezhañ. N' hellemp nemet hetin dezhañ chañs vat ha prometiñ dezhañ n' e ankounac'hfemp biken. « Marteze e kavi e Kosakowzy tud am eus anavezet gwechall, eme Andreï, gra dezhe va gourc'hemennou... »

* * *

Nav eur hanter eo hag evel bep beure emañ paotr-al-lizhiri o tifoupañ e bali ar c'hastell. Pep tra a zegas koun din eus an amzer dremenet. Ur mintinvezh evel hiziv, un obl glas-sklaer ha digoumoul, barroù hir an halegenn-vor o hejañ goustadik en avel skañv, hag en diabarzh trouzioù un aergelc'h na zihuner morse ennañ a-grenn. Edon va-unan evel hiziv dirak ar prenestr hag e sellen ouzh an implijad o tostaat, hep ranellerezh hag hep spi, evel bremañ. Abaoe ma oa distroet Boris da Rusia, ne skrive den dimp, ha piv ma Doue a c'hellfe c'hoazh

skrivañ dimp ? Gwelout a ran paotr-al-lizhiri o vont war e giz, gant e gammedoù ingal, dizamant ha diguñvaus evel an tonkadur. Hiziv e vo un deiz evel an holl re all. Met, an deiz-se...

Ar rener a zeuas tre.

« Ul lizher evit Andreï, emezañ.

- Evit Andreï ?

- Eus Rusia. »

Hag eñ o reiñ din al lizher. Ar chomlec'h a oa skrivet e giz ar C'hornog, gant lizherennoù diampart. Anv ebet eus ar c'haser nag e chomlec'h kennebeut, met ne oa ket digant Boris. Ar siell war an timbr a oa druz ha lous ha n' hellis ket lenn eus a belec'h e teue al lizher. Piv an diaoul ? Piv 'ta ?

330

« Daoust hag-eñ emañ Andreï en e liorz ? » a glevis ar rener o c'houlenn.

Ha me etrezek an dachenn-zouar. Derc'hel a raen da sellout ouzh an anv-se skrivet diampart : « Andreï Malinov » hag e soñjen - nann, ne oan ket barrek da soñjal. Ne oa ennon nemet un disfiz ankenius, evel pa vefe bet pe edo o vont da vezañ un darvoud digemmus. Me da huchal :

« Andreï ! Andreï ! »

Dont a reas davedon.

« Ul lizher eus Rusia, Andreï ! »

Hag-eñ da sellet ouzhin souezhet hag amgredik.

« Ya, emezon, eus Rusia ! »

- Boris ? » emezañ.

Ha me d' e reiñ dezhañ. Ur sell war ar chomlec'h. Ha liv ar marv en e gerc'henn, dispourbellet e zaoulagad. Digoret ar c'holoenn, displeget al lizher. Sevel a reas e benn :

« Digant va gwreg ! »

* * *

Klevout a ran c'hoazh anezhañ. E glevout a rin da viken, evel ma klevo unan kondaonet gerioù e varner da viken.

« Va gwreg, » en doa lavaret Andreï.

N' eo ket me e oa honnezh.

Eben a skrive :

« Andreï karet, goude bloavezhioù hir, eo bet degemennet din e oas bev bepred. Eürus e vi o klevout ez eomp mat, ar vugale ha me. Lydia ha Varia a zo bremañ merc'hed yaouank hag a labour o-div en ur burev.

Lievin a zo c'hoazh war ar studioù, met a-benn ur bloavezh e vo ijiner. Me am eus ul labour bourrus en ur stal-voued stok ouzh hon ti. Evurus omp, e gwirionez.

Ha te, penaos emañ ar bed ganit ? Boris en deus kontet dimp en em gavez en un ti-degemer e-lec'h ma labourez. Daoust ha talvezout a ra ar boan din lavarout

dit hon eus c'hoant bras d' az kwelout ? Perak ne deufes ket ? Didro, e lavaran dit en em bliji amañ hag e c'helli adkregiñ gant da vuhez. Boris a gas dit e c'hourc'hemennou, labourat a ra endeo en e gêriadenn hag eürus eo.

Dont a ri buan ? Bremañ pa ouzon ez out bev c'hoazh, e c'hoantaan gant va holl nerzh kaout ac'hanout ganin ha gant ar vugale.

Andreï, ma fried karet, deus. Da wreg. »

* * *

Ger ebet ne zeuas ganimp e-pad m' edomp aze, e liorzh-al-legumajoù. Ur pennat mat e chomjomp fas-ouzh-fas hep kalon a-walc'h evit sellet an eil ouzh egile.

Andreï a zastumas e vinvioù hag o lakaas el lab. Distreiñ a rejomp d' ar c'hastell hep ur ger. Dirak an nor, e kemennas Andreï : « Ne lavari da zen, hañ, Tania ! »

Ne rannjomp grik da zen, zoken d' an rener a gavjomp en trepas hag a sellas ouzh Andreï evel pa vefe bet engortoz eus un diskleriadenn bennak diwar-benn al lizher-se eus Rusia. Met Andreï e saludas hag a savas gant an diri, ha me ouzh e heul. Erruout a rejomp en hor c'hambr.

« Ha bremañ ? » eme Andreï a vouezh dinerzhet. Met ar goulenn-se ne oa ket evidon.

Diblasañ a reas ar gador-vrec'h, o harpañ e gein ouzh ar gwele, hag en em lezas da gouezhañ e-barzh. Da greisteiz, e c'houlennas : « Teurvez kaout ar vadelezh da lavarout en traoñ n' on ket em bleud ».

D' abardaez, edo bepred er gador-vrec'h. Ha d' an eur edomp boaz da vont en hor gwele, a savas :

« E gwirionez, n' on ket em jeu, Tania, emezañ. Diskenn a ran el liorzh ur pennadig. Kae te da gousket ! » Diwezhat-tre e oa pa glevis anezhañ o tistreiñ d' ar gambr. Hep en em ziwiskañ, ec'h azezas adarre er gador-vrec'h. D' ar mintin, e welis e oa manet sorennet hag e tihunis anezhañ evit e lein.

« Petra a c'hoarvez gant Andreï ? a voe goulennet diganin un toullad deizioù goude. Petra a c'hoari gantañ 'ta, Tania ? »

Grik. N' em boa ket aotre da respont.

Un devezh ma oa chomet Andreï er gêr, pezh na c'hoarveze mui alies, e komzjomp eus al lizher.

« Gwir eo, Tania, eme Andreï. N' eus douetañs ebet, anavezout a ran ar skritur. Met an doare da skrivañ a zo iskis : ar frazennoù a zo ken berr ha ken disi... N' eo ket evel-se e komze. Met hi an hini he deus skrivet...

332

- Marteze... emezon, en ur grenañ, marteze eo bet rediet...

- Me 'oar ?

- N' eus ket ur ger zoken war an darvoudoù tremenet, a gendalc'has eñ goude tevel ul lajad. Petra a zo c'hoarvezet gante en ur vont eus ar c'hentañ kamp d' egile ? Daoust ha bet ez eus, e gwirionez, ur beñseadenn war ar Volga ? Ha neuze, penaos int bet saveteet ? Pegeit int bet toullbac'het ? Penaos int distroet da Gosakowzy ? Ha perak n' o deus ket ar vugale skrivet ur ger bennak ? Pe o anv, da vihanañ ? Perak ? Ha perak n' en deus ket lavaret Boris edomp... »

Souden e lakaas e zaouarn war va diskoaz ha kement e poueze ken e reas

poan din : « Bet eo rediet da skrivañ evel-se, » emezañ, ken diarvar ha tra.

* * *

Tremen a reas an devezhioù hag an nozvezhioù. Devezhioù ha nozvezhioù spontus. En em garout a raemp, marteze edomp c'hoazh sotoc'h eget kent an eil gant egile, met bevañ a raemp distok. Un tasmant a oa etrezomp, ha daoust dezhañ da vezañ treuzwelus, dispartiañ a rae ac'hanomp evel ur speurenn didrec'hus. Ne gomzomp morse anezhi nag eus he bugale. Ne felle ket da Andreï hen ober ha ne grede ket. Hor c'hambrig, hor goudor goude kement a reuzidigezh hag a rann-galon, hor repu goude bezañ kantreet a-hed hir bloavezhioù, hor c'hambrig a oa souden deut da vezañ re vihan. P' en em gavemp asambles enni, e santemp gant from ne oa ket graet ken evidomp hon-daou hag e tlee unan ac'hanomp tec'hel kuit. Ha mont a rae unan er-maez ha peurvuiañ e veze Andreï. « Petra a c'hoari gant Andreï ? » eme ar re all.

Ar pezh a c'hoarie gantañ a oa e zic'hallusted dirak an dibab didruez en doa d' ober, e aon dirak ar varn a vefe ret dezhañ kas da benn dizale. Lenn a raen ar prederioù-se en e zaoulagad skuizh, en e jestroù faezh, ha klevout a raen anezho a-hed e veilhadegoù hag e gousk.

Perak, ya, perak chom krog ennon, peogwir ec'h ouzout mat n' on ket an hini wir ?

« Andreï ! » emezon, un nozvezh.

333

Un nozvezh sklaer. Eus va gwele e welen kein ar gador-vrec'h distag mat war ar prenestr sklerijennet gant al loar.

« Andreï... »

Sevel a reas e benn.

« N' hellan ket sikour ac'hanout, Andreï, emezon. Met ne din ket enep d' ar pezh a vo divizet ganit, ne glaskin ket levezonañ ac'hanout. Ar pezh a gav dit ac'h eus d' ober hen gra hep sellout ouzhin, hep soñjal ennon. » Ha neuze eñ da sevel ha da dostaat ouzh ar gwele. Un herradig e voe evel a-raok. Derc'hel kloz a reas ac'hanon war e vruched, e zorn abaf ha krenus a lamas ar blev diwar va zal.

« Tania... » a c'harmas eñ.

Netra ouzhpenn.

Gout ' ouien petra 'oa o vont d' ober.

Hen anzav a reas tri devezh diwezhatoc'h.

* * *

Eus kambr ar vatezh, en eil solieradur, betek burev ar rener, n' eus ket pell da vale. Ur pondalez strizh, ur viñs ken strizh all. Un trepas ledanoc'h, an diri-a-enor, an " hall " hag an trepas bras. Eno emañ ar burev. Pet gwech abaoe em eus treuzet an trepasoù-se ha diskennet ar skalieroù ?

D'abardaez, pa vez dous an amzer, e plij din tremen ur pennadig en trepas bras. Bep tro, n' hellan soñjal nemet er wech-se ha gouzañv a ran ar memes skuizhder em izili hag ar memes pouez em c'hilpenn. Gortoz a rejomp meur a vunutenn en " hall " ha Heïko Tiru a lavaras dimp e oa ar gontez Glovacka er burev. Erfin, setu hi o tont er-maez. En trepas, e reas Andreï din arsaviñ ur pennadig, hag eñ neuze da dreiñ davedon e zremm faezh ha dislivet ha da zistagañ a vouezh izel

« Ma ouelez, Tania, e vin digalonekaet.

- Ne ouelin ket, Andreï, emezon, ken izel all. Na bremañ na goude. »

Ha ni da skeiñ war an nor ha da vont tre.

* * *

Ar rener a sellas, souezhet da gentañ, ranell goude ha nec'het en diwezh.

« Ac'hanta ? emezañ.

334

- Un toullad deizioù 'zo, em eus bet ul lizher... eme Andreï.

- Eus Rusia, a gendalc'has ar rener.

- Eus Rusia, eme Andreï war e lerc'h. Digant va gwreg. Va gwreg a soñje din e oa marv. »

Tennañ a reas al lizher eus e c'hodell, hag e roas d' ar rener en em lakaas d' e lenn. Pa savas e benn, e paras e selloù nann war Andreï, met warnon. E-pad ur predig amzer. Goulenn a reas neuze digant Andreï :

« Sur out eo bet skrivet al lizher-se gant da wreg ?

- Douetañs ebet, a respontas Andreï. Met d' am menoz, dibabet eo bet eviti ar pezh a oa da lavarout.

- Ha petra a ri ?

- Kriz eo evit Tania, Aotrou, eme Andreï, met n' hellan ket ober a-hend-all : dleet eo din skarzhañ du-hont. »

Moarvat, edo ar rener engortoz eus an diskleriadenn-se ; chom a reas mut ha difiñv ul lajadig. Met, souden, reut an tamm anezhañ :

« Evelato, Andreï, ne ri ket se ! Gouzout a-walc'h a rez ar pezh a c'hortoz ac'hanout du-hont !

- Ya, eme Andreï.

- Ac'hanta neuze, perak e fell dit mont ? a stlapas dezhañ ar rener gant ur vouezh skiltrus-tre.

- Abalamour eo va dever, » a eilgerias hepken Andreï.

An Aotrou Chaloni-meur Jord a erruas. Gouzout a ran ha pep hini a oar pegen bras eo e levezon ha pegen diaes eo rebarbiñ outañ. Ober a reas e seizh posubl evit dont a-benn eus Andreï, met en aner.

« Dleet eo din mont, Aotrou Chaloni. »

Unan eus pennoù-bras an harluidi a zeuas ivez. Eñ a ziouganas un tenn er penn, pe ar galeoù, hag evel ma chome Andreï yen ha disaouzan dirak e vreutadenn, ez eas betek komz eus treitouriezh.

« Ret eo din, » a glozas Andreï.

Goude e voe tro an Tad.

Eñ a c'hwitas ivez.

Neuze e komprenas pep hini ar pezh am boa drouksantet adalek ar vunutenn

gentañ : den n' helle mirout ouzh Andreï da seveniñ e vennad.

* * *

335

Hirie e skrijan c'hoazh gant an doujañs pa soñjan e habasketed Andreï evit dilenn e venoz ha chom feal dezhañ goude. Ha koulskoude ne glaske tamm ebet en em douellañ war e blanedenn. Ma chome dizaon dirak an dazont ragaroueziet dezhañ, eo abalamour ma soñje eñ e-unan er pep gwashañ. Ket er marv evelkent, laosket e vefe e vuhez gantañ. Met gouzout a rae ne vefe ket aotreet da labourat e peoc'h hag e c'helle bezañ kaset d' ar galeoù. Met gwelout a rafe e wreg hag e vugale, ha resev a rafen, da vihanañ, na pa vefe nemet ul lizher kement ha diskouez din ha d' an holl amañ e oa erruet mat e Kozakowzy hag en doa adkavet e diegezh.

« N' eus forzh pelec'h e c'heller lakaat ac'hanout da skrivañ ul lizher evel-se, emezon.

- Evel just, met me 'oar ec'h erruin e Kozakowzy. Mar lennez em lizher ar ger " evuruzamant ", da skouer, em eus kavet evuruzamant va familh, e vi sur em bo adwelet anezhe e gwirionez... Fiziañs am eus, Tania, e c'hellin diwezhatoc'h kas keleier all dit, met... »

Gant ar sin amgredik a rae gant e zorn dehou, e tiskoueze asantiñ kement d' e donkadur, ken em bije bet mezh o waskañ pelloc'h war e galedenn hag ober dezhañ gouzañv muioc'h c'hoazh.

Den ne ouias, zoken ar rener. Ur beurevezh, e resevas Andreï ur respont d' al lizher en doa skrivet da gannadour an U.R.S.S. Ur ger berr hag ofisiel o tegemenn e oa bet degemeret mat goulenn Andreï Malinov evit distreiñ d' e vro. Gourc'hemennet e oa dezhañ en em gavout ar merc'her kentañ, diouzh ar mintin, er c'hannaddi, ha, war an deiz, ur c'harnnij e gasfe da Rusia. Nikun n' en deus gwelet anezhañ o vont kuit. Den n' helle gwelout ac'hanomp o kimiadiñ. Abred-kaer e oa, hag an holl a gouske er c'hastell. Er penn all d' al liorz-veur edomp, el lec'h distro hor boa fiziet ennañ dornad douar Kufstein, o soñjal edomp tonket da vevañ amañ hiviziken. Abaoe, e oamp deut amañ bep abardaez. Ha bremañ e oa an diwezhañ gwech dimp da zont asambles.

Aze hon eus kimiadet. Un toullad gerioù izel. Poket hon eus. Dalc'het em eus d' am ger : n' em eus ket gouelet.

Met pa 'z eas Andreï kuit !... Ur momed e c'hellis spurmantiñ anezhañ c'hoazh etre ar gwez ha, souden, netra ken... O, neuze...

* * *

336

Mont a ra e-biou an devezhioù, ar mizioù ha mareoù-ar-bloaz. Hag ar bloavezhioù. Netra a-nevez. Warc'hoazh a vo heñvel ouzh hiziv, evel ma 'z eo hiziv ouzh dec'h. N' eus cheñchamant ebet nemet el legumajoù a zebromp da greisteiz : ar peurrest, hor c'homzoù hag hor sioulder, an traoù gwelet ha klevet, hor baleadennoù el liorz-veur, hag hon huñvreoù e sal-an-ebatoù, a vez ordinal-ordinal memes tra.

Ar gontez Glovacka a c'hoari gant he c'hartoù, goustadik-goustadik, ha lavaret e vefe eo marv endeo ha n' eus amañ nemet he neuz evit un herradig. Kerkoulz ha marv eo ivez Rodzianko ; goude bezañ studiet an iwerzhoneg, an euskareg hag ar brezhoneg, ne gav ket kalon a-walc'h evit deskiñ ur yezh all. Abaoe hon eus intereset e wreg Inriid, Heiko Tiru ne gizell ken a girvi-erc'h na skeudoù tasmantus ; chom a ra en e goazez, paret e selloù Doue 'oar war betra. An " hetman " Tarkin ne gomz ken eus ar fazioù graet gant Wrangel, rak bet en deus e emgann diwezhañ : gant e Gozaked dispont en deus arsailhet kreñv-lec'hioù ar Re-Ruz, hag en ur vervel e tigoras e roched-noz evel pa vefe bet ur chupenn soudard hag e lakaas e zorn war e galon treuzet gant ur boled. Hag ar jeneral Arkinov a van hiramzer dirak ar prenestr, hep ober netra. Hag ar re all ! Ha me!

Me, an hini yaouankañ. Met ar gozhni n' eo ket hepken un niver bloavezhioù. Mar deo yaouankoc'h va c'horf, koshoc'h egete on marteze a spered. Koshoc'h on, e gwirionez, rak soñj am eus eus ar pezh a dremenas gwechall a gavan ken pell, ya, pell-spontus. Klevout a ran fraezh, klevout a ran pep tra e sioulder ar c'hastell, klevout a ran an amzer, va amzer, o vont a-raok, riñset diganin : mil drouzig oc'h en em deuziñ en unan hepken, ar sioulder. Met eurvezhioù 'zo, e sko ar sioulder taolioù morzhol war va c'hokenn, hag er momedoù-se, ez an krec'h pe e tiskennan, ez an er-maez pe e teuan-tre kement ha klevout stroñs va seulioù ponner war ar pavez pe war ar c'hoad. Sellet e vez ouzhin neuze ha ne gomprenet ket perak e kemeran kement a boan didalvoud.

Traoù all 'zo ha ne gomprenet ket amañ. Da skouer, ne gomprenet ket perak em eus adlakaet poltred Andreï e-kichen re an eizh harluad marv, er stern e-pign dirak ar prenestr, perak em eus graet se un abardevezh m' edo an holl aze o welout ar pezh a raen. Ne gomprenet ket perak ez on chomet em c'hoazez aze, meur a zevezh, evit diskouez anat ar pezh a felle din. Den ne gredas mui, goude, tennañ al luc'hskeudenn diouzh ar stern. Da se ivez o deus asantet, evel m' eo bet dav dezhe - ha din ivez - asantiñ da gement a draoù.

337

* * *

A-wechoù, e c'hoarvez ganimp advevañ. Bep teir sizhun, an Aotrou Chaloni-meur Jord a zeu da ganañ an oferenn a heuliomp ken aketus ha m' eo posubl. Goude e chom ganimp, a-wechoù un toullad eurvezhioù, met a-wechoù ivez ur pennadig hepken. Komz a ra gant pep hini ac'hanomp e-unan, dirak ar prenestr, e penn gwele unan klañv pe e-pad ur valeadenn el liorz-veur. Gout ' oar petra a zo da lavarout dimp. Neb ac'hanomp a gouezh er c'hwervoni, er rustoni pe en digalonegezh, a gompren buan e tleomp evelato en em gontantiñ. Daoust hag eñ ne domp ket chañsus, e-keñver ar milieroù a harluidi bern-war-vern bepred er c'hampoù ? An Aotrou Chaloni-meur Jord n' en deus ket ezhomm da venegiñ se din, ne glemman morse. Ha kammed ne gomzomp diwar-benn Andreï : ar pezh a oa da lavarout, an Aotrou Chaloni-meur hen lavaras din pa zeuas d' am gweledenniñ, an deiz war-lerc'h ma oa aet Andreï kuit. Ne rannomp ket kalz a c'herioù e-pad hor c'haozeadenn bep teir sizhun, met ar sioulder etre ar c'homzoù rouez a vez leun a druez. Evit ar pezh a sell ouzh an Tad...

Ne vez ket gwelet ken alies ha kent. Kement en deus d' ober, e gwirionez ! Ar c'hazetennoù a gemenn dimp peseurt beaj emañ oc'h ober, ar mennad a gas da benn kazi dre vurzud, al labour diehan a ra evit hor breudeur hag hor c'hoarezed eus ar c'hampoù, armead trist an harluidi. Met pa vez aze, pa vez gwelet e porzh ar c'hastell, e redomp endro dezhañ evel bugale, ha ni kozh. Hag e vousec'hoarzh ouzhimp, evel pa vefemp bugale wirion, ya, bugale, ha n' eus forzh pegen fentus e kavot se, en em santout a reomp bugale, e vugale. Er momedoù-se, eus a vorgousket m' edomp, e tihunomp ha dont a ra dimp kalon adarre, kavout a ra dimp ez omp tud vev, hag ar mored didrec'hus a zeu war-lerc'h an dihun berr-se a zo kentoc'h un emzinac'h eget ul lez-da-vont. Ur seurt pinvidig eo an hini a c'hell dilezel un dra bennak e-keñver neb n' en deus foeltr Doue seurt.

338

Ne daio morse an Tad kuit hep bezañ deut da gaozeal ur pennadig ganin va-unan. Na posubl ne vefe nemet un nebeudig amzer er c'hastell, e tremeno ur vunutenn bennak ganin. Ha koulskoude ne vez ket kalz a gaozioù etrezomp kenebeut ha morse diwar-benn Andreï ; an Tad en deus lavaret din ivez ar pezh a dlee bezañ lavaret.

Met gouzout a ran e ray e seizh posubl evit klask petra eo deut Andreï da vezañ.

Rak dres ar pezh en doa diouganet Andreï a zo c'hoarvezet.

Resevet em eus al lizher-se eus Kosakowzy. Skrivet e oa gant Andreï. Met

fromus e oa gwelout pegen heñvel e oa al lizher-se ouzh an hini a resevas digant e wreg, gant an hevelep frazennoù berr ha krak, ken ne oa ket da faziañ. Met... e familh, Andreï en doa he gwelet " evuruzamant ".

N' em eus bet lizher all ebet, goude ma skrivis meur a wech da Andreï ha d' e wreg. Daoust ma skrivas an Tad, daoust d' e zifraeoù ofisiel pe get, d' e enklaskoù, n' eus bet mann. Ha biken ne vo.

Da eur an disparti, Andreï ha me a ouie e vefe kont evel-se.

Tremen a ra an amzer.

Hir eo an devezhioù hag hiroc'h c'hoazh an nozvezhioù. Gellout a rafed soñjal : buhez un den a zo hir-spontus gant an holl devezhioù hag an holl nozvezhioù didermen-se : met n' eo ket gwir. Gouel Pask a zo c'hoazh tostik d' an eñvor, evel pa vefe tremenet un toulladig deizioù 'zo hepken. Hogen an hañv ha diskar-ar-bloaz zo aet e-biou endeo, emamp er goañv, mare Nedeleg eo.

Abaoe ar 24vet a viz Kerzu, ez eus bet lakaet ur Wezenn Nedeleg fichet-kaer er sal-vras, rak amañ, e broioù ar C'hornog, emañ gouel Nedeleg d' ar 25 a viz Kerzu. Goude merenn, ur bagad krennarded a zeuas da ganañ ha pep hini ac'hanomp en doe ur prof digant ar rener. Met hor gouel Nedeleg-ni, hor Nedeleg rusian, a vez lidet d' ar seizh a viz Genver.

An Aotrou Chaloni-meur a zo erruet ha kanet en deus an oferenn. Komzet en deus plaen ha war e bouez diwar-benn ganedigezh Hor Salver hag holl hon eus komprenet mat. Met n' hellen ket chom hep soñjal dibaouez er bugelig, va bugelig a zeuas war an douar hag a nijas kuit bremañ 'z eus dek vloaz. Goude merenn, ez erruas an Tad ha ni da ziskouez joa dezhañ. Ar jeneral Arkinov a gomzas a-berzh an holl ha klask a reas, ur wech c'hoazh, bezañ an Arkinov meur. War e " bechmete " gwenn-kann, e lugerne medalenn Sant Vladimir hag e gleze a enor a oa stag ouzh e gostez. Met ar jeneral Arkinov a zo bremañ ken kozh ha ken kizidik ken eo bet ret dezhañ tevel goude un nebeut gerioù, taget gant an daskren.

339

An Tad a gomzas ivez. Hag eñ kuit d' abardaez. Ur pennadig e viras va dorn e-kreiz-tre e re : bremaik hor boa kaozeet ha gouzout a rae pegen start e oa bet an devezh-se evidon.

* * *

Deut eo an noz.

Bodet omp holl e sal-ar-gouelioù. Souden, Ivan Charpakov a stag da ganañ " Plaenenn, ma flañenn "... Ar vouezh a zo gwan ha daskrenus, ha koulskoude ar mouskan-se a laka da sevel dirazomp taolennoù hor bro. Plaenenn, o kompezenn divent Rusia !...

Ha sklaeroc'h eget kanaouenn Charpakov, setu ma seblant din klevout o tintal er-maez kleierigoù-arc'hant. N' eo ket an titirin am eus klevet gwechall, ur bern bloavezhioù 'zo, pa oan azezet, evit ar wech kentañ en troïka, o vont da welout froudoù skornet an Dnieper ?

Ha me er-maez.

Goloet eo al liorz-veur gant erc'h, ha bodoù 'zo, sammet ponner o skourroù, a zo heñvel a-walc'h ouzh un isba. Mont a ran pelloc'h, betek ar penn all eus al liorz, ha dirazon eo ledet ar vro : ur gaer a gompezenn gwenn-kann en nozvezh sklaer. Ha titirin ar c'hleierigoù-arc'hant a dosta muioc'h-mui.

Dont a rez da gerc'hat ac'hanon, troïka ? 0, troïka, kanet gant kement a garantez gant hor barzhed ! Troïka, va labous a nij a-rez ar stepennoù leun a erc'h, va c'hemer a rez ganit ? Ar stepenn a zo ec'hon, met treuziñ a rez anezhi, ken herrus hag an avel, o tilezel al levioù war-lerc'h al levioù.

« Andreï ! »

Dalc'h da vont, troïka, pelloc'h-pell war-du ar reter, pelloc'h-pell war-du an hanternoz.

Goude ar stepenn, e teuio an toundra a seblant bezañ ken divent-all, met dont a ri ivez a-benn.

340

« Andreï ! Andreï ! Respont din, Andreï ! »

Met respont ebet ne zeu betek va divskouarn.

Pelec'h emañ, va Doue, pelec'h emañ ar steredenn a gaso ac'hanon d' ho petek da gavout karediged va c'halon ?

Nevez-amzer war Menez Arre

Kanaouenn.

Pa zeu an nevez-amzer
War gein gleb Menez Arre
War gein gleb Menez Arre,
Ez an da droc'hañ war 'r maez
Dre 'r parkeier ha 'r c'hoadoù
Da c'haloupat 'vel un ebeul
Dre 'r raden ha 'r stankennoù.

Analañ adarre 'ran
'Vel ar ploueziad e oan
'Vel ar ploueziad e oan,
Ha pebezh plijadur 'm eus
Hed-ha-hed un abardaez
O redek hep kavout war va hent
Nag un den na penn ur c'hi.

E ser oberenn Lan Inizan : " Emgann Kergidu "

A) DOARE AN OBERENN

En ur ster strizh ne c'heller ket termenañ " Emgann Kergidu " evel ur romant. Bez ez eus anezhañ kentoc'h un heuliad pennadoù hep tamm liamm resis etrezo nemet ez int holl awenet gant spered pobl Bro-Leon. Pourmen a reer a gêr da gêr, o tastum heklevioù eus ar stourm a zo renet a-enep da " Republik Paris ". Kejet e vez gant Loull ar Bouc'h, person intru Plouared ; gant tud Lesneven da vare gouel Mirabeau ; gant kouerion Bro-Leon pa vez " tennet d' ar sort " e Plabenneg hag e Kastell; gant Pol Inizan zoken, tad-kozh ar skrivagner e Lanzeon. Heuliañ a reer tro-dro da Gergidu ar stourm renet gant Breizhiz a-enep d' an arme c'hall. Hogen n' eo ket un amzer " ergorel " a zo o ren en " emgann Kergidu ". N' eus ket a liamm spis etre an darvoudoù. Er bloaz 1793 e tarzh stourmadennoù e Leon ; hogen n' eus pal ebet o vleniañ anezho. Diouzh ar sell kentañ eta e hañval trivliadoù, mennozioù hag oberoù Leoniz en em gavout er-maez eus pep " amzerelezh ". An emgann a-enep d' ar Gall moarvat a ro ar memes spered da holl Leoniz ; hogen ar spered-se n' eo ket politikel ; nac'hus eo, emdarzhok ; pep den a van stag ouzh e gorn-bro, ouzh tachenn e barrez ; ne wel ket ar stourm e par ar vroad e nep doare. Moarvat e kaver daou bennahel d' ar stourm a zo kaset da benn : unan danvezel, hini ar vuhez pemdeziek, a glasker mirout e giz m' emañ - direnket eo an dud gant emell an arme c'hall a drubuilh ar vuhez-se - hag unan speredel, ar relijion. Hogen dispartiet e chom an daou benn ahel-se pe - mar karit - n' eus ket a zaelerezh etre ar pal hag an ober : war zaou live diforc'h ha kenstur emaint, hep kejout morse an eil gant egile.

War an diazez-se e weler tud o tremen a vareoù, o vont a-ziwar-wel e-pad ur pennad, oc'h en em ziskouez pelloc'h en oberenn : eon war-neuñv war-c'horre ar stourm a zo kaset da benn gant ur bobl gouerion-pesketaerion. Tarzhañ a reont diouzh ar froud da sklerijennañ anezhañ, a-raok adkouezhañ evel tonnoù ar mor e goueled buhez ar bobl. Dibab e c'heller skouer an aotrou Feburier e-pad gouel Mirabeau, hini Loull ar Bouc'h. Damwelout a reer c'hoazh treizh an aotrou Poullaoueg, ar c'habiten Jaouen ha Kivoron a-raok ma vijent adlonket gant keflusk ar gevredigezh. N' int bet nemet ur maread anezhi. Re all a bign endro war-c'horre bep an amzer, evel an aotrou a Gerbalaneg, Pol Inizan pe Roparz Mengi.

Steuat eo an holl zarvoudoù koulskoude gant un neudenn anat : an troioù c'hoarvezet gant Yann Pennhorz. Rak " Emgann Kergidu " a zo savet diouzh un tu all evel un deizlevr. An darvoudoù a zegouezh betek ennomp dre hanterouriezh Yann Pennhorz. Eñ en deus bevet en o mesk hag a zispleg e zazweredoù. Ar gwallstourmoù a gav un hekleven en e emzalc'h : perzh a gemer en emgannoù hag e kredennoù tud e vro ; n' eo ket chomet da arvestiñ outo dre darzhelloù an " neptuegezh ". Aet eo war an hentoù da gavout ar chouanted ; drailhet en deus soudarded ar " Republik " e Kergidu ha gloazet eo bet war un dro. Lazhet en deus - hag eñ e unan penn - 25 republikan en un devezh. Stagat en deus ar " riblennad lien du " ouzh tour Iliz Berven goude mont da greiz an enebourion. Ne vez ket heuliet Yann Pennhorz koulskoude a-hed an holl bennadoù hogen chom a ra an istor stag ouzh e bersonelezh. Setu ar pezh a skriv Lan Inizan e derou al levr : « Pell 'zo emac'h o c'houlenn digant Yann Pennhorz kontañ deoc'h e vuhez. Mat, setu amañ un abadenn eus e yaouankiz. Diwezhatoc'h, marteze, e konto deoc'h abadennoù e gozhni... »

B) MENNADOU LAN INIZAN

Goude bezañ studiet diazezoù an oberenn, da lavarout eo, livadur spered ur bobl diwar desteni Yann Pennhorz, e vefe mat gwelout peseurt mennadoù en devoa

Lan Inizan en e levr. E bal kentañ avat n' eo ket diskouez e bersonelezh, embann mennoziou nevez pe furchal e kudennoù ar bed. Klask a ra, a-raok pep tra, kelenn e genvroiz. Difenn a ra un doare da gompren ar gevredigezh, ha zoken ar bed a-bezh ; dezrevelladur an darvoudoù, dres, a ro tro dezhañ da vrudañ un urzhiadur zo eus ar gevredigezh. Silañ a ra e evezhiadennoù hag e alioù war-lerc'h pe e-kreiz pep drama. Pep degouezhenn a bourchas ur skouer a-du gant e dezennoù.

Daou stumm pouezus a zo d' e veizadur eus ar gevredigezh.

Ar relijion, da gentañ. Ret eo kounañ e veve Lan Inizan dindan ur gouarnamant gall digristen a-grenn pe zoken enep-kristen. Adal 1880 e krogo ar gouarnamant-se da embann lezennoù a-enep d' an Iliz. Hogen adal 1876 endeo ez eo deuet a-benn ar Republikaned da gemer ar galloud e Pariz. En o zouez e kaver ar " Radicaux " a ro da c'houzout d' an holl gant nerzh ez int heulierion " Jakobined " 1793. Bez e c'heller klask eta andon " Emgann Kergidu " e kendegouezh ar mare ; ar gannaded c'hall-se a rae dave da venozioù digristen dispac'h 1793. El levr ne vo kaoz nemet eus heskinadur ar gristenion gant ar republikaned difeiz ha dreist-holl heskinadur ar veleion doujus da lezennoù Doue. Sanket omp adal ar penn-kentañ e kudenn vras al levr : « *Daou vloaz bennak zo e oa bet harluet ar veleion gant tud deuet eus a-gostez Pariz, abalamour ma ne falveze ket dezho sentiñ ouzh al lezennoù nevez ; hogen al lezennoù-se a oa a-enep da lezenn Doue, a-enep da lezenn an Iliz ha zoken a-enep da lezennoù ar bed... »*

Da Zoue hepken e tle an dud sentiñ eta ; hag ar Republikaned a laka an hu war gannaded Doue a zo " dall " hag a ya a-enep da " lezennoù Doue ". Ha setu ar gentel a c'heller tennañ o lenn " Emgann Kergidu " : an dizoueadegzh a zo andon a fallagriezh. An dael etre Pol Inizan hag ur c'habiten republikan a ziskouez mat ar gelennadurezh a zo endalc'het en oberenn :

345

Pol Inizan a zo o komz. « *An neb a zo eeun e goustiañs ne zle kaout aon nemet rak Doue. »*

Ar c'habiten. « *Ho Toue ! Ho Toue ! Ni ne gredomp ket er spontailh diskiant-se. »*

Pol Inizan. « *Doue koulskoude a varno ac'hanoc'h hag a stardo warnoc'h mar kendalc'hit da ober fall evel ma rit bremañ. »*

Ar c'habiten. « *Lezit anezhañ ganeomp ; ni en lakaio war e du a-raok maz aimp kuit eus ar vro-mañ. »*

Pol Inizan. « *Touer Doue, serrit ho kenou gant aon na gouezhfe warnomp tan an neñv... »*

Er pennad-se ez implij Lan Inizan mouezh e dad kozh evit displegañ e vennoziou ha dreist-holl hemañ : pep tra a zo bet krouet gant Doue en un doare kenedus ha kempouez ; an hini en deus distrujet an urzh kenedus-se, ar Republikan gall, a zo milliget ; setu perak ez eo mat stourm a-enep dezhañ.

Meur a vennoz all a zo displeget gant ar skrivagner. Unan anezho ez eo reizhded an urzh kozh. Lan Inizan, e gwirionez, hag ar re a vev war e dro n' int ket klenket tamm ebet e bed nevez ar vourc'hizion. Diskouez a reer deomp dreist-holl penaos ez eo bet diskaret galloud ar roue, hini an noblañsoù hag ar veleion gant hini nevez ar " gannaded " hag ar " vaered ". Abaoe an Dispac'h avat n' emañ ket mui ar roue evit reiñ ur skeudenn vev eus Doue hag ar veleion n' int ket mui kreiz ar bed kennebeut. An talvoudoù kozh a zo bet diskaret gant keal an efedusted. Ne gaver mui netra d' en em stagañ outañ. Ar gannaded a zo o vevañ e Pariz a zo distag a-grenn diouzh tud Bro-Leon : ne glot mui o buhez war ar maez, o buhez henvoazel, gant an hini a geflusk ar gevredigezh nevez diazezet war an ijinerezh. " Emgann Kergidu " a daolenn deomp tarzhadur ur gevredigezh war he diskar. Goude koll he blenierion - ar veleion dreist-holl - e koll ivez he gwarez diwezhañ : ar yezh. Betek Dispac'h 1789 he doa gellet bevañ serret warni

hec'h-unan. Lec'hiadur darvoudoù ar romant en diskouez mat : tro-dro da Gastell-Paol e tifret ur bobl vihan en he fezh e-barzh kêriadenoù evel Plouared, Ploumagoar, Perroz, Bourc'h-Briag, betek Lesneven, Konk-Leon, Lokronan-Leon ha Porspoder, h.a. Ur rannvroad vras a-walc'h en em astenn eus kreiz Treger betek penn pellañ Bro-Leon ar c'hornog, 100 kilometrad a reter da gornog ha 30 kilometrad a hanternoz da greisteiz. Un douar a gouerion eo an douar-mañ hag an darvoudoù a ziroll adal 1793-1794 a zo bevet evel ma c'hellont bezañ bevet gant kouerion.

346

Tud ar c'hêrioù, bourc'hizion ha micherourion a zo argarzhed. Ne glever komz nemet ur wech ar mare eus jeneraled Vrest, komiserion ar Republik, ar varnerion. Heverk eo dreist-holl penaos eo disprizet ar vicherourion, heverk ivez an enebiezh a ziskouezer kaout en o c'heñver. Lan Inizan, koulskoude, a ro un daolenn verr anezho e Gwengamp, hag a zo arouezius kenañ evit pezh a sell ouzh o doareoù-bevañ ha labourat. An ec'honder ma c'hwezh an darvoudoù warnañ a zo stern buhez kevredigezhel ar gouerion. Strollet int tro-dro da Gastell-Paol ha marteze da Lesneven. Ar bourc'hioù-mañ avat n' int ket gwir gêrioù, marc'hadoù e-lec'h ma c'hell kejout annezidi ar vro, ne lavaran ket. Montroulez, dreist-holl, a oa ur marc'had. Setu ar pezh a c'heller lenn en 28vet pennad : AN DOUR DU HA PLOUGASNOU : « *D'ar mare-se koulz ha bremañ, Plougasnaouiz a gare mont bep sadorn da Vontroulez. Ar marc'had ne vije ket graet mat ma ne vijent ket bet ennañ. Ha pa n' en defe nemet pevar vi pe un hanter-lur amann da werzhañ, paotr Plougasnou a gavo gwelloc'h koll e zervezh er gêr evit mont da Vontroulez da werzhañ e bevar vi hag e hanter-lur amann eget o reiñ, ouzh ar memes priz, er gêr, da un trafiker bennak eus ar bourk. Hounnezh oa ar c'hiz kozh ; hounnezh eo ar c'hiz a-vremañ...* » Mont a reer eta d' ar c'hêrioù-se evit kejout gant kouerien all ha klevout ar c'heleier nevez. An holl oberoù a vez eskemmet en un dachennad bevennet strizh ha resis ; hiniennel hag eeun eo an darempredoù ; n' eus ket a hanterourion evel maz eus d' ar mare ma varv Lan Inizan ; ha, dres, distrujidigezh an darempredoù hiniennel a zo un elfenn eus bruzunadur ar gevredigezh henvoazel (1). Un elfenn all ez eo kiladur ar brezhoneg. Ha Lan Inizan, na petra 'ta, a gemer digarez eus se evit difenn yezh an tadoù kozh, hep gwelout ervat abegoù ha diskar. « *Mar o doa skiant kanfarded Loull ar Bouc' h, ar re a ziwalle ar veleion 'vat n' oant ket diot kennebeut. C'hwi, paotred yaouank, an amzer zo bremañ, hoc'h eus kement a skiant war ho meno abalamour m' eo touz ho penn, abalamour ma ouzoc'h lavarout " ya " ha " nann " e galleg, abalamour ma ouzoc'h mont aliesoc'h d'ar c'hafedioù eget da gofez, daoust ha c'hwi ho pije graet gwell eget na rae an dud yaouank eus va amzer-me na ouient an darn vuiañ na skrivañ na lenn...* »

(1) Merzout a ra war un dro dibobladur ar maezioù hag ar c'hêrioù bihan a gaver en o c'hreiz. Kv. p. 95 : « *D'ar mare-se, Lezneven a oa ur gêr vras ha brudet ; er penn-kentañ edo eus kêrioù Bro-Leon. An Dispac'h he deus he dibennet ; bremañ an dud a vrezel hag a lezenn a zo aet da Vrest pe da ul lec'h all hag ar geot a sav hiziv etre ar vein, dre ar ruioù e kêr Lezneven...* »

347

Hogen o tagañ ar boazioù nevez ne ra ar beleg Lan Inizan nemet kemer emzalc'h ur c'hilstourmer. Sevel a ra e vouezh a-enep da alouberezh ar galleg dre hent an deskadurezh nevez a zegas ivez boazioù nevez o tont eus kêr (evel troc'hañ ar blev pe mont d' ar c'hafedi) hogen n' eo ket barrek da ginnig tra evit kemer lec'h ar boazioù nevez-se hag a zegasfe en dro-mañ ur wellaenn er gevredigezh kozh ; disoc'hañ a ra e emzalc'h da serriñ Bro-Leon warni hec'h-unan. Rak setu pezh ez eo " *Emgann Kergidu* " : istor ur bobl sezizet a bep tu, sonnet en he boazioù hag en he frammoù hag o vevañ er-maez eus ar bed, hec'h-unan dirak an neñv. En abeg d' an dro-spered-se ez eo bet gloazet ken don kornog Breizh d' ar mare-se. An estren, soudarded ar Republik a zo argaset hepken dre maz int estren, peogwir int bleniet gant un nerzh a-ziavaez. Nac'hus eo eta hepken emzalc'h Leoniz. Dre maz eus bet miret outo evel ouzh ar peurrest eus Breizhiz a sevel ur stad ez eo deuet ar gevredigezh vrezhon d' en em rannañ e kornioù-bro bihan, e strolloù bihan digenstag, evel endro da Gastell-Paol. Er c'heñver-se e tiskouez " *Emgann Kergidu* " mat tre an dro-spered e Bro-Leon. Ha ret mat eo anzav ne zeu ket ar maezioù a-benn da grouiñ kalz tra dre maz int

troc'het diouzh ar c'hêrioù ijinerezh ha bourc'hizelaet. Ma lakaer Montroulez a-gostez e c'heller merzout ez eo Gwengamp ha dreist-holl Brest dianav d' ar gouerion. O vezañ ivez ma vev ar gouerion e-barzh underioù kevredigezhel bihan hag enk - tiegezh ha mevelion - strewet war ar maezioù, o n' em gavout ur wech ar mare hepken an eil re gant ar re all da geñver ar marc'hadoù pe ar gouelioù, n' o deus dre se buhez kevredigezhel ebet koulz lavaret. E Lesneven, da skouer, e kejer da geñver gouel Mirabeau.

« Evel maz oa bet embannet ar gouel en holl barrezioù a dro-war-dro ec'h en em gavas en dervezh-se un engroez a dud e kêr Lesneven... Ouzhpenn-se kalz tud diwar ar maez, c'hoant da welout traoù nevez ha da c'houzout penaos e rae ar republik e c'houelioù, a zilezas ivez o farrez hag a yeas e kêr. »

348

" Emgann Kergidu " a zo eta istor ur bobl serret warni hec'h-unan, er-maez eus an istor hag a oa tonket da vont da get ur wech ma vije deuet da vat e dalc'h ur gevredigezh gwir oberiant, gouest da grouiñ, o kemer perzh da vat en istor : divellgeinet eo bet kerkent ha maz eo bet lamet diganti he frammoù kent - a oa re strizh a-hend-all - an Iliz hag an Noblañs.

Merzout a reer fraezh pennañ tresoù ar gevredigezh-se a-dreuz pajennoù al levr. Klask a rin bremañ avat displegañ talvoudoù kentañ ar vroad en em ziskouez er romant-mañ.

Doe eo an hini pouezusañ. Evitañ e vez stourmet bepred e-pad ar bloavezhioù 1793-1794. Arouez ar mad hag ar wirionez dirak an dismantrou berniet gant ar Republikaned c'hall ez eo, evel maz eo ar veleion difennerion ar mad hag ar wirionez-se dirak an dud. « Deskiñ a raent d' ar bobl lezennoù Doue ; henn pellaat a raent diouzh ar falskredennoù hag an dud disakret... » (p. 153). Endalc'het eo ar furnezh, ar vuhez hec'h-unan penn-da-benn er relijion. Treiñ a ra an dud tro-dro da iliz ar barrez ha d' ar veleion. Kreñv tre eo an devosion : soñjit da skouer e prosesion santez Berc'hed e Sant-Tegoneg e-kreiz sponterezh an dispac'h.

Ar roue eo an eil. Betek an triwec'hvet kantved, da lavarout eo betek ar mare ma krogas ar brederourion c'hall da skignañ o mennozioù, e chome re stag al liammoù politikel ouzh an darempredoù hiniennel. Ar roue a roe ur c'horf d' ar vroad. Ha Leoniz, daoust ma tegemerent ur roue evit o rener, a zispartie Breizh diouzh Bro-C'hall. Ar roue en deus ul lec'h a-us d' ar broadoù, n' eo ket a-us da unan hepken. Kiriek eo eus gouarnamant meur a vroad disheñvel. Setu ar pezh a c'hellfed merzout er frazenn-mañ : « Er-maez a Vreizh an divroidi ! eme Dider Dindaon ; deomp-ni hor bro gant hor feiz hag hor rouaned, deoc'h-c'hwi hoc'h hini gant ho republik, mar kirit ! »

Ar veleion, diouzh o zu, a vlegn alies o c'henvroiz d' an emsavadeg, o kenderc'hel da bismigat ar Republik, o nac'hañ touiñ d' ar gouarnamant gall. O mad a reont eus gwasterezh ar soudarded c'hall er vro evit broudañ o farrezianiz d' an emgann dindan beli an noblañsoù.

Tu a zo da venegiñ er c'heñver-se ar frazenn-mañ : « En amzer gozh ar veleion a oa karet ha doujet gant kement hini a anzave bezañ kristen mat. Deskiñ a raent d' ar bobl lezennoù Doue ; her pellaat a raent diouzh falskredennoù an dud disakret. Abalamour da se eo o doa droug outo an dud fall a oa ivez e penn an dispac'h rak ar re-mañ a ouie ivez ne zeujent ket a-benn eus a dud ar vro e-pad ma chomje en o zouez beleion hervez kalon Doue... »

349

Hogen ar gristeniezh n' eo ket hepken un doare da veizañ ar bed dre vras ; stag eo ivez ouzh ar gevredigezh. Doue a zo da gentañ holl Doue Bro-Leon an hini a vlegn e bobl kerkoulz er peoc'h hag er brezel.

Pagan eo c'hoazh an doareoù da grediñ e Doue. E pennad " Santez Berc'hed e Sant Thegonneg ", da skouer, ar gouerion a ya da gavout Doue en ur chapel peogwir e oa serret an ilizoù all. Lec'hiet eo Doue en e balez, ha mont a reer

eno gant ur brosesion da aspediñ anezhañ gant pedennoù « da bellaat pep droug diouto ». Ouzhpenn-se, bez e c'heller keñveriañ relijion tud bro Leon ouzh hini ur strollad-kuzh. E-kreiz ar brezel ez anavezer ar gwir vignoned dre ar pedennoù. Ar re-se a zo evel un eil yezh kuzh hag a zigor an holl dorioù deoc'h. Sikour ar bedenn-noz hepken eo en deus digoret un degemer frank da Iann Pennors ha da Jan Mari en trede pennad. An diforc'hioù e-keñver relijion ha stuzegezh eo a laka argas an estrenien eus ar gevredigezh. Evit gellout kemer perzh e buhez ar vro, eo ret asantiñ da zegemer stuzegezh ar vro ha da zilezel soñjoù nevez n' int ket diwanet diouzh ar vuhez-se, asantiñ ivez da veli an dud a relijion. A-hend-all, evel Loull ar Bouc'h, evel tud kêr dre vras e tleer bevañ en digenvez, kasaet gant an holl.

" Engann Kergidu " a zo eta istor ur bobl sonnet en he stuzegezh, serret ouzh pep levezon diavaez, troc'het diouzh ar c'hêrioù bras bourc'hizelaet pe ijinerezh. An darempredoù etre ar gouerion a zo ouzhpenn rouez a-walc'h. En em damolodet o deus warno o-unan, bodet tro-dro d' ar veleion, dic'houest da vleniañ ur bobl, ha mirourion an urzh kozh war un dro gant an noblañsed. Dre-se ez eo izel a-walc'h galloud seveniñ ar bobl, ha bevennet strizh an tachennoù ma c'hell en em ziorren ur sevenadurezh bennak. Koulskoude, o vezañ en em serret en o boazioù o deus gallet kouerion bro Leon mirout ar brezhoneg. Hag an doare nemetañ d' e virout e oa, o vezañ ma oa gallekaet ar gefredourion hag ar vourc'hizion (skouer ar c'hluhoù niverus a oa er c'hêrioù bras evel Brest, Roazhon pe Naoned).

350

Hogen dispac'h 1789 o lakaat frammoù gall nevez e-lec'h ar re gozh a oa laosk a-walc'h a zistruje ivez ar gevredigezh henvoazel ; Leoniz a sante an dañjer ha rak-se en em savjont. O emzalc'h koulskoude a chome forc'hellek, evel m' hon eus merket, peogwir ne verzent ket ne oa ket ar gevredigezh vrezhon da virout hepken hogen da adsevel ha da adkrouiñ evit he barrekaat da herzel ouzh ur gevredigezh arnevez a oa trec'h dezhi e pep doare.

Un disoc'h talvoudus a zo bet d' an darvoudoù neuze evelato. An dispac'h gall en deus dispennet ar goudor ma veve ar Vrezhoned ennañ dindan sell hag evezh Doue hag ar Roue hepken ; moarvat o deus klasket ar Vrezhoned gouarn ar goudor-se en ur stourm a-enep d' ar frammoù nevez, a-enep d' al lezennoù war ar relijion hag ar servij-soudard ; hag oc'h ober se, hep mar, o deus renet ur stourm broadel, daoust ma oa marv ar vroad a stourment eviti o vezañ ma ne groue mui netra. Hogen ur wech dispennet ar goudor eta ez eo en em gavet ar gevredigezh vreizhat war-eeun hag ent anat dindan beli ar Stad c'hall. Sklaer eo deuet da vezañ diwar neuze an darempredoù a sujedigezh hag a vac'homerezh a stage Breizh ouzh Bro-C'hall dre ma oa bet dismantret ar gevredigezh kozh. War an dismantroù-se berniet gant ar gouarnamant gall e Breizh - keñveriañ ar politikerezh distrujañ a-enep d' ar yezh menet gant ar gouarnamant-se - e tiwano an Emsav a gemero da bal adober eus Breizh ur vroad emren gouest da sammañ ur roll krouiñ e bodad ar broadoù europat arnevez.

Gerioù ha na gaver ket er geriadurioù.

Arnevez : modern. - Arvez : stumm, doare, diavaez. - Kefredour : intellektual. - Kilstourm : stourm nac'hus, hep intrudu, a-benn mirout hepken ha n' eo ket krouiñ. - Daelerezh : dialekteg. - Dazwered : ersav, doare d' en em zougen dirak un darvoud bennak. - Ergorel : objektiv. - Emdarzhok : a zegouezh dioutañ e-unan, hep mennad ebet. - Henvoazel : hengounel, stag ouzh ar gevredigezh maezat a-wechall. - Forc'hellek : amsteriek, meur a ster dezhañ, disklaer. - Stuzegezh : doare d' en em zerc'hel dirak ar vuhez hag ar bed, kultur (boazioù, mennozioù h.a.).

ISTOR BREIZH LA BORDERIE

troet gant ROPARZ HEMON

An Dugiezh gant Lignez Penteür

(KENDALC'H)

Ren an dug Jafrez II

(1181-1186)

Edo an amzer o tont da Jafrez, na oa bet dug Breizh betek neuze nemet dre anv, da gemer ar galloud stag ouzh an titl. Ganet oa bet e 1158, ha tizhet en doa eta e oad-gour. Ne oa mui abeg da zaleañ e zimeziñ gant an dugez Konstanza, merc'h Konan IV. Ur wech graet an eured, e dad en doa prometet e lezel da vezañ mestr e Breizh.

E 1181 e voe dimezet, embannet da zug Breizh dindan an anv a Jafrez II, hag e krogas da c'houarn e zugelezh. Saoz e oa, hogen da vihanañ e oa evit Breizh ur rener dezhi hec'h-unan, a vije alies, anat oa, o tifenn mad ar vro en ur zifenn e vad prevez, a vije dre redi a-enep ar mac'herezh hag ar c'hreizennerezh moustrus pleustret didruez gant Herri II. En e zoare-bevañ ne oa tamm direbech, hogen kalz aesoc'h oa da c'houzañv eget e dad.

Jafrez o c'hounit e frankiz.

E derou e ren e tegouezhas un darvoud a ziskouez ervat e oa deuet ur c'hemm politikerezh hag ur reizhadur nevez, daoust n' eus ket bet taolet sklerijenn war ar munudoù anezhañ.

352

Disoñjet em eus lavarout e oa Rolant Dinan, - unan eus gwellañ kadourien Vreizh, nebeut amzer diaraok, e 1168, - en em lezet da vezañ lorbet gant ar roue Herri II e 1175. Er bloaz-se end-eeun e oa bet anvet gant hemañ da senesal Breizh evit gouarn an dugelezh. Goude dimeziñ Jafrez, e fellas da Herri II kenderc'hel da vleniañ ar priñs, evel m' en doa graet betek neuze, dre hantererezh Rolant, a oa e zen a fiziañs hep bezañ hini an dug. Jafrez a enebas, o reiñ da c'houzout e venne bezañ en e di.

Herri II, imoret, a gasas e Breizh un arme, a yeas betek Roazhon, moarvat pa ne oa ket Jafrez eno. Kemeret e voe ar c'hastell, losket, adsavet, lakaet ennañ gwarnizon. Hep dale avat e tistroas Jafrez, gantañ soudarded e-leizh, hag e tapas krog en e gêr hag en e gastell adarre. War se, evit diskouez n' en doa mui ezhomm eus gwardoniezh e dad nag eus hini Rolant Dinan, e kemas hag e loskas Bekerel, pennañ kastell Rolant. E 1181 pe 1182 e c'hoarvezas kement-se. Daoust d' ar reuzioù ha d' an dizurzhoù a ranke dont da heul, e voe ren Jafrez evit Breizh evel un arsav-brezel a bemp bloaz.

" Dalc'h-Azez ar C'hont Jafrez "

E-doug an arsav-se, e 1185, e voe embannet unan eus pouezusañ dielloù lezennerezh politikel ar Vrezhoned er Grennamzer, a dleomp teurel ur sell outi e-pad ur pennad. Anvet eo bet " Dalc'h-Azez ar C'hont Jafrez ".

Istor pennañ aotrouniezhoù Breizh a brou ez ae alies, en 11-vet hag en 12-vet kantved, ul lodenn vras eus hêrezh an tad gant ar yaouaerien, ul lodenn kevatal pe dost, a-wechoù, gant hini ar mab henañ. Dalc'h-yaouaer Penteür, evel ma voe savet da gentañ, a oa ennañ Devnon a-bezh, un drederenn eus Breizh da nebeutañ. Roc'han, roet d' ur yaouaer eus lignez Pourc'hoad, a oa brasoc'h eget

al lodenn a chome gant ar mab henañ. Hevelep tra gant Monforzh, distaget diouzh Gwazel. Bekerele, distaget diouzh Dinan, ha Sant-Nazer, distaget diouzh Donz, a oa tost ken bras hag an dalc'hioù-douar ma oant bet enno. Ha gwelet hon eus e oa bet rannet kontelezh Leon e div gevrenn, e 1179, hogos kevatal, evit mad lignez ar yaouaer ; amañ, gwir eo, e oa bet dre emell an estren. Ma trofed an evezh ouzh an dalc'hioù-douar bihanoc'h, e kavfed skouerioù all e-leizh. Re hir e vefe ha ne dalvezfe da netra. Trawalc'h a zo gant ar skouerioù hon eus roet.

353

Kement-se n' eo ket koulz ha lavarout e veze keitrannet douaroù an noblañs etre breudeur. Hor gwiraour hag istorour meur eus ar 16-vet kantved, Beltram Arc'hantred, a grede an dra-se. Faziet e oa. Er c'hantved da heul, Per Hevin, gouiziek war ar wiraouriezh hag an istorouriezh vrezhon eveltañ, en deus reizhet ar fazi. Anzav a ra koulskoude ne veze ket sevenet-strizh reolenn an henavelezh, daoust ma oa bet asantet dezhi gant ar c'hladdalc'hourien e Breizh. Habaskaet e veze alies, hag ankounac'haet zoken a-wechoù. Ar c'heitrannañ ne oa ket ur gwir ; hogen dre youl an tad pe ar mab henañ e teue meur a wech da vezañ tost da vat ar reolenn.

N' eo ket souezh, rak ne oa ket an henavelezh un ensavadur brezhon. Berzet-krenn e veze gant lezennoù Kembre en 10-vet hag en 11-vet kantved, en desped da nerzh lezenn Voizez. Ne oa ket ar Vrezhoned evit krediñ e oa reizh lodennañ digevatal an hêrezh etre mibien un tad, netra nemet war zigarez e oa bet ganet unan a-raok ar re all. Goude aloubadegoù an Normaned, pa zrevezas ar Vrezhoned ensavadurioù ar c'hladdalc'helezh c'hall, p' o lakajont da dalvezout en o bro, e rankjont degemer ivez an henavelezh da benndiazez-lezenn ; e gwirionez, evel hon eus gwelet, e voe lakaet da dalvezout en un doare laosk-kenañ.

Dre se, en diwezh, e vije bet bruzunet an dalc'hioù-douar bras. Hag o kompren e c'hoarvezje sur a-walc'h, ha buan marteze, e voe gwall nec'het hep mar priñsed saoz-hag-anjevat al lignez Plantagenet, a wele ar c'hladdalc'helezh sichennet-start e Bro-Saoz hag e Frañs war reolenn strizh an henavelezh.

Aes kompren en dije klasket ur priñs eus al lignez-se stourm, dre un akta lezennel hag un ordrenañs lidus, ouzh doug ar Vrezhoned da geitrannañ an hêrezh hag ar pezh a zeuje da heul.

Sed a reas dres an dug Jafrez II e 1185, en akta anvet peurliesañ gant an istorourien hag ar wiraourien vrezhon " Dalc'h-Azez ar C'hont Jafrez ", dre 'n abeg ma voe embannet en un dalc'h-azez, pe mar karer gwell ur vodadeg eus eskibien ha baroned Vreizh.

Gant an ordrenañs-se e vez berzet diemprañ " ar baronelezhioù " ha " dalc'hioù-douar ar varc'heien ". Gourc'hemenn a reas reiñ hiviziken d' ar yaouaerien madoù loc'hus ha douar lakaet en o c'herz a-hed-buhez.

354

Setu ar pezh a lavar ar pennad kentañ :

« Hiviziken ne vezo mui rannet ar baronelezhioù na dalc'hioù-douar ar varc'heien ; gant ar mab henañ hepken ez ay an aotrouniezh en he fezh. »

Hag en un diell all eus hon henwiraouriezh e vez troet an dra evel-hen :

« Baronelezh ne ranner etre breudeur. »

Ar " varonelezh " .

Penaos kompren amañ ster " baronelezh " ha " dalc'h-douar ur marc'heg " ?

Lavaret em eus petra a voe anvet diwar 1450 an " nav baronelezh ", pe c'hoazh " henvaronelezhioù Breizh ". Ar renerien anezho a gemere ar renk kentañ

e-touez an holl uhelidi all, hag ar gwir o doa da leviañ Urzh an Noblañs er Breujoù. Lavaret em eus e oa un ensavadur na oa ket koshoc'h, d'ar muiañ-holl, eget eil hanterenn ar 15-vet kantved. N' eo tamm ebet ar seurt baronelezhioù a veneger e " Dalc'h-Azez ar C'hont Jafrez ".

En amzer-hont, adalek dibenn an 10-vet betek kreiz ar 15-vet kantved, perc'henn un dalc'h-douar pe un aotrouniezh bras a-walc'h, bet war-eeun digant dug Breizh hag o tougen gwazoniezh dezhañ, en doa ar gwir hag an dlead da gemer e lec'h e lez an dug pe en e parlamant, evit e aliañ hag e harpañ da ober barnedigezhioù. An neb en doa ar gwir-se a oa " baron an dug " pe " baron Breizh ", hag e zouar a veze anvet " baronelezh ". Dom Lobineau, en e " skridstudi war Varoned Vreizh " (chomet dornskrivet hepken), a lavar zoken, ha gant gwirionez, e oa e Breizh, en 11-vet hag en 12-vet kantved, " baronelezh ", " dalc'h-douar marc'heg " ha " dalc'h-douar marc'hegiezh " tost heñvelster.

Anat eo dre se e selle kemennadurioù an " Dalc'h-Azez " ouzh an holl zouaroù-noblañs war-bouez nebeut, - da vihanañ ouzh ar re o tont war-eeun diouzh an dug. An ordrenañs-se eo eta he deus peurziazezet da vat stad ar c'hiladdalc'helezh e Breizh. Ret e oa pouezañ war ar poent-mañ ha diskouez pegen grevus eo bet.

355

Ar parlamant meur.

Teurel evezh a dleer ivez ouzh an doare ma voe embannet an ordrenañs. An Dalc'h-Azez, savidigezh an henavelezh e Breizh, a zo bet hep mar, - evel ma voe lavaret gant reizh, - « un adaozadur deuet eus Bro-Saoz » (Marsel Planiol). Koulskoude, ne felle ket da Jafrez skeiñ un taol nerzh-beli. Bodañ a reas pennoù-bras ar vro evit kemer ali diganto.

« Er bloaz-mañ, 1185, » a skriv Ar Baot, « e talc'has an dug Jafrez hag an dugez Konstanza parlamant e kêr Roazhon, hag eno en em vodas an eskibien hag ar breladed all, ar varoned ha tud-a-stad all eus Breizh a-bezh, evit pleustriñ war gefridioù boutin ha kenvad ar vro. Ha Jafrez ha Konstanza, da heul emziviz hag asant ar breladed hag ar varoned-se, a embannas meur a ensavadur talvoudus ; en o zouez e rejont hag ez aozjont ul lezenn a-zivout ar - baronelezhioù ha dalc'hioù-douar ar varc'heien. »

N' anavezomp ket anvioù an holl varoned a gemeras perzh er " parlamant meur ". Darn anezho a zellez bezañ meneget, dre ma 'z int anvioù renerien eneberezh taer ha padus ar Vrezhoned ouzh mac'homerezh Herri II : da skouer, Raoul Felger, Eozen Pourc'hoad, gant o c'herent hag o c'heneiled, aotrounez Gwizhurieg, Roc'han, Kastell-Briant, Kastell-Jiron, h.a. Gwelout ar re-se er renk a enor en ur vodadeg dalc'het gant ur Plantagenet a ziskouez splann e oa kemmet-krenn ar renadur hag ar politikerezh. N' eus ket ezhomm muioc'h evit prouiñ e oa gwir an hengounioù dastumet gant " Kronik Sant-Brieg ", a lavar « e voe kuñv Jafrez II, deuet da vezañ dug Breizh, e-keñver ar bobl vrezhon keit ha ma vevas ».

An Dalc'h-Azez-se, o kadarnaat dirannaduster, ha dre se nerzh ha paduster an dalc'hioù-douar bras, ar gwellañ difenn ouzh ar gwaskerezh, ne oa ket bet aozet gant ur mac'homer. Setu perak hep mar en em zisklerias Raoul Felger hag Eozen Pourc'hoad, evel ma lavar an diell, a-du gant an adreizhadur ; rak Jafrez a ziskler enni ez eo bet graet gantañ evit plijout d' ar varoned.

Ne blijas ket d' an holl e Breizh koulskoude. Ne voe ket sevenet ken klok ha ma lavarer peurvuiañ, pell ac'hano. E-tro 1226, Herri Penteür a zistagas diouzh e gontelezh a Ouelou un drederenn tost da vat, baronelezh Kintin, enni 28 a barrezioù, evit reiñ d' e vreur yaouank Jafrez Botorel, evel dalc'h-douar hêrezhel. Diwezhatoc'h c'hoazh, re Roc'han a roas d' ur yaouaer kastellaniezh kaer Ar Gemene-Wegant, distaget diouzh o beskontelezhioù. Ha kalz skouerioù all a c'hallfed menegiñ.

356

Aozer " Kronik Sant-Brieg ", - a verve e galon evel kalon ar bobl, - goude bezañ eilskrivet testenn lezenn 1185 oc'h embann gwir ar mab henañ, a lavar ouzhpenn :

« Kalet-tre eo ar gourc'hemenn-mañ. Ne dle bezañ sevenet nemet war an douaroù ma ren enno dre henvoaz. Rak kement henvoaz a ya a-enep ar gwir a dle bezañ krennet muiañ ma c'haller. »

An heug-se rak an henavelezh, a-hed amzer emdroadur ar menozioù hag an ensavadurioù gladdalc'hel, a zeu eus ar spered kozh kelt-ha-brezhon, n' oad ket deuet a-benn da ziwriziennañ.

Marv Jafrez II.

An Dalc'h-Azez brudet-se a zo pennañ darvoud ren Jafrez II, an darvoud a bouez nemetañ.

Ne voe ket hir ar ren. Goulennet en doa Jafrez digant e dad, evit klokaat e lodenn, kontelezh Anjev. Degemeret-fall e oa bet e c'houlenn. Mont a reas neuze da Bariz (e 1186) evit kontañ e gerseen da roue Frañs, Fulub-Aogust, a gare kalz anezhañ, hag e bediñ da bourchas Anjev dezhañ e doare pe zoare.

Fulub-Aogust a brometas e skoazellañ. O c'hortoz, e klaskas reiñ diduamant da Jafrez keit ha ma vije e Pariz. Jafrez a blije dezhañ an tournamantoù. Unan a voe aozet a-ratozh evitañ. E-doug ur pennad-stourm e voe skoet gant tud ar bagad enep, ha taolet d' an douar diwar e varc'h. Roñseed ar stourmerien a dremenas war e gorf. Pa voe savet e oa brevet e holl izili. Fulub-Aogust a lakaas kerc'hat ar vezeged vrudetañ, ha prederiet e voe eus ar gwellañ. En aner. An dug Jafrez a varvas e Pariz d' an 19 a viz Eost 1186, ha graet e voe dezhañ gant roue Frañs obidoù war an ton bras en iliz an Itron-Varia.

E Breizh hiviz...

" The Light that Failed "

pe

Danevell ur veaj da Enez Eusa

P' edon o pazeal war gae ar Maltouterezh e Porz-Treñ, da c'hortoz ma vefe prest al lestr da skeiñ war-du Eusa, e kreden c'hoazh e oa bev ar brezhoneg en enezenn daoust ma ouien ervat edo war e ziskar eno evel e kement lec'h a zo e Breizh-Izel. Ne voen ket pell, avat, a-raok bezañ sklerijennet war e stad wirion mantrus rak, e-touez an dud a lestras en deiz-se, n' oa nemet J. Breton ha me o vrezhonegañ.

A-ziavaez d' un tourist bennak, paket-mat en o chupennoù koaret, hag un toulladig Brestiz gwisket kran, ne oa war al lestr nemet Eusaiz ha Moleneziz, aes anavezout ar re gentañ diouzh o doare, anezho gwazed yaouank, dreist-holl, o tont en-dro eus beajoù pell, ha div pe deir plac'h, sirius o dremmoù.

Edomp eta J. Breton ha me o vont da Eusa da dremen un nebeut devezhioù. Evidon, em boa gwelet alies dija an enezenn nemet atav eus a-bell. Pa verdeen war al listri-kenwerzh e oan tremenet meur a wech e-biou dezhi en noz hag en deiz. Pellik goude, e-pad an « iskis a vrezel » em boe tro alies-alies d' he gwelout adarre. Edon, neuze, war-vourzh ul lestr-avizer ha me « gédour bras en é sau ar er » pont, oc'h ober gward dirak mulgul Brest. An enezenn, avat, he doa bepred miret he c'hevrin evidon.

Ar wech-mañ, edon o vont da zilestrañ ha d' ober anaoudegezh da vat ganti. Kentoc'h du e oa ar menozioù a droe em spered diwar he fenn. Gwelout a raen kêriadenoù paour kollet er vrumenn, gwazed kozh ha kabac'h, aet skuizh gant o merdeadenoù pell, merc'hed, « merc'hed ar glav » na petra 'ta, hag int gwisket e du o vont-dont dibaouez, war-lerc'h o deñved, war al lann.

358

War vourzh ar Bugel Eusa - hennezh a oa anv hol lestr hag ur c'haer a hini e vije bet ma ne vije ket bet togn e fri - e stagis da cheñch menoz. Ur wech kuitaet ar Mulgul ha graet tro beg Sant-Vazhe e sklaeraas pep tra, evel pa 'z it er-maez eus un ti, teñval e ziabarzh. N' oa mui netra da herzel ouzh va sell. Edo ar vrumenn-veure o vont kuit a-dammoù hag o tizoleiñ a bep eil skoselloù digenvez hag inizi traezhek izel-izel, ar re-mañ ken kaer o anvioù : Benniget, Kemenez, Trielen, Balaneg, Banneg hag ar gaerañ : Molenez gant he Ledenez. Pa gaejomp eno evit ur vunutenn bennak nemetken nag a gerse am boe, paotr diboell ma oan, da vezañ chomet, en derc'hent, hep adkargañ va benveg-luc'hskeudenniñ, ken a-zevri e oan bet gant Kêr-Vrest. Un daolenn eus ar gaerañ ha lieslivek eus buhez an enezenn a oa eno dindan va daoulagad : div vag-pesketa ouzh ar c'hae gant o faotred o lakaat ar c'hevell er bourzh a-raok goueliañ !

* * *

E Porzh-al-Lann (1), war aod biz an enezenn, e tilestrjomp. Izel ar mor. Ur sav-mein uhel a-us d' hor penn. Diri-mein da skrapat ha moñsell al lestr o stekiñ garv, outo. Tud o c'hortoz an dreizhidi en nec'h. Saludoù, pokoù, briatadennoù ha goude, dibunadeg hir an dud o pellaat a-raok sevel er gweturioù ouzh o gortoz. Al lod brasañ anezho a bignas e-barzh daou gozh garr-tan boutin a loc'has kuit en ur vrañsigellat. Ur pennadig hent meinek o kildroenniñ ha setu ni o tont er-maez eus an draoniennig, a gas d' ar porzh, hag o tiplukañ war-c'horre an enezenn. Neuze ez en em ziskouezas deomp dindan stumm ur gompezenn

rust ha difraost, marellet a diez tolzennek uhel war an dremmwel. Enezenn deñval va huñvre, avat, a oa aet da vro lugernus heoliek-holl. An tiez strewet amañ hag a-hont, war vord an hent a stankaas ha setu ni erru war blasenn an iliz, penn hor beaj. Edo paotr an arc'hant e-kichen e garr, ur melegan, 30 vloaz bennak dezhañ, gwisket gant dilhad-labour lien glas. « Pegement ? » a c'houlennis outañ. « Un franc cinquante », a respontas, ur minc'hoarzh goapaus war e vuzelloù.

359

Kemer a rejomp ur ru vihan a weled ar mor er penn anezhi. Edo paotr an ostaleri a-dreñv d' e gonter. Ur vizaj dihegar dezhañ. N' helle ket reiñ deomp kambroù ha, koulskoude, en doa J. Breton pellgomzet eus an douar-bras evit mirout anezho. Ya, met ne c'helle ket. Edo o c'hortoz ul lestrad tud antronoz, sañset. Dipitet e oamp nemet ne zalejomp ket da gavout boued ha lojeiz en ostaleri dostañ. Nag en eil nag en eben n' edod kreñv war ar brezhoneg, anat e oa, hag, evit lavaret gwir, ur seurt kerse a savas ennon neuze da vezañ deuet eno. Re zisheñvel pep tra diouzh a ijinen hag a c'hortozen. Un enezenn heoliek-holl, ruioù o tiflukañ a bep tu war blasenn an iliz, stalioù o kinnig o marc'hadourezh, paotred yaouank o tremen tizh ganto war marc'hoù-tan trouzus-spontus, tud evel don hag evel doc'h, galleg plat leizh o genou ! E pelec'h e oa brezhoneg sasun an enezenn hag, ivez, ar merc'hed o tougen kañv d' o friedoù ? Ma ! joa an nevez-amzer hag an dibenn-sizhun eo a dride e pep lec'h, kentoc'h.

Goude ur verenn vat betek re, derou an endervezh a voe gouestlet ganin da gousket war vili, rust un tamm, ur wall-draezhenn. Pa voen dihunet ez ejomp war hor pouez war hent ar Feunteun-Velen, el Ledenez a zo e mervent an enezenn. Tiez mein solud, diginkl o zalbennoù, a oa amañ hag a-hont a bep tu d' an hent. Etrezo e verzemp Pradoù glas marellet a zeñved pe ar mor o lufrennaouiñ e bae Lambaol.

Ur ger brezhonek e-giz salud hag e voe a-walc'h evit toullañ kaoz gant ur paotr solud, kramennek e zremm, un tri-ugent vloaz bennak dezhañ. Ur gaozeadenn hir e voe e gwasked un ti dirapar. Tremenet en doa e vuhez-c'hour war al listri-brezel hag edo o vevañ diwar e retred evel an darn vuiañ eus e genvroiz. Bet e oa en Indez-Sina p' edo ar brezel o ren du-hont en amzer ar C'hallaoued ha pa gomzas eus ar marevezh-se e voe anat e from warnañ : « Un druez e oa ! War an ugent m' edomp ne zistroas nemet pemp ! » N' on ket sur ez eo dres ar sifroù a lavaras nemet e oa ken bras all an diforc'h etrezo. Ne vern ! Daoust m'en doa bec'h alies o kavout e gomzoù ne ziskrogjomp ket eus ar brezhoneg ha, pa gonte istorioù war ar verdeadurezh-vrezel neuze e oa e yezh hanter-c'hallek hanter-vrezhonek hag, a-wechoù, zoken e teue gantañ muioc'h a c'herioù gallek eget a c'herioù brezhonek nemet e oa aze bepred ar gevreadurezh vrezhonek evit stagañ an eil re ouzh ar re all.

360

Dilezel a rejomp an hent evit bale war ar geot a oa glas, hir ha fonnus. Gwellat boued d' an deñved ! N' oa ket nemeur anezho avat. Ein a veze gant o mammoù hag a bep tu o c'hleved o vegeliat. Redek a raent en hon raok da gaout o mammoù hag ur wech diarvar e sellent hardizh ouzhomp. Anat e oa diskar an enezenn e pep lec'h. A dra sur hor boa gwelet tiez nevez-flamm, e kostez Lambaol dreist-holl, nemet e oa ken niverus all an tiez dismantret hag an tiez serret-kloz o stalafioù hag o dorioù ; ar milinoù-avel, ken stank gwechall, n' oa mui nemet ar sichenn-vein ront anezho ; ar gwaskedoù mein pe vouted da wareziñ an deñved diouzh an avel hag ar glav a oa o kouezhañ en o foull ; kalz a barkeier, mogerioù mein sec'h en-dro dezho a oa gonezet gant al linad hag an drez.

Goude un dro a-hed an tornaod war ur c'haer a hentig letonennet e weljomp ur vaouez o treuziñ al lanneg, ganti daou benn-dañvad war he lerc'h. Edo o vont d' o stagañ ouzh ur peul en ur parkig tost d' ar wenodenn a valeemp ganti. « Amañ eo e kouskint neuze ! » a laoskis dezhi en ur dremen e-biou. « Ya, 'vat, amañ e kouskint... » a respontas-hi en ur c'hoarzhin. Derc'hel a reas da gomz. Aes e teue ar brezhoneg ganti. Ne oa ket kozh-kozh, kentoc'h e-kreiz he brud. O vezañ meneget an nebeut a zeñved hor boa gwelet e tisklerias deomp e oa ar c'hleñved warno hag e oa muioc'h anezho « en Norzh ».

Evel-se e voe hon devezh kentañ en Eusa.

* * *

Skuizhus e vefe danevellañ dre ar munud an tri devezh all a dremenjomp en enezenn. Bez' e voent re douristed a fell dezho gwelout ar muiañ a draoù ar gwellañ. Redek a ris, eta, eus ur penn eus an enezenn d' egile, a-wechoù va-unan-penn ha, peurliesañ, gant J. Breton. Mont a ris da Benn-ar-Run-Meur (2) hag e chomis ur pennad eno oc'h arvestiñ ouzh kein noazh enezenn dolzennek Keller hag he c'hastell postek digenvez a vezer souezhet da gavout eno. Chapel Sant-Per, Porzh-al-Lann ha Kroaz-ar-C'halvar gwenn-holl war an oabl glas ha savet en ul lec'h eus an digenvesañ a voe gweladennet ganeomp ivez. Goude, e voe tro Pern, gant e reier ramzel souezhus war un aod izel, ha Kadoran, faoutet don ha roget gant arsailh dibaouez an tarzhioù-mor, ar re-mañ, an daou lec'h kaerañ eus an enezenn, moarvat. Un druez eo, avat, ez eo displeberet Pern gant savadurioù divalav ha dilezet " Mererezh an Tourioù-tan hag ar Merkoù-mor ". Ne veze ket taolet kalz a evezh, kant vloaz 'zo, ouzh kaerder ar vro ha n' ouzon ket hag-eñ e vez taolet muioc'h hiziv !

361

Da lavaret gwir, ez on bet kentoc'h kerseet gant aodoù Eusa. N' int ket ken kaer ha ma vez lavaret. Na ken fromus ! E rannoù all eus Breizh e weler ken kaer-all, ma n' eo ket kaeroc'h. Sevel a ra, avat, eus an enezenn ur seurt boem graet gant he mojenn (« Qui voit Ouessant voit son sang »), hec'h istor (engann war vor Eusa), he zud hag o brud, he gweledvaoù ken eeun : tiez louet, uhel ha postek, o sevel war al lann noazh, a-us dezho, evel ur mesaer oc'h evezhiañ war e dropell, tour gwenn ha du Krec'h ; mogerioù mein en-dro d' al liorzhoù ha d' ar parkeier ; kloc'hdi dantelezh et iliz Lambaol ; ar vered e-kreiz ar vourc'h. Sed amañ penaos am eus-me gwelet Eusa.

E-keñver an trouz n' eo ket hini ar mor en deus skoet va spered ar muiañ met kentoc'h begeliadeg dibaouez an deñved a vez klevet a-hed an devezh. Kemend-all a c'hellfen lavaret eus ar goukoug a veze o kanañ e pep lec'h eus tarzhan deiz betek serr-noz.

Boem Eusa a zo graet c'hoazh gant ar blijadur da c'hallout bale dibreder, er-maez eus an hentoù, war c'heot touz Pern kerkoulz hag hini tev, evel ur pallenn gloan, ar Feunteun-Velen. En enez, evel e kornog Iwerzhon, ez en em santer dieub ha kement-se, evit an dud a vourc'h a hoazh o vale, pell diouzh safar ar vuhez a-vremañ, a zo, e gwirionez, dibriz.

Dibriz ivez e voe evidomp ar brezhoneg a glevjomp en Eusa. Kerkent ha dilestret e oa bet lavaret n' hor bije ket kavet kalz a dud o c'houzout anezhañ ha ni hon-unan a oa prest da soñjal e oa marv-mik. A-drugarez Doue, n' eo ket ! Toc'hor, avat, se 'zo sklaer. Koulskoude, niverus eo c'hoazh an dud en o oad gouest da vrezhonegañ. Ne ziskouez ket bezañ implijet kalz, avat, ha ne c'hellfemp ket lavaret pelec'h ha penaos e vez graet c'hoazh gantañ. Klevet hon eus, koulskoude, ur wech, merc'hed o varvailhat etrezo e brezhoneg. Evidomp-ni graet hon eus kalz gantañ en hon darempredoù gant an dud. Ar re en o oad, evel just, rak dianaoudegezh ar yaouankiz a ziskouez bezañ spontus, ken e c'hell bezañ hollek. Ur wech, o tont en-dro eus Niou-Izelañ, e komzis ur pennadig gant ur paotrig 12 vloaz dezhañ. Ne ouie ket brezhoneg, evel just, distagañ a rae " Créache" anv an tour-tan brudet ha n' anaveze ket, kennebeut, ster ar ger.

362

Koulskoude, ur wech all, o tont eus Pern ha Krec'h, pres warnon, e kollis va hent hag e rankis tremen dre barkoù mogeriet a oa nepell eus un ti. Chas a stagas da harzhal ha, neuze, e teuas ur plac'h yaouank e toull an nor da welout. Youc'hal a ris dezhi, dre ziv wech, e giz digarez : « Kollet 'm eus va hent ! » - « A ! ya ! » a respontas. Marteze e ouie houmañ un tamm brezhoneg bennak, evel paotr yaouank an taksi a lavare e komprene anezhañ hag a resisae, prestik goude, ar paotr fin ma oa, « hini Eusa » a zo, evel just, leun a c'herioù gallek pa vez kaoz eus traoù a-vremañ ha, rak-se, aes da intent.

Mont a raemp eta d' an dud e brezhoneg hep gouzout hag-eñ e oant brezhonegerien pe get. Ur mintin, aet pellik a-walc'h war hent Krec'h, ne gavjomp ket ar mirdi a felle deomp gweladenniñ. Ha me, neuze, o vont da gaout ur vaouez ha komz outi evel-hen : « Mar plij, emaoamp o klask ar mirdi ». Distaget fraezh em boa ar ger, c'hoant din gouzout ma c'helle bezañ komprenet. « A ! » emezi, « ar maerdi ? » - « Nann, » emezon, « emaoamp o klask an ti ma vez miret ennañ traoù kozh Eusa. » Souezhet a-walc'h e voen pa astennas he brec'h da ziskouez daou di kichen-ha-kichen e-kreiz al lann. Enno e oa ar mirdi !

Siwazh ! prenet e oant war zigarez adaozañ anezhañ. Bez' e rejomp, avat, anaoudegezh gant ar gward, Job Riou e anv. a gavjomp e-kreiz e borzh, e Niou-Izelañ. Hag heñ ur C'hab-Horner kozh, sonn evel ur peul ha treut, avat, evel ur geuneudenn, ur wir blijadur e voe evidomp komz gantañ rak e oa ur gwir vrezhoneger anezhañ hag, ouzhpenn, un den mat.

M' am eus danevellet kement-se eo evit diskouez ez eus c'hoazh un nebeut devezhioù kaer evit ar vrezhonegerien, c'hoant ganto gwelout an enez. Arabat dezho, avat, daleañ re !

363

A-gozh e sav diskar ar brezhoneg en Eusa, en deus skrivet din R. Hemon ha kemend-all a voe lavaret deomp, e brezhoneg, gant ar Maer. Abaoe pell ez a an holl wazed da verdeiñ war al listri-kenwerzh ha, gwechall, dreist-holl, e choment pell dizarempred gant o zud hag an enez. N' eo ket souezh, eta e teuent en-dro gant un toullad gerioù gallek. Penaos ivez komz eus al listri, ma verdeent warno - an teir pe beder-gwerni, gwechall, al listri-dre-dan, da c'houde ha, bremañ, gwashoc'h c'hoazh - hep ober gant gerioù gallek a veze talvoudus c'hoazh evit displegañ doareoù ar broioù estren.

Soudarded a zo deuet, ivez, d' ober brezelig war an enez hag emañ bepred eno o c'hazarnioù, siwazh ! rak ne dalvezont ket da gaeraat bourc'h Lambaol.

An Iliz ? Bremañ e ra ar veleien e Lambaol gant ar galleg evel hogos e pep lec'h e Breizh-Izel (3). Ar c'hiz eo ! " Diblaset " eo bet an aoter, evel just, ha lakaet en e lec'h ur seurt mogerig plastr a zo harpet outi, a-rez al leur, div pe deir delwenn gaer prizius. Gwelet am eus avat, e-pad an oferenn, un dra n' em boa gwelet e nep lec'h a-raok, ken e ris dre ziv wech un astenn gouzoug evit bezañ sur ne fazien ket. Ya, e-kichen an Ao. Person, edo ur " sivil " o reiñ ar gomunion ! Biskoazh kemend-all ! O vezañ goulennataet an dud, goude an oferenn (e brezhoneg, na petra) e ouezis e oa rener skol ar Frered an hini e oa.

* * *

Evel-se 'ta, e cheñch buan-ha-buan an traoù en Eusa hag a-benn nemeur e vo kemmet doare ar vro, ha ne vo ket bepred evit ar gwellañ !

Komzet em eus dija eus Pern displeberet gant savadurioù kozh. Hogen, kit da Grec'h, da skouer, hag ur wech gweladennet an tour-tan brudet - pezh n' hon eus ket graet - kit a-hed an aod, war-du ar reter. Va Doue benniget ! vilaet eo adarre an aod, en ul lec'h eus ar brudetañ war un dro gant ur pikol lab digor d' ar pevar avel ha gant al lastez a vez diskarget divezh war ar reier !

364

Ur wech all, edomp o vale war ur brav a hentig pa gavjomp un hent terdouaret o kas rag-eeun d' an aod. Soñjal a ris e ranke bezañ un draezhenn er penn anezhañ hag e oa bet graet evit an douristed ! Mont a ris eta da welet. Goloet e oa al lann gant paperennoù lous degaset eno gant an avel. E penn an hent e oa un tammig moger izel war ribl ur faoutenn en tornaod ha n' am eus ket ezhomm da lavaret petra e teuer da ziskargañ eno. Ur vezh ruz eo ! Pase poent eo ne dafe mui an aod hag ar mor da Gaoc'higell Veur ! Evit bezañ just, ret eo lavarout e vez graet heñvel e meur a lec'h e Breizh.

Me ' gave din ivez e oa Eusa ul lec'h didrouz ha didrabas gant nebeut a girri-tan. Va Doue ! na faziet e oan ! 120 a zo anezho, pezh a rank ober, well-wazh, unan evit unnek pe zaouzek den o chom war an enezenn (4). Kalz eo pa ouzer n' eo ket an enezenn 3 lev en hec'h hirder brasañ hag he led a-boan unan. Hag emañ, ouzhpenn, Lambaol er c'hreiz anezhi. Souezhet on bet memes tra, o kavout kozh kirri-tan o verglañ emañ hag a-hont, war ar geot. A-drugarez Doue, n' eus ket c'hoazh kalz anezho.

* * *

N' eo ket, evel just, evit dismegañsiñ Eusa em eus pouezet uheloc'h war an traoù ez on-me bet feuket ganto. An enez a rankfe bezañ kaer ha kempenn penn-da-benn, ha spi am eus e kompreno kement-se ar pennadurezhioù anezhi ha renerien " Park-an-Arvor ", peogwir emañ-hi e-barzh.

E gwir, a-raok mont di e oan tuet da grediñ e oa an enez ul lec'h diwallet, gwarezet, diouzh kalz a zrouk-nerzhioù hor sevenadurezh. N' eo ket ! N' eus ket hiziv a lec'hioù diwallet. Ur bedig-bihan eo Eusa, heñvel ouzh an hini ma vevomp ennañ ha, marteze gwashoc'h e meur a-geñver gant ar pell ma 'z eo ha gant ar mor a zo ret treuziñ evit mont betek ennañ. Pezh a zo sur eo e kaver eno an hevelep kudennoù da ziluziañ ha war an douar-bras : digresk ar boblañs (5), labour da gavout d' an dud, saotradur ar vro, trouz, marteze, a-benn nemeur, h.a...

365

Aes a-walc'h eo dija an darempredoù gant Brest ha Konk-Leon (listri bemdez nemet d' ar meurzh). Moarvat e teuint da vezañ aesoc'h ha stankoc'h a-barzh nemeur, dreist-holl e-pad an hañv. Un dachenn-nijal a zo dija e-lec'h ma c'hell douarañ nijerezed bihan. Kaoz a zo d' ober aozadurioù evit ma c'hellfe mont di ivez ar " sardoned-ramz " (super-frelons). Stourm a ra an darn vuiañ eus an dud a-enep ar walenn-se hag un druez e vefe ma teufent d' en em vodañ ha da blavañ a-us d' an enezenn rak, daoust d' ar pezh am eus lavaret war an tremen-distremen war an hentoù, e c'heller c'hoazh, a-drugarez Doue ! bevañ eurvezhioù kaer, peoc'hus ha sioul, ur bam ! war an tornaod pe en traoñ anezhañ, war ar bili pe war an traezh.

Evidomp, avat, 'm eus aon n' he devo ket Eusa an hevelep blaz, an hevelep hoal, pa vezo bet divrezhonekaet a-grenn, ma rank bezañ, un deiz. Evidon-me, plijet-bras on bet gant an enez met ne vijen ket bet kement ma n' em bije ket kavet eno kement a dud vat hag hegarat, prest bepred da vrezhonegañ ganin.

Neuze, daoust ha ne c'hellfe ket bezañ aliet d' ar vrezhonegerien, yaouank pe gozh, mont aliesoc'h di da dremen o ehanoù-labour ha pa ne vefe nemet un devezh, gwech ha gwech all, ha da vont hardizh d' an dud e brezhoneg ? Ha perak ne vefe ket savet eno ur " C'hamp ar vrezhonegerien pe ur skol-hañv, unan vrezhonek, avat ?

(1) " Porz Arlan " war ar gartenn douristel a oa ganeomp hag hor boa prenet en Eusa e ti ar Maer. " Porz Darland " hervez Cuillandre (Toponymie de l'archipel Ouessant-Molène, pp. 34/35). Souezhus a-walc'h ne gaver ket an anv-mañ e roll ar re savet a-ziwar anvioù-tud. Daoust hag e vefe neuze, eeun-hag-eeun, Porzh-al-Lann " a ran gantañ ?

(2) War ar gartenn douristel a oa ganeomp ez eo merket al lec'h " Penn ar Ru Meur ". Ret eo lenn, moarvat, ar " Run Meur ". Un druez eo n' eo ket reishoc'h ar gartenn-mañ rak anvioù-lec'h Eusa a zo brezhonek-holl hag ur blijadur eo evit ur gwir Vreizhad o lenn hag o distagañ. Alies, avat, ez int skrivet en un doare a laka anezho da vezañ diveizus. En hanternoz da " Benn-al-Lann " ha " Porzh-al-Lann " e lenner, da skouer, " Porz Ac'hea " war ar gartenn, " Porz Ahéah " reizhet " Aheac'h " e Toponymie. Ha ne vefe ket " Porzh-ar-C'hae " ? N'am eus ket kavet, evit gwir, kalz a sklerijenn e labour Cuillandre.

Un dra vat e vefe embann, ha pa ne vefe nemet evit an douristed, ur gartenn eus

Eusa gant an anvioù reizhet-mat. Un afer vat e c'hellfe bezañ ouzhpenn.

366

(3) Ar veleien o deus, en Eusa, ur seurt bered dezho o-unan a-dreñv d' an iliz. Koant eo ha dalc'het e-ratre. Tra souezhus : war an holl vein-bez a zo enni ez eus enskrivadurioù gallek nemet war unan : hini ur beleg eus ar Veljik a gavas repu en enez e-pad ar brezel-bed kentañ. Ur beleg mat a gare ar Vretoned e oa anezhañ, moarvat, rak pep tra a zo displeget ez hir war e vez e brezhoneg. En iliz, hec'h-unan, n' am eus gwelet ger brezhonek ebet. N' eo ket heñvel avat e chapel Sant-Per, er reter. Gwerennoù livet, savet gant Toulhoat, a zo bet lakaet er prenester anezhi e 1952, ha setu pezh a c'heller lenn warno : 1 - « Savet eo a varo da veo - pignet eo d' an nenvou » ; 2 - « Skuilha a rin va spered war pep den » ; « 3 - « Mari a zo douget d' an nenv, korf hag ene » ; « 4 - Eurur e vezin galvet gant an holl boblou ». Er vered war an taolennoù o tegas soñj eus an dud lazhet er brezel 1914-1918 e lenner : « Eussaiz ho pet sonj euz an dud a zo maro evit ar vro ». E-kreiz ar vered e lenner ivez : « Eussaiz ho pezit sonj ».

Ret din lavarout ivez e voe kanet ur poz hepken eus ur c'hantik brezhonek e fin an oferenn m' on bet.

(4) Hervez an Ao. Maer, un den hegarat anezhañ, ez eus bremañ 1.816 den oc'h ober o annez en Eusa, 250 anezho o verdeiñ war al listri-kenwerzh hag un hanter-kant all war al listri-brezel. Anat eo e vevont, ha lod anezho gant o familhoù, er-maez eus an enez an darn vuiañ eus an amzer. Neuze, e c'heller krediñ n' eus ket muioc'h eget 1.200 pe 1.300 den o chom atav war an enez. Ret e vefe derc'hel kont ivez eus ar yaouankizoù o vont d' ar skol war an douar-bras.

(5) Hanter-kant vloaz 'zo e oa ur miliad tud ouzhpenn o chom en enezenn. Er bloaz 1886, poblañs enez Eusa a save da 2.307 den. Evel ma 'z eo he gorread 1.550 hektar pe 15,6 km² e oa 148 den dre g-km² o chom war an enez paour-mañ, da lavaret eo war-bouez div wech kemend-all hag er c'hwec'hkorneg en e bezh a vez sellet outañ evel pindivik. « N' eus ijinerezh ebet na kenwerzh en Eusa. Ijinerezh al ludu-bezhin, ken pouezus-all en inizi, a zo dianav eno, ar bezhin o vezañ implijet da demzañ an douar. Ar pesketaerezh, kaset en-dro gant un 30 bennak a vigi, a zo nebeut a bouez dezhañ, gant an diaes ma vez ar merdeñ tost d' an enezenn. Palaret e vez an douar gant ar merc'hed, ar wazed o vezañ o verdeiñ pe war-vourzh listri ar Stad, pe war-vourzh al listri-kenwerzh. 800 hektar, da lavaret eo war-dro an hanter eus gorread an enezenn a zo dindan eost. Heiz, avaloù-douar, kerc'h ha segal a vez eostet. Un 30 hektar bennak a zo gouestlet d' al louzoù-kegin.

« Enez Eusa, ma 'z eo an dour fonnus ha mat-mat enni, a vage gwechall ur ouenn gezeg bihan prizet-dreist a zo aet da get hiziv. »

Hervez " La Bretagne Maritime " (Breizh ar Mor) gant B. GIRARD, ar Roc'hell-war-vor, 1889.

Al Levrioù

" **Ishi e daou ved** " gant Teodora KROEBER, 340 pajennad ennañ hag ivez 5 kartenn, 15 tresadenn hag 31 luc'hskeudenn. Troidigezh c'hallek ul levr amerikan embannet gant Plon, 1968.

Ma 'z eo c'hoavezet ganeoc'h tremen e-biou da beorien hep ti nag aoz, en o c'hluh e toull un nor pa 'z eo garv an amzer ha m' hoc'h eus soñjet er poanioù gouzañvet ganto, neuze e c'hellot ijinañ marteze petra a droe e spered Ishi pa reas e venoz, hag heñ peurzivi ha trec'h, mont da gaout e enebourien washañ : an Amerikaned. C'hoarvezout a reas kement-se e Kalifornia d' an 29 a viz Eost 1911 ha " sheriff " Oroville, ha ne ouie ket petra ober gant an den dinoaz-se, hel lakeas dindan alc'houez, en toull-bac'h.

Piv e oa Ishi eta ? Un Indian gouez, ur C'hroc'hen-ruz, un 40 vloaz bennak dezhañ, kastiz ha marnaoniet, losket e vlev gantañ ha noazh dindan gozh bilhoù o kouezhañ eus e ziskoaz e-giz ur "poncho ". Ar vrud a redas emberr dre ar vro e oa bet paket un Indian gouez, pa gave d' an holl ne oa mui anezho, hag e voe fromet meur a hini gant ar c'heloù souezhus-se. Daou zevezh war-lerc'h e tegemere ar " sheriff " ar pell lizher-mañ : « *Kemenn a ra kelaouennoù kemeridigezh Indian gouez o komz yezh dianav a-grenn eus ar meuriadoù all. Plijet kemenn din, war va c'houst, ha gwir eo pe get. Ma 'z eo gwir mirit Indian ken e tegouezho kelenner Skol-Veur (ar) Stad a ray war e dro hag e warezo. Afer a-bouez e-keñver istor henvroiz* ».

Kaset e oa bet ar bellskridenn gant Skol-Veur Galifornia ha, nebeut goude, ez errue war an dachenn ur c'helenner a oa gantañ en e valizenn e c'heriadurioù indianek. Klask a reas toullañ kaoz gant an den gouez ha bec'h a voe gantañ o klask kompren anezhañ. Ar gudenn a oa, da gentañ, klask gouzout peseurt yezh e komze. Kalz a arnodennoù a chomas difrouezh. Nag a levnez, avat, pa gouezhjont a-benn ar fin war ur ger anavezet ganto o-daou. Ur ger yanaek an hini e oa ! Rak-se e oa an den ur Yana anezhañ, hag heñ ezel eus ur meuriad a veve en hanternoz Kalifornia ha kaset da get, pellik a oa, war a greded. E gwir, Ishi a oa anezhañ an den nemetañ eus e bobl a oa deuet a-benn da vevañ en e frankiz war zouar e dadoù kozh. Evel ma n' oa netra da damall dezhañ e voe lezet da vont gant ar c'helenner peogwir e plije da Skol-Veur Galifornia soursial outañ. Tremen a reas eta ar peurrest eus e vuhez e Mirdi an Denoniezh, a oa stag ouzh ar Skol-Veur, hag eno eo e varvas e miz Meurzh 1916.

Istor Ishi, a-raok ha goude ma 'z eas da vevañ gant an Amerikaned, eo he deus skrivet Teodora Kroeber, ha hi skoazellet el labour-se gant he fried, ar gouizieg Alfred-Loeiz Kroeber, rener Mirdi an Denoniezh e Sant-Fransisko hag aozer un " Dornlevr diwar-benn Indianed Kalifornia ".

Bevañ a rae ar Yanaed - 2.000 pe 3.000 anezho en holl d' an holl - er menezioù en hanternoz Kalifornia, en ur vro a oa 6.000 km² ar gorread anezhi. Tud lorc'hus, kalonek hag ijinus a oa anezho hag aon razo o doa ar meuriadoù a veve en traoniennoù. Rannet e oant, avat, etre pevar ismeuriad. Ishi a oa ezel eus hini ar c'hreisteiz : ar Yanied. Ma teue an holl Yanaed a-benn d' en em gompren etrezo ne veze ket bepred hep poan. Ur yezh heverk e oa ar yanaeg rak disheñvel e oa hervez ma veze komzet gant ar wazed pe gant ar merc'hed. Berroc'h e veze ar furmoù implijet gant an eil. Da skouer, « un den » e yanaeg gourel a veze lavaret « yana », gant an taol-mouezh war « ya », hag e yanaeg gwregel « yah », en ur silabenn hepken, an « h » o vezañ berr ha c'hwezhadennet taer (p. 50). Koulskoude, ne veze kement-se un diaester nemet evit an estrañjourien, gwazed ha merc'hed oc'h anavezout an eil yezh hag eben.

Ti-annez ar Yanaed a veze krenn ha begek. Ennañ e veve an tiegezh a-bezh hag a-wechoù meur a ziegezh. Un ti dezho o-unan o doa ivez ar wazed. Ne veze ket

niverus an tiegezh indian ha setu perak, pa c'hane ur bugel, e veze degemeret gant levez ha graet war e dro gant aked ha karantez.

Dre ma veze klouar an amzer en o bro e veve ar Yanaed hogos en noazh, a-ziwar bleud mez dreist-holl. Debret e veze ganto ivez kig eog ha kig demm, kriz pe vogedet, frouezh ar c'hoadoù ha gwrizioù 'zo. Ne labourent ket an douar.

Bevañ a rejont evel-se, evurus a-walc'h war a seblant, betek ar bloaz 1844, pa dizhas ar Veksikaned o bro ha pa lodennas etrezo gouarnamant Mec'hiko an douar e traonienn ar stêr Sakramento. Goude, e voe anavezet gwirioù ar berc'henned nevez war o atantoù gant gouarnamant ar Stadoù-Unanet.

War washaat ez eas stad ar Yanaed pa voe kavet aour e stêrioù Kalifornia, er bloavezh 1849. Kregiñ a reas, neuze, ar glaskerien aour da vont etrezek ar vro-se hag e teujont eno niverusoc'h-niverusañ. Da vont betek ar stêrioù aour hag an aouregi e treuzent bro ar Yanaed. Unan eus an hentoù ma valeent gantañ (" Old Lassen Trail " a vez graet anezhañ) a rae tro ar Menez Lassen, diouzh tu ar c'hreisteiz hag a zaouhantere bro ar Yanied. Er bloaz 1872, pa dizhas Ishi e 10 pe 12 vloaz, ne chome mui, hervez, nemet un ugent pe un tregont Yana bennak, e kreiz hag en hanternoz ar vro. Evit ar Yanied, meuriad Ishi, a veve er c'hreisteiz, e kreded e oant bet kaset da get.

22 vloavezh, eta, a oa bet a-walc'h evit peurzistrujañ ar Yanaed. En em zifennet o doa graet gant kalon. Petra a c'hellent ober, avat, a-enep an ermaezidi niverusoc'h hag armet gwelloc'h egeto ? Displegañ a ra Teodora Kroeber penaos e voe graet al lazhadeg-se. Daoust ma 'z eo diaes-diaes niveriñ ar muntroù sevenet gant tud an daou du, anat eo e voe kalz nivuroc'h ar Yanaed lazhet eget an Amerikaned. Skrivañ a ra-hi : « Ne ouzomp tra diwar-benn ar pezh a zo c'hoarvezet er menezioù pe en traoniennoù enk a oa treuzet gant al " Lassen Trail " nemet diwar ar brud pe diwar danevelloù rouez a-walc'h e ve. Evel-se, evit ar marevezh ma voe sevenet peurzistruj ar Yanaed e c'heller menegiñ 600 skouerenn eus Yanaed drouklazhet a-unanoù ; gwechoù all e vez komzet eus « meur a hini », eus « kalz » hag eus « unan bennak » ; a-ziwar seurt kementadoù diresis ne c'heller dont da niver hollek ebet ha se kuit eus ar muntroù n' o deus lezet roud ebet en dielloù. » A zo sur, avat, e voe graet mat al labour mezhus-se.

369

A-drugarez da Ishi - un den mat ha dedennus anezhañ - ha d' an dud a gemeras soursi anezhañ e welomp heul didruez an abegoù a vountas an daou ved, an hini « sevenet » hag an hini « gouez », da sevel an eil a-enep egile ha d' en em gannañ. Gwelout a reomp ar Yanaed - tud kalonek ma oant - o klask derc'hel da vevañ hag o kouezhañ war an dachenn an eil re war-lerc'h ar re all, ken na chomas mui nemet un den hepken a voe, hiviziken dispi e stourm digenvez.

An istor rangalonus-mañ eo he deus Teodora Kroeber danevellet deomp ken resis ha ma c'helle. Ma n' eo ket deuet a-benn eus he zaol eo dre ma oa berr ganti an danvez istorel peogwir, evel ma lavar, « kalz muntroù n' o deus lezet roud ebet ». Arabat disoñjal e voe skoazellet gant he gwaz hag eñ gouiziek-bras war gement tra o tennañ da Indianed Kalifornia. Bez' e ranker bezañ anaoudek outo eus o labour. Ken diglok bennak hag e c'hell chom, anat eo hon eus afer eno ouzh un oberenn wirion, awenet gant ar garantez a vage an daou bried evit an Indianed hag evit ar paour kaezh Ishi, un oberenn na c'heller ket lenn hep bezañ fromet don hag hep merzout braster ar c'holl a zo bet evit an Denezel gouenn lazhadeg Indianed Amerika an Hanternoz. Nag hep kaout mezhus kennebeut !

L. ANDOUARD.

NOTENNOÙ

Hor Mignoned

Erwan VALLERIE ha Claire CASTELLAN e wreg zo laouen da gemenn deoc'h eo kresket an dud en ti, d' an 3 a viz Gwengolo 1971. Gwenn a reer eus ar plac'hig.

Kañv

Klevet hon eus keloù marv Erwan GELEZEAU e La Rochelle. Koumanantet e oa d' hor c'helaouenn abaoe ouzhpenn 13 vloaz.

Aet eo ivez da anaon an Dimezell Odette CHEVILLOTTE e Brelez. A-bell zo e oa en emsav ha koumananterez feal d' " Al Liamm ".

Kinnig a reomp da diegezhioù hor mignoned hor gourc'hemennoù a gengañv.

Priz " Al Liamm "

Moulet ez eus bet 790 skouerenn eus niverenn 145 " Al Liamm " ha 840 skouerenn eus an niverenn 146. An niverenn diwezhañ-mañ he deus koustet 3.215,65 lur.

660 Koumananter

Kontañ a rae ar gelc'hgelaouenn e miz Here 660 koumananter, un toullad lennerien nevez o vezañ deut goude teuzidigezh " Al Liamm " gant " Ar Bed Keltiek ". Spi hon eus e kavimp amzer d' ober a-walc'h a vrud evit tizhout hep re a zale 700 lenner.

Deziadur Godell Al Liamm

Deut eo er-maez Deziadur godell Al Liamm evit ar bloavezh 1972. Ar skeudenn a ziskouez tiez e Enez Eusa. Ar priz a zo 8,00 lur an dek. Evel boaz, lod a gaver war o c'hein bruderezh evit Al Liamm hag ur c'hrennlavar, lod a zo gwenn, war re all e kaver ar meneg " Bloavezh mat ".

Kasit ho chekenn gant ho koulenn da R. Huon, c.c.p. 1629 14 Rennes. Distaol 1/3 adalek 50 skouerenn.

Skol " Ober "

O vezañ ma kresk bep bloaz niver ar Vretoned c'hoant dezho deskiñ pe beurzeskiñ o yezh, adaozet eo bet Skol " Ober ", ha savet ur sekretouriezh all.

Hiviziken e vo ret skrivañ da : Skol " Ober ", e ti an Itr. de Bellaing, 28, rue des 3 Frères Le-Goff, 22 - Saint-Brieuc (Tél. 33- 26-66), evit goulenn diskleriadurioù diwar-benn ar gelennadurezh-se, hag en em skrivañ evit heuliañ ar c'hentelioù. (Lakaat ur golo gant un timbr evit ar respont.)

Skol " Ober " a c'houlenn roll al levrierien o werzhañ levrioù-deskiñ Al Liamm, e bep kêr, evit aliañ an danvez-skolidi da brenañ al levrioù e-lec'h m' emaint o chom, ha dre-se, ober bruderezh evit al levrierien-se.

Ar brezhoneg unvan eo a vez implijet gant Skol " Ober ".

An Trec'h Kentañ e 1971

Aozet eo bet ar bloaz-mañ evel bep bloaz arnodenn an Trec'h Kentañ e-pad kampoù an hañv. Degemeret eo bet :

- 1 - Herve KERRAIN, meneg mat-tre gant meuleudi ar varnerien.
- 2 - Bernez KADORET, meneg mat-tre ha meuleudi ar varnerien.
- 3 - Pierrette LONCLE, meneg mat-tre.
- 4 - Kirill GIRAUDON, meneg mat-tre.
- 5 - Alan BOTREL, meneg mat.
- 6 - Gwenole GEVEL, meneg mat.
- 7 - Serj Bouczo, meneg mat.
- 8 - Loig CHAPEL, meneg mat.
- 9 - Yolen BEAUGRAND, meneg mat.
- 10 - Deneza MAGUER, meneg mat a-walc'h.
- 11 - Job COTEL, meneg mat a-walc'h.
- 12 - Gweltaz DURAND, meneg mat a-walc'h.
- 13 - Colette VINCENT.
- 14 - an Ir. D'HAESE.
- 15 - Anna AR GOFF.
- 16 - Katell KALVEZ.

Aozet oa ar bloaz-mañ an Trec'h Kentañ gant KEVREDIGEZH AN DESKADUREZH NEVEZ (K.D.N.), 12 straed Astor, Kemper.

Pelec'h prenañ ho levrioù

Setu amañ roll al levrierien bouezusañ hag a ra ur striv evit gwerzhañ al levrioù a embannomp. Evel just e kendalc'hit da brenañ ho levrioù war-eeun, dre lizher, digant J. Queillé, ar gounid o vezañ brasoc'h evit Al Liamm. Koulskoude e c'hellit, ur wech an amzer, mont er stalioù-mañ da brenañ levrioù brezhonek ha dreist-holl al levrioù all oc'h eus ezhomm anezho.

Brest : Librairie de la Cité, 57, rue de Siam. - Delestre, 1, avenue Clemenceau. Le Breton, 35, rue E. Zola - Jouanneau, 75, rue de Siam.

372

Kemper : Kemere-Jaouen, 2, rue du Roi-Gradlon. Le Dault, 16 bis, rue R: Madec. Guivarc'h, Librairie de l'Odét, Bd Kerguelen. - Jacob, place Terre-au-Duc. La Pléiade, 34, rue Kereon. - Ravy, 40, rue Kereon.

Konk-Kernev : Librairie Concarnoise, 30, avenue de la Gare. - La Bouquinerie, 22, avenue de la Gare.

Douarnenez : Nayel, rue Duguay-Trouin. - Jugant, 14, rue Voltaire.

Montroulez : Le Goaziou, 1, place E.-Souvestre. - André, Grand' rue.

Lesneven Doumap, 13, rue du Général-de-Gaulle.

Kastell-Paol : Dulac, 15, Grande-Place.

Sant-Brieg : Person, 17, rue St-Goueno. - Genie, 14, rue St-Goueno. Osty, rue St-Gilles. Basquin, 13, rue St-Guillaume. Les Presses Bretonnes, 12, rue Poulain-Corbion.

Lanuon : Le Pape, 6, rue J.-Savidan.

Gwengamp : Le Gallou, 29, place du Centre.

Perroz : Margraff, place A.-Briand. Librairie de la Bove, 36, Cours de la Bove.

Spezet : Menez Kamm.

An Alre : Lie Bezannier, 13, rue Barré.

Dinarz : Musée Breton, 8, rue du Casino.

Dinan :

Landreger : Moreau, place de la Cathédrale.

Kistreberzh : " Saint-Hervé ", Mlle Marquer.

Sant-Ke : Galeries du Portrieux, 21, rue du Commerce.

Roazhon : Librairie de Bretagne, quai Chateaubriand. Les Nourritures Terrestres, 19, rue Hoche.

Ar Baol : Breiz, 4, allée des Ormeaux.

Naoned : Librairie de la Cité, 14, rue d'Orléans. - Ti Breiz, 15, rue de Verdun.

Lille : Le Furet du Nord, place du Général-de-Gaulle.

Pariz : Nouvelle Librairie Celtique, 108 bis, rue de Rennes. -Gibert, 2, rue de l'Ecole-de-Médecine (6e).

Cardiff : Siop y Triban, 6, Wyndham Arcade (Kembre).

Bruxelles : Maison des Langues Vivantes, 9, rue des Pierres.

Pa vez tu lakait anezho da c'houzout ez eo bet brudet o zi gant Al Liamm.

Devezhioù-studi Skol An Emsav e Bulad

Dalc'het eo bet devezhioù-studi dibenn hañv Skol An Emsav e Bulad-Pestivien, etre Gwengamp ha Kallag, adal ar sul 5 a viz Gwengolo hag ar yaou 9 a viz Gwengolo 1971.

Un 30 bennak a skolidi o deus kemeret perzh en devezhioù-studi-mañ a zo bet gouestlet da gentañ da studi ar yezh.

Taolenn niverennoù diwezhañ ar gelaouenn " Imbourc'h "

Niverenn 17 - 31 Mae 1971 :

Distro ar sarpant-mor, gant Youenn Olier.
Ar reverzhi c'hlas, gant Jakez ar Bihan.
War-du ar bloaz 2000, keleier armerzhel.
Keleier eus Bro-Euzkadi.
E ser afer nevez ar skritur, gant Yeun Gourvez. Lizher d' an embanner.

Niverenn 18 - 30 Mezheven 1971 :

Metou hag Emsav : daoust hag an Emsav a zle bezañ ur metou pe ur framm ?
Petra a c'hoarvez e Norzh-Iwerzhon ? gant Yann Morvan.
Kenvarc'had ha broioù keltiek, gant Jakez ar Bihan.
Akediñ ouzh ar yezh, gant Jil Ewan.
A-dreuz ar wask vrezhon : SAV-BREIZH.
Ar stourm evit ar vro : KUZUL AR BREZHONEG.

Niverenn 19 - 31 Gouere 1971 :

Rakwel war dazont E. B. V. pe amsteriegezh an oberemsavel, gant Y. O.
Ar stourm evit ar vro.
Ur sell auzh an trede bed, gant Jakez ar Bihan.

Niverenn 20 - 31 Eost 1971 :

Devezhioù-studi hañv S. A. E. e Rosporden, 2-12 Eost 1971.
An Emsav ha luskadoù an enep-stuziadur (skrivadenn).
Roll ha lec'h an devezhioù-studi, gant F. F.
Lizher e ser an embannerezh brezhon.
Daeadenn an Arvorig, gant Henri Deligny.
Notenn diwar-benn talvoudegezh pleustrek an devezhioù-studi gant Y. O.
An Emsav hag al luskadoù kenelelour-kleizour.

Niverenn 21 - 30 Gwengolo 1971 :

Adsav, gant Emyr Llewelyn, troet gant F. F.
Emsav ar yaouankiz ha kouerion an " Ouest " pe Mao e Breizh, danevellskrid
stourmerion vaoat e Breizh, troet gant P. B.
Sellboent Y. Kêrvorc'h : Enez ar C'huzh-Heol.
Dislavaroù an Emsav ; pennad kentañ : dislavar an Istor.
Steuñv-labour an Emsav evit ar bloaz da zont.

Imbourc'h, kelaouenn bolitikel (miziek). - Koumanant-bloaz : 20 lur. - Y.
Ollivier, c.c.p, 1 534 25 Roazhon.

Devezhioù-studi hañv Skol An Emsav e Rosporden, 2-12 Eost 1971.

Hevlene eo bet dalc'het devezhioù-studi bras Skol An Emsav e Rosporden, etre an
2 hag an 12 a viz Eost. Degemeret eo bet ar berzhidi war un dro e " Penn-ar-Pont
" en oaled ar vicherourien yaouank hag en ur skol barrez evit ar c'hentelioù.

374

Al labour graet e-kerz an devezhioù-studi-se hag an tuadurioù nevez a zo
frouezh al labour bet graet daou vloaz bremañ hag an enklaskoù graet evit
gwellaat atav hon doareoù ober. Gellout a reer menegiñ meur a gemm a ziskouezo o
zalvoudegezh dre ar pleustr :

1. - Devezhioù-studi kentañ Skol An Emsav e oant e gwirionez. Betek-henn e oa
bet aozet an devezhioù-studi gant Emsav ar Bobl Vrezhon. Hogen chom a rae
amsteriek al labour da ober en devezhioù-studi dre ma veze graet dreist-holl ur
stummadur war ar yezh, labour E.B.V. o vezañ politikel. Aozet eo bet devezhioù-
studi S.A.E. eta evit resisaat labour an aozadurioù hag an emsaverien evit ma
c'hello S.A.E. bezañ frammet buanoc'h ha mont en-dro evel un aozadur emren.

2. - Klasket eo bet kaout muioc'h a zarempredoù gant tud ar vro peogwir e oa bet meneget ar si-se e devezhioù-studi Kistreberzh 70. War an tu-se eo bet graet ur paz en a-raok e Rosporden ; henn gwelet e vo e rentañ-kont an obererezh.

3. - Kresket e vo niver ar prantadoù-studi evit meur a abeg :

- o vezañ ma kresk niver an dud hag e vo diaesoc'h-diaesañ o bodañ holl a-gevret ;
- peogwir eo diaes da zarn bezañ dieub evit ur mare resis '
- peogwir e vo aozet devezhioù-studi rannvroel aesoc'h evit tud ar rannvro, krouiñ kreizennoù nevez, lakaat muioc'h a dud da gemer perzh el labour, skañvaat labour ar c'hreizennerezh.

Gellout a reer rannañ e teir lodenn obererezh an devezhioù-studi :

1. - Al labour stummañ war ar yezh a veze graet dreist-holl gant kentelioù diouzh ar beure : div eurvezh kentel war ar brezhoneg, un eurvezh studi danvezioù all : istor, armerzh, douaroniezh, tironiezh, jedoniezh. Trizek kelenner o deus kemeret perzh el labour-se evit pevar rummad. Graet ez eus bet ouzhpenn-se ur gentel skouer war ar brezhoneg evit ar gelennerien pe an danvez kelennerien.

Bodadoù komz o doa ivez da bal boaziañ an deraouidi ouzh ar yezh hag o lakaat da gomz. Alies avat e oant bodadoù komz war un danvez politikel.

2. - Ar bodadoù komz pe gendaelioù a oa o danvezioù :

- Ar vuhez e brezhoneg e kêr hiziv.
- Emdroadur armerzh Breizh.
- Unyezhegezh, divyezhegezh.
- Burutelladennoù da heul ur gendael gant un ezel eus ar P.S.U.
- An emskiantekaat broadel er skolioù e Breizh.
- Skol an Emsav : ar roll a dle c'hoari e Breizh hag an arvezioù pleustrek.
- Feulster ha difeulster e Breizh.
- Penaos komz gant an dud er-maez eus an Emsav.

A-hend-all e c'heller menegiñ div gendael all a denn war un dro d' an darempredoù diavaez ha d' ar stummadur war gudennoù ar vro :

- ur gendael gant un ezel eus ar P.S.U. e galleg : " Perak ez on brezhon ; perak ez on sokialour "
- ur gendael gant daou ezel, dileuridi eus ur sindikad gounideien (labourerien-douar), diwar-benn ar gounezerezh e Breizh hag e Penn-ar-bed ha diwar-benn ar gudenn vroadel dre vras.

375

3. - En trede lodenn-mañ (an darempredoù diavaez) eo ret menegiñ ar bruderezh graet gant pep hini o komz gant an dud e Rosporden, gant ar gazetennieren (" Ouest-France " hag an " Télégramme "), ar bruderezh graet e festoù-noz (Tregunc, Landelo ha Kerrien). Da heul fest-noz Kerrien ez eo bet embannet war an " Télégramme " (embannadur Rosporden, 12 Eost 70) ur rentañ-kont a-du gant Skol An Emsav o doa graet bruderezh evit an Emsav er fest-noz-se hag o doa tamallet « galvidigezh touristel Breizh ».

Un oferenn vrezhonek a zo bet aozet ivez e Nizon an 8 Eost, lec'h m' o deus kemeret perzh un toullad tud eus an devezhioù-studi.

D' ar sul a 8 viz Eost ne voe na kentelioù, na kendaelioù. E-pad an ehan-se e c'hellas ar berzhidi ober anaoudegezh gwelloc'h etrezo o vont da vale dre ar vro.

Un dalc'h arnodenniñ evit an Trec'h Kentañ zo bet aozet ar merc'her 11 Eost.

Da glozañ an devezhioù-studi e voe ur gendael evit dezrann al labour bet graet

e-pad an dek devezh-se. Evit dezastum ar barnadennoù, e c'heller lavarout e vez kavet mat bepred ar prantadoù-studi-se, peogwir ez int un doare d' en em stummañ ha da gejout etre tud a labour e lec'hioù disheñvel. Prientiñ a reer eno al labour da ober. An holl a anzav ez eo frouezhus an hentenoù nevez dibabet hol laka da gaout darempredoù gant tud ar vro hag an aozadurioù all e Breizh.

Ma 'z eo mat ar bodadoù komz evit studiañ gwelloc'h ar yezh, n' int ket ken talvoudus evit prederiañ, d' an nebeutañ evit an deraouidi.

Evit ar c'hentelioù ez eus bepred un nebeut araokadennoù d' ober. Da gentañ eo ret adlavarout ne vo tennet ar gounid brasañ eus an devezhioù-studi nemet mard eo bet studiet aketus a-walc'h en a-raok gant an deraouidi.

Diouzh un tu all, ar c'hentelioù war ar yezh ne glotont ket gant an holl daoust d' ar pevar rummad disheñvel, rak live ha tachenn anaoudegezh pep hini zo disheñvel alies, dreist-holl er rummadoù uhelañ. Muioc'h-mui e verzer an ezhomm e zevezhioù-studi arbennikaet a gemerfe lec'h kentelioù re lennegel evit darn ha ket a-walc'h evit re all. Un dra ret e chom avat evit an holl kenderc'hel da studiañ evit pinvidikaat o yezh.

Er rummad III (eil pe trede bloavezh) e vo mat studiañ testennoù gant gerioù arnevez ha displegañ war-un-dro ar yezhadur. Evit ar rummad II e vefe ret kavout testennoù difetisoc'h hogen gant frazennoù boutin, ha displegañ ar yezhadur war un dro, hervez hetoù ar skolidi.

376

Eil levrenn an Testamant Nevez : Oberoù, Lizheroù, Diskuliadur.

Setu dindan stumm ul levr 350 pajenn, eil lodenn an Testament Nevez, da lavarout eo : Oberoù an Ebestel, Lizheroù Sant Paol, al Lizher d' an Hebreed, al Lizheroù katolik, an Diskuliadur.

An droidigezh a zo ken resis ha ma c'hell bezañ, daoust na chom ket bepred da dreiñ ger evit ger, hebreegadurioù re bonner. Notañ a ra gant aked an troidigezhioù disheñvel a c'hell bezañ roet evit arroudoù diaes a zo.

E penn kentañ pep lodenn e kaver un digoradur, o tegas an notadurioù a zo ezhomm anezho da gompren mat an destenn : bloaziad, degouezhioù, mennad an oberour.

Ul labour a-gevret eo bet an droidigezh-mañ ivez evel hini an Avieloù. Evel-se, Oberoù an Ebestel a zo diazezet war destenn an Ao. Kollo, person Lambêr ; pep meuleudi a zo dleet dezhañ evit e stumm skrivañ aketus ha resis.

Kement hini a geñverio al levr-mañ gant an troidigezhioù kentañ eus Lizheroù Sant Paol, bet embannet gwechall gant " Studi hag Ober ", a vuzulio peseurt strivad a zo bet kaset da benn en ur ober ugent vloaz.

Ha ret eo lavarout ez eo ar yezh implijet unan klasek-meurbet, hag ec'h aliomp he studi d' ar re a glask en em varrekaat da skrivañ e brezhoneg.

Embannet gant Al Liamm.

Priz war baper bibl : 35 lur.

Priz war " Bouffant " : 27 lur.

" Hor Yezh "

Frañsez KERVELLA - " Méthode Nouvelle de Breton - Hent Nevez d'ar Brezhoneg " - Niv. 69-70 - 11,00 lur (1/3 distaol pa brener 3 skouerenn a-gevret). P. Denis,

Setu deut er-maez levrenn gentañ " Hent Nevez d'ar Brezhoneg " Frañsez Kervella. N' eo ket graet evit bugale skol met evit tud bet graet o c'hresk ganto ha barrek da vont buan a-walc'h war-raok. « C'hoant am eus bet, a lavar an aozer e-unan, da lakaat (er c'hentelioù-mañ) ar pep retañ da c'houzout hag ober ganto hent diazezoù ar brezhoneg ».

Rannet eo al levrenn e 10 kentel. Un eil levrenn gant 10 kentel all a vo embannet gant " Yor Yezh " hep dale. Diazezet eo an dornlevr war an diviz, pep kentel o terc'hel ur skrid brezhoneg gant displegadenoù yezhadur da heul hag un daolenn eus ar gerioù nevez gant o zroidigezh (e galleg) hag an distagadur aroueziet hervez an doare etrevroadel, ken aes ha ken resis, hag anavezet bremañ gant an holl, zoken ar vugale. Ouzhpenn an diskleriadurioù yezhadur boull ha don war un dro e tiskouez bezañ al lodenn-se an degasadenn bouezusañ eus an oberenn-mañ. Ur gudenn kalz re zilezet betek bremañ, pezh a zo bet abeg eus astennidigezh ar brezhoneg displiv ha divuhez e zoare distagañ a reer " Roazhoneg " anezhañ.

377

Setu kroget da vat war dachenn an distagadur al labour unvanidigezh bet sevenet endeo war hini ar reizhskrivadur, frammadur ar frazenn hag ar gerioù. Evit kas al labour-se da benn, Frañsez Kervella, a gomz ur brezhoneg " etre ", hanter-hent etre al leoneg hag ar c'herneveg, a zo an den a-zoare.

Roet eo an diskleriadennoù yezhadur ha troidigezh ar gerioù e galleg. Gwelloc'h e vefe bet d' am meno o lakaat kentoc'h e saozneg. Kinniget en deus a-hend-all an aozer e-unan o sevel en ur yezh all bennak ma teufe dezhañ kenlabour : Poent ha poent bras eo deomp disterniañ da vat diouzh karr ar galleg ne dle ken bezañ an hent nemetañ da vont d' ar brezhoneg. Gouest eo pep hini bremañ, dreist-holl e-touez ar rummadoù yaouank, da gomprenn, d' an nebeutañ, saozneg eeun al levrioù-deskiñ hag implij ar saozneg a rofe diouzhtu d'un oberenn un degemer etrevroadel. Gortoz a reomp bremañ gant mall an eil levrenn a dle bezañ embannet hep dale gant " Hor Yezh ".

KERVOC'H.

" Studi hag Ober "

E niverenn 11-12 Studi hag Ober e kaver " Ritual nevez ar Briedelezh evit Eskoptioù Sant-Brieg, Landreger ha Gwened ", embannet gant ar Gomision Etreeskoptiel.

Troet eo bet diwar al latin, met ar reolennoù-heñchañ embannet gant Roma evit an droerien ne c'houlenn ket e chomfent sklav d' al latin : en abeg da se, ar Gomision he deus kemeret ur wech an amzer, un tamm frankiz, ha meulet eo bet evit-se gant ar re a zo bet karget da adwelout al labour.

Ritual ar Gomision a zegas kement a zo ezhome evit al lid, ha dreist-holl kantikoù, kanaouenoù, ha tonioù salmoù, a vanke betek-hen en embannadurioù all.

Skolioù dre lizher

V. Seite a c'houlenn diganeomp evel bep bloaz embann un danevell eus e Skol dre lizher.

Bloavezh 1970-71 : skolidi enskrivet : 756.

Penn ar Bed : 292 - Aodoù an Hanternoz : 36 - Mor Bihan : 39 - Il ha Gwilum : 55

- Liger Atlantel : 44 - Paris : 190 - Departamantoù all : 88 - Broioù estren (all) : 12.

En o zouez ez eus 245 studier, 87 skolaer pe gelenner, 78 implijad, 28 micherour, hag all...

Warlene e oa 615 skoliad hag er bloaz-mañ ez eus 756. Implijet e vez " doare ar Skol-veur " gant ar Skol-se.

378

Leksional Ar Bloavezh ha Levr-Oferenn

A-benn diwezh miz Du e vo prest al LEKSIONAL NEVEZ da vezañ implijet er bloaz a zeu : " Leksional ar Bloavezh " A, moulet dre offset.

Priz al levr : 15,00 lur da vezañ kaset war-eeun da Revue Barr-Heol, 22 - Lannion - c.c.p. 2454-53 Rennes.

UI LEVR-OFERENN roneoskrivet (80 paj. 21 X 27) evit an Azvent, Amzer an Nedeleg hag an Epifaniezh a zo prest a-benn bremañ, ennañ an holl bedennoù ha lennadennoù evit ar Sul hag ar Pemdeiz (nemet evel just ar pezh a zo el " Leksionaloù ").

Priz al " Levr-Oferenn " : 9,00 lur da vezañ kaset war-eeun da Revue Barr-Heol. Evit pezh a sell ouzh Liderezh Nevez e kaver c'hoazh e Levraoueg v-Barr-Heol :

Sulioù ar C'houraiz ha Sul Fask (offset)	5 lur
Sulioù ha Gouelioù ar Bloavezh B (offset)	8 lur
Leksional ar Bloavezh C (offset)	15 lur
Ritual ar Briedelezh (klok 50 paj. 21 X 27)	6 lur
Badeziant ar Vugale (liesskrivet)	2 lur

Kuzul ar Brezhoneg

Bodadeg diskar-amzer Kuzul ar Brezhoneg a zo bet dalc'het e Sant-Brieg d' ar 17 a viz Here.

Studiet eo bet eno : 1) Buhez ar c'hevredigezhioù ; 2) An darempredoù gant ar strolladoù sevenadurel all ; 3) Stad an traoù evit kelennerzh ar brezhoneg e skolioù an eil derez, hag er skolioù dre lizher ; 4) An emvodoù da zont gant an A.P.L.B.-K.A.B.E.S.K. hag ar skolioù brezhoneg.

Ar burev zo bet adanvet gant Yann Talbot evel kadoriad Kuzul ar Brezhoneg, Sekretourva : 28, rue des 3 Frères Le-Goff, 22 - Saint- Briec - ccp. J. Le Bec 30 70 20. Gallout a reer kas dezhañ profoù evit sikour ar gevredigezh.

Levrioù ha kelaouennoù

Niverenn miz Meurzh-Ebrel Nouvelle Ecole, ur gelaouenn gaer ha skeudennet, a zo gouestlet d' ar yezhoù ha lennegezhioù keltiek. Ar pennad pouezusañ zo diwar dorn Goulc'hen Pennaod. Ur studiadenn hir ha goueziek war orin hag istor ar yezhoù keltiek. 10,00 lur an niverenn. B. P. 129 07 Paris 7.

379

Adarre gant Goulc'hen Pennaod eo bet skrivet un istor berr eus ar skriturioù brezhonek adalek skritur an henvrezhoneg betek an hini " skolveurel ", en ur dremen dre ar c'hrennvrezhoneg, skritur an Tad Maner, hini ar Gonideg, ar c'h-

KLT, skriturioù ar gwenedeg hag ar skritur peurunvan. Ar studiadenn-se, kentelius-kenañ, he dije gounezet kalz ma vije bet roet muioc'h a skouerennoù evit aesaat d' an den boutin nann-gramadegour kompren an termenadurioù skiantel. Dipitus eo ivez e vefe diaes da lenn a-wechoù abalamour d' ar paper pe d' al liv implijet moarvat. 14 pajenn roneoskrivet ha skrivet stank e galleg. " La Bretagne Réelle " Merdrignac, c.c.p. 754-82 Rennes. Priz : 6,00 lur.

Resevet hon eus ivez " Deizlevr brezel " miz Here - miz Du 1943 gant Youenn Olier, c.c.p. 1534-25 Rennes. Priz : 7 lur- - hag An Nerzh (Merdrignac) : 4 lur.

Kemenn a reer deomp ivez ez eo deut er-maez " La Bretagne malade de la République " gant Job de Roince. 12,50 lur : Job de Roince, 50, avenue du Mail, Rennes, c.c.p. 769-95 Rennes. Ne vo ket gwerzhet er stalioù.

" Herve ha Nora ", ugent kentel evit ar vistri

Emañ ar gelaouenn " Skol " o paouez embann un eil levrig evit skoazellañ ar vistri a implij Levr Kentañ Herve ha Nora. Priz pep levrig evit ar vistri : 4 lur, da gas da Revue Skol, 22 - Lannion, ccp. 1911-06 Rennes.

AL LIAMM 149

TAOLENN

Barzhaz Breizh :

Klemmvan Itron Nizon	383
Gwrizioù kement droug gant GRAHAM GREENE (tr.)	386
Donemat d' an estrañjourien gant ALAN HEUSAFF	400
Kadoudal gant JORD KLER	419
Istor Breizh La Borderie troet gant R. HEMON	426
Ur pikig pe zaou... gant F. KERVELLA	434
Skridoù nevez gant ARZEL EVEN ha RONAN HUON	439
O c'hoarzh gant Tad TURIAV	447
Notennoù	448
Roll ar pennadoù	458

KLEMMVAN ITRON NIZON

Allas, allas ! maro itron
 Maner ar Genkiz a Nizon !
 Me a wel evel koumoul du
 O kuzhat an heol a bep tu.

- Hor mammig paour, pa n' emaac'h mui,
 Piv a dorro hon naon dimp-ni ?
 Piv 'roy dimp dilhad ha louzoù ?
 Piv 'bareo hor goulioù ?

Adal ar gêr a Gemperle
 Betek Nizon, ni a ouele,
 E bordig an hent, daoulinet,
 'Hed peder lev hon eus gouelet.

Gouelet hon eus da heul ar c'harr
 Zo bet ouzh ho kas d' an douar.
 Gouelet hon eus e-tal ho pez.
 Gouelañ 'raimp e-pad hor buhez.

Pebezh kañv, siwazh, er maner !
 Pebezh kañv er vro, itron ger !
 Kenavo, hor mamm dous ha mat.
 Perak oc'h-hu deut d' hor c'huitaat ?

- Peorien, peorien geizh, ho taeroù
 Zo dreist an holl veuleudioù.
 Koulskoude n' eo ket ret gouelañ,
 P' emañ hor mamm e-barzh ar joa.

384

P' emañ gant ar Werc'hez santel,
 Gant Jezuz hag an Ebestel,
 Gant ar Sent hag ar Santezed,
 Gant he div verc'h, gant he fried.

Ar beleg e-tal he gwele,
 Gant ur vouezh dous, o lavare :
 « Sent ha santezed eus an Neñv,
 Deut da zegemer va ene.

Deut 'ta, ma c'hellin evit mat
 Karout, ganeoc'h, Doue hon Tad,
 Er Baradoz da virviken. »
 Neuze e teuas da dremen.

Tremen he deus graet gant douster,
 Evel o c'hoarzhin, hor mamm ger,
 Evel m' he defe gwelet dor
 Ar Baradoz dezhi digor.

Edo gouel Maria Garmel,
 Gouel dudius evit mervel.
 Edo abardaez ar Gwener,
 Deiz bras ma varvas ar Salver.

Tavit 'ta, peorien geizh, tavit,
Na ouelit ket, mar he c'harit.
Mat da vediñ e oa an ed.
An aelez o deus o medet.

Ar wezenn gozh a zo pilet,
E dra gant ar Mestr a zo aet.
Padal, meur a blantenn yaouank
A chom war he lerc'h, stank-ha-stank.

An evnedigoù ' c'hello c'hoazh
Neizhiañ dindan an delioù glas,
Ha kanañ meuleudi Doue,
Na laosk evn na den dibourve. -

385

Lavaromp an De profundis
E-tal bez itron ar Genkiz.
Ha ra vo skrivet war he maen :
« Amañ emañ mamm ar beorien ».

Ar werz zo graet gant ur beleg,
Bet kure e parrez Rieg,
Hag a gare, hag a garo
Da viken an itron varo.

Hag endra chomo e buhez,
E lavaro pep mintinvezh
Ur Memento 'vit e vamm gozh,
Ma 'z ay ganti d' ar Baradoz !

Gwrizioù kement droug

Graham Greene ganet e 1905 en deus degaset el lennegezh saoz ur spered nevez d'an nevez-c'hatoligiezh, hag a zo un doare puritanelezh wasaour. An oberenn gentañ a bouez bet skrivet gantañ a zo " The Power and the Glory " e 1940 : kontañ a ra er romant-se istor ur beleg enket gant polis ar Meksik e-pad ar prantadoù trubuilhet etre 1920 ha 1930.

Goude ar brezel, div oberenn o deus lakaet e vrud da greskiñ dre ar bed a-bezh : divizoù ar film " The third Man " hag ar romant " The Heart of the matter " (1948).

E levr diwezhañ " A sort of life " a zo un danevell-buhez. Ar gontadenn a vo kavet amañ da heul a zo tennet eus an dastumad danevelloù " May we borrow your husband ".

Perzh mat Graham Greene a zo bet implij stummoù poblekañ al lennegezh-dudi aes evel ar romantou-polis hag ar romantou-darvoudoù evit displegañ ur brederouriezh denel ha dramael.

*

An istor-mañ a zo bet kontet din gant va zad a glevas anezhañ war-eeun digant e dad a oa breur da unan eus ar re o doa kemeret perzh ennañ. A-hend-all ne gav ket din em bije e gredet. Un den eeun e spered e oa va zad avat, ha n' em eus abeg ebet da grediñ ne vefe ket bet miret ar spered-se gant ar familh.

E 189- e c'hoarvezas an darvoudoù-mañ - evel ma lavaront e romantou kozh Bro-Rusia - e kêriadenn B. Alamaneger a oa va zad, ha p' en em ziazezas e Bro-Saoz e oa an hini kentañ eus an tiegezh o vont en tu all d' un nebeut kilometradoù diouzh e barrez, korn-bro, pastell-vro genidik - pe anv bennak e vez roet dezho er broioù-se.

Va zad a oa ur protestant start e feiz ha n' eus den barrekoc'h egetañ evit krediñ hep pismigañ, pa ne vefe ur protestant eus ar seurt-se. Ne felle ket dezhañ zoken lezel va mamm da lenn deomp marvailhoù hag ober a rae ul lev war droad da vont d' un iliz kentoc'h eget mont da unan gant bankoù enni. « N' hon eus netra da guzhat, e lavare, ma kouskan e kouskan, ha ra vo gouezet gant ar bed gwanded va c'hig » - « Perak ? » e lavare c'hoazh, hag ar soñj a vroude va faltazi ha marteze he deus bet un tamm levezon war va buhez da zont, « bez e c'hellfent c'hoari ar c'hartoù er bankoù-se ha den ne oufe ».

Liammet eo ar frazenn-se em spered gant an doare ma oa kustum da gregiñ e istor. « Ar pec'hed kentañ a vountas an den da guzhat, » a lavare ; « pec'hiñ a-wel d' an dud n' eo nemet hanter-bec'hiñ ; chom hep pec'hiñ e kuzh n' eo nemet bezañ hanter-zigablus ; an neb en deus traoù da guzhat a bec'h abred pe ziwhezhat ; ne lezfen ket ur frañmason da dremen dor va zi ; e-lec'h ma oan e oa difennet ar c'hevredigezhioù kuzh hag e oa ar gwir gant ar gouarnamant, pegen dinamm bennak e c'helljent bezañ en derou evel « Klub ar Schmidt ».

E-touez tud kozh ar gêr m' edo va zad o vevañ, e oa ur c'houblad a gendalc'hin d' ober anezho Schmidt dre n' on ket sur-tre eus natur al lezennoù diwar-benn an droug-skouer hag eus an doare ma c'hell ar re varv bezañ tizhet gant strizhadurioù ha traoù eus ar seurt-se. Herr Schmidt un den mentek hag ul lonker bras anezhañ a gave gwelloc'h evañ er gêr, ar pezh a zisplije d' e wreg n' he doa morse tañvet hec'h-unan an disterañ takennig alkool. N' eo ket e felle

dezhi emellout en evadennoù he gwaz ; bez' he doa ur menoz dezhi hec'h-unan a-zivout dlead ur wreg, met deut e oa d' un oad (ouzhpenn 60 vloaz he doa, hag eñ ouzhpenn 70) m' he doa ur c'hoant bras da azezañ sioul gant ur vaouez all oc'h ober stamm evit he bugale vihan pe o komz diwar-benn o c'hleñvedoù diwezhañ. Ne c'heller ket en em santout en e aez gant un den a ya d' ar c'hav dibaouez da gerc'hat ul litrad all. Bez' ez eus un aergelc'h evit ar wazed, hag un aergelc'h evit ar maouezed, ha n' en em veskont ket nemet el lec'h dereat, dindan al liñserioù. Meur a wech he doa Frau Schmidt klasket gant he doare hegarat e gendrec'hiñ da vont d'an davarn, diouzh an abardaez. « Perak paeañ muioc'h evit pep gwerennad ? » e lavare neuze. Goude-se e klaskas e lakaat da gompren en doa ezhomm kejañ ha komz gant gwazed all. « Ket pa vezan o tañva gwin mat, » a lavare.

388

Neuze a-benn ar fin e kontas he zrubuilhoù da Frau Muller a c'houzañve dres en hevelep doare. Frau Muller a oa hi ur plac'h a-benn, a ijinias kement-mañ : kavout a reas peder maouez all gwall c'hoant ganto kejañ gant gwragez all ; en em glevout a rejont evit en em gavout ur wech ar sizhun gant o gwrierzh, hag evit kemer a-gevret o c'hafe abardaez. Dre-holl o doa ouzhpenn div zousennad vugale vihan ; neuze e c'hellit meizañ ne choment morse dilavar. P' en deveze echu ar bugel gant ar vrec'h-nij, e veze daou da nebeutañ a groge gant ar bennsac'h. Bez' o doa ivez da geñveriañ an doareoù disheñvel d'o fareañ, ha bez' o doa ur skol-soñjal a gemere evel ger-stur « mougite ur sifern » evit talvezout « ma vougite ur sifern e vagote an derzhienn » hag ur skol all he doa ur savboent muioc'h hengounel.

Hogen o zabutoù ne vezent morse ken taer hag ar re o doa gant o gwazed ha pep hini d' he zro a veze an ostizez hag a rae gwestell.

Met petra 'zeue da vezañ ar wazed e-keit-se ? Gallout a rafec'h soñjal e oant laouen o terc'hel da evañ o unan penn, met ne oa ket gwir tamm ebet. Evañ 'zo evel lenn " sorbiennoù " (va zad a implije ar ger-se gant dispriz ; n'en doa morse lakaet e fri e-barzh ur romant e-doug e vuhez). N' hoc'h eus ket ezhomm komz, met ezhomm hoc'h eus kaout tud en-dro deoc'h pe a-hend-all e krog ennoc'h c'hoant da labourat. Frau Muller he doa soñjet en dra-se, hag e kinnigas d' he gwaz, ken hegarat, ma ne daolas ket hemañ evezh, e c'houlennfe digant ar priedoù all, pa vije ar maouezed oc'h en em gavout e lec'h all, dont en-dro d' e di e unan gant o evajoù dezho (ezhomm ebet dispign arc'hant ouzhpenn en davarn). Gallout a rafent chom azezet ken sioul ha ma plijfe dezho gant o gwerennadoù betek ar mare da vont da gousket. Evel just ne chomfent ket dilavar a-hed an amzer. A vare da vare e komzfe moarvat unan anezho diwar-benn an amzer hag unan all a zisplegfe e soñj a-zivout an eost da zont hag un trede a lavarfe ne oa bet morse hañv ken tomm hag hini 188-. Hep ar maouezed, ne dafe morse breutadennoù ar wazed war daeraat.

389

Ur spi 'oa gant an emglev-se avat hag hemañ a voe kaoz ar gwallreuz. Frau Muller a gejas gant ur seizhvet maouez, a zeuas da vezañ intañvez, n' eo ket dre ma 'z eve he gwaz, met dre ma oa hemañ re gurius. Frau Puckler he doa ur pried ha na c'helle hini ebet eus ar re all gouzañv. A-raok lakaat da vont en-dro o abardaezioù-mignonezed e oa ret dezho divizout petra ober gantañ. Un den un tammig trenket e oa, luch, moal e glopenn, a lake da dec'hout holl ostizien an davarn kerkent hag aet e-barzh. E zaoulagad o sellout a-dreuz evel-se a rae kement hag un talar-tro, ha chom a rae da gaozeal gant un den e-pad dek munutenn e selloù paret war dal egile ken ne vezed o c'hortoz ar brenn-heskenn da zont er maez. Siwazh, e oa doujet kenañ Frau Puckler. A-bouez bras e oa mirout outi da soñjal e oa deuet-fall he gwaz, ha neuze e-pad un nebeut sizhunvezhioù e voe ret dezho nac'h ar c'hinnig graet gant Frau Muller. Laouen a-walc'h e oant, emezo, o chom o-unan er gêr gant ur werennad, pezh a dalveze e gwirionez e oa gwelloc'h dezho chom o-unan eget bezañ gant Herr Puckler. Met e-keit-se e teujont da vezañ ken gwalleurus ma vezent kavet o kousket en o gweleoù pa zistroe d' ar gêr o maouezed.

D' ar poent-se e krogas Herr Schmidt da gomz. Mont a reas da seniñ ouzh

dor Herr Muller, un abardaez ma oa aet kuit ar maouezed, gant ur podad gwin pevar litrad ha n' en doa ket diskennet c'hoazh ouzhpenn daou litrad pa lavaras kement-mañ : « Ret eo lakaat ur fin, d' an evadenn digenvez-se, » ; kousket en doa muioc'h e-kerz un nebeut sizhuniou diwezhañ eget e-kerz ar c'hwec'h miz tremenet hag edo o koll e nerzh. « Galvet ez omp gant ar bez, » e hirvoudas. « Met Puckler ? » a enebas Herr Muller... « Gwashoc'h eo eget ur bez. »

« Ret e vo deomp en em gavout dre guzh, » eme Herr Schmidt. « Braun en deus ur c'hav dispar. » Setu penaos e krogas ar guzhiadenn, a lavaras va zad, hag eus an traoù kuzhet e c'hellit diorren holl bec'hedoù ar bed. Gwelout a raen ar c'huzhiadennoù evel al louedenn deñval er c'hav m' edomp o c'houneziñ ennañ kebell-touseg, met mat oa ar c'hebell-touseg da zebriñ ha neuze o c'hreskidigezh kuzh... Kavet em eus bepred un neuz amjestr da gelennadurezh va zad war ar vuhezegezh.

390

E-pad ur mare ez eas mat an traoù, war e seblant. Ar wazed a oa laouen oc'h evañ a-gevret, hep Herr Puckler evel just, ha laouen oa ivez ar maouezed, zoken Frau Puckler rak kavout a rae bepred he gwaz en e wele d' an noz prest evit ober e zlead a waz. Kalz re lorc'hus e oa evit lavarout dezhi ne ehane ket da redek kêr o klask kompagnunezh. Bep noz e klaske un ti disheñvel ha bep noz ne gave nemet un nor brennet hag ur prenestr teñval. Ur wech e kav Herr Braun, e klevas ar wazed morzhol an nor o skeiñ. Mont a rae ivez da sellout ingal pe dizingal er " gasthof ", evel p' en dije bet spi o zapout pa n' edont ket war evezh. Sklerijennañ a rae al lampoù-straed e glopenn moal hag alies e tegouezhe gant ul lonker o tistreiñ d'ar gêr diwezhat kejañ gant an daoulagad luch-se na gredent tra eus ar pezh a lavared. « Ha gwelet hoc'h eus Herr Muller fenoz ? » pe « Hag emañ Herr Schmidt er gêr ? » e c'houlenne neuze digant ur riboter bennak all. Klask a rae anezho amañ hag ahont. E-pad ur mare e oa bet plijet awalc'h oc'h evañ e-unan en e di hag o kas e wreg d' ar c'hav davit gwin, met re vat e ouie, bremañ ma oa e-unan, ne oa plijadur ebet oc'h evañ digenvez. Ma n' edo ket Herr Schmidt ha Herr Muller er gêr, pelec'h edont-ta ? Hag ar pevar all n' en doa morse en em glevet mat ganto, pelec'h edont ? Frau Muller ha Frau Schmidt a oa o begoù serret ken mat ha klozadur ur sac'h-dorn graet mat.

Benn ul lajad goude-se ne c'hellas ket chom hep mont da di ar polis. Nac'h a reas komz gant neb den izeloc'h e renk eget ar Provost-Meur. E zaoulagad talar-tro a doulle tal ar Provost-Meur, evel ur barrad poan-benn. E-pad ma pare e zaoulagad warnañ, e tistagas gerioù luziet ha diresis. Un taol-nerzh anarkour oa c'hoarvezet e Schloss - n'em eus ket soñj ken eus an anv ; brud a rede diwar-benn ur gwalldaol a-enep d' an Dug Meur. Ar Provost-Meur a droas un tammig a-zehou hag un tammig a-gleiz en e gador-vrec'h, rak seurt aferioù bras ne sellent ket outañ ; e-keit-se edo an daoulagad luch o toullañ dibaouez al lec'h kizidik-se a-us d' e fri ma kroge bepred eno ar boan-benn. C'hwezhañ a reas e fri ha lavarout : « Emañ ar Fall o ren en amzer-mañ, » gerioù, hag en doa dalc'het soñj anezho, eus liderezh ar Sul.

391

« Anavezout a rit al lezenn diwar-benn ar c'hevredigezhioù kuzh ? » eme Herr Puckler.

« Evel just. »

« Hag koulskoude amañ dindan fri ar polis, » hag an daoulagad luch a doullas donoc'h, « ez eus dres ur seurt kevredigezh. »

« Ma vefec'h un tammig resisoc'h... »

Herr Puckler a reas dezhañ roll klok an anvioù a groge gant Herr Schmidt. « En em vodañ a reont e kuzh, » emezañ, « hini ebet ne chom er gêr. »

« N' eo ket ar seurt tud a welfen oc'h irienniñ. »

« Na 'vit-se dañjerusoc'h a-se. »

Marteze n' int nemet mignoned. »

Perak 'ta n' en em vodont ket a-wel d' an holl neuze ? »

« Me 'zo vont da lakaat un archer war an afer, » a lavaras ar Provost-Meur en ur c'hinañ.

Ha neuze diouzh an noz e oa daou zen o sellout tro-war-dro da glask pelec'h o doa ar c'hwec'h all o lec'h-emvod. Un den eeun e oa an archer. Kregiñ a reas dre ober goulennoù didro met gwelet e oa bet meur a wech a-gevret gant Puckler ; ar c'hwec'h den neuze a verzas buan a-walc'h e oa klask warno war c'houlenn Puckler ha teurel a rejont evezh muioc'h eget biskoazh gant aon da vezañ dizoloet. Leuniañ a rejont kav Herr Braun a win hag e taoljont kalz muioc'h a bled betek gouzout na vijent gwelet o vont e-barzh. Pep hini a aberzhas un nozvezh lonkañ evit dihentañ Herr Puckler hag an archer. Ne c'hellent ket fiziañ en o gwraez gant aon e c'hellfe kement-se bezañ klevet gant Frau Puckler ; lakaat a rajent da grediñ neuze e oa bet c'hwitet ganto o afer hag edo bremañ pep hini adarre oc'h evañ diouzh e du. Kement-se a amplege o doa ur bern gevier da livañ pa ne zeueent ket a-benn da zistreiñ d' ar gêr a-raok o gwraez. Ha setu d' ar poent-se eo, eme va zad, e teuas ar pec'hed e-barzh.

392

Un nozvezh ma c'hoarvezas gant Herr Schmidt bezañ an diheñcher, hemañ a lakaas Herr Puckler d' ober ur bourmenadenn hir dre ar fabourzioù ha neuze o welout un nor digor hag ur c'houlouenn war enaou dre ar prenestr gant ur skleur ruz kletus hag o vezañ m' en doa sec'hed bras, e kemeras an ti en e zienez evit un ostaleri sioul hag ez eas e-barzh. Un degemer eus ar gwellañ a oa roet dezhañ gant ur vaouez lart a gasas anezhañ en ur salig-degemer, lec'h ma krede dezhañ e vije bet servijet ur banne gwin dezhañ. Teir maouez yaouank oa azezet war ur sofa, pep hini anezho diwisket mui pe vui, hag e tegemerjont Herr Schmidt gant c'hoarzhadennoù diot ha gerioù flour. Herr Schmidt ne grede ket kuitaat an ti diouzhtu gant aon na vefe chomet Puckler er-maez oc'h evezhiañ hag e-pad m' edo en entremar e teuas tre ar vaouez lart gant ur voutailhad champagn gant skorn ha meur a werenn. Dre ma kare ar gwin (daoust ma ne oa ket ar champagn a blije dezhañ ar gwellañ met kentoc'h gwin ar vro), e chomas, hag e-giz-se, a lavare va zad e tiflukas un eil pec'hed dre guzhadenn. Hogen ne oa ket echu c'hoazh gant ar gevier hag an orgederezh. Pa oa poent mont, dre ma ne oa ket e soñj chom re bell, e taolas Herr Schmidt ur sell dre ar prenestr hag er straed : e-lec'h Puckler edo ar poliser o vont hag e tont a-hed ar riblenn. Hemañ en doa heuliet Puckler a-bell moarvat, ha neuze kemeret e dro-c'hed e-keit ma oa Puckler o klask war-lerc'h ar re all. Petra ober ? Diwezhat e oa dija ; bremaik ez afe ar gwraez da evañ o zasad ziwedhañ hag e paouezfent d' ober renabl ar vugale vihan. Herr Schmidt a azpedas ar vaouez fart hegarat ; goulenn a reas hag eñ ne oa ket un nor a-dreñv ; met ur vaouez a intrudu e oa ha buan-tre e oa goloet gant ur grinolinenn, evel ar re a veze douget gant koueriadezed er mare-se, war ar marc'hadoù, ur re loeroù gwenn, ur flotantenn laosk a-walc'h hag un tog gant bordoù ledan. Abaoe pell n' o doa ket bet ar merc'hed kement a blijadur o fichañ e zremm gant liv ruz, du-abrantoù ha ruz-muzelloù. Pa zeuas er-maez, e voe ken sabatuet an archer gant an arvest ma chomas seizes el lec'h m' edo, pell a-walc'h evit Herr Schmidt da nijal kuit e korn ar straed, o sachañ e skasoù dre ur straed teñval, ha degouezhout yac'h ha dibistik er gêr e koulz evit naetaat e zremm kent ma tistrofe e wreg.

Ma vije paouezet amañ an traoù en dije gallet pep tra bezañ mat, met an archer ne oa ket bet touellet, mont a reas neuze d' ober un danevell d' ar Provost-Meur o tisplegañ en em dreuzwiske izili ur gevredigezh kuzh evel merc'hed hag e-giz-se e tarempredent tiez-plijadur-kêr. « Perak 'ta en em wiskont evel merc'hed evit ober kement-se ? » a c'houlennas ar Provost-Meur ; ha Puckler a silas e spered hemañ e veze abadennoù-orged a yae en tu-hont d' an urzh naturel. « Anarkiezh, » emezañ, « a glask eilpennañ pep tra, zoken an darempredoù dereat etre paotr ha plac'h. »

« Gallout a rit spisaat ho menoz ? » a c'houlennas outañ ur wech ouzhpenn ar Provost-Meur. Ar frazenn-se a blije kalz dezhañ, met Puckler a lezas ar munudoù en donañ kevrin. D' ar poent-se e teuas kredennoù diboellus Puckler da vezañ klañvidik. Kemer a reas kement maouez mentek a wele er straed evit ur gwaz treuzwisket. Ur wech zoken e sachas da vat war berukenn ur Frau Hackenfurth bennak (betek an deiz-se, ne ouie den ha zoken he fried, e touge houmañ ur berrukenn) ; hag a-benn nebeut ez ae dre ar straedoù gwisket evel ur vaouez o krediñ e teufe un den treuzwisket da anavezout unan all hag en em gavfe enrollet abred pe ziwezhat en abadennoù-orged. Un den bihan e oa hag e c'hoarie e roll gwelloc'h eget Herr Schmidt. E zaoulagad luch hepken a vije bet a-walc'h evit trubardiñ anezhañ e sklerijenn an deiz.

Ar wazed en em vode laouen a-walc'h abaoe div sizhun e kav Herr Braun. An archer a oa aet skuizh gant e enklask hag ar Provost-Meur en doa spi e oa echu an afer pa voe kemeret un disentez reuzus. Boas e oa Frau Schmidt ha Frau Muller gwechall da aozañ gwestell evit o friedoù da vont gant ar gwin, hag an daou waz ha kaout keuz eus ar c'hofadoù-se. Kement-se a gontent d' o c'henlonkerien, hag an eñvor-se a denne dour eus o dent.

Kinnig a reas Herr Braun lakaat da zont ur vaouez da keginañ evito ; ne goustfe ket ker da bep hini anezho rak keginerez ebet ne c'houlennfe kalz evit un nebeut eurvezhioù-labour e dibenn an abardaez. He c'hefridi a vefe degas gwestelligoù fresk ha tomm hogos bep hanter eurvezh keit ha ma padfe an evadeg. Embann a reas sklaer a-walc'h e kelaouenn-kêr edo oklask ur geginerez, ha Puckler a skoas war an tomm (meneget e oa er gelaouenn ur c'hclub gwazed) en em ginnigas hag a wiskas bravañ dilhad-sul e wreg. Herr Braun, an hini nemetañ, n' anaveze ket Herr Puckler nemet dre vrud, a reas marc'had gantañ. Puckler en em gavas eta dres e-kreiz ar c'hevrin, ha tro en devoe da selaou o c'hendivizoù en o fezh. Ar skoilh nemetañ oa ne oa ket gwall ampart war ar c'heginerezh hag alies pa lakae e zivskouarn stok ouzh dor ar c'hav e leze ar gwestelligoù da suilhañ. An eil abardaez e lavaras dezhañ Herr Braun e klaskfe ur vaouez all ma ne rafe ket gwelloc'h gwestell.

Ne voe ket chalet Puckler gant kement-se avat, rak dastumet en doa kement titour en doa ezhomm evit ar Provost-Meur hag ur wir blijadur a voe evitañ kontañ e zanevell dirak ar poliser n' en doa degaset netra d' an enklask.

Skrivet en doa Puckler an diviz evel m' en doa e glevet hep menegiñ ar paouezoù hir, gourgouilh ar podadoù-gwin nevez (ha breugeudoù a c'hoarveze ur wech an amzer). Setu ar pezh a oa en e zanevell :

Enklask diwar-benn ar bodadegoù kuzh dalc'het e kav Herr Braun - Strasse
27

(Klevet eo bet an diviz-se gant an enklasker)

Muller : Ma chomomp c'hoazh ur miz hep glav, e vo gwelloc'h ar vendem eget warlene.

Mouezh dianavezet : Ugh.

Schmidt : Hervez, e vefe bet paotr-al-lizhiri war-nes terriñ e ufern ar sizhun dremenet. Risklet en doa war ur bazenn.

Braun : Koun am eus eus 61 vendem.

Dobel : Poent ' debriñ ur wastellennig.

Mouezh dianavezet : Ugh.

Muller : Lakait ar strakell gozh da zont-tre.

(Galvet e voe an enklasker ha lezel a reas ur pladad gwestelligoù.)

Braun : Diwallit. Tomm int.

Schmidt : Homañ zo aet e glaou.

Dobel : N' eus ket a zebr dezho.

Kastner : Gwelloc'h eo skarzhañ anezhi a-raok ma 'z afe gwashoc'h an traoù.

Braun : Paeet eo bet betek fin ar sizhun. Dalc'het e vo betek ar poent-se.

Muller : Pevarzek derez a oa da greisteiz.

Dobel : Horolaj an ti-kêr zo war-raok.

Schmidt : Soñj hoc'h eus eus ki ar maer gant e darchoù du ?

Mouezh dianavezet : Ugh !

Kastner : Nann, perak ?

Schmidt : N' em eus ket a soñj.

Muller : Pa oan paotrig hor boa kouignoù-rezin ne raer ket ken.

Dobel : En hañv 1887 e oa.

Mouezh dianavezet : Petra oa ?

Muller : Ar bloavezh ma varvas ar Maer Kalnitz.

395

Schmidt : 1888.

Muller : Bez e voe reveier bras.

Dobel : Ket ken spontus ha re 1886.

Braun : Ur bloavezh drastus e voe evit ar gwin.

Hag evel-se e kendalc'he e-pad daouzek pajennad.

«Petra eo kement-se ? » a c'houlennas ar Provost-Meur.

« Ma oufemp ez oufemp pep tra. »

« Seblantout a ra dinoaz. »

« Neuze perak en em vodont e kuzh ? »

An archer a lavaras « Ugh » evel ar vouezh dianavezet.

« D' am menoz, » eme Buckler e vo dizoloet ar stek.

« Sellit ouzh an deiziadoù-se. Ret eo gwiriañ anezho. »

« Taolet e voe ur vombezenn e 1886, » eme ar Provost-Meur, amgredik. « Lazhañ a reas gwellañ marc'h an Dug-Meur. »

« Ur bloavezh drastus evit ar gwin, » eme Buckler. « C'hwitet o deus. Takenn win ebet. Gwad roueel ebet. »

« Jedet fall e voe an taol, » a gounaas ar Provost-Meur.

« Horolaj an ti-kêr zo war-raok, » a adlavaras Puckler.

« Ne gredan ket kennebeut. »

« Ur c'hod. Muioc'h a zafar a zo ezhomme evit diskuliañ ar c'hod. »

Asantout a reas ar Provost-Meur gant un tamm diegi e kendalc'hfe ar rentañ-kont ; met bez e oa skoilh ar gwestelligoù. « Ur skoazeller ampart am eus ezhomme evit aozañ ar gwestelligoù, » a lavaras Puckler, « ha neuze e c'hellin selaou dibaouez. Ne gavint ket da abegiañ ma lavaran dezho ne gousto ket keroc'h. »

Ar Provost-Meur a lavaras d' an archer : « Mat e oa ar gwestelligoù am eus debret en ho ti. »

« Me an hini eo em boa o aozet, » a respontas an archer en ur voubenniñ.

« Neuze n' omp ket gwelloc'h a se. »

« Perak 'ta, » a c'houlennas Puckler. « Ma c'hellan me gwiskañ dilhad maouez e c'hell eñ ivez hen ober. »

« Hag e vourrou ? »

« Ul laonenn vat ha soavon mat a ziskoulmo ar gudenn. »

« Dibaot eo goulenn kement-se digant ur gwaz. »

« Evit servij al lezenn. »

396

Evel-se e voe divizet ober, daoust ma ne oa ket laouen tamm ebet an archer gant seurt afer. Puckler, evitañ da vezañ un den bihan, a c'helle gwiskañ dilhad e wreg, met ar poliser n' en doa ket a wreg. A-benn ar fin e voe red da Puckler asantiñ prenañ e-unan an djihad : o frenañ a reas e dibenn an abardaez, pa oa mall gant ar gomisien mont kuit ha pa ne oa ket ar re-mañ evit anavezout e zaoulagad talar-tro, p' edont o vuzuliañ ment ar vrozh, ar flotantenn hag ar bragoù. Bez e oa bet gevier, orgederezh : n' ouzon ket e pe rummad e lakae va zad an abadenn-brenañ iskis-se, ne voe ket, evit gwir diverz a-grenn. Gwall-skouer, setu marteze an trede pec'hed diwanet eus ar guzhiadenn, rak ur pratik diwezhat o tont er stal a anavezaz mat Puckler dres p' edo o terc'hel ur bragoù-maouez dirazañ da welout ha ledan a-walc'h e oa.

Bez e c'hellit soñjal pegen buan e voe brudet an istor-mañ gant kement maouez e kêr. Frau Puckler nemeti ne ouezas netra. Houmañ a verzas un emzalc'h iskis en he c'heñver e-kerz ar stammadeg kentañ, azaouez e c'helle bezañ pe marteze kendruez.

Pep hini a baouezze evit selaou p' edo o komz ; den ne grede enebiañ outi pe dabutal ganti ha ne oa ket lezet da zougen ur sklatenn, pe leuniañ un dasenn. Ken didalvez en em santas ma krogas ar boan-benn enni ha divizout a reas mont abred d' ar gêr. Gwelout a rae anezho oc'h hejañ o fennoù kenetrezo evel p' o dije anavezet an istor gwelloc'h egeti.

Frau Muller a ginnigas dezhi hec'h ambroug betek he zi.

Evel just e tistroas buan, mall warni, da gontañ dezho ar pezh he doa gwelet. « Pa zegouezhjomp - emezi - n' edo ket Herr Puckler er gêr. Evel just e reas van ar baour-kaezh maouez da vezañ hep gouzout pelec'h edo ; gwall drubuilhet e oa. Lavarout a reas edo bepred er g^rr d' he degemer pa zistroe. War-nes e voe mont d' an ti-polis evit diskleriañ e oa kollet he fried, met aliet em eus anezhi da chom hep mont. Tost e oan da grediañ ne ouie ket petra e

oa o klask ober. Kuzumuzat a rae diwar-benn darvoudoù iskis a c'hoarveze e kêr, anarkourion ha tud ar seurt-se ha krediñ a rafec'h, lavarout a reas en doa Herr Puckler lavaret dezhi e oa bet gwelet gant ur poliser, Herr Schmidt gwisket e maouez. »

« Pebezh pemoc'h ! » a lavaras Frau Schmidt o komz evel just diwar-benn Puckler rak heñvel e oa Herr Schmidt ouzh unan eus e varikennoù gwin ; « gallout a rit ijinañ kement-se ? »

397

« Emañ o klask disteurel an evezh diwar e dec'hoù fall - eme Frau Muller - rak klevit ar pezh a c'hoarvezas goude. Mont a rejomp d' ar gambr-gousket ha kavout a reas Frau Puckler dor hec'h armel-dilhad digoret bras. Sellout a reas e-barzh ha petra a gavas ? he dilhad sul a vanke. » « A-benn ar fin e oa gwir an istor, - emezi - ha mont a ran da glask war-lerc'h Herr Schmidt. » Met lakaat a rin anezhi da verzout e tlefe bezañ un den gwall-vihan evit dougen he dilhad. »

« Ha ruziañ a reas ? »

« Krediñ a ran, evit gwir ne oar netra eus an afer, »

« Paour-kaezh plac'h, » a lavaras Frau Dobel. « Ha d' ho soñj petra a ra pa vez gwisket evel-se ? »

Hag e krogjont da faltaziañ ur bern traoù. Hag ar c'homzoù hudur-se, evel ma lavare va zad, a zeuas da heul ar pec'hedoù all, gevier, orgederezh, gwallskouer. An hini gwashañ holl a vane c'hoazh avat.

Un noz-se e teuas Puckler hag ar poliser da doull dor Herr Braun. Ne ouient ket e oa aet istor Puckler betek divskouarn an everien, rak Frau Muller he doa kontet an darvoudoù iskis da Herr Muller. Diouzhtu e teuas soñj da Vraun eus daoulagad talar-tro ar geginerez Anna paret warnañ en deñvalijenn. Pa gejas ar wazed e kontas dezho Herr Braun edo ar geginerez o vont da zegas ur skoazeller d' he harpañ d' ober gwestelligoù, hag asantet en doa peogwir n' he doa ket goulennet arc'hant ouzhpenn. Bez e c'hellit ijinañ ar fistilhadedg a darzhas etre an dud dilavar-se pa gontas Herr Muller e istor. Peseurt abeg en doa Puckler ? Un abeg fall dre ma oa Puckler en taol. Unan eus an displegadurioù a oa hemañ : graet en doa e vennoz kontammañ anezho gant ar gwestelligoù, harpet gant ur skoazeller dre zroukrañs da vezañ bet lezet a-gostez.

« Gouest eo d' hen ober, » eme Herr Dobel. Abegoù mat o doa da vezañ war evezh, setu perak ne lakaas ket va zad, an den just a oa anezhañ, an disfiz diabeg e-touez ar pec'hedoù diwanet diwar ar gevredigezh kuzh. Prientiñ a rejont un degemer a-zoare evit Puckler.

Skeiñ a reas Puckler ouzh an nor hag edo an archer dres a-dreñv dezhañ, ur ramz en e vrozha ledan ha du gant e loeroù gwenn oc'h ober plegoù war e votoù dre m' en doa disoñjet Puckler prenañ dezhañ stagloereier.

398

Goude an eil taol e krogas ar vombezadeg eus ar prenestroù uhelañ. Taolet e voe warno dourennoù lous a bep seurt hag a bep c'hwez, hag ivez skodennoù. Gleb teil ha bloñset e oant. Aon o devoa e vefe tizhet o daoulagad gant fourchetezennoù o kouezhañ a-bil. An archer a voe an hini kentañ da sachañ e skasoù. Iskis e voe gwelout ur vaouez ken mentek o tiflipañ kuit dre ar straed : ar flotantenn ne oa ket mui dalc'het gant ar gouriz ha stlakañ a rae evel ur ouel e-pad ma klaske e berc'henn tec'hout rak an traezhoù o nijal bremañ en o zouez : ur roll paper privezioù, ur pod-te torret hag ur poltred eus an Dug-Meur.

Puckler a oa bet tizhet e skoaz gant ur roll-pastezer, ne dec'has ket kuit diouzhtu. Kalonek pe abafet a oa d' ar poent-se. Hogen pa voe skoet gant ar billig ma rae ganti evit ober gwestelligoù, e oa re zivezhat evit mont da heul an archer. D' ar poent-se dres e kouezhas ur pod-kambr war e benn, en em gavout

a reas gourvezet war ar straed gant ar pod fichet mat ouzh e benn evel un tokarn. Ret e voe e derriñ gant ur morzhol evit e lemel met a-benn neuze e oa marv Puckler. Ne ouezas den hag e voe en abeg d' ar spont, d'an taol war e benn, pe dre ma oa kouezhet, pe vouget gant ar pod-kambr : an darn vuiañ a gredas e oa bet mouget. Un enklask a voe graet evel just, a badas meur a vizvezh, a-zivout un irienn anarkour. Hag a-raok ma voe kaset da benn e teuas ar Provost-Meur da vezañ dre guzh danvez-pried Frau Puckler, ar pezh ne voe tamallet dezhi gant den, dre ma oa ur vaouez deuet-mat gant an holl - nemet gant va zad ne c'helle ket gouzañv an traoù graet e kuzh. (Kavout a rae dezhañ e oa bet hiraet an enklask en abeg da garantez ar Provost-Meur evit Frau Puckler, rak van a rae da grediñ tamalloù Herr Puckler.)

Diouzh ur savboent kalvezel evel just e oa se ur muntr da heul un dagadenn a-enep-lezenn, hogen c'hwec'h miz goude, e voe didamallet ar c'hwec'h gwaz gant al lez-varn. « Met uheloc'h lez-varn a zo, » a lavare va zad evit echuiñ e istor. « Hag el lez-varn-se ne lez morse ur muntrer digastiz. Kregiñ a rit gant ur c'hevren, - ha sellout a rae ouzhin evel p' en dije gouezet e oa leun anezho va godelloù, evel ma oant e gwirionez, en o zouez ar gerig edon e soñj reiñ an deiz war-lerc'h er skol d' ar plac'h melen he blev en eil renk, - hag echuiñ a rit gant holl bec'hedoù ar c'hatekiz. » Kregiñ a rae da adlavarout anezho ur wech ouzhpenn evit va mad : « gevier, mezventi, orgederezh, gwallskoueriañ. muntr, lorberezh an aotrouniezh ».

399

« Lorberezh an aotrouniezh ? »

« Ya, » emezañ, ha parañ a rae warnon e zaoulagad o lugerniñ, krediñ a ran e soñje-eñ e Frau Puckler hag er Provost-Meur, e gounnar a dizhe neuze e varr uhelañ : « Paotred gwisket gant dilhad merc'hed, pec'hed euzhus Sodom. »

« Ha petra eo se ? » a c'houlennen mall warnon.

« D' hoc'h oad, » a lavaras va zad, « ez eus traoù a rank chom kuzh. »

Troet diwar ar saozneg gant ur strollad tud yaouank e Kamp Etrekeltiek ar Vrezhonegerien e Krec'hen.

Ar gontadenn " The root of all Evil " a zo tennet eus levr Graham Greene " May we borrow your husband " gant aotre hegarat an oberour a drugarekaomp.

DONEMAT D'AN ESTRANJOURIEN

Dav e oa bet teurel evezh bras pa oan aet da Vreizh evit ar wech kentañ goude ar brezel, en hañv 1967. Ar vro a-bezh a oa difennet din hag an departamantoù amezek ivez. O tostaat ouzh Cherbourg e hañvale din spisoc'h-spis e oan o vont da zouarañ e-touez enebourien.

Pennden " Mona " e danevell Jakez Riou a lavare n' oa kemm ebet er vro. Me a ouie e vije disheñvel. E meur a lec'h em boa kavet dezhi un arvez kozhet, gwalleget. Koulskoude e oa keflusk, difrae war an dud da vont d' o labour, nebeut amzer ganto evit traoù all. Diaezet e oamp, ha ni aheurtet o terc'hel da vrezhonegañ - ur brezhoneg souezhus dezho hep mar - e kelc'h ur gerentiezh niverus damc'hallekaet. Plijadur em boa bet memestra ! Seul dennoc'h e vez war ho spered, seul greñvoc'h e c'hell bezañ ho levenez, pa vez gwir abeg.

Ar wech-se ne oa nemedomp hon-daou. Hevlene e oa pemp eus ar vugale o tont ivez. Gant ar c'harr-tan, dezho da welout dibarderioù ar vro. Din ma-unan ivez, rak nebeut e oa bet ergerzhet ganin a-raok kuitaat. 29 ha 35 a chom berzet atav, da virviken a-hervez ! Neuze eo ret mont dre laer. N' eus ket ezhomm da c'houlenn aotre digant ar re-se. Kement-se !

Eus Ros Lâr betek an Havr-Nevez ez eus un dreizhadenn a ziv eurvezh warn-ugent. Klenket ar c'harr e kof al " Leopard ", hag e pignomp war ar bourzh B da gemer ur banne. N' on ket bet azezet dek munutenn pa welan ur paotr o tont d' am c'haout. « An Ao. H..., m' hen bari ? » emezañ. Un eilenn en entremar, hag e soñjan « gwelet dija... ». E anaout a ran : H. L. Emañ o vont da Vreizh ivez, evit fest-eured e vreur. Tremenet en deus un nebeut bloavezhioù en Iwerzhon, mar gall e tiazezo eno. Distagañ a ra mat ar brezhoneg, met bec'h en deus o kenderc'hel gant an diviz en hor yezh. Diouer a bleustr, diouer a youl. Kemeret en deus bet perzh oberiant en ur c'henaoadur politikel breizhat. Gant taol-dispac'h Paris e 1968 ez eus deuet trefu en e spered, a lavar. Kavet en deus e oa re untuek, re strizh tachenn brederiadur al luskad-se ; ne ginnige ket dezhañ un diskoulm sklaer a-walc'h da gudennoù denel ha kevredigezhel hon amzer. Ha klasket en deus un diskoulm gwelloc'h abaoe ? N' eus ket bet anv eus an dra-se. 'M eus aon, o tont da Iwerzhon e tec'he diouzh ur gudenn hag a vije bet re dost ma vije chomet e Breizh. Displeget em eus dezhañ penaos e kavan emglev etre an deur hag an dudi a gemeran gant Breizh hag an doug d' ar frankiz denel dre vras. N' eus displavar ebet. Emsevenidigezh er c'hontrol. Nemet e pep brezel e ranker anaout ar pep difraeusañ ha kreizenniñ e strivadoù, pep hini hervez e c'halloudezhioù. N' eus ket tu da bleustriñ pep neuz eus ar vuhez a emsaver.

401

Broudet eo ma c'havandenn, met risklet eo hor c'haoz ken darev war an dachenn all. E c'hoar zo aze ivez, hag he gwaz, ur Gall. Kejañ a ran gantañ o trec'hiñ d' am disfiziañs. Arabat en em chalañ, a lavar H. L., un hengoun a vroadelouriezh zo en hon tiegezh. Ma breur-kaer a zo troet-mat. Anaout a ra abegoù armerzhel ezhommoù ha c'hoantoù ar Vretoned. Lennet en deus " Debut Bretagne "...

An noz a zo o tont. Beg-douar ebet war wel. Warc'hoazh em bo da vleniañ ar pellañ ma c'hellin. Ma rod-stur a zo war an tu dehou. Biskoazh n' em eus bleniet war an tu-se eus an hent. H. L. en deus lavaret din ec'h en em gavin da vihanañ ur wech war an tu kleiz e-pad an tri devezh kentañ. Dav e vo diskuizhañ mat. Bez' e c'hell c'hwec'h ac'hanomp kousket en hol log. Niamh a venn chom e-pad an noz en azezva. Ober a ray gant ur sac'h kousket, hag ar gourvez-vankoù zo blot. Hogen ne chom plas e neblec'h evit en em astenn ervat.

Eoghan a jed - penaos ? - e vo al lestr e biojoù Penn sant hag Inizi Sillan da hanternoz, fellout a ra dezhañ arvestiñ ouzh gouleier an tourioù-tan ha gouzout hag e tremenimp dre ar strizh-mor pe en diavaez d' an inizi. Ya, paotr, me n' em eus ket c'hoant da vout direnket e-kreiz an noz. Gra diouzh da benn, met na zeu ket d' ober trouz.

402

Chomet eo er-maez, war gorf e roched. War-dro peder eur ez eo deut da gerc'hat ur porpant. N' em eus ket taolet evezh. Da seizh eur ez eo distroet hep bout gallet kousket banne gant al lavig war ar bourzh hag ar yenijenn. Ne dapo bremañ nemet div eurvezh a hun.

* * *

Degouezhet omp en Havr-Nevez e-kreiz an endervezh, dres d' an eur. N' eus dale ebet o tilestrañ. Ra vo prest ar paperioù. Diouzh un tu eus hor steudad kirri, ur paotr kasketennet gwisket e glas a sell ouzh ar follennoù-asurañs, diouzh an tu all e kemer un archer ar paseporzhioù da louc'hañ. Ha war-raok didrabas.

N' eus ket ezhomme da vont a-dreuz kêr. Emañ an hent war-eeun dirazomp war-du pont Tancarville. Evit tremen e-biou d' ar c'hirri-samm em eus da ziwall, dreist-holl pa 'z eont hogozik ken buan. D' am gwreg eo da lavarout din pevore em eus amzer d' ober al lamm e-biou.

Taget omp gant ar sec'hed. Paouez a reomp en ur vourc'hadenn, dirak un davarn. Petra 'vez evet dre amañ ? En hor bandennad, pep hini en deus e faltazi, ha gwalluget (1) omp amañ evit reiñ un anv dezhi. Eoghan ne c'hoanta netra a gement a zo er stal, drouklivet eo, n' emañ ket war e du goude e nozvezh an hun. Deut omp a-benn d' e lakaat da gemer ur banne dour yen.

Tremenet omp dizarvoud dre fabourzioù Caen ha dre Villedieu-les-Poêles gant he fodoù hag e listri arem o lintrañ a-hed ar straedoù. War-dro seizh eur hanter hon eus tizhet Pontorson. Er gêr-mañ ez eus ur " camping municipal ". hervez hor c'hartennoù. War ribl ar C'houenon emañ, en un alez pupli. Ret eo din reiñ ma faseporzh d' ar c'hargad da virout evit an noz.

Difrae hon eus lakaet da sevel hon teltenn, rak amañ e teu an noz abretikoc'h eget na c'hortozomp. Un tamm koan e vo dav a-walc'h aozañ ivez. N' eus ket kalz a dra en hor panerioù. Ha digor e vo un ispiserezh bennak d' an eur-mañ, goude serr-nos ? Ur stal am eus kavet bara ha formaj da brenañ enni, met ret e vo dioueriñ laezh betek arc'hoazh da eizh eur.

(1) gwall-nec'het.

403

* * *

Dol-de-Bretagne " : merket evel pa vefe ur post-harzoù. Un Ty Breiz er straed vras, ha traoùachoù breizhek e meur a stal. Kemer a reomp amzer da skrivañ un nebeut kartennoù-post, da brenañ boued evit merenn, da eskemm ur chekenn-veaj. Fraziañ a rae breur-kaer H. L. pa lavare e oa emsavoc'h eskemm war al lestr eget war an douar-bras.

E-lec'h mont dre Zinan, greomp un dro dre dredanlec'h ar Rañs, ne vo ket kalz hiroc'h. Ar gweled war an aber, e krec'h hag e traoñ, zo dedennus : re a girri zo avat war an hent evit din treiñ ma sell diwarnañ. En-dro d' ar chaoser n' eus ket plas da chom a-sav. Ma ! o tont en-dro e vo amzer marteze da weladenniñ ar savadur brudet. Hor mennad eo lezel Niamh e K.E.A.V. - daoust ma ne chomo eno nemet peder eurvezh warn-ugent - ha levata a-dreuz Breizh evit tizhout kreisteiz Kernev a-raok an abardaez. C'hoant hon eus da gavout ul lec'h ma c'hellimp chom da gampiñ pevar pe bemp devezh. Ar gwener eo, hag en dibenn-sizhun-mañ e vo aloubet an arvor moarvat gant ur maread hañvourien.

E-tal Menez-ar-C'hont e rankomp arsaviñ da c'hlebiañ hor gourlañchennoù. Ne zeuomp ket a-benn da derriñ hor sec'hed. Dizoloet hon eus en davarn ur bier mat hag a zo tu d' e gas ganeomp er voutailh, kalz gwelloc'h-marc'had eo eget prenañ a werennadoù.

Ha me o kas loc'hañ en-dro, setu ma chom hourzet ar c'heflusker. Ar goulou-trekiner a zo enaouet, met n' eus talmadenn ebet digant al loc'her. An hent dirazomp a ya war grec'h. An holl er-maez eta, ober tro pa n' eus karr all ebet o tont, ha bountañ war draoñ... fraoñval a ra !

Adalek Dol hon eus merzet ez eo chomet Breizh ur vro labour-douar liesseurt. Heverk eo pegement a vaiz a zo, moarvat en deus kemeret ar plas a oa gwechall gant ar c'haol-saout. Amañ er Menez ne seblant ket kreskiñ mat, parkadoù 'zo hon eus gwelet ma oa berr ha signac'h. Bep ar mare e tiguzh mareziou liv sklaer dirazomp er pellder - digleuziet eo bet dre eno. N' eo ket evel-se etre Pondivi hag Arzhanou. Du-hont emañ ar c'hlasvezh en he brud, ken e kinnig ar strouezh, ar bodennoù, ar gwez stankañ ar gweled a-hed an hent. Ar re zo boas ouzh maeziou digor hanterenn Gornog Iwerzhon a vo techet da grediñ n' eus ket ezhomm d' en em chalañ ma tiskarer kement eus ar c'hleuziou e Breizh. Dibaot a zen war an hent. Hag ez eus tud c'hoazh war ar maez ? Amañ hag ahont e tifoup roudoù eus o bezañs, treset war an ter du ha war ar mogerioù. *Dieubit Carel !* Diwallit, prest omp-ni kouerien da zispac'hañ !

404

Ret e vo chom en tu-mañ da Bont-Aven. Abardaeziñ a ra p' emaoomp o treuziñ Kemperle. E Moelan ez eus tri c'hamp marilhet, hini Kerfani a hañval bezañ an hini gwellañ. Emañ en ur stankennig, etre koadigoù pin ha gwerjeoù, goudoret ouzhpenn-se diouzh tu ar mor gant garzhadoù haleg gwenn.

Plas ? Unan a chom, dres. Betek pe vare e fell deomp chom ? Antronoz arc'hoazh e rankfemp dilec'hiañ an deltenn, mont un tammig pelloc'h diouzh an draezhenn, ar stal, an dourdi. Paeañ a reer kement-ha-kement evit pep den deut, pep bugel, un deltenn hag ur c'harr. En holl 10 lur bemdez. N' eo ket re ger.

E tu an hent-karr e skoer war vein, a-hend-all n' eo ket diaes sankañ ar strapennoù : n' eus nemet traezh, moudenn na geotenn ebet. N' eo ket gant an avel ez eo chalet ar gamperien all evit doare. Graet o deus klazioù en-dro d' o zeltennoù. Klevout a ran ez eus bet arnev eistez 'zo, darn eus an teltennoù zo bet liñvet. Arabat kampiñ tost d' ar foz, rak ma teu dour-bil e tisac'ho an traezh.

Dirak ar mor ez eus ur voger vein hir, skrivet warni e lizherennoù bras : " Bourgeois, vous nous cachez la mer ". Hag aet eo tud ar vro skuizh gant an douristed ? Ha n' o deus ket plas a-walc'h mui da ebatiñ pa zeuont d' an aod ? Ur gwaz a oa bremaik en e avalenneg, o fuloriñ peogwir e oa bet kanfarded ar c'hamp o laerezh. « Ma c'hellfent debriñ an avaloù ! Re c'hlas int. Da berc'henned ar c'hamp e vefe lakaat orjal dreinek. Me ne c'hounezan netra gant ar c'hamp. » Deut eo paotr ar burev da barlantiñ gantañ. Ur studiour eo, den eus ar vro, o labourat amañ e-pad e ehan-skol. Hejañ a ra e benn goude. « Da henezh eo kaeañ e bark, m' en deus ezhomm. » Anat eo n' en deus ket prederiet. Emañ e soñj mont da vezeg en arme. Degemer a ra doare-gwelout an drevadennerien.

405

E penn ar voger ez eus ul skritell vras gant dremm ledan Glenmor. Warc'hoazh e kano e Pont-Aven.

* * *

Ni a dremen dre Bont-Aven evit mont da Gemper. Un distro hon eus ranket ober dre c'horre-kêr, emeur moarvat o sevel ul leurenn e-kreiz kêr evit ar gouel folklorek. Aet on dre fazi war hent Rosporden e-lec'h mont da dapout hini Konk. Deomp 'ta dre vourc'h Melven ha Kroez Louarn. A-hed an hent-mañ e tihun heklevioù gant an anvioù merket war ar pester : Troueg, Langoad, Kerilin. Emaon en ardremez korn-bro ma c'hrennoad. " Ar vered Suis " ar pezhidiag douar etre

peder moger vein e kroazhent Kerouilhenn n' eo ket bet foeltret daoust ma 'z eo ledanaet an hentoù.

Lakaet em eus ar c'harr er porzh dirak an ti-hent-houarn e Kemper. Pa n' ouzon dare hag he deus bet ma c'hoar D. ar gartenn am eus skrivet dezhi e Dol ez in ma-unan betek he zi da gentañ. Emañ o chom war Menez Fruji. Oc'h ober an dro d' ar voger uhel e penn ar park-tenañ, sell piv 'ta A. ma filhorez, ha M. C., hag o mamm ! N' int ket sebezet evelkent. Dec'h o deus bet ar gartenn. « Da hunan 'mout deut ? - Nann avat, pemp all a zo. - 'T eus ket laret. P'lec'h 'maint ? - Aet d' an oferenn. Da un eur hanter yin da glask 'ne' en-dro 'kichen 'n gar. »

Emaint o vont da ranndi ma nizez J. e-kichen. Ar sal zo leun a gerentiezh, yaouank ha yaouankoc'h. Derc'hel a ran da gomz brezhoneg gant D. ha ma breur-kaer. M. C., J. hag he gwaz a gompren. Gwaz M. C. hag ar vugale ne reont ket. Evit an darn vrasañ eus an diviz ez eo ret mont e galleg.

Kaer em eus bet herzel, ha digareziñ, ret eo bet din gouestlañ e tegasin va zud da di D. diouzhtu. Hi a zo er gêr, dezhi eo da c'hourc'hemenn ha din da selaou ! Ni a azezo ouzh taol er sal-debriñ, hag a zebro ar pezh hon eus degaset. Int a chomo er gegin gant o fred-int. Evel-se ez on bet paket. Goude-se n' eus ket bet tu mui da nac'hañ, ha rannet eo bet ar c'hig rost, an avaloù-douar fritet, ar saladenn hag ar gwin etre an holl. Moarvat o deus klevet e oa bet naonegezh vras en Iwerzhon. Gwir eo ivez n' hon eus ket kemeret amzer da geginañ kalz abaoe dimerc'her. Un neuz disvouedet adle bezañ deomp...

406

An tammig brezhoneg am eus desket da Anna hag Eadaoin a zo distaget re zisheñvel diouzh doare rannyezhel Sant-Ivi evit talvoud d' an disterañ diviz gant o moereb. Un notenn a rebech a glevan diganti : « Mat e vefe bet deskiñ galleg dezho, evit daremprediñ o c'hendirvi amañ - Desket e vez hag e vezo dezho en o skolioù. Me ne fell ket din kemer ar garg-se ». C'hwerv e kavan-me ivez gwelout n' hell ket ar remziadoù yaouank e Breizh kendivizout gant o zud-kozh.

Distroet omp dre Gonk gant un hent hag a zo bet graet, tostoc'h d' an aod eget hini ar Post Glas, a-dreuz ur c'hoad ha gwaremmoù ma teuemp da bourmen ha da c'hoari enno p' edon er skol-lojañ e Konk. Eno e lennen Breiz Atao hag e tagen an eveshaerien a felle dezho hor c'has da bark mell-droad Kroezez Keramperu, un argarzh !

A-hed straed ar Gêr Gloz e lugern an eñvorennoù breizhek en amc'houlou. Me n' em eus ezhomm netra eus ar seurt. Evit koan, deomp 'ta d' ar c'hrapouezherezh " Deiz ha Noz ". Ar brezhoneg er c'henwerzh ! O c'hortoz ar c'hrapouezh hon eus amzer da studiañ an arrebeuri, al livadurioù, ar c'hizelladurioù, holl " mod-kouz " ha liv lec'hel... Bez' e kavimp an dameuc'h anezho e traoñ an notenn bremaik ivez. Da zibab a zo etre krampouezh gwinizh ha krampouezh ed-du, gant amann, konfitur, kilhevardon ha me 'oar. Sistr zo d' o c'has d' an traoñ. Setu boued saourus. Emsavoc'h eo avat ar c'hrapouezh a vez gwerzhet e pakadoù er stalioù.

Un den yaouank, treut-ki, zo deut da azezañ war ur bank e-kostez ar voger, en distro. Un neuz spouronus a zo dezhañ gant e zremm liv ar marv, e zaoulagad faezh-divi. Ha merzet en defe hor sebezadur ? Ne gredan ket sellout pelloc'h outañ. Taolet en deus e benn war e zivrec'h kroazet war an daol dirazañ. Daoust hag hemañ a vefe unan eus ar bleustrerien drammoù, unan higennet, " o weañ an neudenn " bremañ ?

*

Sioul e vez ar c'hamp kerkent ha deut an noz. Ne dalvez ket chom da zeviñ goulou. Gant an avel, diwezhat, e teu bommoù biniou mesket gant c'hoarzhadeg. Moarvat ez eus degouezhet darn eus sonerien gouel Pont-Aven en davarn a-us d' ar stal.

Glav a zarc'hav war doenn an deltenn. Chom a ra klouar an amzer, met ne zistroio an hinon da vat nemet pa vimp o kuitaat Breizh en-dro.

* * *

A-raok mont pelloc'h er C'hornog e raimp un droiad betek Karnag. Kemm am eus kavet etre maeziou kreisteiz Kernev ha re ar riblennad etre an Oriant ha Plouharnel - ken strujus an eil re ha ken fallik ar re all. An arvest paotañ eo ar postou gant ar skritell " Terrain à vendre ". Met evel-se emañ kont en Arvor a-bezh, 'm eus aon.

Neriñ a ra an hañvourien en-dro da Garnag. Ar mirdi a zo leun-chouk, ne dalvez ket mont tre da zic'houzougañ ouzh an traezoù kozh en deñvalijenn. Goude gwelout ar Veineg o deus bet ar vugale o gwalc'h a veinhir.

Diwar an droiad am boa graet e Karnag e 1941 em eus dalc'het koun eus renkennadoù peulvanoù bras-eston oc'h en em astenn war hed gweled war un dachennad c'heot rouez. E pelec'h e oa ? E Kervario ? Eno ez eus melloù anezho e gwirionez, er pezhriad tost d' ar park-kirri-tan. Lann a gresk e pep lec'h etre ar rezadoù.

En Dreinded hon eus kavet bara segal mat da brenañ. Goulennet em eus ouzh plac'h ar stal hag-eñ a gomzer brezhoneg er gêriadenn. Nebeut, emezi. War ar maez tro-war-dro e reer.

E-kichen maenhir Lokmariaker hon eus kejet gant ur strolladig tud laouen. Safariñ a reont en ur yezh na gomprenan ket. Diouzh o dilhad ec'h anavezur ur plac'h nevez hag ur mab nevez en o metoù. Hi a gomz brezhoneg, m' hen bari. Ober a ran dezhi gourc'hemenoù. Eus kichen an Dreinded emañ-hi. He gwaz zo eus Norzh Italia.

Ur skritell war vord an hent en deus tennet ma evezh bremaik. Istr a vez gwerzhet d' an dremenerien. A dri ment ez eus anezho. Sammet em eus teir dousenn, a raimp ganto evit koan.

* * *

E ti D. e kejan gant mamm. Laouen on o welout atav liv yac'h dezhi, daoust d' he eizh vloaz ha pevar-ugent. Div nizez all, M. T. ha N., zo deut a-gevret gant o gwazed hag o bugale, ha, gant ar safar, n' eo ket aes kaozeal ganti. Alies, evit klokaat he c'homz, e ra ur jestr buan gant he dorn dehou. Marteze he deus tapet ar voaz-se o kas trec'hiñ d' an diouer a genyezh gant he bugale vihan ha gallegerien all.

Pa 'm eus lavaret dezho emamp e soñj klask ur plas da gampiñ tostoc'h da Gemper, en tu da Bont-'n-Abad, o deus aliet din goulenn ouzh ma niz, L. Eñ a anavez kouerien e Loktudi, dre e hanterouriezh o doa gallet M. T. ha N. kampiñ gant o ziegezh war o douar warlene.

L. zo o chom en un ti nevez tost da hent Ploveur, e Pont-'n-Abad. N' eo ket bet niverennet c'hoazh, setu ma 'm eus ranket goulenn en un ti all : « Ur rozenn graperez a zo e-tal an nor ». Skoet em eus war an nor, hini ar c'harrdi eo a zo digoret, « Ma eontr ! Soñjal a raen e oas-te an hini e oa, pa 'm eus gwelet ar c'harr-tan gant IRL o vont difounn e-biou bremaik. » Koulskoude n' en doa ket klevet a-raok e oan degouezhet er vro.

E wreg zo o labourat, distreiñ a ray da c'hwec'h eur. Ar vugale a vez kaset d' un drevad-hañv e-pad an deiz. Mont a ray d' o c'herc'hat bremañ-sonn. Ret e vo deomp gortoz, ne vo ket pell. Traoù war an daol, debrit hag evit. Hini kreñv, hini dous, gwispid, kraoñ.

Eñ a dle bezañ pevar ha tregont bremañ. Ne glask ket komz galleg ouzhimp. Danevellañ a ra ar gwallzarvoud marc'h-dre-dan ma oa bet darbet dezhañ koll e

vuhez, dek vloaz 'zo. Chomet eo koeñvet e droad hag e ufern kleiz.

Deut eo ganeomp da Loktudi da welout ar c'houer. Ar vereuri zo en tu all d' ar vourc'h, e penn un alez avalenned bec'hiet o brankoù gant frouezh. Ar savadurioù zo damguzhet e-kreiz gwez uhel. Aet eo L. da gentañ betek an ti. Goude pemp pe zek munud e tistro da lavarout din dont tre ivez. Er sal e kejan gant ar c'houer hag e wreg, e vab hag e verc'h-kaer. Gouzout a reont ez on eontr da L. Int kennebeut ne glaskont ket gallegañ, pezh a gadarna ma c'houn eus ar Bigouenned evel ur " ouenn " ha ne oa ket abafet evit komz hor yezh. " Wie ihnen der Schnabel gewachsen ist " e-giz ma 'z eo stummet o figos.

409

« Aze a-dreñv, er park, ez eus plas da lakaat teltennoù, kement a gar. Dour a c'heller kerc'hat diouzh ar bluñvenn er porzh pe ar feunteun e penn all ar park, e-kichen ar poull-kannañ. Evit privezioù, ne vo nemet ober un toull e-kreiz ar strouezh. »

Ne c'houlennont ket eus pelec'h omp deut na pegeit e chomomp. Warc'hoazh vintin e tilojimp eus Kerfani.

O tegouezhout eno en abardaez e kavomp ur c'harr all e plas hon hini e-tal an deltenn. Un itron zo deut da gampiñ war ar savenn, e penn ar " straed ". N' eus ket tu da bignat aze gant ar c'harr, ha n' eus ket plas kennebeut en traoñ. Setu m' he deus en em zibrouilhet. Hon amezeien, Roazhoniz hegarat anezho, o deus klasket he fellaat ha mirout ar plas deomp. Respontet he deus : « N' o devo nemet ober evel don ! Gouestlet eo bet din e vije plas d' ur c'harr e-tal pep teltenn, ma gwir a c'houlennan ». Ur vaouez prim, a lavaront.

Aet on d' ar burev. Diwezhat eo, met deut on a-benn da ziskoachañ ar merour. « A-benn arc'hoazh vintin e rankimp pakañ hor stalabard, n' hon eus ket c'hoant da choukata bec'hioù kant metr betek hor c'harr. »

Aet eo da welout ar vaouez. Pa ne dae tu ebet ganti, en deus degaset ar berc'henned. Perc'henned ar stal int ivez, doare Reteriz dezho. Goude un hantereur, setu an itron o tont a-herr d' am c'haout :

« Ne blij ket deomp kaout trouz na reiñ trubuilh da estrenien, fellout a ra deomp e kavfent degemer vat e Bro-C'hall. Met derc'hel a rankomp hor gwir ». E gwirionez div pe deir gwech stankoc'h emañ an teltennoù emañ eget aotreet hervez ar reoliadurioù. C'hoant am eus da lavarout dezhi ne fell ket din tregasiñ estrenien kennebeut.

En em glevout a reomp. Gant ma tenno he c'harr kuit a-raok eizh eur hanter ne ran forzh. Evit un nozvezh e lakain ma hini e lec'h all.

* * *

A-raok ma 'z omp savet e oa aet kuit ar c'harr, didrouz.

Glav a ra. Goude distav ec'h adkrog, gwashoc'h. Kerkent ha ma vez damsec'h an deltenn e vez glebiet adarre. N' hellomp ket gortoz pelloc'h eget kreistez, pakañ a reomp pep tra tamm-ha-tamm. Ar gamperien all n' o deus netra welloc'h da ober eget arvestiñ ouzh hon embregadenn. Mall zo warnomp mont kuit. Darn anezho zo deut da vout re garadek. O c'hlevelt em eus o lavarout e komzan mat galleg... Evit un estren !

410

E Loktudi emaoimp didrabas. Teltenn all ebet en hor park. Bez' ez eus div pe deir er park e-kichen hag a-raok dimp mont kuit e teuy re all. Teltennoù a weler e pep lec'h. Ni hag a grede e oa strizh ar reoliadur hag e tlejemp kampiñ el lec'hioù aotreet hepken ! Emaomp ivez en ur vro gelt.

Gwaskedet-mat omp a bep tu estreget ar reter. Ret eo bet din kompezañ al

leton da gentañ, hag he dic'hlaouediñ ivez. Aes eo sankañ ar strapennoù en douar arbrad (1). An draezhenn n' eo ket ken tost ha ma karjemp ha pa 'z omp aet da gouronkat n' en deus ket plijet an dour deomp kennebeut. Klouar e oa, met strafuilhet betek re ha diskred hon eus bet o welout takennoù eoulek gell o neuñvenniñ en-dro deomp. Eus pelec'h e teuent, eus ar bigi-pesketaerien, eus Pont-'n-Abad, eus an donvor, n' oufen ket lavarout. Ma ! n' eo ket traezhennoù brav a vank etre Pennmarc'h ha Benodet. Ar vugale a gav traoù a-walc'h d' o dudiañ a-hend-all. Un darn vat eus o amzer a dremenont o klagousañ en-dro d' ar poull-kannañ. Kavet o deus ur glesker, un dra na welont morse e fabourzioù Dulenn. Pignat a reont er gwez hag er pengosoù. Ur gwall lamm en deus tapet Diarmaid p' en deus kroget en ur skourr dolmet : kouezhet eo en ur fozad drez ha linad, krabiset ha devet eo e zremm hag e zaouarn.

* * *

Pevar bloaz 'zo hor boa tremenet un endervezh bourrus war an traezh e Benodet. Hervez hor c'hartenn ez eus tu da dremen gant ar c'harr-tan war ar vag-treizh. Pebezh steudad kirri o c'hortoz ! Pa 'm eus komprenet e oa ken difounn ez on deut a-benn d' en em dennañ. Gwelloc'h eo lezel ar c'harr en tu-mañ. Ken buan e vefe mont da c'hoari an dro dre Gemper a-hend-all. Ur vlenierez dic'houzvez pe re hardizh zo deut betek ar glann e-biou d' ar re all. Ur vaouez all zo dilammet er-maez eus he c'harr-hi hag he deus he langachet gant kement kunujenn en he geriadur.

(1) douar arbrad : douar melen, pri.

411

Un dra n' en deus ket plijet din e Benodet ar wech-mañ : ac'hubet eo an draezhenn gant listri-bale sachet war ar sec'h. Aze e vefe gwir abeg da glemm a-enep ar vourc'hizien. Eadaoin ha Diarmaid zo bet dav dezho mont war ar c'herreg hep soursial hag ez eont diwar wel pe nann, ha setu kollet ar plac'h en engroez. Merkañ a reomp mat d' an tri all pelec'h chom da c'hortoz ma tistroimp, kemend-all a dud a zo ma 'z eo a-walc'h da unan diankañ. Brid eo he deus kavet Eadaoin e-kichen ur " post-sikour ", degaset di gant ur vaouez hag he doa komzet saozneg outi. Edo o ouelañ.

E Pennmarc'h emamp degouezhet da seizh eur eus an abardaez. Re ziwezhat evit kas ar vugale da veg an tour-tan. Tourni a zo gant ar c'hezeg mezheven ha gwikefreoù ar stalioù a bep seurt savet en arbenn d' ur c'hermes pe ur foar bennak. Tostaat a reomp ouzh ur stalig eñvorennoù breizhek dalc'het gant ur vaouez korfet-mat hag a rank ober war-dro ur babig fichfich keit ha ma pled d' he fraticoù ivez. Ur gwaz o vont war e dri-ugent vloaz a zo e penn ar stal, o kizellañ hag o livañ. E glevet em eus o komz brezhoneg. Me da doullañ kaoz outañ en hor yezh ivez. Ne ziskouez ket bezañ souezhet. « Penaos ya ar c'hoñvers - Fall. An dud a zalc'h d' o argant, ar bloaz-mañ. Ha n' eus ket moien da intent an dud gant an trouz spontus a ra ar re-se en tu an d' an hent. Pa soñjan e vint aze bremañ e-pad pemzektez ! »

Pelloc'h e c'houlenn : « Eus peiec'h out 'ta ? Me 'wel n' eo ket un oto eus tro-amañ a zo ganit. - Me 'zo genidik eus kostez Kemperle, » emezon. N' eo ket bet dav din resisaat. Eñ 'zo eus kichen Kemper. Seven-meurbet e ra gourc'hemenoù da Vrid.

Goude ur pennadig e tro war ar galleg. E lezel a ran, met en ur vont kuit e lavaran : « Ne blij ket din ar yezh-se. - Kompren a ran, » emezañ.

E Breizh ne vez koulz lavaret den ebet mui war an hentoù nag ar straedoù goude kuzh-heol. Sañset ez eus ur " Fête Bretonne " e Loktudi, ma Doue 'ta ! Deut ez eus bommoù diheson betek hon teltenn, darn anezho doare breizhek dezho.

* * *

412

Ezhomm am eus bet da vont d' ur c'hafedi e-kichen ar porzh evit pellgomz d' ur vignonez er penn all eus Breizh. Aet on en tu all d' ur speurenn. E

brezhoneg em eus komzet. « Pegement eo ? - Netra, eme an ozhac'h. - Ur banne a gemerin, emezon. - C'hwi a zeu mat ar brezhoneg ganeoc'h, emezañ. Ne veskit ket gant kement a c'halleg ha ma reomp. - En ur akediñ e c'heller dont da gomz brezhoneg koulz ha galleg. - Langaj ar Vretoned eo, emezañ. Dleet e ve deomp derc'hel dezhañ. - A ra plijadur da glevout, emezon. - 'Gav ket dit ? » a c'houlenn ouzh ur gwaz all. Asantiñ a ra egile, hep kalz a c'hred.

Un droiad ez omp aet da welout peseurt buhez a vez en tavarnioù goude serr-noz. Eus tu an hini 'zo anvet " Les Récifs " e klevomp safar ha kan. Tud yaouank zo er sal, paotred ha merc'hed o tañsal pe o jestraouiñ, luskañ a reont o divvrec'h hag o divesker evel pa vefent war varc'h-houarn. Ur gour giz martolod, dilhad ha kasketenn c'hlas, zo en o c'hompagnunezh. Emaomp o vont da c'houlenn pep a vanne met setu ur paotr o tont d' hor c'haout : « Estrenien ? » emezañ, e saozneg. - « Ya, emezon, eus Breizh Veur. N' on ket Saoz, Kembread. - Ha mat ! emezañ, gouzout a ran peseurt diforc'h a zo. Klevet em eus ez eus lod ac'hanoc'h o klask en em ren. E komzit ur yezh kar d' ar brezhoneg. Me zo eus Brest, n'ouzon ket brezhoneg. - Me 'oar brezhoneg, eme ur melegan bras pennvezv. Amañ ivez hon eus tud a fell dezho argas ar C'hallaoued. Les Frantsouzes dehors. F.L.B. » Hag e krog da strinkañ brezhoneg, drailhet 'giz Kemper, ouzh Jañ-Loui, ar c'hozh martolod.

Hemañ ne ev ket sistr na bier, gwin ruz an hini a ya dezhañ. Bremaik ez eo bet bountet hag ez eo kouezhet a-hed e gorf war al leur. N' eo ket dihabaskaet evit kennebeut. Ur c'horker a oar pladañ. Azezet eo e-keñver da Vrid hag he deus lavaret dezhañ ez eo-hi gouest da gomz brezhoneg. Eñ zo besteot-mat a-benn-bremañ, met ne vank ket da ziskouez ez eo ken barrek hag hi. Krediñ a ra ez eo-hi genidik eus Nord-Finistère. Emañ ar stal o vont da serriñ, hon dichoual a reer, met eñ a dap c'hoazh ur werennad win ruz diwar chinañ. « Bremañ, emezo, ez eomp da besketa. - Pesketa ? Da hanter-noz ? - Ya, kerzhout a reomp en dour, gant rouedoù. Deuit ganeomp. - Deomp eo re ziwezhat. Warc'hoazh e rankomp loc'hañ abred. »

413

Hor gwelet o deus p' edomp o tont kuit eus Loktudi. Savet o deus o daouarn da gimiadiñ, drant. Diganto hor boa klevet e oa bet bac'het kantadoù tud e Norzh-Iwerzhon hag e oa lazherezh da heul.

* * *

Daou zevezh a dremenimp c'hoazh er c'hornog. Evit an troiadoù a chom d' ober e vo mat deomp kampiñ war an aod e pleg-mor Douarnenez. Gouzout a ran ne vo ket ken klet eno hag e Loktudi. Dirak ar mor eonennek e Santez-Anna ar Palud hon eus dibabet ur pleg etre an tevennoù.

Amañ ez eus nebeutoc'h c'hoazh a aezamantoù eget e Loktudi. Evit dour e ranker mont ouzhpenn ur c'hilometr da feunteun ar chapel. Ur c'hafedi zo war an dunienn nepell diouzhimp, ha " kraou an azen ", evel ma lavaront e Konamara, zo e-kichen. N' eus ket goulou ennañ ; n' eo ket sklaer kennebeut hor bije aotre da vont ennañ.

Un devezhiad glav adarre. Ar beurevezh hon eus tremenet e Douarnenez zo bet laouenaet gant div weladenn. Sklaeraet eo an oabl war-dro un eur, koulz e vo deomp mont d' ober an droiad rakdivizet e ledenez Krozon.

Souezhet on bet o welout ez eus bet graet un hent teret betek kern Menez C'hom. Pebezh disakradur aesaat evel-se pignadur unan eus hor menezioù brudetañ ! Un taol heñvel zo bet graet da Venez Mikael Brasparz, siwazh !

E Beg ar Spagnoled, unan eus ar c'hevioù e mogerioù ar c'hreñvlec'hioù kozh zo bet gouestlet d' un diskouezadeg livadurioù. Teñval eo er-maez, e-barzh ez eo teñvaloc'h c'hoazh. Hag al livadurioù zo ken dispis ma kredfed ez eus latar tro-war-dro. Kement-se en deus skrivet unan bennak en ur c'haier lakaet eno, d' ar weladennerien da reiñ o meno. Ur priz a oa bet roet d' an arzour e Kemper, met ar pezh a oa skrivet er c'haier ne oa ket evit e galonekaat.

Gwelet hon eus Penn Hir, ul lec'h par d' ar re ouesañ en Iwerzhon gant e reier, ar mor garv, an avel vras. N' on ket a-du gant sevel ° monumañchoù " e-lec'h m' emañ an natur en he meurdezusañ ha n' eo ket da frankiz ar Vrezhoned evel pobl ez eo gouestlet an hini zo bet savet du-hont.

414

En un davarn e Krozon ez eus daou zen azezet ouzh un daol e-tal an nor. Brezhoneg ganto. Un trede a zeu da goazezañ en o c'hichen, hag e tiskouez start e vennad gallegañ outo. Banneoù adarre. Evit pet troiad ez eo bet paeet endeo ? Evit teir bremañ, eme an daou all. Evit div hepken, eme ar servijer. Ne zeuont ket a-benn d' en em glevout gantañ. Aet int kuit, kounnaret.

Noziñ a ra adarre pa ziraezomp hor c'hêr. Kof-moan hon eus graet e-pad an deiz. N' hon eus ket kalz c'hoant da geginañ d' an eur-mañ met naon hon eus. Buan ma vo diblusket un nebeut avaloù-douar ha poazhet un tamm kig-sall er pod-gwask. Pelec'h emañ an tamm kig ? N' emañ ket er baner, nag er boestoù kartoñs, n' emañ ket en arc'h ar c'harr kennebeut. Kaer zo klask, n' eus na liv na c'hwezh anezhañ. Chomet eo war hol lerc'h er stal e Douarnenez ! Kement-se zo dipitus, goude da Eoghan bezañ kouezhet e Krozon gant ur podad mel hag un hanter dousenn vioù ha troc'het e c'hlin war an tammoù gwer. Saladenn lezhegez a vo gant an avaloù-douar hag an neb en deus c'hoant a zebro bara amann gant pe hep keuz war-lerc'h. O hejañ al letuz er-maez e tifoup an delioù eus al lienenn hag ez int strewet gant an avel. Koulz eo c'hoarzhin ! Ha mont da gousket.

Petra an tanfoeltr eo ar saflik a glevan o tont a-zindan ar vatarasenn aer ? Dour zo poulladet war leur an deltenn diabarzh. Penaos eo deut e-barzh, ne gomprenan ket. Kalz glav zo bet a-hed an deiz ha gant an avel hag al lien o rimiat ouzh ar bannoù e c'hellfe ar glebor bezañ en em silet a-dreuz an danvez ha redet dindan. Koulskoude n' eo ket gleb ar sac'h-kousket nag ar pennwele er c'horn. N' eus ket da zilerc'hiñ na da dermal, ret eo spoueañ an dour ha sec'hiñ ar gwellañ ma c'hellan. Ne dan ket da c'hourvez war ur vatarasenn c'hleb. Ehanet-mat eo ar glav, emichañs e vo peoc'h betek ar beure.

Antronoz em eus sellet pizh. Gounezet en deus ar glebor a oa aet en danvez betek gorre ar vatarasenn, en tu dehou. O plegañ an deltenn diabarzh a-raok mont kuit, em eus dizoloet daou fregig el leurenn. N' em eus ket gouezet e pelec'h e oant bet graet, ret eo krediñ n' hor boa ket taolet evezh a-walc'h da zstum trojoù louzoù, tammoù gwer pe meinigoù lemm el lec'hioù dibabet ganeomp da gampiñ.

* * *

415

Skeiñ a reomp bremañ war-du ar reter en-dro. Hor soñj eo bezañ en abardaez-mañ 'tu bennak kostez Erge-war-Vor. Ac'hano e vo aes deomp tizhout Sant-Brieg, Sant-Malo ha Roazhon, e-lec'h ma fell din ober un nebeut gweladennoù e-pad an daou zevezh diwezhañ.

An hent zo un tammig luzius evit diraez an uhelenn, en hanternoz da Erge, e-lec'h ma 'z eus daou pe dri c'hamp hervez hon dielloù. Setu ar Vilin Gozh - merket eo hech anv e brezhoneg en hol levr-stur, dindan an hini galleg - ur gwenn-ha-du zo gwintet e-kichen an hini triliv. Ul lec'h all hon eus anavezadennet, n' eo ket gwelloc'h. Dav d' ar Vilin Gozh. Eno ez eus ichou, ha kement seurt aezamantoù.

* * *

Da greisteiz e tleomp kejañ gant Niamh e Sant-Brieg. Diskennet omp en Erge. Kirri-tan a zo e-leizh ar straedoù, parket en daou du, ha poan a zo evit daou garr da dremen etrezo. Ret eo ober lammou glesker, mont goustad, arsaviñ, lammat e-biou. Mil... ! Houpet eo ar c'harr ! Hourzet. E-kreiz an tremeneri, ha war grec'h. N' eus netra d' ober. N' eo ket al loc'her ar wech-mañ. Eoul-maen a-walc'h a zo. Ne vank na dour nag eoul. Ne dalvez ket ar boan din mont da furikat en-dro d' ar c'heflusker n' ouzon ket an dialloù anezhañ. Tu a gavan da gilañ ha

da duañ ar c'harr tostik-tost d' ur voger. Lavaret eo bet din e burev an Automobile Association e Dulenn ez eus emglev etre ar gompagnunezh-se hag an Touring Club de France evit an degouezhioù ma chomer sac'het war an douar-bras. Gwashat tra ar sadorn eo, hag emañ o vont war greisteiz. Den ebet en Erge ne hañval gouzout hag ez eus ur burev TCF, pe ur gompagnunezh heñvel, er gêriadenn. Er Syndicat d'Initiative e tlefezt bout gouest da lavarout. Emañ er penn all eus Erge, dirak ar mor. Kent degouezhout eno e tremenan e-kichen ur c'harrdi. Ne c'hellfent ket pleidiñ d' am sachadenn a-raok dilun ! Da eizh eur dilun e tlean bezañ war al lestr e Cherbourg. Un tamm dielc'het on o tisplegañ d' an itron en S. I. petra 'glaskan. N' eus ket a d-TCF na tra eus ar seurt en Erge. Reiñ a ra din div niverenn-bellgomz e Sant-Brieg, ha goulenn zoken an ereadur evidon. Setu a zo hegarat. E penn all al linenn e c'houlenner ouzhin hag-eñ em eus ur c'harned-teuliekaat ? Paeañ a rin evit an adaozañ, sinet e vo din un testeni ha pa zistroin da Zulenn e restaolo an AA ma dispign din. Da sutal ! N' eo ket se o deus lavaret din e Dulenn, n' em eus nemet ur c'hozh paperenn divurokratek. Mont a ran en-dro d' ur c'harrdi buan-ha-buan. Tre da benn all Erge adarre.

416

Displeget em eus d' ur mekaniker e peseurt enkadenn emañ. Ma c'hortozin ur pennadig e teuy da welout. Lammet omp e-barzh ur c'harr heñvel ouzh ur stlejer, gwikefreet evit pep seurt trubuilh. Marteze e vo ret stlejañ ma loenedenn d' ar c'harrdi.

N' eo ket bet pell o tizoleiñ an namm. Un dra bennak en dasparzher-tredan zo teuc'h. Grit ho kwellañ evit adrenkañ an dra, emezon. Gant ma tiraezin Iwerzhon. Goude-se ne ran forzh.

Graet en deus, ha graet-mat, peogwir tri miz goude n' em eus ket bet trubuilh digant ar c'heflusker eus an tu-se. Koulskoude en deus roet ar mekaniker din da c'houzout e oa en em gavet un nozvezh e Bro-Saoz, en ur gêr vras, ha n'en doa asantet karrdiour ebet ober war-dro ur sac'hadenn a oa degouezhet gantañ.

« Arabat deoc'h ober ur fazi a ra kement a dud war an douar-bras, » emezon. « Iwerzhon n' eo ket Bro-Saoz. »

* * *

Un hanter eur diwezhat ez omp degouezhet e Sant-Brieg. Niamh n' eo ket deut. Un taol pellgomz zo bet, evit lavarout ne oa ket erru e koulz evit ar c'harr-boutin. En em glevet em eus gant ur mignon e Sant-Malo evit ma 'z afe d' he c'herc'hat. Da seizh eur e tleomp bezañ en e di.

Hor mignon a anavez mat-tre Sant-Malo, ur gêr ha n' omp bet biskoazh enni. Da c'hortoz koan e kas ac'hanomp hon-tri d' ober tro ar gêr gozh, da gentañ war ar ramparzhoù ha neuze dre ar banelloù hag ar straedoù. Eñ a oar diouzh ar vrezelouriezh hag ar pezh en deus disklêriet deomp a-zivout an doare ma 'z eo savet ar c'hreñvlec'hioù a oa ken resis hag un diskouezadenn ventoniezh. Sellit, emezañ, penaos ez eo troet toulloù-tennañ kastell an Dugez Anna, hag eñ savet tre sko ouzh mogerioù ar gêr gloz, a-enep kêr, neket war-du ar mor. Maloiz a felle dezho chom dieub diouzh an dug koulz ha diouzh roue Bro-C'hall, ha mirout evito o-unan ar buz a zegase dezho ar breizherien-vor. Dalc'het e oant avat e-giz en ur c'hevel etre ar c'hastell ha Tour Solidor en tu all d' an dour.

417

Diskouez a ra deomp pelec'h e oa neizhiet an Alamaned a zalc'has penn keit all e Sant-Malo goude ma oa tremenet an Amerikaned. Gouzout a ra dre ar munud penaos e voe lakaet soudarded von Aulock (?) da blegañ, goude m' en devoe koustet ur falsaroueziadur o buhez d' un toullad mat eus ar sezizourien.

Estlammus eo an aked o deus lakaet Maloiz da adsevel o ziez distrujet e-pad ar brezel, oc'h ober gant daroù greunvaen da wiskañ o mogerioù nevez en un doare ken aketus ma c'heller a-boan merkañ an diforc'h etrezo hag ar re gozh.

* * *

Gant keuz hon eus kroazet war an droiad dre Roazhon a-raok dont kuit. Ret e oa bezañ hep mank e Cherbourg d' ar sul abardaez ha ne fizien ket kaer er c'harr goude taol Erge. E gwirionez ne c'hoarias e benn fall nemet ur wech all war hent an distro. Edomp o tostaat ouzh Haverfordwest, e mervent Kembre. Dibreder a-walc'h e voen evit chom a-sav en un tennad war grec'h, e-sell da zebriñ un tamm e-kostez an hent, ha mougañ ar c'heflusker. Degouezhout a reas evel e Menez-ar-C'hont. Bouchet, souchet, asik-mik ! Ne oa ket anv amañ d' ober tro evit mont war-draoñ : ne oa distag ebet d' ar c'hirri o tremen a-dro-jou. Arsa ! enaouiñ ar goulou-trekiner, kenrodañ evit kilañ, bountañ war-dreñv, ha teurel evezh da vont eeun : treiñ a ra !

* * *

Ne oan ket dinec'h o vont war hentoù Bro-C'hall ha Breizh d' ur mare eus ar bloaz ma soñjen e vefe kirri-tan stank-ha-stank warno. Ar vlenierien c'hall o deus ar vrud da vont difoutre ha gwelet em eus Brezhoned o leviata evel an tanfoeltr war hentoù strizh ar vro. Pa soñjen ec'h en em gavfen fri-ha-fri ganto en ur c'horn-tro, ha me war an tu kleiz, o krediñ bezañ en Iwerzhon !

N' em eus graet ar fazi nemet div wech. O tont kuit eus an huadeg pesked e Loktudi, an hent oa ken ledan hag ur gwiler. Hag un tu bennak all, n' em eus ket soñj mui pelec'h.

418

N' em eus ket bet ezhomm da lavarout da vugale Mari Robin ne gomprenen ket galleg. Pezh n' o defe ket kredet moarvat. E Cherbourg e oamp aet da zebriñ pesked hag avaloù-douar fritet en ur c'hafedi. O klevout Diarmaid hag Eadaoin o varvailhat en iwerzhoneg e fellas da dud an ti gouzout a be orin e oamp. E 1967 e oan aet da zebriñ en ur c'hrampouezherezh nepell eus ar c'hafedi-se hag em boa goulennet krampouezh ed-du. « N' eus nemet Bretoned a c'houlenn ar re-se, » e oa bet respontet din. Dak ! Kae en-dro d' ar skol ! Ne oan ket o vont da ziskleriañ ma orin d' an Normaned-mañ c'hoazh. Da Vrid ha d' ar vugale e oa aes tremen evit Iwerzhoniz. « Met c'hwi, » eme ar wreg din, « c'hwi a gomz galleg evel unan eus kornog Breizh. »

Kadoudal pe distresadenn an Istor

" Istor ur bobl a dle bezañ d' am meno, un emvarnadenn. "
R. HEMON.

Ne don ket un istorour a vicher. A-viskoazh on bet dedennet koulskoude gant istor an Dispac'h bras ha dreist-holl gant hini ar Chouanerezh. Dastumet em eus a-hed ar bloavezhioù ur bern levrioù ha notennoù a bep seurt diwar-benn ar prantad-se. Prederiet em eus ivez...

E-mesk tud meur ar Chouanerezh, Kadoudal eo ar muiañ anavezet, ar muiañ doujet. Pehini ac'hanomp n' en deus ket santet e galon o tridal o lenn darvoudoù niverus e vuhez, e varv ken kalonek, rak mervel a reas evel m' en doa bevet, da lavarout eo, dispont ha nerzhus : « Kentoc'h mervel eget en em vastariñ ».

Ha koulskoude n' eo ket bet komprenet mat buhez an den-se gant an holl. Roet hon eus dezhañ menozioù ha na oant ket e venozioù. Bamet omp dirak ur seurt den ha gwell-a-se. Ar pezh a zo direizh eo implijout a-dreuz anv brudet Kadoudal. Mat eo, d' am soñj, diskouez ar pezh a zo bet talvoudus en e vuhez evit hor bro-ni, Breizh, hep kaout aon da ziskouez ivez an darvoudoù all hag a blij nebeutoc'h dimp ! Ne gomzan ket eus ar pezh n' en deus ket graet.

* * *
420

Kadoudal a zo ganet daou c'hant vloaz 'zo e Kerleano, tostik ouzh Alre. Er bloaz-mañ ez eo bet lidet 'ta deiz-ha-bloaz e c'hanedigezh, lidet war un ton bras koulz gant ar gouelioù savet en e enor hag ar skridoù embannet amañ hag ahont. Aon am eus koulskoude e teufe da vezañ buhez Kadoudal un afer-a-genwerzh ! Ac'hubet eo va zaol-skrivañ gant skridoù ha pennadoù bet embannet diwar e benn a-hed ar bloaz. Darn a zo a-bouez, darn all leun a faltazi. Re hir e vefe displegañ anezho holl. E-mesk al levrioù e venegin hini Kiapp : " Jord Kadoudal pe ar Frankiz ", embannet e derou ar bloaz. Talvoudus ha klok eo ar pikol buhezskrid-mañ. Daoust d' an oberour da brizout war un dro Kadoudal, Breizh hag ar Vretoned (n' en deus ket aon da ganañ uhel meuleudi hor bro hag hor gouenn), ec'h adkavomp, a-hed al levr, mennadoù politikel strizh : « Bevet ar Roue » ! Karout a ra Kadoudal, met daoust hag en defe Kiapp kanet ken uhel e veuleudi ma vefe bet Kadoudal rener ar Republikaned ? Ul levr all a zo addeuet er-maez er bloaz-mañ ivez : hini La Varende, bet embannet dija e 1952. N' eo ket didalvez ar skrid-mañ. Flemmus eo pluenn ar skrivagner normandat. Ne zegas netra da glod Kadoudal.

En tu all d' an daou levr-se e kavomp e nouspet kelaouenn ur bern pennadoù o tibunañ an tra-mañ-tra diwar-benn buhez hep par ar Chouan brudet. Aozet eo bet an traoù un tammig evel just. Distreset eo bet e vuhez, dibabet enni hepken an darvoudoùigoù gouest da lakaat ar plac'hed tener o c'halon da ouelañ dourek. Lennomp, da skouer, al linennoù-mañ tennet eus ar gelaouenn " Le Petit Echo de la Mode " (pennad embannet e gwirionez un nebeut bloavezhioù 'zo) :

- « *Georges, le plus redoutable des Chouans, avait un grand amour dans sa vie... Lucrèce était si belle, si réservée et si lointaine qu'elle faisait songer à une sainte de vitrail, à quelque apparition... elle avait un profil de Madone !* »

Diotachoù ! Ma oa Lukreza ur gaer a blac'h, eo diaes dimp krediñ en doa an Aotrou Doue krouet anezhi ken brav all !

Ur romant zoken a zo deuet er-maez warlene, hag ur pikol hini. Embannet eo

bet gant an ti-embannerezh " Fleuve Noir ". Ha keinet mar plij ! An titl ? " *Flammes sur la lande* ". An oberour ? Per Nezelof. Ne blij ket din seurt lennegezh, met gout a ouien e oa keloù el levr-se eus Kadoudal... Prenet em eus anezhañ. N' em eus tamm keuz ebet ! An danevell - un istor a garantez etre ur plac'h hag un ofiser divroet - a zo skrivet mat ha plijus da lenn. Estonet on bet o welout pegen tost ouzh ar wirionez e oa an darvoudoù istorel dibunet ennañ. Hep mar ebet ec'h anavez mat-tre ar skrivagner buhez Jord Kadoudal hag istor ar Chouanerezh.

421

Goude bezañ lennet kement a bennadoù, kement a levrioù diwar-benn Kadoudal, penaos dispartiañ ar pezh a zo gwir-anat, diouzh ar vojenn ? Hervez istorourien 'zo ez eo bet Kadoudal unan eus hor gwellañ brogarourien. E penn e levr en deus unan anezho (1) skrivet, e galleg : « *E koun S. ar Balp, Pontkallek, Jord Kadoudal, Y.-V. Perrot... d' an holl re o deus skuilhet o gwad evit Breizh* ». Daoust hag en deus skuilhet Kadoudal e wad evit Breizh ?...

Kudenn Kadoudal n' eo ket ur gudenn hiniennel. « ... *Evit pezh a sell ouzh ar Chouanted, anat eo ne c'hallent kaout tamm ebet skiant eus kenvad ar vroad evit un abeg splann : renet e oant gant estrenion pe gant Brezhoned na oant tamm ebet o klask mad ar vroad vrezhon, evel Kadoudal e-unan* (2) ». Evit kompren an den, ar soudard, an haroz, eo ret adgwelout un tammig orin ar brezel-diabarzh anvet Chouanerezh.

* * *

E-sell da lakaat e zorn war Vreizh e klaske Gouarnamant ar Roue, pell 'zo, dispartiañ ar renkadoù-tud an eil diouzh egile. An Trede-Stad he doa skoazellet an Noblañs pa stourmas an dudjentil a-enep beli ar Roue, met an doare d' ober-se ne oa nemet un dro-bleg evit gwanaat an Noblañs ha reiñ d' ar bobl ar menoz eus he nerzh nevez o tiwanañ, dreist-holl e-mesk bourc'hizien ar c'hêrioù. Emgar e oa an Noblañs : a-hed ar c'hantvedoù he doa stourmet kreñv evit mirout frankizioù Breizh, met an uhelvennad-se a oa aet war ziskar. Pa grogas ar Reveulzi, ne chome mui netra eus ar pezh en doa graet enor o c'hefridi. Ne veze kaoz ganto nemet eus kudennoù arc'hant ha gwirioù personel da virout. N' eo ket goulennoù groñs ar Roue o deus diskaret Breujoù Breizh : dizunvaniezh-diabarzh an izili ne lavaran ket...

(1) Caerleon : " *La Révolution bretonne permanente* ".

(2) " *Emsav* " : niverenn 5.

422

Pa nac'has an Noblañs kas kannaded da Versailhez, e welas an Trede-Stad e oa deuet an eur c'hortozet. Ar vourc'hizien, o lakaat o aferioù da dremen dreist kenvad ar Vretoned, a vezias frankizioù Breizh. Ret eo anzav : ne ouelas tamm ebet an Trede-Stad war hor frankizioù kollet. « *Breizhiz dre vras o deus dibabet dianaout ar gaou a ra dezho o destagerezh da Frañs ; tec'hout a reont eus an istor ha war un dro eus o istor evit kaout repu er mojennoù a anavezomp holl...* » (1)

Daou zen hepken, daou Vrezhon feal d' o bro, a gendalc'has mui pe vui gant ar stourm : ar markiz Ar Roueri hag ar c'hont Boterel.

Dre ma oa denjentil ha daoust dezhañ da vezañ enoret bep an amzer war gelaouennoù 'zo, n' en deus ket Ar Roueri al lec'h enorus a dlefe bezañ roet dezhañ. Setu un den en deus gouestlet lodenn ziwezhañ e vuhez da Vreizh. Roet en deus d' hor bro e holl vadoù, e yec'hed, e vuhez ! Evel ma skriv L. Ar Berr : « *Evit diskouez e garantez e-keñver Breizh ez eo kouezhet Ar Roueri war an dachenn* ». An Tad Chardronnet, en e levrig ken talvoudus, a lavar : « *Pa varvas Ar Roueri e kollas Breizh an hini nemetken a c'helle ober an unvaniezh* ».

Pa skrivan al linennoù-mañ emañ dindan va daoulagad levr eñvorennoù ar jeneral Turreau (lesanvet Linières e-pad an Dispac'h ha de Linières goude !...). El levr-se, diaes-tre da gavout, e lennan : « ... *ar gevrenn hag he deus gwastet* ».

ribl kleiz al Liger ne oa nemet ur skourr eus hini Ar Roueri », ha pelloc'h : « Ha ma vefe bet un den o tont war-lerc'h Ar Roueri hag en defe tennet e vad eus e raktres, eus e ijin, eus e fazioù zoken evit adkregiñ gant un tan hanter vouget ! » Pemzek vloaz goude e varv, Ar Roueri a laka ar jeneral Turreau da grenañ gant ar spont. Ne lavar grik diwar-benn Kadoudal.

Markiz Ar Roueri n' en deus ket krouet ar Chouanerezh end-eeun, met roet en deus lañs dezhañ. Kalz eus izili an "Association Bretonne " a yelo d' an emgann pa grogo an emsavadegoù kentañ. Gwir eo ivez n' en deus ket Ar Roueri disrannet, en e spered, ar stourm evit distro ar Roue diouzh ar stourm evit frankizioù Breizh, met Ar Roueri a voe an hini nemetañ, er mare-se, o labourat kalonek e-sell da virout ur vuhez vroadel da Vreizh. Pa varvas ar markiz, e skrivas kannaded Pariz d' ar gouarnamant (d' ar 5 a viz Meurzh 1793) : « La calotte et les vieux parchemins sont vaincus ». Breizh eo a oa trec'het, 'm eus aon !

(1) " Isdiorradur ha Bredoniezh ", gant Gi Etienne, war Tonkad 66 - Preder 84-85.

423

Kalz nebeutoc'h anavezet ez eo eil difenner bras Breizh e dibenn an XVIIIvet kantved. An istorour gall Lenotr a lavar ez eo ar c'hont Boterel « difenner kalonek frankizioù Breizh, anvet an hini diwezhañ eus ar Vrezhoned ». Mont a ra re bell ar skrivagner, a gredan ! Un den-a-lezenn e oa an denjentil-se (prokolor an Noblañs), c'hoant dezhañ mirout ha difenn gwirioù an Noblañsoù koulz ha gwirioù hor bro. Akuit war al lezennoù-stadec'h anaveze ar gwellañ doareoù gwidreüs da arguziñ war ar poent-mañ-boent. Ha kalonek ouzhpenn ! E 1788, edo e Kemper gant ar soñj da lakaat noblañsoù ar c'horn-bro-se da enebañ ouzh sezi direizh ar gouarnamant. Pa erruas e-kreiz kêr e voe kunujennet ken e voe kunujennet, hejet ha dihejet gant un engroez aet e gouez. « Ar Parlamant d' an traoñ ! » a vlejed warnañ. Un den deuet imor ruz ennañ a stlapas e voned ouzh fas Boterel en ur huchal mallozh warnañ. Ken sioul ha tra e tapas ar prokolor ar boned, hag hen roas en-dro d' ar paotr : « Va mignon, emezañ, n' hoc'h eus ket aon da dapout ur sifern ? » Bloaz goude, e derou Genver 1789, pa dorras ar Roue Breujoù Breizh, eo Boterel a voe an hini nemetken o sevel taer e vouezh a-enep, hag oc'h enebañ ouzh an taol trubard-se ! Met an den-a-lezenn-se a ouie bezañ un den-a-vrezel pa veze ret. Adkavout a reor Boterel hag unan eus e vibien e dilestradeg Kiberen. Dont a reas a-benn an tad da dec'hout diouzh griped ar Republikaned met e vab a vo fuzuilhet e Gwened d' an eizh a Fruktidor. Diwezhatoc'h e vab all, Feliz, a stourmo e penn ar Chouaned war-dro Mezerieg (kanton Menez-Alban). Met dre ma oa denjentil, evel Ar Roueri, ha dre m' en doa difennet gwirioù an Noblañs war un dro gant gwirioù Breizh, labour bennek Boterel n' eo na komprenet na prizet ! Boterel ? Un randoner, setu holl ! (1) Koulskoude, goude Ar Roueri, goude Boterel, e vo ret d' ar Vrezhoned gortoz hir-hir amzer a-raok gwelout tud o kinnig dezho menozioù politikel breizhek.

* * *

(1) Ober goap a reas Kadoudal ouzh Boterel, e Londrez, pa glask ar c'hont bodañ izili divroet Parlamant Breizh.

424

E-keit-se e kroge Kadoudal gant e stourm e Bro-Vande dindan tud vrudet evel Bonchamp ha Stofflet. E gwirionez n' eus ket an disterañ mennad politikel breizhat en e youl. E garantez evit ar Roue hag evit ar relijion eo a boulzas Kadoudal d' en em gannañ. « Doué ha mem Bro ! » setu e c'her-stur, e uhelvennad. Met evit peseurt bro e roas e vuhez ? Darn a lavar ne voe Kadoudal nemet « mevel ar B/Priñsed » (1).

Morse ne soñjas Jord e " Breizh " eviti hec'h-unan. Hini ebet eus ar Chouaned - an darn vuiañ anezho izili an Trede-Stad - n' en deus difennet gwirioù Breizh : gwirioù o renkad ne lavaran ket. Alies e teu ar bobl da vezañ enebour dezhi hec'h-unan ! Ne soursie tamm ebet al labourien-douar ouzh menozioù ha diskleriadurioù ar gouarnamant petra bennak e vefe ar gouarnamant-se ! Ne c'houlenne an dud nemet bevañ eürus ha sioul : fazioù niverus-niverusoc'h ar

Republikaned eo a denno ar bobl eus he leziregezh politikel. Mont a raio ar beizanted d' an emgann dindan banniel ar Roue n' eo ket hepken evit difenn ar Roue met kentoc'h evit stourm a-enep ur galloud nevez ha dianav a zirenke o buhez pemdeziek hag a argase « ar veleien vat ». Ouzhpenn-se, bourc'hizien ar c'hêrioù ne blijent tamm ebet dezho. Pouezus-kenañ eo bet ar gudenn relijiel ! Dre an Iliz ec'h anaveze ar bobl lezennoù nevez ar gouarnamant. An Iliz a oa ul liamm etre an dud diwar-ar-maez hag ar peurrest eus ar vro.

Ne welimp ket an Trede-Stad o kaout keuz da wirioù diwezhañ Breizh o vont da get. N' eo ket bet re verr menozioù politikel ar bobl kent an Dispac'h : n' o doa an dud, an darn vrasañ anezho, menoz politikel ebet ! Emgarantez an Noblañs, diseblanted politikel ha gwanded-diabarzh an Trede-Stad eo a lazhas da vat hor bro e dibenn an XVIIIvet kantved !

.. .. .

(1) Y. Poupinot, da akouer.

425

Perak en defe bet Kadoudal menozioù disheñvel diouzh menozioù an dud a geje bemdez ganto ? Morse ne savas ennañ ur spered politikel bennak nemet hini e sentidigezh ouzh ar Roue, ouzh Doue. N' en deus ket anavezet Jord Kadoudal kudenn Vreizh ha m' en defe hec'h anavezet n' on ket sur tamm ebet en defe kemeret perzh er stourm. N' en deus tennet kennebeut kentel ebet eus an darvoudoù !

Na damallomp ket anezhañ ! Hent ar politikerezh a zo ken hir ha ken luziet ! Servij ar vro c'houlenn estreget vertuz : ur gwall vicher eo !

Evidomp-ni, koulskoude, e chomo Kadoudal an arouez eus ar fealded a zleer derc'hel d' hor c'hredennoù startañ.

Setu kentel buhez Jord.

Ha n' eo ket dister ar gentel-se !

ISTOR BREIZH LA BORDERIE

troet gant ROPARZ HEMON

An Dugiezh gant Lignez Penteür

(KENDALC'H)

An dugez Konstanza hag an dug Arzhur I

(1186-1203)

Ganedigezh Arzhur.

D' an 29 a viz Meurzh, ar bloaz war-lerc'h, 1187, e-pad nozvezh Pask, an dugez Konstanza, intañvez an dug Jafrez II, a c'hanas e Naoned ur mab, degemeret laouen gant ar Vrezhoned evel an dieuber da zont.

Daoust da urzh ar roue Herri II, a venne reiñ dezhañ e anv, e voe badezet Arzhur, un anv karget a glod hag a ster. Rak, hervez diougan Merzhin, Arzhur ar 6-vet kantved, haroz kadarn ar Vrezhoned, enebour spontus an Angled-ha-Saozon, a dlee distreiñ d' ar bed d' ar mare-se, evit daskoriñ d' ar ouenn vrezhon impalaeriezh an Douar.

Marv Herri II a Vro-Saoz.

Beskont Leon a gredas e oa deuet an deiz-se. Adperc'hennañ a reas an douaroù bet laeret digantañ gant ar Saozon. O klevout se, e teredas Herri II, kounnaret, e Breizh. Ur wech c'hoazh e voe trec'h war Leoniz. Adkemer a reas Montroulez, hag evit diskouez d' ar Vrezhoned e chome o mestr, daoust da c'hanedigezh Arzhur, ez eas da Naoned, hag eno e lakaas an dugez, a-enep d' he youl ha da youl he sujidi, da zimeziñ gant ur Saoz dihegar, mignon dezhañ, anvet Ranulf Chester.

427

Ne reas ar roue mac'hom nemet tremen dre Vreizh avat. Edo Doue oc'h astenn warnezhañ dorn ar c'hastiz. Ret e voe dezhañ mont betek penn pellañ e zomani da stourm war un dro ouzh e vibien emsavet hag ouzh roue Frañs. Er stourm-se e voe trec'het. D' an 8 a viz Gouere 1189 e varvas e Chinon, mallozhioù en e c'henou, kounnar ha dic'hoanag en e galon : marv un den daonet !

Kerkent e voe kaset er-maez an den argarzhus Chester gant ar Vrezhoned. A-unvouezh e fizjont gwardoniezh Arzhur yaouank en o dugez.

Richarzh Kalon-Leon, mab henañ hag hêr Herri II, a felle dezhañ bezañ e ward. Mont a reas avat da Vrezel ar Groaz, hag e chomas pevar bloaz (1190-1194). E-pad ar pevar bloaz-se, ar Vrezhoned, renet kuñv gant an dugez, a ziskuizhas un nebeud hag a adkavas nerzh da ziarbenn tagadennoù nevez diouzh ret.

Arzhur anavezet da zug.

Raktal goude distro Richarzh eus ar Reter, evit lemel digantañ pep digarez da emellout e traoù Breizh, an dugez a lakaas Arzhur da vezañ anavezet evel dug en ur vodadeg veur eus ar varoned hag an eskibien, dalc'het e Sant-Malo-Begnen.

« Dont a reas ar varoned hag ar breladed da gaout Arzhur a oa neuze o chom e Sant-Malo-Begnen, en o zouez Herberzh eskob Roazhon, Alan kont Penteür ha Gouelou, Gwionvarc'h hag Herve Leon, Andrev Gwizhuriege, Jafrez Felger, Alan Roc'han ar yaouankañ... ha kalz re all, hag e ouestljont bezañ leal e-keñver an dud yaouank Arzhur, hag hemañ a ouestlas hag a douas dezho ne raje na peoc'h nag

emglev gant ar roue Richarzh e eontr hep o ali. » (Ar Baot).

Konstanza prizoniet.

Richarzh, kounnar ennañ o vezañ diarbennet gant furnez kadarn Konstanza, a dalvezas dezhi un taol. He dedennañ a reas e Pontorson hag he derc'hel prizoniet eno dre drubarderezh. Evit ma vije displijusoc'h c'hoazh dezhi, e lakaas d' he diwall ar pried kasaus he doa argaset, Ranulf Chester (1196).

428

Arzhur lakaet e surentez.

Ar Vrezhoned a yeas en egar, hag a c'houlennas groñs ma vije restaolet dezho o dugez. O rakwelout edo Richarzh war-nes aozañ un ergerzhadenn-vrezel e Breizh evit krapañ Arzhur, e lakajont ar priñs yaouank e surentez, en tu-hont da bep tagadenn, e kastell Brest, na c'halled ket kemer.

Richarzh a aloubas an dugelezh evit gwir, a reas enni kalz a freuz hag a grizderioù, hogen, dre na c'halle ket tapout Arzhur, en em dennas dizale (1196). Ar bloaz war-lerc'h e kasas un armead vras a "rouderien", soudarded-urupailhed, en o fenn o "friñs", un den ferv anvet Marcadier, karget da lemel ar priñs yaouank diouzh kastell Brest ha d' e gas da Richarzh.

Ar rouderien a gerzhas dizaon, oc'h ober mil mestaol, betek Goueled-Breizh, e-kreiz Pouc'haer. Ac'hano e skojont war-eeun etrezek Brest. Trumm e kavjont ur voger savet dirazo : Breizhizeliz Leon, Treger, Kernev ha Bro-Wened, renet gant priñsed Leon, beskouted Pourc'hoad ha Roc'han, o sparlañ krenn an hent. En ur gilañ, ar rouderien a spurmantas a-dreñv dezho ur voger all : tud armet, marc'heien ha gwarded-vro Breizh-Uhel, deuet dreist-holl eus eskoptioù Dol, Roazhon ha Sant-Malo, ganto renerien akuit ha kalonek, Jafrez Felger, Yann Dol, Andreu Gwizhurie, Raoul Monforzh. Harzet ma oant evel-se a-raok hag a-dreñv, e rankas ar rouderien chom a-sav e-kichen Karaez, o c'hortoz ar stokadenn.

Ar Vrezhoned, eme Ar Baot, hervez ar c'hronikoù kozh, « a sailhas outo a-nerzh, ha kalz rouderien a varvas, rak o marc'heien, divodet, o dilezas ». Faezhet e voent. Darn anezho hepken, savetaet gant an noz o tont, a dec'has diouzh Breizh, mall warno.

Arzhur yaouank, evit bezañ e brasoc'h surentez, a voe kaset gant Guethenoc, eskob Gwened, da Bariz, ha lakaet e gward gant ar roue Fulub-Aogust, a reas e zesevel en e balez a-unan gant e vab Loeiz.

429

Marv Richarzh Kalon-Leon hag an dugez Konstanza.

Mervel a reas dizale. E 1199, d' ar 6 a viz Ebrel, e voe lazhet e seziz Chalus e Bro-Lemojez. An dugez Konstanza a reas diwiriekaat he dimeziñ gant an den fall Chester, hag a zimezas gant un denjentil gall, Gwion Thouars. Teir merc'h he devoe digantañ : Alis, Marc'harid ha Katell. E 1201 e varvas, o lezel he mab Arzhur, dezhañ a-boan 14 vloaz, hogen balc'h, kadarn, karet endeo gant e bobl, o klask adc'hounit e vadoù hêrezhel digant e eontr Yann Dizouar. Rak, hervez gwir e dad Jafrez, koshoc'h eget Yann, Arzhur an hini eo a dlee bezañ hêr da Richarzh Kalon-Leon, e rouantelezh Vro-Saoz hag e holl zomaniou e Frañs.

Brezel Arzhur.

E 1199 endeo en doa Arzhur kemeret kêrioù Angers hag Ar Mañs, hag un degemer kalonek en doa bet digant tud Anjev. Men ha Touren, bet fiziet ennañ nevez a oa gant roue Frañs, a-unan gant Breizh. N' en doa nemet 12 vloaz. Tri bloaz goude, e miz Gouere 1202, e touas lealded da Fulub-Aogust. Hemañ a ouestlas dezhañ e verc'h Mari e dimeziñ, hag evit e harpañ da zastum e hêrezh, peurgetket Poatev, e tigoras dezhañ e deñzor hag e lakaas ur bagadig soudarded taer dindanañ, o c'houlenn digarez, dre n' halle ket ober muioc'h en abeg d' ar

brezel e Normandia, nemet o prometiñ reiñ dezhañ soudarded niverus prest goude.

Gant ar bagadig-se ez eas Arzhur da Deurn. Eno e tlee kavout gant o arme an dudjentil a Vro-Boatev o doa e c'halvet da aloubiñ o rannvro. Tudjentil a gavas e gwirionez, nemet nebeud, ha, dre feur, nebeutoc'h c'hoazh a soudarded. An aotrounez pennañ meneget e-touez ar re a zeuas, oa Jafrez Lusignan, Gwilherm ha Savari Mauléon, Raoul Issoudun kont Eu, Huon Le Brun. Ne oa ganto nemet 175 a gadourien. O lakaat ouzhpenn ar re a oa deuet war-lerc'h Arzhur, ne rae ket 300, kant anezho marc'heien.

Mar karjed, avat, gortoz un nebeut devezhioù, e kreskje ar bagadig-se d' un arme vras. Arzhur a roas da anaout d' an dudjentil boatevat an nerzhioù a oa o tont d' en em unaniñ ganto : « Ar roue, » emezañ, « en deus roet dimp d' hon harpañ kont Nevers (Herve Donzy), Huon Dampierre, Imbert Beaujeu, aotrounez Berri ha Burgondia, hag an holl varoned en tu-hont d' al Liger. Emaint o tont, tizh warno, hag e vint feteiz en Orleañs. Eus Breizh e kaser din 500 marc'heg ha 4.000 brezelour, a vo feteiz pe warc'hoazh e Naoned. Amañ, me ' wel, hon eus a-vec'h kant marc'heg. Mar gortozomp un nebeut devezhioù, hor bo 1.500 marc'heg ha 30.000 a droadeien. Aloubiñ a c'hellomp douar an enebour hep aon ha freuzañ holl nerzhioù va eontr. »

430

Pouezañ a reas dreist-holl war an niver bras a gadourien kaset d' an enebour gant Normandia, ur vro poblet-stank. Kant marc'heg da stourm outo ne oa ket kalz a dra. Ret oa eta gedal, a-raok kregiñ, donedigezh ar bagadoù-skoazell a oa endeo war ar bale. Poellek, anat, oa kement-se.

Seziz Mirebeau.

Ar Boateviz, avat, a gave dezho e c'halljent, o tagañ trumm, pakañ ar rouanez kozh Eleonora, intañvez ar roue Herri II, a oa en em dennet e tour Mirebeau. Yann Dizouar, a gredient, a blegje dezho penn-da-benn evit dieubiñ e vamm. Kerzhout betek Mirebeau a vennent ober diouzhtu, hag int un niver bihan-bihan a dud hepken.

En aner e voe diskouezet dezho gant Arzhur ul lizher en doa bet en deiz-se end-eeun digant Fulub-Aogust. Roue Frañs a erbede dezhañ « bezañ fur ha chom hep mont e-barzh bro an enebour ken na erruje ar bagadoù a oa endeo o tont d' e skoazellañ ».

Arzhur, hag eñ yaouank-flamm, a ziskoueze evezhiegezh ur gwir benngadour. Ar Boateviz, evelkent, diskiantet gant ar gasoni, a rae moustamalloù dismegañsus e-giz respont :

« Kroget ar spont en eneoù laosk ! Krenet ar gouarded ! Re gadarn omp-ni, Poateviz, evit kaout aon rak ur roue digalon na gredo ket zoken hon tagañ ! »

Petra a c'halle ober ur priñs pemzek vloaz leun a dan, rebechet dezhañ bezañ krener ? Ne c'halle nemet mont war-raok, koustout pe goustout. Setu pezh a reas Arzhur. Gant e 300 brezelour e kemeras diouzhtu penn e hent etrezek Mirebeau, o raksantout marteze en e galon an drougeur a oa o tont.

Mogeriou-tro kêr, hag i start a-walc'h, a voe treuzet buan. An tour er c'hontrol a oa kreñv-bras, hag ar gwarnizon en em repuas ennañ. Hep ar pezh a oa ret da aozañ ar seziz, n' halle bagadig Arzhur ober tra.

431

Arzhur paket.

Eus an tour-se, ar rouanez kozh Eleonora a gavas tu da gemenn da Yann Dizouar e peseurt riskl edo. Ha Yann da zeredek a-herr trema Mirebeau gant un armead kalz niverusoc'h eget hini Arzhur. Gouest e vije bet hemañ koulskoude da zerc'hel penn e-barzh kelc'hiad ar mogeriou, amzer d' an 30.000 den a oa o tont

eus Berri ha Breizh da lakaat Yann d' an tec'h.

Yann, o kompren an dra-se, a c'hourc'hemennas d' e soudarded menel a-sav pell a-walc'h diouzh kêr ; evel-se ne ouiije ket soudarded Arzhur e oa o enebourien o tont. Kuzul a zalc'has gant pennoù e arme, o tiskleriañ e oa ret tagañ Mirebeau a-fed-noz, rak neuze difennourien gêr a vije « og gant ar c'houked, badaouet gant ar gwin, hep diskred en o spered, o tiskuizhañ goude labourioù an deiz. E-giz-se, » emezañ c'hoazh, « hep kaout ezhomm d' en em gannañ, e chadennimp enebourien chadennet endeo, dizarm, pep hini o kousket en e lojeiz ».

Evit soupren an enebourien e ranked lakaat unan bennak da zigeriñ didrouz an dorojoù, kaout eta mignoned e kêr.

Amañ en em ziskouez war al leur-c'hoari un den, divinadellek e demz-spered koulz hag e emzalc'h, ur Gall a lignez uhel, a bouez bras, Guillaume des Roches e anv. Amsklaer ha gwidilus e voe e zoareoù-ober en istor-mañ. Bez' e oa bet a bep eil e pep kamp. D' an ampoent, edo e kamp Yann Dizouar. Kemer a reas ar garg da gouezhañ e-pad an noz war zifennourien Mirebeau. War a hañval e klaske lakaat Arzhur hag e eontr da skoulmañ un emglev reizh etrezo.

Da Yann Dizouar e lavaras :

« Mar asantit touiñ din ne vo lazhet na prizoniet hini ebet eus hoc'h enebourien a zo bremañ e Mirebeau, touiñ ober ur peoc'h gwirion gant ho niz, ha resteurel dezhañ, hervez ali ho paroned, kement hoc'h eus lamet digantañ hep gwir, e lakain fenoz hoc'h enebourien etre ho taouarn. »

Yann Dizouar a douas raktal kement le a gared. Guillaume des Roches, dre harp mignoned en doa e kêr, a yeas enni hep trouz, gantañ ur bagad soudarded, hag a gargas Arzhur hag e zalc'hidi a chadennoù dre o c'houk.

« Iskisat emgann hep emgann ! » a skriv un den eus an amzer-se. « Trec'h hep trec'hourien ! Unan eus an enebourien, hep bezañ trec'het, a zo trec'h ! Egile, hep bezañ bet trec'het, a zo paket ha karget a chadennoù ! »

432

En noz etre an 31 a viz Gouere hag ar c'hentañ a viz Eost 1202 e c'hoarvezas an dra-se.

Muntridigezh Arzhur.

A-boan paket krog gantañ en e enebourien, e reas Yann Dizouar goap eus ar promesaoù kaer en doa graet, eus al leoù en doa touet dirak Guillaume des Roches. Hemañ a daeras hag a zilezas tuad Yann : ha na voe ket a-walc'h da zizober, siwazh, an droug diremed graet.

Yann a lakaas e niz Arzhur en ur c'harc'har e kastell Falaise. Neuze, gant gourdrozoù spontus, e klaskas e rediañ da zilezel kurunenn Vro-Saoz, an holl wirioù en doa a-berzh e dad ha dre e c'hanedigezh. Arzhur ne oa nemet ur c'hrennard pemzek vloaz, hogen brezhon dre berzhioù gwellañ e ene. Chom a reas dibleg ha disaouzan. Netra ne reas dezhañ kilañ.

Yann a reas e venoz neuze e lazhañ. E-touez an dud ar muiañ diouzh e zorn e klaskas unan a asantje lakaat an dug yaouank d' ar marv dre un touell vil ha kuzh. Nac'h a rejont holl. War se e lakaas lemel Arzhur diouzh kastell Falaise, hag e gas da Rouen, en un tour eus mogerioù kêr, soubet an troad anezhañ e dour ar stêr Saena.

Ur marc'heg norman mat, anvet Guillaume de Briouze, a oa bet karget betek neuze da ziwall ar priñs. Merzout a reas edo ar roue o prientiñ un taol fall. Ne felle ket dezhañ bezañ nag oberour na kenwaller en taol-se. Lavaret a eure da

Yann, dirak e varoned :

« Ne ouzon ket petra a zo tonket d' ho niz en amzer da zont. Dre hoc'h urzhioù on-me bet e ziwaller leal. E zaskoriñ a ran deoc'h e buhez, yac'h e gorf hag e izili. Teurvezet ganeoc'h lakaat un all da seveniñ va c'harg. »

Hag e tistroas d' ar gêr. Ar roue divezh a glaskas hep mar muntrerien all. Ne gavas ket, hag e tivizas eta ober ar vicher e-unan.

Tec'hout a reas diouzh e lez, ha mont da guzhat e-pad tri devezh e koad Moulineaux, war ribl ar Saena, un nebeut levioù izeloc'h eget Rouen. Neuze, en noz, e c'hourc'hemennas bezañ kaset gant ur vag a-hed ar stêr betek troad an tour ma oa Arzhur bac'het ennañ. War e urzh e voe lakaet ar priñs yaouank, liammet e zaouarn hag e zaoudroad, e-barzh ar vag, a zistroas etrezek Moulineaux.

433

Ar vag a yae he hent en noz du. Koulskoude, d' ar poent ma oa bet diskennet enni, en doa gallet Arzhur trawelout dremm Yann Dizouar, ken hurennek, ken gwallziouganus ma oa anat en doa divizet ober un torfed spontus. Nepell c'hoazh diouzh Rouen, e klevas ar bugel kaezh e eontr o lakaat e zorn war e gleze, hag e c'harmas :

« Va eontr ! truez ouzh da niz yaouank ! Espern anezhañ, va eontr mat ! Espern unan a zo kar dit, mab da vreur ! »

Hep selaou avat ouzh klemmoù ar paotr, e krogas ar muntrer en e vlev, a-zioc'h e dal, e sankas e gleze en e gof betek an dornell, hen tennas er-maez leun-gwad hag hen sankas adarre, ar wech-mañ en e benn, o toullañ e zaouividig.

Neuze ez ordrenas kas ar vag war-hed ur mildouar diouzh lec'h an torfed, hag e taolas ar c'horf gwadek er stêr. Ar c'horf-se, kavet gant pesketaerien en o rouedoù, a voe beziet e kuzh e prioldi Itron Varia ar Prad, a oa dindan veli abati Bec.

Setu aze betek pegeit ez eas lignez spontus ar re Blantagenet. Herri II en doa graet d' un arc'heskob, sant Tomaz Becket, bezañ lazhet e-harz an aoter. N' en doa ket avat saotret e zaouarn er gwad. Yann Dizouar, mab d' e dad, a vuntras e-unan ur bugel.

Shakespeare, gwall hardizh koulskoude, en deus kilet dirak spont ha vilder ur seurt torfed. En e bezh-c'hoari " Ar Roue Yann ", n' en deus ket livet faos temz-spered ar priñs. Lakaat splann a ra e zispledonni, e widreüsted, e laoskentez. Un dra evelato n' en deus ket kredet diskouez d' ar Saozon, daoust ma 'z eo gwirionez rik an Istor, ur roue Bro-Saoz oc'h en em izelaat betek bezañ bourev.

Gwelet e voe an dra-se koulskoude e miz Ebrel er bloaz 1203.

Ur pikig pe zaou...

Ur pik pe zaou ? - Nebeut a dra, a vo lavaret moarvat. Ha koulskoude ez eo gant an traoù bihan eo e vezer hegaset a-wechoù ; ha kement-se a zo en em gavet ganin en ur lenn niverenn 148 " Al Liamm ". Ha setu :

Lenn a ran, da skouer, war ar bajenn 317 : « Boris Karamaïev, mignon Andreï », ha war ar bajenn 357 e kavan skrivet « Eusaiz ». Ne deo ket ar wech kentañ din kavout seurt fazioù, ha stankoc'h e seblantont dont da vezañ ur pennad 'zo, ken ne oa bernioù anezho zoken war bajennadoù danvez ul levr-skol a oa bet kaset din da welout a-raok bezañ embannet, ma kaven gerioù evel « yac'haüs ». A-walc'h eo avat skrivañ *yac'haus*, anat eo, evel ma vije bet a-walc'h skrivañ *Karamaïev, Andreï* hag *Eusaiz*. Hag e gwirionez ez eus tu da skrivañ brezhoneg reizh hep lakaat an daoubik e lec'h all ebet nemet war an U, pa ranker distagañ hemañ goude E pe O : eürus, roüs, evit diskouez n' eus ket aze da ober gant ar vogalennoù EU hag OU evel m' o c'haver en *eured* ha *trouz*.

Mar bije bet reizh skrivañ « Eusaiz » e rankjed skrivañ ivez : *gouëz, loën, traïg, aliës, souëzhus, roömp, troän...* ; ha penaos skrivañ neuze : *gweleöù* pe *gwelëoù* ? - Bez' e vije neuze ur bern daoubikoù o nijal a-us d' al linennoù, ha kavout a ra din koulskoude, gwellañ ma 'z eus, eo an nebeutañ ar gwellañ a arouezioù war al lizherennoù. Ur gudenn a sav, gwir eo, pa ne ouezer ket dre ar skritur eeun pe gensonenn pe vogalenn eo an I e gerioù 'zo ha ma vez ezhomm koulskoude da verkañ e tle an taol-mouezh skeiñ war an I-se. Em Yezhadur e komzan eus ar gudenn-se er § 83-84, met ne raen aze nemet adlakaat war-wel ar pezh a oa bet lavaret gant re all em raok ha ne raen ket un dibab etre *alïes, yenïen, drougïezh* hag *aliës, yenïen, drougïezh*. Met moarvat ne reomp nemet heuliañ aze adarre un tammig re dost boazioù ar galleg, ur yezh hag eo enni « ei » hag « ai » kevatal gant ê. Hag e galleg evel-just ez eo talvoudus skrivañ « Andreï », met « Breïzh » eo a vije skrivet ivez gant ar c'hallegerien ! Gwell eo dimp moarvat ober ivez ur sell war ar pezh a vez graet er yezh tostañ d' hon hini, ar c'hembraeg. Ma ! amañ e vez graet gant an tired kognek, an tokig, hag e vez skrivet g^wydd evit hor « gouez » -ni ha gw^ydd evit « gwez » e doare da verkañ ar vogalenn a zle an taol-mouezh bezañ warni. Met kavout a reer ivez evit se an tired serr : *coffáu* (kounaat), *nacáu* (nac'h), met ivez an daoubik war an I (sio, chwirlïo). Ne gavomp ket aze eta kennebeut un hent gwall fraezh da heuliañ. Hag a-barzh reiñ ul lezenn da heuliañ ez eo ret soñjal ivez er mekanikoù da skrivañ a vez kavet peurvuiañ en hor bro, ha kement all e kudenn ar moulañ. Evit klozañ diwar-benn an daou bik war ar vogalenn setu ar pezh a soñjan : en tu-hont da *eü* ha da *oü*, hag a zo un dra ret en abeg d' an div vogalenn EU hag OU, ne zleer kavout nemet *i*, ha c'hoazh hepken pa vez evit merkañ emañ an ton war an i-se. Ha kement-mañ hepken pa c'heller bezañ en arvar war ar silabenn da vezañ toniet. N' eus abeg ebet da lakaat daou bik er gerioù *dienn* ha *kiez*, met reizh e vo skrivañ *alïes* (evit mirout na ve distaget *ailhes*), met *lies* eo a zo da skrivañ. Bep gwech avat e vo gellet ivez ober gant an tokig e-lec'h gant an daoubik : *alïes, enebïezh*.

Met n' eo ket e keñver an ober gant an daoubik hepken eo ez omp techet da heuliañ re dost, hag a-wechoù e gaou, boazioù ar galleg. War ar bajenn 365 e welan skrivet en notenn gentañ *Porzh-al-Lann*, hag en eil avat *Penn ar Ru Meur* hag a zo muioc'h diouzh va doare, rak kavout a ra din ez eo a-walc'h lakaat al lizherennoù e bras evit lakaat kemm etre *Park an Arvor* ha « park an arvor ». Ma kroger da lakaat tiredoù e bommoù-ger evel-se, n' eus abeg ebet da chom hep skrivañ « Ernest-ar-Barzhig » anv troer « Un dornad douar ».

Koulz eo din distreiñ bremañ war zaou dra am eus kavet, pajenn 357, e pennad L. Andouard (en tu-hont d'ar pezh mellad « vi-koukoug » a zo bet dozvet en talbenn dindan anv an oberour). Ha me o lenn al linenn gentañ e kavan « war gae ar Maltouterezh e Porz-Treñ », ar pezh en deus va souezhet evelato, rak abaoe amzer va bugaleaj em eus klevet komz eus *Porstrein*, hag an doare m' en deus L. A. skrivet ar ger ne deo marteze nemet distagadur ar ger-se klevet digant ur galleg bennak. Evit talvoudegezh an anv ne oufen avat bremañ lavarout da vat pe e tleer rannañ e « Porzh Drein » pe e « Porzh Trein » ; e-pad pell em eus soñjet e c'helle bezañ « drein » e-barzh, bremañ avat e vijen kentoc'h techet da welout *trein* e-barzh an anv hag a dalvezfe neuze « porzh ar beg », pe gentoc'h « porzh ar fri », o vezañ m' emañ ar porzh e-kichen ar beg-douar a zo warnañ kastell Brest. Rak n' eo ket dianav an anv « trein » er vro, hag un toullad levioù alese, en ur bignat gant an Elorn da vont etrezek Landerne e kaver, war zouar parrez Loperc'hed, *Beg Penn an Trein* e-kichen ur gêr hag a zoug an anv-se. Ne gav ket din e ve chomet bev ar ger *trein* er brezhoneg a-vremañ, met kavet e vez e kembraeg dindan ar stumm *trwyn* (ur ger hag a rank bezañ kar ivez d' ar galleg « trogne »). Kavet e vo marteze ez eo disheñvelik a-walc'h ar brezhoneg hag ar c'hembraeg, anat e teu koulskoude ar gerentiezh da vezañ pa geñverier un toullad gerioù all :

eizh = wyth, ein = wyn, leizh = llwyth, mein = mwyn

Rak a-wechoù en deus lakaet troadur ar sonioù an div yezh da vont pellik a-walc'h an eil eus eben ha ne weler ket eus an taol kentañ ar gerentiezh a c'hell bezañ etre an div ; evel-se emañ hor gerioù « douar » ha « klouar » pellik a-walc'h eus ar c'hembraeg *daear* ha *claear*. Ma n' anavezomp ket an dra-se avat e vo diaes dimp kompren talvoudegezh an anv *Roual*, anv ur gêr e Dirinonn, anavezet a-walc'h dre ma oa anv un tiegezh nobl gwechall (ur *Roual* all a zo ivez e Lanniliz) ha dre-se anavezet e veze skrivet *Rouazl* gwechall, ar pezh a laka ac'hanomp da dostaat ouzh ar c'hembraeg *rhaeadr* hag a dalvez « tizh-dour » pe « lamm-dour », an tremen eus « rouazr » da « rouazl » o vezañ un dra eeun-tre. Klask ar memes orin avat d' an anv *Keroual*, hag a zo anezhañ e Gwiler (Leon), e Gwimilio, Kerlouan, Logonna (Daoulaz) ha Milizag, hag ivez e Redene, a ve moarvat ur fazi, rak ar re-mañ a zo aes da zisplegañ dre kêr + Goual, anv-den hag a gaver e *Lingoual* Loperc'hed, *Treoual* Redene, hag ivez *Caroual* Erge-Benteür, hag a zo ar stumm evit *Keroual* bet miret e Breizh Uhel.

War ar bajenn 360 e lennan « Mont a ris da Benn-ar-Ru-Meur », o kas d' an notenn 2, p. 365, ma verker e oa merket *Penn ar Ru Meur* war ar gartenn. Ne gav ket din e oa abeg da reizhañ aze ha gant ar gartenn e oa moarvat ar wirionez. Met kompren a ran e ve bet faziet aozer ar pennad rak stank-kaer e vez kavet an anv *Run* douget gant kêrioù hor bro ; ha me va-unan n' eus ket gwall belloù abaoe ma 'm eus taolet evezh pegen stank ez eo ivez an anvioù o kregiñ gant *Ru-*. Moarvat dre ma ne oa ket stank an anvioù e *Ru-* er vro m' on bet savet, ha pa glevis goude an dud o komz e Treger eus unan bennak hag a oa o chom « er ru » e kemeren ar ger ru-se evit ar ger ru o tont diwar ar galleg. Ne deo nemet pa 'z on kroget da studiañ anvioù al lec'hioù annezet dre ar vro ma 'm eus taolet evezh pegen ledet e oa an anv *ru*, ur ger gourel ouzhpenn. Ha ma komzed eus ar *Ru Vras* e Brest gwechall, ez eo ar *Ru Meur* hag a gavomp amañ. En un anv evel *Rumengol* evel just, ne deo ket aes gwelout ha bez' hon eus da ober gant *run* + *Mengol* pe neuze gant *ru* + *Mengol*, met anatoc'h eo avat e « Rukelenn », « Rubanal », « Rukraz » pe « Rupiket » hon eus da ober gant *ru* ha neket gant *run*. Kement-se ne deo ket evit lavarout e c'hellfe bezañ un ere bennak etre an daou c'her, evel ma 'z eus etre *bre-* ha *bren-*. Kozh e tle koulskoude « ru » bezañ, rak en ur deurel ur sell ouzh ur gartenn a vro-Gembre em eus kavet ur *Rhualt* e Flint, en hanternoz ar vro (hor « run » eo moarvat a vez kavet dindan ar stumm *rhyn* ha *Penrhyn* a vefe *Penn ar Run*). Hag an anv kevatal a vez kavet da nebeutañ teir gwech war roll anvioù departamant Penn ar Bed dindan ar stumm *Ruot* hag a zo anezhañ e Plogastell S.J., Plouneour Lanvern ha Pouldruzig. Hep kontañ marteze ar pemp *Ruat* a zo anezho e Loprevaler, Plouzeniel, an Dreneq, Rieg ha Tregon.

Kement-se a laka anat pegen nebeut anavezet ez eo dre vras anvioù-lec'h

Breizh. Madik a-walc'h ez eus bet graet war-dro anvioù ar parrezioù. Hag ouzhpenn an anvioù o kregiñ gant *Ker-* e oar an holl ez eus anvioù kregiñ gant *Plou-*, *Gwik-*, *Tre-*, *Lann-*, *Lok-* ha *Sant-*. Mar deus bet anv eus *Lok* avat, ha lavaret e oa bet diwezhat a-walc'h anvet al Lokrist hag al Lokmaria niverus, ne gav ket din e ve taolet evezh ouzh an anvioù o kregiñ gant *Kel-* ha *Kili-* (pe daoust ha *Kell* ha *Killi* e vefe ?). Er bajenn 360 e kavomp ivez : « Hag e chomis ur pennad eno oc'h arvestiñ ouzh kein noazh enezenn dolzennek Keller ». En anv-se e kavomp moarvat an anv *Er* hag a vez kavet ivez dindan ar stumm « *Queler* » en Treou (Leon), « *Quelair* » e Goulc'hen, « *Lanner* » e Milizag (ul *Lanner* a zo ivez e Kerne-Veur, e-kichen Redruth), « *Mezer* » e Plouzane ha marteze zoken « *Misère* » e Gouezeg. Er c'hontrol eus *Lok* ez eo gwregel *Kel* ha *Kili* (kudenn i -lost ar ger-mañ a zo marteze ur gudenn all enni), ac'hano *Kelvi* e Gouezeg ha *Kilivien* e Brasparzh hag e Rosloc'han. An anv-se eo moarvat an hini a zo ken stank en Iwerzhon ha « *Killarney* » en deus marteze un dra bennak da welout gant « *Quelarn* » Plovanaleg, gant « *Kelarnec* » Plouhineg Kerne ha gant « *Quelarnic* » Pluguven. Ha da welout e c'hellje ivez *Kel-* kaout da ober gant an anvioù gallek « *La Celle* » pe « *La Selle* ».

Meneget em eus uheloc'h *Lingoual*, hag e parrez Loperc'hed e kaver ivez *Linglaz* ; daoust ma tistager er vro evel ma vije an *Ingoual* hag an *Inglaz* e kav din koulskoude ez eus aze gerioù o kregiñ gant *Lin-*. Ha pa geñverier « *Lillouet* » Sant Noug a ouzh « *Linlouet* » Lopereg pe Sibiril e weler e tro ivez a-wechoù da *Lil-* dirak L. Techet e vefer da dostaat ouzh *lein*, met kavout a reer avat an eil e-kichen egile evel ma kaver *ru* ha *run*. Peadra a vije ivez da lavarout diwar-benn an anvioù e *Luz-* evel *Luzuri* Sant Noug, *Luzivili* Plouigneve pe *Luzurien* Sant Turien ha da dostaat ouzh « *Luxulian* » (*Luz Sulian* ?) hag a gaver e bro ar staen e Kerne-Veur hag a zo bet anvet diwarnañ ur garregenn « *luxulianite* ».

skridoù-nevez

Arzel EVEN

Setu amañ, siwazh, skrid diwezhañ hor mignon Arzel Even. Goulennet e oa bet digantañ ur miz bennak zo ha degouezhet eo ganimp tri deiz a-raok e varv.

R. H.

ROPARZ HEMON : Tangi Kerviler, romant. - Ho kervel a rin en noz ha marvailhoù all. - War ribl an hent, marvailhoù.

E-kerz un nebeut mizioù ez eus bet embannet tri levr komz-plaen gant Roparz Hemon : ur romant nevez-flamm, div zastumadenn danevelloù bet embannet dija war gelaouennoù - " nevez " e vint avat evit kalz tud, ar re yaouank dreistholl, a zo diaes dezho kaout krog war niverennoù kozh. Abaoe embannidigezh *Kleier eured* e 1943 en doa Roparz Hemon skrivet un niver bras a zanevelloù strewet amañ hag ahont ha biskoazh dastumet ; setu sevenet enta an hetadenn a raen e niv. 142 " Al Liamm ".

Komzomp da gentañ diwar-benn ar romant, peogwir ez eo un oberenn nevez. Un istor eeun a-walc'h, met dic'hortoz-krenn - anzav aran ez on bet sabatuet gantañ. Tremen a ra an traoù er bloavezhioù diwezhañ a-raok Dispac'h Bro-C'hall, en ur vro faltaziet hag a zo Breizh hep bezañ Breizh ; brezhonek eo anvioù an dud, hag anvioù ar c'hêrioù zo ijinnet met brezhonek o neuz : Radeneg ar gêrbenn ; Indrezh ar gêr vras er C'hreisteiz, « kevezerez Radeneg da vezañ kêrbenn a-hed an Istor » (hag e 1788 e lider 900vet deiz-ha-bloaz he dieubidigezh diouzh an Normaned...) ; Sant-Alv, porzh-mor an Hanternoz, « kêr gozh ar gourserien, lorc'hus, atav dizalc'h » ; Tregili ha Plouar, porzhioù-brezel... N'eo ket ar « Vreizh » -se avat ur rannvro sujet ; ur rouantelezh dieub ne lavaran ket.

440

Betek-hen e c'hellfe bezañ ur marvailh « bedoù keittuek » (parallel universes) evel ma kaver stankik diouto e lennegezh *fantasy and science fiction* ar broioù saoznek (1), rentet soutiloc'h dre gemmañ an anvioù-lec'h, Radeneg e-lec'h Roazhon, hag all. Hogen setu ar mennoz dibar : heñvel eo stad an traoù er rouantelezh-se ouzh stad an traoù d' an hevelep mare e... Bro-C'hall ! Ar roue Hoel VI zo un den mat - madek kentoc'h - hogen gwan ha dindan levezon e wreg Ingrid, ur briñsez estren skañvbenn, dispigner hag irienner, kasaet gant ar bobl. Peuzc'houllo eo kefioù ar Stad, hag a bobl dilaouen a selaou mui-ouzh-mui prezegennerien an dispac'h. Un disheñvelder bras koulskoude : en enep da Louis XVI, en deus Hoel daou vab en oad-gour : Alan ar priñs-hêr (rouez eo romantoù pe zanevelloù Roparz Hemon na vije ket enno un Alan, ar pennden peurliesañ...), speredek ha leun a nerzh-kalon, un danvez-roue dispar, ha Gourmelen, un didalvez, moumoun e vamm (un avoultr eo, a lavar darn). Dre-se, an dispac'h, pa c'hoarvezo, a vo disheñvel diouzh hini Bro-C'hall. Taget eo ar palez, lazhadeget ar warded, rediet Hoel VI da reiñ e zilez, ha lakaet Gourmelen war an tron gant an dispac'herien, o deus spi e raio pezh a garint (ar rouanez he deus en em glevet dre guzh ganto). Torret o irienn avat gant ar priñs Alan, en deus tec'het diouto ha kavet repu war vourzh ur fourgadenn. Degas a ra ar merdeadurezh a-du gantañ, dilestrañ e Sant-Alv, ha war-lerc'h emgannoù kriz e teu a-benn da adc'hounit ar vro. Harluiñ a ra e vamm hag e vreur, ha ren evel Alan VII, ar roue mat ha fur - gant ur genvroadez da rouanez.

Kontet eo an istor gant an den a ro dezhañ e anv, Tangi Kerviler, un den yaouank eus an noblañs paour a vev gant e dud en ur maner kozh e kornog ar vro. Un noz en deus e dad roet bod d' ur beajour yaouank kollet gantañ e hent - hag en em ziskuilh er mintin evel ar priñs-hêr. Ar paotr Tangi a blij dezhañ, hag evit e drugarekaat eñ hag e diegezh e kas anezhañ war e goust da skol ofiserien ar Warded.

(1) An hini gwellañ anezho, *Bring the Jubilee* gant Ward Moore (1955), a ziskouez ar « Stadoù-Unanet » trec'het er brezel-diabarzh (Brezel an Disrannañ), hag o krakvevañ e skeud ar « Confederacy » aet da c'halloud hollvedel. Un istor all disteroc'h, am eus lipet va mourrou diwarni koulskoude, eo « Unification Day » gant George Collyn : Bro-Saoz trec'het hag aloubet gant Napoleon, staget ouzh an « Impalaeriezh », hag o stourm evit mirout he yezh hag adc'hounit he frankiz...

441

Kontañ a ra Tangi e vuhez a zanvez-ofiser ha goude a ward e servij ar rouanez-vamm, e amourusted gant Orwen, plac'h a enor gant ar rouanez Ingrid, hag e berzh en dispac'h hag en enep-dispac'h. Un istor skrivet mat, aes ha plijus da lenn. Ne gredan ket koulskoude e vo sellet outañ evel romant gwellañ Roparz Hemon - an enor-se, da veno an holl pe dost, a vefe dleet da Vari-Vorgan (ha pa dlefen tremen da randoner, e lavararin adarre pegement a geuz am eus d' Ar Vugale Fall diechu...).

*

Ho kervel a rin en noz a zo ennañ an istor hir a ro d' al levr e ditl, embannet dre roneoskrid e 1954, an holl gontadennoù embannet war " Ar Bed Keltiek " etre 1960 ha 1970, an darn vuiañ anezho berr-kenañ, ha teir c'hontadenn bet embannet war " Arvor " e-pad ar brezel. En holl 35 marvailh, en ul levr a 258 pajenn.

E-keñver danvez ez eus el levr-se danevelloù a bep seurt. Ho kervel a rin en noz zo un istor tasmant - ket en doare arnevez, kuit a okultouriezh, metapsikologiezh pe « faltazi » (er ster am eus termenet em pennad diwar-benn " Tem an dec'hadenn "), met en doare kozh, gwriziennet hep mezher c'hredennoù-pobl a rene e Breizh-Izel betek n' eus ket gwall-belloù. Ar vaouez varv azezet er gador-vrec'h e korn an oaled pe gluchet war ar siminal da fistilhañ gant ur vignonez vev, a zegas soñj din eus anaon *La Légende de la Mort* a luskell krouadurien, a laer krampouezh hag a ro palvadoù d'an dud war o fenn a-dreñv pa 'z eont e-barzh o gwele-kloz (Un « doubled » eus an istor-se, koulz lavarout, eo ar pezh-c'hoari *Ar bank-oaded*, A. L. niv. 37). An eil marvailh, *Ar mell-benniget*, a zo diazezet ivez war ur gredenn-bobl. N' eo ket un istor mat-mat evelato. Ha meur a hini eus ar marvailhoù all el levr n' int ket dispar (evit Roparz Hemon, da vihanañ ; meur a skrivagner all a vije stad ennañ da vezañ o skrivet). E-touez ar re wellañ emañ an istorioù bugale (ne lavaran ket « evit » ar vugale) : *Ar marc'hig du* (brav-kenañ), *Ar mouezhioù burzhudus*, *Un endervezh hir*, ha dreist-holl *Ar Vamm Nedeleg*, hon degas en-dro da ved *Alanig an Tri Roue*, ur bed a wezennoù Nedeleg, a c'hoarielloù hag a « dud vras » a ranker tremen diouzh o froudennoù digomprenadus (evit gwir, gwall-heñvel ouzh mamm-gozh Alanig eo ar " Vamm Nedeleg "). Re all a denn d' ur bed ergerzhet alies ivez gant Roparz Hemon, hini an tabutoù a familh, ar plac'hed yaouank kozh hag ar profoù eured : *Tamm ar paour*, *Pladoù-saladenn*, *An div glañvdiourez*, *Tartez an ognon*. Er rummad-se ivez emañ an div gontadenn a sellan outo evel ar re gwellañ el levr a-bezh : *Peoc'h ar sul* hag *An daou dagnouz* (daoust ma kavan hemañ un tammig « santimantel »). Ar peurrest eus al levr a zo ennañ istorioù tennet diouzh ar folklor (breizhek pe estren) pe deveret dioutañ (*An amprevan na c'halled ket lazhañ*, *Ar vaouez re fall da vont d'an ifern*, *Luduenn*, *Ar pemp prezeger*, *An irvinenn argollus*) ; un nebeut « science fiction » (*Ul lizher giz nevez*, *Pladoù-nij Marijan*) : hag arahat disoñjal un istor bravik-kenañ a ra goap eus an douristed kenkoulz hag eus an dud a vev diwar o c'houst (*Ar c'harr-nezañ*).

442

Ul levr pouezusoc'h kalz eo *War ribl an hent* (a dlee da gentañ bezañ anvet *Beajour ar goañv*), ennañ an danevelloù moulet war " Walarn " hag " Al Liamm " abaoe *Kleier eured*, hag ivez *Traonienn Skeud ar Marv* (evel-se e c'hello pep unan lenn an danevell bouezus-se). Danevelloù hiroc'h, ha, dre vras, « lennegezhoc'h » eget re an dastumadenn all. Div anezho da nebeutañ a zellezfe ul lec'h a enor en un antologiezh eus kontadennoù gwellañ lennegezhioù modern Europa. Da gentañ, *An dud dieub*, prederennoù ur prizoniad-brezel a Vreizh e Berlin e C'hwevrer 1945 : ar gêr ramzel hanter-zismantret, bombezet noz-deiz hogozik dibaouez, hag o

kenderc'hel da vevañ daoust da bep tra, he zud o lavarout « nann » d' ar brezel, o klask derc'hel d' o labourioù ha d' o flijadurezhioù boas e karvanoù an aerouant. Fromus ha galloudus war un dro eo ar vreuradenn evit « ar vuhez hag a zo ar wir vuhez », a-du gant an hinienn a c'houzañv pa vez implijet evel maen-benerezh gant saverien an Istor. « Hor ger-stur : Labourat daoust da bep tra », a oa ar slogan merket e talbenn pep niverenn eus " Arvor " adskrivet ha lodennet gant izili " Bagad ar Fiziañs " goude ma oa bet bombezet an ti-moulañ e Mezheven 1944.

443

Un istor dispar all eo *An horolaj ruz*. Ma c'heller lavarout « istor », rak n' eus ennañ darvoud ebet, koulz lavarout : un arzour blizidik o c'hounit er foar ur mell horolaj pri-poazh, un euzhadenn « modernstil » hag a ro tro dezhañ ha d' e vignon skrivagner da ober prederiadenoù diwar-benn « Arz ar Foar » - ar pezh a anvfed bremañ « pop art » moarvat. Hogen studiañ a c'hellfed ivez « tem an dec'hadenn » en danevell-se, evel m' henn gra an den e-unan : ... Se a oa an dec'hadenn, redek er yenijenn hag er glav an abardaevezh war e hed da zont d' ar gêr gant ur c'hozh tra doñjerus ha displeet ! Met an den-se, evel kalz tud a ren buhezioù sioul ha dereat, a oa dezhañ an disterañ darvoud dic'hortoz derou un aridennad avanturioù spered ».

Aner - hag un tamm lu - e vefe sevel ur palmare, hogen e-touez an danevelloù gwellañ e lakafen ivez (ouzhpenn " Traonienn Skeud ar Marv ") *Beajour ar goañv*, *An tri goulenn* (un istor boudiged en ur framm modern, e doare Marcel Aymé), ha *Fin ar bed* - daoust d' un diwezh gwan: lavaret e vije ne ouie ket an oberour penaos echuiñ, pezh a zo un druez rak deut eoa a-benn da grouiñ un aergelc'h a spont hag a zigenvezded vac'hus.

Evel en dastumadenn all, e keomp en houmañ gant temoù, mennozioù ha tudenoù a gaver e lec'h all en oberenn Roparz Hemon. Istor *An div favenn* a denn da hini *Ur vaouez vat*, daoust n' eo ket ken mantrus an darvoudoù hag en hemañ : buhezioù kemmet-holl gant ur fazi bihan diot. Ar skolaer a gemer lec'h e verc'h (nijet kuit gant un amourouz kalz koshoc'h egeti) da c'hoari *Mari Stuart* dirak ur saliad c'hoapaus, a « stourm ouzh e blanedenn » e-giz *Pirc'hirin ar Mor* m' eo evel ul luskeudenn anezhañ - hag evel Berliniz. Hag un tammig dre-holl, setu adarre plac'hed yaouank kozh, darn trenk ha kintus, darn trelatet o spered, darn romantel ha karantezus - dezho holl anvioù giz kozh en -a pe en -i.

Eus gwirionded Torfed Emma da varzhoniezh ha faltazi *Traonienn Skeud ar Marv*, eus fent *Ar skeudenoù bev* da gevrenn kañvaouüs *Tasmant ar vali*, e ro al levr-se un alberz eus ijin liestuek hor skrivagner brasañ, hag eus ur vuhez lennegel astennet war hogozik hanter-kant vloaz. Gortoz a reomp bremañ embannidigezh e romant bras all, *Ar plac'h sioul he c'halon*, ha marteze ur mouladur nevez eus e c'hoariva.

444

Un dibab barzhonegoù divyezhek

Emañ an embanner gall P.-J. Oswald o paouez embann un dibab barzhonegoù brezhonek-gallek *Défense de cracher par terre et de parler breton*, aozet gant hor mignon Yann-Ber Piriou.

N' omp bet morse a-du gant an embannadurioù divyezhek nemet e vefent savet a-ratoz evit studierien. Amañ avat n' eo ket un oberenn hon eus met un dibab evel ma oa bet graet e nederlandeg e 1969. A-hend-all al levr a zo unan eus ur rummad divyezhek ma kaver ennañ barzhonegoù eus Sud-Amerika, Okitania, Skandinavia, bro-Alamagn.

Kregiñ a ra an dastumad gant un digoradur hir (32 pajenn). Eno e ro Yann-Ber Piriou un alberz eus hol lennegezh hag eus ar stourmoù renet gant hor yezh a-enep d' ar galloud gall. Reiñ a ra ul lec'h bras d' ar pezh a vez anvet al lennegezh-pobl, ar pezhioù-c'hoari, ar gwerzioù hag ar sonioù bet savet gant tud izel ha dizesk peurvuiañ hep ankounac'haat al lusk nevez roet d'hol lennegezh gant " Gwalarn " ma 'z eo diwanet diwarnañ al lennegezh a-vremañ.

Al levr n' eo ket un dibab eus ar varzhoniezh vreizhek hogen un dibab barzhonegoù engouestlet e doare pe zoare. An oberennoù dibabet gant Y.-B. Piriou a zo bet skrivet e-kerz an ugent vloaz diwezhañ, etre 1950 ha 1970. An aozer a zo un ezel oberiant eus ar strollad politikel UDB hag an dibab, evel ma 'z eo skrivet war golo al levr a zo tuek a-ratoz kaer, dre se e kaver un toullad mat a skridoù gant izili ur strollad o ren ur stourm kevredigezhel resis ha politikel a gleiz. E-kichen e kaver barzhonegoù n'int ket bet savet gant menoz ur stourm e renkadoù ar gevredigezh met ur stourm dre vras evit Breizh, evit ar frankiz, enno un hekleb eus an emgann-se, esperañsoù an dud, o fulor pe o c'herseennoù.

E pep dastumad e vez kavet da damall, an dibaber o vezañ levezonet gant e vennozioù politikel, da skouer, ha souezhet e vo meur a hini moarvat o welout n' eus el levr nemet ur varzhoneg gant unan eus hon daou varzh brasañ er mare-mañ, Roparz Hemon. En e rakskrid Yann-Ber Piriou a respont en a-raok d' an tamall-se, koulskoude e kredomp e vije bet tu da venegiñ lodennoù eus " Pirc'hirin ar Mor " :

445

Petra 'ra dit ar vro-se ?

..
Ha sed ez ont un estren 'barzh da vro.

pe " Maronad " :

Anavezet en deus
er c'hêrioù bras,
al labouradegoù
ma stuc'hell ha ma striv
tolpadoù tud
gant c'hwez ha mallozh.

pe c'hoazh " Kanenn Vrezel ", " Ar c'heloù mat " ha " Kanenn d' an Anaon " :

Ha d' ar re-se ez eus bannieloù
trompilhadek ha taboulinadek ha pavatadek kezeg ha fraoñvadek kirri-tan,
stirlink medalennoù
koagadeg krak-aotrounez e yezh ar gall
oferennoù war gan...

N' eus hini ebet eus barzhonegoù engouestlet niverus Youenn Olier hag a zo mat-tre (gwir eo ez int bet roneoskrivet ha n'eus eus bet tennet nemet un niver bihan a skouerennoù). Menegiñ a c'heller titloù hag a seblant klotañ rik gant an diviz : " Va fobl " pe " Gwerin dilezet " da skouer ha meur a hini all.

Ne vern penaos e nep dastumad heñvel e vez disoñjet unan bennak hag ez eus tu da glokaat diwezhatoc'h ma karer.

Tud all a gavo abeg avat dre ma 'z eus bet roet, d' o meno, ul lec'h re vras da emsav broadel Gwalarn dre ma ne oa ket troet war-du ur stourm er renkadoù.

Ne blijo ket an dibab-mañ d' an holl evel just en abeg d' e liv politikel. N' eo ket graet evit plijout d' an holl kennebeut peogwir hon eus lavaret e oa tuek hag a-gleiz. Kalz eus ar skridoù a sav a-enep d' ar stad kapitalour en un doare anat. Un testeni eo avat ha brud evit hor sevenadur a zo bet hag a vez sellet gant an impalaerourien, a-zehou pe a-gleiz e vefent, evel un dra diamzeriet, a-ziwarlerc'h ha kilstourmer ha da vezañ distrujet evit unaniezh Bro-C'hall.

446

Hor gourc'hemenoù da Yann-Ber Piriou evit al labour talvoudus-se en deus

deus goulennet kalz a amzer hag a enklaskoù hag evit an troidigezhioù kaer ez eo deut a-benn d' ober.

Evit pezh a sell al levr e-unan, moulet eo aketus ha war baper kaer. Spihon eus e tizho ur renkad tud n' ouzont c'hoazh netra war Gultur o bro nag he yezh goude kement a gantvedoù a dav hag a voustrerezh.

Ul levr 170 pajenn, embannet gant P.-J. Oswald. Priz : 9,90 lur.

R. H.

0 C'hoarzh

Mibion an dud en o dudi
diwar va zouribell m' o gwel
ur c'hoarzh gante dre o c'hoari
kerkent tec'het kerkent krouet
etre skoemp ha boem
war diweuzioù an Izaaged nevez
ouzh ar wazed
'n o ampartiz
faro en e sae danav
put war o c'hud
hogen izel 'n o bugelez

noualantiz ar yaouankiz
dre an dismantr
ez eont troadant
ha birvidant
dindan sell evezhiant
o zad karantek
miled izil hogen poellek
pa darzh en o farzh
ar c'hoarzh.

NOTENNOÙ

Hor Mignoned

Brieg, Riwall ha Tangi AR MENN a zo laouen bras o kas kannad deoc'h eus ganedigezh o breur bihan Malo, e Sant-Brieg d' ar 17 a viz Du.

Hor mignon LANGLEIZ a zo laouen o kemenn o deus bet e vab, Gaetan, ha Marie-Hélène de Langlais ur mab Ollivier e anv.

Hor gwellañ gourc'hemennoù d' an holl.

Kañv

Glac'haret eo an Drouiz AB ALRE o kemenn deoc'h ez eo aet da anaon e vamm an Itron H. BERTHO, d' an 19 a viz Here.

Mantret omp bet pa 'z eo degouezhet ganeomp, d' an 19 a viz Kerzu, keloù marv hor mignon Yann PIETTE, anavezet dreist-holl dindan e anv pluenn Arzel EVEN, diwar anv Bro e vamm, Plouarzel.

Ur miz bennak zo, hor boa goulennet digantañ ar pennad a gaver en niverenn-mañ. Asantet en doa diouzhtu.

Ar skrid zo degouezhet ganeomp tri deiz a-raok e varv, gant ul lizher hegarat hag e skrive o n' em zigareziñ : « Setu va fennad. Spi am eus n' on ket diwezhat, an abeg din da vezañ chomet hep e gas abretoc'h eo n' em eus ket labouret kalz en deizioù-mañ, o vezañ n' eo ket gwall vat va yec'hed. Evit gwir, ret eo din mont d' ar c'hlañvdi evit ur sizhun pe ziv - n' ouzon ket tre peur, spi am boa e vije bet a-raok Nedeleg, met bremañ emichañs e vo goude - gant na vo ket e-pad ! »

Kemenn a rae koulskoude ne oa ket ken klañv-se, evit gwir, met ret e oa d' ar mezeg ober un dra bennak evit kas e boues gwad d' an traoñ dre ma oa uhel-tre hag e veze skuizh diouzhtu.

Arzel Even en doa 50 vloaz hag ur c'holl bras eo evidomp hag evit an emsav a-bezh.

Pediñ a reomp e wreg hag e vugale da grediñ e kemeromp perzh en o glac'har ha kerseet omp holl pa ne c'hellomp ket bezañ ganto ha gant e geneiled eus bro Gembre en Aberystwyth evit o sikour da c'houzañv ar c'holl bras-se.

Profoù

Degouezhet eo ganeomp ar profoù-mañ e korf an daou viz diwezhañ :

MIZ GWENGOLO :

P. le Bihan, 10 lur ; J. Queillé, 10 ; dizanv, 10 ; dizanv, 10 ; C. Faou, 5 ; P. L. Guilloux, 30 ; Y. Bouessel du Bourg, 120.

- War un dro : 195 lur.

MIZ HERE :

Y. Cazin, 5 lur ; P. Le Meur, 25 ; R. Le Sclotour, 10 ; M. Piron, 5.
- War un dro : 45 lur.

2.787,77 lur profoù hon eus bet abaoe derou ar bloaz. Bennozh Doue d' an holl.

449

Hol Lennerien a skriv

- Digant G. J. :

« Emaon o paouez degemer niv. 148 " Al Liamm ". Ma ne fazian ket n' eus ket bet roet diskleriadurioù ebet da lennerien ABK diwar-benn ar Geriadur holl-vrezhonek a veze embannet a nebeudigoù war ar Bed Keltiek. Chom a ray diembann ar peurrest ? »

- Digant D. S. Delorme, teñzorer Kêr Vreizh :

« Gwelet hon eus e-barzh ho niverenn diwezhañ, en notenn " Pelec'h prenañ ho levrioù ", ne oa ket meneget anv ha chomlec'h Kêr Vreizh war ar roll. Sellit 'ta, mar plij, en ho niverenn 145, pajenn 136. Eno e kavot roll al levrioù hon eus gwerzhet en ur bloaz, a-walc'h e vo, me gav din. »

War an niverenn 145 hor boa roet roll eus al levrierien bouezusañ a ra ur striv evit gwerzhañ hol levrioù. Laouen omp da gaout ul lizher digant teñzorer Kêr Vreizh evit klokaat ar roll-se. Evel just n' hor boa ket soñjet lakaat Kêr Vreizh e-touez al levrierien. Unan all a c'hellomp c'hoazh menegiñ e Pariz : Elysée-Bretagne, 4, avenue Franklin-Roosevelt, Paris 8', ma vo graet adalek bremañ war dro al levrioù gant Coopérative Breiz. Setu amañ chomlec'h Kêr Vreizh : 43, rue Saint-Placide, Paris 6'.

- Ul lizher digant P. P. :

« Goude teuzidigezh " Al Liamm " gant " Ar Bed Keltiek " ez eo deut da vezañ liesseurt he danvez. Plijet on bet gant pennadoù Andouard ha gant " Brezel ar Sivi ".

- Digant Y. G. :

« Aketus e lennan AL LIAMM, bepred ken dedennus. Diaes avat evidon pennadoù brezhoneg " nevez " a lennan koulskoude... gant skoazell ar geriadur. »

Priz ar c'houmanant

Gant priz ar moulañ o kreskiñ e rankomp lakaat ar c'houmanant da 30 lur. An holl niverennoù avat a vo embannet war baper kaer ha ne vo nemet ur priz koumanant. Ar studierien, ar soudarded oc'h ober o servij, ar gloer a c'hellou komanantiñ en ur gas 15 lur d' ar c'hef.

450

Kelaouennoù

PREDER, kaier 134-135. - An niverenn-mañ zo un adembannadur eus levr Caradar " Welsh made easy ", bet lakaet e brezhoneg gant Per Loisel e 1948 hag adwelet gant Goulven Pennaod.

Un nebeut kemmoù en deus Goulven Pennaod degaset en embannadur-mañ, dreist-holl en doare da aroueziañ an distagadur hag ivez e termenadur ar yezhadur a zo

bremañ an hini savet gant Saded.

Preder, koumanant 12 niverenn : 48,00 lur - c.c.p. 16 093 13 Paris.

EMSAV, niv. 59. - En niverenn-mañ e kaver poelladennoù istor reizhet. Notennoù diwar-benn ar gevredouriezh e dibenn an 19vet kantved ha derou an 20vet kantved : Ar gevredouriezh alaman - Ar gevredadourien saoz hag amerikan. Koumanant-bloaz : 20,00 lur. B. P. 125 Rennes.

IMBOURC'H, niv. 22-23. - Taolenn : Devezhioù-studi Skol an Emsav e Bulad. - Ar Vaourien hag an Emsav e Breizh. - War-du ar bloavezh 2000. - A-dreuz lenn. - Bodadeg Veur ar C'hevren Keltiek. - Dislavar ar yezh hag ar sevenadur. - Ar yezh hag an Emsav. Koumanant-bloaz : 20,00 lur - c.c.p. Y. Ollivier 1534 25 Rennes.

"Yor Yezh " (Niv. 71)

Abaoe tost da driwec'h vloaz n' he deus ket paouezet ar gelaouenn yezhoniel " Hor Yezh " da embann pennadoù hag oberennoù a bep seurt, oc'h ober evit gwir eus ar brezhoneg, evel m' en doa c'hoantaet Meven Mordiern, ur yezh skiantel, yezh imbourc'h ha studi.

Bez' e teu da vezañ nebeutoc'h-nebeutañ ret d' ar studier war ar yezhoù keltiek deskiñ teir pe beder yezh all a-barzh bezañ gouest da gas e studioù da benn ha, war an tu all, ne c'hell ket al labour divent sevenet gant " Hor Yezh " tremen hep bezañ anavezet gant keltiegour ebet : oberennoù 'zo evel " Istor ar Yezhoù Keltiek " Arzel Even, oberenn diazez, kenlakadur dispar, n' o deus ket o far e yezh all ebet.

En niverenn 71 nevez deut er-maez, ez embanner roll klok ar pennadoù hag al labourioù a gaver en " Hor Yezh " adal an niverenn gentañ : ul labour talvoudus eo sur-mat evit ar studierien, hag un diskuliadenn evit kalz tud all.

Kavet e vez ouzhpenn en niverenn-mañ 20 testenn evit ar skolioù gant Per Denez. Evel-se skoaz-ouzh-skoaz gant e labour yezhoniel e talc'h " Hor Yezh " gant he labour kelenn.

KERVORC'H.

Hor Yezh Koumanant 20 lur - An niverenn 5,50 lur - P. Denis, Ploare, 29 S - Douarnenez - c.c.p. 1499-51 Rennes.451

451

Glenmor a gan

Pedet gant ar C'helc'h Sevenadurel Breizhat, savet gant un nebeut tud yaouank en o fenn Gweltaz Durand, Glenmor a zo war leur-c'hoari Sal ar Gouelioù Sant-Malo d' an 10 a viz Kerzu. N' eo ket bras ar sal, an hini eo ma vez graet enni ar Festoù-Noz, hogen leun-kouch eo ha birvidik. Tud yaouank dreist-holl. Glenmor a gan. E c'hitar en e zaouarn, eilet gant ur soner gitar hag ur soner violoñsel. Katell e wreg a zispleg barzhonegoù, en un doare fromus. Glenmor a lar ur ger bennak diwar-benn e ganaouennoù, a gont kaozioù, a gomz d' an dud. Glenmor a gan. Un arvest klok eo.

Gonezet eo ar sal. Ur stourmer eo Glenmor, un den en e sav, un den eus ar bobl, un den erfin, hag a zispleg gant ur vouezh c'halloudek stad sklavelezh e bobl, hag e spi eus deizioù gwelloc'h. Kanañ a ra ar gounnar. Kanañ a ra ar spi. Teir c'hanaouenn hepken e brezhoneg, e-pad div eurvezh arvest. Goulentaet, e anzav ar barzh e ra e ganaouennoù e brezhoneg muioc'h a-berzh e-maez eus Breizh. Gwell e vije dezhañ kanañ e yezh e gavell. Kanaouennoù en deus savet enni, a-walc'h

evit magañ arvestoù e-pad 10 vloaz. Ar brezhoneg, emezañ, n' en deus ket kollet c'hoazh e vantell a wallvezh. Kalz ne gredont ket komz anezhañ, peogwir lod brasañ an dud ne reont ket gantañ. Boaz eo Breizhiz da bakañ taolioù treid en o reor ha poent e vije dezho soñjal restaol anezho. Re nebeut a dud engouestlet evit gwir en Emsav. Arc'hant a vez kavet ; kalz a asant skoazellañ evel-se. Mont pelloc'h ne vennont ket. Diouer a stourmerien a zo.

Glenmor, eñ, e oar pehini eo e hent. Dibabet en deus bezañ un den dieub, mont davet an dud ha stourm dre ar ganaouenn. Glenmor a gan, he displeal e vije nac'hañ efedusted e zoare.

P. A. B.

ABC du collectionneur de monnaies

Savet eo bet al levr-mañ gant hor c'heneil ha lenner Yann Boupinod.

An oberour a zispleg petra eo an dastum-moneiz hag e weler buan e tesk an dastumer meur a dra en ur sevel e zastumadenn. Rankout a ra zoken bezañ gouiziek a-walc'h evit dont e renkoù kentañ ar berc'hennerien-pezhioù.

Gant se, un toullad pajennoù istor n' int ket a re el levr. Gouzout a raio al lenner e voe Gwengamp gwechall ul lec'h brudet evit pezh a sell ar moneiz. E-touez ar skeudennoù dibabet gant Yann Boupinod, e kaver pezhioù breizhat eus mare an dug Yann V, warno gerioù latin, ha pezhioù Republik Iwerzhon gouestlet d' ar c'hefeleg, d' al levran, d' ar c'honikl, d' ar wiz, d' ar yar ha d' an eog.

Penaos ober un dastumadenn, peseurt dastumadennoù ober, penaos anavezout ar pezhioù, hen deskiñ a reer ivez, gant skoazell ur geriadur etrevroadel evit ar " gerioù a vicher " hag un daolenn o tiskouez ar sifrennoù e pep bro, en Europa, India, Mongolia, China, Turkia, Etiopia, Israel, h.a. Roll al levrioù savet war an danvez-se, e galleg koulz hag e saozneg hag en alamaneg, a vez roet ivez.

452

Gouzout a raio al lenner a-hend-all e rank an dastumer en em zibab e-touez ur bern geriadurioù : hini Arabia, hini Israel, reoù Bro-Indez, hag hini an Dispac'h Gall. Meur a dra all e tesko c'hoazh el levr, savet en un doare resis hag aes ha dudius zoken evit al lenner boutin.

Al levr a zo e gwerzh e ti an oberour, a zo rener an " Association Numismatique Armoricaïne ". Priz : 15,00 lur, da gas da gont-red ar Gevredigezh, 3086-28 Nantes (chomlec'h : 24, rue du Bocage).

Albom Wanig ha Wenig 1971

A-walc'h eo treiñ pajennoù an albom-mañ evit kompren pegen bras ha pegen talvoudus eo bet ar striv graet gant ar gelaouennig **Wanig ha Wenig** evit ar vrezhonegerien yaouank pe nevez ; evit kompren ivez pegen kaer (ha pegen koustus !) eo bet ivez ar gwellaennoù degaset abaoe 1959, ar bloaz kentañ.

An doare gwellañ da harpañ ar gelaouennig-se, a zo hep he far en istor ar brezhoneg, eo koumanantiñ ha prenañ albomoù ar bloavezhioù tremenet.

Priz an albomoù :

- 1959 - 1969 : 11 albom, 5,00 lur pep hini franko.
- 1970 - 1971 : 2 albom, 6,00 lur pep hini franko.
- An dastumad klok : 45,00 lur (e-lec'h 67,00 lur) franko. - Ar c'houmanant-

bloaz da 6 niverenn : 6,00 lur.
C.C.P. : " Journal Wanig ha Wenig ", Crec'h-Avel,
22- Lannion - Rennes 1705-96 Rennes

Ar C'hevre Keltiek

Levr-bloaz ar C'hevre Keltiek (164 pajenn - Priz 15 lur)

LEVR-BLOAZ AR C'HEVRE KELTIEK (1971) zo ennañ 45 pennad. E ditl " Celtic Unity - Tea Years on " a zegas da goun ez eus dek vloaz bremañ ma 'z eo bet krouet ar C'hevre. E-touez aozerien ar pennadoù ez eus darn hag a zo anavezet-mat er-maez eus o bro, Gwynfor Evans, Jac Williams, Donall O Mòràin. Re all zo anezho skrivagnerien ampart : Diarmaid O Suilleabhàin, Donall Mac Amhlaigh, Bobi Jones. Séamus O Tuathail hag Eoin O Murchù zo oberiant er penn a-raok eus ar stourm kevredadel-republikan en Iwerzhon. Klasket eo bet reiñ un tañva eus barzhoniezh Iwerzhon ha Breizh, gant troidigezhioù e-tal ar skridoù-orin. Bez' ez eus pennadoù a-hend-all e peder yezh keltiek. Un darn vat eus ar pennadoù zo gouestlet d' ar c'hudennoù yezh. Mat e vefe gouzout petra ' soñj al lennerien eus divyezhegezh pennad D. O Suilleabhàin : ret eo lavarout ez eo en iwerzhoneg penn-da-benn e voe skrivet gantañ, nemet o vezañ ma komze ouzh nann-Iwerzhoniz e oa ret-mat ober gant ur yezh anavezetoc'h ivez. Arnodoù disheñvel a zo el levr-mañ e-sell da drec'hiñ war ar saozneg evel yezh etreKeltiek.

453

" Levr-bloaz ar C'hevre " a vez kaset d' ar re a vez bet paeet o c'houmanant pe o skodenn-vloaz ganto da Jakez Derouet, 1, rue Géo-André, 44-Nantes (c.c.p. Jacques Derouet 3264-47 Nantes). Ar skodenn/koumanant a goust 15,00 lur ar bloaz. Kaset e vez ar c'hannadig CELTIC NEWS « war an holl ». E Niverenn 30 Celtic News, da zont er-maez e derou Kerzu, e vo embannet kenreizhadur ar C'hevre Keltiek. Kement hini hag a asant dezhañ a c'hell bezañ ezel. En hevelep niverenn e vo roet roll anvioù tud hag a zo e kamp-bac'h Longkesh, e-kichen Belfast. Goulenn a reer ouzh izili ar C'hevre ha re all kas un nebeut gerioù dezho da geñver Nedeleg. Kas kelaouennoù ivez pe levrioù da Desmond O' Hagan, Longkesh Internment Kamp, Longkesh, Co. Antrim, N. Ireland. Emañ Jakez Derouet o tastum arc'hant ivez da gas da Norzhiwerzhoniz en dienez. D' am meno ez eo " N. I. C. R. A. ", Kevredigezh Gwirioù Keodedel Norzh Iwerzhon an hini a zo dellezekañ (hag deus ar muiañ ezhomm) a harp.

A. H.

Bodadeg-vloaz ar C'hevre Keltiek

Bodadeg-vloaz ar C'hevre Keltiek a voe graet hevlene e Glasc'ho. Bez' e oa Skosiz dreist-holl eno, estreget an dileuridi eus ar skourroù broadel. Disklêriet e voe er vodadenn gentañ peseurt emzalc'h he deus bremañ ar bobl e-keñver ar mennadoù broadel e pep hini eus ar c'hwec'h bro, ha penaos e kresk ar spered a genober etrekeltiek en emsavioù broadel. D' ar sadorn e voe roet danevelladoù-bloaz gant ar sekretourien-skourr hag ar sekretour-kreiz. Kemer a reas ar gendalc'hidi perzh en emvod kentañ Comunn na Cànaìn Albannaich (Kevredigezh ar Skoseg), hag a fell dezhi lakaat gouezeleg Bro-Skos da vout anavezet evel yezh vroadel Alba. D' ar sul e voe breutaet kenreizhadur ar C'hevre. Graet e voe kemmoù ennañ : en em ziskleriañ a ra ar C'hevre a-du gant ma vo korvoet founnderioù-natur pep bro geltiek evit mad an holl er vro, neket evit gounid un nebeut (evel ma c'hoarvez bremañ gant an tennañ kailh-metal en Iwerzhon). Divizet e voe dilenn poellgorioù-skourr, ha reiñ atebegzh (emell, gwir da zivizout ha dlead e-keñver an izili) d' ar re a gemer ar muiañ perzh en obererezh ar C'hevre hag e dileuridi ar poellgorioù-skourr. Ne vo mui a vesprezidanted.

Ur skol-hañv etrekeltiek a dle bezañ aozet en Iwerzhon e 1972, gant ar pal deskiñ iwerzhoneg d' ar berzhidi, ha ren kendaeloù a-zivout kudennoù boutin d'

ar broioù kelt. D' ar re a zo dedennet skrivañ an abretañ ar gwellañ da Jakez Derouet ha lavarout pe goulz a zerefe ar gwellañ dezho, ha peseurt danvez (testennoù) a garfent gwelout ar skol o plediñ dezho.

Goulenn a reer ouzh pep skourr ober e vodadegoù dre hanterouriezh ar yezh vroadel, kement ha ma c'heller.

Un danevellad klokoc'h eus Bodadeg-vloaz ar C'hevre a dle bout embannet e " Sav Breizh " Niv. 5 (pe 6 ?).

454

Harpit ar C'hevre Keltiek.
Prenit al " Levr-bloaz "
Koumanantit pe emezelit.
Skrivit da J. Derouet, sekretour-skourr Breizh

Galv Skourr Breizh ar C'hevre Keltiek da skoazellañ Norzhiwerzhoniz en dienez

E pep bro geltiek ez eo ret soñjal da gentañ en ezhommoù an emsav broadel. An ezhomm a arc'hant 'zo unan anezho. Hogen er C'hevre Keltiek e kredomp ez eo ul lodenn dalvoudus eus hor stourm startaat an darempredoù hag ar c'hengred gant ar broioù kelt all. Da bep hini da varn neuze hag e tle teurel evezh ouzh ar Galv-mañ.

Ar stourm en Hanternoz Iwerzhon n' hell ket lezel izili ar C'hevre Keltiek digas. Dinac'het eo bet o gwirioù ouzh un darn vat eus poblañs ar rannvro-se ha n' eo ket klasket a-zevri c'hoazh diskoulmañ ar gudenn gant ar re o deus ar veli d'hen ober. Pep hini er C'hevre Keltiek a c'hell kaout e veno a-zivout an hentoù, politikel pe vrezel, dre gaer pe dre heg, da dizhout un diskoulm. N' hell ket ar C'hevre Keltiek harpañ ar stourm gant armoù. Bez' e c'hellomp avat harpañ ar re a ra gant doareoù didaer ha di-ranngredennek da c'hounit gwirioù keodedel d' an holl er 6 Kontelezh. Ne vefe ket ar wech kentañ, daoust d' ar pezh en defe lavaret P. Monjarret d' an " Irish Times " nevez 'zo, da Vrezhoned reiñ skoazell danvezel da Iwerzhoniz a zo bet tizhet gant ar reuz a c'hoarvez eno. Ur bloaz-hanter 'zo e voe dastumet £ 50 (650 lur) e Breizh dre hanterouriezh Skourr Breizh ar C'hevre Keltiek (goude bezañ kaset ar galv da Vreiz, L'Avenir, Le Peuple Breton, Armor, Ar Studier, Ar Soner, Al Liamm, Ar Bed Keltiek !). An arc'hant-se a voe roet d' ur gevredigezh hag he deus lakaet adsevel darn eus ar 500 ti losket e Beal-Feirste (Belfast) e 1971. Se a c'hell bezañ testiniek gant sekretour ar Bombay Street Association, Séamus Napier, e Beal-Feirste.

En Al Liamm (Gouere-Eost 1971), e niverenn 20 (Eost) Imbourc'h, e Douar Breiz (5-20/10/71) ez eus bet embannet ur galv a-berzh hor Skourr da harpañ an Norzhiwerzhoniz dre vras, da gentañ, ha goude tiegezhioù an doullbac'hidi (hag ar repuidi o deus ranket tec'hout eus ar 6-Kontelezh d' ar Republik war " Douar Breiz " ?).

Goude prederiañ e kav deomp ez eo an dud hag o deus gouzañvet kolloù bras pe vrasoc'h hag a chom daoust da se er 6-Kontelezh, e Beal-Feirste ha Doire (Derry) pergen, ez eo an dud-se hag o deus ar muiañ ezhomm a harp. Ar repuidi a zeu d' ar Republik a vez graet war o zro evel ma tere gant gouarnamant Dulenn. Hervez divizoù etrevroadel avat n' hell ket hemañ harpañ ar re o deus kollet o feadra, ar familhoù a zo bet lazhet an tadoù pe ar mammoù anezho, hag a chom er 6-Kontelezh. Emañ ar bihan niver, an nann-Unanourion du-hont o nac'h paeañ tailhoù, feurmoù, aotreoù-skinwel, h.a., o treiñ kein d' ar " sistem " : o ren ur stourmad a zisentigezh keodedel (Campaign of Civil Disobidience) abaoe miz Eost.

455

Emañ renadurezh Stormont war-nes kouezhañ en he foull en abeg d' an dra-se, met klask a ra tizhout an nann-Unanourion d' ho zro, o chom hep paeañ dezho skoazelloù-familh pe o lemel darn eus o goprou diouzhtu er burevioù. Gwelet e vo

ur rentañ kont eus ur vodadeg e Dulenn e-lec'h ma tiskouezas kargidi eus an " Northern Ireland Civil Rights Association " peseurt stourm a renont ha pegen bras eo o ezhomm a harp. Anat eo ma vern d' an nann-Unanourion gounit o gwirioù ez eo gwelloc'h reiñ tu dezho da chom ha da herzel er 6-Kontelezh eget harpañ ar re a dec'h a-dreuz an harzoù. Rak unan eus diskoulmoù, hag a blijfe d' an Unanourion moarvat, eo e tec'hfe an darn vrasañ eus an nann-Unanourion, ar " Bloody Fenians ", d' ar Republik. Ne lavaromp ket ez eo hepken d' an N. I. Civil Rights Association e tleomp reiñ an arc'hant dastumet e Breizh. Bez' e c'hellomp ober un enklask evit gouzout gwelloc'h piv, pere, a zellez ar muiañ e zegemer. Graet e vo diouzh youl ar broferion int o-unan, mar karont. Ar pezh a aliomp start eo dastum profoù da gas war an dachenn e Béal-Feirste, Doire, ha lec'h all er 6-Kontelezh diouzh ret, da harpañ ar re a zo o poaniañ evit gounit o gwirioù, o frankiz ; da skoazellañ bugale kollet ganto o zad pe o mamm er stourm, da varrekaat tud heskinet da ober prosez da Faulkner pe bennadurezhioù all (setu ar pezh a ginnig darn ober), da harpañ ar stourmad disentiñ keodedel. Ne roimp ket arc'hant dastumet en anv ar C'hevre da brenañ armoù, rak terriñ a rafe unan eus reolennoù ar c'henaozadur-mañ. O harpañ ar stourm didaer evit ar gwirioù keodedel ez eomp koulskoude betek ar bev eus enkadenn ar 6-Kontelezh. Ha kemer a reomp perzh er stourm war ul live na c'hell den reizh ebet rebech deomp. (Stourm gant doareoù didaer ne vir ket a vezañ harzet ha boureviet, pell ac'hano. Seul ziaesoc'h eo ! Koulskoude ez eo un doare da zegas unanidigezh Iwerzhon hep estrenaat ar Brotestanted da vat.)

Evit echuiñ ec'h adlavaromp eta : m' hoc'h eus ur prof da reiñ evit Iwerzhoniz ar 6-Kontelezh, e gasit da M. Jacques Derouet, 1, rue Géo-André, 44 - Nantes - c.c.p. 3264-47 Nantes (en ur verkañ a Skoazell da Iwerzhoniz en dienez »).

Jakez Derouet.

Bouevierezh e Hanternoz Iwerzhon

Abaoe an 9 a viz Eost er bloaz-mañ, ez eus bet toullbac'het en tu all da 1.000 den, hep ma vefe graet tamall ebet a-enep dezho hervez al lezenn ; hag ouzhpenn 500 anezho a zo c'hoazh dalc'het bremañ hep bezañ bet barnet. Bemdez e kendalc'h da ren an doare-ober-se a zo kontrol da bep gwir. Ne vern pehini eus an dud-se, dastumet hep ma vefe tamallet tra ebet dezhañ, a c'hell bezañ kaset da greizenn goulennata an Arme Saoz pe ar Polis e kêr Hollywood e-kichen Belfast. Setu amañ petra eo an doare ordinal da atersiñ an dud er greizenn-se, hervez ar pezh a zo bet anzavet a-berzh-Stad : goleiñ penn ar brizonierien « gant ur sac'h danvez stank du pe c'hlas-teñval » ar pezh a lak anezho « da santout e vezont dilezet o-unan-penn » ; lakaat anezho da glevout « ur sutelladenn diehan, pe ur fraoñverezh elektronek » ken na zeu o diskouarn da voudinellat evit o lakaat da santout kreñvoc'h pegen « dilezet int o-unan » ; o lakaat da chom en o sav « ouzh ur voger en emzalc'h gourc'hemennet (troet war-du ar voger, gant o zreid dispartiet evel ma vefent a-ramp, hag harpet ouzh ar voger war-bouez o daouarn savet uhel outi) e-pad peder eur ha zoken c'hwec'h eur ». Evit d' ar Gouarnamant Saoz bezañ anzavet, en un Danevell a-berzh-Stad embannet d' ar 6 a viz Du 1971, an doareoù-ober-se, ne gav ket dezhañ « e vefe enno elfenn a grizder nag a ouezoni ebet » (an Ao. Maudling, Ministr an Diabarzh, e Parlamant Breizh-Veur [House of Commons] d' ar 16 a viz Du 1971). Kenderc'hel a ra an doareoù-ober-se da vezañ implijet evel doareoù ordinal da c'houlennata an dud dastumet gant « bagadoù-surentez » Gouarnamant Bro-Saoz pe hini Iwerzhon an Hanternoz.

456

Bodad-Enklask Compton, hag en deus lakaet sklaer gwirionez an doareoù-goulennata displeget uheloc'h, a voe krouet gant Gouarnamant Breizh-Veur goude ma voe savet ur bern klemmoù a ouezoni dreist-holl gant an dud a oa bet dastumet hep tamall na barnidigezh e-pad skrapadeg vras al lun 9 a viz Eost. Hervez an divizoù merket gant an Urzh a grouas ar Bodad-se e voe difennet outañ : kemer testenioù touet gant an dud war o le, degemer testeni dirak an holl, aotren tud bac'het da gaout alvokaded dirazañ, rediañ an dud da reiñ testeni, pe aotren ar

brizonierien da c'houlennata an testoù. Ar fedoù roet aman dindan a ziskouezo d' ar Vretoned pegen « didu » e oa ar Bodad-Enklask. Hervez e zanevell, e voe kaset an dud dastumet e-pad nozvezh an 9-10 a viz Eost d' ur c'hamp-arme e Ballykinlar nepell diouzh Belfast ha neuze dre rummadoù a dregont e voe « lavaret » dezho gant polised an arme « ober embregerezh-korf aes, evel aozañ ha stekiñ ouzh o zreid gant penn o bizied, pe diwar o azez mont en o gourvez o lakaat o daouarn a-dreñv o gouzoug pe war gern o fenn ». Ar re a voe « lavaret » dezho ober an embregerezh « a-youl-vat » -se a oa bet dastumet abred diouzh ar mintin d' an 9 a viz Eost. Ne gav ket d' ar Bodad-Enklask koulskoude e vefe tra ebet en embregerezh-se a vefe « kriz » pe « graet evit gwallgas pe vilaat ar re o devoa d' en ober ». Gwell eo gantañ kavout « e voe ijinet evit stourm ouzh ar yenijenn a lakae ar brizonidi, hervez o c'hlemm, da gropañ gant ar riv ». Gwelet ez eus bet seurt madelezh re alies e meur a gamp-bac'hañ dre ar bed !

N' hon eus komzet amañ nemet eus doareoù-ober a zo bet anzavet gant Bodad-Enklask Compton ; lavaret hon eus ne ro e reolennoù- diazez gwarez ebet d' ar re a glemm ha gwelet hon eus n' eo ket bet didu. Setu aman klemmoù an a zo bet graet gant tud bet bac'het hag o deus tremenet dre greizennoù-goulennata an Arme Saoz pe re Polis an Hanternoz : bet int bet freet, kannet ha bazhataet, tennet ez eus bet tennoù « gwenn » a-dreñv o fenn e-keit m' edont troet ouzh ar voger ; devet eo bet o c'hof ha lakaet anezho da ziwaskañ poanioù kriz pa veze gwasket o divgell dre zaouarn o bourevien ; roet ez eus bet dezho dre heg louzoù a ar wirionez ».

457

Enklaskoù all a zo bet graet ivez diouzh he zu gant ar gevredigezh anvet " Amnesty International " diwar-benn ar c'hlemmoù bet studiet gant Bodad-Enklask Compton. Setu amañ ur pennad eus he danevell : « A-raok tarzh an deiz d' an 11, an 9 den a voe goloet o fenn gant seier pounner graet gant danvez stank ha teñval. Ne veze laosket toull ebet evit an aer ha diaes e veze dezho tennañ o anal. Rediet e voent da bignat e-barzh helikopteroù ha lakaet da c'hourvez war leur an nijerez. Grizilhonet e oa o daouarn, lod anezho re start. Goap a veze graet outo gant blenierien an nijerez ha lavaret dezho o defe « o bez er mor ». En ur zegouezhout d' ar greizenn-goulennata, e voent rediet da ziwaskañ o dilhad ha d' en em lakaat en noazh-pilh ; goude ma voe bet sellet ouzh stad o c'horf e voe gwasket blouzennoù ledan dezho, ar c'hougoulioù avat a veze lezet war o fenn bepred. Neuze e voent lakaet en o sav, o zreid ganto a-ramp, penn o bizied o voustrañ war ar voger hag o tougen pouez o c'horf : Emzalc'h ar furchadeg ("Search-position " a-hervez). Ne vezent ket aotreet da fichal e-pad peder eur pe bemp eur, ha pa raent e vezent bazhataet ha rediet d' en em lakaat en-dro en emzalc'h poanius-se. Ar memes tra a c'hoarveze ma semplant. Dasseniñ a rae ar sal, gant un trouz iskis hevelebekaet gant lod ouzh sutellerezh aezendour o flistrañ, gant re all ouzh yuderezh un toullerez dre aermoustret. Ne c'helled ket padout gant an tomm a veze e diabarzh ar c'hougoulioù ; ha gwsaet e veze reuzeudigezh an dud-se dre ma veze nac'het boued outo nemet un nebeut kozh tammoù kreun bara sec'h. Ne c'helle ar brizonidi nemet brasjediñ pegeit amzer e vezent dalc'het e « emzalc'h ar furchadeg », o vezañ ne oant ket, er pleg-se, evit kontañ pe jediñ an eurioù o tremen. Lod o devoa da c'houzañv kement-se e-pad daou ha betek pevar devezh diouzh renk ».

Hervez ar gevredigezh " Amnesty International " e kaver eno ur brouenn " prima facie " a grizder hag a vourevierezh kontrol d' ar mellad 5 eus Diskleriadur Hollvedel Gwirioù Mab-den, ha d' ar mellad 3 eus Emglev Europek Gwirioù Mab-den. Goulenn a ra « ma vo savet ur bodad-enklask dieub hag etrevroadel evit ober enklask war an doare a vez graet, e pep keñver, ouzh an dud bac'het e Hanternoz Iwerzhon ». Prest eo ar brizonidi da reiñ testeni dirak ur seurt bodad.

Ni, Kelennerien Skol-Veur Iwerzhon, izili Sindikadoù ha Micherioù a bep seurt, a c'houlenn ouzh hor c'henvreudeur ha mignoned e Breizh, hag ouzh an holl Vretoned dre vras, dont da harpañ hor stourm evit ma vo graet un enklask etrevroadel a-zivout stad an dud bac'het e Hanternoz Iwerzhon. Goulenn a reomp ouzhoc'h ivez reiñ ho skoazell d' hor goulenn evit ma paouezo raktal ar Gouarnamant Saoz gant an doareoù-goulennata spontus ha chatalek o deus anzavet a-ouez d' an holl bezañ implijet e-keñver hor c'henvroiz en Hanternoz Iwerzhon. Goulennit groñs, mar

plij, ma vo ehanet diouzhtu toullbac'hañ tud hep ma vefent na tamallet na
barnet, ar pezh a zo lemel diganto o gwir hag o enor-den.

E Cork d' ar 24 a viz Du 1971

a-berzh " Kevredigezh, evit Gwirioù Mab-den en Hanternoz Iwerzhon " (Committee
for Human Rights in the North).

ROLL AR PENNADOU

embannet war AL LIAMM Bloavezh 1971 (niv. 144 - 149)

Anvioù an oberourien renket hervez urzh al lizherenneg
(144/62 a dalvez niverenn 144 pajenn 62)

ABERZEL Amañ e-kreiz an draonienn (tr.)	144/62
AN DRED (Y.) Un droiad e Jerze	144/11
ANDOUARD (Loeiz) Enezenn va ene E Breizh hiziv E Breizh hiziv Al levrioù	145/128 147/283 148/357 148/367
AR BARZHIG (Ernest) Un dornad douar	148/309
AR BERR (A. E.) Huperion Thalia-Fragment (tr.)	144/41
BRISSEON (Rojer) Brezel ar Sivi Brezel ar Sivi	146/170 147/242
DADIE (B.) Kan da Afrika	144/29
DEPAUW (Valère) Un dornad douar	148/309
459 DONAN KOILH An doug-sigaret laeret	144/19
DRUMMOND DE ANDRADE Barzhonegoù.	147/237
ETIENNE (G) Preder e 1970	144/65
EVEN (Arzel) A-dreuz lenn	149/439
FAVEREAU (F.) Gwagenn.	147/257
GREENE (Graham) Gwrizioù kement droug	149/386
HAWTHORNE (N.) David Swansa	146/183
HEMON (Roparz) Jord Helori Istor Breizh La Borderie (tr.)	145/100 146/190

Istor Breizh La Borderie (tr.)	147/274
Istar Breizh La Borderie (tr.)	147/351
Istor Breizh La Borderie (tr.)	149/426
HEUSAFF (Alan)	
Skoilh d'ar c'hresk armerzhel	146/198
Donemat d' an estrañjourien	149/400
HUON (R.)	
A-dreuz lenn	149/444
HOLDERLIN	
Huperion Thalia-Fragment	144/41
KALVEZ (Tudual)	
Nevez-amzer war Menez Arre	148/341
460	
KELDREG (R. M.)	
Reteo plegañ	144/7
Mona	145/88
KERMOAL (Pierrette)	
Nikolaeva : " An ijinour Baxirev "	145/104
KERSANTON (Loeiz)	
Pajennad ar Breurig Tudal	144/3
KERVARKER	
Barzhaz Breizh	145/88
Barzhaz Breizh	146/151
Barzhaz Breizh	147/231
Barzhaz Breizh	148/303
Barzhaz Breizh	149/383
KERVELLA (Erwan)	
Un dro-vale	144/31
KERVELLA (F)	
Ur pikig pe zaou	149/434
KLER (Jord)	
Digenvez	146/158
Kadoudal	149/419
MAC FHEORAIS (Sean)	
Amañ e-kreiz an draonienn	144/62
OLIER (Erwan)	
E ser oberenn Lan Inizan : Emgann Kergidu	148/342
OLIER (Youenn)	
Evezhiadennoù a-hed hag a-dreuz	145/122
SURZHUR (R. E.)	
An Dremm	145/94
Ar Skrapadenn	147/266
461	
TALBOT (Yann)	
Kan da Afrika (tr.)	144/29
THIBAUT (Alan)	
Skandinavia : Un taol-arnod sokialour deut da vat ?	145/117

TURIAV (Breur)
Deuet gweur ar beure

145/93

TURIAV (Tad)
O c'hoarzh

149/447